

HERE 1911

(N° 2)



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI

AR MISSION

Echu eo mission kaer Landunvez ha cals birvidikeat o c'halon dre c'hrasou Doue diskennet enho puill evel ar glaö var an douar epad ar barr arne, a lavar : n'ac en zo eat buen en dro ar c'houec'h dervez m'eo bet discouezet d'eomp ken sklear petra on deus da ober evit mont d'ar Baradoz ha tec'het deus an Ifern. Ma vezemp skuis asezet, on teod ne skouise morse o kana kantikou nag on diskouarn o selaou prezegenou ar missionnerien.

AR VUGALE GANT O FASKOU

Ar vugale gant o faskou o deus great retred o mission er sizun araoc ma tigure hini ar re vras.

Deuet int oll en dervez kenta. Gant pebez evez e selaouent comsou Doue a deue dezho divar musellou elavar an autrones : Bourdoulous, Person ha Jollec. O zri e ouient braoik kemeret ar c'homsou a entente ar guella ar vugale. Ker brao e roent dezho da gompren ar guirionezou a dlient da gredi, ar gourc'hemenou a dlient da heuill evit beza salvet, ma na droe den e ben epad ar prezegenou. A dreist oll pa ziskouezas dezho an autrou Bourdoulous dre e daolennou

pegen udur eo kalon ar pec'her a jom enhi an drouc-spered hag al loenet lous a ziskoues ar seiz pec'het capital, ha pegen kaer eo er c'hontrol kalon ar vugale zantel a jom en o Ene an dreindet santel hag an oll vertusiou kristen, e vije lavaret o devoa c'hoant da glevet non pas ebken gant o diskouarn mes c'hoas gant o ginou hag o daoulagad ken piz e sellent ous an taolennou.

Karzet o Ene deus pep pec'het, joausdet ar Baradoz o para var o zal, e teuont d'ar zul vintin da glosa o mission dre eur gommunion zantel.

Eur groas livet en aour roet evit derc'hel sonj eus an dervez kaer-ze a reas dezho ar brassa plijadur. A pet hini anezho a lavare : ivisiken ne reimp mui dre ar pec'het poan da Jesus marvet evidomp var ar groas ha deuet da jom en or c'halon.

Mes evit ma zeï da ben ar bromessa-ze, o c'herent a ranko beilla varnho gant evez, o digas d'an offeren, d'ar gousperou, d'ar c'hatekis ha da gommunia alies ha rei dezho e pep tra scouer vad.

MISSION AR RE VRAS

D'ar zul 24 a viz guengolo, an autrou Lhévéder, anavezet pell zo evit eur missioner elavar, a zigoras mission ar re vras dre eur pre-zegeñ gaer great en oferen bred. An ilis a ioa leun couch ha netra souezus en dra-ze. Ar vugale o devoa countet d'o zud pegement a blijadur o devoa tanveat epad retred ho mission, ha joausdet ar vugale a c'hounezas buen kalon o zad hag o mam.

En dervez ze goude kresdeiz, ar procession a ieas d'ar C'hantel (Argenton) da eur chapelic savet en honor da sant Gonvel, patron ar barrez, evit er pedi da rei e vennoz d'ar mission. Enho goude gousperou e saver var eun dorgen huel evit beniga ar mor hag ober ar sarmoun. Var an dorgen-ze e bet savet gant an autrou Joseph Fraper hag he bried santel, ar groas a ioa guechall var chapel ar marine e Brest. Ac'hano e kendalc'h da veniga ar vartoloded a dremen gant o listri dre ganol ar Fourn.

E c'hars troad ar groas-ze, an autrou Jollec a reas diou brezegeñ dispar : unan e gallec hag unan e brezounek. Ma teu, emezan, tud a bell bro da glask ear vad ha pare var aotchou yac'hus Landunvez, ma tispignont kalz arc'hant evit ober alies eur veach hir, c'houi ive, Kantellis, tud a feiz cre, ne zelloc'h ket ous an tam poan o pezo da gouzaon evit ober ebken tri c'hart-leo evit dont d'ar Bourg epad ar mission da rei d'oc'h Ene ear vad ar zantelez ha de farea dre eur govesion eun deus e oll fec'hejou.

Da lun vintin, oa gouscoude eun tam encres e spered ar re a bede evit ar mission. Daoust a domp a reor var ar pembez evel da zul ? Pebez joa evito, sant Gouvel a bae mad ar procession great en

e honor. Pa zounas ar c'hloc'h evit ar pedennou hag an offeren, an Ilis a ioa leun en dervez kenta hag e zoa kement a voazet hag a verc'hed. Pebez laouenedigez evit an Eneou kristen !

Mes ive gant pegement a nerz kalon e tiskouezas an autrou Lhévéder d'an dud-ze diredet d'er selaou ar guirioneziou a dlient da gredi evit beza salvet, gant pegement a evez e selaouent an Autrou Bourdoulous o tiskouez dez'ho dre an taolennou an euz a dlient da gaout evit ar pec'hejou capital hag ar gourc'hemenou o doa da zerc'hel evit mont d'an Nenv, gant pegement a spout e clevent an autronez Person ha Jollec o tispaga dirazho finveziou diveza an den : ar Maro, ar Varn, an Ifern. Ne inouet james o clevet ar missionerien ha pa ziskennent eus ar gador an oll a lavare evel gant keus : oh, echu dija.

Goude ar sarmoniou, leun a garantez evit Doue a guinigue dez'ho ar pardon ; an dud a ia gant mal da dreid o c'honfessour evit diskarga o c'halon deus e oll bec'hejou.

Netra souezus e ve bet d'ar zadorn 620 communion ha d'ar zul kement all evit an Anaon.

AR VUGALE GOEST DA GOVEZ

D'ar zadorn 30 a vengolo goude kreisdeiz e teuas tro ar vugale o devoa skiant aoualc'h evit kovez.

Great e oa dez'ho eur brezegeñ gant an autrou Bourdoulous a oar ker brao renka e gomzou evit beza entetet gant peb oad. Tridal a reant po deveze da respont var ar pez a ioa bet desket dezho gant o c'herent kristen divar ben Doue, myster an Dreindet, buez Jesus-Krist, divar ben ar zacramanchou o devoa recevet pe e zeant da reseo.

Goude ma oent bet covesseat, oa great ar procession a ra kement a joa d'ar vugale o rei dezho tro da gana, ha da glevet o favillonou o strakall gant an avel. Echuet e voa dre Bennos ar Zakramant hag aroc mont er meaz, pep ini a recevas eur vetalen evit derc'hel sonj eus e mission.

D'ar zul vintin oa eun dudi guelet cals eus ar vugaligou-ze o taoulina eus an daol zantel hag o lakat en o c'halon ar mabic Jesus. Oh, nac ii er pede gant karantez do lakat eveldan da greski gant an oad, e furnez hag e santelez.

Kerent kristen, sur e rit ar memez goulen evit o pugalgou. Mes, neuse poanit da zeski dezho c'hoas guelloc'h o relijion, digassit ii alies da gommunia, dalc'hit sonj penaos Jesus n'en deus ket lavaret : An den desket en devezo ar vuez, mes an den a zebr va c'horf hag a ev va goad. Ia, evit na ello ket e dechou fall gounit var o puguel hag an diaoul mont en e galon e plac Jesus, grit dez'han communia alies.

Mes evit dont a ben eus o taol e rankit rei dez'han ar skouer hag ober dez'han compren eo ive o prassa joa lakat Jesus en o kalon dre ar gommunion.

PROCESSION BRAS AR MISSION

Da zul ar rozera goude gousperou e voa great procession bras ar mission. Doue en deus or paet deus ar boan kemeret evit kempen pep tra evit ma vije kaer ar procession-ze. An avel dijadennet araoc kresdeiz a deu sioul aoualc'h aben fin ar gousperou.

Da veza ma zoa niverus ar re a ioa anvet da zougen an anseignou int deuet oll kouls lavaret. Oh, nac ar Verc'hez en Env, nac ar Zent er baradoz oa joa ganto guelet o skeudennou douget var diskoas tud a ioa diskennet enho Jesus er mintin-ze. Nac oa kaer ar procession gant e banielou, e groassiou, e skeudennou, e pavillonou, renket pep hini en e blas.

An oll a lavare : Nan, biskoaz neus bet e Landunvez braoc'h procession, biskoas neo deut an dud gant kement a volonteiz vad da zougen anseignou, hag evel ma ouient e roe ar mission frejou bras, biskoas no deus roet brassoc'h prof. Ra vezo bennos Doue varnho oll.

Gouscoude ar zell a voa dreist var baniel kaer ar famill zantel prenet evit derc'hel sonj er barrez deus ar mission.

EIL BANDEN AR RE VRAS

Goude gousperou sarmoun gaer evit digeri mission an eil loden. Ar prezeger a reas skuill daelou o tiskoes karantez tener an Introun-Varia ar Rozera evit e bugale. Deoc'h dreist oll, Landunvesiz, bugale karet Introun Varia Kersent e vo madelezes. Sur oun e ze hirio, abalamour ma o peus he honoret dre o procesion kaer, da c'hars treid e map evit goulen perseveranz evit ar re o deus great o mission, hag evit goulen ma teuo ar re nint ket bet c'hoas, oll evit an eil banden.

Dal lun vintin e ellet dija trugarekat an Introun Varia a Gerzent eus he feden. An ilis a voa leun a ben ar brezegen genta. An dud zo bet gounezet dioc'htu gant prezegennou kaer ar misionerien. Evel er sizun genta o guelet atao gant keus o tisken deus ar gador, kement a blijadur a veze ous ho c'hlevet.

Evel d'ar sizun araoc d'ar iaou e voa kanet eur servich solennel hag an offeren evit Anaon ar barrez. An autrou Jollec a reas eur brezegen dispar evit lakat c'hoas da greski er c'halonou ar garantez evit an Eneou eat da Zoue. Sur oun, emezan, ne ancounac'hait ket ama ar re varo, rag en neb leac'h n'em eus guelet ar vered hag ar beziou nettoc'h na kempennoc'h.

D'ar zadorn vintin oa glao ha kurun. En despet da ze 650 den a zaoulinas eus an daol zantel. Satan, emezo, a zo facht hag a ra trouz ous or guelet ken niverus e treid Jesus or mestr hag e ini.

Mar deo eat an traou kelkous, oump dleour a ze da c'hras Doue, da sicour an Introun Varia Kersent, da bedennou an dud santel, mes ive d'ar boan o deus lakeat ar missionerien da rei d'eomp kentelliou mad. Bennos Doue dezho. N'oump ket evit lavaret gouscoude n'en deffe den manket da ober e mission. E Landunvez, evel e leac'h all eus ive unan bennac hag a gred no deus izom ebet a Zoue, a bedan a greiz va c'halon da gaout truez outo ha do digas ar c'henta da dreid Jesus en deus mal da lakat ar peoc'h en o Ene hag ar joa da bara var o zall.

AR C'HANN

Er barrez ne vo ket ankounac'heat an autrou Conseil hag an autrou Le Lec, mistri kan dispar. Ii o deus lakeat dioc'htu an oll e trein. Ar voazet hag ar merc'hed a heuille ar mission o velet ar boan a gemerent o deus ive lakeat bolontez vad ha kanet evel n'o diviche bet ken micher.

Ra ganint iviziken ar c'hanticou o deus desket er parkeier pa vezint e lakourat, en hent pa vezimp o veachi. An dra ze a dallo guelloc'h evit chansoniou udur a garg ar spered a vil sonj fall.

RESOLUTION VAD

Oll dud ar mission o deus promettet oun sur miret iviziken guelloc'h lesen Doue, diouall dious ar pec'het a deus kement a zoug d'ar pec'het.

Mad, da veza ma zint diners dirac o zechou fall, e talc'hint oll do germa lennont alies ha ma reomp ar pez zo merket e berr gomsou var an Imaj roet dezho evit derc'hel sonj eus o mission. Gouscoude an harp ar guella evit chom var an hent mad eo ar gommunion great alies. An nep a zebr va c'horf hag a ev va goad, eme or Zalver en devezo ar vues peurbadus.



DARVOUD SPOUNTUS

An eil dervez eus ar mission eur c'helou glac'harus a erruas er Barrez. Ar vatimant hanvet *Liberte* a zo frigasset e Toulon ha cals martolodet zo lazet pe voal gouliet. Pebez pedennou c'houec a rechot ractal evit an dud keis-ze. Martese a lavaret, e zeus en o zoues unan bennac eus ar barrez. Ac en guirionez daou deus bugale ar barrez c'hoaz yaouank ha leun a esperanç zo bet galvet en eun taol dirac barnedigez Doue : Alexandre Jacq ha François Talarmin.

Da zul ar Rozera goude an offeren bred e voe kanet eur *Libera* evit repos Eneou an oll martolodet maro e darvoud Toulon. Oll dud an offeren bred a jomas er pedennou, rac en eur barrez zo enhi kement a vartolodet, e lavaret : hirio dezho, varc'hoaz martese d'eomp-ni.

Dissul diveza araoc gousperou e bet great anterramant François Talarmin en deus bet an heur-vad da veza sebeliet e mesk e dud e guered Landunvez. An ilis a oa leun gant an dud deuet da bedi evitan ha da zigas eun tam saour da glac'har e dud.

Araoc mont er meas eus an Ilis, an Autrou persoun a lavaras : en or bro gristen Breiz-Izel e peder atao evit ar re varo. Ar re eat dirac Doue en eun taol count o deuz c'hoas muioc'h a izom a bedennou. Bennos deoc'h ta oll da veza deuet ken niverus da bedi evit François Talarmin.

An den youank a voelomp a les var e lerc'h eur vam, breudeur, c'hoarezet. Penaos o c'honsoli? o tigas da sonj dezho eo maro o map, o breur oc'h ober e zevel, kementse zo eun henor evitan hag evito, ous o lakat da sonjal penaos an disparti etre ar gristenien ne ket evit atao, e n'em velet a reor adarre er Baradoz. Ha brema tennomp kentel a varo prim François Talarmin. Pa n'ouzomp nac an deis nag an heur, dalc'homp atao on Ene mad ha prest da vont dirac Doue, dalc'homp atao on Ene ken kaer dirac Doue evel ma zeo e fin ar mission, ha ma teu ar maro d'or surpren, or c'havo prest.

Er vered poa diskennet ar c'horf er bez, an Autrou Fortin, mear Guitalméze, conseiller general ar c'hanton, senatour ar Finistère, hag an Autrou Douillard, commisser er marine, a reas pep ini eur brezen-gen elavar a reas scuill cals daelou.



MIZ AR ROZERA

• Epad miz here e c'hounezet :

1° Eun induljanç a seis vloas ha seis corais be vech ma teuer d'an ilis da bedennou ar Rozera.

2° Eun induljanç plenier d'ar re a vez bet da viana dec guech er pedennou gant ma vezint bet o coves hag o communia.

3° Ar memez induljansou a c'hell da c'hounit ar re a raje ar pedennou-ze er guear, ma ne ellomp ket dont d'an Ilis. Ar pedennou da lavaret en Ilis pe er guear eo : ar chapeled, litanioù ar Verc'hes hag ar beden da Sant Joseph.

Evel cals ac'hanoc'h n'o deus ket marteze peden Sant Joseph e lakan aman.

Peden da Sant Joseph

Ouzoc'h en em erbedomp en hon anken, o Joseph, tad eurus. Goude beza pedet on Itron, ho pried santel, e pedomp ac'hanoc'h ive gant fizians.

Abalamour d'ar garantez a bried o peus bet atao evit ar Verc'hes dinam, mam da Zoue, ha d'ar garantez a dad o peuz douget bepred d'ar Mabic-Jesus, o pedomp a galon da ober eur zel a drugarez ouz an heritaj en deus or Zalver Jesus-Krist prenet gant ar priz eus e c'hoad ha d'or skoazia eus oc'h oll galoud en on oll ezomou.

O Joseph c'houi oc'h euz diouallet gant furnez famill gaer Nazareth ; diouallit ive famill ar gristenien, ouen dud dibabet gant Jesus-Krist.

O Tad meurbet karantezus, mirit ne vimp taget gant ar geier hag ar vreïnadurez. O Tad gallouduz, eus bar an env, sellit ouzomp ha roit d'eomp nerz er brezel a ra deomp an drouc-spered, Guechal o peuz saveteat he vuez da Jesus ; hirio saveteit he Ilis ; harpit anezhi a eneb kounar he enebourien, hag e dilivirit eus peb drouc. Roit d'eomp e peb amzer skoazel evit ma c'hellimp, sikouret ganeoc'h, kerzet dre o roudou, beva santelamant, kaout eur maro mad ha mont da joa ar Baradoz evit atao. Evel-ze bezet great.

SOUDARDET YAOUANK

D'ar zadorn 30 a vengolo ar soudardet yaouank zo bet oll goude offeren ar gommunion er presbytal o kerc'het ar billet a ziskouezo e zint kristenien hag e fell d'ezho caout ar belec er c'hlenvet hag en danger a varo hag eo o bolontez e vent anterret gant lidou santel an Ilis.

8 a ioa anezho. Galvet int da vont da ober o servich :
Jean Bizien deus Kellerson da Vannes, artillerie.

Yves Jaouen deus Kernézoc hag Auguste Jaouen deus Landour-
san da Nantes, train d'équipage.

Jean-François Pailleur deus Curullou da Reims, linen.

Jean-Marie Le Borgne deus Pourane da Châlons-sur-Marne,
linen.

Goulven Jaouen deus ar Cave da Brest, artillerie de forteresse.

Gabriel Perchoc deus Kervéléoc da Vannes, artillerie.

Jean Corolleur deus ar Penfrat da Guingamp, linen.

KATEKISMOU

Ar c'hatekismou evit ar vugale a gommans er sizun-ma.

D'ar meurz da 4 heur evit ar vugale a rei o fask kenta solennel er
bloas a zeu pe er bloas goude hag evit ar vugale zo gant o eil hag o
zrede pask.

D'ar iaou da 8 h. 1/2 d'ar memes re a d'ar rè zo e skol eleac'h all.

D'ar iaou c'hoas, da 3 heur, d'ar vugale zo 'en oad da gommunia,
d'ar vugale o devezo 7 pe 8 vloas araoc ar bloas nevez.

D'ar zul, da 1 h. 1/4, d'ar re zo e skol eleac'h all ha d'ar re gant o
pevare pask.

MIZ GUENGOLO

SAKRAMANT AR VADIZIANT

*A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist,
heritourien ar Baradoz*

PAEROUN : MAEROUNES :

8 Guengolo. A.-M.-J. Bothorel, Trémazan.	J.-R. Bothorel.	M. A. Daouben.
11 — J.-M. Trébaol, Bédiez.	J. Trébaol.	M. Théréne.
11 — J.-F.-M. Héliès, Hellen.	Jean Cloatre.	M.-J. Kerjean.
20 — Craouadur Perchoc, Rochard, Kristenet.		

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

*A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn
e goasket ar groaz :*

Jean Pondaven, Kantel, 65 bloaz.

De profundis.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

DU 1911

(N° 3)



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI

Labour an dud ne ra nemet tremen,



Labour Doue a jom

Er sizun varlerc'h ar Mission pa velen an autrou Cure o pignat
er skeul evit distaga ar pavillonou hag ar c'herdign ros a ioa bet ren-
ket ker brao, ma lavare an dud, oa bet an iliz epad eur mis ken kaer
hag ar Baradoz, e sonjen, setu aze pegen buan e tremen labour caera
ha speredeka an dud var an tam douar-ma.

Gouscoude chadenna ar ros-ze, lakat an imachou var ar pavillonou
en devoa goulennet oll labour ar mestrezet kristen epad ho vacançou.
A setu diskaret en eun taol count al labour dudius o devoa great. Mes,
evit Doue eo o devoa labouret, hag Ennes a voczo paea mad ar boan o
devoa kemeret.

Epad ar Mission oa great eul labour all kaeroc'h c'hoas, karzet oa
bet ar c'halonou deus o fec'hejou, hag en o flaç oa bet chadennet ros
graçou Doue a zigassas e unan Jesus da jom e kalonou Landunveziz.
Ha Doue an Tad o sellet deus barr an Nenv, var pet ini anezho, a
lavare, evel deiz badiziant e vap e dour ar Jourdain, setu aze, va bugel
muria karet, evithan va c'harantez. Al labour-ze great gant Doue e
unan epad ar Mission ne vo ket freuzet ractal, evel ini an dud, chom a
rei peurbadus e kalonou tud Landunvez.



GOUEL AN OLL ZENT

En eur barrez a neubet a feiz eviche bet lavaret, emamp o paouez ober ar mission, da betra mont da goves ha da gommunia deiz gouel an oll zent. Tud Landunvez o deuz sonjet er c'hontrol. Yac'h eo c'hoas on Ene abaoe ar mission. Mes, daoust hag an den yac'h ne zebra ket evit kreski c'hoas nerz e c'horf. Ni ive a yelo da gommunia evit kreski c'hoas nerz on Ene.

Ha goude tout, e teir pe beder sizun an Ene a ell beza destumet un tam poultren bennac, ar furra a bec'h seiz guech bembez. Nettaomp ta adarre on Ene dre eur gonvession vad, ne vo james re gaer dirac Doue.

Ha neuze, c'hoant on deus ive da sicour Eneou ar purgator. Mad, digataroc'h evezon on Ene, mioc'h a virit o devezo an oberou mad a reimp evit an anaon, muioc'h e selaouo Doue or peden, laouenoc'h e tigemero or pinijen, on alusen, mioc'h e talo an Induljançou a c'hounezimp evit an Eneou eat da Zoue.

Abalamour da ze neus bet james e Landunvez mioc'h a dud o gommunia evit ar goueliou, ne betjames an Ilis leunoc'h evit an offiçou, neus bet lakeat james muioc'h a bedennou gant an anaon paour.

Ra deuo oll zent ar baradoz da bedi evidomp evit ma talc'himp atao en or c'halon eur garantez ken birvidik evit Doue, ra deuint da rei d'eomp da gompren e rankomp evel dho gounit rouantez an Env, ra deuint da c'houlenn evidomp atao euc'h ous ar pec'hed marvel a virfe ouzomp da errut ganto er Baradoz.

Beva atao er stad da vont eb aon dirac barnedigez Doue, eo bet brassa furnez ar zent. Ra vezo ive on Ini, a neuze dre eur gonvession vad e taolimp ractal deus or c'halon ar pec'hed marvel, mon deffe ar malheur da goeza ennan.

Skouer vad

D'ar meurs, araoe gouel an Oll Zent, oant bet var an divezadou o cas ar gommunion da unan glan a varvas ractal me devoa recevet ar gommunion, an nouen hag induljançou ar maro mad. Lavaret a viche ne c'hede, goude eur verzerenti hir, nemet he sacramanchou diveza evit nijal d'ar Baradoz da ober gouel an Oll Zent.

Epad m'edon o tont d'ar gear, e sounas ar greisdeiz ha ractal Laouic a jechas var gloc'h an Angelus. Tri goas a velen o vont eun tam em race. Evel ma clevont ar c'hloc'h e tennont o zokou hag unan anezho a lavaras an Angelus epad ma responte e gamaraded. N'o devoa great nemet o dever, rac neket evit uza ar c'hloc'h evez sounet an Angelus, mes evit lakat an dud da lavaret peden an Eal d'ar Verc'hes. Mes, allas ! nag a gristenien o deus aon pe mez o tizolei o fen dirac an dud evit lavaret an Angelus po galv ar c'hloc'h d'ar beden-ze.

Red eo, n'euz forz e pelec'h e vezimp, ha n'euz forz gant piou, ober evel an tri c'hoas-ze, on dever a gristen ha beza dispount aoualc'h da lavaret an Angelus pa vez sounet en tour.

Petra da ober

evit ma zeï c'hoas guelloc'h ar vuez kristen er barrez

Eun dra dreist oll. An tad hag ar vam a dle deski d'ho bugale anaout, karet ha servicha Doue evit ma c'herruit eun deiz er Baradoz. Ar vugale a dremen o amser pe er skol pe er gear.

Mad, neuz na peden, na kroas, nag heuriaou a relijion e skoliou zo. Penaos e c'hello o pugale deski enno anaout Doue.

Er skoliou kristen o pugale a zesko gant ar pezh zo red evit ober gant henor afferiou an douar, ar gatekismou hag ent ar Baradoz.

Er gear an tad hag ar vam goude beza desket d'o bugale o fedennou hag o c'hatekismou, a dle o lakat c'hoas da zouja dez'ho, beilla varnho ha rei skouer vad dez'ho.

Da genta, ar vugale a dle douja do zud. Brema ar vugale a zo ar vistri er gear, re alies. An tad hag ar vam ne gredont mui koumandi dezho. Evitho e labouront, e torrout o c'horf araoe an oad. En despet daze o bugale a ra alies goap anezho, ne blegont ket dezho.

Perric en deus debret e zijuni eb pater ebet. Clevit brema e gomsou : Hirio ne lavarin ket va fater, ne din ket d'ar skol, ne din ket d'ar gatekismou, nan, nan, hag an tad hag ar vam eleac'h larda dezhan e billig, a respount kouls lavaret en eur greua : Mad, kea ta neuze da c'hoari.

Ema savet ar map pe ar verc'h, ma vezent leset da ober o fenn pa voant bian, brema pa zint bras e teont da veza otus. Ma lavar o zad dezho grit ar labour-ma, e vo respountet, grit anezhan oc'h unan mar kirit.

Tadou ha mamou no peuz ket eunet ar blantenn pa elloc'h en ober, penaos brema euna eur vezen eb e zerri.

Ha gouscoudé an tad hag ar vam a zalc'h plas an Autrou Doue en tiegez ; an tad hag ar vam a dle gourc'hemen ar mad evel Doue ; outho e rank ar vugale senti evel ous Doue. Karet a dleont o bugale, ia. Mes ar garantez-ze ne dle ket beza sot. Ar garantez brassa eo ober o dever e kever o bugale, ha lakat ar re-ma da ober o dever e kever o zud, ous o lakat da zouja dezho.

D'an eil, beillit varnho. Pa deu ar c'hraouadur en dro deus an Ilis deiz e vadiziant gant e zillad guen, pebez tristidigez ma couesfe er pri. M'oarvad. Ene o craouadur a dall hirroc'h eget e zillad. Ia, pe guir e tall priz goad Jesus-Krist scuillet evithan var ar groas.

Neuse ta kerent kristen dioualit o pugale deus kement a lakafe ar pec'hed da zivoan en o c'halon.

Tennit euz o douarn ar soniou, ar c'hazetennou fall, pellait diontho an teodou lous ha binimuz, dioualit-ii deus ar gompagnuneziou fall, no laoskit ket da redet an noz, da zigarteria var digarez beilla, no laoskit ket da vont d'an dansou sul ha noz, no lesit ket da veza re divezat o tont deus ar pardonniou, ar foariou, ar frikojou. Ne anc'hounac'hait james penaos an noz eo an amzer ma ra an drouc-spered e droiou kam, sellit eus an techou fall o tivoan e kalonou o pugale vian, disgrisiennit anezho abred, var bouez corrija stard ma vez red.

Kemerit un tam paper, grit eur pleg enna o poueza gant o ivin var ar pleg, ne viot mui goest da lamet ar pleg divar an tam paper. Mad, evelse ive an techou fall a gemer ar vugale a gerz ganto betec o c'hosni.

D'an trede, roit skouer vad. Evit gouzout servicha Doue, ra no devezo ar vugale nemet sellet ebken ous o c'herent. Red eo e ve ar c'hraouadur e ti e dad evel o veva ebarz ar religion. Ra vezo hano a Zoue, pa ranko an tad gourc'hemen, alia, skandalat ar vugale. Ra vezo hano a Zoue epad al labour, epad ar prejou, er boan hag en levenez, atao evit e drugarekat. Pa vezo an tad hag ar vam aketus d'ar pedennou, d'an offiçou, offeren ha gousperou, da sakramanti alies, pa lakaint lenn Buez ar Zent, an Aviel, leoriou santel, pa vezo miret dek gourc'hemen Doue ha c'houec'h gourc'hemen an Ilis gant ar gerent, neuze o bugale a vezo ive kristenien, hag a raio ho joa er bed-ma o c'hedal ma vizint ken alies a berlezen evit o c'hurunen er Baradoz.

MIZ HERE

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

PAEROUN : MAEROUNES :

22 Here. Marie-Gabrielle Taloc, Kerloguen. Joseph Taloc. G. Corrolleur.
28 — François Jégot, Kantel. Fr. Guyader. Cath. Castel.
30 — François Luart, Kerzent. Jos. Talarmin. Fr. Guiziou.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIADELEZ

A zo bet liamet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe e derri :

10 Here. Hervé Trébaol, Kantel ha Marie-Herveline Le Dall, Kantel.
10 — Jean Héliès, Plourin ha Marie-Françoise Bellec, Plouguin.
16 — Jean Quéré, Landéda ha Marie Gourmel, Kantel.
17 — Fr.-M. Guenneguès, Plourin ha Joséphin^{no}.-Marie Magueur, Kellérou.

Pater, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

8 Here. François Talarmin, 21 bloaz, Toulon. — 26. Hervé Le Hir, 64 bloaz, Trémazan. — 28. François Roudaut, 39 bloaz, Kantel.

De profundis.

Eat d'ar baradoz. — 23 Here. Yves Arzel, 22 miz.

Laudate pueri.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

KERZU 1911

(N° 4)



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZEL'CHER EN TI

Eun dever striss eo evit an tad hag ar vam

DESKI ABRED HO RELIGION D'HO BUGALE

Dalc'hit sonj, tadou ha mamou kristen, penaoz pa zistro d'ho ti, goude e vadiziant, ho craouvadurik e tigass gant'han eur vuez nevez, en deus bet digant ar Spered-Santel dre c'hoad ha meritou hor Zalver Jesus-Krist, ar vuez dreist natur, buez ar c'hras. Dre ar vuez nevez-se eo deuet da veza bugel da Zoue, breur da Jesus-Krist, heritour euz ar Baradoz.

An histor a gount penaoz tad Origène, an doktor-ze ken brudet dre e skiant, p'edo e vap bianik a dostea alies euz e gavel pa vije kousket, a zizoloe e beultrin hag a boke dez'han gant respet, e sonjal, emez'han, e oa templ an Aotrou Doue, o chom en'han ar Spered-santel.

Mes, tadou ha mamou, ne ket aoualc'h respecti en doare-ze ar bugel fiziet enn'och gant Doue. Dre ma kresko, c'houi vezo var evez, pa dei e skiant evel da c'houlouei en e Ene, evit deski dez'han lavaret kerkent hag hano e dad hag e vam, an hanoiou santel a Jesus hag a Vari, hag e henthoc'h e zournik evit ober sin ar groas, merk ar c'hristen. Ractal e teskoc'h dez'han ive a nebeudou : « Hon tad pehini zo en Env... ». « Ni o salud Mari... ». « Me a gred e Doue an tad oll galloudec... ». « Me a goves ous Doue... ». « E actou a feiz, a esperans, a garantez hag a gontrition... ». » Un Doue ebken a adori... ».

Eun dudi eo evit an Aotrou Doue gullet ha klevet ar bugelic, e Ene neat c'hoas evel an dour e tarza euz an eienen, e lavaret e bedennou e zaouarnigou croaziet, e zaoulagad o para verzuc'h an Ene.

Evel n'oar ket ar bugel peur en deus anavezet he vam, ha lavaret e gomzou kenta, ne dleffe ket ken nebeud goud peur en deuz desket e greansou m'a en deus bet kerent guir gristen.

Tadou ha mamou, lakit ive ez viannik da zivoan en Ene o pugel guirioneziou kenta ar religion.

Ar bugel d'an oad a dri, pevar bloaz a ziskoues e unan dre ar goulennou a ra ouzoc'h en deus c'hoant da zeski.

Pa c'houlennou ta ouzoc'h petra eo ar voull dan a vell en oabl glaz hirder an deiz, e lavaroc'h dez'han penaos e zeus un Doue oll galloudek, crouer ha mestr an oll draou, hag eo En en deus great ar voull dan-ze hanvet eol a skuill var bep tra sklerijen ha gorr da lakat ar greun da zivoan hag an eost da zarevi.

Pa c'houlennou ouzoc'h petra eo ar goulou a vell pa deu ar pardaes adet en Euv evel ken alies a dachic aour, lugernus, e teskoc'h dez'han eo kals brassoc'h pep ini eus an tachouigou-ze eget ar bed-ma a bez, hag eo ive Doue en deus o great hag o dalc'h var elum hag a ispill ous an oabl evit miret na ve re vras tenvalijen an noz.

Ma c'houlennou ouzoc'h o velet ar grucifi o peus staget er penn huella eus o ti azioc'h an daol ma kemerit o prejou, piou eo an den eur gurunen spern var e benn, a zo stag ouz an tam coat-ze, e teskoc'h dez'han eo deuet var an douar, Jesus-Krist, map Doue, an eil person eus an dreindet, evit or prena, e zeo ganet bugel bian en eur c'hraou, e zeo he vam ar Verc'hez glorius Vari, eo bet staget euz ar groas evit digeri d'eomp ar Baradoz serret gant pec'het Adam hag Eva on tad hag or mam genta, hag e zeo skeuden Jesus-Krist eo a zo var ar grucifi. Lakeat e bet e gorf er bez, mes deuet eo a varo da veo enn trede deiz hag ema brema er Baradoz var un trôn skeudus, an Eles hag ar zent en dro dez'han.

Neuse kasi sur o pugel a c'houlennou petra eo ar Baradoz? Respont a reoc'h eo un leac'h a eurusdet eleac'h ne vez james nemet joa ha levezou o velet hag o karet Doue; ema eno dija e dad hag e vam gos, e vreur bian guisket gant eur sae alaouret, e ze i ve di ma vez fur, ma sent, ma lavar mad e bafet, ma ne bec'h ket, eleac'h ar vugale dissurch ha dizent a ya da zevi en Ifern. A ne vesit ket soueset, o clevet o pugel e respont: ho, neuse em beus mal da vont d'ar Baradoz abalamour na deuffen da bec'hi ha da vont da zevi d'an Iferu, ha me vez'ho fur keit a ma chomin var an douar.

Epad ma ma o pugel o sonjal mont da velet Jesus d'ar Baradoz, disklerit dez'han ema ive o chom var an douar, en ti bras a vell aont er Bourg, un tour en e benn, hag en devezo abred c'hoant da vont d'an Ilis da velet Jesus.

Erruet en Ilis, c'houi en lakaio da blega e benn glin dirac an aoter ma zo dirazhi eul lamp var elum, o lavaret dez'han: en tabernacl zo var an aoter-ze ema Jesus o chom.

Na vankit ket pa vo roet ar gommunion pe bennos ar zakramant da ober dez'han teuler evez eus an hosti-sakr, ha lavarit dezhan goustadik: Sell mad, a ne velez-te ket eun dra bennag guen e dourn ar belec, pe er c'helc'h aour a zo var an aoter leun a c'houlou var elum en dro dezhan, an dra-ze eo an hosti-sakr, an dra-ze eo Jesus cuzet dindan furn an tam bara guen-ze.

Pa vez'hi brassoc'h e teui da di Doue, bep sul, d'an offeren epad pehini Jesus a guinig evidot da Zoue e dad e gorf hag e c'hoad evel var ar groas, e teui d'ar gousperou da gana e veuleudiou, e teui alies da lakat en da galon Jesus dre ar gommunion a verko hag a ziouallo da Ene evit ar Baradoz. Hag ar bugel skoliet er giz-ze en devezo mal da greski evit gellout communia ha dont dan Ilis.

Bez-it ta aketus, kerent kristen da rei d'o pugaligou ar c'hentelliou talvoudek-se. Dalc'hit sonj penaos m'ar deo un torfed skrijus lezel o pugale da vervel defot pourvei dez'ho ar vagadurez red d'ar c'horf, eo un torfed kals grevusoc'h ho lezel da greski eb comz dez'ho a

Zoue, eb deski dez'ho pedi, eb deski dez'ho pe lakat deski dez'ho katekismou.

Ar bugel roet deoc'h gant Doue, neo ket great ebken, evit an douar-ma, evit beza mestr var o lerc'h do tanvez, great eo dreist pep tra evit mont d'ar Baradoz hag abalamour daze eo un dever striss de gerent deski dez'han an Hent.

Union ar Gatoliked

An eil sul eus mis du oa lennet er gador lizer an autrou n'Escop divar ben an izim o deus ar gatoliked pe ar guir gristenien da e n'em unani evit diffen guirion an Ilis hag ar feiz katolik.

Setu ama penaos en deus c'hoant an autrou n'Escop e ve great an union-ze etre ar gatoliked eus Escopti Kemper ha Leon:

ARTICL KENTA. — Eun union a zo savet etre ar gatoliked eus escopti Quimper ha Leon; an autrou n'Escop a zo e penn.

ART. II. — Var an traou a vell ouz ar Religion eo e c'houlennou ouz ar gatoliked en em unani, ha ne glask nemet diffen an Ilis hag asten an oberou mad.

Goulen a ra ouspen digant ar re a deulo dezi voti evel katoliked.

ART. III. — An oll gatoliked azalec an oad a 18 vloaz, a c'hello rei o han.

ART. IV. — Goulen a ra digant ar re a rolo o hano pevar real ar bloaz. Fisianz he deus da gaout muloc'h digant ar re o deus tro da rei.

ART. V. — An union a vezo renet gant an autrou n'Escop, a vezo e penn komite an Escopti; gant ar bersounet kanton a vezo e penn komite ar c'hanton; la gant ar bersouned all a vezo e penn komite ar Barrez.

ART. VI. — An autrou n'Escop a hanvo ar veleien hag an dud lik a vezo e komite an Escopti.

ART. VII. — Ouz komite an Escopti a vezo staget oll komiteou ar parresiou hag ar c'hantonio. Ar bersouned kanton hag ar bersouned all, a laka envel an dud a vezo e penn komite ar c'hanton ha komite ar barres. Bep miz pe bep daou viz e c'halvont anezo evit comz ganto divarben an oberou mad ha gwelet petra viche talvoudus evit startat ar feiz er Barrez.

ART. VIII. — Komite ar c'hanton a vo ennan: da genta an dud a zo e komite ar barrez kanton; da c'houde ar prezidant hag ar sekretour eus komiteou parreziou ar c'hanton.

ART. IX. — Union an Escopti en em assamble eur vech ar bloaz, union ar c'hanton hag union ar barrez da vihana bep tri miz.

ART. X. — Ar bersounet kanton hag ar bersouned all a dle dioc'h tu en em lakat da henvel komite ar barrez, ha da c'houde galver o farrisioniz d'en em voda en dro da renerien ar c'homite.

ART. XI. — Goulen a reomp digant oll dud fidel ar Escopti ha dreist oll digant an dud devot a zo e veva er c'houentchou pe er bed, pedi ha kommunia evit ma vezo great labour vad gant an Union a zavomp.

MIZ DU

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

17 Du.	Emilienne-Etiennette-Eng. Le Guen, Kantel.	Rolland Vidament.	Rosalie Guéna.
22 —	François-Marie Perchoc, Louhallès.	F.-M. Perchoc.	Rosalie Perchoc.
24 —	Marie-Bernadette Magueur, Saint-Samson.	Gabriel Corolleur.	Bernad. Kerjean.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIADELEZ

A zo bet liamet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe e derri:

14 Du.	Jean Morvan, Kantel ha Philomène Le Gall, Trémazan.
15 —	Jean-Marie Vaillant, Kersent ha Anne-Marie Foll, Stréat-Lann.
21 —	Joseph Fourn, Saint-Samson ha Bernadette Jolé, Poul-Calloec.
21 —	Joseph Jarnic ha Eugénie Fourn, Saint-Samson.

Pater, Ave.

E V E S A Ï T :

Ar *C'hannadik* kenta en deus koustet 30 lur, an eil 30 lur 10 guennec, an trede 17 lur abalamour n'en devoa nemet peder bajen. Bet evit o faea digant P. G. 8 real, A.-B. M. 12 guennec, F. G. 2 venneec, J. R. 20 real, C. C. 8 real, F. O. 10 real, L. C. eur scoued.

M I Z K E R Z U

1. Guener kenta. Offeren ar galon sacr da 6 h. 1/2. Pec'hejou eleiz a zo bed great hed ar b'oaz. Kinnigomp digoll da galon Jesus er gommunion, ha romp or ger dez'han e vevimp santel er bloaz-zo erru.

3. Sul kenta an Azvend. An offeren vintin da 7 heur, an offeren bred da 10 heur. Guechal e veze yun ha vijil epad an Azvent evel epad ar c'horais. Evidomp-ni da viana yunomp, euz ar pec'hed ha gouzanvomp gant patiantet or poan hag on labour evit ma cavo Jesus eul logeis deread en or c'haloun evit Nedelec.

Hirio e c'herru ive gouel sant Frances Zav'ier, patron breuriez ar feiz. N'ellomp ket evel'd'han mont er broiou pell da c'hounit Eneou da Zoue, mes goezomp da viana dioueret eur guennec ar sizun var or plijadureziou, var or gueren, var or butun evit sicour dre vreuriezh ar feiz digeri d'or ar baradoz d'ar bayanet ha trugarekat Doue da veza great d'eomp genel en eur vro gristen.

Digas ar c'henta aluzennou breuriez ar feiz hag ar Sainte-Enfance; pe o rei d'an dud vad a zo e penn o tizenes.

8. Gouel ar Ver'hes concevet dinam. Offeren vintin er bourg da 7 h. ; offeren bred e Kersent da 10 h. An Introuñ Varia a Vir Sikour, or patrones karet a roio deomp on oll goulennoù ma teuomp de chapell de fedl, gant eur galon neat a bec'het. Goulennoù dreist oll beva pur evel'd'hi.

10. Eil sul an Azvent. O devezo er zul-ze an honor da dremen un anter-heur dirac ar sakramant evit ma c'hellint caozeal gant Jesus kalon ouz kalon ha diskouez dez'han ho c'harantezh birvidik :

11 h. 1/2 : Michel Cadalen, Street-Lann ; Hervé Guennégues, Créach-Goriou ; Guillaume Bossard, Penkear ; Yves Le Ven, Kerguéroc.

12 h. : An aotrou persoun, Joseph Godebert, Jean Floch, Bourg ; François Jézéquel, Penfoul.

12 h. 1/2 : An aotrou kuré, François Jaouen, Jean Le Borgne, Kernézoc ; Yves Luyen, ti-Pri.

1 h. : Jacques Foll, Langurru ; André Uguen, Traon ; Claude Cloatre, Kervéon ; Joseph Cozien, Bédiez.

1 h. 1/2 : François Floch, Sant-Gouvalch ; Jean-Marie Allégot, Kerlaguen ; Guillaume Godebert, Castel ; Nicolas Jaouen, Kerincuff.

Voazet ar galon sakr a zo eun dudi ho gouelet er Rozera ar zul ma reont ho adoration. Peguir e maint er Bourg e pelea'h e vint guelloc'h eget o pedi ar Ver'hes goude e map Jesus.

47. Trede sul an Azvend. Er zul-ze e reor gouel sant Corentin, patron an Escopti. Pedi dreist oll sant Corentin evit on aotrou N'escop hag evit ma tougo frouez mad en Escopti Union ar gatholiked.

D'ar merc'her 20, d'ar guener 22 ha d'ar sadorn 23 yun ha vijil Evel ma c'herru Nedelec da lun, yun Nedelec a vezo ive da sadorn ar pevare amzer. Goulen ma roio oll dud ar barre logeis da Jesus en o c'halon epad gouelioù Nedelec.

24. Pevare sul an Azvend. Dont dija d'ar sadorn ha d'ar zul vintin da goves evit communion Nedelec. Gousperou a vo kanet da 2 heur, goude a vo kovesseat betek 6 heur hag adalec 8 heur betek 11 h. 1/4.

Trugarekait Doue da rei deoc'h tri dervez dioc'h-tu hag eun nosvez evit e honor, coves hag en digemeret en o kalon. An ini re roio ket logeis en e galon da Jesus epad ar gouelioù a ello lavaret dre e faot.

Evel ma ma noz Nedelec etre ar zul hag al lun, dioual da veza mezo araoc an offeren anter-nos. Goud a rit penaos ma vez trouz en Ilis ne vo ken a belgent evel e cals paressiou en or c'hever. An ali ma zo dreist oll evit an davarnerien a zalc'ho serret o hostaleriou epad an teir offeren.

Deiz Nedelec an offerennoù plean a gommanso da 9 h. 1/4. Dont d'an teir offeren.

Sant Stephan. An offiçou evel d'ar zul. Beza prest da vervel evel sant Stephan, kentoc'h eget nac'h Doue ha chom eb ober on deveriou a gristen.

En deiz-se, evel custom, e vo kemeret arc'hant ar beden-zul hag ar c'hadoriou. Digas oll numero ar c'hadoriou. Ar re o deus bolontez da regli araoc a ello en ober.

31. Sul diveza ar bloaz. Lavaret bennoz da Zoue evit an oll madoberou recevet digant'han er bloaz-ma, ha dreist oll evit grassou ar mission. Nevezi ar bromessa on deuz great epad ar mission da servicha Doue guelloc'h ne ket ebken epad ar bloaz 1912, mes betec or maro.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI



Bloavez Mad

Dar bloaz nevez ar gerant hag ar vignounet a deu da zerri an eil dourn egile en eur lavaret : eur bloavez mad a reketan d'eoc'h ha calz a real ouспен ha joa ar baradoz da fin ho puez. Ar guir gristen a oar ne vez ket bed ar bloaz mad aoualc'h pa n'en deuz ket hon tosteant un tamik d'euz d'or an Envou.

Dar mare-ze ive, pastor ar barrez, tad an oll denved fiziet enn'han gant Doue, da gass verzuc'h ar baradoz, a zo eul levenez evithan, diskoues he garantez de barrissionis, o reketa dez'ho evit ar bloaz a gommans eur guir eurusdet, ed er grinolioù, bara var ar planken, iec'het d'en debri, unvaniez etre an oll ha dreist pet tra karantez Doue er c'halonou evit ma vezint atao prest da veza digemeret er baradoz dan heur ma tei Doue do guervel.

Er bloaz-ma, tud Landunvez, a ia eur mignoun nevez, hanvet *kannadik* ar barrez, da lavaret dez'ho : buez hir ha yac'h en douar-ma, ha kurunen gaer var ho fenn er bed-all goude ho maro. Epad pevar miz dija en deuz kentelliet ho sperejou var guirioneziou ar religion, kennerzet ho c'halonou er brezel zo da c'houzaon evit chom er zav var hent ar zilvidigez, hadet greun ar vertuziou kristen en esperanz e savo en Eneou eun eost puill a oberou mad evit digeri d'or ar baradoz pa rankor trei kein d'ar bed-ma.

Kenderc'hel a fell dez'han ober e kever Landunvezis ken karet gant'han, al labour-ze commancet mad. Ma ro dez'ho avichou aliou evit ma zeï mad an traou a zell euz ar c'horf, e fell dez'han gouscoude araok pet tra, cozeal dez'ho euz ar pez a vo talvoudek evit an Ene, douget da-ze gant ar c'homsou-ma eus an Aviel : « petra dall dan den gounit ar bed oll ma teu da goll he Ene. » Ia, collet ar Baradoz, collet tout, gounezet ar baradoz, gounezet tout.

Eun dever striss eo evit an tad hag ar vam

DESKI ABRED HO RELIGION D'HO BUGALE

(KENDALC'H)

Ema o pugale erruet en oad a c'houac'h pe seiz vloaz. Emain-ta :

I. — *En oad da gommunia :*

Lakat ar vugale da gommunia azalec ho seiz vloaz pe araoc ervez o skiant hag ho deskadurez zo martese un dra nevez evit or bro hag hon amzer, mes en em harpa a ra var komsou Jesus-Krist : Ma ne zebrit va c'horf ha ma na evit va goad, no pez'ho ket ar vuez ennoc'h. Hor Zalver ne lavar ket lezel ar vugale a gostez. Ho pugale, a lavar Hon Tad Santel ar Pab Pi X dan tadou ha dar mamou, o deuz ar memes natur ganeoc'h. Eun Ene o deuz henvel ouz oc'h hini. Dalc'hit sonj euz ar vad a ra ar gommunion d'oc'h Eneou hag eb aon kassit d'an dour a vuez ar gristenien vian a zo o veva en dro deoc'h. Ar zakramant a raio dez'ho ar memes vad a ra d'eoc'h, marteze muioc'h a vad zoken, abalamour ma zeus nebeutoc'h a draou en o Ene oc'h enebi euz gras Doue.

Bremaik e teuio ho ioulou dirol, an drouk-spered, ar skouerion fall do dougen d'ar pec'hed. Mad, evit ma vizint easoc'h treac'h d'an enebourien-ze euz ho silvidigez lakit o c'halon leun a Jesus dre Sakramant an Aoter.

Gouscoude, kerent kristen, n'ellit ket kas ho pugale da daol ar gommunion evel d'an daol ma trebit ho prejou. Deski a rankit dez'ho araoc, da viana, myster an Dreindet, an Inkarnasion, ar Redempcion, pajen 8, 14, 16 eus ar c'hatekis, ar Finveziou diveza, pajen 23, 24, 25, Sakramant an Aoter ha Sakramant ar Binijen, pajen 59, 60, 62, 63, 66, ho C'hreansou, Goulc'hemennou Doue ha re an Ilis, o Actou a Feiz, a Esperanz, a Garantez, a Gontrition.

A goude mo devez'ho great ho c'hommunion genta ne lavarit ken brema e c'houzont traoualac'h a gatekis.

Fazia a raffac'h. Kendalc'hit neuze da zeski dez'ho a nebeut da nebeut leor ar c'hatekis penn-da-benn, ha ma na ellit ket en ober oc'h unan, klaskit re al d'ho sikour. E pet karter e kafoc'h m'o o peuz eur c'hoant guirion, un den a volonteze vad evit ober

al labour zantel-ze. Aon em beuz ne lakafet ket ho polontez vad var ar poent-ze pa veler ken alies ar baotret o tont d'an iliz d'ar c'hatekis eb beza desket eur begad euz ho c'hentel. Poanuis e vezo ho raska pa deuio an examin, ha gouskoude e rankor en ober.

A dra zur, ne vije netra eassoc'h evit lakat ho pugale da gommunia mad hag abred, ma vijent oll er skoliou kristen. Eaz eo gullet ar virionez var gement-ze, pe guir er skoliou kristen ebken e eller ober katekismou, dioual ha kennerzi feiz ho pugale.

Dalc'hit sonj mad penaos eo :

Guelloc'h kelen mabic bihan
Eget destum madou d'ezhan :
Rak skiant an oll skianchou
Eo deski mad, hent an Envou.

An deskadurez kristen ha doujanz Doue, eo kaera heritaj a ell eun tad hag eur vam lezel gant ho bugale.

II. — *Emaint en oad da vont da goves*

Mad, tadou ha mammou, evit ma teuio eassoc'h ho pugalogou da goves ha ma kommuniint gant frouez en despet d'ho oad, deuit assambles gantho. Grit evel kalz kerent kristen, n'ho deuz ket a zamant e coll eur pennad dervez evit ober al labour vad-ze e kever ho bugale.

Ma c'houlennomp digant ar gerent-ze perak e zeont assambles gant ho bugale da goves ha da gommunia, e respountint : Ne reomp nemet ar pez a rea or c'herent hon-unan en or c'hever. A neuze gullet hon deuz penaos pa za ar vugale oll assambles da goves, eb den da veilla varn'ho, an hanter vrassa anezho ne reont nemet c'hoari e tal ar gonfession ha pa zeont ouz an daol zantel emaint o sellet a bep tu, emaint eb devotion ebet. Kementse en deus great deomp kemeret ar boan da zont hon-unan gant ar vugale. Esperanz hon deuz penaos dre ar skouer vad e tiskouezimp dezho ne zear ket da goves evit c'hoari pe ober evel ar re all, mes evit kaout ar pardon eus ar pec'hejou ha lakat gras Doue da gaerat en Ene, ha goude e zeomp assamblez gantho ouz an daol zantel evit ober dezho compren hon deuz eveldho izom eus ar gommunion evit beza muioc'h he karentez Doue ha lakat var hon Ene ar guir da vont d'ar Baradoz.

Mad, red eo anzao, ema ar virionez gant ar gerent-ze hag e zint da veza meulet. Goud a reont aoza sent evit an Env.

III. — *Emaint en oad da vont d'an offeren*

Ar goulc'hemen-ma eus an Ilis : Ho kleo devot a benn-da-benn sul ha gouel berz an offeren, a zo evit ar vugale azalec mo deus skiant kelkous hag evit ho zad hag ho mam. Abalabour da ze eo eur pec'hed bras evit ar gerent chom eb digas ho bugale erruet e seiz vloaz d'an offisou d'ar zul ha d'ar goueliou. Hag ama adarre ra deuio ar vugale gant ho zud, ra zalc'hint anezho en o c'hichen en Ilis evit ma c'hellint beilla varn'ho, gullet hag ho chapeled hag ho leor-zo gant'ho. Ma maint pel diout'ho, nemet mistri pe mestrezet kristen a ve da veilla varn'ho, eus riskl e tremenit an offisou e c'hoari pe e

caozeal. Ma ma ar botred euz ar balustrou, ra vezho lagad o zad pe o breur bras eur vech an amzer o para varn'ho evit guelet penaos e em zalc'hont. Ra c'houlennno digantho ho zad pe ho mam pa zeint d'ar gear petra zo lavaret er gador, var betra e bet ar sarmoun.

Perak eo korvigellet o tavancher, a lavare Mari d'he amezegez? Ne velit ket, Jeannic, so penn caos, pa zann d'an offeren pe d'ar gousperou, e ma atao crog e korn va zavancher.

Mad, eurus e veoc'h tadou, ma ve troed korn o chiletan, eurus e veoc'h mamou, ma ve korvigellet korn o tavancher gant dournic o pugaligou o vont d'an offeren ha d'ar gousperou. Ia, digassit ive ho pugale d'ar gousperou evit rei dezho eur pleg mad, hag o zenna euz compagneziou hag a zeske dezho abred ar fall.



An den en deus e c'hoant mes Doue en deus ive he hini



Unan deus ar merc'hedigou deuet da genta da skol kristen Landunvez, oa bet Joséphine Pondaven, deuz ar C'hantel. Foundatourez ar skol a gemeraz anezhi ar soursi ar vrassa. Paet e veze deuz he foan, rak Joséphine a ioa karantezus meurbet. Ouspen, sentus, aketus da studia, lem a spered a rea joa, hag henor he mestrezet.

Kenta peur liessa en e c'hlass, ini deus he c'hamarezet ne vezent jalous. Goud a vouie ker brao ober dez'ho plijadur, lakat laouen ar re drista, lakat da c'hoari ar re gousketa. Araoc e unec vloas e devoa he certificat d'études. Daou vloaz a ioa abaoue hag he kendalc'he da studia gant aked. Mar doa desket var draou ar bed, oa ken desket var ar pez a zel ouz ar religion, a dre ma c'hanaveze guelloc'h he religion e kreske muioc'h en he c'halon karantez Doue hag ar c'hoant da ober vad d'an Eneou.

Mall e devoa da gaout an oad evit mont da Landerne d'ar skol ma saver ar merc'hed yaouank a zesker evit beza mestrezet er skoliou kristen an n'Eskopti.

E creiz ar volonteze vad-ze, Doue a gav aniz'hi meür evit e Varadoz. Tizet gant eur fluxion beultrin, e c'hlenvet ne badaz nemet pemp dervez. He foan vrassa oa gouelet daelou he mam, hag an dud vad a ioa e kichen he guele. Mes, penaos chom eb voela eur verc'h ken din da veza karet. He foaniou e unan a gouzanve gant ar batiantet ar vrassa. Ne jalas ket, evel ar re no deuz ket a feiz cre, evit reseo he sakramanchou diveza. Re vad e anavese e c'hatekis evit non pas goud penaos ar sakramanchou resevet gant feiz a ra vad d'ar c'horf ha d'an Ene. He joa epad e c'hlenvet oa poket d'ar grucifi, lavaret : Ho polontez bezet great, o va Doue, va foaniou a ginnigan

deoc'h evit distro ar bec'herien ouzoc'h, grit ma vez'ho ganen un deiz er Baradoz va oll gerent; e c'homs diveza d'he mam : Kennavo en Env.

Deiz e anterramant oa eun truez guelet ha clevet voelvan he c'herent, he mestrezet, he c'hamaradezet. Ken karet oa ma viche c'hoanteat non pas james e n'em dispartia. Evit an offis, an ilis a voa leun. An oll er barrez a ioa e dle dezhi; rak piou n'en devoa ket c'hoarzet pe voelet ervez ar rol a rea ken brao er piessou komedi er skol gristen? Piou n'en devoa ket bennoz da lavaret dezhi abalamour d'he c'han melodius epad an offissou.

A breman, ma c'houlenn unan bennak da betra e servich ar religion desket er skoliou kristen e eller respunt : da lakat ho karet, do hentcha verzuc'h ar Barados, da vervel evel ar zent, da gonsoli ar re a jom var an douar varlerc'h ar re zo nijet d'ar Baradoz, o tigaz dez'ho da sonj e c'he n'em veler a nevez en Env, leac'h eurus na vo mui disparti.

ALI

Pa ganer epad an offeren bred ar c'homsou-ma eus ar *Gredo* : *Et incarnatus est... et homo factus est*, an oll a dle e n'em lakat var ho daoulin. Perak ta neuze e chom meur a zen stag fonz ho larrek euz o c'hador er moment-ze?

Niver ties ha tud Landunvez

D'ar bemp a viz meurs diveza e oa e Landunvez 362 ti ha tud

deus un dervez da eur bloas	47
deus eur bloas da 19 vloas	796
deus 20 vloas da 39 vloas	508
deus 40 vloas da 60 vloas	361
deus 60 hag ouspen	182
<hr/>	
En oll	1.894

MIZ KERZU

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

		PAEROUN :	MABROUNES :
25 du.	Anne-Marie-Yvonne Foll, Langurru.	Y.-M. André.	Philom. Cloatre.
26 —	Marcelle-Marie-Augustine Créach, Kantel.	Aug. Magueur.	M.-A. Créach.
3 kerzu.	Jean-François-Marie Cong, Kernozoc.	Franç. Jaouen.	Marie-Anne Ven.
4 —	Hervé-Marie Guena, Ru-Allan.	H. Guennéguès.	Marie Luart.
9 —	Yves-Eugène Floch, Bourg.	Yves Floch.	Jeanne Pellen.
10 —	Jean-Louis Guéna, Kelléron.	P. Guennéguès.	Marguerité Guéna.

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal dez ar varn e goasket ar groaz :

1 Du. Marie-Yvonne Kervoal, 66 vloas, Kantel. — 1 Kerzu. Joséphine Pondaven, 13 vloas, Kantel.
De profundis.

Kannadik miz kerzu a zo koustet pemp lur varnugent. — Bet evit he baea digant : R. B., pevar real ; C. C., G. N., pep a zaouzec guennec ; M. J. L., pevarzec guennec ; E. P., dec guennec ; G. K., P. D., D. E., pep a bemp real. Ne ancounac'hait ket delon mad o *Kannadik*.

MIZ GENVER

1. Bloaz nevez. Dont d'an offerennoù ha d'ar gousperou evit goulenn digant Doue iec'hed hag eurusdet penn-da-benn ar bloaz ha Baradoz da gement ini a vo galvet en daouzek miz-ma da renta da Zoue eur gount eün deus ar mad hag an drouk o devez'ho great. Mad eo e n'em velet, mes drouk eo beza mezo a rei d'an diaoul talvoudegez on dervez kenta euz ar bloaz.

5. Gener kenta. Offeren ar galon sakr da 7 h. nemet kart, ha raktal goude, bennoz ar sakramant.

7. En Ilis gouel ar Rouanez. Eveld'ho, kinnig da Jesus ar pezh hon deuz a vella : eleac'h aour, or c'halonou skeduz dre ar stad a c'hras ; eleac'h ezans, or pedennoù great gant evez, evit ma savint gant c'houes mad verzuc'h an Env evel moget an ezans ; eleac'h myrrhe, or poaniou hag hon labour gouzanvet gant patiantet. Ii, a ra eur veach hir evit dont da velet Jesus, ha n'hi o tremen abiou d'or an Iliz a vez alies gourd da vont d'er saludi en tabernacl.

14. An hano Santel a Jesus. Lavaromp gant devotion an hano Santel-ze alies epad or buez evit ma pellaio diouzomp an droukspered hag evit ma vezo ar gomz divesa a gouezo divar or muzellou e trei kein dan douar-ma.

Ra deuo gant mal voazet ar Galon Sakr da ober ho anter-heur adoration. Eaz e vez'ho dez'ho errut dirak Jesus he dor ar baradoz po devez'ho ken alies daoulinet dirazhan er bed-ma.

A rei o anter-heur adoration er zul-ze pe a lakai real en o flas :
11 h. 1/2 : François-Marie Floc'h, Toul-ar-Ran ; Jean Trébaol, Bédiez ; Jean-Marie Le Ven, Kerguéroc ; Louis Déniel, Kantel.

12 h. : An aotrou persoun, François Jézéquel, Penfoul ; Jean Guennégues, Kernézoc ; François Ollivier, Bourg.

12 h. 1/2 : Yves Taloc, Navant ; Jean Squiban, Jean-Marie Godebert, Kernézoc ; Amédée Cloatre, Bourg.

1 h. : Yves Le Ven, Kerc'hoazoc ; Jean-Marie Perhirin, Pen-Kear ; Jean Levidec, Kerdizinic ; Yves Minguy, Poullouarn.

1 h. 1/2 : François Fourn, Jean Cadalen, Saint-Samson ; Jean-Marie Le Gall, Penfoul ; Hervé Coat, Louhallés.

21. Gouel ar famill Zantel. Lavaret bep nos ar pedennoù e commun dirak Imañ ar famill Zantel, a lenn *Buez ar Zent* pe eul leor santel benak, ober katekis d'ar vugale. Reunion bugale Mari goude gousperou.

Histor Fanch ar Mansouner

Eur mesvier, hanvet Fanch, mansouner deuz e vicher, en devoa great, a bep amzer, glac'har he dud a laoske en anken hag er baourentez ar vrassa evit kas e oll gounideges dan davern.

Un dervez, d'ar bloaz nevez, e chomas gant he gorfad da gousket e fos an hent bras. Antronos sounet ha klan bras e lavaras : chench a rankan buez.

Evit-se e rankan da genta tec'het deus tavarn an tikorn dalc'het gant Yan ar biz cam. Hennez, dre he gomsou flour hag o paea din ar banne kenta, a deñ atao da goulonder va godellou dre ar banac'hou a laka ac'hanon da gemeret goude e vanne kenta. Mad, me en tou, ne din ken he tavarn Yan ar biz cam.

An oll a c'hoarze ouz e glevet. Ne zalc'ho ket, emezho, de bro-messa betek disul. E n'em fazia a reant. Fanch, evit trec'hi e dech, ne dremene ken dirak tavarn Yan. Pan deze da vont da labourat en ti-ze, e rea kentoc'h eur c'hart-d'heur tro evit pellat dous an occasion dangerus.

Bloaz goude en devoe un tam labour da ober en ti tosta d'an davern miliget. Ha, emezan, bezomp var evez, digoromp hon lagad pe e zoump kollet. Ac en guirionez, pa save he vorsol da skei, an taol kenta, e teu Yan ar biz cam var treujou he zor. Buen e tired da gaout Fanch, e crok stard en he zourn, hag e lavar dezhan gant he vouez floura, o va mignoun ker, me gave din oa erruet un dra benak noazus ganes, abaoe an amzer ne velet ken ac'hanot. Deuz ta en ti, kemer eur banne araoc staga da labour, calz e veli skleroc'h. Bon ha Per an ti Kreiz zo o paouez mont ac'halen. O daou e lavarent e tliez beza klan pa ne deues ken en tuma. Ha, emezho, ma vije bet Fanch ar mansouner ama, nac en e diviche evet gant plijadur da eau-de-vie nevez. Ker kouls eo, ma vez c'hoant da eva ar veren var e lerc'h, kement a c'houes mad a jom ganthi. Deuz dioc'htu hag e veli ar virionez.

O trugurekat a ran Yan deuz o peden, a kredi a ran eo dreist mad ho guin ardant. Mes, a drugare Doue, ne effan ken euz an tan-ze en devoa dija devet va goad ha puluc'het eurusdet va greg ha va bugale.

A neuze abaoe ne evan ken an ini melen e zeus savet din eur gorr e pet kostes.

Mad, eme Yan, ar guin ardant ha dreist oll an ini em beuz brema a bareo dit da c'horriou, eul louzou eo evit an oll glenjejou.

Alo, eme Fanch, eur poezoun eo e peus c'hoant da lavaret, ha bez sur penaos al liperien guer a verra o buez euz an anter.

Sel mad, me zo o vont da ziskoues dit va goriou, hag e tennas deus e c'hodel zeou hag eus e c'hodel gleiz, diou vourzad peziou a ugent real, rak goude e zervez, en devoa sonj da vont da baea e c'houel-Mikeal ha diou habit nevez bet prenet de vugale. Sel c'hoaz aont var laez an hent, a ne velez ket va greg o tremen o vont da gass he bugale d'ar skol gristen. Ne reont ket a vez din, ma n'ho deuz ket a zillad seiz, o deuz dillad mezer mad, neat ha kempen. Eleac'h pa zoan sot aoualc'h da vont da tavern, oant lous a goloet a druillou.

Ho zad ne dea d'he di nemet da un ifern, eleac'h brema pa zan d'ar gear e cav din e zan d'ar Baradoz keit ha ma c'heller he gaout er bed-ma. Kenavo, rak presset eo va labour a dalc'h da eau-de-vie mad evit ar re o deuz c'hoant da veva er boan hag en dienez en douar-ma o c'hedal mont kasi-sur da zevi en Ifern er bed all.

Kenavo, me a zo chenchet, hag en troc em euz great, em beuz kavet va eurusted hag ini va fried ha va bugale. Kenavo, Yan ar biz cam, ha ra deuiio an oll vesverien da gemeret skouer var Fanch ar mansouner hag e kavint o tec'het deuz an taverniou, eur peoc'h hag eun evurusdet n'o deuz ket c'hoas tanveat.

Den ne ello lavaret ne ket mad dreist, ali Fanch ar mansouner. Ra zento ta deuz outhi an oll vesverien ha ra lakaint pelloc'h ar joa hag al levenez en o ziegeziou.

An odivi, brassa enebour an den

Ne ket guir a lavar ar mesvier. Lakat a ra gorr ha tomder en izili. Ia, epad eur pennadik, epad mia sil enno an tan o devo a nebeut ha nebeut. A goudeze, e laká buen ar goad da sklasi. Ma o peus savet eun den mezo divar an hent, o coms kenta zo bet, o va Doue, yen sklasi eo.

Ne ket guir a lavar ar mesvier. Maga a ra an den. Lesit ac'hanon da lavaret deoc'h, e vez muioc'h a vagadurez en eur c'hinaouad vara eget en eur litrad odivi. Magadurez an den eo ar boed draillet mat gant an dent ha maled mad er stomok, hag a vez chenchet e goad, e kig, en eskern, en nerz. Eus an odivi ne jom netra er c'horf, evel ma vez eat ebars e teu er meas, goude beza tardet eur pennad er penn, er galon hag er c'hroas-lez, a ves devet gant'han.

Ne ket guir a lavar c'hoas ar mesvier. Rei a ra nerz. Eur gaon all. Roit evit terri o zec'hed da dud hag o deus ar memes beiou pouner da zougen, da unan odivi, da eun all leas, da eun all dour, a c'houi a velo abred an ever odivi feas, skouiz-maró, o coeza dindan e zam, epad ma labouro c'hoas, pell amzer e gamaradet eb re a skouider.

An odivi evet alies ne deo mad nemet da laza ar c'horf hag an Ene, da lakat coll ar skiant vad, hag ar voal vuez hag ar baourentez en tiegeziou. Nag en zo guir lavar on tud coz : « Muioc'h a dud a vez beuzet er veren, eget er ster. »

Piou a gav he vad o rei d'an den sechet odivi ? An diaoul he enebour touet. Mar doc'h ta fur, ma o peus c'hoant da vervel gant o skiant ha da dec'het deus an Ifern ha da vont d'ar baradoz, troit koin d'an odivi, d'an absinthe, ha da gement boesson zo enna cals alcool.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

C'HUEVRER 1912 (N° 6)



KANNADIC
PARRES
Landunvez

♦ ♦ ♦ ♦
EUL LEVRIC BEP MIS
● ● ●
DA LENN HA DA ZEL'HER EN TI

Ar bloavez 1911 e parres Landunvez

E parrez Landunvez e zeuz bet great dre ar Vadiziant, epad ar bloaz 1911, 53 kristen nevez, bugale da Zoue ha dan Ilis, breudeur da Jesus-Krist, heritourien euz ar Baradoz.

Mes, sklear eo, ne erruo ar vugale-ze en Env, ma vevont goude ma vezint deuet da gaout skiant, nemet desket e ve dezho an hent gant ho c'herent pe re al en o flass. Evit-se e rankint ober dezho abred katekismou, o lakat da zerc'hel penn-da-benn d'ho deveriou a gristen o rei dezho ar skouer vad. Ra ello atao an tad hag ar vam lavaret d'ho bugale : baliit var hon roudou hag e tizoc'h ar Baradoz.

Ar gerent a vo o unan paet da genta deuz ar soursi ho devezho kemeret da ober kristenien vad euz ho bugale ; rac ma lakeont doujans Doue en ho c'halonou, o devezho ive doujans evit o zad hag ho mam ; ma teskont dezho derc'hel da oll goulc'hemennou Doue, e talc'hint ive d'ar pevare : Da dad ha da vam a henori, evit pell amzer ma vevi.

Er mor e caver ar c'hrill a drein e c'horf un tam a dreuz. Mad, un dervez ar c'hrill goz a skandale he grillet bian, abalamour ne valeent ket eün ; ar re-ma a respountas : Mes, va mam, araok hor skandalat, roit deomp ar skouer ha baliit eün oc'h unan.

Lavarit ho *Pater*, iit d'an offeren, da govez, da gommunia a lavaro ho c'herent d'ho bugale. Ar re-ma a respouto ive abred, mes grit da genta oc'h unan ar pez a c'houlc'hemenit deomp.

Ia, an tadou hag ar mammou diskiant aoualc'h evit chom eb ober ho deveriou a gristen, a deu abred da laza buez ar c'hras lakeat e kalonou ho bugale dez ho badiziant ha do lakat da gemeret hent an Ifern eleac'h hent ar Baradoz.

Er bloaz tremenet euz bet er barrez trivac'h eured. Mad, d'ar priedjou yaouank e livirin : ho c'hoant eo beva eurus, e peoc'h. Diazezit neuze dioc'htu mad ho tiegez. Ha pet seurt mean rei d'ho ti evit diazes ? Ho teveriou a gristen dalc'het dez'ho penn-da-benn. Bep mintin ha bep nos e taoulinoc'h evit ober ho pedennou ha ma roit er giz-ze ar plas kenta da Zoue en o kalonou o peuz kals chans da viret euz an diaoul da zont enho ; bep sul e zeoc'h assamblez dan offeren ha d'ar gousperou pa viot en offeren bred. Er giz-se an ozac'h ne gavo ket a dro da jom en davarn varlerc'h he c'hreg peguir e tuint o daou assamblez dar gear. Alies e zeoc'h da zaoulina assamblez euz an daol zantel. An daou bried ne dleont kaout nemet ar memez kalon, ar memes Ene, ar memes korf. Joa an eil a dle beza joa egile, poan an eil poan egile. Penaos paka ar pleg mad-ze gant karakter hag humor aliez ken dishenvel ? Abalamour ma cavint aden peurbadus ar garantez hag ar pasiantiet er gommunion great mad hag aliez.

Er bloaz tremenet euz bet ive dervezioù a gaon e Landunvez, rac ar maro en deus diskaret 31 er barrez. Ne deuz bet truez oc'h oad ebet. Skoet e deuz ar bugel bian aveac'h digor he zaoulagad da sklerijen ar bed-ma. Karantez he vam en starde evit ar veach kenta var boull he c'halon n'en deuz ket gellet e ziffen. Skoet en deuz an den yaouank pa lavare : dizale e c'hellin dizama va zad ha va mam dinerzet, kemeret evidon peb poaniussa euz ho labourou. Diskaret en deuz an den e creiz e vrud, en despet d'he nerz eo couezet evel ma couez dindan alan an avel dijadennet, ar vezen zero a zave ken huel he fenn er c'hoad.

Dispartiet en deuz an daou bried e creiz ho c'harantez. Epad ma lavare ar pried iac'h d'ar medicin galvet ractal : o, va goaz ne varvo ket c'hoas, ar vugale n'ellont ket chom eb o zad, e ten e alanad diveza. N'en deus ket espernet an den koz a ioa bennoz an ti dre an oberou mad ha founnuz great epad he vuez. Mad, maroioù ar bloaz tremenet a ro deomp oll ar memes kentel. Oll e criont ouzomp : Dalc'hit oc'h Ene e stad a c'hras, bezit prest da renta da Zoue eun Ene mad, rac n'ouzoh nag an deiz, nag an heur ma veot galvet dirak he varnedigez.

Gouel Nedelek, ar bloaz nevez

Gouel Nedelek zo tremenet e Landunvez er joa hag er laouenediges. Offisou ar pelgent zo bet sioul da veza ma zoa leun couch an Ilis. Eun dudi oa clevet an oll o kana gant ho mouesioù ar floura. Kement a blijadur a ioa en Ilis sklerijennet evel pa vije an eol o para da heur ar greis-deis, ma cavet e zea buen an teir offeren. Ar mabik Jesus ne voa ket lezet var golo e graouik pegen kaer bennak oa kempennet. Eul logeis tom a gavas er c'halonou. An

dud a ioa en offeren anternos a gommunias kasi oll. 800 communion epad an tri dervez gouel. Hag ar vugale deuz seiz da unnek vloas zo deuet oll abaoùe da ober ive euz o c'halon eur c'havel d'ar Mabik Jesus. Bennoz Doue dan tadou ha dar mamou a goupren penaos ar voyen ar guella da gaout bugale fur, eo o lakat da gommunia alies ha dont da zaoulina assamblez gantho ouz an daol zantel.

Dar bloas nevez oa bet ive eur joa vras evit kalon Jesus, gullet oll dud ar barrez en offisou evit pedi Doue da rei e vennos dezho epad an daouzec miz nevez a zigore evit o zostat ouz ar Baradoz dre ho oberou mad. Den mezo ebet en Ilis, en despet da vanac'hou an delou mad. Daoust hag an oll o deus sonj da vale iviziken var roudou Fanch ar mansouner. Neuze e zeus o c'houlaoui evit ar barrez dervezioù a vara, a beoc'h hag a eurusdet.

Breuriez ar Feiz, Breuriez ar Sainte Enfance

Landunvez a virit un tam meuleudi evit he aluzen breuriez ar feiz. Euz a 415 lur eo eat da 420 lur. Arabat deomp gouskoude beza re a stad ennomp, rac o terc'hel count deus niver tud ar barrez, Landunvez zo varlerc'h an oll parrezioù all euz ar c'hanton, nemet diou.

Kemeromp mioc'h a nerz kalon ha commansomp ractal da lakat a gostes eur guennec ar sizun kemeret var ar plijadur, ar c'hoariou, ar veren ; ma lezomp an arc'hant da glask betek an termen diveza hon devezho marteze diegi o rei en eun dournad dek real a daou vennec. Breuriez ar Sainte Enfance zo eat gelloc'h. Eus a dregont lur oar eat da tri lur ha daou-ugent.

Beza e zeus ta er barrez 72 kraouadur hag a lavar da Zoue : Evit ar feiz o peuz roet deomp hag evit goulen ar c'hras de derc'hel birvidik en or c'halonou, e roomp eur gennec ar mis evit sikour sklerijenna var hent ar Baradoz, hor breudeur bian c'hoas payanet.

Morlarjes pe an deziou ened

On tud coz a rea euz dervezioù ened un amzer a joa hag a laouenedigez. An dud euz oad an Hini a skriv ar c'homzou-ma a jome daou ugent dervez ar c'horaiz eb debri kig evit senti deuz goulc'hennou an Ilis ne devoa ket roet c'hoaz an dispansou a vez brema. Araoc commans ar binijen hir-ze an tad hag ar vam a roe do zud eur pred guelloc'h epad dervezioù morlarjes. Ma veze un tam yenien bennak etre ar gerent pe ar vignounet e teuet en occasion-ze da ober ar peoc'h. Ar vugale o servicha a veze mall gantho dont da di ho zad hag ho mam evit digass ho c'houmanand hag an tanva deus morlarjes roet dezho gant o mistri. Ar vugale dimezet hag oar eat da veva e ti o friejou, a deue gant o bugale vian da glask bennoz tad coz ha mam goz. Ma veze morlarjes d'ar zul ar pred a tea un tam buen, rak an tad coz hag ar vam goz a dlie rei skouer vad o vont dad gousperou.

Pa veze morlarjes da lun pe veurs al lard e veze kemeret an amzer. Goude ar pred peb ini a gounte he joa pe he dristidigez hag

an tad hag ar vam a roe aliou mad hag ar re er muia e poan a zistroe d'ar gear laouennoc'h ha gant mioc'h a pasiantet en o c'halon.

Pa veze amzer e veze sellet ouz al loenet, redet ar parkeier, pe great eur barti gartou pe domino. Ar vugale vian peb a bastez gantho ne dlient ket loueda epad ar c'horais, abalamour ma vouient e vijent debret araok antronoz.

Mes an diaoul a c'hrougnas abred o velet e tremenet an derveziou ened er joa hag e sonjas-buan freuza eurusdet an tiegeziou hag eur c'hiz ken talvoudek evit mad an oll.

Evit-ze e c'houezas e kalonou tavarnerien-ze difframa ar yaouankis a gompagnunez ho zud o c'hervel sounerien da lakat da zansal e tall ho hostaleri. Ken tost d'ar bod illo, e vezo lounket guindant pe boisson all ne dall ket hirroc'h. Ar gounid oll a vezo d'an hostis. Goud a rit oll pegen danjerus eo an dansou publik-ze great da Vorlarjes, d'ar foariou ha d'ar zul. Ma kaver enho un den benak a fesson dall var affer vras he silvidigez, e velot ive sur kement truil-len-ze er vro a ziou leo a round. Danset e vo epad an deiz, danset e vo ar peurliezza en noz evit ma vo essoc'h d'ar bleiz debri an danvad pa vior antervezo hag e kreiz an denvalijen o vont d'ar gear. Chans c'hoas ma ne vez ket eno tud goloet o bizach gant masklou evit ma vezo essoc'h dez'ho ober an drouk eb beza anavezet.

Gant gras Doue, e parrez Landunvez eo couezet dansou publik morlarjes ha ne deor ket d'o c'houmans a nevez e bloavez ar mission. Ar frouez a zantelez lakeat neuze er c'halonou-ze c'hoas re yac'h evit ma vent taolet da vressa e fank ar pec'hed.

Mar deuz bet calz tud o communia da c'houel an oll zent ha da Nedelec, e vo kement all da vorlajes evit gounit induljansou ar c'harante-heur. Rak gout a rit penaos evit distrei an dud deuz dizurchou sul ha meurs al lard, evo lakeat en daou zervez-ze en hor parrez ar Sakramant meulet ra vezo var an aoter.

Ma kri an diaoul dre dizurchou morlarjes, deuit davidon hag pezho ebad en douar-ma ha tan an Ifern da leski ennan er bed all, Jesus divar an aoter a gri ive deuit dam digoll dre eur gommunion vad deuz ar boan great din gant an dud dissakr epad an derveziou ened, ha me ho paco er bed-ma dre joa o kalon e stad a c'hvas hag er bed all dre eurusdet ar baradoz. Ar choas ne vo ket diez da ober etre an diou vouez-ze evit ar c'hristen guirion.

Evel e Rom

E darn euz hon Ilizou e kaner pe e lenner brema al latin dishenvel diouz kent, hag ar c'hiz-ze a nebeudou en em skigno dre an escripti a bez. Perak an dra-ze adarre ?

Abalamour e Rom e rear evelse hag eno e tleer gouzout gouelloc'h eget aman penaos kana ha lenn al latin, hag a hent all, Iliz Rom eo Rouanez an holl Ilizou, hag an Ilizou all a dle poania da ober diouti e peb doare.

Setu aman petra zo red deomp gouzout evit beza goest da euil

giz Rom evit lenn ha kana al latin. Ma klevan gouskoude e vezo faout er pez a skrivan aman varlerc'h, e n'em dislavarin en eur c'hammadik all.

Al lizeren *u* a vez lennet evel pa ve *ou*.

Eleac'h *autem, euge, equum, quia* e lennoc'h : *aoutem, laoudate, eouge, ecououm, couia*.

Al lizeren *c* araok *e, æ, œ, i*, a vez lennet *tch*.

Eleac'h *pacem*, e lennoc'h : *pa-tchem*.

Mes al lizeren *c* araok *a, o, u*, a vez lennet evel *ka*.

An diou lizeren *cc* dirak *e, æ, œ, i*, a vez lennet *tch*.

Eleac'h *ecce*, e lennoc'h : *et-che*.

An diou lizeren *ch*, a vez lennet *k*.

Eleac'h *machina*, e lennoc'h : *makina*.

An diou lizeren *sc*, a vez lennet evel *ch* e gallec.

Eleac'h *discipulus*, e lennoc'h : *dichipoulqus*.

An diou lizeren *xc*, a vez lennet *k-ch*.

Eleac'h *excelsis*, e lennoc'h : *ekchelsis*.

Al lizeren *g*, a diou *gg* araok *e, æ, œ, i*, a vez lennet *dj*.

Eleac'h *agimus*, e lennoc'h : *adjimous*.

An diou lizeren *gn* a ves lavaret evel e gallec.

Eleac'h *agnus*, e lennoc'h : *anious*.

Al lizeren *h* a vez lennet evel *k* er geriou *mihil, nihil*.

Eleac'h *mihi, nihil*, e lennoc'h : *mikil, nikil*.

Al lizeren *j* a vez lennet evel *i*.

Eleac'h *Jesus, ejus*, e lennoc'h : *iesous, eious*.

Al lizeren *t* araok *i* suivi d'une voyelle a vez lennet *ts*.

Eleac'h *justitiam*, e lennoc'h *iouce-ti-tsiam*. Mes ma vez araok al lizeren *t* al lizeren *s* er memes ger e vo lennet *t* ebken. *Hostia*, a lennoc'h ta : *hos-tia*.

Al lizeren *z* a vez lennet evel *dz*.

Eleac'h *zelus*, e lennoc'h ta *dzelous*.

MIZ GENVER

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

	PAEROUN :	MAEROUNES :
16 kerzu	Marie-Joséphine Le Borgne, Pen-ar-Pave.	T. Le Borgne. J. BRÉNEOL.
21 —	Marie-Renée Saliou, Tour.	J.-F. Tréguer. M.-F. Saliou.
26 —	Marie-Nocéie-Joséphine Uguen, Traon.	André Uguen. J. Salou.
11 genver	Jean-Marie Le Lann, Saint-Samson.	J.-M. Le Lann. M.-G. Magueur

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIADELEZ

A zo bet liamet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe e derri :

- 9 genver. Vincent Le Borgne, Kerc'hoazoc ha Françoise Guennéguès, Penfoul.
- Yves-Marie Guennéguès, Penfoul ha Philomène Provost, Lannourien.
- Jean-Marie Guennéguès, Penfoul ha Marie-Jeanne Débosque, Guitalmere.
- Gabriel Masson, Lambézellec ha Marie-Jeanne Héliès, Kerzent.
- Ollivier Héliès, Kerzent ha Marie-Françoise Thépaut, Plabennec.
- Jean-Marie Guellec, Mahalon ha Marie-Louise Le Menn, Kantel.
- 22 — Joseph Trébaol, Rédiez ha Madeleine Godebert, Castel.
- Joseph Godebert, Castel ha Marie-Joséphine Jaouen, Kerincuff.
- Goulven Godebert, Castel ha Rosé Normand, Kerent.

Bennoz Doue varnho.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hodal deiz ar varn e goasket ar groaz :

- 15 Kerzu. François Perchoc, Traon-Bian, 50 bloaz.
- 29 — Yves-Marie Richard, Kerriou, 50 bloaz.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

- 9 Genver. Marie-Yvonne Magueur, Kerc'hoazoc, 6 miz.

Laudate pueri Dominum.

MIZ C'HUEVRER

2. Guener kenta ha gouel ar chandelour. An offeren vintin da 6 h. 1/2, an offeren bred da 9 h. 1/2 ; ar Rozera da 2 h. e Kerzent ha gousperou da 2 h. 1/2.

Dont dan offeren bred gant peb a c'houlouen goar, evit ma vo kavet en oll tiez goulou benniget pa zeor da gass dar re glan ho sakramanchou diveza. O derc'hel en dourn var elum epad ar procession, an aviel, azalec ar gorreou betek ar gommunion. Sonjal eo Jesus digasset da gever an derves-ze var breac'h he vam dan templ a Jerusalem ar guir sklerijen evit on hench varzuc'h ar Baradoz.

4. Sul ar Septuagesim. Da veza ma vez salvet kement ini a zistro a vir galon ouz Doue araok he varo, arabat gortoz re abalamour ne vet surprenet e stad fall.

11. Sul ar Sexagesim. Ne ket aoualc'h klevet comzou Doue, ret eo senti outho hag o lakat da zougen frouez evit or silvidigez. Adoration voazet ar Galon Sakr a vezo graet dan trede sul euz ar miz en dro-man.

18. Sul ar lard : Evit digoll Jesus deus an dizurchou a vez great e meur a leac'h en dervez-ze, ar sakramant a vezo exposet var an

aoter deuz an offeren vintin betek fin ar gousperou. Ar baotret gant o eil, o zrede hag o fevare pask a deui da goves d'ar zadorn seitec evit ma c'hellint communia^{er} zul-ze. Ar rozera vezo da 2 h. 1/4 ha gousperou da 3 h.

Goude gousperou e vezo coveseat.

A zo pedet da ober anter-heur adoration en dervez-ze :

11 h. : François Jaouen, Kerincuff ; Yves Kervran, Penfoul ; Eozen Magueur, Pen-al-Lan ; Gilles Guennéguès, Kermajeau.

11 h. 1/2 : An Aotrou Persoun, François Jézéquel, Penfoul ; Jean-Marie Bégoc, Alexis Salaün, Bourg.

12 h. : Yves Minguy, Job Godebert, Guillaume Lescop, Jean Floc'h, Bourg.

12 h. 1/2 : Claude Lunven, Ti-Pry ; Basti Trébaol, Kerguérioc ; Paul Minguy, Poullouarm ; Auguste Jaouen, Loudourzan.

1 h. : Jean-Marie Corolleur, Kerlaguen ; Fanch Colin, Penfoul ; Yves Uguen, Traon ; Jean Autret, Kantel.

1 h. 1/2 : Jean-Marie Quéméneur, Traon ; Vincent Cadalen, Kelleret ; François Guennéguès, Kelléron ; Joseph Talarmin, Kelleret.

19. Lun al lard. Offeren vintin da 6 h. 1/2, servich evit Anaon ar barrez da 8 h.

20. Meurs al lard. Offeren vintin da 6 h. 1/2, servich evit ar Veleien bet er barrez hag ar Veleien maro var ar bloaz da 8 h. Goude ar servich e vo exposet ar sakramant.

Zo pedet da ober ho heur adoration en dervez-ze :

9 h. : Noémie Vaillant, Joséphine Godebert, Jeannie Léon, Marie-Yvonne Floch, bourg.

10 h. : Julie Pérez, Jeannie Floch, Joséphine Cloatre, Marie Minguy, bourg.

11 h. : Françoise Morel, Clémentine Allouer, Françoise ha Jeanne Floc'h, bourg.

12 h. : Dimezellet ar skol gristen.

1 h. : Mme Vaillant, Joséphe Nédélec, Marie-Yvonne Lescop, Françoise Floc'h, bourg.

2 h. : Rose Le Borgne, Joséphe Guennéguès, Elisa Pérez, Anna Squiban, bourg.

3 h. : Marie Bizien, Philomène ha Claire Coat, Jeanne Le Hir, bourg.

4 h. : Bennoz ar Sakramant.

21. Merc'her al ludu. Offeren vintin da 6 h. 1/2, offeren bred da 9 h. Derc'hel sonj e vimp skubet deuz ar bed-ma pa sonjimp an nebeuta evel ar bouldren gant an avel.

25. Sul genta ar C'horais. Diouall oc'h an drouk-speret ho tento evel Jesus evit or chass gantan mar gel en Ifern.

Kannadik miz genver en deus koustet 30 lur. Bet evit sikour er paea digant : L. T., eur skouet ; J. C., pevar real ; E. L., eiz real, eur strollad deuz T. pemp real ; F. C., ugent real ; J. P., pemp real ; G. B., pemzek gennek ; Y. A., J. B., M. A., peb a bevar real ; M. P., dek gennek ; M. C., c'houec'h real ; X. hag X, peb a eiz real ; X, dek real ; P. G., H. H., peb a eiz real ; M. G., dek gennek ; J. R., dek gennek.

SOUDARDED, MARTOLODED

Eul levenez vras eo bet evidon lenn el liziri em beuz recevet dre occasion ar bloaz nevez digant ar martoloded hag ar soudarded, e rea dezho ar brassa plijadur kaout ar *C'hannadik*. Eur joa, emezho, eo evidomp klevet keleier fresk ar barrez ha kaout aliou mad evit on derc'hel stard en or feiz ha var hent ar Baradoz. Mar deuz en o zouez unan bennak hag en deuz c'hoant da gaout al leorik bian, n'en deuz nemet digass e adress d'ann Autrou Persoun.

E KOMPAGNUNEZ VRAO

Lenn a rear e kannad miz Genver : E kalz karteriou e Franz e vez great fae var ar veleien ha tud a gaver, a ra goasa m'hellont brezel dezho, en em fougeal a reont a gement-se. Neuz ket goulskoude leac'h. Unan euz ar fougerien-ze a lavare eun dervez : « Petra fell deoc'h ; me zo eun anticlerical, pe enep ar veleien. »

Eur c'hristen mad a respountaz dezhan : « Mestr out, va mignoun. Mes anaout a rez-te ar guir anticlericaled ? Selaou, me zo vont da lavaret did. Ar jusèvien zo anticlericaled ; ar franmasounet zo anticlericaled, an dud dizoue zo anticlericaled ; ar polisouned zo anticlericaled ; al laeroun zo anticlericaled ; ar vuntrerien zo anticlericaled ; an diaoul zo anticlerical.

» Te avad, a zo e koumpagnunez vras, neketa. »

Ni Landunveszis, selaouomp hor beleien ha sentomp outho, rak gantho e ma ar virionez, hi a ziskuez deomp hent ar Baradoz hag a zigor deomp an or. Ni, a zo hag a jommo clericaled pe vignounet ar veleien. N'on deuz ket a c'hoant e couezfe varnomp ar rebech a Jesus o parlant euz ar veleien. An nep ho tisprij am disprij-me.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

MEURS 1912 (N° 7)



KANNADIC

PARRES

Landunvez

EUL LEVRIC BEP MIS

DA LENN HA DA ZEL'HER EN TI

Piou c'houlen chom eb labourat d'ar zul ?

DA GENTA, DOUE E UNAN

An oll derveziou a zo da Zoue, peguir en deuz o great. Mad en he Vadelez, e ro deomp c'houac'h evit gounit hor bara, mes derc'hel a ra evithan ar seizvet.

Setu ama he gomzou el lezen goz : Labourat a reot epad c'houac'h dervez, mez ar seizvet a vo eun dervez a ziskouiz. Ne reot en dervez-ze labour ebet, na c'houi, nag o pugale, nag o servicherien, nag o loened, nag an estranjourien a dremeno dre ho keriou. Ar gourc'hemen-ze a Zoue a ioa striss meurbet el lezen goz, peguir an hini a labour en deiz-se a veze lakeat d'ar maro.

El lezen goz an dervez a ziskouiz oa ar zadorn. Abaoue, meo pignet en Env Jesus-Krist, an eil fersoun eus an dreinded sakr, goude beza or prenet gant ar priz euz he c'hoad, an Ilis kentelliet gantho ha bleinet gant ar Spered-Santel e deuz choaset ar zul evit an dervez da eana. Marteze abalamour ma zeo ar zul a zigas deomp ar muia sonj euz an dreinded-santel. D'ar zul pe dervez kenta ar sizun, Doue an tad a gommasas croui ar bed, d'ar zul fasq, Jesus an eil fersoun euz an dreinded zo deuet a varo da veo, da zul ar Pantekost e tiskennaz ar Spered-Santel var an Ebestel dindan furm teodou tan.

Ma ne deuer ket brema da lakat ractal d'ar maro an den diskiant da labourat d'ar zul eb eur rezoun vad bennag, he zizentidigez ouz lezen Doue a ro, ar pezh a zo yoassoc'h ar maro d'he ene, rak ober a ra eur pec'hed marvel o vankout da c'hourc'hemen Doue enn eur poent grevus, gant eur vouiziegezh hag eur volontez parfet.

E pec'hed ebet n'euz mioc'h a fallagriez eget el labour da zul. Al labourer da zul ne gleo ket ebken tamal he goustians, mes c'hoas soun ar c'hleier ouz er gervel d'an Ilis, gouelet a ra ouспен he amezien guisket gant o dillad sul o vont d'an offisou, peb tra a zesk dezhan e pec'h o vont a eneb an trede goulc'hemen a Zoue :

Ar zuliou santel a viri,
E servich Doue, oc'h e veuli.

Evit diskoues sclear ingrateri al labourer da zul e kounter an histor-ma. Un den a voa o vont d'ar gousperou. Var hent ar bourg e kav eur paour o c'houlou an aluzen. Dirak klemmou ar paour goloet a druillou ha trez eun dienez vras varnhan, e ten e yalc'h a zo seiz pezh a ugent lur enni. Rei a ra d'an izomek c'houec'h anezho. Pebez karantez evit e vadoberour a dlie beza e kaloun an den reu-zeudik. En em fazia a rit.

Rak ar zonz diaoulek-ma a deu en e spered. Perak n'en deuz ket roet din ive ar pezh all. Redet a ra var e lerc'h, lamet a ra de c'houzouk en eur lavaret, roit ar pezh a ugent lur o peuz dalc'het pe e zoc'h mouget. Scrija a rit o velet eur seurt ingrateri. Ha koulskoude, piou eo ar moundian mad-ze, piou eo ar paour-ze.

Ar moundian-ze eo Doue, en deuz roet deomp c'houeac'h dervez var ar seiz en deuz great, ar paour eb kaloun-ze eo al labourer da zul. Diframa a ra digant Doue en despet dezhan an dervez en devoa dalc'het evithan, ha moug a ra anezhan en e vadoberou peguir dre he bec'hed e voug meritou passion e Zalver en devoa digoret dezhan dre he varo var ar groaz doriou ar Baradoz.

Pa gounter an niver deus an darvoudou spountuz a erru er vro, peb bag a vez diskennet e founz ar mor gant an avel dijadennet, pet den a vez friggaset gant kirri an hent ouarn pe gant ar c'hirri a red var an hent braz, pet den a vez voal-lakeat er chasse pe o labourat en o fark, e kaver e vez mioch, a valeuriou, d'ar zul evit ar c'houeac'h dervez all euz ar sizun.

An nep ne anavez ket dre eno cassoni Doue ouz al labourer da zul a zo dall ha bouzar a volontez vad.

Al lavar-ma euz hon tud coz a vo atao guir :

Al labour da zul ne binvidika den,
Ha bleud an diaoul a ia da vren.

Da guenderc'hel eur veach kenta.

Goulc'hemennou an Aotrou n'Eskop evit amzer zantel ar C'horaiz 1912

ARTIKL I

Digas a reomp da sonj d'ar gristenien eo red ober pinijen epad amzer santel ar c'horaiz ha miret lezennou an Iliz divarben ar iun hag ar vijil. Al lezennou-ze a verk e rank kement hini en deuz eur 21 vloaz great iun epad ar c'horaiz bemdez, nemet d'ar zul, hag ar re zo en oad a skiant chom hep debri kig epad ar c'horaiz.

ARTIKL II

Abalamour d'an otre resevet digant hon Tad Santel ar Pab, e permettomp, epad ar c'horaiz-ma, d'an oll gristenien euz hon Escopti en oad da iun debri kig : 1° d'ar zul, d'an oll brejou ; 2° d'al lun, d'ar meur, d'ar iaou, d'ar zadorn (nemet sadorn an daouzek-deziou 2 a veurz, hag ive iaou ha sadorn ar sizun zantel).

An dud n'emaint ket e tro da iun abalamour d'o oad, d'o zem-pladurez pe d'o labour tenn, a c'hell debri kig peb pred d'ar pevar dervez euz ar sizun merket huelloc'h. Difennet eo, epad ar c'horaiz, zoken da zul, debri kig a pesket er memes pred.

ARTIKL III

Abalamour d'ar memes otre e permettont kemeret amân, leaz, fromaj-leaz epad ar c'horaiz, zoken d'ar pred dioc'h an noz.

Viou a c'heller debri bemdez nemet deiz guener ar groaz : evelato ar re o deuz da iun ne c'hellont ket debri viou d'ar pred bian dioc'h an noz.

Permetti a reomp lakaat gress (soa, lard) e lec'h amân evit prepari ar boued, d'an deziou ma zeuz difen da zebri kig, nemed eun dervez ebken : da vener ar groaz.

ARTIKL IV

An aotronez chaloniet evit hon eskopti, ar bersounet evit o farressionis, superioret hag omonerien ar c'houentchou pe scoliou, ar veleien evit ar re zo o kofez ganto, a c'hello rei dispanz eus ar iun ha permetti debri kig meur a vech bemdez d'ar re o devezo eur rezoun vad benag, gant ma n'er graint ket evit rumajou tud a-bez.

ARTIKL V

Abalamour d'an otre deuet deomp euz Rom d'an 9 a viz ebrel 1910, e permettomp debri kig bep sadorn epad ar bloaz-man, nemet da sadorniou ar pevar amzer, hag ar sadorniou all a ve merket iun abalamour d'eur gouel bras.

ARTIKL VI

Abalamour d'eun otre all euz an 9 a viz ebrel 1910, e permetomp debri kig da c'houel sant Mark ha d'ar Rogasionou.

ARTIKL VII

Ervez m'eo merket e liziri hon Tad Santel ar Pap, ar gristenien o devezo bet an dispansou merket huelloc'h a zo pedet d'ober en o leac'h oberou mad ha dreist oll aluzennou ervez o danvez.

O fedi a reomp gant nerz da sikour gant o aluzennou oberou an Escopti a deu bembez o niver hag o ezomou da greski.

An aluzennou-ze vezo roet d'an aotrounez persouned hag omerien pe lakeat en eur c'hef great evit o reseo ha digasset e vezint da zekretour an Escopti.

ARTIKL VIII

Ar re baour, ne c'helfent ket ober eun aluzen zoken dister, e leac'h an aluzen a lavaro bep sizun euz ar c'horaz 5 *Pater* ha 5 *Ave Maria* evit ezomou an Ilis, ar Frans hag an Escopti.

ARTIKL IX

Permetti reomp rei benedikcion ar Zakramant goude ar pedennou e vez great d'ar pardaez, e darn eus Ilizou ha chapelion hon Escopti.

ARTIKL X

An amzer fask a zigoro evit an Escopti da zul ar bassion hag a vezo klozet d'an eil sul goude pask.

Goulen a reomp stard ma vezo leset gant an dud fidel ar vrassa liberte evit choaz o c'honfessour. Ar reolen great gant ar pevare konsil a Latran, a vezo embannet d'ar pevare sul euz ar C'horaz, hag ar bersounet a zigasso da sonj d'o farrissioniz euz lesen an Ilis divar ben koves ha kommunia da Basq, hag a alio stard an oll da ober o dever.

Lennet e vezo ive an decret *quam singulari*, ha lavaret sklear eo red d'ar vugale evel d'an dud vras kommunia da Bask.

ARTIKL XI

Ar gest evit an Douar Santel, goulennet stard, gant an Tad Santel ar Pab, a vezo great da Vener ar Groaz.

ARTIKL XII

Ar gest evit diner an Ilis a vezo great, kement ma vezo possubl, araok pask. An tamigou sikour a roe ar c'houarnamant a zo fin dezo abaoue ar bloaz 1909. An dud fidel a gompreno an dever a goustians o deus da zikour o beleien da veva. An aluzennou resevet evit an dra-ze a vezo digasset da sekretour an Escopti hag ar gommission a labouro neuse evit rei sikour d'an neb en devezo izom.

ARTIKL XIII

Goulen a reomp stard, ma vezo, evel m'eo bet merket guechall,

great ar gest evit diner sant Per, hag ar gest evit ar patronachou ha kelc'hou studi da c'houel ar Rozera.

Recommani a reomp ive d'an dud fidel hor skoliou kristen a-zo kement a izom anezo en deiz hirio, ha da c'houel ar iaou bask, e vezo great eur gest en oll ilizou evit skol-veur Paris an Institut catholik hag evit scoliou kristen an Escopti. Evel ma teu al leoriou fall da ober muioc'h mui a zroug bemdes er skoliou, e c'houlennomp digant ar veleien hag an dud fidel lavaret goude ar pedennou a reont o-unan pe assamblez, ar c'homsou-ma : « Euz ar skoliou dizoue hag ar mistri difeiz, hon dilivrit, va Doue. »

EURED

D'ar meurs 13 a viz c'huevreur, an aotrou Gélébart, kure Loc-Maria-Plouzané en deuz eureujet e vreur Gabriel gant Françoise Perhirin a Penkear. Eur joa e vez atao evit tud Landunvez gullet o c'henvroad yaouank o pignat e kador ar Virionez, rak sur e vezont da glevet comsou talvoudek bras evit mad ho Eneou. Mes ar prezeguen great dimeurs d'he vreur ha d'he c'hoar nevez eo a dra sur kaera komzou en deuz lavaret en ilis Landunvez. Mar deuz bet en dervez-ze goude kreiz-deiz, friko e Kerc'hing evit ar stomok euz bet ive deuz ar mintin en ilis Landunvez friko evit ar spered hag ar galoun. Eur geillenen a viche bet klevet o nijal ker sioul e chomet da zelaou ar prezeguer. Noun evit lakat er c'hannadik nemet un fanva divlas ha berr-berr deuz ar pezh em beuz klevet va unan gant kement a blijadur.

Goude beza lakeat an daou bried yaouank da drugurekat Jesus euz ar vadelez en devoa bet da ober deuz ar briadelez eur sakramant a iea da skuill en ho Eneou ar grassou o sikouro da veva e guir kristenien, goude beza diskouezet dezho o deveriou e kever Doue hag en o c'hever o unan, ar prezeger a echu o lavaret d'he c'hoar : c'houi a zigasso do menaj nevez doujans Doue hag ar vertuziou santel hadet en ho kaloun gant o tad hag o mam ha gant mestrezet kristen. Rak o kerent no deuz ket sellet ouz an dispign evit o cass d'ar skol gristen a ouient oa guella tra a ioa evit rei deoc'h furnez ha santelez. Ne ankounac'haoc'h james ho c'harantez evidoc'h, da veza mo pezo en o ti nevez da garet o pried hag ive eun tad, eur c'hoar, breudeur, ha beza e vioc'h, oun sur joa Kergastel vras dre ho aked do labour, do teveriou a relijion, dre o tousder, ho laouenedigez hag o ijin da renta servich d'an oll.

Ha goude, e lavar d'he vreur : Va breur ker, sur oun, no peus ket ankounac'heat comsou diveza hor mam garet d'he bugale yaouankik c'hoaz ha bodet en dro d'he guele a boan : « Va bugale, emezi, karit atao o tad, bezit mad da zenti, chomit atao fur, dalc'hit karantez Doue en o kaloun ha pedit evit ho mam, ne ankounac'hait ket e koust mioc'h din kimiada diouzoc'h eget ober da Zoue ar sacrifis euz va buez. » Mes Doue o c'hervel hor mam davithan

ken abred, a leze ganeomp eun tad mad hag eur vam goz he deuz silet enn or c'haloun ar feiz kre ha nerzus a ioa en e ini. A, er moment-ma, emia aze o tad evit rei deoc'h e vennoz, goulennit ive bennoz ho tiou vam, deuz barr an Env e vizint eurus de lezel da goeza varnoc'h ha var ho pried a garoc'h atao evel doc'h oc'h unan. Daou iviziken da ranna poan ha laouenedigez ar vuez e chomoc'h startoc'h var hent an Env en despet d'ar pez a deuffe da glask mont eneb ho silvidiges.

Goude eur goms c'hoas a anaoudegez vad d'ar gerent, d'ar vignounet, d'ar veleien deuet niverus da gemeret perz en he joa ha da unani ho fedennou gant e re, an aotrou Gélébart a lavar an offeren eured, ha goad Jesus o redet var an aoter en devezho bed digant Doue e Dad ar grassou puill a rento an daou bried yaouank eurus en douar-ma da c'headal eurusdet peurbadus ar Baradoz.

MIZ C'HUEVRER

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritoürrien ar Baradoz

	PAEROUN:	MAEROUNES:
12 c'huevreer. Joseph CONQ. Traon.	Joseph CONQ.	Francine CONQ.
14 — Marie-Philomène COADOU, Penfoul.	Jean-Marie COADOU.	Philomène TALOC.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIADELEZ

A zo bet liamet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe e derri :

13 c'huevreer. Gabriel GÉLÉBARD, Kergas:el ha Françoise PERHIRIN, Penkear.

A zo eat d'euz Landunvez da eureuji e leac'h all epad miz c'huevreer

François-Marie GUENNÉGUÉS, Créac'h. — Jean-Marie PERHIRIN, Penkear. — François GUENNÉGUÉS, Kermajeau. — Marie-Yvonne GUENNÉGUÉS, Kermajeau. — Rosalie CADALEN, Streat-Lan. — Gabriel APPRIOU, Trémazan.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal deiz ar varn e goasket ar groaz :

23 Genver. Armand Perhirin, 45 bloaz, Rochard.
8 Chuevreer. Yves Guéna, 74 bloaz, Kelléron.
18 — Françoise Guéguen, 30 bloaz, Kantel.

De profundis.

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar guella renk

Clas kenta.	{	1 Françoise Brénéol.	Clas eil.	{	1 Rosalie Croguennoc.
		2 Marie Guéna.			Rummad kenta {
Rummad kenta.	{	3 Hélène Drégou.	Eil rummad.	{	1 M.-J. Le Borgne.
Eil rummad.	{	1 Philomène Guennégués			2 Victoire Guizioù.
		{	2 Céline Le Dall.		3 Marie Jézéquel.
Trede rummad.	{	1 Euphrasie Maguérés.	Clas trede.	{	1 Marie Perchoc.
		2 Bernardette Vaillant.			2 Lisette Nédélec.
		3 Madeleine Morel.			3 Catherine Talarmin.
		4 Marie Vaillant.			4 Françoise Le Guen.
		5 Jeanne Pellen.			Rummad.
				6 Marie Milin.	
				7 Augustine Talarmin.	

MIZ MEURS

1. Guener kenta. Offeren ar galoun sakr da 7 heur nemet kart. Goulen dre hor c'hommunion a zigoll ma rei oll dud ar barrez eur pask mad.

3. Eil sul ar c'horais. An aviel a hirio a gount deomp penaos ar guel ebken a Jesus var Menez Thabor kaer evel ma vo er Baradoz, a reas da dri d'eus e ziskibien kaout c'hoant da dilezel rañtal oll draou ar bed-ma, evit chom atao ganthan. O, ni zo brao ama, eme sant Per, chomomp ama. Setu ive petra lavarimp oll en eur errut en eurusdet ar Baradoz, o, na ni zo brao ama. Ma man an traou er gizze tec'homp ta deus ar pec'het ha gouzanvomp gant patientet oll boaniou an douar-ma evit errut sur en eurusdet a bado da viken.

10. Trede sul ar c'horais. Pedi stard evit ma compreno ar voazet penaos dre ar votadek e tleont dibab tud goueziek da ziffen mad ar vro ha mad ar religion. Oll e tleer mont da voti ha voti ervez ar goustians. Den a skiant ne dei da verza he vouez evit eur banne. Derc'hel sonj penaos deiz ar varn e vezo poezet ar billet vot he balansou Doue

A zo pedet da ober en dervez-ze o anter-heur adoration :

11 h. : Herve Bervas, Sant-Samson ; Gabriel Trébaol, Kerguérioc ; Claude Le Borgne ha Joseph Théréne, Kerc'hoazoc.

11 h. 1/2 : An aotrou kure ; Jean Guennégués, Kernézoc ; François Jézéquel, Penfoul ; Yves Floch, bourg.

12 h. : An aotrou persoun : Jean-Marie Godebert, Kernézoc ; Jean Godebert, bourg ; Joseph Foll, Langurru.

12 h. 1/2 : Jean-Marie Minguy, Kellérou ; Jean Taloc, Kerc'hoazoc ; François-Marie Cloâtre, Kervéon ; Jean-Marie Uguen, Traon.

1 h. : Job Perchoc, Kervéléoc ; Hervé Guéna, Kelléron ; Victor Cadalen, Kelléret ; Vincent Le Gall, Penfoul.

1 h. 1/2. : François Corolleur, Penfrat ; Yves Taloc, Kerlaguen ; Gabriel Pérez, Kerc'hoézel ; François-Marie Trébaol, Kerguériou.

17. Pevare sul ar c'horais. Gousperou an Arc'hel Gabriel. Derc'hel sonj ema atao en or c'hever an eal mad. Ne reomp james dirazhan ar pez a ouzomp a raffle poan dezhan ha da Zoue.

24. Sul ar Bassion. En dervez-ze e tigor Pask. Eveza ma rank brema komunnia en amzer fask kement hijni en deuz skiant hag a zo gwest da compren piou a zisken en e galon pa za ouz an daol zantel, evez o ive mioc'h a dud da goves. Pedet oc'h ta da en em ranna ha da zont muria ma c'helhor var ar pembez. Labour cals guelloc'h a vezo great eget e kreiz press ar zul ha goueliou Pask.

Ar vugale a dle euil ar retred hag ar vugale 7, 8, 9 ha 10 vloaz resevet evit komnunia a deio oll e sizun ar bassion. Covez a dlefent goude ar skol d'ar zadorn araok sul ar bassion hag ive d'ar zul-ze goude gousperou, peguir euz gouel antronoz.

25. Annontiasion. Offeren vintin er bourg hag e Kersent da 6 h. 1/2. Offeren bred e Kersent da 9 h. 1/2, rozera da 2 h. ha gousperou da 2 h. 1/2. Ra deuimp oll da Guerzent en dervez-ze da c'houlen digant an Introun Varia a vir zikour na jomô den e Landunvez e galloud an drouk-spered en eur dilezel he bask. Neuze an eal a ello lavaret deomp ar c'homzou a lavaraz e kever an dervez-ma d'ar Verc'hez; an Aotrou Doue zo ganeoc'h, hag an neb zo Doue ganthan en deuz an alc'houez a zigor ar Baradoz.

31. Sul bleuniou. Derc'hel ar bodou beuz pe balmez en dourn epad ar prosession hag an aviel o lakat goude en ties, er c'hreier, er parkeier, evit ma teuint dre vennoz an Ilis kouezet varnho da bellat deuz an ti an drouk-sperejou, deuz ar c'hraou ar voal chans, deuz ar park ar c'hlenvejou a dag an ed.

TAOLIT EVEZ

Er baotret a dle ober o fask kenta solannel er bloaz-ma pe er bloaz a zeu neuz c'hoas nemet pevar hag a zeksfe bep tro o c'hentel, François Bizien, Albert Guennégues, Yves-Marie Didou, René Daouben.

Ar re all a ranko beza korbellel ma ne boagn ket mioc'h o zud gantho. Ar re ne vouzint ket ho c'hentel a ranko dont d'ar c'hatekismou bembes epad ar c'horais, ar re a vouezo teir guech ebken.

KANNADIK

Kannadik miz c'huevreur en deuz koustet 30 lur. Bet evit sikour er paea digant : J. M., M.-A. B. peb a eiz real ; M. B., J. C., Ph. M., M. G., J.-T., X. peb a bevar real ; V. B., G. C., peb a zek guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

EBREL 1912

(N° 8)



KANNADIK

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI

Piou c'houlen chom eb labourat d'ar zul ?

(KENDALC'H)

D'AN EIL, YEC'HET AL LABOURER

Doue en deuz roet d'an den nerz da labourat c'houeac'h dervez dioc'h-tu. Mes, diskouiza a rank d'ar seizvet. ma n'en deuz ket a c'hoant e ve torret e gorf abred ha da vont d'ar bez pa vezo a real c'hoaz e kreiz o brud.

Ne zigarezit ket e treber d'ar zul evel en derveziou all hag e ranker ive gounid ar bara en deiz-ze. Abalamour da ze just, Doue a ro deoc'h galloud da c'hounit e c'houeac'h dervez boued evit seiz, ha ma labourit d'ar zul o korf bruzunet abred gant ar skouisdêr a viro ouzoc'h da c'hounid bara memez evit an derveziou labour.

Ar charretour, a ro bep sizun eun dervez a ziskouis de gezek. Daoust hag en o lezo en dervez-ze eb tam ? Nan, a dra zur. Hag e kav deoc'h e lezo Doue an den, eb boued, en dervez a ean, a c'houlen diganthen ? Neuze ne anavezit ket madelez Doue.

Hag ouspen, ar zul zo roet deoc'h evet pedi Doue da suill e vennoz var o labour. Da heul dourn an den eo red dourn Doue, red bennoz Doue. Ar gliz, ar glao, an heol, an avel-skuil, oll e maint e dourn Doue. Ouspen a zo : ar c'hlenved hag ar yec'hed a zo ive var

bal e zourn. Nag a bed a lavare, o labourat d'ar zul : kement-ma great eo atao ! hag antronoz oant var o gouele, er boan, dispign midicin, dispign louzeier.

Lod all a lavaro : guelloc'h eo labourat eget mont d'en em vesvi. Mes un dra benag all zo guelloc'h : chom eb labourat ha chom eb beza mezo.

A c'hoant o peuz da veza eurus, da gaont iec'het, bara da zrebi. Grit neuze euz ar zul an dervez a ziskouiz hag a beden.

Brema e zeus eun neubeut bloaveziou, gouarnamant Bro-Zaos a gassas eur vanden midicinet da ober tro ar bed evit gouelet e peleac'h edo an dud creva, yac'ha, pinvidika. A setu ama o respount en distro euz o beach : er broiou ma vez dalc'het da lezen ar zul o paouez a labourat hag o lakaat an dervez-ze, e servich Doue, eo, ema, an dud creva, yac'ha ha pinvidika.

EMGLEO AR GATHOLIKED E LANDUNVEZ

Emgleo ar gatholiked goulc'hemennet gant an Aotrou n'Escop evit pep parres euz an Escopti, zo bet savet e Landunvez ar zul kenta euz ar c'horaiz. En dervez-ze an Aotrou Masson, dean a henor, zo bet galvet gant an Aotrou Persoun da zont da ziskouez d'he barrissionis petra eo emgleo ar gatholiked.

Eur blijadur eo bet evit ar voazet selaou epad eun anter-heur e brezeguen sklear hag eaz da gompren.

« Lakit doun en o spered, eme an Aotrou Masson, penaos eo evit an traou a zell euz ar relijion eo e c'houlen an Aotrou n'Escop euz ar gatholiked en em unani ha ne glaskoc'h ober an emgleo-ze, nemet diffen guelloc'h guiriou an Ilis hag asten an oberou mad. An emgleo ne rei ket a bolitik peguir e c'halvo ar gatholiked euz pet opinion, kelkoulz ar re zo evit ar Roue, pe an Impalaer, pe ar Republik. Goulskoude ar virionez-ma a rankor da lakat da zisken doun e penn ar re a deuo dezhi : ar gatholiked ne ellont voti nemet evit katholiked pe skleroc'h evit tud a ziffenno assamblez gant mad ar vro, guiriou an Ilis hag ar religion.

Un dra souezus eo hag eur virionez goulskoude hag a ranker da anzaou, penaos eur guchen franmansonet (a veach ma zeus anter kant mil anezho en or bro) a laka ober lezennou difeiz a eneb eis mil ha tregont million a gatholiked.

Ar prezegeer elavar, a niveras neuze al lezennou fallakra great a eneb guiriou an Ilis hag ar guir katholiked. Mad, penaos freuza al lezennou dizoue, penaos miret ne vo great re voassoc'h c'hoas ? Ar gatholiked no deuz nemet un dra da ober evit-ze ; goud en em unani. Ia, ho nerz, ho galloud a vo ken bras ma lakeont an eil ho dourn he dourn egile, ma na ello netra beza treac'h dezho.

« Eun neuden, ne grouk ket un den, mes kant neuden a ra eur gorden. »

An testeni ar guella en devoa plijet ar brezegen-ze da voazet Landunvez eo bet gouelet ho mall da zont da rei ho hano evit mont en emgleo.

Meuled ra vezo Doue ha mil bennoz d'an aotrou Masson.

Diner an Ilis

Evel ma o peuz er gouelet en daouzekvet artikl euz goulc'hemnou an Aotrou n'Escop evit ar c'horaiz 1912, e zoump pedet da ober eur gest araok pask evit diner an Ilis.

Digassit adarre ho prof d'ar sakreteri pa deuoc'h da ober ho pask. Ma ne roit ket neuze ho c'haluzen e zeimp d'ho ti d'he goulen goude pask ar vugale. Brema pe tennet digant ar veleien ar sikour a roe dezho ar gouarnamant abaoe m'en devoa kemeret madou an Iliz d'ar revolution vras, eo un dever stris hag a goustians evit pep kristen asten an dourn d'ar re ne ellont ket beva eb an aluzen-ze, pep hini a dle rei ervez e beadra. Ne lavarit ket ni a vevo beleien hor parrez, mes ne roimp netra evit ar pareziou all. Kozeal er giz-ze a viche beza eb karantez kristen. Rak parreziou-zo ken paour, pe kennebeut a dud enno, ma ranker dont do zikour, pe e chomint eb beleg.

Pa bait an taillou d'ar c'houarnamant, daoust kement ar ro eur barrez a zistro dizhi. Nan, rannet e vez an taillou evit mad an oll barressiou ha mad ar vro a bez. Evel-ze a ra an Aotrou n'Escop gant diner an Ilis, rannet e vez ho c'haluzennou evit mad pep parrez ha mad an Escopti a bez.

Ne ket ebken er parreziou e zeus beleien da sikour, mes c'hoas er seminer bras, er seminer bian, e calz skoliou kristen, var dro an aotrou n'Escop evit rei harp dezhan da gass en dro afferiou an Escopti.

Doue ho paeo mad.

Votadek an 10 a viz meurs

Ne veac'h ket marteze countant ma na ve ket lakeat er c'hanadik kelou deuz ar votadek great d'an 10 a viz meurs. Ne vezo er skrid netra trenk evit den. C'hoant en deuz ebken da sklerijenna ar re ne oant ket dalla volonteze vad.

An aotrou Soubigou, kristen penn kil ha troad ha c'hoantek da ziffen araok pep tra guiriou an Ilis hag an den reuzeudik, en deuz bet er pemp kanton : 9.713 mouez.

An aotrou Nicol en deuz marvad pelleat diouthan kals mouesiou kristen o tigass da brezek evithan e meur a leac'h, un depute hag en devoa votet er gampr al loden vrassa eus al lezennou great a eneb an Iliz katholik hag ar skoliou kristen. O velet-ze, kals catholiked o deus sonjet e lavarou o zud koz ! Lavarit din piou a zerempredit ha me lavaro deoc'h piou oc'h.

An Autrou Nicol en deuz bet er pemp kanton 4.102 vouez.
Setu ama penaos eo eat an traou e kanton Guitalméze :

	SOUBIGOU	NICOL	TREIZ
Brélès	198	6	0
Lampaul-Ploudalmézeau	144	17	1
Landunvez	256	126	1
Lanildut	109	100	20
Laret	24	5	1
Ploudalmézeau	556	171	10
Plouguin	337	70	17
Plourin-Ploudalmézeau	234	34	8
Porspoder	139	123	37
Sant-Pabu	184	82	1
Tréglonou	113	20	1
Tréouergat	43	17	0
	<u>2.337</u>	<u>771</u>	<u>97</u>

MIZ MEURS

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar quella renk

Clas kenta. Rummad kenta.	Marie Guéna.	Class ar yugale vian.	1 Marie Perchoc. 2 Louise Nédélec. 3 Gabrielle Fourn.
Eil rummad.	1 Philomène Guennégues. 2 Céline Le Dall. 3 Joséphé Arzel. 4 Marie Brénéol. 5 Germaine Drogou.	Rummad kenta.	4 Catherine Talarmin. 5 Anne-Marie Brénéol. 6 Rosalie Perchoc.
Trede rummad.	1 Madeleine Morel. 2 Bernadette Vaillant. 3 Euprasie Maguérés. 4 Anne-Marie Déniel. 5 Marie Vaillant. 6 Marie-Anne Trébaol. 7 Marie-Jeanne Le Borgne.	Eil rummad.	1 Suzanne Léostic. 2 Augustine Talarmin. 3 Yvonne Magueur. 4 Françoise Le Guen. 5 Marie-Yvonne Pérès. 6 Marie Jaouen. 7 Adèle Talarmin. 8 Catherine Kermorgant. 9 Marie Le Borgne. 10 Madeleine Déniel.
Clas eil. Rummad kenta	1 Marie-Anne Talarmin. 2 Joséphine Guéna. 3 Pauline Conq.	Trede rummad.	1 Marie Gouzien. 2 Marie-Yvonne Conq. 3 Elisa Menguy. 4 Marie-Yvonne Perchoc. 5 Louise Laot. 6 Marie Provost. 7 Marie Bossard. 8 Hélène Bizien. 9 Marie Cadalen. 10 Madeleine Cadalen. 11 Louise Squiban. 12 François Jaouen. 13 François Morel. 14 Claude Talarmin.
Eil rummad.	1 Eugénie Morel. 2 Désirée Maguérés. 3 Joséphine Lescop. 4 Marie-Yvonne Léostic. 5 Thérèse Raoul. 6 Marie-Anne Eliès.		

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist,
heritourien ar Baradoz

	PAEROUN :	MAEROUNES :
18 c'houevreur.	Marie VAILLANT. Stréat-Lann.	François FOLL. M.-F. BOCHEUR.
23 —	Jean-Marie GUÉNA. Sant-Gouvarc'h.	François GUÉNA. M.-A. GUÉNA.
25 —	François-Pr.-Marie TALARMIN. Kelleret.	Prigent LUART. M.-A. TALARMIN.
25 —	Prigent-Marie KERJEAN. Trémazan.	Prigent LE ROUX. M.-J. JAOUEN.
9 meurs	Jean-Joseph CADOUR. Sant-Gouvarc'h.	Jean-M. CADOUR. Joseph CADOUR.
9 —	François-Marie LEHIR. Kernézoc.	François ARZEL. Fr. TRÉBAOL.

Ra' vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar varn
e goasket ar groaz :

12 Meurs. Marie Jeanne Vellen, 63 vloaz, Bédiz-Vras.

De profundis.

MIZ EBREL

4. Iaou gamblit An offiç a gommanso var drô 7 h. 1/2 pe gen-
toch ma vez echu da goves. Enn dervez kaer evit ober ar pask.
Dont eul loden vras da goves d'ar merc'her goude mern.

E kever an dervez-ze, Jesus a reas sakramant an aoter hag ar
veleguiach evit diskouez deomp he garantez birvidik, e chom ga-
neomp atao en tabernakl, e servichout dre ar gommunion da vaga-
durez d'hon Eneou hag e n'em ginnig bembez evidomp dre an offe-
ren e sakrafls da Zoue e dad.

D'ar iaou gamblit peurlïessa ne vez nemet en offeren e pep par-
rez hag an oll beleien ha tud fidel a gommuni ouz ar memez taol
zantel, evit diskouez guelloc'h Jesus-Krist e chench ar bara en e
gorf hag ar guin en e c'hoad hag an ebstel o tigemeret anezho deuz
e zaoarn.

Kerkent a men deuz ar beleg roet ton ar *Gloria in excelsis*, ar
c'hleier a zon betek fin ar c'hantik. Iviziken ar c'hleier ne zounint
ken beteg ar zadorn. Var ar barrez sioul e reno kaon ar bassion.

En offeren ar beleg eleac'h un hosti a gonsakr diou. Unan a
gemer, hag e ben, a vo dalc'het aben offis ar groas d'ar guener. Lakeat
e vo en eur c'halir goloet gant ar vouel ha goude an offeren e vo
douget gant ar brassa levezet betek eul leac'h hanvet repozouer
abalamour ma verk ar bez ma chomas ennan korf or Salver betek
ar zul vintin.

Dirak ar bez-ze eo e zeor brema da zaoulina. Tud ar bourg hag
ar re zo e chom e kichen ar bourg zo pedet da zont da 7 h. 1/2 da
lavaret dirazhan o fedennou diouz an noz ha da ober an heur-
zantel.

Mar dear da arvesti korf un den maro, gant pegement mioc'h a
garantez e tleomp dont da arvesti korf or Zalver.

Pa vez kasset hor Zalver d'ar bez, an aoteriou a vez divis et, an tabernakl zo goulo, pep tra zo e kaon evel un ti zo tremenet ar maro dreizhan.

5. Guener ar groas. An offis da 7 h. Da geveer an dervez-ze Jesus zo bet staget ouz ar groas hag en deuz kinniget d'he Dad he vuez evit silvidigez ar bed. Dont niverus d'an offis evit en truga-rekat.

Ar c'hleier a jom sioul, an aoteriou zo noas ha trist. Pa zigouez ar beleg er c'heur evit an offis, ec'h en nem daol d'an douar evel un den diskaret gant ar spount dirak fallagries an dud e kever Jesus. E kreiz an offis ar beleg a zizolo ar groas a nebevdu en eur lavaret a ben teir guech : Setu ama koat ar groas a zo bet staget outhan an ini en deuz saveteat ar bed. Goudeze, ar beleg tennet ganthan he voutou, a stou teir guech dirak ar groas evit adori map Doue a zo bet staget outhi hag a bok dezhi. Ar bobl de dro a deu da zaoulina ouz ar balustrou hag a bok ive d'ar groas. Goudeze pep ini a en nem den d'ar gear e sonjal e madelez eb muzur Doue en e geveer.

6. Sadorn Zantel. Pa goumans an offis n'euz goulaouen ebed var elum. Ar beleg a ia d'ar porched hag enno e ten an tan euz ar mean. Perak ? Abalamour Jesus a zao evel eun eulfen a zindan he vean bez. Goude e vez binniget an tan nevez hag ive pemp greunen ezans, abalamour korf Jesus a zo dreist oll gouliet e pemp leac'h.

Neuze gant an tan nevez, e vez alumet en eur zistrei d'ar c'heuer, teir goulaouen hag a zo stag ouz ar memez keff. Eur skeuden euz an Dreinded Santel.

Erruet er c'heur e vez beniget ar c'houlouen baskal a verko Jesus-Krist savet beo a douez ar re varo. Epad ma veniger ar c'houlouen baskal, an avieler a laka enni ar pemp greunen ezans evel eun ongant a c'houes mad e pemp gouli ar Zalver. Goudeze ec'h elum anezhi evit merka eo deuet Jesus a varo da veo hag an oll goulor all a vezo allumet diouthi evit diskouez e vezo sklerijen an aviel kasset dre ar bed oll gant an Ebestel kentelliet gant Jesus.

Goude e zear gant ar groas hag ar c'houlouen baskal beteg ar mean fount evit beniga an dour da vadezi. Sin ar groas a vez great aliez varnhan, rak dre veritou ar groas e reseo e nerz ; taolet e vez varzu pevar c'horn ar bed, rag an oll dud a die beza badezet ; c'houezet e vez varnhan, rag ar Spered Santel, huanad beo an tad hag ar mab an eil varzu egile, a deuo d'he zantellaat ; lakeat e vez ar c'houlouen baskal e barz, rak Jesus-Krist a zo bet diskennet heunan en dour pa resevas badiziant Iann-Vadezour ; mesket e vez an dour gant oleo sakr benniget gant an aotrou n'Eskop, rak lakaat a rei an dud da gaout grassou a zo dous ha nerzus evel an oleo.

En distro d'ar c'heuer, ar beleg en nem daol d'an douar evit goulenn gant ar brassa humilite ma teuo ar gristenien da veva ervez feiz ho badiziant.

Goude e coumans an offeren hag evel m'en deuz roet ton ar *Gloria in excelsis*, e tirolli ar c'hleier da zoun evit kass dre bevar c'horn ar barrez kelou eurus ar resurrection. An *alleluia* a deu en dro hag a vez kanet gant joa echu amzer ar binijen, deuet eo leve-
nez ar pask.

7. Ar zul fask. Ar zul-ma a zigas deomp da sonj eo savet Jesus euz e vez leun a vuez goude beza trec'het e oll enebourien hag ar maro zoken. Ar c'horfou-ni ive a dei a varo da veo deiz ar varn diveza evit mont da gemeret perz en eurusdet hon ene d'ar baradoz m'ar doump marvet e stad a c'hras, pe allaz, evit mont da gemeret perz e poaniou hon ene d'an ifern m'ar doump maro e stad a bec'hed marvel.

Ar brezegen a vezo great gant an Aotrou Edouard Floc'h.

D'ar zul ha d'al lun fask e vezo covesseat goude gousperou.

14. Sul ar c'hasimodo. Ra ello lavaret Jesus da bep ini ac'hanomp er zul-ze : ar peoc'h zo ganeoc'h rak eur pask mad o peuz great.

En dervez-ze ar beleg en deuz roet an taolennou epad ar mission a deuo da ober en offerennou eur brezegen d'ar mamou kristen, rak e vont deuz Landunvez oa glac'haret e sonjal n'oa ket great enni breuriez ar mamou kristen. E gousperou e reio eur brezegen all da voaset emgleo ar gatholiked ha da voazet ar galon sakr.

A zo pedet da ober o anter-adoration da zul ar C'hasimodo

10 h. 1/2 : François Brénéol, Jean Bocheur, Kerzent ; Yves Conq, Traon ; Joseph Guenneguès, Kermajeau.

11 h. : Jean Guenneguès, Kernézoc ; François Jézéquel, François Ollivier, Jean Floc'h, bourg.

11 h. 1/2 : René Cloatre, François Jaouen, Jean-Marie Pellen, Kernézoc ; Pierre Trébaol, Troménec.

12 h. : Jacques Foll, Langurru ; Jean-Marie Colin, Kervéon ; André Uguen, Traon ; Prigent Conq, Kervizinic.

12 h. 1/2 : Jean Bossard, Lannourien ; Vincent Le Borgne, Kerhoazoc ; Yves Lunven, Ti-Pri ; Jean-Marie Le Gall, Penfoul.

1 h. : Jean Le Ven, Kerguérioc ; Pierre Paillet, Lann-Gos ; Colas Guéna, Sant-Gonvarc'h ; Jean Guenneguès, Kerhoézel.

1 h. 1/2 : François Calvez, Goulven Godebert, Kerzent ; Job Minguy, Poullouarn ; Yves Bizien, Kelleron.

Da zul ar C'hasimodo ar re o deuz tud klan pe re gabac'h evit dont d'ar bourg da ober o fask, a dei da lavaret.

D'ar meurz 16 da 7 h. e vo lavaret an offeren e Kerzent ha kasset o fask d'ar re ne ellint ket dont d'ar chapell da gommunia. D'ar merc'her 17 da 7 h. e vo lavaret an offeren e chapell Sant-Gonvella ha kasset o fask d'ar re ne ellint ket dont d'ar chapell da gommunia.

An disput a vo d'ar iaou 18 a viz ebrel da 8 h. 1/2 evit ar vugale gant o fask kenta hag ar re ne maint ket en oad da ober o fask solennel. Evit kaout eur rekompans e rankit gout eb faot ebed goulenn ha respount oll gentelliou ar skatekismou, nemet an 11°, 12°, 25°, 27°, 28°, 29°, 30°, 42°, 43°, 44°.

Da 10-heur ar vugale gant o eil, hag o zredè. Ar rema a ranko gant ar c'hatekismou penn-da-ben goulèn ha respount.

Da 2-heur ar re c'hallek. Oll assamblez.

Da 3-h. 1/2 ar re gant o fevare pask. Ar rema a ranko gant ar c'hatekismou, an *De Profundis*, an *Angelus*, ha Litanioù ar Verc'hez.

RETRED AR VUGALE

Ar retred a zigoro d'al-lun 29 da 7-heur diouz ar mintin.

Ar pask a vezo great d'ar-iaou 2-a viz mae.

Offeren ar gommunion a vo da 7-h. 1/2.

Ar vugale a ranko dont d'an oll brezegennou, ho c'herent n'ho dalc'hint ket ta er gear var digarez ebet.

KANNADIK

Kannadik miz-meurs en deus koustet 30 lur. Bet evit sikour ar paea digant : X, pemzek-guennek ; C., L., dek-guennek ; M. Y. L. A. T. X., pep a bevar real ; R. B. ugent real.



Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

MAE 1912

(N° 9)

KANNADIK

PARRES

Landunvez

EUL LEVRIC BEP MIS

DA LENN HA DA ZEL'HER EN TI



Piou c'houlèn chom eb labourat d'ar zul

(KENDALC'H)

D'AN TREDE, EURUSDET AN TIEGEZIOU

Goulennit digant an tad, ar vam, ho bugale, pe seurt dervez a blij dezho ar muria epad ar sizun, e respountit : ar zul.

Perak ? Abalamour ma tremenont an dervez-ze assamblez, o startaat etrezho liamou ar garantez. En dervez-ze, an tad en devezho amzer da velet al labour a-ra e vugale er skol, da velet a-neuz ket etre o daouarn leorioù a-eneb ar religion pe zantelez ar c'hristen, pe skrivet var ho c'haereioù traou kontrol d'ar-pe-zo bed desket dezho var barlen ho mam pe er c'hatekismou. D'ar-zul, kerent ha bugale ha domestiket guisket, deuz ho dillad kaera, a-zant n'int ket sklavourien atao daoubleget varzuc'h an douar, rak goude beza bet en offeren hag e gousperou, ma o-zro en offeren bred, e c'hellont pourmen, c'hoari evel ar re o-deuz a-leiz a-zanvez. En dervez-se ar map, ar verc'h dimezet euz ar gear pe eat da servicha a-e n'em gavo er bourg gant ho zad pe ho mam, a-gounto dezho o-joa pe o-foan hag a-resevo digantho kuzul hag alioù mad, a-roio laouennedigez d'ho c'halon. D'ar-zul ar mignoun a-lez a-gostez pao an alar, troad ar ball pe ar c'hroc'h, evit serri dourn e vignoun, dizama en he galoun ar beac'h en-deuz var he spered, hag ar boan daouanteret o-rei-dezhan kaout he vuez skanvoc'h.

Pion a c'houlen chom eb labourat d'ar zul ? D'ar pevare, an izom da zero'hel ere ha yac'h an Ene var hent ar baradoz.

Epad ar c'houeac'h dervez roet evit labourat, an den en deuz a veac'h amzer da lavaret un tam pater, diouz ar mintin ha diouz an noz hag araok ha goude he brejou ; mes ar zul zo roet dezhan gant madelez Doue evit m'en dezho amzer da zonjal a zevri en affer vraz he zilvidigez, ha da bedi epad an deiz ma plij ganthan.

Evit ta lakât ar zul e servich Doue, ar c'hatekismou a verk deomp ne ket aoualc'h chom eb labourat, beza e ranker ouspen klevet an offeren gant evez ha devosion, hag en hon iliz parrez aliessa ma c'hellimp. Deski a ra deomp e ve eur pec'hed marvel mankout d'an offeren d'ar zul eb eur rezoun vad bennag.

Pedi en hor part on unan zo mad ha red, pedi oll dud an ti daoulinet an eil e kever egile a zo guelloc'h, peguir Doue en deuz lavaret e vo he unan etouez ar re a bed daou pe dri, pe ouspen, assamblez. Mes, kaeroc'h ha talvoudekoc'h eo c'hoaz gueleter eur barreziat tud a bez, daoulinet d'ar zul ha d'ar goueliou berz, o unani o fedenn gant hini o fastor pa deu da lavaret evitho an offeren ha da renta da Zoue an henor zo dleet, dre c'hoad Jesus e vap, a red var an aoter da vare ar gorreou evel gwechall var menez Calvar.

An offeren a zo eun tenzor pinvidik meurbet roet d'ar barrez dre zaoarn e fastor evit ma c'hello trugarekat Doue euz e vadelezou en e c'hever, evit ma c'hello kaout dreizhi, ar pardon deuz e fec'hejou, hag ar grassou red evit beza treac'h dezho en amzer da zont.

En Iliz d'ar zul ar paour e kever ar pinvidik, an den coz e kever ar c'hraouadur, a zigass d'eomp da sonj oump oll breudeur ha c'hoarezet, bugale d'ar memez Doue, great evit ar memez baradoz, leac'h euruz ma zeus eur plas e c'hedal peb hini ac'hanomp, hag an huella enho a vezo an hini en devezho great ar guella e zeveriou a gristen er stad a vuez meo bet lakeat gant ar Brovidans var an tam douar-ma.

Doue a labour evidomp deiz ha noz. Ober a ra evidomp eb ean kement zo red evit derc'hel deomp buez ha yec'hed. Mad, peb labourer a virit he bae, ha petra c'houlen Doue diganeomp evit ar boan a gemer da rei deomp kement on deuz izoum : klevet an offeren d'ar zul.

Digalon ha diskiant e ve ta an hini ne zentfe ket, deuz ar goulc'hemen :

Kleo devot a benn-da-benn
Sul ha gouel berz, an offerenn.

Ma ranker maga ar c'horf, eo ive red maga an Ene. Mad, magadurez an Ene a dei deomp ive d'ar zul, ha dre brezeguennou hor beleien, ha dre al leoriou mad a gemerimp an amzer da lenn ha dreist oll dre ar gommunion a reimp en dervez-se aliessa ma c'hellimp. Skanv e vemp a benn, ma teuchemp d'ar zul d'ar voalc'hi guelloc'h izili ar c'horf, da gemeret eur c'hres neat eleac'h an ini louz, ma na deuchemp ket ive da nettaat on Ene m-ar deo labezet gant ar pec'hed ha da rei dezhi eur c'hres fresk dre an absolven resevet goude eur govession vad, skanv e vemp e benn ma teuchemp ebken da rei eun nerz nevez d'or c'horf o paouez a labourat, oc'h ankounac'hat rei ive eun nerz nevez d'hon Ene dre ar gommunion zantel, he guella magadurez evit erruout en Env, ervez comzou Jesus e

unan : an neb a zebr va c'horf hag a ev va goad, en devezho buez peurbaduz ar baradoz.

An trede gouic'hemen a Zoue a lavar :

Ar zuliou santel a viri.
E servich Doue oc'h e veuli.

Mad, un den hag en en deuz great he zervez, ma n'en deuz labourer nemet eun anter-heur pe eun heur ? Nan, den ne baeo dezhan evit ken nebeut a labour e zervez penn-da-benn. Mad, diez eo ive lavaret hon devezo implijet ar zul e servich Doue mar deomp atao da eun offeren a ne bad aliez nemet un anter-heur. Mad dreist eo ta mont d'an offisou all a vez great d'ar zul en iliz ha dreist oll d'ar gousperou. Sonjomp neket evit ar blijadur da usa ar c'hloc'h eo e vez great ar soniou goude mern, mes evit hor gervel d'an iliz da gana meuleudi Doue. Feiz cre eur barrez a vez anet, pa vez ken stank an dud en iliz, d'ar gousperou evel d'an offeren bred. Ne vankit ket d'ar gousperou eb eur rezoun vraz bennag.

E peleadh e kaver ar peurliessa, ar re a vank dre o faot d'ar gousperou ? En taverniou, en dansou, eleac'h ma zeus danger braz evit ho silvidigez. Ne lakit ket ta d'ar zul, na lein, na foar, na c'hoariou a virfe ouz o tud da vont d'ar gousperou.

Setu ama petra c'hourc'hemen cheffou ar franmansounet d'ho mevellien : lakit, emezho, ar muria c'hoariou a c'helloc'h d'ar zul, er giz-ze e teoc'h a benn da viret deuz ar gristenien da vont d'an iliz da bedi Doue ha da glevet he gomzou santel, hag e c'helloc'h a nebeut ober pafanet anezho. Pa anavezomp ho menoz fall-lakr, ne roomp ket an dourn dezho.

Neuze ta ne eller kemeret ebad ebet d'ar zul ? Eo, gant ma vezo ervez Doue hag an honestis ha goude beza bet en offeren hag er gousperou. C'hoarit kartou, killou, galloch, boulou, mes tost d'ho ti, en ho karter, rak neuze e chomo ar gounid hag ar c'holl etrezoc'h ha seminal o ti e tivogedi, a lavaro deoc'h peur e vo poent mont da zrebi koan. Ma chomit da c'hoari en taverniou, ar c'holl a vo atao evidoc'h hag ar gounid d'an tavernier, hag aliez e c'helfac'h ankounac'hat an heur da zont d'ar gear en amzer an dud fur, ha marteze an hent bras ne ve ket ledan aoualc'h evidoc'h, ha strobinellet var ho meno e kouesfac'h er foz, eleac'h en ho kouele.

Pa c'hoarier etre an offeren ha gousperou, selaou mad soniou ar c'hleier, ha tarda ar jeu pa na jomo nemet an amzer a lakear da vont betek an iliz. Non pas digarezi e ranker echui ar barti, kement-se a vo great goude gousperou.

Strobinellet oun

Aliez e klever tud o lavaret int bet strobinellet pe killet, hag ervez o c'homzou an taol fall-ze zo bet great dezho gant unan bennag hag en deuz eur c'halloud vras, pe dre he zeskadurez pe dre he fallagriez. Marteze memes e taolont ar beac'h var an diaoul pe eur c'houzin dezhan.

An dud-ze a fazi, kollet ho deuz ho hent pe abalamour ma zeo teo tenvalijen an noz, pe abalamour ma zeo deuet ho daoulagad dre an oad pe eur c'hlenvet bennag, da velet nebeutoc'h. Neuze ho daoulagad trellet a gav dezho gueleit kaiou eleac'h neuz nemet un tam tanvoualc'h, guez huel eleac'h neuz nemet kaol. Goulskoude ne vezer ar peurliesa strobinellet nemet abalamour ma vez evet re a odivi pe re a absinthe.

Avichou e klever tud o lavaret : m'ar doc'h strobinellet, troit o poned pe o cheleten var an tu eneb. An dud-ze a ra goap ac'hanoc'h. Ne ket o jeleten troed eo a ra tec'hed Paol gornek pe ar chans fall kouezet varnoc'h. An dra-ze a ziniti ebken, penaos m'a o peuz anaoudegez da drei o tillad, ema dija koumoulen an odivi o tanoat hag o taoulagad o kommans gueleit guelloc'h, a neuze evel just, e kavoc'h essoc'h ho c'hent.

Mar doc'h ta bet kouezet ha glazet pa ne gavac'h ket ho hent, ne dit ket da glask eun den pe eur sorser a gav deoc'h en deuz ar galloud da denna ar chans fall pe ar sor divarnoc'h, koll a rajac'h ho arc'hant ; mes, it da gaout ar medisin ha kemerit he louzou, rak n'oc'h ket klan abalamour moc'h bet strobinellet, mes abalamour ma o peuz bet eur voual lam pe eur voual stokaden, ar pez a ell eruoent gant an den furra.

Brema e lavarinn deoc'h, tec'hit deuz an diaoul, non pas abalamour ma strobinel o korf, mes abalamour ma strobinel oc'h Ene bep tro m'ho laka da goueza er pec'hed marvel, ha man en deuz o tiskaret en e rouejou, iit neuze buhan da gaout an distrobinellet, da lavaret eo, ho confessour, anzavit o pec'hed gant keuz ha glac'har hag an absolven resevet ho lakai ractal vad hent ar Baradoz o poa kollet dre o peched marvel.

AR ZUL FASK

Mar doa eun Iliz leun d'ar zul fask, oa a dra zur hini Landunvez oa. Ha goulskoude epad ar brezegen oat ken sioul ma vije gellet kredi n'oa den en Iliz.

Petra oa kaoz a ze? An autrou Floc'h, beleg yaouank euz ar barrez a bigne, ar vech kenta, e kador ar virionez, evit prezeg d'he genvroiz. He sarmoun renket mad, a oa ouспен displeget ken brao ma veze koulz lavaret evet he gomzou gant ar blijadur a ioa ouz he zelaou.

Ar *C'hannadik* ne ell rei nemet eun tanva berr ha divlaz euz he brezeguen :

« Hirio, eme an autrou Floc'h, al levenez e deuz great plas da gaony derveziou diveza ar sizun zantel. Perak? Abalamour Jesus zo bet treac'h d'ar maro ha savet beo euz ar bez. D'ar guener da noz, ar Jusevien, eur musc'hoars yud var ho muzellou, a zistro d'ho zies, goude beza lakeat ar ziel var ar mean bez a c'holoe korf Jesus, ha lakeat kalz soudardet en dro dezhan d'en dioual.

Mes, Jusevien, kollet o peuz ho poan, ha c'houi, soudardet,

essoc'h e vije bet deoc'h miret euz an deiz da zevel deuz ar mintin, deuz an eol da rei deomp he sklerijen, eget miret deuz mest ar bed da zont euz ar bez pa zoa he volonte. D'ar poent ta merket ganthan, Jesus leun a vuez a zao euz ar bez. Ar burzud-ze a ziskoueze oa miap Doue, hag oll galloudek evelthan. Hag evit n'e elje den nac'h he resureksion, e chomas c'hoas daou-ugent dervez gant he ziskibien, dibri a rea gantho, rei a reaz dezho he gentelliou diveza ha dirak pemb kant den sebezet, e savaz en Env dre he c'halloud he unan, deiz ar iaou bask.

Jesus a zo resusitet dioc'h ar mintin, da c'houlou deiz. Kement-ze a ro deomp da goumpren, e rankomp ive trei kein d'ar pec'hed mintin mad, evit rei da Zoue hon oll dervez, da lavaret eo or buez penn-da-benn. Ma teu ta ar pec'hed marvel d'hon lakât er bez, resusitomp ar c'henta dre eur govesion vad. Siouaz, nag a dud marteze a sonj, e vezint atao abred aoualc'h da resusita en ho amzer diveza, da noz ho buez. An dud-ze o deuz da ziouall, rak Jesus ne ket oblijet da gemeret atao restachou eur vuez bet oll d'an diaoul.

Jesus a zo resusitet e guirionez, ne deomp ket tani neuze da ober an neuz da resusita. Taolomp ive divarnomp en guirionez, ar pec'hed, o tont da ober eur pask mad.

Jesus eur vech resusitet ne varvo ken. C'houi ive goude ho pask ne gemerit mui ar pec'hed, n'en em ampoezonit ken dre he loustoni.

Jesus resusitet a en em ziskoues d'he ebestel en eur stad nevez. C'houi ive goude ho pask a dle beza evel tud nevez. Red eo deoc'h teuler divarnoc'h mean ho habitujou fall, neuz forz pegen pouner e ve, evit ma c'hello o eal mad lavaret ac'hanoc'h ive, comzou an eal d'ar merc'hed santel deuet d'ar bez da glask Jesus, ne ma mui ama, resusitet eo. Nan, ar pec'heur ne ma mui e bez ar pec'hed goude e bask, resusitet eo, ha resusitet evel Jesus, da lavaret eo evit atao.

Mes, dioualit, ma o peuz lavaret kenavo d'an drouk-spered, en n'en deuz lavaret kenavo deoc'h. N'ho pe ket a aoun, keit a ma talc'hoc'h Jesus en ho kaloun, neuz ket a blas evit an diaoul, ha gras Doue a jomo en o kaloun, ma vezit mad da dec'het deuz an okasionou fall, mad d'ho pedennou, mad da rei ar zul da Zoue, mad da vont aliez da govez ha da gommunia. Neuze, resusitet evit atao da vuez ar c'hras e kavoc'h ive ar vuez a bad da viken pa dei Doue d'ho kervel d'he Varadoz.

SUL AR C'HAZIMODO

Breuriez ar mammou kristen

Da zul ar c'hazimodo, ar baressionis ho deuz bet an heur-vad da velet en ho zouez unan euz ar visionerien ho doa labouret ganeomp varlene. Galvet da ren ar retred Adoration e parrez Porspoder, an aotrou Bourdoulous hen deuz bet ar vadelez, da dremen

ar zul e Landun vez. Prezeget en deuz betek teir guech. Bennoz Doue dezhan. En oferen vintin hag en oferen bred, e komzas da genta euz al labour great er barrez epad amzer zantel ar mission. Kementse a roas dezhan tro da nevezi er c'halonou ar promessaou great neuze da Zoue.

Ar prezeget a zisklerias, da c'houde, oa deuet dreist pep tra evit rei da anaout Breuriez ar mammou ha gragez kristen. Dre gomzou sklear evit an oll, e verkas pebez frouez a c'hell ar vreuriez-se da zougen er parresiou. Kass a reas da netra kement digarez a c'heljet da glask evit chom er meaz euz ar vreuriez. Ennhi, emezan, n'euz netra diez, hag e tisplegas e berr gomzou ar peb brassa euz ar pez a verk ar reolen. Diskouez a reaz ive n'eo ket eun dra nevez. Dija eo skignet dre an oll broiou. Dre ali an aotrou n'escop e teu d'en em skigna mioc'h-mui e parresiou an Eskopti.

El loden diveza euz ar brezeget, e oue displeget madoberou braz ar vreuriez. Ganthi n'euz netra da goll ha kalz a zo da c'hounit. Er reunionou great espress-mad evitho, ar mammou kristen a vez sikouret guelloc'h da veva ervez Doue en ho stad. Disken a ra mioc'h a sklerijen en ho spered ha mioc'h a nerz en ho bolontez. Deski a reont guelloc'h e pe zoare santellat ho foaniou.

Ar gelennadurez roet er brezeget a zo bet selaouet gant evez ha komprenet mad. Adalek an deiz-ze meur a hini a zo deuet dija da rei ho hano hag an niver anezho a ielo var gresk eb dale.

Goude ar gousperou, ar missionner kalounek, dizamant ouz he boan, a zo pignet adarre er gador. Komz a reas euz an aked a dle eun ene kristen da gaout evit silvidigez an nessa. Danvez he sarmoun evel m'en lavaras, a ioa tennet divar eun nebeut comzou bet skrivet gant Hon Tad Santel ar Pap Leon trizek. Ar chomzou-ze eo mad deomp derc'hel sonj anezho. « Ar skritur zakr, eme Leon XIII, a ro deomp da anaout e zeo dever peb hini, hervez he stad hag e gondision, labourat evit silvidigez an nessa. Meur a zoare ho deuz an dud fidel da ober, gant kalz a frouez al labour-ze merket dezho gant Doue ; hen ober a dleont dre eur vuez pur ha divlam, dre an oberou a garantez hag a drugarez e kever an nessa, dre hedennou kinniget aketuz hag a greiz kaloun da Zoue. »

Divar bep loden, euz ar pennad-se, ar prezeget a dennas kentellicu talvouduz meurbed. Tamal a reas eur rum dud a garfe beza atao didrabas, eb kemeret poan ebet gant an nessa. N'e ket en doare-ze o deuz bevet ar Zent, nag ar Zalver Jesus-Krist, ho skouer. Nag a zoursi ho deuz hi kemeret evit chassa ar re all d'ho heul var hent ar Baradoz. Ar skoueriou santel a ra mioc'h a vad d'an Eneou eget an holl brezegetnou.

Divar ben ar skoueriou mad, ar missionner a gavas komzou kalounek da veuli ar goazed zo en em lakeat nevez-ze en « Union katholik ». Meuli a reas ive goazed ar Galoun Sakr, a zo kals anezho er barrez, a drugare Doue. Ra zuint da veza stankoc'h c'hoaz evit mad an Iliz hag ar vro. Gant skoazel tud eveldho, da lavaret eo, kristenien dispount, ha n'e ket gant krenerien laosk en ho feiz, eo e vezo ar harpet ar religion a eneb an dud fall.

Eun dudi oa gullet an dud ho daoulagad ho para varzu ar gador epad ar brezeget. Ar c'homzou kouezet ha vuzellou an aotrou Bourdoulous ne vint ket ankounac'heat. Pa glevo kelou euz hor parrez, esper hon euz hen devezho tro da veza laouen, rag diouanet mad e vezo ar greun hen deuz hadet. Bennoz dezhan c'hoaz eur vech all.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

		PAEROUN :	MAEROUNES :
22 Meurs.	Louis-Joseph NÉDÉLEC, Sémaphore.	Louis TALARMIN.	Josèphe KERBOUL.
24 —	Louise FLY, Archantel.	J.-M. KERLEROUX.	L. JAOUEN.
24 —	Marie-Philomène-Auge POTIN, Kervéon.	Hervé PERHIRIN.	Augustine MOREL.
30 —	Joseph-Marie LE VEN, Sant-Samson.	Joseph JARNIC.	Anna LEVEN.
8 Ebrél.	Yves GUYADER, Archantel.	Yves JÉGOT.	Anna KERROS.
8 —	Claude-Marie SILVESTRE, Poulloupri.	Claude TRÉGUER.	Marie MOUDEN.
9 —	Hervé MAGUEUR, Lannourien.	Hervé MAGUEUR.	M.-J. PROVOST.
10 —	Marie-Louise TALARMIN, Trémazan.	Hervé TALARMIN.	M.-L. COAT.
17 —	Jeanne-Eugénie PERCHIRIN, Rochard.	Eugène TALARMIN.	Jeanne TALARMIN.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

3 Meurs.	Marie QUIVORON, 18 bloaz, Rochard.
3 —	Jean JAOUEN, 83 bloaz, Landoursan.
10 —	Josèphe COADOU, 72 bloaz, Kerzent.

De profundis.

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar gella renk

Klas kenta.		Eil rummad.	{ Marie-Anne Menguy. Haude Milin. Josèphe Cloatre. Désirée Maguérés.
Kenta rummad.	Marie Guéna.		
Eil rummad.	{ Philomène Guennégues. Céline Le Dall. Germaine Drogou. Josèphe Arzel. Marie-Anne Cadalen.	Trede klas.	{ Marie Perchoc. Louise Nédélec. Gabrielle Fourn. Marie-Yvonne Kerjean. Suzanne Léostic. Rosalie Perchoc. Catherine Talarmin.
Trede rummad.	{ Marie Vaillant. Marie Déniel. Ernestine Guéna.	Kenta rummad.	
Eil klas.	{ Augustine Brénéol. Marie Jézéquel. Marie-Anne Talarmin.	Eil rummad.	{ Marie-Yvonne Cong. Elisa Menguy. Marie Gouzien. Hélène Bizien. Marie Yvonne Perchoc.
Kenta rummad.	{ Pauline Cong. Louise Forest. Victoire Guiziou.		

MIZ MAE

Miz Mari a véro great en Iliz du 8 h. nemet quart ; d'ar zul ha d'ar goueliou goude gousperou. Leor miz Mari a zo brema e peb ti. Lenn ar gentel e plas buez ar zent, ha lavaret eur beden c'houek en honor d'ar Verc'hez.

2. Pask ar vugale er barrez. An tadou hag ar mammou a raffe un dra vad meurbet, o tont da gommunia assamblez gantho. Ar skouer vad-ze roet d'ho bugale a dallo hirrok eget ar prezegen ar gaera.

3. Guener kanta ar miz. Offeren ar galoun sakr da 6 h. 1/2. Bugale ar paskou a rei ar brassa plijadur da galoun Jesus, o tont en dervez-ze da gommunia evit en trugarekat euz ar grassou puill koezet varnho epad ar retred. Koumans a elfent communion an nao guener kenta ar miz, a roio dezho ar c'hras, da gaout eur maro mad.

13, 14, 15. Rogationou. Da 6 heur d'al lun ar procession a ielo da chapel Sant-Gonvel ; da 6 heur d'ar meurz da chapel Sant-Samson ; da 6 heur d'ar merc'her ar procession a rei tro ar vered araok an oferen. Goulen amzer vad evit an ed da zével ; Iec'hed d'an dud ha d'ar chatal. Seul-vui a dud a deuio d'ar procession en derveziou-ze, seul-vui a c'hrasou a goezo var ar barrez.

16. Yaou Bask. Offeren vintin er Bourg hag e Chapel Kerzent da 6 heur. Offeren bred e Kerzent da 10 heur, rozera da 2 h., gousperou da 2 h. 1/2. Ar procession a ielo euz ar Bourg da 9 h. nemet quart. Heuill ar procession gant devotion o kana hag o pedi, evit mont ha dont. Ar merc'hed yaouank a deuio e guen da zougen an anseignou.

Hag oll, voazet ha merc'hed a ziskouezo dre ho furnez, e kounprenont, an henor zo great dezho pa zint bet hanvet da zougen relegou ar zent ha skeudnnoù ar Verc'hes. Den ne vezo guelelet mezo, rak tenna a raffe varnhan e hunan, var he dud ha var ar barrez an dismeganz ar vrasa.

D'an 29, d'an 31 a vae ha d'ar c'henta a Even, yun ha vigil ar pevare amzer.

A zo pedet da ober ho anter-heur adoration d'an 12 a vae, eil sul ar miz

10 h. 1/2 : Yves Jaouen, Loudourzan ; Louis Lesnevan, François Morvan, Jean-Marie Jaouen, Kérincuff.

11 h. : An autrou persoun, Job Godebert, François Ollivier, bourg ; François Jézéquel, Penfoul.

11 h. 1/2 : Jean Squiban, Kernézoc ; Jean-Marie Silvestre, Poullou-Pri ; Joseph Taloc, Yves Jaouen, Navant.

12 h. : Jean-Marie Taloc, Jean-Marié Hamon, Kerc'hoazoc ; Jean Morvan, Penfoul ; François Lunven, Ti-pri.

12 h. 1/2 : Biel Gélébart, Kergastel ; Jean-Louis Minguy, Poulouarn ; Prigent Jollé, Ollivier Daouben, Trémazan.

1 h. : François Fourn, Jean Cadalen, Yves Richard, Sant-Samson ; Hervé Magueur, Kerc'hoazoc.

1 h. 1/2 : François Arzel, Hellen ; Guillaume Riouall, Kerc'hoazoc ; Hervé Kervran, Penfoul ; Claude Le Borgne, Pourane. Trede sul a vae, reunion bugale Mari.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4

EVEN 1912

(N° 10)



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI

Lezen ar Bansion

Al lezen galvet e gallek, loi des Retraites Ouvrières et Paysannes, a zo bet great d'ar 5 a viz ebrel 1910 hag a zo koumanset da vont en dro d'an 3 a viz gouere 1911.

Araok m'oa votet hag abaoue, kalz tud, o deuz kavet abeg enn-hi ha great ar pezh a ioa en ho galloud, evit miret na vije heuillet. Lod a damalle al lezen, var digarez n'oa ket great mad aoualc'h. Guir eo, guelloc'h e vije bet gellet he ober, mez, er bed-ma, e z'eo diez da eun dra beza great mad en taol kenta, ha da c'hedal ma vez guelleat, e z'eo red he c'hemeret, evel m'ema.

Lezen ar bansion, heb mar ebet, a vezo digasset enn-hi meur a jenchamant, dre ma z'ao en dro ha ma vezo guelelet petra vank dez-hi. N'euz ket kalz da glem, evel m'ema brema, abaoue ar jenchamant kenta great d'an 28 a viz c'huevreur 1912.

Setu ama penaos e vezo brema lezen ar bansion azalek ar c'henta a viz eost 1912. Azalek an dervez-ze an dud o devezo ho fansion pa vezint 60 bloaz (e leac'h 65, kentoc'h) hag an dud 65 bloaz, ar re o doa koumanset, da douch dija, a resevo eun nebeud mioc'h c'hoaz. Zoken, ar re a gavo guelloc'h kaout ho fansion d'ho 55 bloaz, a c'hello goulen ha kaout, nemet e touchint nebeutoc'h, evel just, eget m'o divije gortozet ho 60 vloaz.

Erfin an dud 60 vloazo devezo savet bugale, tri da nebeuta beteg an oad a 16 vloaz, a resevo bep bloaz 10 lur muioc'h eget ar re all.

En ti-kear e vezo lavaret da bep hini ar pezh en deuz da ober evit kaout he bansion. Ar *C'hannadik* ne c'hell merka nemet eur poent benag euz al lezen.

1. Pep hini a c'hell delc'her evit he heritourien ar pezh en deuz paet bep bloaz he unan; n'en deuz da ober nemet diskleria da zekretour an ti-kear, hag e vezo great ervez he c'houlen. Pa varvo, he heritourien a doucho an arc'hant en devoa paet, mes ep interest ebet. An dra-ze, ne viro ket ouz an den assuret da douch he bansion memes tra, mes bianoc'h avad. O veza dalc'het eul loden evit he dud, n'en do evithan nemet ar pezh paet evithan gant ar patron hag ar c'houarnamant; an diou drederen eleac'h an deir. Evelse eur goaz hag en divije koumanset paea evit he bansion d'he 19 vloaz; hennez d'he 60 vloaz, en do 252 lur bep bloaz (262 lur, d'an hini en do savet 3 a vugale betek 16 vloaz). Mes ar memes hini, ma fell dezhan lezel he lod gant he heritourien, na doucho bep bloaz nemet 168 lur (pe 178 lur, m'en deuz savet 3 a vugale); he heritourien avad, pa varvo, a doucho 360 lur en eun taol.

2. Da 13 vloaz e c'heller koumans da bosti arc'hant evit ar bansion. Eur goaz hag en devezo paet bep bloaz he 9 lur azalek 13 vloaz beteg 60 vloaz, a doucho 304 lur ar bloaz (314 m'en deuz savet 3 graouadur beteg ho 16 vloaz); eur vaouez a doucho 269 lur pe 279, evit beza paet 6 lur ar bloaz.

Unan hag a goumansfe paea de 23 vloaz a resevfe 243 pe 253. Eur vaouez 200 lur pe 210.

Sklear eo, penaoz divezatoc'h e koumanser paea, bianoc'h e vo ar bansion.

3. An hini n'en do ket paet bep bloaz ar pezh merket gant al lezen, n'en do ket he bansion leun, evel just; nebeutoch paet, nebeutoch da reseo.

Mes dalc'hit sonj mad, penaos evit kaout ar bansion e rankor beza roet an hano araok an 3 a viz gouere 1912 ha paet an arc'hant dlet evit ar bloaz tremenet.

Ar pezh zo kaoz da galz tud da jom heb rei ho hano evit lezen ar bansion, eo o deuz aon da goll ho arc'hant. Mes a leac'h zo da gaout aon, en guirionez? Ne gredan ket. Rak evit coll an arc'hant, ar c'houarnamant a rankfe ober (banqueroute), ha neuze neket ebken al labourerien a golfe ho arc'hant, mes kement re a douch pansion evit eur resouñ bennag.

Pansion ar vartoloded

Peguir emaoimp o parlant deuz pansion al labourerien, lavaromp ive eur gomz deuz pansion ar vartoloded.

Eur martolod hag en deuz gounezet he bansion, hag en a

c'hell unan bennag miret outhan da gaout anezhi, pe he bried var e lerc'h al lod a deu dezhi? A tenna a c'heller digant eur martolod he bansion eur vech m'an en deuz koumanset de zouchi? Nan, a dra zur. Perak? Abalamour n'a c'hell den mont a eneb al lezen e deuz merket peur e vez guir da gaout ar bansion ha pegeiment a vezo a bansion. An hini-ta a deuffe da lavaret da eur martolod, pe da un inscrit maritime, ma ne res ket va lavar, ma na blijes ket din, e kolli d'ha bansion, a lavar eur mel gaou ha n'euz kount ebet da zerc'hel euz he c'hourdrouzou.

Pa erru gant ar vartoloded eur c'holl braz benag evel eur penad bloaveziou-ze gant ar re a ra pesketerez ar sardinet, piou a c'hell kaout evitho eur sikour. Setu ama petra a vez great neuze ar peur-liessa. An deuteed pe e z'int guen, pe ruz, pe c'hlaz, pe dud gounezek euz ar c'harter rivinet, a ia da gaout ar c'houarnamant, evit diskouez dezhan stad renzeudik ar vartoloded a ra ar besketerez dic'hounit. Ha ma cav d'ar c'houarnamant eo din a druez an duz-ze, an oll deuteed a vez galvet da voti ar zoum a vo roet dezho. Pa deuer-ta da lavaret d'ar Vartoloded, eo an depute ma, pe an depute-ze, eo en deuz bet ar zoum, e rear goap anezho, rak an oll deuteed, o deuz bet ho ali da rei dre ho vot.

Pa lavarer c'hoaz an depute ma, pe an depute-ze en deuz calz plasou da rei, ne gredit ket re vuan. Rak eur c'houarnamant leal, a dle rei ar plasou d'an neb o deuz o gounezet hag o miret, ha non pas da vignounet an depute. Hag ouспен, eun depute mad ha leal, ne c'hell ket goulenn evit tud a ne veritont ket, mes ebken evit ar re o deuz guir da gaout.

Evit ma zeñ mad an traou, peb hini a dle ober al labour zo goulnet outhan. An depute a dle sikour ober lezennoù evit eurusdet an oll er vro, ar re zo dindan ar c'houarnamant al labour fiziet enno, o lezel gant an dud al liberte da ober ho deveriou a gristen evel ma plij gantho, ha da zibaba evit gouarn ar vro ar re a zifennio ar guella mad an oll hag ar religion catholik, bet atao, en oll broiou, eienenn surra ar peoc'h hag an eurusdet.

An dud a vor

Evel ma zeo bet lennet kentel leor Miz Mari eleac'h intansion an abostolaj evit miz mae, e cav d'in e ve mad skriva ama an intansion-ze a c'houlenn pedi evit an dud a vor. N'euz micher ebet hag a ve enni muioc'h a boan, muioc'h a zanjer evit ar vuez eget micher an dud a vor.

Memes, var al listri brassa, pa sonjont an nebeuta, e vez ar maro dirazho. Er miz tremenet, pemzek kant den, goazet oll, koulz lavaret, a zo bet beuzet. Eur bern skourñ a deuz epad an noz da steki ouz al lestr saoz *Titanic*, ar brasa, ar c'haera a ioa er bed, hag a ioa var he vech kenta. Petra benag ma z'oa en houarn, gant diou

c'holoen en dro dezhan, roget eo bet evel pa vije e paper. Eat eo da strad ar mor, ha ganthan pemzek kant den.

Ha goulskoude n'ez euz ket a dud ha o defe kement a zienes hag ar vartoloded evit ar peza c'hell ho sikour da rei nerz d'ho ene ha d'ho savetei. Meur a rum a zo anezho, hag kem zo etre stad ar re zo var al listri a vrezel hag ar re zo var ar bagou pesketa hag ar re zo var al listri marc'hadour.

Var al listri a vrezel. — Setu ama ar peza skriva, n'euz ket pell, eun offiser : Hor martoloded, emezhan, an darn vuia anezho 'zo dizeblant e kever ar relijion ; hag ouspen, huallet int gant ar vez, aon o deuz an eil rag egile. Tud, va ekipaj a zo Bretonet, savet int bet ar c'halz anezho gant kerent kristen, bet int er skoliou kristen mad ; ne velan ket ec'h anavesfent pegen red eo kaout offeren d'ar zul.

Abaoue 12 vloaz, an traou zo c'hoaz goasseat. Betek neuze e zoa var al listri eun tam relijion benag.

Ar reglamant oa e vije eur beleg var bep lestr braz ; an oferen da zul a veze embannet gant an drompill. Bep pardaez, ar beleg a lavare gant an Ekipaj asamblet : *Pater, Ave.* Da vener ar groas e veze lakeat ar guerniou e kaon.

Lezennou nevez a zo great : diffen a oue da verka kaon da vener ar groaz ; da venigen al listri ; da lavaret ar beden diouz an noz assamblez ; beleg ebet ne oue lakeat var al listri ; oferen ebet var al lestr, ar re glavy en hospitaliou evit kaout eur beleg a dle er goulven dre skrid (penaoz er grafent pa vezont toc'hor, dare da vervel), pa na vouezont ken skriva. « Abalamour da-ze martolod yaouank ebet, ne dlefe mont eur ar gear eb sina deuz he hano daou dam paper var bere e vezo skrivet : eo kristen catholik hag e c'hoanta kaout ar beleg pa vezho klanv ha beza anterret gant lidou hor mam Santel an Ilis. Unan deuz ar paperiou-ze a zalc ho en he c'hodel, egile, a roio da heur c'hamarad d'ezhan. »

Anzav a ranker goulskoude, penaoz kalz martoloded a c'helfe heuilla guelloc'h ho relijion eget ne reont. Pa vezont er gear e zeont d'an oferen d'ar zul, da goves, da gommunia. Pa zeont en dro d'ar servich e vevont, re alies, evel n'o divije ene ebet.

Gellout a rafent meur a vej, kaout oferen d'ar zul, epad ma vezont er c'hartier, pe ha deont euz ho listri en douar araok kreiz deiz, rak offerennou a gafent betek an heur-ze.

Mes, daoust hag ar vartoloded, o deuz a berz ho zud er gear, ar sikour a c'helfent kaout ?

Ha kalz zo etouez ar gragez ha mammou martoloded hag a bedfe evel ma tlefent evit ma chommo ar feiz beo e kaloun ho zud ? Hag kalz zo hag o defe soursi, pa skrivont dez'ho, da gomz dez'ho euz ho Ene, euz ho fedennou, euz an offeren, ho fask ?

Ia, calz kerent a ra ho dever var ar poent-ze e Landunvez.

Kementse a veler dre ar soursi a gemerer da zigas da goves ha da gommunia ar vartoloded hag ar soudarded pa deont e permission. Avichou, ma c'houlenner digant tud a feiz, perak e teuont da zul ar

C'hasimodo da ober ho fask ? E respountont, hor map, pe hor pried, pe hor breur n'oa erruet er gear nemet deac'h da noz, hag hon deuz gortozet evit en digas ganeomp da ober he bask. Setu aze eur guir garantez evit an Eneou hag a vezo paet mad gant Doue en he Varadoz.

Goulskoude e kaver ive kerent diskiant. Kenta tra a reont pa deu ho martoloded d'ar gear, eo lavaret dirazho drouk euz ho beleien. Ho zeod binimus ha gaouiad en deuz lazet evit atao, Ene ho map, pe ho pried. Ema dija anter gollet he feiz ganthan dre ar skoueriou fall en deuz guelet, dre ar c'hazetennou fall en deuz lennet, ne c'houlenne nemet eun digarez evit chom eb mont var dro an Ilis. Euruz eo da veza e gavet he ginou an hini a gave d'ezhan a ioa o vont d'er pedi da vont da nettaat he goustians dre ar gonnession ha da great he Ene var hent ar Baradoz dre ar gommunion. Laouen, e respount d'he vam, pe d'he bried muntrez he Ene : pa ma an traou evelse, ne din ken var dro beleg ebet.

(*Da genderc'hel eur vech all*).

Cuzulierien ti-kear hanvet d'ar sul 5 a vae e parrez Landunvez

Setu ama ho hanoiou e renk ma zoant douget var al listen vot :

- | | |
|---------------------------------|----------------------------------|
| 1. Jean Morel, Bourg. | 9. François Fourn, Sant-Samson. |
| 2. Jean-Marie Quémeneur, Traon. | 10. Vincent Cadalen, Kelleret. |
| 3. Jean Marzin, Bédiez. | 11. Tanguy Le Ven, Kerzent. |
| 4. Bernard Jaouen, Cave. | 12. Yves Taloc, Navant. |
| 5. Pierre Eliès, Kermajeau. | 13. Goulven Godebert, Castel. |
| 6. Jacques Foll, Langurru. | 14. Paul Salaun, Arc'hantel. |
| 7. Jacques Trébaol, Bédiez. | 15. Victor Marzin, Arc'hantel. |
| 8. François Calvez, Kerzent. | 16. Gabriel Gélébart, Kergastel. |

An trizech hano kenta a ioa er c'honseil coz. An aotrou Victor Marzin, adjoent er c'honseil coz ha Basti Gélébart, bet o daou pell bloaveziou er c'honseil, a ioa e n'em dennet abalamour d'ho yec'hed ha d'ho oad. Jean Poudaven a ioa bet galvet gant Doue d'he Varadoz.

Ar guzulier en deuz bet ar muria moueziou a zo erruet da 368 ; an hini en deuz an nebenta da 328.

N'euz nemet peb meuleudi da rei d'ar barrez bet ken unanet da henvel he guzulierien. Ra vevo atao ar garantez-ze etre voazet Landunvez. An niver vraz a dud bet o voti a ziskouez ive ar fizians a zo er guzulierien.

D'ar zul 12 a vae, e bet hanvet ar mear hag an adjoent ; bet o deuz o daou, oll moueziou ar c'honseil.

Jean Morel, 16 mouez, mear.

Jean Marzin, 16 mouez, adjoent.

Ar *C'hannadik* a reket dezho buez hir hag ober kalz vad er Barrez.

Hanoïou ar re n'o deuz great ebet evit an disput

Kenta Pask

Madeleine Morel
Euphrasie Maguères.
Germaine Drogou.
Augustine Brénéol.
Joséphine Le Borgne.
Marie-Jeanne Le Borgne.
Joséphine Guéna.
Joséphine Kerros.
Rosalie Croguennoc.
Marie Cozien.

Eil Pask

Joseph Bizien.
Joseph Jaouen.
Céline Le Dall.
Joseph Arzel.
Marie-Yvonne Marzin.
Marie-Anne Cadalen.
Joséphine Conq.
Marie Déniel.
Victoire Guiziou.
Marie-Anne Talarmin.
Bernardette Vaillant.
Marie-Anne Trébaol.
Marie-Anne Magueur.

Françoise Eliès.
Marie-Yvonne Bossard.
Fernande Brézel.

Trede Pask

Jean Talarmin.
Marie Guéna.
Marie Brénéol,
Philomène Guennégues.
Marie-Jeanne Magueur.
Jéanne Pellen.
Louise Forest.

Pevare Pask

Marie Taloc.
Rosalie Daouben.
Joséphine Tarlarmin.
Jéanne Guiziou.
Marie Magueur.
Joséphine Le Borgne.
Marie-Renée Foll.
Herveline Guennégues.
Marie-Yvonne Magueur.
Marie Eliès.
Anna Perhirin.
Olga Vaillant.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

4 zo bet great bugale da Zoue lia d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

19 Ebrél. Kristenet, krouadur an Aotrou Victor Marzin, Arc'hantel.
6 Mae. Kristenet, krouadur an Aotrou Pennamen, Arc'hantel.

	PAEROUN	MAEROUNEZ
26 Ebrél.	Marie-Yvonne HAMON, Kélleret.	J.-M. HAMON. M.-J. KERJEAN.
28 —	Eugène-Marie-Jos. CADALEN, Kélleret.	Eugène KERJEAN. Marie CADALEN.
1 Mae.	Joseph KERROS, Kergougan.	Franç. CHAPALAIN. M.-J. CHAPALAIN.
7 —	Jean-Stanislas LE BORGNE, Pourane.	Claude LE BORGNE. L.-A. SQUIBAN.

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal dez ar varn e goashed ar Groaz

27 Ebrél. René-Marie CLOATRE, 59 bloaz, Kernézoc.
6 Mae. Jean-François PROVOST, 23 bloaz, Kerriou.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

19 Ebrél. Marie-Louise TALARMIN, 9 dervéz, Trémazan.
20 — Marie-Françoise PERCHOC, 7 miz, Rochard.

MIZ EVEN

Epad miz even, e vo great miz ar galoun sakr, d'ar guener da 8 h. deuz an noz ha d'ar zul goude gousperou.

2. Sul an Dreindet. Pardon mud Kerzent, galvet er guiz-ze abalamour ma teuer mintin mad, o pedi, o lavaret chapeledou pe o kanna kantikou. Komz nemet gant Doue. Ar pedennou a goumanso da 4 h., goude e vo great an nao dro d'ar chapel e prosesion ; deuet en iliz e vo lavaret ar chapeled, great ar prezegen, lavaret offeren ar gommunion ha roet bennoz ar Sakramant. Goude e vezo covesseat betek an offeren bred a vo lavaret da 9 h., Rozera da 2 h., gousperou da 2 h. 1/2. Ar barrisionis zo pedet da zont da goves d'ar sadorn. Landunvezis ne lezint ket an oll grassou da vont gant an niver braz a dud a deu en dervez ze da bardouna da chapel an Introun Varia a Vir Sikour. Kalz anezho a deui da zaoulina euz an daol zantel.

4. Eil pelerinaj voazet an Escopti da iliz ar Galoun Sakr e Montmartre e Paris. Unani hor pedennou gant re ar beleined evit goulenn silvidigez hor bro ha muioc'h a feiz er c'halonou.

7. Guener kenta ar miz, offeren ar Galoun Sakr da 6 h., ractal goude bennoz ar Sakramant.

9. Gouel ar Sakramant. Prosesion ar Sakramant, goude an offeren bred. En em lakat var an daoulin pa dremeno ar Sakramant dirazoc'h. Heuill oll ar prosesion. En distro ar Sakramant a jomo expozet betek goude gousperou.

A zo pedet da ober en dervez-ze anter-heur a adoration :

11 h. : François Jaouen, Kerincuff ; Jean-Marie Jaouen, Landourzan ; Vincent Taloc, Navant ; René Jaouen, Kernézoc.

11 h. 1/2 : An Aotrou Persoun, Jean Guennégues, Kernezoc ; François Jézéquel, Jean Floch, Bourg.

12 h. : Yves Minguy, Bourg ; François-Marie Corolleur, Penfrat ; Jean Foll, Langurru ; Yves Uguen, Traon.

12 h. 1/2 : Jean-Louis Minguy, Poullouarn ; Gilles Guennégues, Kermajeau ; Joseph Cozien, Bédiez ; Jean Cadalen, Kerc'hoazoc.

1 h. : Jean-Marie Quéméneur, Traon ; François-Marie Trébaol, Bédiez ; Gabriel Corolleur, Curullou ; Jean-Marie Cadalen, Kélleret.

1 h. 1/2 : François Théréne, Kerc'hoazoc ; Yves Jollé, Poulcallac ; François Floc'h, Sant-Gonvarc'h ; Yves Le Ven, Kerguérioc.

2 h. : Rozera hag heur a adoration evit oll dud ar barrez.

Dont niverus da ziskouez hor c'harantez da Jesus a jom noz dez en Tabernakl evit hor c'harga euz he c'hrassou ha maga hon eneou.

Epad ar sizun, offeren ar Sakramant da 6 h., ar zalud da 8 h. deuz an noz.

An orator, he pehini Jesus a zisken gant ar muia plijadur, eo

hon Ene. Dont ta bemdez epad ar sizun unan pe zaou a bep ti da offeren ar Sakramant ha da gommunia.

Ar veleien a vo kavet en iliz kerkent a 5 h.

Ar baotret gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask, zo pedet da zont da goves d'ar sadorn 8 euz ar miz, goude ar skol.

16. Gouel ar Galoun-Sakr. Ar Sakramant a vo exposet adalek an offeren vintin betek ar prosesion, a vo great goude gousperou. Betek an offeren-bred, ar re a dei da govez a zalc'ho plas ar re all dirak ar Sakramant.

Goude an offeren bred e peder da ober eun anter-heur Adoration

10 h. 1/2 : Françoise Morel, Françoise ha Jeanne Floch, Clémentine Allouer, bourg.

11 h. : Noémie Vaillant, Joséphine Godebert, Jeannie Léon, Marie-Yvonne Floch, bourg.

11 h. 1/2 : Marie-Yvonne Lescop, Elisa Pérès, Françoise Floch, Joséphe Guennégues, bourg.

12 h. : Dimezellet ar skol gristen.

12 h. 1/2 : Marie-Jeanne Brénéol, Françoise Jaouen, Kerzent ; Marie-Renée Godebert, Castel. Marie Le Borgne, Milin-Vraz.

1 h. : Lucie Brézel, Pauline Le Dall, Augustine Brézel, Marie Nédélec, Arc'hantel.

1 h. 1/2 : D'an heur-ze oll dud ar barrez a zo pedet da ober ho heur-adorasion-assamblez, evit diskouez da Galoun Jesus ho anaoudegez vad hag evit goulenn pardoun euz an disprij great dezhan gant kalz pec'herien.

23. Gouel sant Yan Vadezour ha gouel sant Alar. Iviziken gouel an daou zant-ze a vo great atao d'ar zul araok gouel sant Per. Gouel sant Yan ne vo ken ta d'ar bevar varnugent nemet pa erruo ar 24 d'ar zul. Pedi evit ma vo diouallet a bep drouk gant sant Alar, sant Herbot, oll gezek ha chatal ar barrez.

28. Evel ma erru gouel sant Per d'ar sadorn, yun a vigil ar gouel d'ar guener.

Kannadik miz ebrel ha *Kannadik* miz mae o deuz koustet 60 lur. Bet evit sikour ho faea digant : L. J., A.-M. P., pep a ugent real ; R. N., H. P., M. R. C., Y. P., pep a 8 real ; P. G., eur skouet ; J. F., M. T., pep a c'houeac'h real ; J. S., B. J., F. D., pep a pevar real ; J. Y. F., A. P., Y. M., pep a zek guennek.

Doue r'ho faeo.

TAOLIT EVEZ

Abalamour da c'houel ar Galoun Sakr, reunion bugale Mari a vo great d'ar pevare sul 23. Ar re anezho o deuz resevet ar vetalen bloaz a zo a vezo great en dervez kongreganistezed. Dionall-ta da vankout d'ar reunion. Eun induljans plenier o deuz da c'hounit en dervez-ze ma zeont da govez ha da gommunia. Var ar memez tro, e vo roet ar vetalen d'ar re o deuz roet o hano deiz pask ar vugale.

Le Gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZEL'HER EN TI

Lezen pansion al labourerien

(Eil Pennad)

Lenn dioc'htu ar pennad skrid-ma

Perak an ali-ze? Abalamour ma rankor beza bet d'an 3 a viz gouere, da zivezata, o skriva an hano en ti kear hag o paea an arc'hant dleet evit ar bloaz tremenet.

Kalz nebeutoc'h a vezo a bansion ma lezer an termen-ze da dremen eb beza roet an hano.

Mez evit piou eo great al lezen-ze?

Evit daou rumm tud.

Ar rumm kenta zo galvet (assurés obligatoires), hag a ranko marvad plega d'al lezen dre forz, ma ne reont ket a volonteiz vad.

Pere eo an dud-ze? Kement den n'en deuz ket c'hoaz 65 bloaz, a zo o labourat gant eun all hag a zo paet gant'han, ha ne c'hounit ket ouспен 3.000 lur ar bloaz. Evel just, n'e ket red chomm da labourat atao gant ar memez hini. Ar re ta a jenj ti bembez da labourat, a c'hell gounit ar bansion, koulz hag ar re all.

An hini ta a gemer eul labourer evit eun dervez a dle lakat var he garten eun timbr a dri centim m'ar deo eur goaz, a zaou centim m'ar d'eo eur vaouez, a eur centim-hanter ma n'en deuz ket c'hoaz 18 vloaz.

Pe seurt soum a vez da baea bep bloaz ?

Ar goazed a dle paea tri centim bembez, 9 lur bep bloaz. Ar merc'hed daou centim bembez, daou skoued ar bloaz.

Ar re n'o deuz ket c'hoaz 18 vloaz, eur centim-hanter bembez, 18 real ar bloaz.

Ar mestr a dle paea he-unan, kement ha peb hini euz ar re a zo o labourat enn he di hag o deuz gajou pe koumanant digant-han.

Pegement a vezo resevet ?

Peb hini a resevo an interest divar ann arc'hant paet ganthan bep bloaz ha paet evit-han gant he vestr, hag ouspen, kant lur ar bloaz lakeat var gorre gant ar c'houarnamant.

Ar goazed bet er servich, o dezho daou vloaz nebeutoc'h da baea, hag ar mammou, ken aliez a vloaz nebeutoc'h, ha m'o dezho bet a vugale.

Lavaret em beuz dija e c'heller koumans da bosti arc'hant d'an 13 vloaz.

Evit diskouez var dro pegement pansion a c'hellor da gaout, e verkin ama eun nebeut bloaveziou.

Ar goazed d'ho 60 vloaz

Ma koumansont da baea da 15 vloaz a resevo	287 fr. 11
— 20 —	259 94
— 25 —	236 63
— 30 —	214 82

Ar merc'hed d'ho 60 vloaz

Ma koumansont da baea da 15 vloaz a resevo	240 fr. 98
— 20 —	216 64
— 25 —	191 09
— 30 —	169 80

An eil koulz hag egile, ma savont tri grouadur beteg 16 vloaz, a doucho ouspen 10 lur bep bloaz.

Goulen a c'hellont ho fansion d'ho 60 vloaz ha memez d'ho 55 vloaz.

Mez ma keront gedal ho 65 vloaz, e touchint kalz muioc'h.

1° Evelse eur goaz oajet a 65 vloaz, m'en deuz paet azalek he 13 vloaz, a doucho bep bloaz 494 fr. 91, ha 511 fr. 11 m'en deuz savet tri grouadur betek ho 16 vloaz.

Goulskoude, en eur baea epad 52 bloaz, n'en deuz dispignet nemed 454 fr. 50, peguir er pemp bloaz kenta n'en deuz paet nemet 18 real ar bloaz hag evit an 48 vloaz all nemet 9 lur ar bloaz ; touch a ra eta, er bloaz kenta m'en deuz he bansion, eun tam brao mioc'h evit en deuz roet epad 52 vloaz.

Eur vaouez a zispigno ive evit ar memez amzer 310 lur 50 centim, hag e toucho 426 fr. 05 pe 436 fr. 21.

2° Eur goaz, o koumans paea d'he 25 vloaz, a zispigno 380 lur hag a doucho 395 fr. 80 pe 412 fr. 02.

Eur vaouez a zispigno 240 lur hag e doucho 317 fr. 88 pe 334 fr. 08.

Mez ar re o d'oa ouspen 30 vloaz, p'eo kkommanset al lezen, ha n'ellont ket evelse paea 30 guech 9 lur pe 6 lur araok ho 60 vloaz, penaos e c'hellint kaout ar bansion ?

Ar re-ze ive n'o deuz nemed paea 9 lur pe 6 lur ar bloaz, hag a doucho, ouspen interest ho arc'hant, 100 lur ar bloaz digant ar c'houarnamant.

1° Eur goaz o koumans paea d'he 35 vloaz, a doucho d'he 60 vloaz 178 fr. 31 pe 188 fr. 31 m'en deuz savet tri a vugale betek 16 vloaz.

Eur vaouez o koumans paea d'ar memez oad a doucho 152 fr. 21 pe 162 fr. 21.

2° Eur goaz o koumans paea d'he 60 vloaz a zispigno 9 lur hag a doucho evel ma vo echu e 60 vloaz 101 fr. 66 pe 111 fr. 66 a bansion.

Eur vaouez o koumans da baea d'he 60 vloaz a zispigno 6 lur hag a doucho evel ma vo echu he 60 vloaz 100 lur pe 110 lur a bansion.

Mez ma c'hortozer 65 vloaz evit touch ar bansion ar re o deuz ouspen 30 vloaz pa goumansont paea o dezho ive kalz muioc'h a bansion :

1° Eur goaz o koumans paea d'he 35 vloaz a doucho d'he 65 vloaz 300 fr. 78 pe 316 fr. 98.

Eur vaouez o koumans d'ar memez oad a doucho d'he 65 vloaz 254 fr. 52 pe 270 fr. 72.

2° Eur goaz o koumans da baea d'he 60, a zispigno 45 lur e pemp bloaz hag a doucho 175 lur 86 a bansion pe 192 lur 06.

Eur vaouez o koumans d'ar memez oad a zispigno 30 lur hag a doucho 171 lur 24 pe 187 lur 44.

3° Eur goaz, o koumans da baea d'he 65 vloaz, a zispigno 9 lur hag a doucho bep bloaz goudeze 112 lur 98 pe 124 lur 08.

Eur vaouez, d'ar memez oad a zispigno 6 lur hag a doucho 112 lur 32 pe 123 lur 42.

Evelse, ar re dosta d'ho 60 vloaz pe d'ho 65 vloaz, eo a c'hounid ar muia. Mez eur vech c'hoaz, red eo rei an hano araok an 3 a viz gouere, da lavaret eo a ben meurs kenta miz gouere 1912.

Ar re a ielo divezatoc'h da lakaat ho hano, ha m'o doa, d'an 3 a viz gouere 30 vloaz, ne douchint nemet pansion dister, ha m'o doa ouspen 45 vloaz ne douchint netra, nemed eun interest a 3 dre gant, ouspen an arc'hant postet gantho.

Mez lod a lavaro marteze : Ha ma varvan araok ? Ma varvit araok e vezo roet eur zikour d'ho pugale, hag ar peb brassa euz ho arc'hant a servicho da baea ho fansion d'ar re all.

Hag ar re ne c'hellint mui labourat, abalamour da eur c'hlenved pe eun darvoud benag ?

Ar re-ze a vezo roet dezho ractal ho fansion, ma z'eo anat n'int mui goest da labourat. Ar bansion a vezo biannoc'h pe vrasoc'h, ervez niver ar bloaveziou mo dezho paet.

Eil rummad

An eil rumm, galvet (assurés facultatifs), a c'hell, hervez ma plij d'ezho lakaat ho hano, pe chom eb ober, evit kaout eur bansion.

Piou eo, ar re-ze ?

Ar re-ze eo an dud a labour ho unan, pe a zo gant-ho eul labourer eb-ken, pe c'hoaz tud ho famill ; tud ho famill a c'hell ive lakat ho hano. Goudeze, ema kement hini en deuz bep bloas ouspen 3.000 lur bae, mez n'en deuz ket ouspenn 5.000 lur. Goude e teu gragez hag intanvezet ar re o deuz pansion, hag al labourerien douar, n'o deuz ket ouspen 600 lur ferm.

Ar rum-ze a rank paea bep bloaz 9 lur da nebeuta ; mez, ma plij dezho, e paint 18 lur evit kaout kalz mioc'h a bansion.

Ma n'o deuz ket a 30 vloaz, pa goumansont paea, ar c'houarnamant a laka euz he gostez an anter euz ar pez a baeont da lavaret eo 4 fr. 50 ma paeont 9 lur ha 9 lur ma paeont 18 lur.

D'ho 60 vloaz, o devezo evel pansion an interest divar an arc'hant-ze, ha 10 lur mnoc'h m'o deuz savet tri graouadur betek 16 vloaz.

Ma c'hortozont 65 vloaz e touchint calz mioc'h c'hoaz.

Al labourerien douar, o d'oa 35 vloaz, d'an 3 a viz gouere 1911, ha n'o deuz ket ouspen 600 lur ferm, o deuz ive kalz da c'hounid gant lezen ar bansion. Ma keront paea 18 lur ar bloaz, ar c'houarnamant a lakaio, var interest he arc'hant, eur zoum a gant lur.

Memez m'o deuz ouspen 500 lur ferm, pe ma paeont da nebeuta 9 lur ar bloaz, ar c'houarnamant a lakaio euz he gostez an interest o dije gounezet o paea azalek 35 vloaz, eur zoum a 12 lur ar bloaz.

Tud an eil rum ne dleont ket ive marc'hata, mez rei ho hano, araok ma vezo re divezad.

An dud euz an eil rummad hag o devezo koumanset da baea araok 35 vloaz 18 lur ar bloaz a doucho d'ho 60 vloaz :

Ma koumansont da baea da	13 vloaz	326 fr. 43	pe	336 fr. 43
—	21	— 227 48	—	225 06
—	30	— 157 23	—	162 47

Ar re a c'hortozo 65 vloaz a doucho, ma o deuz roet 18 lur ar bloaz :

Ma koumansont da baea da	13 vloaz	543 fr. 12	pe	559 fr. 42
—	21	— 387 45	—	400 36
—	30	— 272 97	—	282 07

Ar re n'o devezo koumanset da baea nemet d'ho 36 vloaz a doucho d'ho 60 vloaz :

Ma koumansont da baea da	37 vloaz	113 fr. 51	pe	117 fr. 50
—	50	— 71 54	—	76 37

Ar re a c'hortozo ho 65 vloaz a doucho :

Ma koumansont da baea da	36 vloaz	201 fr. 72	pe	208 fr. 79
—	50	— 133 32	—	141 76
—	60	— 104 07	—	113 09
—	65	— 86 25	—	94 68

Ar re a jenj parrez a dle kas ar c'helou da sekretour ti-kear.

ASSURANS AR CHATAL

Ar *C'hannadik*, o velet assurans ar chatal great er parrezioù tosta dezhan, evel e Guitalméze, Porspoder, Plouguin, Lambaol, Sant-Pabu, a gav e ve ive eun dra talvoudek evit Landunvezis ober an emgleo en ho farrez.

Araok skriva an dra-ma, en deuz interrojet an aotrou Mear ha kalz mistri tiegeziou, hag oll o deuz respountet : Ne ve netra guelloc'h evit mad peb hini, eget an assurans-ze great e Landunvez.

Anat eo e rankor koumans dre dibaba ar renerien, gant eur prezidant, eur vis-prezidant, eur sekretour, eun tenzorier hag eun nebeut kuzulierien. Choaz a rankor ouspen daou pe dri gomiser evit peb kordennat pe karter. Ar barrez a elfe beza rannet e teir gordennat. Ar gomiserien, tud a zoujans Doue ha goest da c'hout petra dal an dra, a vo karget da velet petra dalvezo al loenet kezek pe zaout a vo c'hoant da lakat en assurans.

Ha goude maro al loenet, e zeint da velet ha n'int ket bet kollet dre faot o ferc'hen.

Prizout a reint ive an depouillou : croc'hen pe gik ma n'int ket maro gant ar c'hlenved.

Petra vo brema paed dre gant evit al loan pe ar vioc'h assuret ?

E kalz parrezioù e paer bep tri pe c'houac'h miz, ervez ar c'holl a vez bet. Neuze e vez da baea mioc'h pe nebeutoc'h dre gant, ervez ar c'hollou a vez bet epad an tri miz pe c'houac'h miz. Awechou dek guennek, awechou pemzek, awechou pevar real pe ouspen, awechou netra, ma n'euz kollet loan ebet.

Ar peurliessa e paer an hanter nebeutoc'h dre gant evit ar zaout.

E parrezioù all e paer atao bep bloaz ar memez priz dre gant. Dek guennek, mar kirit evit ar zaout, pevar real pe ouspen evit ar c'hezek.

Er giz-se, peb hini a oar raktal pegement a arc'hant en do da rei. En doare-ze, ma vez kalz kollou epad ar bloaz, marteze, ar zoum savet ne ello ket rei an digoll penn-da-benn. Mez ive, ma vez brasoc'h ar zoum eget ar c'hollou, e ellor lakaat ar pez a zo a re, var interest hag e vezo kavet evit ar bloaveziou falloc'h.

Goud a rid ive penaoz ar c'houarnamant a ro eur vech an amzer eur zoum da zikour emgleo an assurans. Mioc'h pe nebeutoc'h ervez ma zeo braz pe vian soum ar chatal assuret.

Mez pegement a vo roet evit al loan pe ar vioc'h assuret, ma teuont da vervel ? Pe ar priz ma z'eo assuret penn-da-benn, pe an diou drederen, pe an tri-c'hart ? Pa vezo bodet an dud evit ober reolen an assurans e vezo guele-ze.

Ar pez a zo sur eo, e ve marteze, guelloc'h rei nemet an diou drederen. Ma o peuz assuret ho loan 600 lur o po an diou drederen pe 400 lur.

Perak eo guelloc'h kementse ? Abalamour da gaout mioc'h a zoursi da viret euz hor chatal da goueza klanv, pe da rei dezho sikour ma kouez ar c'hlenvet varnho. Rak, a livirimp, an drederen a zo eun tam brao da goll.

Ma ve roet ar priz penn-da-benn, ar c'houstiansou ledan, a lavarfe : perak kemeret kement a zoursi gant hon loenet en ho c'hlenved ? Paet evizimp atao ha gant arc'hant an assurans or ho eul loan all a blijo, marteze, mioc'h deomp.

Mez, pa vez an drederen da goll, e seller tostoc'h.

An traou-ze oll a vo studied mad, en dervez ma teui an aotrou Mear d'ho kervel evit diazeza an emgleo.

Guelet e vo ive neuze da be oad e vo kemeret ar chatal en emgleo, da be oad e vint tennet er meaz, ha pe seurt kalite a rankit da gaout evit beza assuret.

Lod a lavaro, marteze, me zo pinvidik aoualc'h, evit prena kezek all ma kollan va re. An niver deuz an dud-ze zo nebeut anezho, hag an dra-ze ne vir ket e ve eun dra vad evit an tiekerien paour pe binvidik dont da e n'em harpa er c'hollou a el koueza varnho. Ar gouella doare d'en em garet, eo en em sikour.

Lod all a lavaro, ma kollan chatal, me c'houlennno sikour digant ar c'houarnamant. Ar c'houarnamant ne ro ket atao ar zikour a vez goulennet, ha pa ro, ne ro morse nemet pemp dre gant. Evit eur c'holl a dri c'hant lur, o po pemzek lur, abenn meur a viz, marteze, bloaz goude.

Setu ama petra skrive n'euz ket pell ministr al labour douar da bep Prefed :

1° Ar sikourou dre benn evit ar re o deuz kollet chatal a zo evel netra hag a vezo diessoc'h diessa da gaout iviziken.

2° Ar sikourou-ze a vezo lakeat da greski arc'hant ar c'heffou-assurans evit ar chatal.

Ar re-ze eo o devezho al loden vraz euz an arc'hant votet evit sikour ar c'hollou chatal.

Mez, a lavaro lod c'hoaz, renerien assurans ar chatal, a vezo paet mad.

Nan, a dra zur : rak evit kaout otre da zevel an emgleo, e ranker derc'hel kount a dri dra :

1° Ma vezo savet gant labourerien douar etrezho ;

2° Ma vezo miziou ebet ganthi ;

3° Ma na glaskor gounid ha ma na c'hounezor netra divar goust den.

Mizou ebet ta, nemet eun timbr benag hag eun tam paper benag.

Ar renerien n'ho devezo evit pae, nemet ar blijadur da veza great vad d'ho nessa, hag aliez an droublansou a bakint oc'h ober ho dever eun hag e koustians.

MIZ EVEN

2. En despet d'an doare glao, ar belerined a zo adarre deuet a vanden, da zul an Dreinded, da chapel Kerzent, evit pedi an Itroun-Varia a Vir-Zikour. Pa erruaz an aotrou Persoun da 4 heur, evit ober prosesion an nao dro d'ar chapel, oa dija ouz e c'headal ouспен mil den. Goude ar pedennou diouz ar mintin, ar chapeled hag an nao

dro, ar prezeger a ziskouezas d'ar belerined o doa gellet kaout plas er chapel, pegen mad eo ar Verc'hez e kever e zervicherien hag ar bec'herien. N'en devoa evit-ze nemet kounta buez sant Tanguy ha santez Heodez, ganet e kastel Tremazan, e parrez Landunvez. Evit derc'hel sonj anezho ha trugarekat ar Verc'hez euz he madelez en o c'hever, eo e bet savet gant tadou coz Landunvezis chapel gaer an Itroun-Varia a Vir-Zikour. Dre skouer an daou zant-ze e tiskouezas ive pegen eas eo da eun tad hag eur vam gristen, ober sent euz o bugale, en eur lakaat a vianig doujans Doue en o c'halonou hag o poagna da zeski dezho ho c'hatekismou ha dreizhan hent ar Baradoz.

Da 5 h. 1/2, e voa lavaret offeren ar gommunion, ha ractal goude ar belerined a zistroas d'ar gear, Jesus en o c'haloun, hag en ho c'herc'hen ar grasou puill bet digant an Itroun-Varia a Vir-Sikour.

En dervez-se ive, bugale Mari plac'hed pe matezed Brest, a deuz da lakaat ho c'hongregasion dindan skoazel an Itroun-Varia a Vir-Sikour. Eun dudi oa o c'hlevet o kana epad an offeren bred hag epad ar gousperou. An aotrou Guermeur, kure e Sant-Lois Brest, ha rener ar gongregasion, a reas eur brezegen gaer var madelez ha galloud ar Verc'hez, o tisplega e brezounek yac'h komzou an *Ave Maria*. An oll daoulagad o para varn'han, a ziskoueze e plije he sarmoun.

Eured

Eured an dimezel Jeanne Marzin gant an aotrou Coantic, noter e Langounet a zo bet great d'ar 4 a viz Even. Kalz beleien, mignounet ar famill, a zeuas da unani ho fedennou gant re ar gerent. An aotrou Jezequel, persoun Logonna-Daoulas, a reas an eured hag eur brezegen euz ar re gaera. An dud a honor a reas eur gest founuz, hag an aotrou Marzin a lezas gant an ilis ar fleur kaer prenet e Brest evit ornia an aoter vraz. Bennoz dezhan ha ra dalvezo he vadelez, buez hir hag euruz d'an daou bried yaouank.

Sizun ar Zakramant

Sentet o peuz oc'h e n'em ranna hag o tont bembez eun nebeud a bep ti da govez ha da gommunia en offeren diouz ar mintin.

Digasset o peuz ive ho pugale da govez, eun nebeut bembez, goude ar skol. Er giz-ze, covez ar re vraz zo bet essoc'h diouz ar mintin ha n'euz ket bet re abress d'ar zuliou. Biskoaz ive n'euz bet bembez mioc'h a dud er zalud. Da zul ar Sakr kerkoulz ha da zul ar Galoun-Sakr an ilis a ioa kasi leun evit an heur a adoration.

Eur joa vraz o peuz c'hoaz great da Jesus, oc'h heuill niveruz ha devot an daou prosesion. Ar re a ia avichou d'ar parreziou all, a zo deuet oll en diou zul d'ho farrez. An daou orator a ioa ive brao meur-bed. An oll o deuz diskouezet bolontez vad : lod o rei fleur, lod o rei ho labour eb sellet euz ar boan. Evit kaloun Jesus, emezho, ne gemerer james re a skouider.

Testeni a zeskadurez

12. D'an 12 a viz Even, e bet e Guitalmes, examin ar certificat d'études. Teir d'euz merc'hedigo ar skol gristen, zo bet resevet :

Céline Le Dall, Arc'hantel ; Philomène Guennégues, Créach-Goriou, Joseph Arzel, Kerzent.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Ilis, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Barados :

PAEROUN MAEROUNEZ
16 Mae. Joseph Guéna, ru-Allan. Joseph Guéna. Marie-A. Guennégues.
8 Even. Yves-Marie Quéré, Arc'hantel. Yves Guéna. Marie Quéré.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIDEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri:
4 Even. An aotrou Eli-Marie Coantic, Langonnet hag an dimezel Jeanne-Eugénie-Marie Marzin, Arc'hantel.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn, e goashed ar Groaz :
25 Mae. Marie-Jeanne Cadalen, 73 bloaz, Kelleret.
29 — Marie Trébaol, 74 — Kerzent.

De profundis.

MIZ GOURE

A zo pedet da ober o hanter-heur adorasion, d'an eil zul a c'houere

- 10 h. 1/2 : Auguste Le Borgne, Pourane ; Jean Trébaol, Bédiez ; Joseph Jaouen, Kerléo ; Gilles Guennégues, Kermajeau.
- 11 h. : An aotrou Kure, François Jézéquel, Guillaume Lescop, François Bégoc, Bourg.
- 11 h. 1/2 : An aotrou Persoun, Jean-Marie Silvestre, Poulou-Pri ; Joseph Lescop, Bourg ; Jean-Louis Foll, Languerru.
- 12 h. : Yves Minguy, Poullouarn ; Jean-Marie Le Ven ; François Trébaol, Kerguérioc ; Hervé Coat, Louhallee.
- 12 h. 1/2 : Jean Bocheur, Kerzent ; Michel Cadalen, Streat-Lan ; François Guennégues, Créach-Gouriou ; Jean Lenvec, Kervizinic.
- 1 h. : Jean-Marie Corolleur, Jean-Marie Allégot, Kerlaguen ; François Floc'h, Tourane ; Joseph Trébaol, Kerjournic.
- 1 h. 1/2 : Jean-Marie Quéméneur, Traon ; François Floch, Sant-Gonval'h ; Joseph Talarmin, Kelleret ; Louis Déniel, Arc'hantel.

D'an eil zul e vo ive reunion bugale Mari.

21. Pardoun sant Samson.

Ar prosesion a ielo euz ar Bourg da 2 h. En eur erruout er chapel e vo beniget ar mor, kanet : ni o salud stereden vor, an *De Profundis*. Sant Samson a c'hortoz enho epad ar pedennou-ze, an oll vartoloded a c'hounid ho bara deuz ar mor. Gousperou, hag eun hanter-heur goude, ar prosesion a zistroi d'ar bourg. Heuill oll ar prosesion evit mont ha dont ; pa erruor en Ilis, bennoz ar guir-groaz.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZELC'HER EN TI

AN DUD A VOR

(Eil Pennad)

Ar vartolodet var ar bagou da besketa

Poanius eo micher ar besketerien var aodjou Breiz. Ho bagik a reaz d'an dour a vez atao e danjer, ma na vezont ket heb hean var evez.

Malheur, d'ar martolod, a ielo euz ar porz, goude beza evet re a odivi, pe a absinthe, rak eun taol roued roet e faoz, pe eul lien dispaket re vuhan pe re ledan, pe savet re huel en avel, a zo avouallac'h evit tumpa ar vag.

Ouspen, skuiz maro e vez ar vartolodet pe o rouevát da gas ar vag var araok, pe o tenna euz ar mor ho rouejou pounereat gant ar pesket hag atao gant an dour, a ne ve netra enho.

Lod all a vez sklasset gant ar riu pe deveed gant an eol, o terc'hel o linen, meur a heur dioc'htu.

Gant eur vuez ken kaled, nag eaz eve d'an dud reuzeudik-ze, gounid ar baradoz, ma karjent.

Petra o deuz da ober evit-ze ? Derc'hel ho Ene e stad a c'hras, o tont da govez ha da gommunia eur vech an amzer epad ar bloaz, lavaret eur bater c'houek ha pa ve berr, bep mintin ha bep noz,

kinnig ho foan da Zoue evit plijout dezhan, ha dreist oll miret ar zul o paouez labourat hag o vont d'an offeren ha da offisou all an Ilis. Lezen ar zul a zo great evit an oll, ha Doue n'en deuz james lezet en eun dienez re vraz, ar re zo kempen hag a zent euz he c'hourc'hemennou.

Klaskit da genta rouantelez an Env, hag ar madou all, a vo roet deoc'h var ar marc'had.

Mes, ma vez re fall an amzer epad meur a zizun, ha ma na vez ken a vara da zebri, ha n'hellor ket mont er mor da zul, ma vez brao an amzer?

Neuze, kentoc'h eget mervel gant an naoun, gant ma vezo great an oll bossubl evit kaout offeren, e c'helfet mont er mor. Mes, an dra-ze, ne erruo ket aliez, rak ar vartoloded evesiek pa reint sizun-veziou mad, a zalc'ho eur beren evit terri o zec'het, pa deuio an amzer fall.

En anv, pa deu ar poent da lakaat ar c'hevel er mor, nag a ziga-reziou evit labourat da zul: Ma na d'an ket da zevel va c'hevel, re all a ielo hag a gemero va fesket.

Diez, eo credi, eve kementse a laeroun, rak oll euz c'hoant da vont d'ar Baradoz, ha Doue a lavar deomp sklear, penaos al laeroun ne deint ket da rouantelez an Env.

Ha neuze, perak ar vartoloded deuz ar memez karter n'e n'em glevont ket evit na zeï bag ebet er mor da zul, pe evit mont bep sul, peb hini d'he dro, da zioual ar c'hevel? Er giz-ze ne elfet ober laerouni ebet.

Brema, ma n'e ell ket ar vartolodet e n'em glevet var ar poent-ze, e tleont lakaat ho bag izel var an aod evit ma c'hellint gortoz da vont kuit, ken n'o devezo bet offeren. D'ho bag e zeint neuze gant ho c'hanot.

Ha ma rankont abalamour d'ar mare, mont er mor araok an offeren vintin, e tleont ober ho fossubl, evit beza distro a benn an offeren bred.

En truez eo guelet ar c'hem a vez etre ar re vez o kevella. Darn a vank d'an offeren 9, 10 guech bep anv ha zoken aliessoc'h; darn all ne vankont nemet 3 pe 4 guech. Neuze ta eo sklear ne reont ket oll ar pez zo en ho galloud evit kaout offeren da zul, hag ar re n'er greont ket, o deuz pec'hed bras.

Ama ive e tle ar gragez, ar mammou ober ho dever, ha pourchu, en dra c'hellint var ho zud, evit ne risklint ket koll ho Ene evit klask gounid ho bara var an douar.

Darn all a vank d'an offeren hag a labour da zul, var digarez klask garved. Sklear eo, pa vez 6 dervez er sizun evit garvetta, e c'heller atao, pa vez bolontez vad, kaout ar pez zo red evit pesketa d'al lun, eb mont da balad an treaz da zul. Var ar poent-ze, n'euz nemet digareziou fall, evit labourat da zul, ha dirak Doue n'o devezo nerz ebet, nag excuz ebet.

Ar Stud Book

Lennet o peuz er sizun dremenet, er *C'hourrier du Finistère*, penaos e kommansant miz gouere, e tlie beza reunionou er pareziou evit rei tro d'an dud da lakaat merka ho c'hezek pounner var eul leor galvet « Stud Book », eur ger saoz hag a sinifi: leor ar vouen.

E Breiz, e zeuz eur vouen kezek, galvet e gallek « trait breton », e brezounek « kezek pounner », hag a zo e guirionez euz hor bro, eur vouen euz ar re vella, eur vouen kre meurbet, hag a zo brudet e peb leac'h.

Ouspenn-se, divar ar c'hezekened pounner, ha divar an « demi-sang anglais », galvet Norfolk, e teu eur vouen all, brudetoc'h c'hoaz, m'a zeo possubl, al loan « postier ».

Peguir eta, hor vouen kezek Breiz, e deuz kement a dalvoudegez, e z'eo red ober ar pez a zo possubl, evit miret ne ielo da goll, ha zoken e guellaat c'hoaz. Abalamour da ze, eo great, leor ar vouen, var behini e vez lakeat hano ar c'hezek, a zo e guirionez euz vouen ar c'hezek pounner.

An dud o deuz kounprenet, oa ho interest dont da verka ho c'hezek, ha d'ar mare-ma, ouspenn daou vil loan a zo lakeat ho hano var ar c'haierou. Ar c'hezek-ze, o deuz evelse kals mioc'h talvoudegez; ho mistri, p'o deuz c'hoant d'ho guerza, pe da verza ar bouchou bian deuet divarnho, a c'hell diskouez ho certificat, hag a zo sur da gaout kalz huelloc'h priz.

Ar *C'hannadik* n'en deuz ket izom da lavaret hirroc'h, evit diskuez pegen talvouduz eo lakaat hanoiou ar c'hezek pounner var ar « Stud Book ». Digemeret e vezont azalek ho zri bloaz beteg ho 15 vloaz.

Evit ar c'hezekened e paer, eur skoed, hag evit ar mirc'hcher, ugent real.

Pelerinaj, great e Rom gant bugaligou Granz

Eur pelerinaj evel n'oa ket guelet c'hoaz, a zigoueze e Rom d'an 10 a viz ebrel diveza. 500 bugel euz bro C'hall, etre 6 ha 10 vloaz, a oa eat da drugarekaat an Tad Santel ar Pap, euz an aotre, roet ganthan d'ar vugale da gommunia, kerkent ha m'o deuz skiant ha deskadurez aoualc'h da goupren ema dindan spesou ar bara: Korf, goad, Ene ha divinite or Zalver Jesus-Christ.

Sul ar C'hasimodo a yoa evitho, an dervez braz; rak en deiz-se e voent digemeret gant Hon Tad Santel ar Pap Pi dek. Pa oent oll tremenet dirazhan, ar Pap a reas dez'ho eur brezegen talvouduz da veza lennet ha studiet mad, gant an tadou hag ar mammou kristen, ken aliez, dieguz da vont da gommunia, ha da zigaz gantho ho bugaligou, var digarez, n'o deuz ket c'hoaz great ho fask kenta solannel.

« Va Bugaligou, emezhan, ho trugarekaat a ran euz ar joa a roit d'in, d'en em gaout en ho touez, pa sonjan e talc'han plas Jesus-Krist, hag a en n'em blije e kichen ar re zo henvel ouzoc'h, hag a lavare d'he ebestel: Lezit ar vugale da zont d'am c'haout, rak rouan-

telez an Env a zo d'ar re a zo henvel outho. Eun digarez all, am beuz d'ho trugarekaat, va bugaligou, abalamour an testeni braz-ma a roit d'ar Pab euz ho karantez, hag a zo koustet d'eoc'h skuisder eur veach hirr, a ro tro d'in da veza laouen, o velet gant pebez, senti-digez, o peuz great ar pez a c'houlenne ouzoc'h, Hor Zalver Jesus, p'o peuz, evidoc'h da veza ken yaouankik, Hen resevet dre ar gommunion zantel.

Guelit, va bugaligou, ar grasou, a deu da heul ar gommunion. Hoc'h en em rei deoc'h, Hor Zalver madelezuz a ro d'ho spered ar virionez, d'ho polontez ar zantelez, d'ho kaloun ar vadelez, en eun doare ma c'hellomp lavaret, goude ar gommunion, evel sant Paol : Jesus-Christ eo va buez ; beva a ran, mes, Jesus eo a vev ennhon.

Evelse, p'e guir Doue eo ar glanded heb koumoul, an neb a zo unanet gant Jesus-Krist dre ar gommunion, a zao evel eur goulmik dreist fank ha sklabez ar bed-ma, hag a ya d'en em guzet e kaloun Doue, e kaloun an hini a zo glannoc'h eged an erc'h var gern ar menezioù.

P'e guir Doue, eo ar gened dispar, an hini a zo unanet gant Jesus, a deu ive da veza ken skeduz ma laka an Elez souezet dirak eun hevelep tra.

P'e guir Doue, eo ar garantez memez, ar c'hristen unanet gant Jesus a deu da veza henvel outhan, he galoun leuniet oll, gant ar garantez divin.

P'e guir Doue, eo ar vadelez memez, hag ar vadelez, hervez yez ar Skritur Sakr, eo ar berfeksion, ar c'hristen unanet gant Jesus dre ar gommunion, a gav e sakramant an aoter ar zantelez, ar berfeksion. Kaout a ra ennhan an nerz d'en em zével dreist he ioulou direol ha da ober fae var oll madou troumplus ar bed-ma. Hag evel-ze e teu da veza guir promessa Jesus ; an neb a zreb va c'horf en deuz ar vuez peurbaduz. Ne lavar ket : en devezo divezatoc'h, mes adalek breman eo dezhan ; an errez guirion a zo gantho dre ar gommunion.

Breman e zan c'hoaz da rei deoc'h, un ali benak hag a lakeoc'h doun en ho spered. Da genta, e kendalc'hoc'h da vont d'ar c'hatekismou, rak izom deski o peuz c'hoaz, ha seul vui ec'h anavezoc'h guirioneziou ar relijion, seul vui e teuoc'h da anaout eo sakramant an aoter kalounen ar feiz, ar feunteun euz an oll grasou, al louzou guella a eneb ar poaniou, an nerzusa a eneb an techou fall, ar guir bara a vuez, hag an errez euz buez peurbaduz ar Baradoz.

An eil ali, a roan deoc'h, eo beza aketuz da gommunia aliez, bembez ma c'hellit, evit ma teuoc'h bepred da greski e karantez Doue, da veza evit an oll, eur skouer a volesti, er gear, er skol, en ho parrez, e peb leac'h. Ha brema, en eur echui, e roan a greis kaloun, d'eoc'h, da oll vugaligou Franz, d'ho tadou, d'ho mammou, d'ho kerent, va bennoz a Bap. »



MIZ GOUERE

Ar 23 a viz gouere a zo bet eur gouel kaer evit bugale Mari Landunvez.

18 aspirantez nevez a zo bet resevet, hag oll, araok lakât, ar ruban en ho c'herc'hen hag ar vetalen var ho c'haloun, o deuz promettel, a vouez huel e c'hars treid aoter ar Verc'hez : tec'hed evit atao dioc'h an ebatou danjeruz, evel an dansou noz, an dansou sul, an dansou morlarjez, an dansou pardonioù ha foariou, ar veillerez noz, ar goal gompagnuneziou, al leorioù hag ar c'hazetennou fall, ha kement a c'helfe beza evitho danjer da goeza er pec'hed ha da denna dismegans var ar gongregasion.

Setu ama ho hanoioù :

Joséphine Le Borgne, Milin-Tréaz.	Marie-Yvonne Magueur, St-Samson.
Françoise Bellec, Traon.	Marie Magueur, Sant-Samson.
Marie Eliès, Kermajeau.	Marie Magueur, Sant-Gonvalc'h.
Marie-Renée Foll, Langurru.	Anna Perhirin, Rochard.
Rose Foll, Streat-Lann.	Marie Taloc, Kerc'hoazoc'h.
Marie-Renée Floc'h, Sant-Gonvalc'h.	Marie-Jeanne Trébaol, Berguep.
Marie Guéna, Arc'hantel.	Joséphine Talarvein, Trémazan.
Herveline Guennégues, Kerchoézel.	Catherine Talarvein, Trémazan.
Jeanne Guizioù, Trémazan.	Olga Vaillant, bourg.

En dervez-ze ive euz bet great 10 congreganistez nevez.

En akt a gonsekrasion o deuz lennet d'ar Verc'hez, e lavarent : ni ho kemer hirio evit hor rouanez, hor patrounez, hag hor mam. Prometti a reomp a vir galoun n'ho tilezimp biken, ne raimp ha ne lavarimp netra biken enep oc'h honor. Ni a fell deomp ho karet, ho servicha, ha lakaat ho karet-hag o servicha en dro deomp.


Goude e voe roet dezho leor reolen ar gongregasion ha skrivet ho hanoioù var gaier Bugale Mari.

Setu ama ho hanoioù

Françoise Brénéol, Kerriou.	Philomène Le Guen, Trémazan.
Joséphine Cloâtre, Langurru.	Marie-Jeanne Magueur, Sant-Samson.
Marie-Anne Eliès, Kermajeau.	Françoise Magueur, Prat-Arc'hantel.
Marie-Jeanne Forest, Trémazan.	Josèphe Perchoc, Kervéléoc.
Françoise Guizioù, Kelleret.	Marie-Jeanne Trébaol, Kerzournic.

Hirio c'hoant ar merc'hed yaouank-ze eo, lakaat an oll Eneou da garet Doue hag ar Verc'hez.

Evit-ze n'o deuz nemet dont aketuz da reunion an trede sul ar miz ; kommunia aliez, rei skuer vad en ho zi, en ho farrez, e kement leac'h ma vezint.



ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar gella renk

Klas kenta. Kenta rummad.	1 Marie Guéna. 2 Françoise Brénéol. 3 Philomène Guennégues 4 Céline Le Dall. 5 Joséphe Arzel.	Eil klas.	1 Marie-Anne Talarvein. 2 Augustine Brénéol. 3 Victoire Guiziou. 4 Louise Forest.
		Eil rummad.	1 Désirée Maguérés. 2 Françoise Silvestre. 3 Eugénie Morel. 4 Marie-Yvonne Léostic. 5 Augustine Talarmin.
Eil rummad.	1 Marie Brénéol. 2 Marie-Anne Cadalen. 3 Germaine Drogou. 4 Euphrasie Maguérés. 5 Joséphine Conq. 6 Marie Vaillant. 7 Marie-Anne Trébaol. 8 Joséphe Kerros. 9 Ernestine Guéna. 10 Francine Conq.	Trede klas. Kenta rummad.	1 Yvonne Magueur. 2 Marie Jaouen. 3 Marie-Yvonne Perchoc. 4 Marie Jaouen.
		Eil rummad.	1 Jeanne Guéna. 2 Marie Provost. 3 Marie Gouzien. 4 François Jaouen. 5 François Morel.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Barados :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
18 Even	Rose-Renée Marie Lesvénan, Kérincuff.	Rose Lesvénan.
19 —	Jean-Marie Mingant, Kerléo.	M.-R. Quéménéur.
20 —	Françoise Habasque, Stréat-doun.	F. Habasque.
1 Gouere	Guillaume-Jean J. V. Kerlérroux, Archantel.	Valent. Kerlérroux.
4 —	Goulven-F. Habasque, Créac'h.	F. Guennegues.
5 —	Jean Pailler, Langoz.	M.-J. Cadalen.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BERRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

- 25 Even, François-Marie Tanguy, Sant Pabu, Marie-Anne Perchoc, Traon-bian.
16 Gouere, François-Marie Floch, Plouarzel, Marie-Louise Habasque, Streat-doun.

A zo bet eureujet e parrresiou all :

Guillaume hag Anne-Marie Pailler, Curullou ; Marie-Françoise Cadalen, Keic'hoazoc'h Jean Leneve, Kerdisinic.

Pater, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'headal deiz ar varn, e goashed ar Groas

10 Gouere, Marie-Renée Pellé, 80 bloaz, Archantel.

De profundis.

MIZ EOST

2. Guenre kenta. Offeren ar galoun sakr ha bennoz ar sakramant da 6 h.

Goulen dre galoun Jesus eun amzer vad evit an Eost. E miz eost evel er miziou all, miromp lezen ar zul en eur vont d'an offeren ha d'ar gousperou. Ne zilezomp ket hor pedennou var digarez e zeus eun tam labour tennoc'h. Sonjomp dastum dre skuisder ar c'horf eun eost puill evit ar Baradoz.

4. Eil sul. Offeren sant Dominik, gousperou Introun Varia-an-Erc'h. Ar Verc'hez e unan a ziskennaz euz an Env, da zeski da sant Dominik an doare da lavaret ar rozera. Divezatoc'h, ar beden-ze a vezo e vella benvek evit lakaat, da zistrei ouz Doue, heretiket divar dro Albi. Evelthan, bezomp mad, da lavaret hor chapeled, deomp d'ar zul d'ar Rozera, ha gant sikour ar Verc'hez e tiskarimp kement a glaskfe miret ouzomp da ober kor silvidigez.

11. Eil sul. Offeren sant Ligor, gousperou ar memez sant, betek Capitul, goude offis santez Clara. Eur vanden paianet a glaske ober skrab var gouent santez Clara. Leun a fizianz e Doue ne c'hell ket lezel he servicherezet da goueza etre daouarn an dud divadez-ze, e za varzuc'h enno, ar sakramant meulet ra vezo etre he daouarn. O velet evel bannou tan o strinka euz an hosti sakr, ar bai Janet, dallet ha spountet, a gemer an teac'h. Ar gommunion great mad, eo a lakaio ive an drouk-spered da dec'het divar hon tro.

A zo pedet da ober d'an eil sul, ho anter-heur adoration, pe da lakaat re all en o leac'h

10 h. 1/2 : François Guennégues, Kelleron, Claude Le Borgne, Pourane, Eugène Jaouen, Kerléo, Pierre Jaouen, Landoursan.

11 h. : Job Godebert, François Ollivier, bourg, Jean Guennégues, Kerchoezel, François Jézéquel.

11 h. 1/2 : Yves Floc'h, Jean-Marie Pondaven, Eugène Jaouen, Joseph Lescop, bourg.

12 h. : François Coadou, François Jaouen, Jean-Marie Pellen, Jean-Marie Godebert, Kernézoc.

12 h. 1/2 : Jean Taloc, Kerc'hoazoc'h, Jean-Marie Colin, Kervéon, Pierre Trébaol, Troméac, Vincent Le Gall, Penfoul.

1 h. : Yves Bizien, Joseph Bizien, Kelléron, Gabriel Pérez, Kerchoezel, Ollivier Daouben, Trémazan.

1 h. 1/2 : Eozen Magueur, Pen-al-Lan, Yves Kervran, Penfoul, Auguste Perhirin, Penkear, Hervé Bervas, Kelléret.

14. Derc'hent gouel Itroun Varia anter-eost. Yun ha vijil.

15. An dervez-ze a zigaz deomp da zonj eo bet douget, d'ar baradoz, gant an Elez, korf dinam ar Verc'hez. Er bloaz 1638,

Lois XIII, roue Franz, en em voestlas e unan hag e rouantelez d'ar Verc'hez Vari, en eun henvelep doare, ma c'hellet lavaret a c'houdevez :

Rouantelez Franz eo rouantelez Mari. Evit na vezo james dizonjet an dervez kaer-ze, an Ilis a gemen eur prosesion bras, bep bloaz, e pep parrez a Franz, da c'houel Maria anter-east.

En dervez-se, offeren vintin e Kerzent da 6 h. 1/2, offeren bred da 9 h. 1/2, rozera da 2 h., gousperou da 2 h. 1/2.

Ar prosesion a ziblaso euz ar bourk da 8 h. 1/2.

Heuill oll ar prosesion evit mont ha dont. Da anter-east, euz pardoun e pep parres. Goude beza bet e Kerzent o pedi hag o tiskouez hor c'harantez d'ar Verc'hez, e tizroimp oll d'ar gear gant ar prosesion hag en eur gana meuleudi hor mam euz an Env. Er-giz-ze e veritimp ma c'haozo deomp eur plas en he c'hever er Baradoz.

Bugale ar skol gristen ha bugale Mari gant ho medalen, a en em lakei var renk e kever an enseignou.

Ar re o devezo an henor da zouggen an enseignou, a roio, oun sur, skouer vad d'an estranjourien. Hini anezho ne denno dismeganz var ar barrez o tont da gozeal epad ar prosesion, pe da en em vesvi. Araok ar prosesion e teuint oll da lakaat Jesus en o c'haloun, dre eur gommunion santel, o merko, da vont d'ar baradoz e kever ar Zent a zougint.

18. Trede sul ; offerenn ha gousperou sant Joachim, Tad ar Verc'hez. Tadou ho mammou, dre ho kentelliou santel ha dre ho skouer vad, savit ho pugaligou e doujans Doue hag e reint joa ho kaloun evel ma reaz ar Verc'hez levezet sant Joachim, he zad.

Goude gousperou, reunion bugale Mari.

25. Offeren ha gousperou Kaloun dinam ar Verc'hez.

Dastum e Kaloun Mari hon oll poaniou, labourou, pedennou, evit o c'hinnig, a unan gant he re, da galoun Jesus, evit he oll mennoziou.

KANNADIK

Kannadik miz Even ha *Kannadik* miz Gouere o deuz koustet 60 lur. Bet evit sikour o faea, digant : L. B., J.-M. Q., pep a 8 real ; A. S., C. G., pep a 4 real.

Doue r'ho faeo.

Ar paour keaz kannadik erruet en he 12 miz gant al leor-ma, ne ra ket a fortun. Ma ra da viana eur vad bennag d'an ene ha d'ar c'horf, he oll boan ne ket kollet. Doue er paeo, ma vez ankounac'head gant kalz tud-zo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4

GWENGOLO 1912 (N° 13)



KANNADIC

PARRES

Landunvez



EUL LEVRIC BEP MIS



DA LENN HA DA ZEL'HER EN TI

AN DUD A VOR

(Trede Pennad)

Ar vartolodet var al listri marc'hadour

Stad ar vartolodet var al listri marc'hadour pe var al listri a gas tud euz an eil bro de benn, n'eo ket kaer ken neubeut, da viana, e kever ho Ene. Pet guech al listri-ze, a elfe, heb koll ebed, gortoz da ziblaz ar zul goude an offeren pe al lun vintin. Er giz-ze ho martolodet hag ho beachourien a elje kaout offeren, araok mont en hent. Mes, hirio an deiz, eo rouez, ar mistri listri a sonj en dever stris en deuz peb kristen da glevet an offeren da zul, ma rankont evit-ze, e n'em dieza un tamik bennak.

N'euz ket pel bloaveziou, tri lestr a ioa prest da ziblaz d'ar zul vintin. O zri e z'eant d'ar memez porz mor. Daou a ieas kouit da c'houlou deiz. Cabiten an trede lestr, a lavaras : pa beuz ranket gedal ar zul vintin, e c'hortozin ar mare goude kreiz-deiz. Ne vezin ket kalz divezatoc'h e penn va beach, ha va martolodet o devezho an offeren. Doue, a rei deomp paska an amzer, roet dezhan. Goude ta m'o devoa great he equipaj he zever a gristen, e savaz an eor hag al lestr a reugaz mor. Abenn ar zadorn vintin, edo e penn he beach. Laouen oa ar vartolodet hag ar c'habiten e sonjal e c'hel-jent adarre, rei ar zul d'an Aotrou Doue.

Mes, pa glaskont an daou lestr diblasset en o raok hag heb offeren, n'o guelchont ket. Ouassoc'h, abaoue, n'euz bet kelou ebed anezho. Goueleded oant bet ho daou er mor doun.

Doue, a n'en devoa ket diskouezet dre eno, e teu, he zourn, abred pe divezad da skei ar re a ra goap d'euz he c'hourc'hemen :

Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, ouz he veuli,
Ha d'euz gourc'hemen an Ilis :
Ho kleo devot a benn da benn
Sul ha gouel berz, an offeren.

En amzao, a ranker, an daelou en doulagad, ar vartoloded marc'hadour, a rank re aliez beva evel pa n'ho deffe ene ebed da gas d'ar Baradoz. Epad ma vezont er mor n'o deuz sikour ebet evit ho Ene paour. Pa erruont er porz, e rankont ar peurlieissa chom var ho lestr, memez d'ar zul. Parc'hennou al listri-ze, a zo goulskoude ho dever, rei amzer d'ho martoloded, pa vezont er porz, da ober ho deveriou ha gristen ha da vont d'an offeren. Ma n'er greont ket, euz an dra-ze o do da renta kount da Zoue.

Brema e rear listri, hag a ell kas assamblez betek 3.000 den deuz eur vro de ben. Kaout a rear enno saliou pe grampou braz evit c'hoari, lenn, kemeret ar blijadur. Ne vank enno nemet eur zal a ve enni eun aoter, da lavaret an offeren, a denche ker puill bennoz Doue var ar veachourien.

Mes, arabat teuler ar beac'h atao var mistri al listri, rak, re aliez, siouaz, ar vartoloded diskennet en douar, pe o c'hedal un ambarkamant nevez, a ankounac'ha o deuz an offeren da glevet d'ar zul, dindan boan a bec'hed braz.

« Mes, a ne rear netra evit goulenn ma vo lakeat adarre beleien da viana var al listri a vrezel ? » Eo, an darvoud spountuz c'hoarvezet varlene e Toulon, o deuz lakeat 459 maouez, mammou, priejou, ha c'hoarezed ar vartoloded lazet var al listri *Gloire* ha *Liberte*, da zina ha da gas d'ar senatourien eur petition evit goulenn ma vezo lakeat var hon listri beleien, evit rei d'ar vartoloded sikour ar religion. Neuze e c'hellint essoc'h beva ha mervel evel kristenien.

Emgleo katholiket enez Eussa, e deuz ive pedet ho depute da rei da anaout d'ar c'houarnamant, ar c'hoant e deuz da velet beleien lakeat en hospitaliou ha var al listri a vrezel. Setu ama e gallek ar petition-ze, a elfe beza great gant oll emgleoioù katholiket ar parrezioù o deuz kalz martolodet :

« Les membres de l'Union Catholique de l'île d'Ouessant, au nombre de 150; tous électeurs, réunis en assemblée générale, le 14 juillet 1912, émus des catastrophes qui jettent si souvent le deuil dans les familles maritimes, demandent instamment le rétablissement de l'aumônerie de la marine. Ils désirent qu'il y ait toujours un aumônier dans chaque hôpital et dans chacune des unités importantes des trois escadres, cuirassés, croiseurs, contre-torpilleurs,

afin que leurs fils, neveux, cousins, tous catholiques, soient aidés à sanctifier leur vie comme leur mort, en temps de paix comme en temps de guerre.

» Ils donnent mandat à leur directeur d'adresser cette pétition à M. Louis Soubigou, député de la 3^e circonscription de Brest, afin qu'elle soit déposée au plus tôt sur le bureau de la Chambre ».

Ma kemerer soursi euz Ene ar vartoloded ne ankounac'haer ket ken nebeut mad ho c'horf

Evit sikour morerien ar vro hag o distrei dioc'h an taverniou a c'houlounder ho yalc'h hag a zistruj yec'hed kalz annezho, tud madezus, o deuz savet var ribl an aodjou tosta deomp, dek ti, hanvet « abris du marin ». Henno e kavomp baneou dour zom aozet gant deliou eucalyptus gant sucr ebarz, hag a laka heb ho mesvi, gor en ho goaziet pa vezont slasset o tont euz ar mor, papèr lizer da skriva, leorioù da lenn, c'hoarioù honest da dremen ho amzer epad an diskouiz pe an taolioù avel divergount.

Setu ama e gallek un diverra euz ar pezh zo tremenet en tiez-ze epad ar bloaz 1910 :

« Au minimum, 483.532 entrées, dont 96.017 aux salles de lecture ; plus d'un demi-million d'heures passées par des milliers de marins dans une atmosphère moralisante, éducatrice, instructive.

Entrées des marins dans les dix abris en 1910 : Ile-de-Sein, 73.165 ; Guilvinec, 58.895 ; Passage-Lanriec, 47.024 ; Concarneau, 104.077 ; Audierne, 68.573 ; Palais, 62.329 ; Camaret, 28.008 ; Sainte-Marine, 7.333 ; L'Île-Tudy, 17.729 ; Roscoff, 16.299. Vente rapide de 19.000 exemplaires de l'Almanach du Marin Breton, ouvrage de vulgarisation professionnelle et anti-alcoolique, qui possède la faveur de plus de 50.000 lecteurs sur la côte.

Aux lits de camp des « abris » : 1.190 couchages de marin en relâche.

Anti-alcoolisme direct : 94.542 tasses chaudes et sucrées de décoction d'eucalyptus et plus de 2.300 kilog. de feuilles d'eucalyptus délivrées par paquets aux équipages et ménages. Thérapeutique populaire : 5.070 pansements, soins et remèdes courants. »

Evit anaout guelloc'h ar vad a ra an dek ti-ze, ar vartolodet a dlefe prena bep bloaz l'« Almanach du Marin Breton » a roio dezho ouспен-kalz sklerijen var ho micher, ha kassoni ouz ar vesventi.

Adoption des orphelins de la mer

Eun ober all c'hoaz kaer evit skor an dud a vor, eo an hini 'zo hanvet : adoption des orphelins de la mer. Dont a ra da zikour ar baotred minorez, o deuz kollet ho zad er mor pe dre eur c'hlenvea paket er mor. D'ar re o deuz c'hoaz ho mamm e vez roet 100 lur er bloaz ; d'ar re n'o deuz na tad na mamm 200 lur, beteg ho 14 vloaz. Evit kaout ar zikour-ze e rank ar minor bian bezo fur, beza savet ervez ar religion gristen, ha karet micher he dad. Aotrou persoun ar barrez ha prezidant conseil an Ilis a ro bep bloaz euz he gelou d'ar re zo karget da ingala an aluzennou.

Ar prizioù er skol Gristen

D'ar zadorn 27 a viz gouere, eo bet roet ho frizioù da baotrezet ar skol gristen. En desped d'ar glao a goueze puil, kerent ha mignou-net zo diredet d'ar gouel. Bennoz d'an aotrou Mear ha da brezidant conseil an ilis, a ioa er pen araok. Mad o doa great ar barrizionis, o tont da rei testi a anaoudegez hag a garantez d'ar mestrezet kristen a laka o foan evit kelen merc'hedigou Landunvez. Ma tesker er skol gristen hent an Env dre ar c'hatekismou, ne lezer ket evit-ze a gostez an deskadurez red evit ober afferiou an douar. Ar certifi-cajou d'études, a deu bep bloaz d'ar skol, a ziskouez sklear aoualc'h, ar zoursi a gemerer da zeski ar grammaire, ar chiff, histor ar vro hag al labourou a vez great gant an adozioù da c'hriat pe da ober stamm. Kement hini a deuaz er c'hlas braz deiz ar prizioù, a jome sebezet, o velet ar mogerioù goloet gant bajou, tavancherou, chaliou stamm, cach-neou, mouchouerou, ha kant tra all talvoudek evit eun tiegez. Al labourou-ze oa great oll gant ar vugale. E kever peb labour oa ive pajennou skritur, pe dessinou euz ar re gaera.

Araok ar prizioù euz bet c'hoariet piesou komedi euz ar re vrava. Ar vilnerez hag ar c'hlaouez a c'hoariaz e brezounek hag a lakeas an dud da reuga ho ginou e c'hoarzin. Ar pies gallek kenta, ne reaz ket nebeutoc'h c'hoarzin. Kaout a reat ken ijinus an denne-rez poltrejou, ha ken drol, c'hoant dreist muzur, eun intanvez coz, marc'hadourez pillou pe besket, da gaout en he foltret, daoulagad c'hlaz ha bleo alaouret ha frizet evel paot bian al Lizon. Ar pies-ze a ziskoueze penaos an ourgouill a jom er galoun betek ar maro, pa na vez ket great brezel dezhan.

An eil c'hoari gallek a lakeas an daelou da redet euz daoulagad, an oll, o velet Doue e kastiza eur vamm, ne sonje nemet tanva oll ebatou millged ar bed, hag o chacheal euz he zi, he merc'h Cle-mence, abalamour ma lakea he deveriou e kever Doue, araok plija-dureziou vean ar bed. Doue a venigas Clemence, o rei dezhi eur vadouberourez a lezaz ganthi he oll danvez. Mes, ar plac'h yaouank fur, ne n'em servichas anezho, nemet evit sikour an dud clanv, izomek, mac'hagnet. Eun dudi oa gueled an dud sikouret ganthi, o tigaz ho bugale d'e zrugarekat ha da ginik dezhi ar prezanchou a gave dezho a raje plijadur d'ho madouberourez. Goulskoude, eürusdet Clemence noa ket leun, rak na ouie ket, petra oa deuet da veza he mamm hag he c'hoar vian. Pell bloaveziou goude, e erruaz e tal d'or he zi, eur vaouez koz da c'houlenn sikour, rak dare oa da vervel gant an dienez. Eur plac'h yaouank goloet a druillou he rene. Pebez kalounad evit Clemence, anaout a ra en diou estranjourez; he mamm hag he c'hoar. Buan e tigor dezho he zi, he divrec'h hag he c'haloun. Mez, re divezad oa. He mamm ne deuz amzer, nemet da c'houlenn pardoun euz he c'hrisder, araok tenna he alanad diveza. Da viana, he c'hoar a vevo eüruz en he zi iviziken.

Ar paotrezet n'oant ket nec'het o tistaga ho c'homsou; gallegat a reant evel ma n'o diviche klevet ken abaoue m'edont var an douar.

Etretant, e veze ive kan, dudius da glevet. Avichou e save betek 30, 40 assambez var an teatr. Gouerziou a voa gantho euz an dibab.

Madelen Morel, evel eur c'habiten, goude beza lavaret: un, deux, trois, a roe an tòn araok pep post kan, da re viana, evit kana penaos

o tleer-saludi ar re a erru ganeomp. Gant plijadur hon euz' guelet, penaos ho zalud mignouna ha kaera, a ioa evit ar mabik Jesus, ho mammou hag an dud deuet da zelaou deiz ar prizioù.

Eur vanden all a ganas:

Gai, gai, gai, restez bretonnes,
Bon, bon, bon, restez bretons.

Dre ho gouerz, e roent d'an oll ar c'huzulioù ar guella evit chom breped guir Breizad ha guir gristen. Goulskoude noa ket ankou-nac'head ive ar Franz, rak ar post diveza oa:

Gai, gai, gai, vive la France, bon, bon, bon, vivent les bretons.

Pa oa echu da rei ar prizioù ha sklasket an daouarn betek o lakaat da zont ruz, an oll a zistroas d'ar gear eürus ha laouen, ha fouge enn'ho da veza deuet da velet eur gouel ken kaer.

MIZ EOST

Peguir n'euz ket a skol e miz eost, e vo lakeat en dro-mar var ar c'hannadik hanoioù paotrezet ar skol gristen a zo var an daolen a henor evit ho labour hag ho zentidigez:

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar gella renk

Klas kenta. Kenta rummad.	}	1 Marie Guéna.	Eil klas.	}	13 Marie Provost.
		2 Céline Le Dall.			14 Joseph Le Borgne.
		3 Philomène Guennéguès			15 Anastasie Coadou.
		4 Françoise Brénéol.			16 Rosalie Croguennoc.
		5 Joseph Arzel.			17 Désirée Maguérés.
Eil rummad.	}	1 Marie Brénéol.	Eil klas.	}	18 Eugénie Morel.
		2 Germaine Drogou.			19 Joséphine Lescop.
		3 Euphrasie Maguérés.			20 Françoise Silvestre.
		4 Joséphine Cong.			21 Thérèse Raoul.
		5 Anne-Marie Daniël.			22 Louise Nédélec.
		6 Madeleine Morel.			23 Rosalie Perchoc.
		7 Marie Vaillant.			24 Jeanne Le Borgne.
		8 Joseph Kerros.			25 Augustine Talarmin.
		9 Denise Talarmin.			
Eil klas.	}	1 Augustine Brénéol.	Tredre klas.	}	1 Marie Jaouen.
		2 Marie-Anne Talarmin.			2 Marie Jaouen.
		3 Victoire Guizioù.			3 Yvonne Magueur.
		4 Pauline Cong.			4 Anna Quivoron.
		5 Adèle Talarmin.			5 Françoise Pondaven.
		6 Louise Eliès.			6 Marie-Yvonne Allégot.
		7 Marie-Yvonne Cong.			7 Philomène Cornen.
		8 Louise Laot.			8 Marie-Anne Cong.
		9 Marie Gouzien.			9 François Jaouen.
		10 Hélène Bizien.			10 Jean-Marie Talarmin.
		11 Marie Cadalen.			11 François Morel.
		12 Madeleine Prigent.			12 Joseph Castel.
					13 Claude Talarmin.

15. Da anter-eost, ar brosesion a ioa kals tud ouz e heul evit mont da Gerzent. Netra eno a zouezus. Oll e santet an izom da bedi c'houek ar Verc'hes evit kaout dre he sikour amzer velloc'h evit an Eost.

An offeren bred zo bed kanet gant an Aotrou Millet, a ra skol e ti an aotrou de Martel. An aotrou Ollivier a zo oc'h ober skol e ti an

aotrou Auguste Carof en deuz great, en offeren bred, eur prezegen euz ar re gaera.

Diskouezet en deuz e berr comsou, penaos n'euz bet e kaloun ebed mioc'h a garantez evit e kaloun ar Verc'hez, rak Doue ouz e choas evit mamm da Jesus, a ranke ive rei dezhi hirra ma c'helle ar garantez en deuz e unan evit he vap. Ar garantez bero-ze evit he map, eo en deuz great d'he Ene, tec'het eb poan ebet deuz e c'horf evit nijal d'ar Baradoz. Dinam ar beb pec'hed, he c'horf n'en devoa ket izom da dremen dre vreïnadurez ar bez, evit beza nevezet evel corfou ar bec'herien. Setu perak eo bet goude he maro, douget d'an Env gant an Eles. Savet e bet betek an huella euz an Envou, abalamour me bet var an douar an humpla deuz an dud. Doue a n'en deuz lavaret : an nep a en n'em izella a vo savet huel.

Eveld'hi, eme ar prezeger elavar, karomp Doue dreist pet tra, bevomp dinam ha disklabez euz ar pec'hed, bezomp izel a galoun, hag e errouimp en deiz ganthi er Baradoz.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz.

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
22 gouere	Joséphine-Marie Cadalen, Kelleret.	Vincent Cadalen.
11 east	Jeanne-Philomène Taloc, Navant.	Jean Taloc.
11 —	Joseph-Eugène-Marie Autret, Archantel.	Jos. ph Autret.
14 —	Joséphine-Marie Salauñ, bourg.	Guillaume Coadou.
12 —	Ernest Pellen, Kernézac.	Vincent Pellen.
15 —	Joseph-Marie Elies, Kerguérioc.	Guillaume Godebert.
		Zoé Coatanéa.
		Philomène Provost.
		Marie-Fr. Isaac.
		Joséphine Jaouen.
		Françoise Perchoc.
		Joséphine-M. Forest.

MIZ GUENGOLO

1. Pevarzekved sul goude ar Pantekost, offis ar zul d'an offeren ha d'ar gousperou.

6. Guener kenta, offeren ha kommunion a zigol da 6 h.

8. Guinevelez ar Verc'hez Vari. Offeren vintin er bourg da 6 h. e Kerzent da 6 h. 1/2. An offeren bred er chapel da 9 h. 1/2, rozera da 2 h. ha gousperou da 2 h. 1/2. Evel ma vezo an offisou e Kerzent, ne vo ket a adoration evit voazet ar galoun sakr. En dervez-ze d'ar pardaez e tigor e Quimper eur c'hongrès evit emgleoiou katoliket parrezioù an Escopti. Pedomp ar Verc'hes evit ma vo unan bennak a beb parrez o selaou an traou kaer a vo lavaret enno evit mad ar religion, ar c'hongrès a bado tri dervez.

15. Pardoun sant Gonvel, patroun parrez Landunvez, an offeren vintin da 6 h., an offeren bred da 10 h., gousperou da 3 h.

Mes petra eo eur pardoun ?

Eur pardoun a zo gouel ar zant a zo bet choazet gant hon tud coz evit skoazia ha diffen hor parrez.

E pe leac'h e tle beza great ar gouel ? N'eo ket en hostalirioù, nag er c'hoarioù a vez great var ar plasennou, na var ar c'hezek koat, nag en dansou. Petra zo dinnoc'h a druez, evit ar galoun zo enñhi tan karantez an Aotrou Doue, eget guelet tud, dallet gant ar c'hoant da c'hounid arc'hant, o tigas sounerien da checha ar yaouankis d'an drouk-spered, epad ma ma ho zant patroun o pedi a unan gant ar guir gristenien, evit ma zeint d'ar Baradoz.

Ar pardoun a dle beza great en ilis. Eno eo e tle ar barrizioniz, a zo bugale ar zant patroun, en em zestum evit enori ho zad, evit en em erbedi outhan, evit lakaat etre he zaouarn ar reketou o deuz c'hoant a ve sevenet gant an Aotrou Doue.

Pe seurt pedennou a blij muia d'ar zant patroun ? Ar re a vez great gant eun Ene dibec'h ! Petra dle ober-ta ar barrizioniz a c'hoanta enori ha pedi o zant Patroun egiz ma zeo dleet ? Mont da govez evit en em lakaat e stad da gommunia da zeiz gouel sant Patroun ar barrez. Eur c'hiz-kaer eo, an ini zo gant ar re zo hanvet da zougen an anseignou, da dostaat oc'h ar Sakramanchou. Ne deuont ket atao oll. Ha goulskoude, daoust a perak ne deuffent ket oll ? Daoust ha n'eo ket mad d'an eil koulz ha d'egile diskuez eur guir devosion d'ho zant Patroun ? Anat eo ne vezont ket hanvet ebken evit kaout tro d'en em ziskouez d'an dud oll gant ho dillad brao ha da gaout evelse eun tam lorc'h. Choazet int, d'ho zro, e touez tud ar barrez, evit rei gloar d'ar zant, ha diskouez e fell dezho bale var he roudou. Hi, da genta, a zo eta ho dever rei dezhan eun testeni euz ho c'harantez en eur zont da sakramanti. Mes ar re all a dle dont ive. Eur maread induljansou zo da c'hounid en dervez-ze, ha setu a-se perak eo hanvet ar pardoun ; pardoun ar pec'hejou dre an absolven, hag ar gommunion ; pardoun ar poanioù dleet d'ar pec'hejou memez goude an absolven, dre an induljansou.

N'euz netra all ebed da ober evit enori ar zant Patroun da zeiz ar pardoun ? eo, sûr. Petra ? kemeret perz en oll enorioù a vez roet dezhan, klevet kana ha displega he veuleديو en offeren bred, er gousperou, er brosession.

D'an oll offisou-ze, e tle dont an oll barrizioniz. Ne dle chomm er gear nemed an dud zo red evit diouall an ti hag ober al labour.

Daoust hag evelse eo e vez great ? Nan, siouaz ! Ar virionez n'euz forz pegen poaniuz e ve, a ranker lavaret. Ne vez ket muioc'h, mez nebeutoc'h zoken, a dud, en offeren bred deiz ar pardoun, ha nebeutoc'h c'hoaz er gousperou. Perak ? Abalamour ma chomer er gear var digarez aoza lein evit digemeret kerent ha mignounet. Lod ne deont memez da offeren ebed. Neuze lein ar pardoun a rank padout hirroc'h eget leinou all, hag abalamour da-ze e vanker d'ar gousperou a vez goulskoude lakeat da 3 heur evit rei deoc'h amzer da en em gaout. Mez, amzer avad a gaver atao da vont d'ann hostalirioù, ha da c'hinaoui var ar plasennou. E Landunvez, bennoz da Zoue, e vez kalz tud o heul ar brosession ; mez goulskoude e vez mioc'h c'hoaz o kuriuzennat var bord an hent dre beini e tremen. Ped euz ar re-ma a sonj lavaret eur beden, pa ia abiou dezho ar c'hroaziou, ar banielou, relegou ar zent ? Ped anezho a deu en Ilis evit bennoz ar sakramant ? Lod zoken a c'hoarz, a gaoze, a zalc'h ho zog var ho fen. Meur a veach, e ranker kaout mez, pa veler penaoz ec'h en em gundu paotret yaouank, savet mad, pa gomman-sont mont da burchu lod euz ho c'hamaladed. N'o deuz mez ebed ken.

N'euz ket pell c'hoaz ann oll coz ha iaouank, a en em denne d'ar gear deiz ar pardoun, da zivezata a ben kuz heol, ha pa deue ar pardaez ar bourg a veze sioul hag an archerien no deveze ket izom da furcha an tavernioù. Brema, e veler avichou bandennou tud a bep oad o chomm da lustrugenni en hostalirioù, ha pa zeont d'ar gear abars-ar-fin, e vez aliez tomed mad dezho, pa ne vezont ket mezo-dall. Ac'hano aliez ar chikaniou, ar c'hannou. Piou ne anzavo ket e tle ar gerent beza dizourzioc'h ha direbechoc'h, pa deue ho

bugale d'ar gear araok an noz, ha pa na jommet ket da c'haloupat, Doue a c'hoar e pelec'h ?

Kerent, beillit var ho pugale, ne roit ket dezho re a arc'hant, diskuezit dezho, skuer vad ; ha c'houi, tud iaouank, diskuezit o-peuz pen ; eleac'h en em laosker da ober evel ar re all, grit mad bepred oc'h unan, hag a nebeudou e chachoc'h ar re all d'ho purchu.

Deiz ar pardoun, e tiblasso pelerinaj an Escopti evit Lourdes. Unanomp epad ar sizun hor pedennou gant re ar Pelerined evit goulenn ma roio dezho ar Verc'hez ar grasou a glaskint evit ho Ene hag ar pare a c'houlennit evit ho c'horf.

18, 20 hag 21, yun ha vijil ar c'hotuerou.

22. Pardoun sant Gonvel Archantel. Heuill ar brosesion a ziblasso da 2 h. evit mont d'ar chapel. En eur erruout e vo beniget ar mor. Ra vezo enho an oll pesketerien, bizinerien ha martoloded Arc'hantel evit unani ho fedennou gant re an Ilis.

24. D'ar meurzh 24. e tigoro e Lesneven eur retred evit ar soudarded iouank hag ar Vartoloded a dle beza savet en 12 miz kenta. Evel ar bloaveziou all hor iaouankiz a ielo d'ar retred-ze ken talvoudekevitho. Ar re o-deuz c'hoant da veza kentelliet guelloc'h var ar retred-ze a dei da gaout ar velein.

29. Gouel an Arc'heal Michel. Offeren ha gousperou euz an arc'heal.

Kannadik miz east en deuz koustet 60 lur. Bet evit sikour e baea digant : A. M., pevar real ; M. A. A., ugent real.


Doue r'ho faeo !

TAOLIT EVEZ

Ar skol gristen evit ar paotrezet a zigoro d'al lun 16 a viz guengolo. Digassit ho pugale adalek an dervez kenta. Ar vugale a den varlec'h ar re all a vez atao diezet, abalamour ma vez kentelliou a no devezo ket studiet mad. Lod a c'houlenn perak ne vez ket resevet ar bugale evit ar certificat d'études ? Perak n'o peuz ket o digasset d'ar skol e poent ? Perak o peuz o lezet da vankout d'ar skol var an disterra digarez. Ha n'ouzoc'h ket penaos deuz 7 vloaz betek 12 vloaz eo merket d'ar mistri ha d'ar mestrezet skol petra rankont bembes da zeski d'ar vugale evit kaout, pa dei ar poent, ho zesteni a zeskadurez. Eun dervez manket d'ar skol a zo eun toul goulo chomet er pezh a dleont da c'houzout evit paka ar certificat.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4



Eun habit nevez

Lennerien ar *C'hannadik*, a lavaro oll, bennoz d'an aotrou J.-M. Conseil, beleg iaouank a Gleder, en deuz great evit all leorik a lennomp bep miz, gant kement a blijadur, eur zae nevez kals kaeroc'h ha tommoc'h eget an hini goz.

Hiviziken ar *C'hannadik* a gaozeo d'an daoulagad ha d'ar galoun araok memez ma vo lennet ar c'henteliou zo mouillet enghan.

Ar guel d'euz ho Ilis parrez, d'euz ho chapel Kerzent ken karet, d'euz skeuden ho mam an Itroun Varia a vir sikour, a zigaso da dud Landunvez, pe e zint labourerien douar, pe vartoloded, pe michouerien, ar sonj euz an deveriou o deuz da ober evit erruout e Rouantelez an Env.

Ia, o sellet d'euz ho Ilis parrez e penn ho *C'hannadik*, Landunvezis a lavaro, o tridal a joa : ennhi oump bep great dre ar Vadiziant bugale da Zoue, breudeur da Jesus-Krist, heritourien euz an Env ; ennhi hon deuz kant ha kant guech touet trei kein d'an drouk-spered, d'he bompou ha d'he oberou ; ennhi eo bet hadet en or c'halounou guirioneziou kenta ar religion dre ar c'hatekismou pa oamp bianik, ennhi o deuz ar guirioneziou-ze taolet griziu dounoc'h, dre brezegennou hor beleien, pa z'oump deuet da veza kossoc'h. Ha ma hon deuz bet an dallentez da goeza er pec'hed, ennhi oump deuet da voalc'hi hon Ene dre eur govession vad ha da rei dezhi dre an absolven ar peoc'h e devoa kollet ; ennhi omp deuet aliesha ma c'hellemp da roi d'an Ene-ze, dre ar gomunion zantel, ar vagadurez e dalc'h iac'h ha crenv var hent ar Baradoz.

An Ilis a zo ty an Aotrou Doue, dor an Env ; mes ivez ty ar barrizionis. Ho aluzennou e d'euz e zavet hag e dalc'h en e za kaer meurbet. Er meaz euz an Ilis, pep hini en deuz e dy paouroc'h pe binvidikoc'h, ervez he beadra ; mez an Ilis zo ty an oll, ennhi bian ha braz, paour ha pinvidik a vez daoulinet an eil e kever egile, evel bugale ar memez tad, pehini a zo en env kem ebet etrezo, nemet an hini en deuz ar zam pounera a oberou mad ; a zo tostoc'h da galoun Doue, perc'hen kenta an Ilis. Abalamour da-ze en Ilis, ty an hini en deuz roet he vuez evit he vredeur, ar ienien, ar gassoni e kaloun an den, a deuz evel an erc'h var gern ar menezioù pa bar varnhan tomder an eol. Keit a ma teu bep sul ha bep gouel ha var ar pembez pa ellont, ar barrizionis d'an offeren ha d'ar gousperrou d'ho Ilis, an traou a ia mad er barrez. Ar peoc'h hag an unvaniez a jom enni, Doue, a vez karet ha servichet ha gant Doue, e teu atao an eurusted.

Ma vel hiviziken Landunvezis ho Ilis parrez e penn ho *C'hannadik*, e velint ive er bajen diveza, ho chapel Kerzent hag ive skeuden

an Itroun Varia a vir Sikour, rouanez ar chapel-ze. Ar guel-ze, a lavaro dezho, penaos ne ouient ket c'hoaz marteze teuler an eil troad araok egile, pa deuz ho mammou d'o digas da dreid aoter ar Verc'hez ha d'e fedi da ober d'euz ho bugaligoù kristenien stard en ho feiz. Ha ne ket ebken pa zoac'h bian, eo bet ho tud o pedi an Itroun-Varia Kerzent d'ho tional a bep drouk, mez c'hoaz bep tro m'oc'h bet e poan pe e clenvet, ha pa o peuz ranket mont pell-diout'ho da soudarded, pe da vartoloded, pe da c'hounid ho para er meaz euz ar barrez. Atao int bet selaouet, hag abalamour da-ze, he skeuden dirak ho taoulagad er *C'hannadik* a zesko deoc'h ive en em erbedi outhi gant fizians, rak guir oa atao comzou sant Bernard : biskoaz den n'en em erbedaz ouz ar Verc'hez gant fizians, eb beza bet ganthi selaouet.

AR MISSION

Pa zigouezo ar *C'hannadik*-ma en tiez, e vezo bloaz abaoe Mission braz ar Barrez. Oll e fin ar Mission-ze, e kanac'h, al laouenedigez o para var ho tall :

Kavet em euz ar peoc'h hag an eurusted,
Iac'h eo brema ha laouen va Ene,
Dindan va zrei ann ifern a zo klozet,
Dreist an oabl glaz me vel digor ann Ee.
O va Zalver, hirio, varchoa'z ha bemdez,
Ra vo meulet hoc'h hano dudiuz !
Er Mission em euz kavet ar vuez,
Bennoz, Bennoz, mil bennoz d'eoc'h, Jesus !

Mad, hirio, greomp eur zell var hor c'houstians ha guelomp hag oll hon deuz dalc'het en hor c'halonou peoc'h Doue, hon rente ken euruz varlene d'ar mare-ma. Mar deo bet treac'h d'eomp hon tec'hou fall, mar d'oump anevet liamet e galloud an drouk-spered, ne gollomp ket a fizians. Epad miz here, miz ar Rozera, sikouret gant ar Verc'hez, e teuimp da garza hon Ene deuz he fec'hejou, ha da lakaat Jezuz en hor c'halonou, dre eur gommunion vad. Miz here, a vezo er bloaz-ma adarre, evel amzer zantel ar pask, evit tud Landunvez : oll e teuint da zaoulina da dreid ho chonfessour, oll e teuint da zaoulina ouz an daol zantel, evit maga ho Ene deuz ar guir bara a vuez.

Den ne ankounac'haio gounit an induljansou braz a zo stag ouz miz ar Rozera, pe evithan e unan, pe evit anaon paour ar purgator.

Ma teuffe eun den mad ha pinvidik, da lavaret deoc'h : c'houi o peuz dle, ho tud o deuz dle ; mad, grit an dra dister a c'houlennan diganeoc'h, ha me a roio deoc'h peadra da baea ho tle ha dle ho tud. Piou a ve diskiant aoualc'h da chom eb kemeret an arc'hant kinniget dezhan evit en em zizlea ha dizlea he dud ?

Den ebet, me zo sur.

Mad, setu aze petra ra an Ilis evidomp epad miz ar Rozera. C'houi o peuz c'hoaz dle da baea da justis Doue goude an absolven,

pe ho kerent eat d'an anaon, o d'euz c'hoaz ive dle da baea da justis Doue, hag a zo abalamour da-ze e tan ar purgator ; mad, kemerit e tenzor an Indulgansou great gant meritou eb muzur hor Zalver Jesus-Krist, meritou ar Verc'hez ha kalz sent all ; ar meritou-ze zo oll e boutin evit ma c'helloc'h kemeret eul loden anezho evit en zizlea ha dizlea an anaon paour.

Mez evit gellout kemeret ho lod en indulgansou, e rankoc'h ober ar pezh a zo goulennet gant an Ilis hag a verk ar *C'hannadik* ama varlerc'h :

1° Da zul ar Rozera hag epad an eizvetez e zeuz eun induljans plenier pe leun da c'hounid d'ar re vezo bet o kovez hag o kommunia. (Kovez a eller araok ar zul. Muioc'h, induljans plenier a zo da c'hounit bep tro ma teuer en Ilis da bedi en intansion Hon Tad Santel ar Pab, azalek ar zadorn kreizdeiz betek ar c'huz eol da zul ar Rozera.

Epad miz here e c'hounezher c'hoaz :

2° Eun induljans a zeiz vloaz ha seiz korais bep vech ma teuer d'an ilis da bedennou ar chapeled.

3° Eun induljans plenier d'ar re a vezo bet da viana dek guech er pedennou, gant ma vezint bet o kovez hag o kommunia.

4° Ar memez indulgansou a c'hell da c'hounid, ar re a raje ar pedennou-ze er gear, ma ne ellont ket dont d'an iliz.

Ar pedennou da lavaret en ilis hag er gear eo : ar chapeled, litanioù ar Verc'hez hag ar beden da zant Joseph.

Lavaret ar chapeled a zo lavaret pemp dizenez en eur sonjal bep dizenez en unan d'euz ar mysteriou. D'al lun ha da iaou er mysteriou a joa, d'ar meurs ha d'ar guener er mysteriou a geuz, d'ar merc'her, d'ar zadorn ha d'ar zul, er mysteriou a c'hloar.

Evel varlene e lakan er *C'hannadik* peden sant Joseph.

PEDEN SANT JOSEPH

Ouzoc'h en em erbedomp en hon anken, o Joseph, tad euruz. Goude beza pedet an Intron, ho pried Santel, e pedomp ac'hanoc'h ive gant fizians.

Abalamour d'ar garantez a bried oc'h euz bet atao evit ar Verc'hez dinam. mam da Zoue, ha d'ar garantez a dad oc'h euz douget hepred d'ar Mabik-Jesus, o pedomp a galon, da ober eur zell a drugarez ouz an heritaj en deuz hor Zalver Jesus-Krist prenet gant ar priz euz he c'hoad, ha d'hor skoazia euz oc'h oll galloud en hon oll ezomou.

O Joseph, c'houi, oc'h euz diouallet gant furnez, famill gaer Nazareth ; diouallit ive famill ar gristenien, ouen dud dibabet gant Jesus-Krist.

O tad meurbet karantezus, mirit na vimp taget gant ar geier hag ar vreinaurez. O Tad gallouduz, euz bar an env, sellit ouzomp ha roit d'eomp nerz er brezel a ra d'eomp roue an denvalijen. Guechal oc'h euz saveteat he vuez da Jesus ; hirio saveteit he Ilis ; harpit anezhi a eneb kounar he enebourien hag he dilivrit euz peb drouk.

Roit deomp, e peb amzer, skoazel evit ma c'hellimp, sikouret ganeoc'h, kerzet dre ho roudou, beva santelamant, kaout eur maro mad, ha mont da joa ar Baradoz evit atao. Evelse bezet great.

MIZ GUENGOLO

8. Gouel guinevelez ar Verc'hez a zo bet great e Kerzent gant kalz devoision. Ar berrizionis a devuaz niveruz da drugarekat ar Verc'hez da veza bet digant he map Jesus, eun amzer vad, evit peur destum an eost.

Goulscoude evit ar gousperou, kalz zo eat da bardoun sant Roch. Mar d'int bet e Sant Roch, o pedi ar zant da bellaat dioutho ar c'hlenvejou hag o kana e veuleudi evit ar gousperou, eo mad. Mez m'ar dint eat ebken evit ginaouegi hag eva odivi hag evit gedal an noz da zont d'ar gear, o deuz great fall, ha lakeat glac'har e kaloun, an Intron Varia a vir Sikour, o gede evit kana he gousperou.

LOURDES

15. Enn dervez ma z'ea ar *C'hannadik* d'ar voullerez, e z'ea pemp den euz ar Barrez da Lourdes : an autrou persoun, an autrou Floch, hag an dimezellet Herveline Grall, Amélie Jaouen, hag Anna Nédélec. Ne ankounac'haint ket pedi evit ho c'henvroiz ha mad ar barrez.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
18 Eost. Madeleine Gorréder, Archantel,	P. Bresquinier, C. Lemeur.	
19 — Gabriel-Marie Morel, bourg,	Gab. Gélébart, M.-A. Arzel.	
22 — Goulven-Marie Corolleur, Penfrat,	Goul. Corroleur, Marie Guéna.	
25 — Jean-Marie Guennéguès, Kelléron,	J.-M. Menguy, M. Guennéguès.	
28 — Joseph-Léon Maguerez, Archantel,	Paul Maguerez, Dés. Le Gall.	
29 — Tanguy Bossard, Lanourien,	J.-M. Allégot, Josèphe Bossard.	
6 Guengolo. Haudes Kermaidic, Lanhalès,	Yves Perchoc, M.-J. Kermaidic.	
19 Eost. Nicolle-Marie-Gabrielle Tardieu,	Am. de Kerros, G. de Raucourt.	

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

25 Eost. Marie-Françoise Habasque, Streat-Doun, 2 miz.

Laudate pueri.

MIZ HERE

Azalek ar miz-ma betek miz kerzu, an offeren vintin d'ar zul da 6 h. 1/2, an offeren bred da 9 h. 1/2.

Epad ar miz offeren ar chapeled da 7 h. nemet kart. E n'em ranna en tiez, evit ma teuio bembez, unan da nebeuta a bep ty d'an offeren-ze, da govez ha da gommunia.

Ar mammou a zigaso gantho ho bugale en oad da gommunia. Er giz-ze, oll dud ar barrez, braz ha bian o devezo a benn fin ar miz roet d'ho Eneou ar peoc'h hag an euruzded tanveat varlene epad ar Mission.

4. Guener kenta. An offeren hag ar gommunion a zigoll da 7 h. nemet kart. Ober ar gommunion evit goulenn dre galoun karantez Jesus, ma teuio an oll barrizionis da gommunia epad miz Rozera.

6. Pardoun braz ar Rozera. Dont da govez en derveziou araok ha d'ar zadorn da noz, evit ma c'hello gounid, ar muia tud pos-subl, an induljansou a eller da gaout en dervez-ze.

Heuill oll ar brosesion gant ar brassa evez hag o kanna meuleudi ar Verc'hez.

Ar re ne maint ket c'hoaz e breuriez ar Rozera ken karet gant hon tud coz, abalamour d'an induljansou niverus stag outhi, a raffe mad rei ho hano.

Er giz-ze, eb er sonjal, o devezo perz e frouez kant ha kant mil chapeled lavaret bembez gant kenvreudeur ar Rozera.

13. (**Mari, guerc'hez ha mam Doue**). Offeren ha gousperou Mari, mam Doue. Mam Doue a zo oll-c'halloudek var galoun he map divin : en em erbedi outhi gant fizians en-hon oll izommou.

A zo pedet da ober er zul-ze ho anter-heur adoration pe da lakaat re all en ho flas

11 heur. Jean-Marie Menguy, Kelléron, Job Menguy, Poullouarn, Hervé Guennéguès, Créac'horiou, Yves Conq, Traon.

11 h. 1/2. An autrou persoun, Jean Guennéguès, Kernézoc, François Jézéquel, Penfoul, Joseph Lescop, Bourg.

12 heur. Claude Lunven, Ty-Pri, Guillaume Lescop, Jean Godebert, Bourg, Joseph Foll, Langurru.

12 h. 1/2. André Uguen, Traon, Prigent Conq, Kervisinic, Jean Bossard, Lannourien, Vincent Le Borgne, Kerc'hoazoc.

1 heur. Guillaume Bossard, Penkéar, Victor Cadalen, Kelléret, Gabriel Trébaol, Kerguérioc, Jean-Marie Hamon, Kerc'hoazoc.

1 h. 1/2. Pierre Pailler, Lan-Goz, Yves Taloc, Kerlaguen, Goulven Godebert, Jean Brénéol, Kerzent.

20. **Purete ar Verc'hez**. Offeren ha gousperou purete ar Verc'hez. Evel ar Verc'hez, pep kristen a zo bugel da Zoue ha templ ar Spered-Santel, deuet da veva ennomp, abaoue deiz hor badiziant : evit ober honor da Zoue, bezomp pur a gorf, a spered, a volontez evel ar Verc'hez.

Er sul-ze, reunion bugale Mari, goude gousperou.

27. Eil zul varnugent goude ar Pantekost, offeren ar zul, gousperou sant Simon ha sant Jude.

31. Yun a vigil gouel an oll zent.

Soudarded yaouank

D'al lun 30 a vengolo da 6 h. 1/2 e vo offeren ar soudarded yaouank. Pedet int da govez ha da gommunia ha goude e teuint d'ar presbytal da guerc'het ar billet a ziskouezo int kristenien, hag e fell dezho kaout ar beleg er c'hlenvet hag en danger a varo hag eo o bolontez e vent anterret gant lidou santel an Ilis.

Skoliou

Offeren ar Spered-Santel evit bugale ar skoliou a vo lavaret d'al lun 7 a viz here da 7 h. nemet kart. Ar vugale a zigaso gantho kantikou evit kana. Ar gerent a raffe ive mad dont en dervez-ze, eun tamik stankoc'h d'an offeren.

Katekismou

Ar c'hatekismou evit ar vugale a goumans e sizun sul ar Rozera.

D'ar meurz da 4 h., d'ar vugale a rei o fask kenta solennel da viz ebrel kenta pe da viz ebrel er bloaz goude, da lavaret eo, d'ar vugale o devezo araok ar bloaz nevez dek pe nao bloaz.

D'ar memez heur katekismou d'ar vugale gant o eil hag o zrede pask.

D'ar iaou, da 8 h. 1/2, katekismou d'ar memez re ha d'ar re a zo er skol el leac'h all.

D'ar iaou c'hoaz da 3 h., katekismou d'ar vugale en oad da gommunia, da lavaret eo d'ar vugale o deuz 6, 7 ha 8 vloas.

D'ar zul, da 1 h. 1/4, katekismou d'ar re a zo gant ho fevare pask ha d'ar re zo er skol er parrezioù all.

Ar gonfirmation

Da viz ebrel pe viz mae kenta e vo ar gonfirmation en hor parrez. Evit ober ar pask kenta solennel e ranker beza bet dek vloaz araok ar bloaz nevez, mez evit beza konfirmet ne ranker kaout nemet nao bloaz araok ar bloaz nevez. Evit ar gonfirmation genta e vo ta eur bloaveziat muioc'h a vugale.

Poent eo ta d'ar gerent poania stard da zeski ho c'hatekismou d'ar vugale o devezo bet nao bloaz a benn ar bloaz nevez, kerkoulz a d'an oll bugale a euill ar c'hatekis en ilis.

Arabad e vanke hini d'ar skol gatekismou en deiz merket dezhan.

Kannadik miz guengolo en deuz kousket 30 lur. Bet evit sikour e baea, digant M. C., ugent real ; digant M. G. M., eiz real ; digant M. G., pevar guennec varnugent ; digant C. A., dek guennec ; digant R. S., daou venec.

Doue r'ho faeo !

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



KANNADIAK

PARREZ

LANDUNVEZ

An illustration of two men standing on either side of a large banner. The man on the left is dressed in a sailor's uniform, and the man on the right is wearing a hat and holding a staff. The banner contains text about a patron saint.

SANT GONVEL
PATRON BENNIGET
AR BARREZ
PEDIT EVIDOMP

An illustration of a church building with a tall, pointed steeple, situated behind a body of water. The church is the central focus of the background scene.

An Union Katolik e Quimper

S, 9, 10, 11 A VIZ GUENGOLO

Oll dud ar barrez, o deuz lennet e *Kannadik* miz kerzu diveza, penaos an Aotrou n'Escop en deuz gourc'hemenet evit mad ar Religion hag an Iliz, e ve great e peb parrez euz an Escopti, eun Union pe emgleo etre ar gatoliked, beleien ha tud fidel, evit crenfaat ar vuez christen etouez an dud, evit startaat ho feiz.

Evit rei dezho muioc'h a sklerijen, evit kendelc'hel gant al labour-ze, an Aotrou n'Escop en deuz galvet euz peb parrez, daou pe dri euz ar re zo en emgleo, d'en em assambli e Quimper, evit deski gwelloc'h c'hoaz petra zo da ober. Var dro 700 goaz, o deuz selaouet he vouez. En o zoues, edo deuz Landunvez, an aotrou mear ha tenzorien an Iliz. Ne ell nemet beza talvoudek braz evito beza bet e kerkoulz skol.

Ar c'hongrès zo padet tri dervez. D'ar zul d'abardaez, 8 a viz guengolo, e tigoraz dre eur brezegen great gant an Aotrou n'Escop en iliz katedral. Dre gomzou elavar, e tiskouezaz en devoa galvet ar gongressisted evit ma sikourint anezhan da ober en Escopti hag er parrezioù, ar pezh a ra Hon Tad Santel ar Pab en Iliz abez : diazeza pep tra var Jesus-Krist, hag evit al labour-ze, beleien ha kristenien, a dle diskoues ar memez tiz.

Epad an tri dervez n'euz ket kollet a amzer. Bemdez da 7 heur anter e veze lavaret an offeren evit goazet ar c'hongrès. Eur brezegen a veze great dezho ha da vare ar gommunion, ar gongressisted kazi oll a dostea euz an daol zantel.

Da 9 heur e kommanse ar c'honferansou beteg 11 heur, hag adarre da 2 heur beteg 5 heur. Pa veze lennet ar c'honferansou, pep unan a c'helle lavaret e c'her var ar pezh en deveze klevet, pe evit assanti, pe evit enebi.

Goude koan, da 8 heur, bodadek diveza beteg 10 heur.

An Union katolik er Parrezioù

An aotroun de la Villemarqué, deuz Quimperle, Costa de Beauregard, deuz Plouézoc'h, Le Roy, deuz Rosporden, Dubois, deuz Concarneau, de Guébriant, deuz Castel, ha Buleon, persoun katredal Guened, o deuz diskouezet mad ha sklear, petra eo Union ar gatoliked e pep parrez, e pep kanton, en Escopti a bez.

Mes, n'e ket aoualc'h sevel an Union. N'e ket diez lakat an hano var ar paper. Da c'houde eo ema al labour. Red eo delc'hel an emgleo en e zav. Ha penaos kementse ? O labourat sklear eo hag o poania.

Pa zear da ober eun tam labour, ma zeus c'hoant e zaffe var araok, e ranker lakat e penn al labour, eul labourer goueziek hag en deuz goud evit e vicher.

E penn Union ar parrezioù e vo lakeat ive an dud vella. Ober a

reint ar pezh a c'halved (comite). Dibaba eta evit ar c'homite, an dud a galoun, ac a labouro, a ielo var araok eb aoun ebet. Kemeret tud a feiz, a skouer vad. Lakat tud yaouank ha tud koz. An dud koz o deuz skiant prena hag a ell bleina ar re yaouank prest aliez da derri raktal kement a stourm outho.

Pe seurt labour a rei comite ar barrez ?

Red e vezo dezhan en em vodi bep miz, mez ne ket da fumi eur c'horniad eo, avad, na da eva eur banne asamblez ; bed e vezo da gomz euz ezomou ar barrez, da velet penaos dic'hri zienna ar guizioù fall, penaos skigna ar c'hazetennou mad, penaos harpa ar skolioù kristen, penaos en em gemeret evit deski katekismou d'ar vugale, penaos divoaza an dud euz an odivi, muntrer brassa an den, penaos miret euz ar prosesou sot, ha penaos kas da benn kant ha kant tro all talvoudek evit mad an ene hag ar c'horf.

Bep tri miz, prezidant ar c'homite a dle assambli ar re o deuz roet ho hano evit Union ar barrez, ha comz pe lakat comz dezho euz ar pezh en deuz great ar c'homite epad an tri miz diveza. Rei a vezo great ive da anaout, er reunionou ze, an traou tremenet, abaoue ar veach diveza er barrez, en Escopti, er Frans, er bed katolik. Comz a eller ive divar benn an doare da labourat gwelloc'h an douar, da gaout gwelloc'h tremp, gwelloc'h eost, divarbenn ar syndicajou, an assuransou evit ar chatal, eneb an tan goual, ha deuz meur a dra all. Goude pep prezegen, pep unan a ello rei e ali ha klask c'hoaz gwelloc'h.

Comite ar c'hanton

E penn peb kanton, e vezo ive eur c'homite, a vezo ennan ar re zo e Comite parrez ar c'hanton, ha tri deuz ar re zo e comiteou ar parrezioù. En em vodi a reint da nebeuta bep tri miz, ha tud peb parrez a lavaro ar pezh o deuz great epad an tri miz diveza, evit ma teskint evelse an eil parrez gant eben, petra vo ar guella da ober.

Etre oll gatoliked ar c'hanton e tle beza ive eun union, a vezo enni ar re oll zo en unioniou ar parrezioù.

Diou veach ar bloaz ec'h en em assablinter er c'hanton pe el leac'h merket, hag e studiint assamblez kement a vo talvoudek evit mad ar religion, hag evit mad an dud e kever traou ar bed-ma.

Er fin, bep bloaz, e vo galvet da Guimper, daou pe dri a bep parrez, evit Union an Escopti abez.

Ar retrejou kloz

Mes penaos delc'her ha kreski c'hoaz e kaloun an dud dibabet evit ar c'homiteou ar c'hoant da glask mad ar religion ? Netra par, eme an aotrou Lidou deuz Brest, eget ar retrejou kloz evit ober deuz eur c'hristen klouar eur c'hristen mad, deuz eur c'hristen mad, eur c'hristen parfet. Eur mission a zo eun dra mad kenan ; ar retrejou evel ma vezont great e Lesneven, Quimper, pe ar Salett, a zo talvoudusoc'h c'hoaz.

Comzou an aotrou Lidou a oe kavet mad. Setu perak an aotrou n'Escop, goude beza goulennet ali ar gongressisted, a zougas ar mennoz-man : Goazet ar c'homite a yelo, beb an amzer da eur retred hag a alio ar re all d'ober evel d'ho.

An odivi. — Ar Groaz-Venn

An aotronet Carret deuz Plougastel ha de Lamarzelle, senatour Guened, a reaz bep a gonferans eneb ar vesventi. N'euz netra, emezho, hag a raffe muioc'h a zrouk dre ar bed eget an odivi, an absinth hag an oll evachou crenv. Eur rivin int evit an tiegeziou, eur rivin evit urz vad ar vro, eur rivin evit ar furnez, eur rivin evit ar yec'hed.

Red eo ta poania evit distrei an dud deuz ar vesventi.

Evit-ze an aotrou n'Escop en deuz diskleriet e vezo savet en Escopti breuriez ar Groaz-Venn (hanvet evelse, abalamour ma vez roet d'ar re a laka ho hano enni eur groazik gant eur ruban guen).

Hon Tad santel ar Pap Pi X en deuz staget ouz ar Vreuriez kalz induljansou.

Petra c'houlenner digant ar re a laka ho hano er Vreuriez ? Chom eb eva marse banne odivi ebet, dilezel an absinth, ar rhum hag an oll liquoriou great gant alcool. Mes, breuriez ar Groaz-Venn, ne ziffen ket eva guin, chistr, bier, da lavaret eo, ar boessoniou yac'h hag a ell ober vad, ma ne effer ket re anezho.

Goulskoude ar boessoniou yac'ha eo : an dour hag al leaz.

Diez bras eo dont a benn euz ar re zo boazet da eva odivi. N'euz ket evelato da goll fizianz gantho, ha meur a hini a vez guelet o tigeri ho daoulagad pe o tilezel ar c'hiz diskiant da en em ampoezoni dre an odivi. Ar re-ze evel ar re ne evont james a odivi a lakaio ho hano e breuriez ar Groaz-Venn. Ha dreist oll ar vugale goude ho faskou, a c'helfe oll mont e breuriez ar Groaz-Venn hag en em voasa da chom eb kemeret boessoniou crenv.

Guir eo e kaver avichou kerent diskiant aoualc'h evit rei odivi da eva d'ho bugale yaouank. N'euz netra nozusoc'h d'ho yec'hed. Ma teu an odivi da drec'hi goad eur goas e kreiz e nerz, penaoz e c'helfe stomok eur bugel harpa ouz ar poezoun-ze.

Perak, a lavar ar gazetenn *Feiz ha Breiz*, rei odivi evit an disterra digarez ? Setu ama ar facteur o tont en ho ti, hag e kinnig digrez han dioc'htu eur banne odivi. Roit dezhan ha d'ar re a ra krevediou evidoc'h, daou vennek, a zo kalz guelloc'h.

Perak c'hoaz ar pennou tiegeziou, ne roffent ken guin pe jistr e leac'h odivi pa vez gantho derveziou braz ?

An dud a deuffe buhan da zilezel an odivi ma vije roet dezho guin ha chistr. An tadou a famill euz ar memez parrez a dlefe en em glevet evit chom hep rei odivi.

Rei e plas an odivi eur banne guin pe chistr.

Ma kendalc'her da vont, abenn eur pennad aman, ne vezo ket gellet mui ober eur c'hart-eur labour, eur grevidi heb kaout eur banne odivi. Ma fell deoch rei eun dra benag, roet-ta daou venneg, ha diskleriomp oll brezel d'an odivi. Ia, poaniomp pep hini en he garter, en he barrez, hag abenn neubeut bloaveziou e vezo meur a vil den e breuriez ar Groaz-Venn, hag e teur a benn da barea hor bro diouz klenved an odivi, klenved goasoc'h e unan eget an oll glenjejou all assamblez.

(Da genderc'hel).

Madou an Iliz

An aotrou n'Escop a zigaz deomp da sonj dre ar *Semaine Religieuse* penaos kement den a bren madou ar zant eb beza en em ententet gantho pe gant ar re zo karget da ober al labour-ze en e blaz, a gouez varnhan an eskummunugen. Ar memez tra a erru gant ar re a ra koummanant euz ar madou-ze digant ar re o deuz o frenet eb an aotre red. Ar fermourrien-ma a rank ive en em entent gant an aotrou n'Escop pe gant ar re a zalc'h e blaz. Hag o divije bet an aotre, ma ne zalc'hont ket d'ar pez o deuz promettet, ema an eskummunugen varnho abaoue gouel Micheal.

Ne ellont ken, nemet chench a raffent, reseo an absolven, nag ar gommunion, na beza anterret gant lidou santel an Iliz.

Ar soudarded yaouank

N'euz anezho er bloaz-ma nemet pemp en hor parrez. An dud yaouank all euz ho oah zo dija eat da vartolodet. O femp int bet beteg Lesnevén evit ar retred. Ar re o deuz heullet ar retred penn-da-benn, a zo distroet al laouenedigez o para var ho zal hag ar joa ar vrassa en ho c'haloun ker kountant oant.

Mes perak ne da ket ive d'ar retred-ze an oll vartolodet a dle beza savet er bloaz ? Netra a dra zur na raffe muioc'h a vad dezho. Kerent a zo, hag a ve lavaret eo guel gantho 15 lur en ho godel eget baradoz d'ho bugale.

Ar zoudarded yaouank zo deuet dissadorn, abars kimmiada, da la-kaat Jesus en o c'haloun dre eur gommunion zantel ha da bedi an Introun Varia a Vir Sikour da veilla varnho epad ho c'honje.

Setu ama hanoiou ar zoudardet yaouank hag hanoiou ar c'hearriou ma zeont enno

Guillaume Godebert, euz ar C'hastel, Guened, Artillerie ; François-Marie Héliès, euz Kernézoc, Guened, Artillerie ; Joseph Guennégues, euz Kermajeau, Lorient, linen ; Yves Lunven, euz Ty-Pri, Cherbourg, Infanterie coloniale ; Jean Morvan, euz Penfoul, Guingamp, linen

Kannadik ar barrez a vezo kasset dezho bep miz da di an aotrou Aumônier.

Aliou d'ar soudarded pe vartolodet a goez klanv ha d'ho c'herent

Al lezen a c'hourc'hemen klask d'eur zoudard pe da eur martolod ar beleg, pa ra, ar re-man, goulenn anezhan.

Setu perak ma vijent klanv pe voal lakeat er c'hazerniou, en hospitalioù pe var al listri, hon tud yaouank leun a feiz ha doujans Doue en o c'haloun, a en em lakai en tu da gaout ar beleg.

Penaos ha petra da ober ?

Da heb soudard ha martolod e vez roet pa bartiont, daou baper moulet, n'o deuz nemet o zina ha lakat ho numero hag ini ho regimant hag o c'homagnunez varnhezo : unan da jom gant ar soudard pe ar martolod, hag a stagint ebars en ho livret pe etouez ho dillad var stal

ar gambr pe al lestr; egile a roint d'ar beleg aumônier pe garget anezho, pe d'eur c'hamarad kristen, en devezo soursi da sikour he vignoun klanv da gaout ar beleg.

Ar gerent a ell ive kass eul lizer da golonel ho c'hraouadur m'ar deo soudard pe d'ho gapiten m'ar d'eo martolod evit o fedo da zigas ar beleg d'ho bugale ma vent voal glany pe voal gouliet.

Ar gerent a ell ive mont en hent da velet ho bugale klanv. Var an hent-houarn n'o deuz nemet anter bae da rei : tad ha mam, breudeur ha c'hoarezet, priejou, bugale. Var ar listri ne hacont nemet ar bederved, mes, ebken an tadou, har mammou, ar priejou, ar vugale.

Petra da ober evit beachi euz ar priz-ze ?

Da vont e tleont kaout da ziskouez da baotr an hent-houarn, eur certificat a berz medisin ar c'hlanvour, pe ebken an (dépêche) en deuz digasset kelou dezho eus he glenved, hag ouспен eur certificat digant mear ho farrez evit rei da anaout ho c'herentiaj gant ar c'hlanvour hag ho ezom a zikour da veachi.

D'an distro d'ar gear eo aoualc'h dezho kaout ar memez certificat medisin pe (dépêche); skrivet varnhan gant ar medisin : Bon pour le retour.

Den ebed, deuz Breiz, na soudard, na martolod, na kerent, n'e garfent mont euz ar bed-ma, eb sakramanchou ha pedennou an Ilis; greomp ta oll, guella ma chellimp evit kaout ar beleg a ro anezho.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

	PARROUN	MAEROUNEZ
13 Guengolo.	Rosalie-Marie Milin, Trémazan,	J.-M. Milin, Haudes Milin.
13 —	Jérôme-René Guéna, Troménéec,	Jean Guéna, M.-A. Magueur.
16 —	A.-F.-M. Talarmin, Arc'hantel,	E. Le Menn, Fr. Kerdévez.
16 —	Yves-Marie Pallier, Langoz,	Yves Rioual, Jeanne Pallier.
19 —	A.-M.-J. Fourn, Poukallac,	Fr. Fourn, M.-J. Kerbérénez.
22 —	Marie-Jeanne Trébaol, Bédiez-Vras,	Joseph Trébaol, Marie Le Ven.
24 —	Marie-Jeanne Cornen, Kerzent,	P. Cadalen, Philo. Cornen.
25 —	Pierre Trébaol, Arc'hantel,	Prosp. Le Dall, M.-J. Morvan.
25 —	A.-Jos.-M. Le Guen, Trémazan,	Fr. Pellen, Philo. Le Guen.
1 Here.	François Cadalen, Streat-Lann,	Hamon Fourn, Fr. Cadalen.
7 —	Jean Trébaol, Troménéec,	A.-C. Trébaol, Franç. Trébaol.
7 —	Isidore Trébaol, Troménéec,	Pierre Le Her, Jos. Guennégues.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

2 Here. Albert-Marie Kerros, Kergouan, ha Marie-Anne-Thérèse-Véronique Abalain, Arc'hantel.

Paier, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

22 Guengolo. Jean-Marie Le Dall, 82 bloaz, Arc'hantel.

De profundis.

MIZ DU

En dervechou arak gouel an Oll Zent, skriva servichou an Anaoun, pa deour d'an offeren ar chapeled. Koumans en dervechou-ze ive koves evit ne vo ket re a brez evit ar goueliou hag evit ma c'hello an oll ober eur gommunion evit an anaoun paour. Seul santelloc'h e vezimp, seul galloudekoc'h e ve hor pedennou var galoun an Aotrou Doue evit hon tud eat d'an anaoun. D'ar yaou 31 euz ar miz ha d'ar goueliou ne vo ket kovesseat a vugale. Ho digaz ta arak.

1. *Gouel an Oll Zent.* Offisou evel d'ar zul. Goude gousperou, prezegen ha gousperou an Anaoun. Kerkoulz hag ar Zent brema en Env, ni rank beva santel, ma fell deomp kaout hon loden Varadoz : nag a bed a vev ep sonjal en eternite ato dallet gant madou an douar ! Petra dal d'an den gounid ar bed oll ma goll he ene ?

2. *Gouel an Anaoun.* Offeren vintin da 6 h. 1/2, offeren var gan ha procession er vered da 9 h. : selaou mouez an anaoun o c'houlen diganeomp pedennou hag oberou mad.

3. *Gouel ar Relegou Santel.* Offeren ha gousperou ar gouel. Ar Zent a resusito gloriuz deiz ar Varn. Greomp ato ar vad; Doue a zo just ha ganthan pep hini a gav dioc'h ma ra.

10. *Dedi oll Ilizou Frans.* Offeren ha gousperou ar gouel. Delc'hel sonj eo bet konsakret hon iliz parrez da Zoue. Arabad eta ober en iliz netra enep Doue en eun ti zo dezhan.

A zo peded da ober en dervez-ze ho anter-heur adoration

11. heur. Vincent Codalen, Kelleret; François Fourn, Sant-Samson; François Brénéol, Kerzent; François Arzel, Hellen.

11 h. 1/2. An aotrou Kuré, Jean-Marie Pondaven; Job Godebert, bourg; François Jézéquel.

12 heur. An aotrou Persoun, François Ollivier; Jean Floc'h, bourg; Eugène Foll, Langurru.

12 h. 1/2. Hervé Guéna, Kelléron; Jean-François Corolleur, Penfrat; Jean-Marie Uguen, Traon; François Lunven, Ty-Pri.

1 heur. Yves Taloc, Navant; Jean-Marie Colin, Kervéon; Paul Minguy, Poullouarn; Auguste Jaouen, Kerincuff.

1 h. 1/2. Bernard Jaouen, Cave; Jean Autret, Arc'hantel; Jean-Marie Le Gall, Penfoul; Gabriel Gélébart, Kergastel.

17. Eizved dedi an Ilisou: Offeren ar gouel; gousperou dedi Ilisou Sant Per ha Sant Paol. Reunion bugale Mari goude gousperou.

24. Patronaj ar Verc'hez gloriuz-Vari. Offeren ha gousperou ar gouel. « Grit, o Doue, dre intercession Mari bepred guerc'hez, ma vezimp diouallet deuz enkreziou ar bed-ma, ha ma tanvaimp levenez peur-baduz ar Baradoz.


Kannadik miz here a zo koustet 41 lur. Bet evithan digant: M. A. G. ha M. C., pep a skoed.

Le gérant: J.-M. LE ROUX.



KANNADIAK

PARREZ



An Unjon Katolik e Quimper

8, 9, 10, 11 A VIZ GUENGOLO

EIL PENNAD

Emgleo an tadou a famil

Perak, eme, an Aotrou Barthes, offiser a vor euz Brest, eo bet savet emgleo an tadou a famil. Perak e zeus brema eun emgleo e peb parrez, unanet gant emgleo he c'hanton, hag oum-ma gant emgleo an Escopti, hag oum-nez gant emgleo Paris, penn an oll emgleoioù? Evit ma c'hello essoc'h an oll dadou a famil, an eil crog he dourn egile, enebi ouz al leoriou kondaonet gant an Iskipien, ma vijent roet da zeski d'ho bugale e skolioù ar c'houarnamant. Ar vad o deuz great er vro, emgleoioù an tadou a famil a zo bras. Deuet int a benn, e meur a leac'h, da lakaat chench al leoriou difeiz ha gaouiad a roet d'ar vugale. Ha pa n'hellent ket dont a benn euz o zaol, e lakeent sevel skolioù kristen, pe e sikourent ar vugale da vont d'ar skol gristen tosta d'ho farrez.

Ne ankounac'hait james, kerent kristen, o peuz ar guir da velet petra vez desket d'ho pugale er skol, o peuz an dever stris da viret na ve lavaret dezho netra a eneb ar religion gristen. Ma o peuz da en em glem var ar poent-ze, kassit ho mennoziou betek emgleo an tadou a famil, ho c'harpo hag a gemero ho affer da zibuna. Sentit ouz ho koustians, diffennit Eneou ho pugale, setu lezen Doue ha dever ar guir gristen.

Ra zavo an oll gristenien var ho zreid, eme c'hoaz an aotrou Hugot-Derville, député Quimper, evit diffen ho skolioù, ha goulen eul lezen nevez, evel zo dija e Bro-Zaos, er Belgique, er Holland, evit ma vezo paet mistri ha mestrezed ar skolioù libr, kerkouls ha mistri ha mestrezed ar skolioù publik gant arc'hant ar vro. Oll dud ar vro a bae an taillou. Perak neuze o defe lod skol evit netra d'ho bugale hag e rankfe ar re all paea evit ho re, peguir oar libr dre al lezen da choaz ar skol a garer.

Dija euz eul lezen hag a bermet e ve roet eur sikour benag d'ar vugale baour evit kaout leoriou, dillad, bouteier, bara, n'euz forz e pe skol e vezont. Neuze ta eo ervez al lealdet, o defe bugale ar skolioù kristen perz er zikour-ze, kerkoulz hag ar vugale all, peguir an arc'hant a vez votet evit-ze gant ar barrez, a deu euz godel an oll. An oll meared hag ar c'honseillou kristen, a dle ta rei an dourn evit ma vo ingalet, ervez al lealdet, ar sikourou-ze etre oll bugale baour ar skolioù, heb derc'hel kount, pe ema ar vugale baour-ze e skol ar c'houarnamant, pe er skol gristen. Da bep hini he lod, ervez an niver a vugale paour a zo enno.

An dud a zilez ar gear evit mont da labourat pell euz ho bro

An aotrou de Saint-Simon euz parrez Sant-Goazek, a ziskouezas, pegen truezus e vez ar peurlies, stad an dud a zilez ho bro, evit mont da glask labour er mengleuzioù var dro Angers, pe a ia da ober ar foen pe an eost var dro Chartres, Versaill, pe Paris, pe da labourat e keariou bras all. Kredi a reont kaout brassoc'h gounidegez, ha padal ne gavont alies nemet paourentez, mil miser, hag ar pez a zo vouassoc'h, an darn vuia a goll ho Ene. Hag epad an amzer-ze, ho zud a zuo gant an naoun er gear.

Kalz talvoudekoc'h e ve, evito, chom er vro. Ne ket labour, na bara, nag aman da lakaat varnhan a vank e Breiz.

Da viana, ma fell dezho a grenn divroa, ra deuint araok da c'houlen euzul digant ho beleien. Ar re-ma a skrivo d'an dud vad a zo en emgleoioù kristen savet e peb bro evit plasi an estranjourien. Mar divroont gant ho famil a bez, e vezo klasket dezho araok eul lojeiz d'eread, ha labour er plasou ma c'hellint savetei ho Eneou. Mar deont o-unan, e vezint ive plaset el leac'h ma c'hellint ober ho deverioù a gristen. Kemeret e vezo ive soursi euz ho gounidegez ha digaset e vezint d'o zud ma o deuz izom.

Plac'hezad yaouank

Evit ar merc'hed yaouank a ia da glask plas da Paris, pe d'ar c'heariou bras, pe d'ar porziou mor, ho stad, eme, an Introu de Saint-Senne, renerez e Paris, ar Vreurie katolik savet evit diouall, difen pa plasi mad ar plac'hed yaouank, a zo c'hoaz kalz truezusoc'h. Meur a hini en o zouez, a gouez en dissurch.

Setu ama, an aliou a roaz an Introu-ze d'ar plac'hed yaouank. Ar guella evitho, eo chom er gear, klask labour en ho bro. Ma rannkont divroa. Deski araok eun nebeut benag griat, ampeza, ober ar gegin. Anez-ze e vo diez dezho plijout d'ho mestrezet pa kout plasou mad

Pa sonj ta eur plac'h yaouank divroa, e tle goulen ali digant ar re a c'hell rei dezi euzul vad, mont da gaout he beleien pe an hini a vije karget en he farrez, da skriva da renerez ar Vreurie katolik skignet en oll broioù evit diffen, sikour ha plasi ar plac'hed yaouank. An introuezet-ze a glasko araok eviti eur plas mad ha mistri kristen, pe ma ne ket c'hoas kavet ar plas, e digemero en eun ti santel, e peleac'h e c'hello gortoz eb danjer ma vo kavet dezhi labour. Goude ne dilezint ket, d'ar zul e c'hello dont do guelet, ha ma n'en em blijont ket er plas klasket evito, e vezint adarre digemeret en ti savet evit o diouall da c'hedal kaout eur plas all. Prest e vior ive do zikour da zistrei d'ho bro, ma krog enno klenvet ar gear.

Ar gerent ta, euz Landunvez, o deuz c'hoant e chomche ho merc'hed yaouank kristenezed mad, pa zivroont, no deuz nemed dont da gaout ho beleien pe an dimezel Marie, kenta mestrez ar skol gristen, choazet er barrez, evit skriva d'an Introuezet a zo er c'heariou braz e penn ar Vreurie Katolik savet evit difen, sikour ha plasi ar merc'hed yaouank. Ar re-ma a raffe mad chom er gear ken na vezo kavet dezo eur plas.

Sellet ha studia mad an affich lakeat var d'or an Ilis.

An dud a volonteze vad a en em garg da ober katekismou

An Introu de Penfentenyo euz Quimper a gomzaz euz an dud a volonteze vad a ra e parrezioù an Escopti, katekismou d'ar vugale. An niver, anezho, zo var dro pevar mil. Nag an dud-ze a ra eun dra dudiuze dirak daoulagad Doue, rag petra zo kaeroc'h ha talvoudusoc'h eget deski d'ar vugale hent ar Baradoz.

A dra zur, eo er gear da genta, e tle beza great katekismou d'ar vugale vian, a zesko var barlen ho mamm ho fedennou, ho c'hredennou. Morse, ar vammou gristen n'eo bet strisoc'h ho dever eget hirio. Abred e tleont en em lakaat gant ho bugale evit ma tiskenno doun en ho c'halonou guirioneziou ar feiz. Ar vugale a dle hirio kommunia evel ma ho deuz skiant. Mes, pe seurt kominunion a reint, ma na deu ket ho c'herent da zeski dezho, an nebeudik katekismou a zo red evit-ze.

Penaos e vouezint, ema dindan spesou an tam bara guen ha round a velont, etre bizied ar beleg: korf, goad. Ene ha divinite Hor Zalver Jesus-Krist, ma ne vez ket desket dezho? Penaos e vouezint e resevont dre ar gommunion Jesus-Krist, an eil fersoun euz an dreinded, ma na ouzont ket petra eo; myster an dreinded, petra eo Jesus-Krist?

Ha goulskoude, siouas, nag a gerent ne gomprenont ket, eo evito ar c'henta deuz ho deverioù, deski katekismou d'ho bugale, pe a zigarez n'int ket goest d'en ober.

Evet bugale an tadou hag ar mammou-ze, eo e tle beza kavet tud a volonteze vad evit ober katekismou.

Ra veillo, da viana, ar gerent-ze, var ho bugale, evit ma zeint bembez ha d'an heur merket da di an dud madelezus a en em garg da zeski dezho hent an Envi.

Gout a ran, penaos tadou ha mammou a lavar: Va merc'h a zo er skol gristen. Desket e vezho dezhi katekismou. Kement-se a zo gwir, ma na vank ket d'ar skol. Mes, pegement e vije essoc'h d'ar mestrezed ha d'ho merc'h, mo pije e sikouret da zeski eun tam e c'hentel er gear.

Lod all, a lavar, e skol an Ilis e vez hor bugale... Mes, da betra e servicho dezho beza eno azeset var eur skaon, ma n'o deuz ket araok sellet ouz ar gentel a ioa da zeski. Epad ma vezho ar vugale all o tibuna ar peza ouzont, hag o selaou, gant evez ha joa, ar beleg a boagn da ober dezho kompren gant ho spered, ar c'homsou o deuz lavaret gant o zeod, ar re n'o deuz ket sellet ouz ho c'hentel, ne reont nemet inoui digeri ho ginou, pe c'hoari. Netra souezus, n'ouzomp ket deuz petra e kaozer, hag e zeont er meaz euz an Ilis ken azen evel mint deuet ebars.

Evel a ouzor oll, dre ar C'hannadik, peguir e vez, beh miz, kasset da gement ti a zo er barrez, hag evel ma zo bed lavaret er gador, an aotrou n'Escop a gonfirmo e miz ebrel pe vae kenta, bugale ar barrez, o devezo bed nao bloaz d'ar bloavez nevez. Mes, dalc'homp sonj penaos an aotrou n'Escop ne rei ar gonfirmasion, nemet d'ar re a vouezo ho c'hatekismou, ha n'o devezo ket market d'ar c'hatekiz.

Gouel an oll zent ha gouel an anaoun

Epad an daou c'houel, an Iliz a zo bet leun chek evit an oll offisou. Mes, ar peza zo bet talvoudeka evit an Eneou, eo an niver braz a gommunionou a zo bet great. Koumprenet o peuz penaos, an aden guella, da lakaat er galoun, evit beza ive eur zant, eo ar gommunion, ervez komzou hor Zalver e unan: an neb, emezhan, a zebr va c'horf hag a ev va goad, en deuz ar vuez eternal, pe m'ar de guelloc'h ganeoc'h a vezo Sant.

Sonjet o peuz c'hoaz penaos ho pedennou, unanet gant re an Iliz dre ar servichou o peus lakeat evit ho tud eat d'an Anaoun, a viche sur selaouet gant Doue, mar gelchac'h diskouez dezhan Jesuse vap, diskenent en ho kaloun dre ar gommunion hag o pedi o unan ganeoc'h.

Ar c'hoant da veza sent hag an ioul da zikour surroc'h Eneou ar purgator, o deuz digaset ar barrez a bez da zaoulina euz an daol zantel epad miz ar Rozera hag ar gouelioù.

COMITÉ EMGLEO KATOLIKED AR BARREZ

Emgleo katoliked Landunvez e devoa dija bet diou reunion, bet oant ive eur vech e reunion ar c'hanton. Mes ar c'homite a dle aozal labour evit reunion ar barrez a bez, n'oa ket c'hoaz great. Setu perak, an aotrou persoun a bedas eur vanden vad a voazet da zont d'ar presbytal d'ar zul 10 a viz du, evit choaz assamblez ganthan ar re a vije er c'homite.

Goude ar beden great var an daoulin, hag eun displega berr deuz an eil goulou euz ar c'hatekismou, petra eo eur c'hristen mad, an aotrou persoun a lavaras ar peza ioa bet dija merket e *Kannadik* miz du: « Comite emgleo katoliked ar barrez ne vo ket great evit kaout honorioù, mes, evit labourat a unan gant he beleien evit mad ar relijion, gloar Doue, silvidigez ar barrez. Alies, e ranko en n'em dieza evit dont bep miz d'ar reunion d'an heur merket, evit mont d'ar c'hanton teir guech ar bloas ha da Guemper eur vech. Abalamour da ze e ranko beza great, gant ar voazet, a c'halv an aotrou n'Eskob e unan (l'élite des hommes de la paroisse). Daou dra a ranker da gaout dreist oll e voazet ar c'homite: 1° eur feiz crenv, o dougo da rei e peb leac'h skouer vad, da zont an aliessa possubl, nemet klanv e ver, d'an offeren bred ha d'ar gousperou d'ho farrez. da zaoulina meur a veach ar bloaz ouz an daol santel, da veza prest da rei an dourn d'an oll oberou mad pe a zevosion a zo pe a vezo savet er barrez, da non pas chom reir da droidella en tavernioù; 2° ho c'halonnou a ranko beza bero a garantez Doue, hag ar garantez-ze a labourint da allumi e kalonou ho c'henvroiz evit ma reint penn-da-benn ho deverioù a gatoliked. »

Goude beza poezet ar c'homizou-ze, ar voazet bodet en dro d'an aotrou persoun ho deuz dibabet 17 goaz a gavent goest da ober al labour zantel goulenet digantho.

Evit ma reint essoc'h ar gefridi kaer fichet enno int bet dibabet eun tam a bep karter eus ar barrez.

Ractal, eo bet roet dezho al labour o deuz da ober a benn ar reunion genta, merket evit 1 h. 1/2 just, d'ar zul kenta a viz kerzu. Er giz-ze, a re a vo libr, ar c'hello mont da 2 heur d'ar rozera, evit lakaat dindan skoazel ar Verc'hez, al labour founuz great epad an anter-heur mint bet bodet en dro d'ho beleien. Evel n'euz ket c'hoaz assant ar re n'edont ket er reunion, ne vo ket roet, hirio an hanonioù.

Ra vezo meulet Doue.

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar guella renk

Klas kenta.	{ 1 Celine Le Dall. 2 Joseph Arzel.	Eil rummad.	{ 1 Gabrielle Fourn. 2 Louise Nédélec. 3 Marie Le Duff. 4 Anne-Marie Brénéol. 5 Marie Forest. 6 Françoise Le Guen. 7 Augustine Talarmin. 8 Catherine Talarmin.
Kenta rummad.			
Eil rummad.	{ 1 Marie Brénéol. 2 Marie-Anne Cadalen. 3 Germaine Drogou. 4 Joséphine Cong. 5 Euphrasie Maguérés.	Eil rummad.	{ 1 Marie Anne Guéna. 2 Françoise Pondaven. 3 Marie Jaoueu. 4 Yvonne Magueur. 5 Marie Yvonne Perchoc. 6 Louise Eliès. 7 Marie Cadalen. 8 Héléne Bizien. 9 Rosalie Eliès.
Trede rummad.			
Trede rummad.	{ 1 Marie Vaillant. 2 Joseph Kerros. 3 Pauline Morvan. 4 Joséphine Guéna.	Trede klas.	{ 1 Marie Anne Guéna. 2 Françoise Pondaven. 3 Marie Jaoueu. 4 Yvonne Magueur. 5 Marie Yvonne Perchoc. 6 Louise Eliès. 7 Marie Cadalen. 8 Héléne Bizien. 9 Rosalie Eliès.
Kenta rummad.			
Eil klas.	{ 1 Rosalie Croguennoc. 2 Victoire Guizio. 3 Marie-Anne Talarmin. 4 Pauline Cong. 5 Marie Squibon. 6 Désirée Maguérés. 7 Eugénie Morel. 8 Françoise Sylvestre. 9 Joséphine Lescop.	Eil rummad.	{ 1 François Jaouen. 2 François Morel. 3 Noélie Lesvenan. 4 Madeleine Jarnic. 5 Françoise Eliès.
Kenta rummad.			

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

	PAEROUN	MAEROUNEZ
19 Here. J.-Ernestine Gouzien, bourg.	Ernest Champion.	Jeanne Bellec.
12 — Almaise Jeanne Gouzien, bourg.	Jean Floch.	Almaise Buzaré.
21 — François-Marie Jarnic, Kerzent.	François Fourn.	M.-A. Prigent.
3 Du. Hervé Pellen, Kerzent.	Hervé Pellen.	Françoise Jaouen.
4 — Annette-Marie Provost, Curullou.	Claude Roué.	Annette Mérien.
7 — Marie Godebert, Castel.	François Jaouen.	Marie Godebert.

SAKRAMANT AR BRIDEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

22 Here. Joseph Cloatre, bourg, ha Marie-Anne Cloatre, Langurru.
28 — Jean-Marie Quéré, Archantel, ha Marie-Jeanne Allégot, Gorrékear.
5 Du. Guillaume Dagorn, Guitalméze, ha Marie-Renée Breterch, Kerzent.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal deiz ar varn e goasket ar groaz :

Bugel Perchoc, 2 heur, Kérélioc.

Laudate pueri.

MIZ KERZU

1. Sul kenta an Asvent Hiviziken an offeren genta da 7 h., an offeren bred, da 10 h., betek gouel ar chandelour. Offeren ha gousperou ar zul Er zul-ze e vo kanet ar *Veni Creator* araok an offeren bred evit goulenn ma vo lakeat Michel le Nobletz e renk an dud eurus. An dud fidel zo pedet da ober eur gommunion er memez intansion.

Tremen an Asvent evel ma c'houlenn an Iliz o skuba hon Ene euz he oll fec'hejou evit ma kavo Jesus an hent koumpezet da zont enni deiz Nedelek.

3. Gouel sant Frances Xavier, patroun breuriez ar feiz. Indulgans plener da c'hounit epad an eisvet d'ar re a zo er vreuriez.

Digas ar c'henta aluzen breuriez ar feiz hag ar sainte Enfance. Aluzen ebet ne dall keit hag aluzen breuriez ar feiz. Mad, rouez eo er barrez, an dud vraz ne c'helfent ket kemeret eur guennek ar sizun var ho flijaduriou, var ho c'hoariou, var ho banne, var ho butun evit sikour digeri d'or ar Baradoz d'ar bayanet paour.

Rouez eo er barrez, ar vugale ne c'helfent ket kemeret eur guennek ar miz, var ar bonboniou a laka ho dent da vreina evit lakat var hent an Env ar vugale c'hoaz diyadez.

Evit ober an diou aluzen, ne vank nemet eun tam bolontez vad, eun tam anaoudegez e kever Doue en deuz great deomp genel en eur vro gristen.

6. Guener kenta ar miz. Offeren ar galoun sakr pe bennoz ar sakramant da 7 h. nemet kart. Ober ar gommunion a zigoll evit konsoli kaloun Jesus, euz ingrateri an dud, o deuz eun tam peadra, ha ne voezont ket trugarekât Doue da veza great dezho genel en eur vro gristen, en eur rei ho aluzen evit breuriez ar feiz.

8. Eil sul an Asvent. Offeren ha gousperou ar Verc'hez consevet heb pec'het. Offeren vintin er Bourg da 7 h. Offeren bred Kerzent da 10 h. Ne jomo ket kalonnou ar yaouankis dinam evel ini ar Verc'hez, mar deomp da c'haloupat epad an noz var digarez bella ha pell deus ho c'harter.

15. Trede sul an Asvent, offeren ha gousperou sant Corentin, patroun an Escopti. Pedi evit an aotrou n'escop a zalc'h hirio he blas.

18, 20 ha 21 eus ar miz, yun ha vijil ar pevare amzer.

22. Pevare sul euz an Asvent, offeren ha gousperou ar zul.

24. Yun ha vijil Nedelec.

25. Gouel Nedelec, offis an noz a goummanso da 11 h. 1/2. An offerennou plean araok an offeren bred, a goummanso da 9 h. 1/4. An davarerien ne roint ket da eva hag a brenno ho d'or epad an teir offeren. Pa ne vo ken a belgent, e vizint re zivezad da glemm. Jesus o tisken e kraou Bethleem evit or savetei, ha c'houlenn diganeomp eur plas tomoc'h en or c'haloun. Evit ma c'hello an oll kommunia d'an Nedelek, koumans kovs azalek ar zul araok. E noz Nedelek, ne vo ket koveseat a vugale.


26. Offeren ha gousperou sant Stéphan. En dervez-se, evel kustum, e ve kemeret arc'hant ar beden-zul hag ar c'hadoriou. Evit ne vo ket a fazi, peb hini a zigaso gantho numero ho gadoriou. An neb a garo a reglo araok ar bres.

29. Sul varlerc'h Nedelek. Offeren sant Thomas, merzer. Eil gousperou Nedelek betek capitul, ha goude, eil gousperou eur merzer.

Bet evit sikour paea *Kannadik* miz du digant F. M., eur skoued; M. A. F. ha C. G., peb a bevar real; G. H., dek guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant: J.-M. LE ROUX.



Bloavez mad

D'he oll lennerien, coz ha yaouank, paour ha pinvidik, ha dreist oll d'ar zelatourezed en ingal bep miz gant kement a boan e peb ti, ar *C'hannadik*, mignoun tener peb den er barrez, a lavar a greiz kaloun, eur bloavez mad, Ia, ra blijo da Zoue, ha d'an Introun Varia a Guerzent, patrounez karet Landunvez, rei da bep den er barrez, iec'hed hag eürused en douar-ma, ha baradoz er bed all, ra blijo dezho skuill var bep hini oll vadou ar c'horf hag oll vadou an Ene.

Goulskoude skigna madou an Ene ar re dalvoudussa, a galz, eo a glask araok peb tra ar *C'hannadik*. Goud a car mad, n'euz na peoc'h, nag eürusted guirion, evit an Ene ne dec'h ket euz ar pec'hed marvel ha ne zalc'h ket da oll gourc'hemennou Doue ha re an Iliz. Rak spountet oll e vez an Ene-ze, o sonjal, e kerz gant hent an Ifern, pa zeo he dever kemeret hent ar Baradoz.

Er c'hontrol, an Ene neat a bec'hed marvel hag a vev e stad a c'hraz, e deuz ar c'henta euz an oll madou. An Ene zantel-ze, ne vezo ket re e soursi, pe e devezo var an douar-ma, buez hirr pe verr, danvez braz pe boan he divreac'h ebken evit gounit he bara, iec'hed crenv pe dister. Tremen e doare vad, ar bloaveziou a vo roet dezhi, ren eur vuez talvoudek evit an Env, setu petra glasko.

Peguir, emezhi, e ia ker buhan diganhen an eil blavez goude egile euz va buez, ar pez a zere d'in, eo ober euz peb bloaz an implij dleet, lakaat da dalvezout evit va silvidigez, peb dervez, peb heur, peb minut. Neuze an termen a c'hell dont, ne vouelin da netra, neuze ar maro a c'hell dont, ne laero netra diganhen. Gant an amzer tremenet ervez Doue, ha lakeat da ober ar mad, em bezo bet a oualc'h, gant va buez implijet e servich Doue, em bezo gounezet ar baradoz.

Mez, ma reket da genta ar *C'hannadik*, d'he lennerien, ober an oberou a gas d'an Env, e c'houlen ive evitho ho bara pemdeziek ha iec'hed d'en drebi ha ma teuo Doue da skuill he vennoz var ho labouriou. An darn vuia anezho a zo labourerien douar pe besketerien, a rank poania kalz evit gounit ho boued hag ini ho zud ; ho c'horf a vez aliez skouiz maro ; mad, ra deuo an Aotrou Doue da rei dezho atao nerz-kaloun ha levenez, evit ne vo morse re bouner ar zamm.

Ha brema, peguir e za ar *C'hannadik* betek kement tud a zo eat euz ar barrez d'ar broiou all, pe evit gounit ho bara, pe evit pedi ha labourat e kouent, pe evit diffen ho bro, evel martolod pe soudard, e pedo ive. Doue, da vianaat ar boan a zantont o veva pell euz ar gear, ha do dougen da ober e peb leac'h, heb mez, an deveriou a gristen, o c'hasso d'ar Baradoz.

Ar bara beniget

En amzer genta euz an Iliz, an oll gristenien a gommunie d'ar zul, epad an offeren. Netra souezus, e vije neuze etrezho ar garantez an tenera, ha no diviche nemet eur memez kaloun hag eur memez bolontez, hag e vije peb tra boutin etrezho. Guelit ta, a lavare ar bayaned, sebezet oll, pegement ec'h en em gar ar gristenien, prest int atao da rei skor an eil d'egile, en ho oll ezommou.

Pa deuz re niverus ar gristenien evit kommunia oll d'ar zul epad an offeren, e veze roet dezho goulskoude ar bara beniget, evit diskouez dezho oant oll breudeur, o trebi euz ar memez bara. Ar c'hiz vad-ze a gendalch en hor bro.

Pa gemeromp hon tam bara beniget, kassomp araok hon dourn d'hor ginou, e memor euz ar poch a roe guechal, goude an *Agnus Dei*, ar belek d'ar gristenien hag ar gristenien an eil d'egile hag a verke ar guir garantez a dle beza etre diskibien Jesus-Krist.

Dalc'homp, mar gellomp, hon tam bara beniget da zrebi pa gommuni ar beleg, hag ouz en lakaat en hor ginou, sonjomp pegen eüruz e vichemp bet m'hon dije gellet kommunia ha drebi hag eva, evel ar belek, Korf ha Goad Jezuz-Krist.

Greomp ive sin ar groaz araok drebi hor bara beniget, ha sonjomp penaoz ma ra vad d'hor c'horf ha d'hon Ene, e teu dezhan nerz da ober-ze, dre veritou Jesus maro var ar groaz.

Epad meur a gant vloaz, ar belek a lavare an offeren, a roe e-unan ar bara beniget. Hirio ar voazet a ro ar bara beniget, a dle sonjal e reont eun dra zantel ha talvoudek kenan dirak Doue.

Derc'hel a reont plas ar belek hag er sikour a reont da gas beteg kement hini a zo en offeren, ar grasou kaer stag ouz ar bara a ingalont. Ouspen dre an aluzennou a zastumont, bep sul gant kement a aked, e sikouront kaerat ti an Aotrou Doue, ho zad, pehini zo eun Env, hag a voezo o faea eus ho foan, e kaerat ive ho c'hurunen er Baradoz.

Joa a rei d'ar fabriquet zo bet o ingala ar bara beniget en daou vloaz varnugent diveza, guelet ho hano var ar *C'hannadik* ha klevet pe seurt soum o devoa destumet.

Goulskoude tout ne ket gounid evit an Ilis rak rankout a reas paea divar an arc'hant-ze, ar bara hag ar c'houign e vez roet en diou zul kenta ar bloaz.

Bloaveziou	FABRIQUET	Soum destumet
1890	Hervé Guéna, François Trébaol	459 lur.
1891	François Mingant, François Cloatre.....	514
1892	Michel Cadalen, Théophile Jaouen.....	526
1893	Jean Forest, Yves Kervran.....	515
1894	Claude Cloatre, Jean-Marie Cadour	571
1895	François Foll, Jean-Marie Fourn	507
1896	Guillaume Bossard, Yves Provost.....	548
1897	Gilles Guenneguès, René Cloatre	520
1898	Jean-Marie Forest, Joseph Guiziou.....	490

Bloaveziou	FABRIQUET	Soum destumet
1899	Louis Guillerm, Tanguy Allégot.....	545
1900	Jacques Foll, Yves Jaouen.....	563
1901	Guillaume Talarvein, Jean Taloc.....	578
1902	Prigent Conq, François Magueur.....	540
1903	Hervé Guennegues, Pierre Hélies.....	576
1904	Sébastien Trébaol, Prigent Autret.....	504
1905	Jérôme Guena, Jean-Marie Allégot.....	539
1906	Jean Provost, Yves Mingant.....	530
1907	Joseph Magueur, Yves Le Ven.....	513
1908	Jean Bossard, Hamon Kerros.....	465
1909	Gabriel Pérès, Victor Perchoc.....	501
1910	Jean Cornen, Victor Cadalen.....	485
1911	Engène Magueur, Yves Taloc.....	460
1912	Goulven Habasque, Jean-Marie Foll. Ar re ma o devezo dreist 500 lur, peguir o deuz destumet evit an nao miz kenta 410 lur.	

Evel er guelomp, an oll fabriquet a v'irit meuleudi evit ar boan a lakeont da glask mad an Iliz. Ma vez eur bloavez nebeutoc'h eget en eur bloavez all, kement-se ne ket dre ho faot eo ; mez abalamour ma vez bet amzer fall, sulveziou a vez, ha dre eno nebeutoc'h a dud en offeren bred, pe abalamour c'hoaz, ne vez ket bet kement a zervi-chou er bloaz-ze.

Sant Gonvel a c'houlenn evitho oll, bennoz puilla Doue.

Eured

An 19 a viz du, e timezas Marie-Yvonne Floc'h, plac'h yaouank euz ar bourg, e devoa ken aliez lezet a gostez he flijadur hag ar pardouniou evit chom en he farrez da gana meuleudi Doue en offeren-bred hag er gousperou.

Doue en deuz he faet, o rei dezhi da bried, eun den yaouank, a zo ive he blijadur kana meuleudi Doue, Nicolas Boucher, kaner braz iliz Lambezellec. Araok ho dimezi, an aotrou Floc'h, belek skolaer e Recouvrens-Brest, en deuz great eur brezegen euz ar re gaera. N'ellan skriva ama nemet eun tanva berr euz he gomzou :

« Mar deuz, emezhan, eun deiz kaer hag a gount en ho puez, eo hini ho eured eo. Daoulinet dirag an aoter, e c'harz treid Jesus, dirak ho kerent hag ho mignounet bodet laouen en dro d'eoc'h, e zit da unani ho puezioù evit atao.

» Bremaik an Iliz ho Mam, o pedo da lavaret eur ger, eur ger berr, mez nerzus, rak kelc'ha rei ho puez gant eur c'helc'h a ne c'hello beza torret nemet gant ar maro.

Goude m'ho pezhio roet oc'h assant, e rooc'h ho tourn deou an eil d'egile, evit diskouez d'an oll oc'h unanet evit atao. Ar belek a zavo neuze he vouez evit diskleria en hano Doue eo siellet en Eny an dimezi great etrezoc'h var an douar.

Ar voalen beniget a lakai ho pried var ho pezh, a vezo, va c'hoar ger, skeuden ar jaden a garantez o liammo epad ho

puez. Ho pried ha c'houi a vevo er mevez ti, a zrebo ouz ar mevez taol, n'ho pezhio netra kuzet an eil evit egile, pa vezo unan er joa pe en daelou, egile a vezo ive. Assamblez e labouroc'h, assamblez e pedoc'h, assamblez e zeoc'h aliez da zaoulina euz an daol zantel, ha ma plij da Zoue fichout ennoc'h ealigou da zevel, assamblez e hentoc'h anez'ho var hent ar Baradoz.

E peleac'h e kavoc'h nerz evit-ze ? E Sakramant ar briedelez ! Ar briedelez instituet gant Doue pa unanaz e Baradoz an douar Adam hag Eva, a zo bet savet gant hor Zalver Jesus, da renk a Zakramant ; hag abalamour da-ze, en deuz c'hoaz muioc'h a nerz evit tenna var ar priedjou ar grasou a zere ouz ho stad. Divar ben ar Zakramant-ze, an abostol sant Paol en deuz lavaret, oa eur Zakramant vraz abalamour ma verk union Jesus-Krist gant he Iliz. Hogen an Iliz a zent euz Jesus-Krist en eur ober ar pezh en deuz gourc'hemennet dezhi, evelse ar vaouez a dle senti ouz he goaz ; Jesus-Krist a garo e Iliz betek fin ar bed, evelse ar goaz a dle ive karet e vaouez betek fin he vuez.

» Va c'hoar ger, savet gant eun tad hag eur vam gristen, n'ho deuz bet ken ioul, nemet da lakaat da zivoan en ho kaloun ar zantelez, c'houi a vezho en ho ti nevez, ar pezh m'oc'h bet er gear epad ho yaouankis, eur vaouez a garo Doue hag a rei joa ar pried en deuz meritet dre he labour hag he zoujans a Zoue, unani he vuez gant oc'h hini.

» Ha c'houi a vezo bremaik, va breur karet, c'houi a zalc'ho ive sonj euz kentelliou mad ho tad, ha deuz aliou mad ar vam-ze a vouelit c'hoaz, pa sonjit en he madelez ; c'houi ive a vezo skoazel ho pried hag a gendalc'ho da servicha Doue ha da gana e veuleudiou en Iliz, ha dre oc'h oberou kristen e peb leac'h.

» Ha breman e pedan Doue do penigea, hag e lavaran ive bennoz d'ho kerent ha d'ar veleien, va mignounet, deuet ken niverus da bedi evidoc'h.

» Er moment-ma, va breur, oun sur, penaos ho mam, ho preur, ho c'hoar, a drid a joa e lein an Envou, hag a c'houlenn digant Doue, eürusdet evidoc'h hag evit ho pried.

» Me ive a zo o vont da bignat ouz an aoter, evit lavaret an offeren evidoc'h ha pa vezo, da vare ar gorreou, Jesus, etre va daouarn, e pedin anezhan da rei d'eoc'h ar vertuzioù a ra ar priedjou santel hag an oll grasou ho kasso, pa deui Doue d'ho kervel, da joa ar Baradoz, eleac'h ma vioc'h c'hoaz unanet en eürusdet peurbaduz a ro Doue d'he vir servicherien. »

Komite emgleo ar gatoliked

Ar zul kenta a viz kerzu, ar voazed dibabet, evit ober komite emgleo katoliked ar barrez, a zo en em vodet er presbytal, evel m'oa bet gourc'hemennet dez'ho Goude ar beden, peb hini d'he dro en deuz rentet kount d'euz al labour goulennet out'han gant ar prezidant.

Al labour-ze oa, alia ho amezeien n'edont ket c'hoaz en emgleo ar gatoliked da lakaat ho hano, ha da bedi ar voazed dimezet, n'edont ket

c'hoaz en emgleo an tadou a familh, da rei ive ho hano. Hon labour, emezho, ne ket bet diez. Rak kement den zo badezet, a gomoren e rank hirio an oll gristenien, rei an dourn an eil d'egile, evit diffen ho feiz ha feiz ho bugale.

Goulskoude tri euz ar voazed dibabet evit ar c'homite, n'int ket deuet d'an deiz merket da rei hanoiou tud ho c'harter. Evel n'int ket krenerien, e kounter o devezo great ho labour a benn ar reunion genta merket evit 1 h. 1/2, an eil sul a viz genver.

Ar c'homite a glasko ive a benn an dervez-ze, tud evit breuniezh voazet ar Galoun Sakr.

Ia, eun neubeudik hanoiou c'hoaz ha ne deuo tro peb hini da ober he anter-heur adoration, nemet eur vech ar bloaz. Pebez bennoz evit an tiegeziou, ma tremenfe oll voazet ar barrez, peb hini de dro, an anter-heur dirak kaloun Jesus. Neuze an tann a zeo kaloun Jesus a garantez evidomp, a grogo ive en hor c'halonou hag a roio deomp nerz da drec'hi kement tra a stourmf euz hor silvidigez.

ER SKOLIOU KRISTEN

O deuz bet epad ar miz ar guella renk

Klas kenta.	}	1 Joseph Arzel.	Eil rummad.	1 Marie Le Duff.
Kenta rummad.		2 Celine Le Dall.		2 Anne-Marie Brénéol.
Eil rummad.	}	1 Marie Brénéol.	Eil rummad.	3 Gabrielle Fourn.
		2 Marie-Anne Cadalen.		4 Louise Nédélec.
		3 Germaine Drogou.		5 Marie Forest.
		4 Euphrasie Maguérés.		6 Françoise Le Guen.
		5 Madeleine Morel.		7 Catherine Talarmin.
		6 Bernadette Vaillant.		8 Marie Derrien.
Tred e rummad.	}	1 Ernestine Guéna.	Tred e rummad.	9 Augustine Talarmin.
		2 Marie Vaillant.		1 Anna Quivoron.
		3 Pauline Morvan.		2 Philomène Bossard.
		4 Francine Conq.		3 Marie-Yvonne Perchoc.
		5 Joseph Kerros.		4 Marie-Anne Guéna.
Eil klas.	}	1 Victoire Guizliou.	Eil rummad.	5 Marie Jaouen.
		2 Marie-Anne Talarmin.		6 Françoise Pondaven.
		3 Marie-Yvonne Marzin.		7 Marie Cadalen.
		4 Rosalie Croguennoc.		7 Rosalie Eliès.
		5 Pauline Conq.		1 Jeanne Didou.
		6 Joséphine Le Borgne.		2 Françoise Trébaol.
		7 Joséphine Lescop.		3 Augustine Perhirin.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

18 Du. Joseph-Tanguy-Marie Le Ven,	PARROUN	Tanguy Le Ven,	MAEROUNEZ	Marie Ropars.
22 — Marie-Gab. Appriou, Trémazan,		Pierre Primel,		Marie Appriou.
27 — Alfred-Jos. Kerjean, Archantel,		Joseph Le Gall,		Mathilde Kerdran.
3 Kerzu. Joséphine Gélébart, Kergastel,		Basti Gélébart,		Joséphine Kerjean.
12 — Nathalie-Irène Josse, Archantel,		J.-M. Le Bihan,		Elisa Le Febrvre.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helpe he derri :

19 Du. Nicolas-Marie Boucher, Lambézellec ha Marie-Yvonne Floc'h, Bourg.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

- 17 Du. Guillaume Perchoc, 74 bloaz, Lanhallès.
- 2 Kerzu. Bastian Luart, 77 bloaz, Kelleret.
- 5 — Pierre Cloâtre, 82 bloaz, Navant.

De profundis.

A zo eat d'ar Baradoz :

- 21 Du. Pierre Trébaol, 2 viz, Kantel.
- 4 Kerzu. Bugel Rioual, 2 minut, Kerc'hoazoc.

Laudate pueri.

MIZ GENVER

1. Offerennoù ha gousperou evel d'ar zul. Dont oll d'an offisoù evit trugarekaat Doue euz ar grasou resevet er bloavezh tremenet hag evit goulen he vennoz evit ar bloaz a goumans.

Mad eo en em velet en deiz-ze ha rekete bloavezh mad an eil d'egile. Fall tre e vije avad offansi Doue dre re a vanneou.

3. Guener kenta ar miz. Offeren ar galoun sakr da 7 h. Lakaat oll derveziou ar bloaz dindan skoazel ar galoun sakr.

12. Eil sul ar miz. Offeren bred ha gousperou ar rouanez.

A zo pedet er zul-ze da ober ho anter-heur adoration :

11 h. 1/2. François Jaouen, Louis Lesvenan, François Morvan, Kerin-cuff, Jean-Marie Jaouen, Landourzan.

12 h. An aotrou persoun, Job Godebert, Jean Floch, bourg, François Jézéquel.

12 h. 1/2. Jean-Marie Sylvestre, Poullou-Pri, Gabriel Manguy, Poul-louarn, Jean Cloâtre, Jean-Louis Foll, Langurru.


1 h. Yves Bellec, Sant-Gouvarc'h, Yves Jaouen, Landourzan, Joseph Jaouen, Navant, Jean-Marie Taloc, Sant-Samson.

1 h. 1/2. Pierre Luart, Kelleret, Jean Cadalen, Sant-Samson, Basti Trébaol, Kerzournic, Herve Magueur, Kerc'hoazoc.

Kannadik miz kerzu en deuz koustet 26 lur. Bet evit sikour he baea, digant M. B., M. M., J. A., C. D., G. D., J. A., M. D., P. M. E. G., L. N., H. B., A. P., F. P., M. D., J. C., M.-A. C., peb a zaou vennek ; M. A., H. G., M. F., A. C., M.-J. B., peb a bevar real ; M. G., L. T., peb a 20 real ; J. J., c'huec'h real ; M.-A. F., 8 guennek ; J. M., 3 guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



Ar bloaz 1912 e Landunvez

BADIZIANTOU

Epad ar bloaz 1912, ar c'hleier o deuz sounet laouen 71, abalamour ma zoa bet great dre ar vadiziant, 71 kristen nevez. Daou yugelik badezet en ti, a zo eat d'an Env eb kan a joa an *Te Deum*. 73 ginevelez er memez bloaz, n'oa ket bet guelel pell a ioa e Landunvez.

Tadou ha mammou, sur oun, penaos, pa c'houlanno Doue ouzoc'h, deiz ar varn, pet o pezho bet a vugale, e c'helloc'h oll, respount : hini ebet a re, hini ebet a re nebeut. Hini ebet a re ; pa deu eur c'hrouadur e vez digemeret laouen, savet, kenteliet evit ma zei eun dervez d'ar Baradoz. Hini ebet a re nebeut ; beva a reomp evel priedjou kristen ha kemeret a reomp a greiz kaloun ar vugale a blij da Zoue rei d'comp. N'hon deuz morse klasket dre eun izign fallakr diarben ar vuaz, nag ober ar bez araok ar c'havel.

EUREUJOU

Epad ar bloaz tremenet, euz bet er barrez 18 eured. An eurusded hag i a vezo loden ar priedjou nevez ? Ia, ma keront beva e guir gristenien ha derc'hel penn-da-benn da c'hourc'hemennou Doue ha da re an Iliz. Eur pried evit heuilh he bried, a zilez tad ha mam. Mez, ne dle morse dilezel Doue. Ar c'henta plas er galoun a dle beza atao da Zoue. En em garet a eneb Doue, pe oc'h ober ar pezh a zo difennet ganthan, n'eo ket en em garet, mez en em zaoni.

En em garet, ret e vezo ouspen, en em bardoni. N'euz ti ebet, a ne ve enghan eur gomz rok bennag. Petra da ober ? en em bardoni.

Fachet eo Mari, ne lavar ger,
Ha tro he fenn ouz ar voger.
Mouzet eo Iannik, ha du he dal
Tost an arne da strakal.

Mad, eur c'houezaden var an tam koumoul-ze, ha peoc'h en ti, Salver Doue.

Evit kaout ar peoc'h-ze essoc'h, da bep hini he labour. D'an ozac'h, fouet ar c'har, pao an alar, brid ar marc'h, roued ha stur ar vag, an afferiou braz. D'ar c'hreg, an trebez, al loa bod, alc'hoez an arbel, paner ar viou, an aman hag ar pesked. Al larrek d'ar goaz, an tavancher d'ar vaouez.

Labourat o daou evit mad an ti. Diouall na ve re ledan gouzouk an ozac'h evit lounka odivi, re frank gouzouk ar c'hreg evit klunka kafe koeffet. Derc'hel eun aval evit terri ar zeched, eun tam bara evit terri an naoun.

AR MARO

Er bloaz echu ar maro en deuz falc'het 23 buez er barrez. Kasset en deuz 7 eal d'ar baradoz ha 16 den braz dirak

barnedigez eun an Aotrou Doue ? Esperomp int bet oll digemeret mad, rak beza oant oll tud a feiz hag a skouer vad. Re goz dreist oll eo a zo bet diskaret, 7 o devoa dreist 70 vloaz, ha pevar dreist 80 vloaz... Bet o devoa ta, amzer da zestum meritou founnuz evit ar Baradoz.

EMGLEO AR GATOLIKED

Setu ama komzou an aotrou n'Escop dizro a Rom :

Kenta goulenn, emezhan, a reas ouzin an Tad Santel ar Pab, a oue evit klevet kelou euz a emgleo ar gatoliked en Escopti. Lavaret em euz d'ezhan, petra hon deuz great, oll a unan, evit diazeza an emgleo-ze en or bro ha lakaat buez enni. Bez o peuz, kalz ac'hannoc'h, baleet en hent a ziskoueze deoc'h oc'h Escop hag ho peleien. Evit an dra-ze, hon Tad Santel a ro meuleudi d'eoc'h.

Eurus oun da ziskleria er *C'hannadik*, penaos epad ar bloaz tremenet, voazed Landunvez o deuz sentet d'euz aliou an Tad Santel ar Pab hag an aotrou n'Escop ; oll, koulz lavaret, o deuz roet ho hano evit an emgleo hag ar c'homite dibabet evit beza en he fenn, a deu, do en em voda bep miz evit klask, assamblez gant ho beleien, ar pezh zo guella da ober er barrez evit mad ar relijion ha guellad stad an dud reuzeudik. Ar c'homite, gant eur vanden vad a voazed, a zo het ive e Guitalmese, an 22 a viz Kerzu, o selaou, assamblez gant emgleoioù ar parresioù all euz ar c'hanton, eur brezegen dispar great var fallagriez ar franmansouned e kever ar gatoliked guirion.

Breuriez an Tadou a Famill

Epad ar bloaz 1912, kalz tud dimezet euz ar barrez, o deuz roet ho hano evit breuriez an tadou a famill, hag ar re n'o deuz c'hoaz skrivet ho hini, a deuo d'en ober ar c'henta, rak ne vezimp krenv da stourm ouz al lezennou nevez a zo sonj da ober a eneb ar skolioù kristen, nemet niverus e vemp.

Gellet hor beuz, eme, an aotrou n'Escop, el lizer a rent kount deuz a veach e Roum, diskleria d'an Tad Santel ar Pab, ar vad e deuz great breuriez an tadou a famill, a zo dija diazezet e peb parrez euz an Escopti ; ha pegement e poagn evit lakaat tenna euz ar skolioù al levriou kondaonet gant an Eskibien ha lakaat ranna, en oll parrezioù, sikourioù an ti kear, etre an oll vugale, koulz etre bugale ar skolioù skristen, hag ar re a zo er skolioù public.

ASSURANS AR GHATAL

Ama c'hoaz, hor parrez e deuz great ar pezh a c'houlenne an tad santel ar pap digant hon Aotrou n'Escop pe bet e Rom. Meulet en deuz d'ezhan, an oberou mad great evit guellat stad al labourerien. Mad, petra o deuz klasket an aotrou Mear hag an aotrou Adjoint, o voda ar voazet d'ar 15 a viz kerzu evit aoza reolen assurans ar chatal, nemet na ve den re diskaret gant ar c'hollou a c'hell koueza

varnhan, pa deu loenet dezhan da vervel. An traou a ioa eat brao kenan en dervez-ze. Kavet oa bet raktal, tud a galoun hag a benn, evit beza renerien ha komiseret an assurans. Gout a vouient, goulskoude, penaos o kemeret al labour ze, e kolchent kalz amzer ha no doa pae ebet da gaout. Mez, ar garantez kristen o devoa evit ho nessa hag ar mirit o devezo dirak Doue, a reas dezho serri ho daoulagad var ar boan o devezho hag an droublansou a bakint aliez evit ober ho dever e koustians.

O tizrei euz ar reunion, kourmaset hag echuet dre ar beden, an oll a lavare : delou mad ar barrez evit ar bloaz nevez a vezo : reolen assurans ar chatal diazezet mad

Allaz, gortoz a ranko c'hoaz. Arabat koll fizians, eun ti-mad ha talvoudek ne vez ket savet en eun dervez.

Abaoue ar reunion, eur guel berr deuz ar reolen a zo bet kasset da bep ti. Lennet e bet gant mal, hag ar re no deuz ket he c'havet c'hoaz dibikouz aoualc'h, a zo deuet d'en lavaret d'ar renerien, ha meur a dra a vo chenchet c'hoaz. Astennet e vezo dreist oll, an oad ma chomo ar c'hezek hag ar zaout var ar rol.

Goulskoude, ar re n'int ket bet c'hoaz o lakaat ho hano a raffe mad dont er chenta, evit ma vezo great var eun dro, priz oll chatal peb karter.

Mar deuz c'hoant e ve c'hoaz eur reunion all, araok, evit en em glevet guelloc'h, n'euz nemet e goulen digant ar renerien.

SKOL GRISTEN

D'ar 26 a viz kerzu, goude gousperou, ha d'ar 27. da 1 h. 1/2, merc'hedigou ar skol gristen, a c'hoarias daou biès, a lakeas var dal an oll laouenedigez hag eur feiz krenvoc'h er c'halonou.

An daou zervez-ze, ar skol a ioa digor evit an oll.

Bennoz d'ar re a deuz da ziskouez anaoudegez vad d'ar mestroz-zed kristen a laka kement a boan da gelen ar vugale var traou ar bed-man, ha da zeski dezho dre ar c'hatekismou, hent ar Baradoz.

Ar piès kenta, a ioa eun istor guirion en em gavet e Lourd epad eur pelerinaj galvet national, abalamour ma teu di, er mare-ze, tud clanv a bevar c'horn ar Frans evit goulen ar pare.

Eur medisin, brudet euz a Paris, a ieas da Lourd gant ar pelerinaj-ze. Ganthan edo he bried hag he verc'h Yvonne, skoet gant eur c'hlenvet n'oa pare ebet evithan ervez ar vedisined. Ar medisin-ze ne grede n'ag e Doue, n'ag e diaoul. Lakeat en devoa en he spered, ne gred-je ket en eur mirakl, goude er guelet gant he zaoulagad. Rak eur mirakl a vije eun testeni e zeus eun Doue mestr var bep tra, eur mestr a ranker senti ouz he c'hourc'hemennou. Doue, goulskoude, er gortoze e Lourd. He verc'hik klanv a zo eur zantes.

Ne ket deuet d'ar pelerinaj evit goulen ar pare, mez ar feiz evit he zad. Unan deuz ar re genta pareet epad ar pelerinaj-ze, e dour burzuduz ar feunteun, oa bet eur plac'h yaouank hanvet Jeanne. Dall oa daou vloaz a ioa. Just tad Yvonne oa he medisin, ha lavaret en devoa aliez : evit ar plac'h yaouank-ze a zo dall ha dall e chomo betek fin he buez. Pegement-ta ne ket zouezet, pa vel anezhi pare klok, eb louzou ebet, hag

en eun taol kount. Mad, kentoc'h eget kredi, eo guell ganthan anzae eo bet un azen gornek, eo en em faziet. Dour yen ar feunteun eo en deuz roet dezhi ar sklerijen.

Klask a ra c'hoaz eun digarez all : Mar deo ar Verc'hes ken galloudus, perak ne ket he verc'h d'ezhan a zo bei pareet. Hounez a zo eur zantez, e deuz atao gouzanvet he foaniou, eb eur glemmaden, hag en eur lavaret : bolontez Doue, ra vezo great ? Mez, paour keas medisin, d'a verc'h ne fell ket dezhi kaout ar pare, mes pare ene he zad. Neuze ar medisin dizoue a ia er meaz o vlashemi an hano santel a Zoue. Mez treinet eo evel gant eun dourn burzuduz betek ar roc'h a zouk skeuden ar Verc'hez. Ha deuz daoulagad an hini a zo dinam a beb pec'hed, e teu betek ennan evel eur hann a c'hrasou, a jench en eun taol he galoun hag he spered. Goude beza daoulinet ha pedet epad pell he vam euz an Env, e teu da gaout he verc'h Yvonne, hag ouz he briata gant teneredigez, e lavar dezhi : ha brema, e c'houzon perak n'out ket bet pareet ; bet e peuz, goulskoude, ar mirakl a c'houlennet, feiz ha peoc'h kaloun evit d'ha dad. Meulet ra vezho an Introun Varia a Lourd.

Ar re a vez bet e Lourd, no devez nemet eur c'hoant, dizrei di ar chenta. Mad, epad ar piès-ma, e kavet edot en guirionez e Lourd. Skeuden ar memez Ilizou kaer, ar memez roc'h gant ar Verc'hez varnhi a velet dirak an daoulagad, ar memez pedennou, a glevet, dirak ar feunteun burzuduz, ar memes kan epad prosesion ar sakramant, ar memes magnificat a goeze divar ar muzellou pa deue pare, euz an dour burzuduz eun den mac'hagnet, pa save, pa dremene ar sakramant, un den anter-varo bennag, divar e c'holc'hét.

Ar merc'hedigou o deuz c'hoariet ken brao ha gant gallek ken flour ha ken difazi, m'a oa c'hoant da gredi, e velet tud ar pelerinaj o unan.

Setu ama ho hanoniou hag ar roll a reant er piès :

Marie Brénéol, medisin. Céline Le Dall, greg ar medisin. Germaine Drogou, merc'h ar medisin. Joséphine Conq, ar plach yaouank dall, pareet. Joséphe Arzel, Marie Déniel, mignounezet greg ar medisin. Euphrasie Maguerez, Madeleine Morel, Denise Tallarmin, Thérèse Raoul, mignounezet Yvonne, deuet da Lourd evit sikour kas ho digas ar re glanv. Bernadette ha Marie Vaillant, plac'hed a gampr.

An eil piès hag ar re o deuz e c'hoariet a ranko gortoz ar miz all. Lavaret a c'hellan, goulskoude, int en em dennet a affer, ker-kouls a c'hoariezed ar piès kenta.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iles, broudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
21 Kerzu.	M.-A.-P. Le Borgne, Kerc'hoazoc.	P. Guennégues.
21 —	A.-V.-M Brénéol, Kerzent.	Vincent Pailler.
23 —	M.-F. Guennégues, Penfoul.	G. Guennégues.
7 Genver.	Joseph-Marie Conq, Kernézoc.	Joseph Causeur.
10 —	Marie B.-A. Bizien, Kergastel.	Ambr. Bizien.
		Bernard Briant.

Ra vezo meulet Doue.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet unanet gant eul liam santel ha'n'euz nemet ar maro a c'hel/he derri :

- 7 Genver. Joseph Bizien, Porspoder, ha Jeanne Perhirin, Sant-Samson.
- 7 — François Perchoc, Porspoder, ha Eugénie Déniel, Archantel.
- 14 — René Appriou, Creac'h, ha Marie-Josèphe Pellen, Piouarzel.

Pater, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

- 29 Kerzu. Yves-Marie Pellen, 72 bloaz, Kernezoc.
- 5 Genver. Hortense Jaouen, 17 bloaz, Navant.
- 6 — Marie Floc'h, 76 bloaz, Rochard.
- 9 — An introun Poumellec, 97 bloaz, Archantel.

De profundis.

Oll e kredemp, e divije an Introun Poumellec, gaelet he c'hant vloaz. Da veza dinerzet, ne devoa klenved ebed, pa deuz e miz kerzu, eun taol avel direol, de diskar ha da derri dezhi he gar. He buez hir e devoa tremenet e doujans Doue hag en aoun d'en offansi. Ar beleg a ioa evithi Jesus Krist e unan, hag he vezit a lakea atao laouenedigez var he zal. Goude beza er saluded, ar ger kenta a veze atao : deuet oc'h d'am c'hovez, pe zeiz e tigasso'e d'in an Aotrou-Doue. A me a meuz mall e tremene an hent houarn dre Arc'hantel. Neuze e z'in adarre d'an offeren ha da lakaat aliez Jesus, va zalver, em c'haloun. Pebez kentel vad evit ar re zo yac'h hag a gav ken aliez digarez da vankout d'an offeren ha da bellaat deuz ar gommunion.

Doue a zo deuet araok hent houarn Arc'hantel, da rei dezhi he billet, evit ar Baradoz. Ra bedo eno evidomp.

EAT D'AR BARADOZ

- 1. Genver. Ernest Pellen, 4 miz, Kernezoc.

C'HUEVREUR

1. Sadorn. Ar baotret gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask, a zo pedet da zont da goves goude ar skol en dervez-ze.

2. Sul al lard. An offeren vintin da 6 h. 1/2, an offeren bred da 9 h. 1/2.

Offeren ar zul, gousperou ar Chandelour. Ar Zakramant a vezo expozet adalek an offeren vintin betek 4 h. Prosesion ar goulou araok an offeren bred.

Ar gousperou e Kerzent. En distro e vezo roet bennoz ar Sakramant ha kovessat.

A zo pedet er zul-ze da ober ho anter-heur adoration :

11 h. Michel Cadalen, Streat-Lann, Goulven Godebert, Jean Brénéol, Kerzent, Jean-Marie Le Borgne, Milin-Trez.

11 h. 1/2, 12 h., 12 h. 1/2. Dimezellet ha bugale ar skol gristen.

1 h. Philomène Cloatre, Marie-Anne Cloatre, Catherine Castel, Jeanne Pondaven, bourg.

1 h. 1/2. Jeanne an Hir, Marie Bizien, Philomène Guiziou, Jeanne Ker-jean, bourg.

2 h. Rose Le Borgne, Marie-Yvonne Lescop, Françoise Floch, an dimezel Bellec, bourg.

2 h. 1/2. An Introun Vaillant, an itroun Bleuven, an itroun Derrien, Claire Coat, bourg.

3 h. Françoise Morel, Françoise Pelleau, Françoise Cadalen, Elisa Pérez, bourg.

3 h. 1/2. Yvonne Arzel, Yvonne Kervoal, Victoire Coadou, Jeannie Lunven, bourg.

4 h. Bennoz ar Zakramant.

3. Lun a lard. Offeren vintin 6 h. 1/2. Servich evit Anaoun ar barrez da 8 h.

4. Meurs al lard. Offeren vintin da 6 h. 1/2. Servich evit ar veleien maro epad ar bloaz ha dreist evit ar re zo bet er barrez, da 8 h.

Ar zakramant a vo expozet deuz 9 h. betek 4 h.

A zo pedet da ober ho heur a adoration en dervez-ze

9 h. Josèphe Nédélec, Philomène Coat, Anna Squiban, Jeanne Floch, bourg.

10 h. Jeanne Milin, Jeanne an Hir, Jeanne Lozach, Julie Péres, bourg.

11 h. Clémentine Allouer, Philomène Cloatre, Kéménéres, Jeannie Léon, Marie Floch, bourg.

12 h. Dimezellet ar skol gristen.

1 h. Josèphe Corolleur, Jeanne Kerboul, Josèphe Guennégues, Jeann Squiban, bourg.

2 h. Jeanne ha Françoise Floch, Néomie Vaillant, Marie Jarnic, bourg.

3 h. Augustine Pérès, Anna Jaouen, Marie Minguay, Joséphine Godebert, bourg.

Pedet oar da zont da goves epad derveziou morlarjes, evit digol kaloun Jesus deuz ingrateri an dud a laka an dansou milliget araok ar gommunion santel.

5. Merc'her al lud. An offeren vintin da 6 h. 1/2. An offeren bred da 9 h.

Sonjal n'oump nemet poultren ha ludu ha beza atao prest da rei eun ene mad da Zoue.

7. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun-Zakr da 7 h. nemet quart. An offeren zo lakeat gant ar re zo en abostolaj e karter Kelleret.

9. Kenta sul ar C'horais. Offeren ha gousperou ar zul.

16. Eil sul ar C'horais. Offeren ha gousperou ar zul.

23. Trede sul ar C'horais. Offeren ar zul ha gousperou sant Mathias.

BARA BENIGET


Goulven Habasque ha Jean-Marie Foll o deuz destumet evit ar bara beniget, er bloaz tremenet, 544 lur dek guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.




KANNADIAK

PARREZ



LANDUNVEZ



SANT GONVEL

PATRON BENNIGET

AR PARREZ

PEDIT EVIDOMP



Brezel d'ann odivi : « an dour a varo »

Lennit piz, goazed, ha c'houi merc'hed, goall dechet ivez avichou da eva re — lennit piz ar guirioneziou a zo ama varlerc'h.

Lavaret euz bet d'eoc'h meur a veach euz kador ar virionez, e ra ar guin-ardant droug-braz d'ar c'horf ha d'an Ene, e lam aliez digant an den he skiant vad hag en laka d'a ober an torfejou ar re voassa.

Kendelc'her a rear, evelato, da eva an hini melen, droug-hanvet eau-de-vie — dour a vuez, pa z'eo dour a varo, he hanô mad.

Bezomp erfin truez ouz-omp hon-unan, ouz hor bugale, ouz hor bro, « ar c'haera bro a zo er bed, panefe ar vesventi. »

Heuillomp an ali fur roet d'eomp gant hor medisined. Sentomp out-ho ha tec'homp diouz ar gwin-ardant : eur pœzoun eo ! — Melen, du pe ruz, lie-hano guirion eo : dour a varo.

Medisined ar Finister d'ho c'henvrois

Setu ama ho fennad-skrid, evel ma oue moulet, er *C'hourrier*, d'ar 27 a viz mae 1899.

Ni, holl medisined, o chom e departamant ar Finister : o velet ervad e ra ar guin-ardant muioc'h-mui a zroug d'ar Frans, hag ec'h en em ziskouez evel an danjerusa enebour e devije bet biskoaz.

O c'houzout ivez ez euz riskl evit hor bro da veza diskaret ha kaset da netra gant tech ar vesventi.

N'e c'hellomp ket chom pelloc'h hep enebi ouz eun droug, ouz eur woalenn hag a anavezomp guelloc'h eged n'euz forz piou.

Sevel a reomp hor mouez : da genta, evit meuli, evel ma z'eo dleet, an dud vad hag ho deuz diskleriet eur brezel dispount hag hep truez d'ar guin-ardant ; da c'houde, evit kelen an dud e karg divar-benn tech ar vesventi, ha diskuill d'hor c'henvroiz e pegen braz riskl e z'int lakeat gant-han.

O komz eta evit mad ar iec'hed ha mad ar vro, e teuomp da ziskleria d'ann oll :

Ar guin-ardant n'euz forz didan pe hano, n'euz forz didan pe liou, a zo eur pœzoun.

Ar guin-ardant ne ro na nerz, na tomder ; lakaat, a ra ar goad da virvi ; ar c'horf a vez dinerzet kement ganthan, ma ne c'hell mui, abred, herzel ouz an disterra klenvejou.

Ar gwin-ardant a ro d'an dud eleiz a glenvejou hag o c'has var eun d'ar bez.

Dre eva aliez guin-ardant, zoken a vanneou bian, e teuer da veza alcôolik, « da gaout terchen an odivi. » Hag ar c'hlenved-mâ, ouспен ma tiskar an efer, a sko ivez he vugale ; an darn vuia euz bugale an eferien odivi, a vez diot, hep spered da zeski, ha prest atao da goueza klanv, a gouez e droug-sant pe ho deuz an droug-vamm, ha ne c'hellont ket kaout bugale ho-unan.

Ar boessoniu hanvet appétitifs, ha dreist oll an absinthe, evet aliez, araok pe etre ar prejou, a zinerz a nebeudou ar iec'hed — a laka ar gosni da zont araok he zermen hag a ziverra ar vuez.

Dre eva aliez boesoun appétitif pe guin ardant — zoken hep en em vesvi — e teuer ive buanoc'h, easoc'h, da goueza poatriner.

Ar guin-ardant a zo penn-abek d'ar peb brassa euz an darvoudou a zigouez gant al labourerien hag ar besketerien.

Oc'h ober, da vicherourien ar Frans, koll kement all a zeveziou labour, ar guin-ardant, a zigor an or, da vicherourien ar broiou all hag a baoura ar vro.

Ar guin-ardant a garg ann hospitaliou a dud diskiant.

Ar guin-ardant a zo kaoz da ouспен an hanter euz an troiou fall hag euz an torfejou a ra an dud ann eil a-enep egile.

Ar guin-ardant a garg a dorfetourien ar prizoniou hag ar galeou, a ro pennou d'ar c'billotin da drouc'ha.

Ar guin-ardant a ziskar ar Frans enn eur c'hiz all : breina ra ar c'halonou, ha tenvalaat a ra ar sperejou, er memez amzer ha ma tinerz ar c'horf.

Goude beza embannet ar guirioneziou-ze, — ha ne c'houfe den displavaret, — e teuomp gant c'hoant braz da veza selaouet, da bedi an oll dud e karg da ober kement a zo en ho galloud evit rouessaat, enn hon touez, an tech da eva, rak ma vez lezet da greski c'hoaz hor gouen a ielo abarz nemeur da fall, da netra.

Pedi a reomp ive, hor c'henvroiz, euz a greiz hor c'haloun, evit ho mad ho-unan ha mad ar vro, d'en em ziuall dioc'h ar guin-ardant ha dioc'h an oll likuriou krenv, evel dioc'h ho goasa enebourien, — ma fell d'ezho e choumfe ar Frans ar Frans, ma fell d'ezho e ve ho bugale Fransizien evel-d'ho. »

AR GROAZ VENN

Enn he lizer ar c'horreiz 1912, an Aotrou n'Escop a skrive : ober a raimp peb tra evit disc'hrischenna tech ar vesventi, hag heb ean e raimp meuleudi d'ar vreuriezu katolik a vezo savet evit ober brezel d'ann odivi.

Breurie ar *Groaz Venn*, a oue ta savet e Kemper, da viz guengolo diveza evit lakaat an dud da dec'het deuz ar vesventi.

Setu a-ma reolen ar *Groaz Venn*.
I. Ar *Groaz Venn* a zo eur Vreurie savet etouez ar gatoliked evit ober brezel d'an odivi ha d'ar Vesventi milliget. Hanvet eo evelse, abalamour, ar re a laka ho hano a c'hell dougen eur vetalen, a zo en he c'hreiz eur *Groaz Venn*, gant ar geriou-man tro-var-dro : enor, yec'hed, eurüsded.

II. Petra c'houlen ar *Groaz Venn*, digant ar re a laka ho hano ? Chom eb eva odivi, na boesoun great gant odivi : Kassis, Char treuse, Bénédictine, Absinthe, Rhum, Vermouth, Bitter, etc. kounje a zo da eva guin, chistr, hier, gant ma ne vo ket evet re.

III. Da genta e vez roet an hano evit tri miz, ha da c'houde evit bloaz pe ouспен.

IV. Ar re zo er *Groaz Venn*, a boanio da rei da anaout ar Vreuzier. Diskuez a reint an droug great gant an odivi. Klask a raint tud da zont er Vreuzier. Labourat a reint da gaout hostaleriou ne vezo ket guerez odivi enno, hag alia a raint an dud da vont en hostaleriou-ze p'o dezho izoum da vont en eun davarn.

V. Ar *Groaz Venn* a zo bet staget outhi gant hon Tad Santel ar Pap, induljansou kaer, Indulgans plenier, var bouez kovs ha komunia ha pedi evit hon Tad Santel ar Pap : 1° d'an deiz ma vez roet an hano ; 2° da c'houel sant Yan-Vadezour, patrour ar Vreuzier ; 3° da c'houel an oll zent, da zeis Nedelek, da zul ar Pantekost, da c'houel Mari hanter-east, da c'houel sant Joseph (19 a veurs), da heur ar maro, gant ma vezho resevet ar sakramanchou ha pedet hano santel Jesus pe, ma n'e c'heller ket sakramanti, o invoki a greiz kaloun an hano santel-ze.

VI. Ouspen-ze : 300 dervez induljansou bep tro m'a z'ear da eur gonferanz great abertz ar Vreuzier ; bep tro ma tistroer eun den benak diouz an odivi ; bep tro ma kaver unan nevez da lakaat he hano er Vreuzier. Ha c'hoaz 60 devez, bep tro ma vez great eun dra bennag evit ar Vreuzier.

An induljansou-ze a c'heller da c'hounit evit an Anaoun.

E PARREZ LANDUNVEZ

e savet, azalek brema, *Breuzier ar Groaz Venn*, ha kement hini, goaz pe vaouez, pe krouadur, a gompren pegen talvouduz a vezo eur seurt breuzier evit yec'hed an dud hag eurusded an tiegeziou, a c'hell lakaat dioc'htu ho hano. En rei d'an Aotrou Persoun.

Diner an Iliz

Ouz peb Iliz hon tadou coz o devoa staget leveou. Beleien ar parrezioù gant an dra-ze a rea ho zreuz, heb ezom da astenn an dourn d'ho farizionis. Muioc'h, hi, ive, a gemere ar mizou gant ar skoliou savet e peb parrez, hi, a zikoure ar beorien ezomek hag an dud klanv en hospitaliou.

Epad ar revolution vraz, brema e zeuz 115 vloaz, ar c'houarnamant a gemeras al leveou-ze, mez o prometti rei eun dra benag evit sikour beva ar veleien er parrezioù. Bema e zeus 7 vloaz, eur stroillad deputed ha senatourien euz hor bro, dallet gant ho c'hasoni eneb ar relijion, o deuz votet lezen an disparti ha dizamet ar c'houarnamant da baec'h dle en devoa, e kever ar veleien, abaoue m'en doa kemeret ho madou. Ouspen al lezen milliget-ze a reas skrab var gement tam danvez e devoa bet an Iliz abaoue ar revolution.

Abalamour da-ze, keit a m'a n'en devezo ket ar c'houarnamant restalet d'ar guir berc'hen, ar pezh en deuz kemeret, ar veleien, pegen tenn benag e c'hellont kaout an dra-ze, a ranko ober kest diner an Iliz, gourc'hemennet gant oll iskipien Frans, e peb Escopti, ha peb kristen a zo evithan, eun dever striz hag a goustians rei he aluzen hervez he beadra.

Arabat en em fazia, ar relijion a zo eun dra red, hag evelse, peb

kristen a dle ober e c'halloud evit sikour e miret, ha pec'hed braz en deuz, m'a n'er gra ket.

Mez ar relijion ne jomo er vro, nemet beleien a ve d'he frezek ha d'he harpa. Heb ar belek, ar barrez a goezo abred en dissurchou hag en Ifern. Gant ar belek, ema, enni Doue hag e vale var hent ar Baradoz. Mad evit ma chomo, ar belek er barrez, e ranko kaout peadra d'en em loja, d'en em veva, d'en em wiska, da ober aluzen d'ar re ezomeka.

Setu evit pe tra evez great kest diner an Iliz.

Evit ma vo dalc'het urz vad er vro, e roer evit taillou eul loden vraoik deuz an danvez : Perak, neuze kalz a gri hag a vez tenval ho fenn pa c'houlenn digantho ho Iskipien evit mad ho Ene, taillou daou c'hant guech bianoc'h eget ar re a c'houlenn ar c'houarnamant, evit mad ho c'horf ?

Daoust, hag hi, a raffe muioc'h a stad euz o c'horf eget euz ho Ene, o ankounac'hat eo, an Ene, al loden vella euz an den, abalamour ma zeo eur spered ha ne varvo ket, krouet henvel ouz Doue, ha goest d'he anaout ha d'he garet hag evelse da c'hounid ha da erruout er Baradoz ?

Ouspen, da beleac'h e za brema an arc'hant kemeret divar goust madou an Iliz ? Eul loden a vez roet da vianat an taillou var bep parrez. Leal eo ta neuze, d'ar barrizionis, restaol eun tamik, dre diner an Iliz, ar pezh a gouez e kef ar gommun divar goust ar veleien.

Evel er bloaveziou all, o peder, da rei araok pask, ervez gourc'hemenn an aotrou n'Escop, aluzen, diner an Iliz. Goude pask e zeor da di ar re n'o devezo ket c'hoaz great ho aluzen. Lavaret e vo d'eoc'h an deiz.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breuzier da Jesus-Krist, heritourien ar Barados :

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
27 Genver.	Y.-M. Perchoc, Arc'hantel,	Y.-J. Perchoc,
4 C'huevrer.	Jacques Foll, Langurru,	Jacques Foll,
4 —	Ern. Magueur, Kerc'hoazoc,	Yves Magueur,
6 —	Basti Guéna, Ru-Allan,	Hamon Guéna,
10 —	M.-J. Provost, Kerguen,	Jean Jaouen,
12 —	F.-C. Coadou, Penfoul,	Claude Taloc,
3 —	Kristenet, Krouadur,	François-Marie Gourmel, Gorrekéar.
8 —	Kristenet, Krouadur,	François Perchoc, Rochard.

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasket ar groaz :

4 C'houevreur.	Laurent Guéna, 80 vloaz, Rochard.
11 —	Herveline Guéna, 19 vloaz, Rochard.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

6 C'houevreur. Angèle-Vincente-Marie Brénéol, Kerzent, 6 Sizun.

Laudate pueri.

MIZ MEURS

- 2. Pevare sul ar C'houraïs. Offeren ha gousperou ar zul.
- 6 Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun-Sakr ha bennoz ar Zakramant da 7 h. nemet kart. Pedi start Kaloun Jesus evit goulenn ma rei oll dud ar barrez eur pask mad ha santel.
- 9. Sul ar Basion. Offeren ha gousperou ar zul. D'ar zul-ze e tigorou Pask evit an oll. Ar barrizioniz zo pedet d'a en em ranna evit ne vo morse re a bres hag evit ma c'hellor ho c'helen guelloc'h. Lezel ar zul ha goueliou Pask, gant ar re ne c'hellont ket dont var ar pembez. Ar re binvidik o deuz c'hoant da ober ho fask d'ar zul, a deui da goves d'ar sadorn goude lein.
- Ar vugale deuz 7 vloaz, desket aoualc'h evit kommunia, betek ar vugale gant ho fevare pask, hag ar re-ze ive, a deui oll e zizun ar Basion, nemet eur rezoun vraz bennag o deffe da c'headal.
- Aluzen ar C'houraïs a dle beza great gant an oll. Evit ne vo ket ankouna-c'heat, e ober pa deuer da baska.

A zo pedet da ober, da zul ar Basion, ho anteur- heur adoration :

- 11 heur. Fanch Colin, Yves Kervran, François Coadou, Penfoul, Auguste Perhirin, Penkear.
- 11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Yves Minguy, bourg, Jean Guennegues, Kernézoc, François Jézéquel.
- 12 heur. Jean-Marie Godebert, Jean-Marie Pellen, Jean Squiban, François Pellen, Kernézoc.
- 12 h. 1/2. François Théréne, Jacques Perhirin, Guillaume Riouall, Kerc'hoazoc, Pierre Jaouen, Landourzan.
- 1 heur. Eozen Magueur, Penn-al-Lan, Victor Perchoc, Kervéléoc, Jean-Marie Cadalen, Kelleret, Gabriel Corolleur, Curulou.
- 1 h. 1/2. Ollivier Le Borgne, Joseph Jarnic, Joseph Trébaol, Amédée Cloatre, Kerzent.

PASK

Rouez int, a drugare Doue ; ar gristenien euz hor parrez a jom eb ober ho fask. Mez ne ket aoualc'h tostet ouz ar gador govez, hag ouz an daol-zantel ; red eo, ouспен, e rafe an oll eur pask mad. Evit an dra-ze e ranker, da genta, ober eur govesion vad. Red eo e ve klasket mad ar pec'hejou, e vent koveseat gant lealdet, hag e ve eur guir gouz, eur guir glac'har da veza offanset Doue, hag e ve eur volontez stard da jench buez, en eur drei kein d'ar pec'hed ha da gement a zoug d'ar pec'hed.

Gouzout a reomp pegen bresk oump, mez, ni bedo Jesus ken kalounek, pa vo deuet davedomp dre ar gommunion, ma roio d'eomp an nerz a vezo red evit beva hiviziken e guir gristenien.

16. Sul bleuniou. Hiviziken an offeren vintin da 6 h., an offeren bred da 9 h. offeren ha gousperou ar zul.


Delc'her ar bodou beuz pe balmez en daouarn epad ar prosesion hag an aviel. Ho miret goude gant respet evél traou beniget a gas an drouk-spered divar hon tro, ha lakaat, eur bod e peb ti, e peb kraou, e peb park, evit ma tennint bennoz Doue var an dud, ar chatal, ar gounidegez.

Perak e vez kaset ar vugaligou d'an offeren bred d'ar zul bleuniou ? Evit delc'her sonj deuz ar vugale a ambrougaz hor Zalver pa deue e triomp da Jerusalem, hag a grie ive, gant ar bobl : meuleudi da vap Doue. Ar vugale savet kristen a ra joa hag honor ho zud.

- Goude gousperou e vo diskleriet ar basion gant an aotrou Caroff, kure Guitalméze.
- 20. Iaou gamblit. An offis a goumanso var dro 7 h. pe gentoc'h, ma vez echu da goves.
- En dervez-ze e reas Jesus Sakramant an aoter hag ar velegiach evit chomp bepred ganeomp en Tabernacl, evit servichout da vagadurez d'hon Ene dre ar gommunion hag e n'em ginnig bemdez evidomp dre an offeren, e sacrifis da Zoue e dad. Hon dever eo e drugarekaat, evit ar garantez-ze heb he far en deuz diskuezet d'eomp derc'hent he varo, o tont da zaoulina dirak an tabernakl bep tro ma tremenomp dirak an iliz, ha d'en lakaat en or c'haloun aliesha ma c'hellimp dre eur gommunion zantel. N'euz ket eun dervez kaeroc'h evit ober ar pask eget ar iaou gamblit.
- Dont muia ma c'hellor da goves d'ar merc'her goude lein, evit ne vo ket re, deuz ar mintin, d'ar iaou gamblit.
- En deiz-ze tud ar bourg hag ar re zo tost d'ar bourg a deui ive d'an Iliz da 7 heur anteur diouz an noz da lavaret ho fedennou ha da ober an heur-zantel.
- 21. Gener ar Groaz. An offis da 7 heur. Da genver an dervez-ze ec'h honoromp poanjou kriz hor Zalver hag e varo var ar groaz evit hon tenna euz ar stad a bec'hed ha divar hent an Ifern, ha meritout d'eomp euruzded ar baradoz.
- Dont oll d'an offis evit pokat d'he groaz hag evit en drugarekaat deuz eur garantez ken birvidik evit an den.
- Epad an offis e vo great ar gest evit an Douar-Zantel.
- 22. Sadorn Zantel. An offis var dro 7 heur. En dervez-ze e vez elumet an tan nevez, benniget dour-meur ar vadiziant, elumet ar choulaouen paskal, ha digaset ar zakramant en tabernakl : Kementse oll a zigas d'eomp da sonj e rankomp nevezi hor bolontez da veva atao evit Doue gant eur garantez birvidik. — Kovesionou da 2 heur betek 6 heur anteur.
- 23. Ar zul fask. Offeren a gousperou ar gouel.
- An nevez amzer a zo laouen. Asveva 'ra peb tra goude maro ar goanv. Mez, laouena 'zo en nevez amzer, eo ar zul fask, pe gouel tremen Jesus-Krist euz ar maro d'ar vuéz, ha tremen ar bec'herien euz ar pec'hed d'ar c'hras dre eur pask santel.
- Ar c'houlouen paskal elumet e korn an Aviel, bep sul betek ar iaou bask a zigas d'eomp da zonz eo deuet Jesus a varo da veo hag e tleomp-ni ive delc'her hon Ene beo o veva atao e stad a c'hras.
- D'ar zul ha d'al lun fask e vezo koveseat goude gousperou. 24 a 25, lun ha meurs fask an offisou evél d'ar zul.
- 30. Sul ar C'hasimodo. — Offeren ar Zul, gousperou Annonasion ar Verc'hez Vari.
- Jesus, eme Aviel an deiz-ze en em ziskouezas d'an Ebestel, en eur lavaret : ar peoc'h ra vezo ganeoc'h. Ma fell d'eomp beza e peoc'h, ganeomp hon-unan, gant hon nesa ha gant Doue, e rankomp ober brezel d'ar pec'hed ho d'hon defaoutou ; rak, eme ar spered-santel, — « n'euz ket a beoc'h evit ar pec'heur. »
- Kannadik* miz genver ha miz c'huevrer o deus koustet 53 lur. Bet evit sikour ho faea, digant : M. L., M. B., M. I. T., peb a skoued ; P. G. F. B., M. B., M. C., M. A. B., peb a eiz real ; I. C., c'houec'h real ; M. R. Q., M. I. L., peb a 24 guennek ; J. M. G., J. T., Y. F., M. A., E. B., F., M. J., E. G., peb a bevar real ; J. M. G., 12 guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



Breuriez ar Gelennadurez Kristen

E miz genver diveza, an aotrou n'Escop, en deuz digaset eul lizer, da oll bersounded Escopti Quimper, evit ho fedi, deuz perz hon Tad Santel ar Pap, da zevel en ho farrezioù, Breuriez ar Gelennadurez Kristen (l'Œuvre de la Doctrine Chrétienne).

Evit beza er vreuriez e ranker : 1° lakaat an hano var roll ar Vreuriez ; 2° ober katekiz pep hini en he di, pe oc'h en em garga da gentellia ar vugale dizesk pe n'o deuz den d'ho deski ; 3° lavaret bembez eun *Ave Maria* evit ma zeï var araok an deskadurez kristen. An *Ave Maria*, deuz ar pedennou mintin pe noz, a c'hell servichout evit-ze ; 4° ober eun aluzen ar bloaz. An aluzen roet er gest a vez great d'ar zul kenta ar miz evit ar skoliou kristen, a zo aoualc'h.

Ar re a vezo er Vreuriez a ranko ta, dioc'h ma vezo izoum : deski katekiz da vugale dizesk ar barrez, teuler evez anez'ho epad an offeren hag ar gousperou, ha beilla evit ma kendalc'hint, e plegou mad ho yaouankiz.

E Landunvez, ar Gelennadurez Kristen, a vez roet d'ar merc' hedigou er skol gristen hag ar mestrezed a daol evez anezho epad ofisou an Iliz. Ar mestrezed-ze ta, a vezo ho hano er Vreuriez hag o devezo guir da c'hounit an induljansou staget outhi.

Mez piou a dle c'hoaz beza e Breuriez ar Gelennadurez Kristen ? Sklear eo, an tad hag ar vamm e kement ti zo eunho bugale da gentellia var hent ar baradoz. Kement ti a zoujanz Doue a zo, a dle beza evel eur skol gristen.

Evit deski katekiz d'ho bugale, an tad hag ar vamm, a dle beza sikouret gant ar vugale gosa. Ar re ma ive a vezo er Vreuriez. Hag ouspen an oll dud a ra, a volonteze vad, katekizmoù en ho c'harter.

Evit-ho eo e lavar ar Spered-Santel ar c'homzou-ma : « Piou bennak a zesk ar wirionez d'an dud hag o laka var hent ar furnez, a vezo skeduz evel stered epad an oll eternite. »

Setu ama eun diverra euz an Induljansou kaer staget gant hon Tad Santel ar Pap euz Breuriez ar Gelennadurez Kristen.

Induljansou leun pe plener : 1° An deiz ma skriver an hano er Vreuriez ; 2° Deiz gouel ar Vreuriez er barrez ; 3° Pask, Nedelek, ar Rouanez, Iaou-Bask, an deiz kenta ar bloaz, Gouel ar Sakramant, Pantekost, Hanter-Eost, Ar Verc'hez consevel dibec'h, Introun Varia an daelou, sant Joseph, sant Per ha sant Pol, Oll Zent, sant Charles Borromé, sant Joseph Calazanz, gant ma z'eor da govez ha da gommunia ; 4° Da heur ar maro, gant ma vezo lavaret a c'hinou goude beza kaveseat ha kommunit, pe ma n'er geller ket, a galoun da viana, hano santel Jesus, en eur zigemeret ar maro a berz Doue evel paemant euz ar pec'hejou.

Kalz induljansou all a n'int ket plener a zo c'hoaz staget ouz Breuriez ar Gelennadurez Kristen.

Gout a rankomp oll, penaoz, an induljanz plener a ro an

diskarg euz an oll boan a zo c'hoaz dleet d'ar pec'hed, goude an absolven ; ha penaoz, ar re n'int ket plener, ne roont an diskarg nemed euz a eul loden ebken euz ar boan-ze.

Evit gounit an induljansou, e ranker beza e stad a c'hras, hag ober a boent da boent ar peza zo merket gant an Iliz.

An Aotrou n'Escop

D'ar 15 a viz mae, var dro 2 heur e teuio an Aotrou n'Escop deuz Porspoder, da rei ar gonfirmation da vugale Landunvez.

A vo digemeret ganthan, goude ar gonfirmation : conseil ar gommun, conseil ar barrez, komite emgleo ar gatoliked, komite emgleo an tadou a famill, hag ive an dud euz Breuriez ar Gelennadurez kristen a ra, a volonteze vad, katekizmoù da vugale ar barrez. Pedit a rear ta, da zont d'ar presbytal, d'ar 15 a vae, d'an heur a vezo merket dezho ; mestrezet ar skol gristen, Marie Prigent, François Brénéol, Jean Lenvec, an introun Prosper Jacq, an dimezel Eugénie Marzin, Catherine Castel, a zo anavezet gan'hen evit ober katekizmoù d'ar vugale dizesk euz ho c'harter.

Mar deuz re all hag a raffe ar memez labour talvoudek evit an Eneou, n'o deuz nemet rei ho hano hag e vezint ive digemeret gant an Aotrou N'Escop.

BENNOZ HON TAD SANTEL AR PAP

Setu ama komzou an Aotrou N'Escop, e fin al lizer, en deuz digaset deomp araok ar C'horatiz :

« Hor breudeur ker, pa raimp tro an Escopti evit ar gonfirmation, e roimp deoc'h eur merk nevez euz ar garantez en deuz ar Pap evit oc'h eneou.

En dro diveza, m'omp bet e Roum, en deuz roet aotre d'eomp da rei d'eoc'h en e hano, e vennoz, bennoz ar Pap, gant an oll induljansou stag outan.

Eur vech e pep parrez, e roimp evelse bennoz ar Pap. Evit kaout perz er grasou-ze, en em lakit e stad d'ho reseo, it da govez ha da gommunia.

Preparet evelse, e resevot guelloc'h, ar c'hras roet d'oc'h Eneou gant hor Zalver hag an hini a zalc'h e blas var an douar, hag e krenvaio ennoc'h ar vuez dreist natur hon deuz komzet d'eoc'h anezhi, buez talvouduz evit ar bed-ma hag evit ar bed all. »

Kement hini ta a vezo, en Iliz Landunvez, pa roio an Aotrou N'Escop bennoz Hon Tad Santel ar Pap, goude ar gonfirmation, a c'hounezo eun induljans plener gant ma vezo bet o kovez hag o gommunia en dervez-ze pe en dervez araok. Ober a ranko ouspen eur visit d'an Iliz, pe lavaret eur beden evit an Iliz, Hon Tad Santel ar Pap hag an Aotrou N'Escop. Beza en Iliz, pa vezo roet ar vennoz gant an Aotrou N'Escop, a c'hell servichout da vizit.

Sikour d'ar Beorien o deuz bugale

E miz eost diveza, ar C'honsel jeneral en deuz votet daou c'hant mil lur da ingala, er bloavez 1913, etre peorien an departamant, ervez ar reolen zo ama varlerc'h. Piou a resevo aluzen ? Ar beorien ebken, pevar rumm anezho :

1° An intanvezed o deuz da nebeuta tri c'hroudur ha n'o deuz ket c'hoaz 13 vloaz ;

2° Ar famillou o deuz da nebeuta tri c'hrouadur a-zindan 13 vloaz, pa n'e c'hell ket an tad ober an disterra labour ha pa en deuz an tad eur sikour digant ar gommun ;

3° Ar famillou o deuz da nebeuta 7 krouadur a-zindan 13 vloaz, ma chom gant ar c'hef, goude beza great aluzen d'an daou rummad oll.

4° Ar merc'hed varnez kaout bugale.

Pegement a resevint ? — 1° Evit an tri rummad kenta (intanvezed, tadou infirm, famillou 7 kraoudur) ar penn-tiegezh a resevo 7 lur dek guennek er miz ; zoken 10 lur a vezo, pa vo unan euz ar vugale en he vloaz kenta ha maget gant he vamm.

4° Evit ar pevare rummad, ar vamm a resevo 20 lur etre diou vech : 10 lur pemzek dervez bennag araok ar c'hinivelezh ; 10 lur, en derveziou varlerc'h ar c'hinivelezh.

Penaoz en em gemeret, evit kaout an aluzen ? 1° Mont da c'houlenn en ti kear. En ti kear e vezo great daou baper : ar c'henta a verko peseurt contribusionou a bae an hini a c'houlenn ar sikour ; an eil a verko hano an tad, ar vamm, ar vugale, — an oad, ar vicher, etc. An daou baper a vezo kaset gant ar sekretour d'an aotrou Mear ha d'ar c'honseil hanvet (bureau d'assistance). Ar re-ma, a roio ho aviz, hag a vezo kaset d'an Aotrou Prefet e Quimper, assamblez gant an daou baper all. An aotrou Prefet eo hag a roio pe a refuzo ar sikour.

2° Pa vezo merket ar zikour, e vezo diou fesoun da douch. Da genta : an intanvezed, ac an tadou infirm, ar famillou a zeiz krouadur, a resevo bet miz eur mandat da douch e ti ar percepteur, en bourk 7 lur 10 gwennek, pe 10 lur evel ma zeo bet merket huelloc'h ; d'an eil ar mammou a resevo an arc'hant digant ar facteur, en ho c'hear (10 lur araok, 10 lur goude ar c'hinivelezh.

Arc'hant piou a vezo ingalet etre ar beorien ? Arc'hant kement hini a bae taillou er Finistère : Aluzen ar re o deuz, d'ar re n'o deuz ket. — Setu perag an hini ne vije ket paour hag en defe sikour ep guir ebet, a vije laer.

An oll draou nevez er c'hiz-ze a zo mad, pa reont vad d'ar paour.

Mez eun dra red eo, delc'her sonj ne vije izoum ebet anezho, ma vije muioc'h a relijion hag a garantez etouez an dud. Rag neuze an dud a raffe aluzen aoualc'h en dro dezho, ha ne vije ket red forsi anezho da zikour ho breudeur, izili ezommek hor Zalver Jesus-Krist.

(Kannadik Guitalméze).

AR GOUR-VADEZI (L'ondoïement)

En despet d'an aliou roet aliez euz ar gador sarmoun, meur a hini a deu c'hoaz d'ar Bourg gant ar bugel nevez ganet, hag a bed neuze, an Aotrou Persoun, da c'hour-vadezi raktal ar c'hrouadur.

Kement-se a zo a eneb lezennoù an Iliz a c'hourchemenn ma vezo bet da genta aotre an Aotrou n'Escop, pe da viana, aotre an Aotrou Persoun Kanton.

Pa vezer 'ta var c'hed euz eur bugel a zo sonj d'he c'hour-vadezi, deuit da gaout an Aotrou Persoun hag e roio deoc'h eul lizer da vont da c'houlenn aotre an Aotrou Persoun Kanton. Neuze gant ar (permis) a vo roet d'eoc'h e Guitalméze, e c'hellor gour-vadezi ar c'hrouadur raktal ma vo digaset d'an Iliz.

Mez perak e c'houlenner gour-vadezi ar bugel ? Ar peurlissa evit gedal ar paeroun pe vaerounez. En dra-ze, ec'h en em faziit. Ar pae-

roun pe ar vaerounez a vez an hini a zalc'h ar c'hrouadur pa roer dezhan ar gour-vadez, hag ar re en dalc'h pa vez great al lidou varlerc'h ar vadiziant ha sounet ar c'hleier, ne d'int nemet testou, evel ma verk ar c'haier var be-hini e vez skrivet ho hano.

Evit beza paeroun ha maerounez, ar re ne maint ket er gear, a c'helle rei dre eul lizer ho guir da re all da gemeret ho flas pa vez skuillet an dour var benn ar bugel, pe m'ar de gouel ganeoc'h, pa vez hadezet, a neuze e vezint paeroun pe maerounez, en guirionez, da veza ne vent ket var al leac'h.

Var an aotre roet a berz an Aotrou N'Escob da c'hour-vadezi ar bugel, eo skrivet, e rankor, araok fin an tri mis, ober al lidou diveza euz ar vadiziant.

Kalz a dorr var ar poent-ze, ar gourchemenn great d'ezho, goulskoude gant an Iliz, evit brassa mad Eneou ho bugale.

Avis de Monseigneur à ses prêtres, par rapport aux ondoïements

« Messieurs les Curés et Recteurs feront bien de rappeler aux familles que c'est au baptême, proprement dit, par conséquent à l'ondoïement, que la présence des parrain et marraine est requise. On doit leur rappeler aussi que les parrains ou marraines absents, peuvent être représentés par procureur, tout en gardant vis-à-vis du nouveau-né et de ses parents, l'honneur et les prérogatives du parrainage, ce qui fera disparaître, le plus souvent, les raisons qu'on allègue pour demander l'ondoïement. Mais, il est un désordre contre lequel on ne saurait trop s'élever, c'est celui qui consiste à étendre, à un temps très considérable, le délai de trois mois accordé, pour suppléer les cérémonies du baptême. »

AR ZUL BLEUNIOU

Bennoz d'an tadou ha d'ar mammou o deuz digaset ho bugaligou d'an offeren bred d'ar zul bleuniou. Ar vugale-ze ho deuz en ho iez meulet Jesus ho c'har gant an deneredigez ar vrassa. Bezit sur, en devezho lezet he vennoz da goeza puill varnho evit ma kreskint assamblez, en oad, e furnez, hag e santelez.

Bennoz ive d'eoc'h, tud Landunvez, da veza deuet en dervez-ze niveruz d'ar gousperou evit selaou ar Bassion. Paet oc'h bet, dre ar blijadur oc'h euz tanveat o klevet eur prezeger, en deuz dre he gomzou, kavet an tu da ober d'eoc'h vouela ho pec'hejou, o devoa sikouret staga Jesus ouz ar groaz ha da greski en ho kalonou ar garantez dleet da eun Doue bet mad aoualc'h, evit rei he vuez, dre varo kriz ar groaz, evit digeri d'eoc'h d'or ar Baradoz, serret abaoue pec'hed hon tad hag hor mamm genta.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
25	C'huevrer. M.-Y. Perhirin, St-Samson,	René Bervas, M.-J. Magueur.
28	— M.-J. Bervas, Sant-Samson,	Goulv. Perhirin, M.-J. Bervas.
4	Meurz. L.-J. Le Dall, Arc'hantel,	Jean Le Dall, Anna Guennégues.
6	— F.-M. Pelleau, Kerguen,	François Fourn, Françoise Pelleau.
12	— A.-L. Nevez, Arc'hantel,	Louis Le Carre, Anne Lesven.
15	— M.-J. Squiban, Kernézoc,	Goulv. Thépaù, Marie Squiban.

Ra vezo meulet Doue.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goasket ar groaz :

- 15 C'houevreur. Alexandre-Joseph Brézol, 51 bloaz, Arc'hantel.
 16 — Marie-Jeanne Magueur, 92 bloaz, Prat-Arc'hantel.
 5 Meurs. Françoise Autret, 38 bloaz, Hospital-Brest.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

- 13 Meurs. Gabriel Morel, 7 miz hanter. Bourg.
 14 — Isidore Trébaol, 5 miz. Milin-Tromenec.
 19 — Almaise Gouzien, 5 miz. Bourg.
 19 — Jean Le Ven, 3 vloaz hanter. Sant-Samson.

Laudate pueri.

SKOL GRISTEN

O deuz labourer ha santel ar guell epad miz c'houevreur

<p>Klas kenta. Kenta rummad.</p>	<p>Joséph Arzel. Marie Brécol. Marie-Anne Cadalen. Euphrasie Maguérés. Germaine Drogou. Madeleine Morel. Joséphine Cong.</p>	<p>Eil rummad.</p>	<p>Marie-Yvonne Kerjean. Catherine Talarmin. Augustine Talarmin. Marie Derrien. Marie Taloc. Marie Jaouen, Kérincuff.</p>
<p>Eil rummad.</p>	<p>Marie Vaillant. Ernestine Guéna. Pauline Morvan. Joséph Kerros. Gabrielle Perchoc. Augustine Pondaven. Denise Talamin. Désirée Maguérés.</p>	<p>Trede klas. Kenta rummad.</p>	<p>Marie-Yvonne Cong. Marie-Yvonne Perchoc. Marie-Anne Guéna. Marie Jaouen. Marie Balcon. Catherine Kermorgant. Louise Héliès. Madeleine Prigent. Jeanne Didou. Rosalie Léostic.</p>
<p>Eil klas. Kenta rummad.</p>	<p>Victoire Guizou. Rosalie Croguennoc. Joséphine Le Borgne. Marie-Yvonne Marzin. Marie Squiban. Pauline Cong.</p>	<p>Eil rummad.</p>	<p>Madeleine Cadalen. Jeanne Brécol. Phlômène Cornen. Rosalie Croguennoc. Louise Squiban. Joseph Castel. Claude Talarmin.</p>
<p>Eil rummad.</p>	<p>Marie Perchoc. Louise Nédélec. Anne-Marie Brécol.</p>		

MIZ EBREL

Ep ad ar miz, katekismou evel er c'horaiz.

1. Er meur-ze e vezo kaset ho fask d'ar re glanv e karter Arc'hantel ha lavaret an offerenn da 7 h. e chapel St-Gonvel evit Herveline Guéna.

2. Er merc'her-ze, offeren da 6 h. hanter e chapel Kerzent ha goude e vezo kaset ho fask d'ar re glanv euz ar c'harter.

4. Offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Sakramant da 7 h. nemet kart.

6. Eil sul goude pask. Offeren ha gousperou ar Zul.

13. Trede sul goude pask. Solennite sant Joseph, offeren ha gousperou ar gouel. Eb beza pinvidig nag en henoriou, e c'hellomp beza, evel sant Joseph mignoned da Zoue ha sent braz, m'ar greomp penn da benn hon deveriou a gristen, er stad m'oump galvet da vevanhan.

A zo pedet da ober er zul-ze ho hanter-heur adoration

10 h. 1/2. Jean Bocheur, Kerzent, François-Marie Godebert, Castel, Hervé Bervas, Joseph Talarmin, Kelleret.

11 h. An aotrou Kure, François Jézéquel, Jean Floch, Jean Godebert, bourg.

11 h. 1/2. An aotrou persoun, Pierre Le Hir, René Jaouen, Kernézoc, Pierre Trébaol, Troméneq.

12 h. Jean Lenvec, Kervizinic, Eugène Foll, Langurru, Jean-Marie Hamon, Kerc'hoazoc, Vincent Taloc, Navant.

12 h. 1/2. Vincent Le Gall, Penfoul, Yves Uguen, Traon, Jean-Marie Théréne, Kerc'hoazoc, Nicolas Jaouen, Kérincuff.

1 h. Job Perchoc, Kervéléoc, Yves Le Ven, Kerguérioc, Hervé Coât, Lanhallès, Nicolas Héliès, Kerzent.

1 h. 1/2 Bernard Jaouen, Prigent Autret, Ollivier Daouben, François Cadalen, Trémazan.

20. Pevare sul goude pask. Offeren ha gousperou ar zul.

24. **Disput.** Da 8 h. hanter, ar vugale gant ho eil hag ho zrede pask, da 9 h. hanter, ar vugale n'o deuz great pask ebet hag ar vugale gant ho fask kenta. Ar re-ma a ranko gout eb faot, ha goulen ha respount, ar genta hag an eil loden euz ar c'hatekismou.

Da 1 h. anter. Ar re c'hallek. Oll assamblez.

Da 3 heur, ar vugale gant ho fevare pask. Ar re ma a ranko gout, ouспен ar c'hatekismou ; ho *Angelus*, ho *De Profundis* ha litanioù ar Verc'hez. En dervez-ze ne vo ket a gatekismou.

Kement krouadur a zispulo a ranko gout, eb faot ebet, ha goulen ha respount, al lodennoù en deuz da lavaret.

25. Prosesion sant Marc da 6 h. en dro d'ar vered.

27. Pemped sul goude Pask. Offeren ha gousperou ar zul.

28, 29 ha 30. Rogasionou. Prosesion da 6 h., d'al lun da japel sant Gonvel, d'ar meur-ze da japel sant Samson, d'ar merc'her, en dro d'ar vered.

Prosesion sant Mark ha prosesionou ar Rogasionou a rear, dreist oll, evit goulen grasou Doue var madou an douar. Kaer en devezho an den labourat, he boan a vezo kollet, ma ne deu ket Doue d'er sikour.

Dont ta, unan a bep ti, d'ar prosesionou-ze, evit m'hon dezho digant Doue, iec'heq hag eost founnuz.


AR GROAZ VENN

Kalz tud yaouank a zo bet dija o lakaat ho hano er vreuriez. Ma teu eun nebeudik re all da ober eveldho, e c'houlaoù eb dale, evit ar barrez, dervezioù a beoc'h hag a eurusded.

Kannadik miz c'honeyrer en deuz koustet 26 lur. Bet evit sikour he baea digant A. B., J.-M. Q.; peb a eiz real, X, pevar real, M. G. 16 guennek, C. A. 10 guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



Va Farrisioniz Ker

Tremenet eo amzer ar pask. Al laouenedigez a bare var ho tal, da zul ar C'hasimodo, a ziskoueze sklear aoualc'h, oac'h euruz da veza lakeat Jesus en ho kalonou dre eur gommunion zantel. Amzer a zo bet, ive do kentellia, rak gouezet o peuz, dont bemdez, eul lodennik euz pep ti. Er giz-ze n'euz bet morse re a brez. Komprenet o poa ive penaoz n'euz netra guelloc'h, eget ar gommunion, evit delc'her an Ene yac'h ha krenv, var hent ar Baradoz. Abalamour da-ze, kalz ac'hanoc'h, o deuz goulennet tostaat euz an daol zantel, ouспен eur vech. Pa vezo Jesus en ho kaloun, e vezo easoc'h deoc'h trec'hi enebourien ho silvidigez, delc'her penn d'ho koall ioulou, da dentasionou an drouk-spered ha da douellerez ar bed. Deuit ta, aliez da gommunia var ar bloaz; er gommunion, great aliez, eo e kavoc'h atao nerz, da ziskar kement a glaskfe stourm euz ho silvidigez, ha ma vevit, evelse, e stad a c'hraz, e vioc'h sur, digemeret er baradoz, n'euz forz peur e tenio Doue d'ho kervel.

Eur blijadur eo bet ive, evit ho pastor, guelet ar goazed er Rosera epad suliou ar pask. Perak eul loden vraz anezho ne zalc'hfent-hi ket da zont d'ar zul d'ar Rozera? Ra deuint, da viana, atao er zul mo do kommunit evit lakaat ar Verc'hez, da drukarekaat Doue, assamblez gantho, deuz ar c'hraz kaer o deuz bet o reseo Jesus.

D'an eil sul ar miz, goazed ar Galoun Zakr, pa vez ho zro da ober ho anter-heur adorasion, a raffe ive ar brassa plijadur d'ar Verc'hez o tont d'ar Rozera. Er giz-ze ne jomint ket reir en davarn, da c'hedal ar gousperou.

Communion solannel ar vugale

Bugale ar barrez a rei ho fask solannel d'ar 15 a viz mae. Tadou ha mammou kristen, bembez, betek ma savo eyitho an deiz kaer-ze, labourit da greski feiz ho vugale, da doma ho c'halonnou a garantez evit an Doue en deuz o c'hrouet, evit Jesus-Krist en deuz o frenet gant ar priz deuz he c'hoad var ar groaz, hag a blijo ganthan dont enno gant he gorf, he Ene, he zivinite pa zeint da zaoulina ouz an daol santel. Deskit dezho int euruz da gaout eur retred a dri dervez, evit diazeza guelloc'h c'hoaz, en ho spered, guirioneziou ar relijion, evit o sikour, da nettaat ho Ene a bep pec'hed araok digemeret en ho c'haloun; Jesus-Krist, map Doue, an eil ferson, euz an Dreinded Santel.

En dervez diveza euz ar retred, pa vezo bet pardounet ho fec'hejou d'ho vugale dre an absolven, c'houi ive roit dezho ho pennoz ha reketit dezho chom hed ho buez stard en ho feiz, sentus ouz goulc'hemennou Doue ha re an Iliz.

Da zeiz ar gommunion deuit da zaoulina gant ho vugale ouz an

daol Zantel evit ma reoc'h gantho, en dervez-se, muioc'h eget biskoaz, ar memez kaloun hebken.

Ne deuit ket ive en dervez-se, dre eur banked reir pe re c'hlepet, da zitrei ho vugale d'eus an euruzded a daveont o santout e tougont Doue en ho c'halonou. En dervez kaer-ze Doue da genta epad an deiz; an dillad brao hag ar friko da eil.

Ne ankounac'hait ket ive, penaoz, goude ar gonfirmasion, an Aotrou N'Escop, a roio d'an oll dud a vezo en Iliz, ar pez a c'halver, « benediction papale » a zo stag outhi eun induljans plenier. Kement hini a vezo bet o kovez hag o kommunia, en dervez-se, pe en dervez araok, a c'hello gounit ar c'hraz kaer-ze, gant ma pedo evit hon Tad Santel ar Pap, an Iliz hag an Aotrou n'Escop, araok mont er meaz eus an Iliz.

Ar Retred

Retred ar vugale a gommanso da lun ar Pantekost da 1 h. An oll vugale a ranko kaout eur chapeled, hag ar re o oar lenn, eur c'hantik.

D'ar meurz ha d'ar merc'her ar vugale a vezo en Iliz a benn 7 h.

Piou a ranko heuill ar retred? Ar vugale gant ho fevare, ho zrede, ho eil fask, hag ive ar vugale gant ho fask kenta solannel, da lavaret eo, ar re o devezo bet dek vloaz echu araok ar c'henta a viz genver 1913.

Ar vugale o deuz bet 9 bloaz araok ar c'henta a viz genver 1913, hag a vezo bet resevet, a vezo koufirmet, mez ne deuint ket d'ar retred hag ar paotrezed ne vezint ket guisket e guen.

Galvet e vezint, goulskoude, da zont da goves d'ar merc'her da 9 h. ha da zeski e pe seurt renk e teuint da gonfirmi.

D'ar iaou e kommuniint assamblez gant bugale ar paskou.

Perak ar vugale-ze, ne heuillint ket ar retred?

Abalamour, lod a elche kredi, o deviche great ho fask kenta solannel, n'eo aotret en Escopti, ken na vez bet 10 vloaz araok ar bloaz nevez.

Ar vugale ta, a vez o kommunia da bask ha var ar bloaz hag ar re a vezo konfirmet araok ho 10 vloaz, ne vezont resevet evit-ze, nemet abalamour d'ar bromessa a ra ho c'herent do digas d'ar c'hattekiz mou ken no devezo great ho fevare pask solannel etouez ar vugale.

D'ar iaou, 15 a vae, offeren ar gommunion a vezo da 7 h. a kart. Au offeren bred a vezo kanet da 9 h. anter. Goude an offeren bred, e vezo renevezet promessaou ar vadiziant, lennet an act a gonsekrasion d'ar Verc'hez, roet ar skapular da vugale ar pask kenta solannel ha lakeat ho hano var roll breuriez ar rozera.

Confirmation

Ar gonfirmasion a vez ive d'ar 15 a vae, goude meren.

Da lun ar Pantekost e vo lavaret an heur just.

An Aotrou n'Escop a denio euz Porspoder. Mont a reor di d'he

guere'het, hag a dra zur, tud Landunvez, a vezo joa gantho dont niverus da rei gloar hag enor da genta pastor an Escopti. Diskuez a reint, evelse, e zint kristenien guirion, hag e kendalc'hout da vale var roudou ho zud koz.

Ar mammou, a zigaso ive, d'ar bourg, en dervez-ze, ho holl bugale evit beza beniget gant an Aotrou n'Escop hag dre eno gant Doue e-unan.

Mad eo d'an oll gouzout petra eo ar gonfirmasion ha dreist oll d'ar gerent o deuz bugale da veza konfirmet, evit ma teskiñt dezho petra eo ar zakramant-ze.

Ar gonfirmasion a zo eur zakramant a ro deomp ar Spered-Santel, da lavaret eo an trede persounach euz an dreinded sakr, ha gantha e teu e zeiz donezoun, evit ober kristenien barfet ac'hanomp.

Beza konfirmet a zo beza starteat er feiz. Dre ar vadiziant e vezer great bugale da Zoue ha d'an Iliz, dre ar gonfirmasion e teuer da veza soudarded da Jesus-Christ.

Gouzout a rit ar c'hemm a zo etre eur c'hraouadur hag eun den braz. Ar c'hraouadur en deuz buez, mez n'en deuz tam nerz ebed, an disterra stokaden en diskar d'an douar. An den braz, er c'hontrol en deuz nerz, a zo gouest da c'hourin ha d'en em ziffen dioc'h he enebourien. Mad, ar memes kemm a zo etre an hini n'eo nemed badezet hag an hini a zo ouspen konfirmet. An den n'eo nemed badezet en deuz buez, da lavaret eo eima gras Doue en e galoun, mez evel ar c'hrouadur, eo dinerz hag atao dare da goueza. Pa vez konfirmet avad, eo easoc'h dez'han kaout an treac'h, ha chomm bepred fidel da Zoue, en despèt da oll enebourien he silvidigez. Rak ar gonfirmasion a gresk ennomp gras hor badiziant, da lavaret eo, e ro d'eomp eur skoazel kalz nerzussoc'h evit anzañ hor feiz ha diskouez dre hon oberou, e z'oump kristenien, ha pa ve zoken riskl evidomp da goll hor buez.

Pa ziskennas ar Spered-Santel, var an ebestel, da zeiz ar Pante-kost, o devoue goude muioc'h a sklerijen evit anaout guirioneziou ar feiz muioc'h a nerz evit prezeg an aviel ha gouzant ar poaniou a ioa ouz ho gortoz. Netra ne c'hellaz ho delc'her a za, na persekusion, na merzerenti. Ha, den n'eo gouest da niveri, ar pabed, an Eskibien, ar veleien, hag an dud fidel a bep oad hag a bep stad o deuz abaoe baleet var ho roudou, ha diskouezet d'hor Zalver ar memez feiz hag ar memez karantez.

Setu aze labour ar Spered-Santel er c'halonou a reseo mad sakramant ar gonfirmasion.

Ha, ne ankounac'haomp ket, e teu davidomp en dervez-ze gant he zeiz donezoun. An donezoun-ze a zo plegou mad a laka Doue en hon Ene evit ober deomp dont da veza santelloc'h.

An donezoun a furnez, hon doug da garet ha da zaouri madou an Env ha da zistaga hor c'haloun deuz traou an douar.

An donezoun a skiant hor sikour da goupren guirioneziou ar relijion hag ar pez a c'hell beza talvouduz evit hor silvidigez.

An donezoun a guzul a ra d'eomp choaz e poent hag enti amzer, ar pez a dle servichout da ober ac'hanomp sent.

An donezoun a nerz a vir ouzomp da gaout aoun oc'h anzañ hor feiz pe da falgaloni o vrezelekaat eb eap a enep an techou fall, ar bed milliget hag an drouk-spered.

An donezoun a vouisiegez a ra d'eomp anaout an hent a dleomp da heul evit mont d'ar baradoz hag an danjeriou m'hon euz da ziouall outho.

An donezoun a zevosion a ra d'eomp karet Doue evel hon tad ha kaout plijadur oc'h he zervicha.

An donezoun a zoujans Doue, a laka en hor c'halon eun doujans vras evit Doue hag aoun rak kement tra a c'hellfe displijout d'ezhan.

Pa zeo ken pinvidik e grasou sakramant ar gonfirmasion, sonjit, kerent kristen, gant pegement a evez e tleit prepar ho pugale de reseo, pedit evit ma teuint da veza guir soudarded, Jesus-Krist, ha deuit oc'h-unan gantho d'an Iliz da zeiz ar gonfirmasion. Evelse e tiskouezoc'h dezo sklear, e fell deoc'h e vent eveldeoc'h, hed ho buez, tud a feiz krenv, hag a ouezfe he difen e peb mare, e peb leac'h ha dirak an oll.

Goulen Brard ha Dessoie

Brard a zo eun depute, hag a bed ar c'houarnamant da ober eul lezen nevez evit klask miret ne vo ken digoret a skoliou kristen er parrezion, no devezo ket 3,000 den da lavaret eo e 33,000 parrez var 36,000.

Dessoie, ive depute, a bed ar c'houarnamant da ober eul lezen hag a forso an tadou hag ar mammou, dindan boan a amand hag a brisoun, da gas ho bugale d'ar skol ha pa deuffe ar mistri da lakaat, etre ho daouarn, levriou a enep ar feiz, pe da zourna geier a enep ar relijion gatolik. An dud vad o deffe disaliet ar gerent dre c'hrous, da gas ho bugale d'ar skoliou-ze a vezo ive kastiset dre amand pe dre brizoun.

Oll gristenien ar vro, a c'houlenn dre (une pétition) ne vo ket votet eul lezen hag a roje aotre d'ar mistri a vije troet a enep ar relijion, da zistruja ar feiz e kalonou ar vugale fiziet ennho. Er Finistère 140,000 den oajet a ouspen 21 bloaz o deuz dija roet ho sinatur a enep al lezenno-ze.

GRAE ER VERED

O deuz bet ar vadelez da zigas grae d'ar vered araok ma teu an Aotrou n'Espok:

- | | |
|----------------------------------|---------------------------------|
| 1. André Uguen, Traon. | 6. Victor Cadalen, Kelleret. |
| 2. Basti Gélébart, Kergastel. | 7. Jean Cloarec, Kerzent. |
| 3. Pierre Héliès, Kermajeau. | 8. Yves Le Borgne, Kerc'hoazoc. |
| 4. Gilles Guennégues, Kermajeau. | 9. François Hamon, Kerc'hoazoc. |
| 5. Pierre Cadalen, Kelleret. | 10. Jean Taloc, Kerc'hoazoc. |

- | | |
|-------------------------------------|------------------------------------|
| 11. Martial Habasque, Streat-Doun. | 19. Jacques Perhirin, Kerc'hoazoc. |
| 12. Joseph Jaouen, Kerléo. | 20. Bernard Jaouen, Cave. |
| 13. J.-M. Caolour, Saint-Gonvare'h. | 21. Jacques Talarmin, Trémazan. |
| 14. Goulven Godebert, Castel. | 22. Job Minguay, Poullouarn. |
| 15. François Foll, Streat-Lan. | 23. Yves Jaouen, Landourzan. |
| 16. François Morvan, Kérincuff. | 24. Yves Magueur, Saint-Samson. |
| 17. Louis Lesvenan, Kérincuff. | 25. Jean Calalen, Saint-Samson. |
| 18. François Théréné, Kerc'hoazoc. | |

Ra deuo Doue d'ho faea, ha ra bedo evitho en env an oll eneou, dispartiet dez ar c'horfou a c'hed er vered, pignat er baradoz, dez ar vam diveza.

SKOL GRISTEN

O deuz labourer ha sentet ar guellu epad miz mours

Klas kenta.	Kenta rummad.	Eil rummad.	Joséphe Arzel.	Eil rummad.	Suzanne Léostic.
			Marie Brénéol.		Yvonne Magueur.
Eil rummad.	Eil rummad.	Trede klas.	Marie-Anne Cadalen.	Kenta rummad.	Marie-Anne Guéna.
			Germaine Drogou.		Philomène Perchoc.
Eil klas.	Kenta rummad.	Eil rummad.	Euphrasie Maguerez.	Eil rummad.	Louise Magueur.
			Joséphine Conq.		Marie-Yvonne Pérès.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Madeleine Morel.	Eil rummad.	Marie-Yvonne Perchoc.
			Marie Déniel.		Philomène Bossard.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Bernadette Vaillant.	Eil rummad.	Marie Jaouen.
			Marie Vaillant.		Marie-Yvonne Croguennoc.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Joséphe Kerros.	Eil rummad.	Philomène Cornen.
			Marie-Anne Talarmin.		Louise Squiban.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Gabrielle Perchoc.	Eil rummad.	Marie-Yvonne Déniel.
			Victoire Guiziou.		Joséphe Talarmin.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Marie-Yvonne Marzin.	Eil rummad.	Jean Guéna.
			Joséphine Le Borgne.		Françoise Brénéol.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Pauline Conq.	Eil rummad.	François Jaouen.
			Marie Squiban.		Gabriel Conq.
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Catherine Talarmin.	Eil rummad.	
			Augustine Talarmin.		
Eil rummad.	Eil rummad.	Eil rummad.	Marie Taloc.	Eil rummad.	

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz

	PAEROUN	MAEROUNEZ
23 Meurs.	Jean-Allain Le Guellec, Arc'hantel.	Jean Le Guellec, Aline Le Menn.
25 —	Jean-F.-M. Didou, Kerzent.	Jean-F. Didou, Jos. Le Borgne.
4 Ebrel.	Jean François Floc'h, bourk.	François Lunven, Jeanne Floc'h.
5 —	Yves Appriou, Créac'h.	Pierre Pellen, Yvonne Allegot.
7 —	Madeleine Jaouen, bourk.	Hervé Jaouen, Madeleine Jaouen.
10 —	Jean-Marie Marzin, Bédiez.	Jean-M. Marzin, Marie Lhostis.
11 —	Jean-Marie Morvan, Kérincuff.	Jean Mao, Jeanne Y. Corfa.
1 Ebrel.	<i>Kristeniet</i> : Kraouadur Stéphan, Arc'hantel.	

Meulet ra vezo Doue.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet unanet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe en terri

- 8 Ebrel. Jean-François Bars, Brest, ha Suzanne Guennégues, Créach.
15 — Pierre Magueur, Kérincuff, ha Marie-Françoise Jaouen, Kérincuff.

Patet, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goasket ar groaz :

- 30 Meurs. Annette Gélébart, Kelléron, 87 vloaz.
5 Ebrel. Bernadette Kerjean, Kelleret, 33 vloaz.
9 — Yves Balcon, Kerléo, 41 vloaz.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

Jean-Marie Guéna, Sant Gonvare'h, 14 miz.

Laudate pueri.

MIZ MARI

Evit beza treac'h d'hon techou fall, evit ne vo ket flastret an Iliz gant he enebourien, en em erbedomp ouz ar Verc'hez glorius Vari, e deuz brusunet penn an drouk-spéred en eur lakaat er bed, hor Zalver Jesus-Krist, map Doue, en em c'hreat den, maro var ar groaz evidomp, ha choimet ganeomp e sakramant an aoter evit delc'her, dre ar gommunion, crenv hon ene var hent ar baradoz.

Greomp ta oll miz Mari. Ar re zo er bourk a deuo d'an Iliz da 8 h. nemet kart, ar re zo e Kerzent a ielo d'ar chapel. Ar re all a rei eur beden en o zi en enor d'ar Verc'hez hag a lenno eur gentel e leor miz Mari, ha goude beza selaouet gant evez, e pedint ar vamm vad-ze da lakaat da vleunia en ho ene ar vertuz e deuz ar muia plijet dezho er gentel o deuz klevet.

MIZ MAE

1. Gouel an Ascension pe Hor Zalver e pignat en Env. Offeren ha gousperou ar gouel. Offeren vintin e Kerzent hag er Bourg da 6 h. Offeren bred e Kerzent da 10 h. Ar prosesion a ziblaso euz ar Bourg da 9 h. Heuil ar prosesion evit mont ha dont o pedi hag o kana. Den ne vezo mezo, dreist oll etouez ar re o devezo an henor da zougen an anseignou. Rei skouer fall er prosesion a denfe disme-gans an estranjourien, var ar barrez. Gousperou da 2 h. hanter.

2. Guener kenta. Offeren ar Galoun Sakr da 6 h. anter, bennoz ar Sakramant.

4. Sul varlerc'h ar Iaou-Basq. Gouel Jeanne d'Arc. Offeren ar gouel, gousperou translasion sant Corentin ha sant Paol. Dre ar Frans oll, e vezo great gouel Jeanne d'Arc gant levenez hag ar zantez a vezo pedet da zelvira an Iliz d'euz he enebourien.

11. Sul ar Pantekost. Nao dervez araok e koumanso navet ar Spered-Santel evit goulen dreizhan ma tistroio ar Saozon da feiz ho zadou kos.

12. Lun ar Pantekost. An offisou evel d'ar zul.

D'ar 14, d'ar 16 ha d'ar 17, yun ha vijil ar pevare amzer.

18. Sul an Dreinded. Pardoun mud Kerzent. Ar pedennou a gommanso da 4 h. ; goude e vo great an nao dro d'ar chapel e prosesion, lavaret ar chapeled, great ar brezegen, lavaret an offeren var dro 5 h. hanter, ha roet bennoz ar Sakramant. Dont da goves d'ar sadorn goude mern, evit ne dei bet an oll grasou gant ar belerined estranjour.

An offeren-bred a vezo da 9 h. Rosera da 2 h. ha gonsperou da 2 h. anter.

25. Gouel ar Sakramant. Proseñion ar Sakramant goude an offeren-bred. Heuill oll ar prosesion. En distro, ar Sakramant a jomo exposet betek fin ar gonsperou.

A zo pedet da ober en dervez-ze ho hanter heur adoration :

10 h. 1/2. Jean Trébaol, Béliez, François Guennégues, Kelléron, Joseph Jaouen, Kerléo, Yves Richard, Sant-Samson.

11 h. An aotrou Persoun, Jean-Marie Pondaven. Alexis Salaun, bourk, François Jézéquel.

11 h. 1/2. Dimezellet ar skol gristen.

12 h. An aotrou Mear, Jean Guennégues, Kernézoc, Auguste Le Borgne. Pourane, François-Marie Guennégues, Créach-Goriou.

12 h. 1/2. Jacques Foll, Langurru, Jean Le Ven, Kerguérice, Jean Taloc, Kerc'hoazoc, François-Marie Cloatre, Kervéon.

1 h. Jean-Marie Quémeneur, Traon, Pierre Héliès, Kermajeau, Pierre Cadalen, Kelleret, Yves Le Ven, Sant-Samson.

1 h. 1/2. An aotrounet, Paul Salaun, Victor Marzin youank, Félix Brézel, Prosper Jacq, Archantel.

2 h. Rozera, hag heur a adoration, evit oll dud ar barrez.

Hini deuz ar re a deuo d'ar gonsperou, ne vankint da zont d'an heur a adoration-ze, ha Jesus n'en devezo ket da ober d'eomp, ar rebech a reas d'he ziskibien, er jardin Olivez, ne ket falvezet-ganeoc'h beilla, eun heur assemblez, ganen.

Epad ar sizun, offeren ar Zakramant da 6 h., ar Zalud da 8 h. nemet kart.

Bemdez e touio a bep ti, unan bennag d'an offeren-ha da gommunia.

Pebez dudi evit kaloun Jesus, ma teuchemp oll da zaoulina euz an daol zantel epad eizved ar Sakramant.

Ar veleñion a vo en iliz kerkent a 5 heur.

Oll yugaligou ar barrez a vezo ive digaset d'ar Zalud evit resco bennoz ho zalver.

PELERINAJ LOURD

Ar pelerinaj-ze a vezo great er bloaz-ma deuz an 8 d'ar 14 a viz even. Lakaat an hanter ar c'henta ho digas ar pevar real evit al lotri. An aotrou persoun a ielo d'ar pelerinaj.

Le Gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4

158 bis

Pardoun Jezus, o chom, leun a vuez, evel Doue ha den, dindan furm eun tam bara, e Sakramant an Aoter.

TRAOU DA STUDIA

E REUNION

AR VUGALE

E PARREZ LANDUNVEZ

D'an 10 a viz Gouere 1913, da 4 heur

GOULENNOU

Ar vugale hag int a oar petra eo Jezuz-Krist?

Peur, e pelec'h, hag evit petra eo deuet var an douar?

Pe seurt burzud en deuz great er pardaez araog e varo, evit gelloud chom var an douar, goude ma vije pignet en env?

Petra eo sakramant an aoter? — Peur, ha gant piou, hag e pelec'h eo bet great evit ar vech kenta, sakramant an aoter?

Gant piou hag e pe boent euz an offeren e vez great, brema, bemdez, Sakramant an Aoter? — Pa en deuz lavaret ar beleg, da vare ar gorreou, var ar bara a zalc'h etre he zaouarn : An dra-ma, eo va c'horf, ha var ar guin a zo er c'halir : an dra-ma, eo va gâd, ha n'euz mui na bara, na guin var an aoter, hag chenchet int e korf hag e goad Jezuz-Krist? Daoust ha goude ar jenchamant burzuduz-se, furm, liou ha blaz ar bara hag ar guin a jom atao? — Hor feiz hag i a ra deomp kredi penaoz dindan ar

spesou-ze pe an doare-ze a vara hag a vin, ema en guirionez korf ha goad Jezus-Krist? — Jezus-Krist hag hen a zo oll dindan spesou ar bara hag oll dindan spesou ar guin, hag oll dindan peb loden euz ar spesou? Perag an dra-ze? — Jezus-Krist hag hen en deuz great Sakramant an Aoter, dreist oll evit tri-zra? Pere eo an tri dra-ze?

I. — Evit chom ganeomp en Tabernakl

An hostiou konsakret, chenchet e korf, goad, ene ha divinite Hor Zalver Jezus-Krist, hag int a vez lakeat en eur voest arc'hant galvet sibouer, hag ar sibouer hag hen a vez gorrenet en tabernakl, eun arbelik hag a zo a zioc'h an aoter? Hag en a vez dalc'het eur voil noz deiz var an tabernakl evit rei da anaout ema Jezus-Krist eno? Perag e vez avechou guenn, avechou ruz, avechou guer, avechou violet?

Ma man Jezus-Krist e chom en tabernakl evit selaou hor pedennou, hor c'harga euz he c'hrasou, goulen pardoun evit hor pec'hejou, ha neo ket eun dever a anaoudegez vad evidomp, ober bizit dezhan aliessa ma c'heller, hag en trugarekat gant kement a feiz hag a fizians, evel p'her guelfemp var an douar o veva en hon touez? — Petra dle ar vugale da ober pa zeont da eun iliz da bedi dirag Jezus en tabernakl, dirag Jezus pa vez lakeat azioc'h an tabernakl, a vel d'an oll, pa vez roet bennoz ar Zakramant, pa vez douget e prosesion, pa vez kasset d'ar re glanv?

Ha diskouez a c'heller c'hoaz karantez da Jezus, o kae-
raat an iliz, he di; o kempen an aoteriou, e diabarz an
iliz, pe en dianveaz, pa vez great prosesion ar Sakramant
pe ar Galoun Sakr?

Ha plijadur a ra da Jezus ar vugale a laka ho ano en
abostolaj, e breuriez voazed ar Galoun Sakr?

II. — Evit servichout da vagadurez d'an Ene

Penaoz e servich Jezus-Krist da vagadurez d'an ene? —
Oc'h institui Sakramant an Aoter dindan spesou ar bara
hag ar guin, Jezus-Krist ha n'en deuz ket diskouezet sklear
eo ar gommunion ken talvouduz magadurez evit an Ene
evel ma zeo ar bara evit ar c'horf?

Ha tostaat a c'heller bemdez ouz an daol zantel, pa vezer
e stad a c'hraz, ha pa c'hoantear kommunia evit ober pli-

jadur da Zoue, en em unani strissoc'h ganthan dre ar
garantez hag ober implij euz al louzou divin-ze ouz sem-
pladurez ha defaotou an Ene? — Hag red eo kommunia
dindan boan a varo, ervez ar c'homsou-ma, euz Hor Zal-
ver : « Ma ne zebrit korf map an den n'ho pezo ket ar vuez
ennoc'h ». Mervel a reot da vuez ar c'hraz ha n'he c'hellot
ket mont d'an Env?

Ar vugale, kerkent hag m'ho deuz skiant, da lavaret
eo vardro 6 pe 7 vloaz, hag int a dle kommunia, kelkouz
hag ar re vraz, da vihana da bask ha pa vezont en danjer
a varo, gant ma c'hanavezint an dizevelediguez a zo etre
ar bara a zebront hag an hosti zantel? — Hag int a dle
kommunia aliez, bemdez m'ar gellont ervez ali hon Tad
santel ar Pap?

E pe seurt stad e rank beza ar c'horf evit kommunia
ervad? Perag var iun? — Hag kommunia a c'heller heb
beza var iun pa vezer goall-glanv? — Pa jomer pell klanv
var ar guele, hag sonjal a rear e c'heller kommunia meur
a vech? Hag evit-se Hon Tad Santel ar Pab hag n'en deuz ket
aotreet kommunia eb beza var iun?

E pe seurt stad e rank beza an Ene evit kommunia ervad?
Pe seurt frouez a zoug eur gommunion vad? — Petra
ranker da ober araog ha goude ar gommunion? — Pa ho
deuz ar vugale kommunit hag guelloc'h e vezont da zenti,
da bedi, da labourat? — Hag kommunia a reont d'ar guener
kenta ar miz? da zeiz bloaz ho badiziant? da c'houel o
zent patroun? — E sizun ar Sakramant, d'ar (c'harante-
heur) da viz Mari, miz ar Galoun Sakr, miz ar Rozera,
evit gounid an induljansou? — Hag eur pec'hed braz eo
kommunia e stad a bec'hed marvel?

III. — Evit en em ginnig e sakrifis da Zoue e dad

Ar vugale hag int a oar penaoz eo en offeren, eo e n'em
ginig Jezus-Krist e sakrifis da Zoue he dad? Petra eo an
offeren? Mar deo ta sakrifis an offeren ar memez sakrifis
hag hini ar groaz, ma ro deomp perz e meritou maro kris
Jezus var ar c'halvar, ha ma tired neuze beteg hon Encou
ar goad en deuz skuillet evidomp var ar groaz, gant pebez
evz ha pebez devosion ne dleomp-ni ket en em delc'her
epad an offeren? — Ar vugale hag int a ia bep sul d'an
offeren abaoe ho 7 vloaz? — Ha koumpren a reont
penaoz mankout d'an offeren dre ar faot a zo eur pec'hed

marvel a raffe dezho mont da zevi da dan an ifern, ma varfent heb beza bet ar pardoun deuz ar pec'hed-ze, dre eur govesion vad? — Ha mont a reont ive d'ar gousperou? Pe seurt digareziou o deuz da vankout d'ar gousperou? — Hag ne deont ket neuze e koumpagnunez fall? — Hag mont a reont gant joa d'an offeren var ar sizun? Ha gouzout a reont ped loden a zo enn offeren? Petra ra ar belek d'an Introit, d'an offertouer, d'ar gorreou, d'ar gommunion? Ha lakaat a reont evez ouz ar pez a dremen var an aoter? Ha kana a reont?

Hag ne glaskont ket en Iliz eur plas distro evit c'hoari ha kaozeal?

Hiviziken hag klask a raint eur plas evit gullet ar beleg ous an aoter, hag evit klevet guello'h ar prezegennou?
Hag ne glaskont ket en Iliz eur plas distro evit c'hoari ha dall hiroc'h eged an oll oberou mad all, pe guir e deuz eun dalvoudeguez heb muzul?

Da be seurt offeren e deuz c'hoant an Iliz e zafent? Perag d'an offeren bred, ha d'ar barrez?

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 6 Junii 1913.

A. COGNEAU,

Vicaire Général.

Pardoun Jezus, o chom, leun a vitez, evel Doue a den, dindan furm eun tam bara e Sakramant an Aoter.

TRAOU DA STUDIA

E REUNIONOU

An Tadou hag ar Mammou

A FAMILL

E Parrez Landunvez

D'AR ZUL 13 A VIZ GOUERE 1913

Da 1 heur anter : Reunion ar mammou a famil e klaz bras ar skoll gristen.

Da 1 heur anter : Reunion ar merc'hed yaouank e porz ar skol gristen.

GOULENNOU

Divar benn anaout Sakramant an Aoter

1) An tadou hag ar mammou a famil, hag int a laka ho foan da studia ha da gompren mad teir gentel ar c'ha-tekiz divar benn sakramant an aoter, ar gommunion, an offeren (34°, 35°, 36° kentel)? — Hag sonjal a reont e rantik hiviziken deski an teir gentel-ze d'ho bugale, koulz lavaret ken abred hag ho c'hreansou, pe guir evel mo devezo ar vugale-ze skiant, e vezint galvet da gommunia? — Hag penaos e kommuniint gant frouez ma na anavezont ket

petra eo sakramant an aoter, ar gommunion, an offeren? Hag ma c'hoar an tadou hag ar mammou petra eo sakramant an aoter, ar gommunion, an offeren, hag ober a reont an deveriou a c'houlennont digantho?

SAKRAMANT AN AOTER

1) Pa dremenont a biou da eun Iliz, hag mont a reont ebarz da zaoulina eur pennadik dirak an tabernakl da drugrekaat Jezus da veza chomet eno evit selaou ho fedennou, servichout da vagadurez d'ho ene hag en em ginig evitho en offeren, evel guechall var ar c'halvar, e sakrifs da Zoue he Dad?

Ar re a zo tost d'an Iliz, hag ho deuz amzer, hag mont a reont bemdez da zaoulina dirak an Doue kuzet dindan spesou ar bara evel ma zeont da velet eun tad, eur breur, eur mignoun karet, eun den prest da ober vad dezho? — Pa n'ho deuz ket a amzer, da vont en Iliz hag saludi a reont Jezus, hag ober a reont sin ar groas en eur dremen e kichen?

Hag rei a reont ho aluzen evit kaerât an Iliz, ti an Aotrou Doue en ho farrez?

2) Deiz gouel ar sakramant hag ar galoun sakr, hag poania a reont da gempen an tiez, an aoteriou savet dianveaz an Iliz? Hag heuill a reont ar brosesion? pe jom a reont da zellet, heb mont memez var ho daoulin pa dremen Jezuz dirazho? — Hag digas a reont bemdez unan bennag d'euz ho zi d'an offisou ha da gommunia epad sizun ar sakramant ar (c'harante heur). — Hag daoulina a reont pa dremen Jezuz dirazho o vont da vaga eun den klanv? — Hag kempen a reont kramp an den toc'hor? — Hag pourchas a reont ar pezh a zo red evit lidou ar gommunion hag an nouen? — Hag lavaret a reont d'ho bugale, pa c'houlennont digantho petra eo an ti braz ha kaer a zo er bourg gant eun tour en e benn, eman ennan o chom, didan furn eun tam bara, Jezus Mab Doue, ganet evitho e kraou Bethleem ha maro var ar groaz evit digeri dezho dor ar Baradoz? — En deuz Jezus mall e vent braz aoualc'h evit mont d'an offeren, en deuz mall da zisken en ho c'halonou dre ar gommunion evit ho lakaat da veza furroc'h ha star-toc'h var hent ar Baradoz?

3) Hag lennet e vez en ho ziez dirak ho bugale hag ho domestiked leoriou a laka anaout ha karet muioc'h sakramant an aoter, evel ma zeo : Deomp da Jezus er sakramant; penaos karet Jezuz; leorik dourn goazed ar galoun sakr; kannad ar galoun sakr; ar bederved loden a imitasion Jesus-Christ?

AR GOMMUNION

1) An tadou hag ar mammou hag int a respount da c'hoant Jezus o chom gantho en tabernakl evit maga ho Ene? —

Hag dont a reont aliez da rei ar bevans burzudus-ze d'ho Ene a raje dezho beza essoc'h treac'h d'ho ioulou fall, d'an drouk spered? — Hag dont a reont da gommunia d'ar guener kenta ar miz? Ped ho deuz great ho nao guener kenta? — Kommunia a reont da zeiz bloas ho badiziant, ho eured, maro ho zud, da zeiz gouel ho zant patroun, pa deuont d'ar servichou, d'ar (c'harante heur); da zizun ar sakramant; epad miz Mari; miz ar galoun sakr; miz ar rosera evit gounit an induljansou staget ouz ar pedennou-ze? — Hag int a bed bemdez evit an Iliz, hon tad santel ar Pab gant an intansion da c'hounid an induljansou a c'hellont da gaout en dervez-se?

2) Hag pedi a reont araok ha goude ar gommunion? Muioc'h pe nebeutoc'h ervez ho amzer. — Furroc'h int deiz ar gommunion, poania a reont muioc'h da derri ho fiegou fall?

3) Ha poania a reont ho-hunan evit prepar ho bugale da gommunia kerent ha m'o devezo skiant? Lakaat a reont ho bugale da zeski ho c'hatekiz er gear, ha gouzout a reont eo an dra-ze eun dever striz evitho? Hag ho c'hass a reont c'hoaz d'ar skol kristen, pe da diez an dud a ra katekiz a volonteiz vad? — Hag ober a reont ar c'hatekiz dirag oll dud an ti? — Beilla a reont evit ma ne vankint ket da skol an Iliz?

4) Hag digas a reont aliez gantho ho bugale yaouanka da gommunia? ar re vrasoc'h? — Ho faotred hag ho merc'hed yaouank? — Ho domestiked?

OFFEREN

1) An tadou hag ar mammou a famill ha mont a reont oll d'an offeren d'ar zul? Hag peb tra a zo renket en tiegez evit ma ze pep hini d'he dro d'an offeren bred, ha d'ar gousperou? — Hag gouzout a reont penaos ne c'heller ket mankout d'an offeren d'ar zul dindan boan da ober eur pec'hed marvel; nemet eur rezoun vraz benag a viche? — An digareziou didalvez n'ho devezo pouez ebet e barne-diguez Doue? — Pa vezont en offeren hag klask a reont guelet ar beleg ouz an aoter, selaou ar prezegennou a vez great? — Lenn a reont ho leor, pe lavaret a reont ho cha-plet? — Pe kaozeal a reont; pe gortoz, ho divreac'h kroachet, hag heb peden ebet, e ve echu an offeren? — Hag mont a reont d'an davarn eleac'h mont d'ar gousperou? — Delc'her a reont re all da c'hoari en ho zi epad an offisou?

2) Hag digas a reont bep sul ho bugale d'an offeren? d'an offeren bred adalek ho 7 vloaz? — Hag ho lakaat a reont en ho c'hichen, ma n'ho deuz na mistri na mestred kristen d'ho diouall? — Beilla a reont varn'ho ma maint ouz ar balustrou? — Digaset e vezont ive d'ar gousperou evit ho zenna a gompagnunez ar gamaraded a nebeut a feiz? — Hag poania a reont da chacha an dud lezirek d'an offisou da zul?

3) An tadou a famill hag int a zo en abostolaj ar beden; e breuriez voazed ar galoun sakr; en emgleo union ar gatoliked; en emgleo an tadou a famill? — Hag aketuz int da ober ho adoration en dervez merket; da zont da reunion an emgleoiou pa vezont great er barrez pe er c'hanton?

Ar mammou a famill hag int a zo e breuriez ar mammou kristen, e breuriez ar gelennadurez kristen a zesko dezho penaos sevel mad ho bugale hag ho kentcha surroc'h var hent ar Baradoz?

4) An tadou hag ar mammou a famill ha gouzout a reont reiza mad ho ziegez, evit ma ze da zul ho merc'hed yaouank da reunion bugale Mari? Ho faotred yaouank da ober ho adoration ha da reunion emgleo ar gatoliked?

5) Hag skriva reont d'ho faotred er servichi evit ho alia da vont d'an offeren; da ober ho fask? — Pa deuont e permission ha kaset e vezont da goves ha da gommunia?


6) Hag alia a reont ho faotred yaouank, sperdek ha troet var an devosion da vont da veleien? — Ha ne gaozeont ket a enep ar veleien dirazho? — Ha ne ket an aoun rak an dispign, rak goaperez an dud, a vir outho da boulza ho bugale da studia evit beza beleien?

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 6 Junii 1913.

A. COGNEAU,

Vicaire Général.



PELERINAJ LOURD

Distroet deac'h a belerinaj Lourd, he galoun leun a levezeg hag a anaoudegez vad, aozer ar *C'hannadik* a drugareka an Introuñ Varia Lourd euz ar grasou puill en deuz skuillet en he Ene hag en Eneou ar seiz pelerin all, euz ar barrez, a ioa assamblez ganthan, hag e fed stard da genderc'hel evithan he madelez evit ma skrivo el leorik-ma ar c'homsou a denno he oll barizioniz da ober eur retred vad, o lakaio e stad a ranker evit gounit penn-da-benn induljans ar jubile, he fedi a ra c'hoaz da zigas oll dud ar barrez da ober, an 13 a viz gouere, ar gouel ar c'haera en enor d'he Map Jezuz, kuzet dre garantez evitho, dindan furm eun tamik bara, e sakramant an aoter.

J U B I L E

Ar jubile kenta, a zo bet ambannet, gant Doue e unan, dre c'hinou Moysez. Setu, aman, eme Doue da Voysez, unan deuz ar gourc'hemennou a roc'h d'ar Juzevien. Bep 50 vloaz e vezo en ho zouez eur jubile pe eur bloavez a laouenedigez hag a ziskouiz. Epad ar bloaz-ze, ne vezo gelllet nag hada, na destum; an douar koulz hag an dud a eano. Ouspen, an den en devezo guerzet he liberte, hag a vezo sklavour, a deuo da veza adarre mestr dezhan he-unan, an hini en devezo dle n'en devezho mui izoum d'ho faea; an oll douarou, an oll madou guerzet pe gollet en eun doare bennag, a zistroio a nevez d'ho mistri kenta.

Evel oll oberou an Aotrou Doue, ar jubile a ioa eun dra gaer meurbet, miret a rea oc'h ar famillou d'en em zispartia ha da goll evit atao ho zammik danvez; den n'en devoa leac'h d'en em staga re oc'h madou an douar, rak oc'h ho frena, e tlie derc'hel sonj, e tristrojent d'ho ferc'hen da vloaz ar jubile. Diskouez a rea ive oa Doue, mestr var bep tra hag he reiz an traou, evel ma kar.

Ar jubile euz al lezen goz, pegen talvouduz bennag oa, a zo goulskoude, pell varlerc'h ar jubile, a ro brema, an Iliz da c'hounit d'he bugale, eur vech an amzer.

Hag en guirionez, ar c'hristen a c'hounit penn-da-benn graz ar jubile, a vel o terri ar chadennou pouner en dalc'he, marteze, sklavour d'an drouk-spered, a gav a nevez ar meritou hag an oberou mad a c'helle beza kollet dre ar pec'hed marvel, hag a vez dizamet deuz an dle a jom, ar peurlieassa, da baea da Zoue goude an absolven.

Induljans-plenier ar jubile a ro ta an diskarg euz an oll boan a zo, ar peurlieassa, c'hoaz dleet d'ar pec'hed goude an absolven. Ar c'hatekismou e galv, ar gaera euz an Induljansou, a ro ar pabeb da c'hounit, eur vech an amzer, d'an oll dud fidel.

Epad ar jubile ar gossou ho deuz muioc'h a c'halloud, rei a c'hellont an absolven euz al loden vrassa euz ar pec'hejou, a zalc'h evitho ho unan, er mareou all, hon Tad Santel ar Pap, hag an Aotrou

N' Escop, ha chench a c'hellont e traou easoc'h da ober, kalz euz ar veniou a ve re denn, evit ar re o deuz ho great.

Beza e zeuz daou seurt jubile. Eur jubile hag a vez roet da c'hounit d'ar bed oll, bep 25 vloaz, hag eur jubile all, a vez roet pe evit eur vro, pe ivez evit ar bed oll, pa zigouez eun dra bennag vraz, evel eur gounid kaer evit an Iliz, pe eur choll ankeniuz bennag evithi.

Jubile ar bloaz-ma, a zo roet, evit rei deomp tro da drugarekaat Doue euz ar peoc'h a roaz an impalaer Constantin d'an Iliz, brema e zeus 1.600 vloaz.

C'huezekved kanved kemennadurez a beoc'h Milan

Plijadur a rei, da lennerien ar *C'hannadik*, kleyet penaoz hag a zourn piou eo en em servichet Doue evit rei ar peoc'h d'an Iliz.

Constantin, c'hoaz paian, a deuaz da veza, goude maro he dad Constans, impalaer var an douarou a c'halver brema: Bro-Hall, Bro-Zaoz ha Spagn. Avi a roaz da Vaxens a c'houarne neuze an Itali hag an Afriq, ha brezel a zavas etrezho.

Constantin a en em lakeaz raktal en hent varzuc'h an Itali. Hogen, eun dervez goude kreiz-deiz, epad ma kerze e penn he soudarded var dro (Chalons-var-Saone) evel ma kreder, eur groaz skeuduz a baraz azioc'h an eol, gant ar geriou-ma a-uz dezhi: « Dre ar sin-ze e c'honezi. » Eun dra ker burzuduz, a zouezas an Impalaer hag he soudarded. En noz varlerc'h, Jezus-Krist en em diskouezas da Gonstantin hag a gemennaz dezhan ober eur banniel pe (drapeau) dioc'h ar groaz skeduz en devoa gullet hag hen dougen e penn he arme.

Constantin a zentaz. Ar c'hrogad braz etre hen ha Maxens a c'hoarvezas e kichen Pont-Melviuz, a zindan mogeriou Roum, — d'an 28 a viz here 312 hag an treac'h a voa da Gonstantin. E miz meur varlerc'h, 313 e voa douget kemennadurez Milan (édit de Milan) a roe ar peoc'h d'an Iliz.

Ar brezel digernez d'an Iliz a veac'h deuet euz he c'havel, en devoue padet 250 vloaz (64-313); oll impalaered Roum, koulz lavaret, an eil varlerc'h egile, a zougas lezennou a varo a eneb ar gristenien.

An Iliz, rouantelez Doue var an douar, n'e devoue guir ebet da skigna ar feiz, na da ober e lidou santel. Evit lavaret an offeren, konna, anterri he bugale, e ranke mont er mengleuziou a zindan kear Roum. Hevelep tra ne dlle ket padout atao, er mare pe vare, Doue a deu da ehuna an traou. Setu petra reaz dre zourn Constantin, setu petra dalvezaz d'ho c'henvreudeur, pedennou, poaniou, goad ar verzerien.

Abaoue kemennadurez Milan, an Iliz da veza ma vez great dezhi atao brezel en tu pe du, e deuz he flaz a zindan eol an Aotrou Doue hag a zirak daoulagad an dud, ha lakaat a c'hello da dalvezout he guir var an Eneou hag ober ar grefidi, roet dezhi gant Jezus pa lavare: iit, kentelliit an oll bobliou, badezit anezho en Hano an

Tad, ar Map hag ar Spered-Santel, deskit dezho guirioneziou ar relijion, hag an deveriou ho deuz da ober evit erruout ar Baradoz.

Petra da ober evit gounit induljans ar jubile? Ober a rankor a boent da boent ar pezh a zo goulennet gant hon Tad Santel ar Pab ha beza e stad a c'hras pa rear an dra ziveza.

Beza e rankor, e Landunvez, bizita 6 guech an iliz parrez en eur ober eur beden bennag en intansion hon Tad Santel ar Pap, hag ivez evit goulenn ma kresko bugale an Iliz katolik, ma tizroio ouz Doue ar re a vev en heresi, er schism, ma vezo union etre ar rouanteleziou, hag ar peoc'h etre ar gristenien. Beza e rankor c'hoaz ober eun aluzen ervez ar beadra, kovez ha kommunia. Ar re ne c'hellint ket ober ar pezh a zo goulennet, a bedo ho c'honvesour da rei dezho eun dra bennag all da ober.

An dud a zo o veachi var vor, pe var zouar, a c'hello ive gounit induljans ar jubile pa zistroint d'ar gear, pe pa vezint erruet e penn ho beach gant ma reint ar pezh a zo gourelhemennet gant hon Tad Santel ar Pap.

Ar jubile a bado deuz an 30 a viz meus, betek an 8 a viz kerzu 1913.

AR RETRED

Evit gounit Indulgans ar jubile e ranker ober e stad a c'hraz an dra diveza goulennet gant hon Tad Santel ar Pab.

Mad, netra n'hor sikouro guelloc'h da garza hon Ene deuz he fec'hejou eget eur retred. Epad daou zervez peb rummad a lezo a gostez labour ar c'horf, afferion an douar, evit sonjal ebken en affer he silvidigez ha voalc'hi he Ene deuz pep pec'hed. Evit he zikour da-ze, en devezo prezegennou great gant ar pevar missionner o devoa kement plijet da dud Landunvez, epad ar mission braz. Euruz int da zistrei en hon touez evit labourat da greski hor feiz, hor fizians e Doue hag hon startaat var hent an Env.

Pedomp a galoun an Introun Varia a Gerzent, sant Gonvel hor patron, hor zent karet Tanguy hag Heodez, evit ma plijo gantho hor sikour da zelaou gant evez ha frouez komzou ar vissonnerien, da zigeri dezho hor c'halonou ha da reseo divar ho muzellou, an absolven, a bardoun ar pec'hejou.

Ra deuo an oll d'ar retred gant eur c'hantik, eur chapeled, ha leoriou santel da lenn.

Reolen ar Retred

Ne deo nemet goude beza pedet kalz ha gant aotre an Aotrou N'Escop hag ar vissonnerien eo en deuz ho pastor, reizet ar retred evel ma zeo merket ama varlerc'h. Er giz-ze e rear brema e kalz parresiou; easoc'h e vez d'ar brezegerien diskouez da bep rummad he zeveriou ervez he oad hag he stad a vuez.

D'ar zul 6 a viz gouere e vo en offeren bred eur brezegenn evit lavaret petra eo retred ar jubile.

Kenta rummad. Ar merc'hed dimezet

Ar paotrezed o deuz great ho fevare pask solemnel, hag an oll merc'hed yaouank ha dimezet, a gommanso ho retred d'ar zul 6 a viz gouere, raktal goude ar gousperou a vo kanet da 2 heur :

Prezegen evit ho goude gousperou, covession ha da 4 heur anter prezegen, pedennou diouz an noz, bennoz ar Sakramant, ger diveza ar missionner.

D'al lun 7 a viz gouere, pedennou euz ar mintin da 7 heur, offeren, examen a goustians. Da 8 h. anter ha da 11 heur nemet kart, prezegennou ; da 1 heur anter chapeled, prezegen hag ive da 4 heur anter, goude pedennou diouz an noz, bennoz ar Sakramant. Covesseat e vezo deuz 5 heur deuz ar mintin betek 7 heur deuz an noz, nemet epad ar prezegennou hag en heur mern.

D'ar meus 8 a viz gouere, da 6 heur anter, offeren ar gommunion, goude tri c'har d'heur evit dijuni, ha prezegen ar berseverans.

Goude ar berseverans, e vezo roet ar vedalen d'ar paotrezed ho deuz roet ho hano evit beza aspirantezed deiz ho fevare Pask solemnel.

Setu ama ho hanoioù :

- | | |
|------------------------------------|---------------------------------|
| Marie Brénéol, Kerriou. | Louise Kerné, Arc'hantel. |
| Marie-Anne Cadalen, Sant-Samson. | Michèle Kerjean, Trémazan. |
| Marie Cloatre, Kervéon. | Marie-Yvonne Lunven, Ti-Pri. |
| Rose Chapalain, Kergouanan. | Marie-Jeanne Magueur, Tour. |
| Louise Forest, Trémazan. | Jeanne Pellen, Kernézac. |
| Philom. Gueanégues, Créac'hgoriou. | Philomène Richard, Sant-Samson. |

Goude ma vezo roet ar vetalen, an 18 aspirantez resevet varlene, a lenno ho act a gonsekrasion d'ar Verc'hez hag a vezo resevet evit atao e renk bugale Mari ha roet dezho reolen ar gongregasion.

Setu ama ho hanoioù :

- | | |
|------------------------------------|----------------------------------|
| Joséphine Le Borgne, Milin-Trez. | Marie-Yvonne Magueur, St-Samson. |
| Françoise Bellec, Traon. | Marie Magueur, Sant Samson. |
| Marie Eliès, Kermajeau. | Marie Magueur, Sant-Gonvarc'h. |
| Marie-Renée Foll, Langurru. | Anna Perhirin, Arc'hantel. |
| Rose Foll, Streat-Lann. | Marie Taloc, Kerc'hoazoc. |
| Marie Renée Floch, Sant-Gonvarc'h. | Marie-Jeanne Trébaot, Berguep. |
| Marie Guéna, Arc'hantel. | Joséphine Talarvein, Trémazan. |
| Herveline Guennégues, Kerc'hoézel. | Catherine Talarvein, Trémazan. |
| Jeanne Guizio, Trémazan. | Olga Vaillant, bourg. |

Eil rummad. An dud dimezet

D'ar meus, da 1 heur anter, e koummanso ar retred evit ar voazed hag ar merc'hed dimezet. Ra deuint oll d'an heur merket ; ma c'hortozont ar merc'her vintin, e kollint an drederen euz ho retred, ha Doue dirak ho nebeud a volonte vad, ne roio ket dezho ar grasou puil, hag ar frouez pinvidik o deffe tennet euz eur retred great penn-da-benn.

Da 1 heur anter chapeled, ha goude ha da 4 heur anter, prezegennou, pedennou diouz an noz, bennoz ar Sakramant.

Koveseat e vezo evel meo merket d'ar rummad kenta evit ar zul goude gousperou.

D'ar merc'her 9 a viz gouere, pep tra a dremeno d'an heuriou merket evit al lun.

D'ar yaou 10 a viz gouere, offeren ar gommunion da 6 heur anter. Tri c'hart-d'heur evit dijunia ha goude prezegen ar berseverans.

Trede rummad. Ar Vugale a 6 vloaz betek ar re o deuz great ho zrede pask solannel hag ive ar re-ze

D'ar iaou da 1 heur chapeled evit ar Vugale, goude e vezint koveseat betek 4 heur anter. Da 4 heur anter e vezo great goulennoù outho divar benn ar pezh a ioa skrivet var ar paper roet dezho pell araok, evit deski guelloc'h petra eo Sakramant an Aoter, an offeren, ar gommunion. Da 5 heur anter pedennoù diouz an noz, bennos ar Sakramant.

D'ar guener da 6 heur anter, offeren ar gommunion, ha raktal perseverans evit ma vezint prest da vont d'ar skol da 8 heur.

Pevare rummad. Ar baotred yaouank ha gantho ar re o deuz great ho pevare pask solannel

D'ar guener da 1 heur anter chapeled, ha pep tra all evel d'ar meurs goude mern.

D'ar sadorn 12 a viz gouere, pep tra evel d'al lun.

D'ar zul 13 a viz gouere, pardoun Jezus, o chom leuz a vuez, dindan furm eun tam bara, e Sakramant an Aoter.

Setu ama penaoz e vezo renket an traou evit ar gouel kaer-ze :

Da 5 heur ha da 5 heur anter e vezo offerennoù evit ma c'hello eassoc'h kommunia ar re o devezo great o retred gant ar c'henta, an eil, pe an trede rummad.

Da 6 heur, ar gommunion evit ar pevare rummad.

Goude an offerennoù vintin, ne dei den d'ar gear, nemet ar re a zo red evit dioual an ti.

Da 8 heur anter e vezo kanet an offeren bred hag embannet ar pezh en deuz lavaret hon Tad Santel ar Pap divar benn kommunia aliez, ha divar benn oad ar vugale da gommunia evit ar vech kenta.

Da 10 heur, an heur a adorasion en Iliz evit ar merc'hed dimezed hag ar merc'hed yaouank. Epad an heur-ze e vezo kanet ha prezeget.

Da 10 heur ive, reunion ar voazed dimezed, e klas braz ar skol gristen, ha reunion ar baotred iaouank dindan lab ar skol gristen. Epad eun heur e vezho kaezet euz Sakramant an Aoter, ar gommunion, an offeren. Ar voazed a respounto guella ma c'hellint d'ar goulennoù skrivet dezho, pell araok, var eur feuillem baper evit m'ho devezho amzer d'ho studia ha d'ho c'houmpren.

Da 11 heur e vior libr da vont da vern betek 1 heur anter.

A zo pedet goulskoude da ober eun anter-heur adorasion :

11 heur. Yvon Floch, Job Godebert, Guillaume Lescop, François Jézéquel.

11 h. 1/2. Dimezellet ar skol gristen.

12 heur. Ar vugale e pansion er skol gristen.

12 h. 1/2. Françoise Morel, Clémentine Allouer, Françoise ha Jeanne Floch.

1 heur. Jean Guenneguès, Yves Menguy, Jean-Marie Godebert, François Jaouen.

Da 1 heur-anter, heur a adorasion en Iliz evit ar voazed dimezed hag ar baotred yaouank. Epad an heur-ze e vezo kanet ha prezeget.

Da 1 heur-anter ive, reunion, ar merc'hed dimezed e klas bras ar skol gristen, ha reunion ar merc'hed yaouank dindan lab ar skol gristen. Eno e vezint sklerijennet var ho deverioù e kenver Sakramant an Aoter, an offeren, ar gommunion. Ha respount a reint d'ar goulennoù zo skrivet var ar feuillem baper roet dezho araok.

Da 3 heur, e vezo kanet ar gousperou, ha goude great kaera prosesion ar Sakramant a vezo ket e Landunvez.

Oll dud ar barrez hag an estranjourien deuet d'hor gullet, a heuillo ar brosesion o pedi. Bugale ar skol gristen ha bugale Mari a vo araok var diou renk en dro d'an anseignou.

A zo pedet da zougen an de : an Aotrou Mear, an Aotrou Ajant, prezidant ha tenzorier an Iliz.

Al letarnioù : Jean Guillermin ha Jean Talarmin, deuz Gorrékear.

Ar baniel braz : Basti Trébaol, Auguste Pondaven, Archantel ; Jean-Marie Cadalen, Kelleret ; Arsène Vaillant, Bourk.

Baniel abostolaj : Goulven Quivoron, Rochard ; Jean Kerhuel, Milin-Trez ; Jean-Marie Corolleur, Arc'hantel.

Baniel sant Tanguy : François-Marie Jaouen, Kerincuff ; Jean Cadalen, Streat-Lann ; Joseph Foll, Langurru.

Baniel ar Famill Zantel : Jean Perhirin, Penkéar ; Gabriel Menguy, Poullouarn ; Jean-Marie Marzin, Bédiez.

Baniel ar Verc'hez : Amédée Cloâtre, Kerzent ; Pierre Jaouen, Landourzon, Antoine Talarvein, Trémazan.

Baniel bihan : Jean-Louis Cong, Sant-Gonvarc'h ; Alexandre Perhirin, Kerc'hoazoc ; Edouard Talarmin, Sémaphore.

Ar fabriquet a zougo ar c'hroazioù.

Pa vezo distro ar brosesion d'an Iliz, an Aotrou Mear, gant prezidant Conseil an Iliz en tu deou, hag an tenzorier en tu kleiz a deuo er c'heur, evit lenn en hano ar barrez, ar beden aotreed gant an Aotrou n'Eskop evit goulen, pardoun digant Jezus-Krist e Sakramant an Aoter.

Perak hor parrez a rei ar gouel kaer-ze en enor d'ar Zakramant meulet ra vezo

Daoust pegen dister eo sakramant an Aoter da velet, enhan e ma e guirionez korf, goad, ene ha divinite Hor Zalver Jezus-Krist, dindan furm eun tamik bara. Enhan e ma Map Doue. an eil fersoun euz an Drinded Sakr. Doue evel an Tad, ha dre-ze Mestr ha Roue an Env hag an douar. Doue an Tad en deuz roet dezhan oll boblou

an douar en heritaj, hag Hen en deuz ho frenet gant ar priz euz he c'hoad. Pa voue echu ganthan en douar-ma he gefridi, pa zistroaz en Env, Jezuz ne falvezas ket ganthan hon lezel minored var e lerc'h. Dre eur garantez dreist muzul, e zeo plijet ganthan chom ganeomp, nan en eur poltred livet var baper, nan en eur skeuden kizellet er mean pe er c'hoad, mez beo, evel Doue ha den, e Sakramant an Aoter.

Mad, piou a c'hell lavaret en deuz aked, kement a ma c'hellfe kaout, da zeski anaout mad aoualc'h Jezuz-Krist en he Zakramant meulet ra vezo ? Piou a c'hell lavaret e oar mad aoualc'h, petra eo an hosti sakr, petra eo sakrifiz santel an offeren, petra eo kommunia ? Evit deski guelloc'h an traou-ze, eo e teuiio peb rummad d'he dro d'ar c'hlaz bras er skol gristen, pe dindan labar skol. Eno, ar beleg ne brezego ket evel en Iliz. Eun nebeut aliou a roio, ha goude e rei d'an dud ar goulennou a zo skrivet var ar feuillen baper ho deuz etre ho daouarn. Dre an divizou santel-ze, o klevet ar pezh a lavaro an eil hag egile, e velo skleroc'h pep unan he zeveriou e kenver Sakramant an Aoter.

Ha brema c'hoaz, piou a c'hell lavaret ec'h en em blij o kaozeal euz Sakramant an Aoter hag euz an Hini a jom enhan dre garantez evidomp ? Ha ne vezomp ket zoken avichou direspect evithan, direspect en offeren, direspect er gommunion, direspect e prosesion ar Sakramant pe ar Galoun-Sakr ? Ha ne vezomp ket lezirek da vont da Jezuz er gommunion, d'er bizita en tabernakl pa dremenomp abiou an Iliz ?

Kendaze 'ta, e m'aomp e dle hor Zalver. Penaoz en em zizlefa eun tamik ? Oc'h ober, ar voazed d'ho zro hag ar merc'hed d'ho hini, an heur a adorasion d'ar mare merket evit peb rummad.

Epad an heur-ze, a adorasion, hon daoulagad, hag hor c'haloun tro varzu'an hosti sakr savet azioc'h an tabernakl, e adorimp Jezuz o chom enni, Hen anavezimp evit hor mestr hag hon Doue, Hen trugarekaimp euz he oll vadeleziou ha dreist oll da veza chomet ganeomp en douar-ma e Sakramant an Aoter, e c'houlennimp pardoun diganthan euz ar pec'hejou, ha dreist-oll, deuz ar re a reomp a enep ar Zakramant meulet ra vezo, e c'houlennimp an oll grasou a ve talvouduz evidomp hag er pedimp, dreist-oll, da greski hor feiz hag hor c'harantez evithan, e Sakramant an Aoter.

Penaoz e tigollimp Jezuz deuz ienien kalz tud en e genver, e Sakramant an Aoter ? Oc'h henill oll gant mall, ar brosesion gaer, a vezo great, goude gousperou, evit renta honor dezhan ; o vont oll var he lerc'h en eur bedi beteg an Aoter savet e kroasant Kernezoc, ha pa vezo enho, evel en Iliz en distro, savet ar Sakramant evit hor beniga, koz a iaouank, hor glin pleget an douar, e lavarimp : honor, gloar ha karantez da Jezuz an Oan divin, o chom beo, evel Doue ha den dindan spesou ar bara. Dezhan e vesimp epad hor buez ! Dezhan e fell d'eomp beza da heur hor maro.

Deiz konfirmasion bugale ar barrez, an Aotrou n'Eskep a lavare deomp : va bennoz a roan d'ar gouel a reoc'h d'an 13 a viz gouere

evit honor ha deski guelloc'h anaout Jezus-Krist, e Sakramant an Aoter, hini ac'hanoc'h ne jomo eb kemeret perz er gouel-ze a glozet retred ho jubile. Va unan, e vichen deuet d'ar pardoun kaer ze evit diskouez deoc'h va anaoudegez vad, ma n'em bije ket dija promettet konsakri en dervez-ze Aoter vraziliz nevez Sant Mikeal, e Sant-Martin, Brest. Ganeoc'h e vezin, goulskoude, dre va fedennou.

Ha brema, goude ar gouel-ze a raimp oll assamblez, petra a c'hoarvezo ? Hor feiz evit Sakramant an Aoter a vezo krenfeate ha starteat. Gant muioc'h a aked, ni vo troet hed hor buez da garet an offeren, ar gommunion ; ha biken ne zizonjimp, ema Jezuz en tabernakl evit selaou hor pedennou, en em ginig evidomp e sakrifiz da Zoue he dad dre an offeren, hag evit servichout da vagadurez d'hon ene dre ar gommunion.

Hag en eur vont d'ar gear, pa vezo echu ar gouel, a unan gant oll Zent hag oll Elez ar baradoz, o c'hedal ma c'hellimp guele Jezuz gantho e kreiz he c'hloar en Env, e lavarimp : meulet, karet hag adoret ra vezo Jezus-Krist, e Sakramant an Aoter ; brema ha da viken.

GRÆ ER VERED

E skriva er *C'hannadik* diveza hanoiou an dud a volonteze vad o devoa digasset grae er vered, em boa ankounac'heat merka hano François Fourn deuz Sant-Samson. N'em beuz douetans ebet en deuz dija pardounet din va ankounac'ha. Goulskoude, e rankan meuli he garrad, a ioa enhan grae founuz ha brao kenan.

AR GONFIRMASION

En desped d'an avel direol, dervez ar gonfirmasion a zo tremenet mad. Ar vugale, ar furnez o para dija var ho zall, abaoue ho c'hommunion diouz ar mintin, a zo deuet renket mad da gaout an Aotrou N'Eskep, en deuz konfirmet en hor parres 213.

Ra zalc'ho ar vugale, epad ho buez, an Imañ brao en deuz bet peb hini anezho, digant ar paeroun hag ar vaerounez, evit derc'hel sonj deuz an dervez ma zeo deuet ar Spered-Santel davitho gant he zeiz donezoun.

An Aotrou n'Eskep, evel m'ho peuz er c'hlevet, n'en deuz nemet peb meuleudi da rei d'ar barrez abalamour ma e deuz en he fenn voazed ha n'ho deuz ket a aoun o tiskouez int kristenien, pen kil ha troad, hag a oar en em glevet evit diffen guirio Doue hag an Iliz ha feiz ho bugale. Laouen oa, dreist oll, o velet oa bet eun tregont goaz bennag betek Porspoder, ouz hen diambrouk.

Kalz voazed, goulskoude, a ziskoueze eun tam dipit, o veza ma rankent mont e kirri ar re all, abalamour n'edo ket ho c'hezec en

tro evit trolal. N'ho deuz nemet en em gonsoli. Doue n'e c'houlenn diganeomp nemet hor bolontez vad.

Setu ama hanoioù ar re zo bet gant ho c'hirri, ho loañ pe ho bicyclette.

Gant ho c'hirri :

An Aot. Mear hag an Aot. Kure.	Job Minguy, Poullouarn.
Goulven Godebert, euz ar C'hastel.	René Cloatre, Kelléron.
Jean Marzin, Bédiez.	François Jaouen, Kernézoc.
Jacques Trébaol, Bédiez.	Yves Jaouen, Landourzan.
An Aot. Victor Marzin, Arc'hantel.	Basti Gélébart, Kergastel.
Louis Kerjean, Arc'hantel.	Pierre Le Hir, Kernézoc.

Var loañ : Jean Squiban, Kernézoc ; *var bicyclette :* Jean Lenevec, Kervisinic.

Mar deuz ankounac'heat unan bennag, n'en deuz nemet lavaret. Mersi dezho en hano ar barrez.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
20 Ebrel. Jean-Yves Derrien, bourk.	Jean Soubigou.	M.-I. Derrien.
11 Mae. François-Marie Vaillant, Street-Lan.	François Vaillant.	Françoise Foll.
12 — François-Marie Lenevec, Kervisinik.	Fr. Lannuzel.	Victoire Foll.
17 — Marie-Yvonne Brénéol, Kerzent.	Jean Brénéol.	François Lhénaff.
21 — Marie-Louise Godebert, Kerzent.	G. Godebert.	Marie Thomas.
23 — Marie-Françoise Le Hir, Trémazan.	Jean Daouben.	M.-R. Godebert.
29 — Françoise Colin, Kervéon.	François Colin.	Philom. Cloatre.
28 Ebrel. <i>Kristeniet :</i> kraouadur, Peton, Kerriou.		
7 Even. — — — Brenterch, Rochard.		

Doue ra vezo meulet.

SAKRAMANT AR BRIDEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

27 Mae. Yves-Marie Jézéquel, St-Martin, Brest, ha Jeannie Brézel, Arc'hantel.
27 — Guillaume Corolleur, Kerlaguen, ha Marie-Jeanne Bervas, Kelleret.
Pater, Ave.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, di c'hedul deiz ar varn diveza, e goasket ar groaz :

4 Mae. Jean Jaouen, 29 bloaz, hospital Sant-Mandrier, Toulon.
26 — René Chapalain, 58 bloaz, Kergastel.
28 — Yvon Brézel, 86 bloaz, Archantel.
29 — Elisabeth Pérès, 83 bloaz, Archantel.
5 Even. François Vaillant, 71 bloaz, Kerzent.
5 — Perrine Canic, 85 bloaz, Kerzent.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

15 Ebrel. Jean-Marie Guéna, 15 miz, Sant-Gonvarc'h.
24 Mae. Marie-Louise-Gabrielle Godebert, 2 zervez, Kerzent.
31 — Marie-Madeleine Jaouen, 7 sizun, Bourk.
5 Even. Alfred-Marie Kerjean, 6 miz, Archantel.
10 — Anne-Marie-Joséphine Le Guen, 8 miz, Trémazan.

Laudate pueri.

Maro eun den a lavar deomp, bezit ive prest : hirio va zro-mé, varc'hoaz oc'h hini.

Mes, ar gentel, a vez c'hoaz nerzusoc'h, pa veler tud galvet gant Doue e kreiz ho brud ha krog, koulz lavaret, en ho labour, evel Jean Jaouen ha François Vaillant, hanvet aze diaraok.

Penaoz-ta int bet galvet dirak Doue ?

Jean Jaouen a ioa var e lest e Toulon en trein da gempen ar c'hanot a gommande. Marteze, edo epad he labour o sonjal e Landunvez, he barrez, en he dud oa brokuz da sikour, marteze e kane eur c'hantik bennag desket epad retred he baskou, pa gouezas divar e ganot var bord kalet he lest. Kaset d'an hospital e rentas eun nebeut goude he ene da Zoue. Hag bet en deuz ar belek, var e dremenvan ? Ia, mar dedo ganthan ar billet a vez roet brema d'ar zoudarded ha d'ar vartoloded pa guimiadont diouz ho zud, rak var ar billet-ze, e vez skrivet : pa vezin goall-glanv pe goall-glazet, e c'houlennan ar belek.

François Vaillant, pell bloaveziou a ioa, kantonier ar gommun, a zo bet ive skoet e kreiz he labour. Goude beza bet pilet diou vech var an hent braz, e c'hell sevel c'hoaz, evit gervel, d'er sikour, tud o labourat en eur park e kichen. Mes goude beza digoret an draf evit mont da Guespernik, an ti tosta, e kouez eun trede guech ha ne c'hell mui sevel. Ganthan edo c'hoaz en he zourn he rastel labour. Enho var al letoun e resevas he absolven diveza ha sakramant an Nouen. Raktal goude, oa great dezhan eur guele soupl, e kar Jacques Forest ha kaset d'he gear evit tenna he alanad diveza heb beza kavet he anaoudegez. Cloc'her e chapel Kerzent ha kaner en Iliz epad pell bloaveziou, esperomp e devezo an Introun Varia a vir sikour, kaset he Ene betek he Map Jezus, ha bet evithi digor er Baradoz.

Bevomp ta atao e stad a c'hraz, da lavaret eo hon Ene neat a bec'hed marvel, rak na anavezont, nag an deiz, nag an heur ma vezint galvet da varnedigez Doue.

MIZ EVEN

22. Gouel sant Yan Vadezour. Offeren ha gousperou ar gouel. Herodez a lakeaz dibenna sant Yan evit ober plijadur da eun danseres. Pedomp ar zant braz-ze da bellaat deuz hor parrez an dansou sul, memez var digarez eurejou. Jezus ne dei ket da eured an danserien sul, evel ma zeaz da eured kana, hag he vennoz ne gouezo ket varnho.

28. Iun ha vijil gouel sant Per ha sant Paol.

29. Gouel sant Per ha sant Paol. Offeren ha gousperou ar gouel. Pedomp evit hon Tad Santel ar Pab a zalc'h plas sant Per var an douar.

MIZ GOUERE

4. Guener kenta ar miz. Offeren ar galoun sakr da 6 h. 1/2. An offeren-ma zo lakeat gant ar re a zo en abostolaj e karter Kerleo.

Bennoz ar Zakramant goude an offeren. Goulennomp ouz kaloun Jezuz, lakaat e kalonou oll dud ar barrez, ar volonteze stard da ober eur retred vad hag ar c'hras da c'hounit penn-da-benn induljans ar jubile. Neuze hon Eneou a vezo dirak Doue guen ha santel evel deiz hor badiziant.

6. Gouel goad presius hor Zalver. Offeren ha gousperou ar zul. Ra denio oll dud ar barrez da gompren talvoudegez ar retred e reint er sizun-ma; ra deuit a galoun vad da zilezel ho labourou pemdeziek hag afferiou an douar evit sonjal ebken en ho silvidigez epad ho daou zervez retred. Neuze deiz ar gommunion, goad presius hor Zalver a redo var ho Ene hag ho merko evit ar Baradoz.

13. Navet sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou ar zul. Ar zul-ze penn-da-benn a lakaimp da zeski anaout guelloc'h karantez Jezuz evidomp e Sakramant an Aoter. Epad ar zul-ze e vezimp oll er bourk, deuz ar mintin betek an noz, ne jomo, er gear, nemet ar rezo red evit diouall an ti.

16. Gouel Introu Varia a Garmez. Induljans plenier da c'hounit en deiz-ze hag epad an eisved d'ar re a zoug ar skapular du, gant ma vezint bet o kovs hag o kommunia.

20. Dekved sul goude ar Pantekost. Offeren ar zul, gousperou sant Samson, eil patroun hor parrez.

Hor zent patroun o deuz evidomp eur garantez birvidik, pedi a reont Doue, en deuz ho c'hurunet en Env, da skuill he vennoz var ar re ho deuz savet chapellioù en ho honor. Evit diskouez hon anaoudegez vad da sant Samson, heuilomp oll ar brocesion a ziblaso da 2 heur evit mont d'ar chapel, kanomp gousperou gant devosion, ha nan o kaozeal e kenver an taverbioù; heuilomp c'hoaz ar brocesion en distro ha deuomp d'an iliz da resco bennoz ar guir goaz. En eur erruout e Sant-Samson, e vezo beniget ar mor. Pedi a ran-ta ar vartoloded a veo euz ar mor, da veza enno oll evit unani ho fedennou gant re an Iliz.

27. Unekved sul ar Pantekost. Offeren ha gousperou Santez Anna, patrounez karet Breiz-Izel.

Evel me deuz dre ar Verc'hez Vari he merc'h, eur galloud braz en Env, en em erbedomp outhi gant fizians, sur hor pedennou a vezo selaouet.

En diou offeren e vezo great ar gest gourc'hemennet gant an Aotrou n'Escop evit sikour erzel ouz ar mizou, pa vezo, d'ar zul dijeza a viz east, kurunet Santez Anna ar Palud, e parrez Plounevez Porzai.

Kannadik miz ebrel ha Kannadik miz mae, ho deuz koustet 60 lur. Krial a reont truez ha sikour.

Bet evit sikour ho faea digant: F. B., M. C., peb a bevar real, V. B., M. G., pep a zek guennek, P. G., c'houezek real, F. C., M. A. B., peb a ugent real. Doue r'ho faeo.

Le gérant: J.-M. LE ROUX.

Brest, imp. r. Château, 4.

180 bis

Pardoun Jezus, o chom, leun a vuez, evel Doue ha den, dindan furm eun tam bara, e Sakramant an Aoter.

TRAOU DA STUDIA

E REUNION.

Ar Baotred yaouank

hag ar

Merc'hed yaouank

E PARREZ LANDUNVEZ

D'ar Zul 13 a viz Gouere 1913

Da 10 heur: Reunion ar baotred yaouank e porz ar skol gristen.

Da 10 heur: Reunion an tadou a familh e klaz braz ar skol gristen.

GOULENNOU

Divar ben anaout Sakramant an Aoter

Ar baotred hag ar merc'hed yaouank hag int a oar dindan envor an teir gentel euz ar c'hatekiz, a ziskuez petra eo: sakramant an aoter, ar gommunion, an offeren? (34°, 35° ha 36° kentel).

Hag gouest int da ziskouez dre eur gaozeaden e kounprenont ar c'hentellioù-ze? Hag beza ho deuz etre ho daouarn eul leor bennag ha zispleg disfazi guirionezioù

ar religion, evel ma zeo : leor ar gelennadurez kristen? — Evit deski guelloc'h Sakramant an Aoter, hag klevet a reont lenn en ho zi; pe lenn a reont ho-unan : an Aviel, — penaoz karet Jezuz-Krist, — Deomp da Jezuz er sakramant, — Kannad ar Galon Sakr, — Kannadik ar Barrez, — Ar pederved loden euz leor Imitasion Jezuz-Krist, leorigdourn voazed ar Galon Sakr? Hag int a vez entanet ho c'halonou a anaoudegez vad, o klevet prezek divar ben Sakramant an Aoter, burzud karantez Jezuz en ho c'henver?

Deveriou e kenver ar Sakramant meulet ra vezo

1° D'ar zul etre an offisou, ha var ar sizun p'ho deuz tro da dremen dirag an iliz, pe ma maint o chom en e c'hever, ha karet a reont mont da vizita Jezus en tabernakl, evel ma zear da velet eun tad, eur breur, eur mignoun, eun den hag a c'hell hon hentcha?

2° Pa zeont d'an iliz hag ober a reont ar genuflexion var eur c'hlin ma man Jezus enn tabernakl, pe var ho diou c'hlin mar deo savet a vel d'an oll var an tabernakl? — Hag ne gaozeont ket en iliz pa deuont da skriva ho emban-nou, pa vezont paëroun pe vaërounez, pa deuont da gerc'het ar groaz evit ar re varo?

3° Da zul ar sakramant pe da zul ar Galon Sakr, hag poania a reont da gaerât ho ziez, ma tremen Jezus abiou dezho, da gempen an aoteriou savet var an hent? — Heuilla a reont ar brosesion en eur bedi pe en eur gana? — Ha ne jomont ket da zellet hebken, marteze, heb mont var ho daoulin? — Pa erruont gant ar beleg o vont da gass an Aotrou Doue d'ar re glanv, hag tenna a reont ho zok, hag mont a reont var ho daoulin, hag kempen a reont kampr an hini klanv, hag lakaat a reont enni kement zo red evit lidou ar gommunion hag ann nouen?

4° Hag beza emaint en abostolaj ar beden, e breuriez ar rozera? Hag sikour a reont ho zad hag ho mami da zeski katekiz-mou d'ho breudeur ha d'ho c'hoarezet bianoc'h evitho? Hag poania a reont dre ho c'homzou hag ho oberou da lakaat ar yaouankiz all da anaout ha karet muioc'h Jezus-Krist e Sakramant an Aoter.

5° Ar merc'hed yaouank hag int a zo e Bugale Mari, hag int zo aketuz d'ar reunion, da lenn aliez ar Reolenn?

6° Ar baotred yaouank hag int a zo en emgleo ar gatlaked, e breuriez voazed ar Galon Sakr? Ha ne vankont ket da ober ho adorasion enni heur merket dezho?

OFFEREN

1° Ar baotred hag ar merc'hed yaouank hag int a vez atao enn offeren da zul? — Ha ne vankont ket eaz aoualc'h d'an offeren da zul var digarez ma zeuz amzer fall, pardouniou, pourmenadennou, ebatou e tu pe du? Pe c'hoaz var an digarez fall e ranker mont er mor, pe da zestum garved? Hag dont a reont d'an offeren bred d'ho zro, d'ar gousperou?

2° Penaoz e tremenont ho amzer epad an offeren? O sellet en dro dezho, o kaozeal, o c'hoarzin? Hag lenn a reont ho leor, hag lavaret a reont ho chapeled, ha kana a reont? Hag int a sonj e tleont epad ann offeren unani ho feden gant hini Jezus, evit adori assamblez ganthan Doue he dad, he drugarekaat evit e vadoberiou, goulenn diganthen ar pardoun deuz ho fec'hejou hag ar grasou m'ho deuz izom anezho? Hag gouzout a reont penaoz eo evit an dra-ze eo en em ginniget Jezus-Krist da Zoue he dad var ar groaz hag e kendalc'h d'en em ginig e sakrifis santel an offeren?

3° Ar re zo tost d'an iliz, pe ar re ho deuz amzer, ha dont a reont d'an offeren an aliessa ma c'hellont var ar sizun, ma ne zeont ket petra a zigarezont?

4° Pa o deuz eur servich, eun eured, hag dont a reont d'an offeren, ha pedi a reont evit an Anaoun, evit an dud nevez, pe dremen a reont ho amzer ho fic'hellat pe ho kaozeal?

5° Hag ar baotred yaouank hag int a vez er retred araok mont da zoudarded pe da vartoloded? Hag int a deu araok partial da govez ha da gommunia ha da gerc'het ar billet a rei da anaout int kristenien hag o deuz c'hoant da gaout ar beleg er c'hlenved pe pa vezint goal-glazet? — Ha kommunia a reont pa zeuont e permission. Er c'hazarn hag mont a reont d'an offeren, ha poania reont da gass assamblez gantho ho c'hamaradet, ha mont a reont d'an tiez kristen savet evitho ha vardro ar beleg karget anezho? — Ar vartolodet hoc'h ober ho servich pe var al listri marc'hadour hag ober a reont ar pezh a zo en ho galloud evit dont en douar da zul da glevet an offeren, hag ober a reont ho fask? ha chacha a reont kamaraded gantho evit en ober?

COMMUNION

1° Ped a baotred hag a merc'hed yaouank ar barrez a vez ho kommunia bep miz, bep sizun, bemdez, ervez ali

Be
Jez
eur
jul
dei

rei
per
epa
hor

Ar
Jez
bou
red

en
ma
san

reo
ar
deg
heu
nar
en
err
var
fed

An
en
a

Aot
div
Por

Kri
V.
M.

hon Tad santel ar Pap Pi X, ha brassa mad ho Ene? —
Hag anaout a reont ar frouez a zoug eur gommunion santel?

2° Petra da ober evit digass an dud yaouank da gom-
munia aliessoc'h? — Ha ne ket o boaza da gommunia ez
vianik eo?

3° Hag kommunia a reont ar guener kenta ar miz? Ha
great o deuz an nao guener kenta? — Pa deuont d'ar ser-
vichou, deiz ha bloaz ho badiziant, ho fask kenta, da
c'houel ho zent patrouñ, hag mont a reont da gommunia?


Deiz pardoun ar barrez, pa zougont an enseignou, d'ar
(c'harante-heur) da sizun ar zakramant, epad miz Mari, miz
ar Rozera, mis ar Galoun Sakr, hag beza e vezont ho kom-
munia evit gounit an Induljansou?

4° Pedi a reont evel ma zeo dleet araok ha goude ar
gommunion? Pegeit e chomont enn iliz goude beza bet
ouz an daol zantel? — Hag ne ket lod hirroc'h, lod ber-
roc'h ervez ho amzer? En dervez-se, hag en derveziou
varlerc'h, hag diskouez a reont int guelleat, e pedont
c'houekoc'h, int karantezusoc'h e kenver ho zud, e stour-
mont startoc'h ouz ho flegou fall?

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 6 Junii 1913.

A. COGNEAU,
Vicaire Général.



Gloar, meuleudi hag anaoudegez vad da Zoue

Evit tenna frouez pinvidik euz retred ar Jubile ha Pardoun braz Jezus, kuzet dindan furm eun tam bara, e Sakramant an aoter, tud ar barrez o deuz diskouezet kalz a volontez vad. Lezet o deuz a gostez epad daou zervez afferiou an douar evit sonjal ebken en affer vraz ho silvidigez.

Al laouenedigez a bar hirio var ho zal, a ro da anaout sklear aoualc'h, ema brema peoc'h Doue o ren en ho c'halonou. Goulskoude, ra zalc'hint sonj e tleont an eurusded-ze da Zoue, ha ra n'ho devezo nemed eur vouez, evit lavaret : gloar, meuleudi ha trugarez da Zoue, en deuz ho digasset betek Jezus, deuet dre ar gommunion da veza magadurez ho Ene en deuz merket gant he c'hoad evit ar Baradoz.

Pebez meuleudi a zo ive dleet d'an tadou ha d'ar mammou kristen, o deuz poaniet evit digas d'ar gear araok fin ar retred, ho bugale soudardet pe vartoloded, evit ma c'heljent gounit Induljans ar Jubile ha kemeret perz e gouel kaer Jezus, o chom, beo, evel Doue ha Den, e Sakramant an aoter.

Eun dournadik bian a dud, kalz anezho estranjourien, nevez deuet da jom er barrez, ho deuz serret ho diskouarn da c'halv karantezus an Iliz ho mamm. Brema, int eun tam mezoc'h ha du ho zall, o velet laouenedigez ar re o deuz great dioc'h-tu, ho dever a gristen, a skouer vad. Mez, Doue a zo mad, ho gedal a ra c'hoaz. Pedomp-ta oll evitho, evit ma vint treac'h d'ho leziregez ha d'ar c'hlevet, galvet e gallek (respect humain) hag e brezounek, doujans ar bed. Induljans ar Jubile a c'hellomp da c'hounit betek an 8 a viz kerzu, ha n'euz forz ho stad a vuez, digarez ebed ne c'hell miret outho d'he gounit, peguir unan deuz artiklou kenta lezennou ar vro, a zoug : liberte a goustianz, pe liberte d'an oll da ober ho deveriou a gristen evel ma plij gantho.

Communions

Daoust ha peb rummad en deuz heuillet penn-da-benn ar retred ? Respount a c'heller, ia, leun a joa. A veac'h, e zoa ugent muioc'h ar prezegennou diveza eget er re genta. Eun dudi oa ive guelek gant pebez evez e selaouet ar visionnerien. Netra eno a souezuz, rak m'ho devoa an tadou : Le Jollec, Lheveder, Bourdoulouz ha Person, prezeget kaer d'ar mission braz, en dro-ma, ho sarmoniou hag ho c'honferansou, o deuz c'hoaz muioc'h plijet.

Ar c'han a zo ive eat en dro en taol kenta. Peb rummad en devoa c'hoaz en he memor kantikou ar mission, hag an aotrou Gloux, anavezet evit unan deuz kanerien braz an Escopti, n'en devoa nemet rei an ton, ha peb hini a gane assamblez ganthian, evel pa n'en diviche bet en he vuez, nemet ar vicher a ganer.

Setu ama an niver a gommunionou a zo bet great evit peb rummad :

Kenta rummad, ar merc'hed iaouank	270
Eil rummad, ar goazed hag ar merc'hed dimezed....	660
Trede rummad, ar vugale a heuil ar c'hatekismou..	280
Pevare rummad, ar baotred iaouank.....	200

Er barrez e zeuz 1,894 den. Mes, etouez ar re-ma, 300 n'ho deuz ket c'hoaz an oad da gommunia, ha 200 a zo er meaz euz ar barrez, pe evel soudardet, pe evel martoloded, pe evel domestiket. Dre eno, eaz guelek, penaoz eo bianik kenan, an niver euz an dud a zo chomet eb ober retred ar Jubile hag eb kommunia.

Pardoun, Jezus, o chom, leun a vuez, evel Doue ha den e Sakramant an Aoter

Nema ket e galloud ar *C'hannadik* skriva pegen kaer ha pegen talvouduz eo bet ar Pardoun-ze evit an Eneou. Ar pezh a lavaro a vezo izelloc'h eget ar virionez. Ar re o deuz kemeret perz enhan, a c'hello ebken koumpren ar vad en deuz great da Eneou parrisioniz Landunvez.

A dra-zur, ar retred a ioa bet roet, evit ma vije surroc'h peb den e stad a c'hraz, evit gellout gounit penn-da-benn, Induljans ar jubile. Mes, eur sonj all a ioa c'hoaz e penn pastor ar barrez, pa c'halvaz missionerien da rei ar retred-ze. Sonjal a rea penaos, pa vije neat a bep pec'het koustians he barrizionis, pa vije Jezus, mestr en ho c'halonou, e teujent gant mioc'h a diz da ober ar Pardoun kaer en devoa c'hoant da aoza, evit lakaat an oll da anaout guelloc'h madelez Jezus evitho e Sakramant an Aoter, evit kreski ho c'harantez evithan, evit ho dougen d'Hen digol deuz ar ienien a eljent beza bet evihan en offeren, er gommunion.

Ar pardoun a goumansas mad dreist. Ouspen 1,000 den a zigemeraz Jezus en ho c'halonou epad an offerennou lavaret epad ar zul vintin.

Da 8 h. 1/2, an Aotrou Le Roy, chaloni Iliz katedral Kemper, a ganas an offeren bred. Ne zamantas n'a d'he boan, n'a d'he skuisder evit dont a geit d'hor pardoun kaer. An Aotrou Conseil, rejant e skolaj an Introun Varia a Vir Sikour e Brest, a reas avieler, an Aotrou Pouliquen, skolaer e skol gristen Portsall, a reas abostoler. Estreget ar visionnerien ha belein ar barrez, e velet c'hoaz er c'hœur : Aotrou persoun Guitalmeze hag an Aotrou Felix Le Louet,

o daou ebestel ar galoun sakr en hor bro, an Aotrou Masson, dean a henor, Aotrou persoun Plouguin, an Aotrou Siohan, kure Plouarzel, an Aotrou Floc'h, hor c'henvroad, etc.

Goude an Aviel, an tad Lheveder a lennas kemennadurez hon Tad Santel ar Pap divar benn kommunia aliez, bembez, m'ar geller. Poeza a reaz, dreist oll, var ar c'homzou-ma euz ar reolen : Guelet kommunia aliez ha bembez, eo ar pezh a c'hoanta hor Zalver hag an Iliz katolik ; rak-ze e tle an oll dud fidel, a bep stad, gellout kommunia aliez ha bembez, gant ma vezint e stad a c'hraz ha ma tostaint ouz an daol Zantel gant eun intansion eun. Intansion eun a vez pa dostaer ouz an daol Zantel n'e ket evit ober ar c'hiz, nag evit kaout meulendi pe dont mad da unan benag, mes evit senti ouz Doue, plijout dezan, en em unani gantan startoc'h dre ar garantez, ha gellout dre al louzou divin-ze, enebi ouz ar plegou fall, beza treac'h d'ar zempladurez.

Goude e voa lennet an (decret) pe gemennadurez a c'hour-hemen d'ar vugale koves ha kommunia kercent a ma koumans ho spered digeri, da lavaret eo, var dro 7 vloas.

Heur zantel, kaozeaden divar benn sakramant an aoter, an offeren, ar gommunion

Goude an offeren bred ar merc'hed a jomas en Iliz evit ober an heur zantel. An tad Person ho sikouraz da gompren guelloc'h an anaoudegez vad a dlient da gaout evit Jezus, a jom gantho noz-deiz e tabernakl ho Iliz evit selaou ho fedennou, servichout da vagedurez d'ho Eneou, hag e n'em ginig evitho, evel guechal var ar c'halvar, e sakrifis d'he dad, bep tro ma vez lavaret an offeren.

Epad an amzer-ze, an tad Bourdoulouz, en eil klas gant ar goazed dimezed, an tad Le Jollec er c'hlas braz gant ar baotret iaouank, a ziskoueze dre zivizou sklear etre ar re ho zelaoue hag hi, petra oa sakramant an aoter, an deveriou a c'houlenn diganeomp, petra oa an offeren, penaoz e c'hlevet gant frouez, petra eo ar gommunion, penaoz e vezo talvouduz evit hon eneou.

Da 11 heur e zacht da Vern. Mes, tud a volentez vad a jomas en Iliz evit adori ar sakramant.

Da 1 h. 1/2, ar voazed oll a ia d'ho zro en Iliz evit ober an heur zantel. An tad Lheveder a ziskouezas dezo evit petra oant stouet dirak Jezus, kuzet en hosti. He gomzou sklear a lakeaz an oll galonou a unan gant he hini, evit anaout Jezus, evit ho mestr, e drugarekaat euz e vadoberou, goulenn pardoun diganthan euz ho fec'hejou, hag er pedi da rei dezo ar grasou ho dioualo euz ar pec'hed hag ho c'hasso d'ar Baradoz.

Da 1 h. 1/2 ive, ar merc'hed d'ho zro, a deuz d'ar skol gristen.

An tad Le Jollec er c'hlas braz, an tad Bourdoulouz, en eil klas, a roaz dezo da anaout penaoz n'oa ket bet aoualc'h, evit Jezus hor prena gant ar priz eus he c'hoad skuillet var menez Kalvar. Chomet eo ganeomp c'hoaz en douar-ma, leun a vuez, evel Doue ha den e sakramant an aoter. A neuze, goulennou ar veleien ha respountjou ar merc'hed, a lakeaz splamoc'h ar sklerijen da bara er sperejou divar benn hon deveriou, e kenver sakramant an aoter, an offeren, ar gommunion.

Gousperou ha prosesion

Da 3 heur e voa kanet ar gousperou var an toniou braz evel just. An Iliz a voa re vian evit digemeret an oll. Kalz a rankaz chom er meaz, ar pezh ne viraz ket outho da bedi ha da unani ho mouez evit kana gant ar re a ioa en Iliz.

Epad ar retred ha da zul ar pardoun, prezegennoù ar vissioerien a iea dre an diskouarn da lakaat da vervi er c'halonou ar garantez evit Jezus, o chom en hosti sakr.

Mez epad an 8 dervez-ze a zilvidigez, peb tra a roe ive dre an daoulagad, anaoudegez a Zakramant an Aoter.

An Aoter vraz guisket gant ar roz guen ar re gaera, a lavare d'an dud, lakeat oump ama evit renta enor da Jezus o chom en tabernakl. Ar pavillonou savet huelloc'h eget an Aoter, a oa livet varnho, lod eur chalir a-uz dezan an hosti sakr, lod eur sibouer, lod ar Zakramant (ostensoir) gant daou eal a bep tu dezan hoc'h adori an hosti sakr, ar garlantezennou o vont euz an eil piller d'egile, a ioa lorc'h enno o kaerat ti prizounier an tabernakl, peder bag savet huel a plantet enno kalz a bavillonou gant divizou santel, o devoa an ear da naviga verzu ar Baradoz, ha da lavaret, d'ar re a rea ho retred, goalc'hit oc'h Ene euz he fec'hejou, chomit dinam e bag an Iliz, sturiet gant hon Tad Santel ar Pap, hag he erruoc'h eb drouk e porz an Envou.

Mes Jezus a ziblaz euz an Iliz evit mont betek an aoter gaer savet e kroasant Kernezoc. Douget eo didan an de gant an Aotrou Le Roy, chaloni.

Ar barrez a bez goazed ha merc'hed hen heuilho, o pedi hag o kana he gantikou ar re gaera evit meuli ar sakramant. Var an hent peb tra ho doug da garet Jezus.

E penn ar vali, goloet a roz hag a vokedou a c'houez vad a gas d'ar repozouer, euz savet eun (arc-de-triomphe) guisket a dantelez a bet seurt liou, var he gourre, e zeuz eur groas, skeduz evel an hini a velaz Constantin brema e zeus c'houezek kant vloaz, hag a-uz dezi, eo skrivet, ar c'homzou-ma (dre ar sin-ma e c'hounezi). Dreizi Landunvezis o devoa ive gounezet gant ar peoc'h evit ho c'haloun, Induljans ar Jubile.

Tremenet dindan an arc-a-driomp, Jezus a dlle beza laouen o

velet euz an hosti sakr ar boan o devoa kemeret tud ar Barrez evit en digemeret en ho zouez. An oll tiez a ioa stignet outho al linseriou ar re gaera, pavillonou (oriflammes), garlantezennou a rede euz an eil ti d'egile, ha bep 20 paz, e kavet pillerou gant tri bavillon o ficha en avel e penn peb hini anezo. Skrivet oa varnho divizou santel : meuleudi da Jezus, stouomp dirazan, ni er c'haro atao, etc.

Dirak ar repozouer, oa eur jardin, he mogeriou a ioa great gant treas guen, piket enno bokedou. Hag ed ar mogeriou oa podou treas karget a vokedou. E kreiz ar jardin, e voa eur c'halir great ive gant treaz hag alaouret gant deliou roz melen, a zioc'h ar c'halir oa skeden an hosti sakr ive e treaz guen evel an erc'h. Huelloc'h eget ar c'halir oa eur groaz a zeblante lakât dre eur ruban ruz ar goad da redet deuz kaloun Jezus er c'halir, evit deski d'an oll eo sakrifis an offeren ar memez sakrifis hag ini ar groaz.

En tu kleiz d'ar jardin, oa eun daolen a ziskoueze ginivelez Jezus e Bethleem, gant ar c'homzou-ma : « Ama eo deuet da veza hor breur. » Diindan an daol a vezo lakeat varni bremaik ar Sakramant (l'ostensoire) oa eun daolen all, a ziskoueze Jezus, oc'h ober Sakramant an aoter, a-us dezi ar c'homzou-ma : « Ama, ema, magadurez oc'h Eneou. » Hag huelloc'h eget an aoter, eur groaz vraz, gant ar c'homzou-ma : « Ama em beuz ho prenet. » En tu deou d'ar jardin, en daolen all a ziskoueze Jezus epad he angoni, gant ar c'homzou : « Goude ar retred-ma, hag an dervez-ma lakeat da anaout Sakramant an aoter, biken ken ne dreuzimp kaloun Jezus dre ar pec'hed marvel. »

Aoter ar repozouer a zo goudoret gant 8 guezan c'hlaz a drivac'h troalad, karget a bavillonou a griet etrezo gant garlantezennou ar re gaera.

Ema var an aoter ar Sakramant, kanet eo : an *tantum ergo*, an ezans a zo savet varzu an Env. Ar belek a gemer neuze ar Sakramant, evit benig ar barrez a bez stouet, he zies, he farkeier, ar mor a ro da galz ho bara.

Goude c'houec'h baniel Landunvez gant ar pavillonou a zo en dro dezo. o lugerni gant an eol a gerz etrezek an Iliz, an de a deu var o lerc'h, a da dosta d'an de Conseil an Iliz ha Conseil Ti-Kear. Pa zeo lakeat ar Sakramant var an Aoter sklerijenet gant kant goulaouen var elum, pa zec deuet ar bobl en Iliz, an Aotrou Mear a deu e tal ar balustrou, en tu deou dezan, ema prezidant Conseil an Iliz, en tu kleiz an tenzorier, ha pa zint o zri daoulinet, an Aotrou Mear a lenn gant eur vouez sklear, ar beden great evit goulenn pardoun digant Jezus e Sakramant an Aoter. Ar beden-ze a echu dre ar c'homzou-ma : « Stouet dirazoc'h, o Jezus, ni deu d'en em gonsakri d'eoc'h, da gonsakri d'eoc'h hor famillou. Da Vap Doue, en em c'hreat den, o chom en hosti sakr, Roue an Env hag an douar, gloar, enor, meuleudi. » Goude e voa roet bennoz ar Sakramant, hag an oll, goude kimmiad ar visionerien, a zistroaz d'ar gear, o sonjal n'oa bet biskoaz ken kaer gouel e Landunvez, hag o lavaret

e gueled o c'halon : ni hon devezo hiviziken, muioc'h a gassoni ouz ar pec'hed, muioc'h a garantez evit Jezus e Sakramant an Aoter, ne vankimp morse d'ar zul d'an offeren, hag e roimp alies a ma c'helimp lojeis da Jezus en hor c'haloun, dre ar gommunion zantel.

BENNOZ, TRUGAREZ

Aoter ar *C'hannadik*, a drugareka a greiz he galoun, ar visionerien hag ar c'haner o deuz kemeret kement a boan evit lakaat an oll da ober eur retred mad. Trugarekat a ra ive ar veleien o deuz great enor d'ar barrez o tont da gaeraat ar gouel.

Bennoz ive d'an dud en deuz er sikouret da erzel ouz ar mizou.

Bennoz c'hoaz dan d'ud a galoun, o deuz roet fleur, bokedou, guez evit kaerat an Iliz pe ar repozouer, pe sikouret ober ar pavillon, chadenna ar guirlantezennou.

Bennoz dreist oll, d'an dimezel Mari, mestrez kenta ar skol gristen, rak en anzao a ranker, he dourn hag he lagad eo ho deuz lakeat peb tra ken kaer.

SKOL GRISTEN

Trugarekeomp er bloaz-ma adarre mestrezed ar skol gristen a gentel kerkoulz hor paotrezed var ho deveriou a gristenezed ha var an deskadurez ho dezo izoum er bed. Choueac'h deuz hor merc'hedigou a zo bet resevet evit an testeni a zeskadurez (certificat d'études). Setu ama ho hanoiou : Marie Brénéol, Kerriou, Joséphine Conq, Traon, Marie-Anne Cadalen, Sant-Samson, Germaine Drogou, bourk, Marie Déniel, Louroun, Madeleine Morel, bourk.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

		PABROUN	MAEROUNEZ
21 Even.	Sophie-Marie-Alex. Gueguen, Kerc'hozel.	Goulv. Quéménéur.	Marie Magueur.
24 —	Anne-Emilie-Marie-Jos. Rousseau, Arc'hantel.	E.-F.-A. Fournier.	M.-L. Rousseau.
6 Gouere	Françine Tanguy, Traon.	Joseph Tanguy.	Julie Floc'h.
13 —	Marie-Françoise Milin, Trémazan.	François Milin.	Marie Milin.
18 —	Gabriel-François Bégoc, Bourk.	François Morel.	J.-J. Bégoc.

Doue ra vezo meulet.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

1 Gouere.	Gabriel-Marie Corolleur, Curulou, ha Marie-Françoise Le Cuen, Guitalmeze.
1 —	Yves Le Guen, Guitalmeze, ha Marie-Jeanne Corolleur, Curulou.

Pater, Ave.

ENTERRAMANCHOU

Eat d'ar Baradoz

18. Gouere. — Craouadur an Aotrou Vaillant, 1 minut, Kerzent.

Laudate pueri.

MIZ EOST

1. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr da 6 heur, Bennoz ar Zakramant. Goulennomp digant kaloun Jezus eun amzer vad evit an eost. Ne zilezomp ket er miz-ma var digarez skuider, nag hor pedennou, nag an offeren d'ar zul, nag ar gousperou.

3. 12^e sul goude ar Pantekost, offeren ha gousperou ar zul.

10. 13^e sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou sant Laurans.

14. Derc'hent gouel an Introun Varia hanter eost. Yun a vijil.

15. Gouel ar Verc'hez savet en Env, korf hag ene. Er gouel-ze e c'hellor debri kik. Offeren vintin er bourk da 6 heur, e Kerzent da 6 heur anter. An offeren bred e Kerzent da 9 heur anter, rozera da 2 heur, gousperou da 2 heur anter.

Ar brosesion a ziblaso euz ar Bourk, da 8 heur anter. Bugale ar skol gristen ha bugale Mari gant ho medalen a zo pedet da en em lakaat var renk en dro d'an anseignou. An oll barrizioniz a heuillo ar brosesion evit mont ha dont, o pedi hag o kana ; digas gantho eur c'hantik.

Ar re a zougo an anseignou a roio skuer vad o chom eb kaozeal nag en em vesvi. Ne ankounac'haint ket e vezint bet o kommunia dioc'h ar mintin pe en dervezion araok.

Da anter eost euz pardoun en oll parrezion, Louis XIII a voestlas ar Frans d'ar Verc'hez, hag evit ma talc'himp sonj oump da Vari hag e tleomp beva santel eveldi, eo e vez great prosesion anter-eost.


17. 14^e sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou sant Joachim, tad ar Verc'hez Vari.

24. 15^e sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou sant Bartheleme, abostol.

31. 16^e sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou ar zul.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



A L I

Oll diez ar barrez, o deuz resevet ar goulennoù a ioa da studia, pe evit ar vugale, pe evit an dud yaouank, pe evit ar re dimezed, deiz pardoun ar Zakramant, great e Landunvez, an drizek a viz gouere 1913. An divizou great var ar goulennoù-ze, o deuz great dija kalz vad da Eneou ar barrizionis.

Gant plijadur e veler an dud o tont abaoe stankoc'h da gommunia, evit deiz ha bloaz ho badiziant, da c'houel ho zent patroun, pa deuont da zervichou ho zud eat d'an Anaou, pa vezont hanvet da zongen an anseignou, etc. Al loden vraz euz ar re a deu da govez, o kounpren brema guelloc'h talvoudegez eur gommunion vad, a c'houlenn kommunia meur a veach, ha pa ne c'hellont ket dont var ar pembez, e teuont diou pe deir zul dioc'htu.

Ar *C'hannadik* goude beza bet lennet a vez dalc'het en tiez heb er freuza. Eun dra vad kenan eve ive derc'hel ar paperiou a zo skrivet varnho ar goulennoù, hag evit beza surroc'h da jom heb ho c'holl, stagit anezho ouz *Kannadik* miz gouere. Eur joa e vezo evidoc'h o lenn eur veach an amzer, hag ar voyen ar surra da jom heb ankounac'haat ar pez a zo skrivet varnho.

Eun dudi e vezo ive evit ho pugale vian divezatoc'h, lenn ar pez a zo bet great er barrez en amzer ho zud koz, evit rei da anaout guelloc'h Sakramant an Aoter ha kreski ar garantez evit an offeren, hag ar gommunion zantel.

Goueliou kaer ar Folgoat

D'an 8 a viz guengolo, e vezo 25 bloaz abaoe m'eo bet kurunet ar Verc'hez er Folgoat. Evit digas sonj euz ar goueliou ken kaer a oue great neuze, hag a ziredaz dez'ho tostik da gant mil den, daoust ha n'euz ket a leac'h da ober goueliou nevez, evit rei adarre d'an Introun Varia eun testeni euz hor c'harantez atao ken birvidik, hag en em erbedi out-hi gant ar memez fizians? Eo, a dra-sur, ha setu perak e vezo gouel braz n'e ket ebken d'an 8, mez en derveziou araok. D'ar 4, 5 ha 6 e vezo eur « C'hongrès, pe reunion » hag a deuio en-han an dud gouizieka ha brudetta a zo er Finister ha zoket e Breiz, da gomz divar benn ar Verc'hez Vari; he galloud, he madelez, ha da ziskuez pegement eo din da veza meulet ha karet.

Evel pa zoa kurunet ar Verc'hez brema e zeuz 25 bloaz, tud ar parrezioù a zo pedet da vont adarre d'ar Folgoat d'an 8 a viz Guengolo ha da gas gantho ho banielou hag ho groazioù evit ar brosesion. Setu ama penaoz eo renket an traou evit an 8 a Vengolo :

Deuz hanter-noz betek 9 heur e vezo offerenou heb ean.

Da 10 heur e vezo kanet an offeren bred ha great eur brezegen brezounek gant an Aotrou Dubourg, arc'heskop Roazoun, eur Breizad evelomp,

Da 1 heur e vezo lavaret ar Rozera.

Da 2 heur hanter e vezo kanet gousperou ha great eur brezegen gallek gant an Aotrou Gouraud, eskop Guened.

Setu ama pianoù an Eskapien a vezo er goueliou kaer-ze : an Aotrou Duparc, eskop Kemper, an Aotrou Dubourg, arc'heskop Roazoun, an Aotrou Pichon, arc'heskop en Haïti, an Aotrou Le Roy, eskop en Afriq, an Aotrou Rouard, eskop an Naonet, an Aotrou Gouraud, eskop Guened, an Aotrou Morelle, eskop Sant-Briek.

An nep ne dei ket da Voueliou ar Folgoat hag en devezo goulskoude c'hoant da c'houzout petra vezo great en-ho, n'en devezo nemet prena al leor a rento kount a gement a vezo tremenet. Al leor a gousto 20 real.

PELERINAJ GOAZED AN ESCOPTI**Da Iliz-Veur ar Galoun-Sakr e Montmartr (Paris)**

An Aotrou Duparc, eskop Kemper ha Leon, a brezido er bloaz-ma pelerined Montmartr.

An train a ziblaso euz a Vrest d'ar zul 21 a viz guengolo, da 5 heur hanter da bardaez. En em gaout a rei e gar.

Montparnas, Paris, d'al lun 22, da 5 diouz ar mintin. Ac'hano ar c'hirri braz a gaso ar belerined da Vontmartr, evit an offeren kommunion. Epad an deiz e vezo offeren bred ha gousperou, gant prezegennoù. Ouspen, araok ha goude lein, konferansou, divar-benn emgleo goazed ar Galoun-Sakr, Abostolaj ar beden, ar oberioù katolik. Goude koan, an heur-zantel a vezo great dirak ar Zakramant meulet ra vezo.

D'ar meurz goude an offeren-plean klevet e Montmartr, ar belerined o devezo eun ofis kaer en Iliz Introun Varia ar Victoriou. Goude, kreiz-deiz, bizita a raint an traou brudeta zo e Paris. Eu dizro, salud solennel e Montmartr.

D'ar meurz 23, da 6 heur dioc'h ar pardaez, an train a ziblaso evit an distro hag ec'h en em gavo e Brest d'ar merc'her vardro 5 heur hanter dioc'h ar mintin.

Setu ama pegement e kousto ar pelerinaj : en trede klas : 49 lur ; en eil klaz, 63 lur ; er c'henta klas, 90 lur. (E Paris ne vezo kem ebet etre ar belerined, nag evit ar prejou nag evit ar c'hrampeier : en train ebken).

Evit ar priz-ze, ar belerined o devezo an train mont ha dont ; ar c'hirri e Paris epad an daou zervez ; an oll prejou e Paris, dijuni diou vech, leina diou vech, koania diou vech ; koan ar meurz a vezo ten, a roet e gar Montparnas. Ar guele : pep hini e vele hag e gamb : Leorik dourn voazed ar Galoun-Sakr.

Pedomp kaloun Jezuz evit ma teuo niveruz kenan ar belerined a bep parrez, sentuz ouz mouez ho Aotrou 'n Escop, ouz mouez an Aotrou Doue he-unan. Guelet a reomp pegen lark e za kasoni an dud dizoue, pegen izel e kuez stad ar relijion er vro, pebez brezel a rear d'an Eneou : deomp-ta da Vontmarth da bedi en eur ober pini-jen, evit kaout pardoun hor bro hag he zilvidigez.

PENAOZ SEVEL AR VUGALE

32. *Kannad* ar Galoun-Sakr ingalet er barrez, o deuz dija roet da anaout da galz, intansion abostolaj ar beden, evit miz eost. Mes, an intansion-ze, penaoz sevel ar vugale, a blij kement d'ar *C'hannadik*, ma teu da skriva eul loden vraz euz ar pezh a zo moulet er *C'hannad*; evit ma vezo surroc'h lennet, gant oll tadou ha mamou ar barrez. Ar *C'hannadik* a vez kasset da gement ti a zo e Landunvez hag an nep n'en resefe ket n'en deuz nemet dont da lavaret d'ar presbytal pe d'ar sakreteri.

« Daou zevel a zo e kenver ar vugale, memes ar re vihana : kaout respet evit ho, ho deski evit Jezuz.

Envel ouz eun tam koar boug, ar bugel a gemero ar plegou a vezo roet dezhan, hag a zalc'ho dezho ac'houdevez. C'hui oll ta, o peuz an enor da dostaat deuz eur c'havel, evesañ mad ouz Ene ar bugel o tihuna. Arabad a rafe d'eoc'h ar soursi o peuz evit ar c'horf, ankounac'haat an Ene. Red eo e ve ar vam soursiuz dreit peb tra deuz he bugel bihanik; mes dioual goulskoude da ober re a stad anezhan. Arabat eo e teuffe da veza Doue en ti, hag e ve lezet da ober he oll volontezion. Ne ve neuze, nemed eur golladen. N'oufet ket he lakaat re abred da zenti, da zioueret meur a dra. Bez he zeo eur blantenn, ne ehuner nemet pa vez iaouank flamm; kerkent hag e 4 pe 5 bloaz en deuz kemeret he bleg, ne jencho koulz lavaret mui.

Mez, kaeroc'h a zo. Ar bugel a vez badezet, ha dre he vadiziant, e teu da veza bugel da Zoue, buez Doue memes a zo en he Ene. Evel en eur rouantelez, e vez douget respet da vap ar Roue; d'ar bugel kristen ez eo dleet muioc'h a respet c'hoaz, abalamour ma 'z eo map da Roue an env hag an douar. Respet a zo dleet da izili ar c'horf; ne dle ket beza roet da ziouall, da zougenn, da gousket n'euz forz da biou. Respet a zo dleet d'he ene, memes en he vloavezioukenta. He zaoulagad a zo bian c'hoaz, mes, digor mad int, arabat eo, na diskuez dezhan, nag ober dirazan netra dizoare. Na list ket ken neubent da guezha en he ziskouarn ger divalo ebet.

Meuleudi d'ar vam a laka he elik bian da groazia he zaouarnigou ha da lavaret pe da ober « Jezus » ! Hag ive ar vam a ra d'he c'hraouadur kroazia he zivreaç'h var he heultrin, en eur c'houlen diganthen : « E pe leac'h ema Jezus » — « E va c'haloun ».

Mes astit, dreist ol, mamou kristen, da ziskleria d'ho pugale eo Doue mestr var bep tra, ema e peb leac'h, en Env ha var an douar; e zeo he zaoulagad digor evit guelet pep tra, e roio dezho euruzded ar baradoz ma sentont, ma pedont, ma vezont fur; mies ive ho zaolo da zevi en Ifern ma reont ar fall. Goulskoude ar relijion heullet en he di, eo a vezo ar guella fesoun, evit moulla e kaloun ar bugel, ar greden e Doue. O velet he dad hag e vam oc'h ober sin ar groaz gant feiz ha respet dirak ar grusifi staget ouz ar voger e penn an daol, ouz ho guelet o vont bep sul d'an offeren ha d'ar gousperou, da gommunia aliez, o klevet anezho, daoulinet noz ha mintin, o

lavaret : « Hon tad pehini a zo en Env... » ar bugel a sonjo hag a lavaro dre dro : « O tad adoret gant va zad, me ho kar hag a zalc'ho d'ho kourc'hemennou. »

Leor ar c'hatekizmoù, divezatoc'h, ar prezegennou a c'hello kreski er bugel sklerijen ar relijion. Mes, ar feiz kenta, ar feiz silet en he galoun gant he vam, eo a zalc'ho doun he griziu, ar feiz-ze eo he skoro start en e vuez kristen, hag a viro outhan da guezha, ma rank orjella e kreiz danjeriou ar bed.

Kalz tud a gav braz senti ouz tud all envel outho. Perak ? Abalamour n'euz ket desket dezho abred, penaoz ar re o deuz da velet dezho galloud da gommandi hag o senti outho. eo oc'h Doue e-unan e senter. An dra-ze a dleer planta e penn ar bugel er gear hag er skol. Abalamour da ze, ar skoliou, ne vez hano morse enno a Zoue, a zo skoliou a ne c'heller ket kas dezho bugale badezet, ha krouet ha lakeat er bed gant Doue, evit deski he anaout, he garet, he servicha hag erruout evelse e gloar ar baradoz. Hag en guirionez, ma ne glev morse ar bugel he vestr pe he vestrez skol o kaozeal deuz Doue, deuz an deveriou en deuz en he genver, abalamour ma hen deuz he grouet, he brenet gant ar priz euz he c'hoad, petra a c'hoarvezo ? Ar c'hraouadur a gasso ive abred ar sonj a Zoue eus he spered hag a gredo n'en deuz dever ebet en he genver. Pec'hed braz eta o deuz ar gerent ha laka ho bugale er skoliou-ze, pa vez, heb ma c'harufe tor ebet gantho, digor dezho skoliou kristen. Goulskoude ar skol ar vella, ne c'hell ket dont a benn da zavel bugale fur ha sentuz, ma ne vez ket sikouret gant ar familhou, ma n'en deuz ar bugel guelet gourc'hemennou Doue heullet gant he dud, ma n'euz ket bet desket dezhan senti abalamour da Zoue, ma n'en deuz ket guelet he dad hag he vam glac'haret, pa zizente outho, abalamour d'an offanz a rea da Zoue, hag o kastiza anezhan dre ma talc'hent plas Doue.

(Da gendelc'her).

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
1 Eost.	Jeannie Bellec, Sant-Gonvareh.	Goulven Floch. Jeannie Taloc.
10 —	M.-J Habasque, Stréat-Doun	Jean Gouez. M.-A. Ronvel.
11 —	M.-J s. Talarmin, Kellieret.	Joseph Talarmin. Joséph. Talarmin.
13 —	Guillaume Taloc, Kerlagen.	Guill. Corolleur. Philomène Taloc
13 —	Fr.-Marie Guéna, Ru-Allan.	François Guéna. Michelle Trébaol.
17 —	Paul-Marie Cadour, Curullou.	Claude Coat. Marie Fourn.
27 Gouere.	René Jos. Pondaven, Kernézoc.	Ollivier Arzel. Reine Squiban.

Kerzent.

O deuz resevel lidou diveza Sakramant ar Vadiziant.

	TESTOU
14 Eost.	V.-L.-P.-J. Gourmel, Gorrékéar. Paul Gourmel. Joséphine Kerros.
15 —	A.-A.-M. de Marolles, Kerzent. Simon Ambruster. Jeanne Durand.
20 —	R.-L.-J.-F. Crouton, Arc'hantel. Louis Miqueau. Jeanne Célier.

Doue ra vezo meulet.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

- 22 Gouere. François Pellé, Porspoder ha Marie-Jean e Eozinou, Plourin.
- 23 — Joseph-Marie Pellé, Porspoder ha Françoise Eozinou, Landunvez.
Pater, Ave.

ENTERAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn e goasked ar Groaz De profundis !

- 2 Eost. Marie-Yvonne Herry, 70 bloaz, Kerzent.
- 5 — Gabriel Perhoc, 23 bloaz, Guened.
- 15 — André Uguen, 64 bloaz, Traon.

PARDOUN HANTER EOST E KERZENT

Pardoun an Itroun Varia a vir Sikour a zo bet didrouz ha santel. An niver braz a dud o deuz kommunit er chapel diouz ar mintin, en devezo lakeat da dridal gant ar joa kaloun ho mam e bar an Envou ha tennet varnho ha var ar barrez he bennoziou ar re vella.

An offeren bred a zo bet kanet gant an Aotrou Hamon, rejant e skollaj an Itroun Varia a viz Sikour e Brest. Eur brezegen deuz ar re gaera a zo bet great gant an Aotrou Floc'h, hon c'henvroad. Lakeat en deuz da Vleunia startoc'h, e kalounou an oll, ar feiz, an esperans hag ar garantez, a zo bet, emezhan, an teir vertuz ho deuz sikouret ar Verc'hez da bignat an tosta da Zoue er Baradoz.

MIZ GUENGOLO

5. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr da 6 h. 1/2, ha goude bennoz ar Sakramant.

7. Seitekved sul goude ar Pantekost. Offeren ar zul, gousperou Ginivilez ar Verc'hez.

8. Gouel Ginivilez ar Verc'hez. Oferen vintin er bourk da 6 h. E Kerzent, oferen da 6 h. 1/2. Oferen bred da 9 h. 1/2. Rozera da 2 h., gousperou da 2 h. 1/2. Ma ranker chench heur d'an oferen-nou abalamour da bardoun braz ar Folgoat, e vezo lavaret er zul araok. Pedomp oll start an Itroun Varia ar Folgoat da zerc'hel yac'h ha crenv feiz tud Leon, he bugale garet.

16. Trivac'hved sul goude ar Pantekost. Oferen ha gousperou ar Groaz gounezad. Dreizi, map Doue en deuz dasprenet an den ha dibrennet ar Baradoz, ha ganti e vezo gullet o tiskan euz an env, pa deuio da fin ar bed, evit barn an oll dud.

Meulomp eta a vouez huel Jezus hag e groaz santel.

17, 19 hag 20. Yun ha vijil ar pevare amzer.

21. Naontekved sul goude ar Pantekost. **Pardoun braz ar Barrez.** Offeren ha gousperou sant Gonvel. Offeren vintin da 6 heur. Offeren bred da 10 heur. Gousperou da 3 heur. Heuill oll ar brosesion. Bugale Mari gant ho medalen ha bugale ar skol gristen, a ielo var renk dirak an anseignou. Pe hano e roe hon tadou coz da c'houel ho Zant Patroun ? En henvel a reant ar pardoun. Perak ? Abalamour ma teuent en dervez-ze da gaout pardoun euz ho fec'hejou dre eur govesion vad ha da dostaat ouz Doue dre eur gommunion santel. Hini anezo ne vanke na d'an offeren na d'ar gousperou, na d'ar brosesion. Hag an dud a deue do gullet a rea eveldo. Mad, greomp ive eveldo, ha bennoz sant Gonvel a gouezo puill varnomp. Souner galvet da eur pardoun, eo an diaoul o vouga madelez ar zant patroun e kenver he vugale.

Retred ar soudarded hag ar vartoloded iaouank. Deuz ar meurs da noz 23 eus ar miz betek ar zadorn vintin 27, e vezo e Lesneven, eur retred evit ar re a ielo er bloaz-ma da soudarded pe da vartoloded. Evel kustum, hini ebet deuz ar barrez ne vanko d'ar retred-ze, a ra kement a vad d'an Eneou, hag a deu da skolia kerkoulz ar iaouankiz var ar pez ho deuz da ober epad ho servich evit chom kristenien birvidik.

28. 20° sul goude ar pantekost. Offeren ar zul. Gousperou sant Mikeal Arc'hel.

A zo pedet da ober ho hanter heur adorasion d'ar 14. eil sul ar miz

10 h. 1/2. Yves Kervran, François Coadou, Penfoul, Jean Marzin, Jean Trébaol, Bédiez.

11 h. Guillaume Lescop, Yves Floc'h, Jean Floc'h, Bourk, François Jézéquel.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, François Calvez, Kerzent, François Jaouen, François Pellen, Kernézoc.

12 h. Auguste Le Borgne, Pourane, Yves Floc'h, Claude Taloc, Nadant, Joseph Allégot, Kerlaguen.

12 h. 1/2. Gabriel Corolleur, Curulou, Jean-Marie Jaouen, Kerincuff, Yves Le Ven, Kerguérioc, Jean-Marie Le Gall, Penfoul.

1 h. Michel Cadalen, Streat-Lann, Joseph Minguy, Poullouarn, Guillaume Bossard, Penkear, François Godebert, Castel.

1 h. 1/2. Hervé Guéna, Kellérou, Victor Cadalen, Kelleret, Ollivier Le Borgne, Penn-ar-Pavé, Goulven Godebert, Kerzent.

TAOLIT EVEZ

Ar skol gristen a zigoro d'al lun, 15 a viz guengolo. An oll gerent o deuz c'hoant e teskfe ho bugale. Digasit anezo neuze d'ar skol en dervez ma tigor, ha goude-ze bembez. Ar re ne deuont d'ar skol

nemet varlerc'h ar re all, hag a vank var an distera digarez, a goll ar c'hentelliou studiet gant ar re-a deu e poent ha bembez. Neuze e kollont kouraj, o velet e zint nebeutoc'h desket eget ar re all, ne reont mui nemet c'hoari, ne deuont mui d'ar skol nemet en despet dezo ha ne c'hellont ket kaout ho (certificat d'études.) Da biou ar faot? D'ar mestr pe d'ar vestrez skol? Nan, d'ar gerent n'o deuz ket kemeret soursi da zigas ho bugale d'ar skol, e poent ha bembez.

Kannadik miz east en deuz koustet 26 lur. Bet evit sikour he baea digant : M.-A. B., M. T. peb a 4 real, digant J. P., 5 real.

Doùe r'ho faeo.



Le Gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

KANNADIK

PARREZ

LANDUNVEZ

SANT GONVEL
PATRON BENNIGET
AR PARREZ
PEDIT EVIDOMP

Lezen ar pevar graouadur

Adalek ar c'henta dervez er bloaz a zeu, e vezo roet sikour d'ar familhou ezomek hag o devezo da nebeuta pevar graouadur iaouankoc'h eget trizek vloaz.

Pegement a vezo roet da bep familh ? Konseil ti-kear a voto er miz-ma var an dra-ze ; ne c'hello merka na nebeutoc'h eget ugent real ar miz dre graouadur, na muioc'h eget seiz lur dek guennek.

Ar zom merket gant ar c'honseil a vezo ar memez hini evit an oll familhou sikouret ; ma vez votet ugent real e vezo roet d'al labourer hag a c'hounit eur skoued evel d'al labourer a c'hounit eiz real epken. Mes, an ugent real a vezo da douch evit peb kraouadur dindan al lezen.

Peb kraouadur e peb familh a vezo dindan al lezen ? Tri seurt familhou a zo : el loden genta an tad hag ar vamm a zo beo ; en eil loden, an tad epken a zo beo ; en deirved loden, ar vamm epken a zo beo.

Da genta. **An tad hag ar vamm** a zo beo. M'o deuz pevar graouadur iaouankoc'h eget trizek vloaz, eur c'hrouadur a gounto epken. M'o deuz pemp kraouadur iaouankoc'h eget trizek vloaz, daou anezho a gounto hag e vezo diou loden da douch. M'o deuz c'huec'h kraouadur iaouankoc'h eget trizek vloaz, tri a gounto, ha teir aluzen a vezo. Evel a veler, e ranker diskounta an oll vugale kosoc'h eget 13 vloaz, ha tri deuz ar vugale iaouankoc'h eget 13 vloaz.

D'an eil. **An tad a zo intanv.** N'en do netra evit he vugale kosoc'h eget 13 vloaz ; mes deuz ar re iaouankoc'h eget 13 vloaz, n'en do da ziskounta nemet daou. Evelse, m'en deuz tri graouadur dindan 13 vloaz, en devezo eun aluzen, m'en deuz pevar graouadur dindan 13 vloaz, en devezo diou aluzen.

D'an trede. **Ar vamm** zo intanvez. Ne devezo netra evit he bugale kosoc'h eget 13 vloaz ; mes deuz ar re iaouankoc'h eget 13 vloaz, ne devezo da ziskounta nemet unan. Evelse, m'e deuz daou graouadur dindan 13 vloaz, e devezo eun aluzen, m'e deuz tri graouadur, e do diou aluzen.

Evel just, bep tro ma kresko niver ar vugale iaouankoc'h eget 13 vloaz e kresk niver an aluzennoù. Pa ziskresko niver ar vugale dindan 13 vloaz, e tigrsko niver an aluzennoù.

Peur e vezo resevet an aluzen ? Adalek ar bloaz a zeu, bep miz, en deveziou kenta a bep miz. Ar c'honseil ti-kear a c'hello merka ne vezo ket roet arc'hant d'ar familhou ezomek, mes bevans evit ar memez talvoudegez ; pe c'hoaz eleac'h rei bevans pe arc'hant, ar c'honseil a c'hello paea gouel-mikeal da vestr an ti ; ma ne vez ket implijet an aluzen oll, da baea al lizer ferm, an nemorant a vezo roet d'ar familh pe en arc'hant, pe e bevans. **Penaos ober ar goulen ?** D'ont d'an ti-kear an abretta ar guella, rak e konseil miz du eo e vezo votet an aluzennoù. Lavaret pet a vugale a zo, pe hano

ha pe oad o deuz, pe seurt gounidegez en deuz an tad hag ar vamm. Kementse a vezo skrivet gant an aotrou sekretour. Goudeze n'euz nemet gedal miz du. Etretant ar paper a ielo euz an ti-kear d'ar c'homite hanvet (bureau d'assistance). Tud ar c'homite a zougo var roll an aluzennoù, ar familhou ezommek, din e guirionez.

E miz du, deuz ar (bureau d'assistance), ar roll a vezo kaset d'ar c'honseil ti-kear, hag a c'hello lamet divarnhan hanoioù ; pe lakaat re all. Al listen a jomo e ti-kear epad 20 dervez goudeze, evit beza diskouezet da nep a garo mont de goulen.

Ha neuze ar familhou ezommek ha ne vezint ket bet douget varnhi, pa gredont kaout guir, pe a vezo bet merket da gaout nebeutoc'h eget ar pezh a gredont a ve dleet dezho, a c'hello dougen klemm en ti kear.

Epad an 20 dervez-ze ive, kement den a vezo o choum er gommun, pe a baeo taillou enn-hi, a c'hello ivez goulen ma vo lamet divar ar roll ar re a gavo dezho a vezo bet douget varnhan e gaou, pe ma vezo roet d'ezho nebeutoc'h eged n'ez euz bet merket.

Dindan eur miz goude an 20 dervez-ze, ar c'hlemmoù a vezo poezet er c'hanton. An aotrou Mear hag ar re o devezo douget klemm a vezo galvet.

Goude beza ho c'hlevet, ar roll a vezo klozet evit mad ervez barnedigez ar c'hanton.

Ar vinoret ha n'o deuz mui na tad na mamm, pe ar vugale dilezet, a vezo sikouret ervez ar memes lezen : an dud vad (tadou coz, contred, moerebezed, pe dud estrenn, hag o deuz digemeret anezho), a dle mont d'ho diskleria en ti-kear ar c'henta.

An dud sikouret kentoc'h, ervez lezen 1905 (secours temporaires) a c'hello choaz etre al lezen goz hag al lezen nevez. Mes ne c'hellont ket kaout an daou seurt sikour assamblez.

Dalc'her sonj mad euz a gement-ma : Ne vezo sikouret nemet ar re en em gavo e guirionez en ezomm gant pevar bugel da viana iaouankoc'h eged 13 vloaz. Evit ar vugale kosoc'h eged 13 vloaz, n'ez euz netra da glask, nemet marc'hat a ve bet great da zeski d'ezho eur vicher. Hag var ar vugale iaouank-ze e tleer diskounta tri mar o deuz ho zad hag ho mamm, daou ma n'o deuz nemed ho zad, unan ma n'o deuz nemed ho mamm intanvez.

An dispign a vezo savet, eul loden divar ar gommun, eul loden all divar an departainant, hag an deirved divar ar c'houarnamant.

Pe guir e teu an dispign, divar goust an oll, an dud karget euz ar roll o devezo sonj e tleomp rei da bep-hini ervez e vir. Aze ne dleer sellet nag ouz mignouniach nag ouz kerentiach, dindan boan da ober eul laeroni.

Setu eta ar beorien sikouret da zével ho bugaligoù pa vezont niverus, divar goust an taillou paet gant ar re all. Ra vezint anaoudek, ra vouezint ober implij vad euz an aluzennoù, ervez lezennoù Doue hag ar Vro.

ASSURANS AR CHATAL

Diasaset eo e parrez Landunvez emgleo assurans ar chatal. Setu ama hanoioù an dud a zo e penn an assurans : Prezidant, Jean Morel, mear ; vice-prezidanted, Jean Marzin, ajant, Victor Marzin, iaouank ; tenzorier, François Calvez ; sekretour ; Biel Gélébart.

Eun dervez eun den iaouank a c'houlennaz digant Hor Zalver, pe hini oa ar brassa euz ar gourc'hemennou ? Jezuz a respountaz dezhan : karet Doue dreist peb tra, euz an oll galoun, an oll Ene, an oll nerz, hag hon nesa eveldomp hon-unan abalamour da Zoue. Mad, e lakaat hon hano e emgleo assurans ar chatal, e talc'homp d'ar gourc'hemenn gread da garet hon nesa, peguir e teuomp neuze da astenn dezhan an dourn evit en sikour er c'hollou koezet varnhan e c'headal ma rei evidomp ar memes tra, d'hon tro. Mar doamp araok breudeur e Jezus-Krist, oump brema leun a joa o c'houzcut oump ive breudeur evit hon interest en douar-ma ha ne glaskimp hiviziken nemet dioual diouz drouk an eil chatal egile.

Setu ama ar pezh a zo assuret an deiz a hirio.

KARTER	KOMMISERIEIEN	TIEGZIOU ASSURET	Kezek = Priz	Saout = Priz	OLL CHATALOU = Priz
Menez	J.-M. Quéménéur, Gabriel Gélébart, François Jaouen, Jacques Foll.	21			
Kerzent.....	Jean Taloc, J.-M. Forest, Pierre Cadalen, Michel Cadalen.	21	64 = 34.050 lur	6 = 1.300 lur	70 = 35.350 lur
Arc'hantel ..	Jean Trébaol, Claude Coat, Yves Bizien, Jean Le Ven.	17	50 = 26.300	13 = 2.850	63 = 29.150
Er barrez abez.....		59	174 = 94.950 lur	19 = 4.150 lur	193 = 99.100 lur

Gant sikour Doue n'euz kollet penn chatal ebet c'hoaz abaoe me great emgleo an assurans. Pedomp sant Alar ha sant Herbot evit ma vezo diouallet hor chatal diouz peb klenved ha diouz peb droug.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

En zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PABROUN	MABROUNEZ
22 Eost	F.-E. Quéré, Arc'hantel.	François Quéré.
31 —	M.-J. Quéré, Gorrékéar.	J.-M. Allégot.
7 Gwengolo	Jean Trébaol, Arc'hantel.	M.-F. Trébaol.
14 —	Maria Nédélec, Sémaphore.	F.-L. Corpe.
16 —	Jean-Marie Kerros, Kergougan.	Hervé Kerros.
28 Eost	Gourvadezet, Crouadur Andouard, Arc'hantel.	M.-Y. Chapalain.

O deuz resevet lidou diveza Sakramant ar Vadiziant.

TESTOU

14 Gwengolo Jean Jules Peton, Kerriou. J.-L. Omnès. Aimée Perrot.

Doue ra vezo meulet.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vered, da c'headal deiz ar varn e goasked ar Groaz

29 Eost Job Mageur, 70 vloaz, Kerc'hoazoc.
5 Gwengolo Joseph Chapalain, 52 vloaz, Penfoul.
12 — Marie-Jeanne Quéré, 83 vloaz, Traon Bian.

De profundis !

EAT D'AR BARADOZ

12 Gwengolo Marie Jeanne Quéré, 41 dervez, Gorrékéar.

Laudate pueri.

Ar Rozera

Ar rozera a zo ennhan tri chapelet ha pep chapeled a zo great gant kaera roz a ziouan e liorz an Iliz, da lavaret eo gant he c'haera pedennou. Er chapeled emañ ar *Gredo*, a zo ennhan ar guirioneziou a dle pep kristen anaout ha kredi ; ar *Gloria patri*, a veulomp dreizhan an Dreinded-Santel vad an douar, evel m'her gra an Elez hag ar Zent er Baradoz ; ar *Bater* a zo ennhi kement tra a c'hellomp da c'houlenn evit gloaz Doue ha mad an den ; an *Ave Maria*, a ra, be veach ma kouez divar hor muzellou, da galoun ar Verc'hez tridal a joa, o tigaz dezhi da sonj euz an heur dudiuz ma oue bet dibabet a berz Doue evit beza mamm hor Zalver. Gant pebez aked ne dleomp ni ket ta lavaret ar rozera a zo ennhan kaera pedennou a c'hell dont a c'henou an den.

Miz here, miz ar Rozera

Mes perak e hanver miz here, miz ar Rozera ? Abalamour, brema e zeuz 440 vloaz, hon Tad santel ar pab Gregor XIII, a reaz ober bep bloaz d'ar zul kenta a here, gouel ar Rozera e kement Iliz a ioa ennhi aoter an Introuñ Varia ar Rozera. Ar gouel-ze a voa great evit trugarekât ar Verc'hez deuz an treac'h o devoa ar gristenien dre beden ar chapeled var an Turked, e Lepant, er bloaz 1571.

Diou victor all gounezet, dre beden ar chapeled, var an Turked, enebourien touet ar gristenien, er bloaz 1716, a reaz d'ar pap Clement XI, gourc'hemen ober gouel ar Rozera bep bloaz, nan ebken en Ilizou moa enno aoter Introuñ Varia ar Rozera, mez dre ar bed oll, d'ar zul kenta a viz here.

Goulskoude eo dreist oll, hon Tad santel ar Pab Leon XIII, eo en deuz gourc'hemennet abaoe ar bloaz 1883, lakât miz here penn-da-benn; da henori ar Verc'hez dre ar chapeled. Goulén a ra ma vo lavaret ar chapeled, litanioù ar Verc'hez ha peden sant Joseph en oll ilizou epad mis here.

Peo guir, emezan, eo bet plijet gant mamm Doue, pa bedet anezhi, dre ar chapeled, rei d'ar gristenien a voueschall an treac'h var enebourien divadez a glaske driframma digantho ho bro, a bouez kas beteg ennhî henvelep peden, e teuo kag e roio ivez d'ar gristenien a vremen an treac'h var an enebourien milliget a glask dre ho skolioù dizoue diframma ho feiz. Evit hon dougen da lavaret c'houekoc'h ar Rozera, an Iliz e deuz staget ouz ar beden-ze an Indulgansou ar re gaera.

Indulgansou stag ouz breuriez ar Rozera

Evit gounit an oll indulgansou-ze, e ranker lakât an hanoù er Vreuriez : kaout eur chapeled beniget gant eur beleg en deuz ar c'halloud evit-ze, ha lavaret da viana eur Rozera ar sizen en eur sonjal da bep dizenez en unan deuz mysterioù ar Rozera. Lavaret a c'heller ar Rozera dioc'htu, pe evel ma rear e kalz tiez; diou zizenez bemdez ha teir d'ar zul.

Kement hini a zo e breuriez ar Rozera, a c'hell gounit eun induljans plenier bep sul kenta ar miz ha da oll gouelioù ar Verc'hez, abouez kovez ha kommunia ha pedi evit ezommou an Iliz. Ouspenn, an hini a ve bet o kommunia a c'hell gounit eun induljans plenier all, oc'h heuill prosesion ar Rozera a vez great er pareziou, d'ar zul kenta ar miz. Ar re n'int ket bet o kommunia a c'hounit er memez tra, oc'h heuill prosesion ar zul kenta ar miz, eun induljans a zeiz vloaz hag a zeiz koraiz. Setu an indulgansou kaer a goll dre ho leziregez ar re a jom en Iliz heb mont varlerc'h ar prosesion.

Sul ar Rozera

Da zul ar Rozera, gant ma vior bet o kovez hag o kommunia; (ne ket ret kovez en deiz-se memes), an oll gristenien a c'hell gounit eun induljans plenier ken aliez gueach e zeont en Iliz gant ma pedint en intansion hon Tad Santel ar Pap. An indulgansou a c'heller da c'hounit deuz kreiz-deiz derc'hent sul ar Rozera hag en deiz-ze beteg kuz-eol. Abouez kovez ha kommunia e c'hounezur ive eun induljans plenier, epad eizvest gouel ar Rozera.

Miz ar Rozera

Epad miz here e c'hounezur ivez :

1° Eun induljans a 7 vloaz ha 7 koraiz, bep gueach ma teuer d'an Iliz da bedennoù ar chapeled. 2° Eun induljans plenier abouez kovez ha kommunia m'ar doar deuet dek gueach da viana d'an Iliz da bedennoù ar chapeled. 3° Ar memez indulgansou a c'hell da c'hounit a re ar ra ar pedennoù er gear, pa ne c'hellont ket dont d'an Iliz.

Ar pedennoù da lavaret en Iliz hag er gear eo : ar chapeled o sonjal da bep dizenez eun unan deuz mysterioù ar Rozera, litanioù ar Verc'hez hag ar beden da sant Joseph.

MIZ HERE

Adalek sul ar Rozera beteg miz kerzu, an offeren vintin a vezo da zul da 6 h. 1/2, an offeren bred da 9 h. 1/2.

Epad ar miz offeren ar chapeled a vezo lavaret da 7 heur nemet kart. Da zul e vezo daou chapeled araok gousperou, ha goude gousperou eur chapeled, litanioù ar Verc'hez ha peden Sant Joseph.

Pedet oar da renka pep tra en tiegeziou, evit ma c'hello dont bemdez, unan pe zaou a bep ti, da offeren ar chapeled, da govez ha da gommunia. Miz ar Rozera, evel er b'aveziou all, a vezo adarre evit tud ar barrez evel amzer zantel Pask, kement hini a zo en oad da gommunia, koz ha iaouank, a vezo bet, araok fin ar miz, o taoulina ouz an daol zantel.

3. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun-Sakr da 7 heur nemet kart.

5. Pardoun ar Rozera. Offeren ha gousperou ar gouel.

Koummans kovez en derveziou araok, ha dont da zadorn goude mern, evit ma c'hello an niver braz euz ar barizioniz kaout an Indulgansou a c'heller da c'hounit bep bizit a vezo great d'an Iliz en deiz-se. Tennout d'ar zul-ze, hor c'herent, eat d'an anaoun, deuz tan ar purgator, o lakât en ho c'herc'hen, kalz indulgansou plenier.

12. 22 sul goude ar pantekost, offeren ha gousperou ar zul.

A rei en deiz-ze, ho hanter heur adorasion

11 h. Jean-Marie Minguy, Yves Bizien, Kellerson, Hervé Magueur, Job Magueur, Kerc'hoazoc.

11 h. 1/2. An aotrou persoun, François Jézéquel, Job Godebert, François Ollivier, Bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Jacques Foll, Langurru, Jean-Marie Godebert, Kernézoc, Pierre Trébaol, Troménec, François Lunven, ti-pri.

1 h. Claude Cloatre Kervéon, Prigent Conq, Sant-Gouvarc'h, Gabriel Pérès, Kerc'hoazel, Jean-Louis Minguy, Poullouarn.

1 h. 1/2. François Fourn, Jean-Marie Taloc, sant Samson, Joseph Taloc, Navant, Jean-Marie Perchoc, Kervéléoc.

19. 23 sul, goude ar pantekost offerenn ha gousperou ar zul.

26. 24 sul goude ar pontekost offerenn ha gousperou ar zul.

Soudarded iaouank

D'ar zadorn, 4 a viz here, da 7 heur nemet kart e vezo lavaret offeren kimiada ar zoudarded iaouank. Pedet int da zont en deiz-ze da govez ha da gommunia. Pa vezo Jezuz diskenet en ho c'halonou,

er pedint d'ho delc'her start en ho feiz epad ho servich. Goude an offeren e teuint d'ar presbytal da gerc'het ar paper a rei testiñ int kristenien, hag e fell dezho kaout ar beleg er c'hlenved hag en danger a varo, hag eo ho holontez, e vent anterret gant lidou santel an Iliz.

SKOLIOU

D'al lun 6 a viz here da 7 heur nemet kart, e vezo lavaret evit bugale ar skolioù, offeren ar Spered Santel. Ar gerent a zigaso ho bugale abred aoualc'h evit an offeren. Arabat ankounac'hât eo Doue a ro ar spered hag ar c'hoant da labourat.

KATEKIZMOU

Doue en deuz hon lakeat oll en douar-ma, evit he anaout, he garet, he servicha hag erruout evelse er baradoz. Mes, evit erruout heb fazia e penn eur veach, e ranker gouzout an hent. Evit erruout er baradoz eo ar memes tra. Mad, e peleaç'h e vez desket deomp hent an Env? Er c'hatekizmoù. Eun dever striz eo ta evit ar gerent, poania ho-unan da zeski katekizmoù d'ho bugale; hag evit ma vezo c'hoaz ar vugale sklerijennet gwelloc'h var gwirioneziou ar relijion, e tleont o lakât er skol gristen hag o digas da skol an Iliz en derveziou merket evit-ze. Araok ho digas d'ar c'hatekizmoù, e tleont ive gaelet hag ii ho deuz desket ho c'hentel.

Ar c'hatekizmoù a zigoro da zizun ar Rozera. Setu ama penaoz e renket an traou beteg ar C'horaz :

Da veurz da 4 heur, katekizmoù evit ar vugale a dle ober ho fask kenta solanel da viz mae kenta pe da viz mae er bloaz goude ; da lavaret eo d'ar vugale o devezo bet 10 vloaz pe 9 bloaz araok ar bloaz nevez 1914.

Da veurz d'ar memez heur, katekizmoù evit ar vugale gant ho eil hag o zrede pask solanel.

Da iaou, da 8 h. 1/2, katekizmoù d'ar memez bugale evel da veurz hag ouспен d'ar re a zo er skol er pareziou all.

Da iaou c'hoaz, da 9 h. 1/2, katekizmoù d'ar vugale en oad da gommunia, da lavaret eo d'ar vugale o devezo bet 8 pe 7 vloaz araok araok ar bloavez nevez 1914.

Da zul da 1 heur a kart, katekizmoù d'ar re a zo gant ho fevare pask ha d'ar re a zo er skol er parrezioù all, m'ho deuz 9 bloaz.

Ar vugale o devezo manket d'ar c'hatekizmoù heb rezoun vad ebet, a vezo korbellet.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



LEZEN AR PEVAR GRAOUADUR

E Kannadik miz here, er bajen genta, euz faziet, pa lavaret, o comz euz an tad intanv : Evelse m'en deuz tri grouadur dindan 13 vloaz, en devezo eun aluzen. Kement-se a zo eur fazi, pe guir e ranker kaout 4 da nebeuta dindan 13 vloaz evit touch eur sikour. Skriava a ranker ta : m'en deuz 4 grouadur dindan 13 vloaz en devezo diou aluzen, m'en deuz 5 en devezo teir aluzen, etc.

O komz euz ar vamm intanvez, eo ive faziet pa lavare : Evelse m'e deuz daou graouadur dindan 13 vloaz, e devezo eun aluzen, m'• e deuz 3 e devezo 2 aluzen. Kement-se a zo adarre eur fazi, pe guir e ranker kaout 4 graouadur da viana dindan 13 vloaz evit kaout aluzen. Skriava a ranker ta : m'• e deuz 4 graouadur dindan 13 vloaz e devezo 3 aluzen, m'• e deuz 5 e devezo 4 aluzen, etc.

Beleien Parrez Landunvez abaoe ar bloaz 1800

Eur blijadur e vezo evit ar barrizionis lenn hanoiou ar veleien, o deuz labouret da zalc'her ar feiz er barrez ha karantez Doue er c'halonnou abaoe 113 vloaz a zo.

Persouned, an Aotrounez :

- Deuz 1802 da 1804... Roulloin.
- 1804 da 1807... Pell'eteur.
- 1809 da 1826... Floc'h.
- 1826 da 1831... Prigent.
- 1831 da 1843... Mear.
- 1843 da 1856... Rolland.

Kureed, an Aotrounez ;

- Deuz 1802 da 1804... Floc'h.
- 1804 da 1810... Bézard.
- 1810 da 1817... Hini ebed.
- 1817 da 1837... Iliou.
- 1837 da 1838... Forjonel.
- 1838 da 1846... Caroff.
- 1846 da 1847... Le Corre.
- 1847 da 1850... Boga.
- 1850 da 1851... Calvez.
- 1851 da 1855... Guillou.

Persouned, an Aotrouned :

- Deuz 1856 da 1868... Touz. 1920-1926
- 1868 da 1873... Corre. 1926-1943
- 1873 da 1878... Roudaut.
- 1878 da 1886... Mingant. 1928
- 1886 da 1892... Milin.
- 1892 da 1920... Le Roux.

Kureed, an Aotrounez ;

- Deuz 1855 da 1861... Poullaouec.
- 1864 da 1866... Forcès.
- 1866 da 1870... Quéménéur.
- 1870 da 1878... Guillou.
- 1878 da 1884... Liziard.
- 1884 da 1885... Quillivic.
- 1885 da 1886... Callec.
- 1886 da 1917... Boucher.
- 1907 da 1931... Caroff.
- 1931... Maost.

Ra lavaro ar barrizionis eun *De Profundis* evit ar re a zo eat d'an Anaoun hag eur *Bater* evit ar re a labour c'hoaz en ho zouez.

PARDONIOU AR BARREZ

Echu eo evit ar bloaz-man, pardonioù ar barrez. Nag a c'hrasou puill a zo kouezet en Eneou ar barrizionis epad an derveziou santel-ze. Ar gouelioù kaer-ze a zo bet evit Landunvezis, en guirionez, deveziou a bardoun, rak deuet int niveruz da dreid ho

c'hovessour evit karza ho Ene a bep pec'hed, ha bet int o taoulina euz an daol zantel, evit rei d'ho c'haloun, dre eur gommunion vad, nerz Doue he-unan, o dalc'ho var hent ar zantelez hag ar Baradoz.

Koumprenet o devoa guirionez komzou ar *C'hannadik*, pa lavare : Souner galvet da eur pardoun, eo, an diaoul, o voug, madelez ar zent patrouned, e kenver ho bugale. Abalamour da-ze n'euz bet souner ebed nag e pardonioù Kerzent, nag e pardoun Sant-Samson, nag e pardoun braz ar bourk. Hag an hanter dousen estranjourien o deuz klasket lakaat dans e pardoun ar bourk, o deuz buez dilezet ho fringaden, dirak an disprij a ziskoueze evitho an oll bardounerien all. Meuleudi da dud Landunvez o deuz diskouezet en dervez-ze ho feiz krenv. starteat c'hoaz en ho c'halonou dre ar brezegeñ gaer a reas dezho, an aotrou Masson, en offeren bred.

Ha brema piou o deuz galvet sounerien da bardoun sant Gonvel an tenven? N'ouzoun ket. Setu ama ar pez o deuz gounezet. Serret o deuz en o c'henver, kaloun ho zant patroun, prest da c'houlen evitho, deiz he c'houel, grasou puill an Doue en deuz he gurunet en Env. Tennet o deuz varnho, malloz an Aotrou Doue en deuz lavaret, milliget ra vezo an dud a deu dre ho c'homzou, pe ho oberou da lakaat re al da goeza er pec'hed. Mad, an oll zent o deuz lavaret penaoz lakaat dansou ha dreist oll da zul ha d'ar pardoun, co stigma ar rouejou ar re zurra evit diskar an Eneou e galloud an drouk-spered. Peb hini a respounto e barnedigez Doue, deuz an drouk hag ar pec'hejou e vezo bet kaoz dezho. Neuze ta ar sounerien hag ar re o deuz ho galvet, a vezo tamallet he barnedigez Doue, euz ar pec'hejou a vezo bet great en dansou ho deuz digoret.

Mes, peguir, oump oll kristenien, pedomp Doue da gaout truez ouz ar re o deuz roet tro da ober kement a bec'hejou.

SOUDARDED IAOUANK LANDUNVEZ

Oll int bet er retred e Lesneven, ha fizians a zo e talc'hint, o fevarzek, sonj mad euz ar c'hentelioù ken fur ha ken talvouduz roet dezho eno.

Ar *C'hannadik* a zo eüruz da reketi dezho beach vad ha nerz kaloun da servicha Doue ive, epad ma servichint ho bro. C'hoant en deuz da heuill anezho eleac'h ma vezint ha da gaz dezho keleier ho farrez. Plijadur a rei dezho lenn eur goumz brezounek, etouez ar gallek a glevint. E gaout a reint e ti an aumounier pe ar beleg a gemero soursi anezho.

Ar zoudarded iaouank eveziek euz ho Ene, a glasko mignouned mad ; ho c'henta mignoun, a vezo goulskoude, an Aotrou aumounier ; mont a reint an alies a c'hellint d'er gullet, hag en he di e kavint ar zoudarded a feiz hag a vuez vad, a vezo dezho guir mignouned.

D'an aumounier e raint ho dillad hag ho arc'hant da c'horren. En he di e kavint anezho, po do ezoum.

Ma talc'hont ho arc'hant varnezho, e vezo buan dispignet ha dispignet fall.

Evit ober mad, ar gerent ne dlefen kas guennek ebed d'ho faotred soudarded, nemet dre zaouarn an aumounier.

Pa vez roet an arc'hant dirak oll soudarded ar gampr, pe ar c'houmpagnunez, ar paour keaz soudard, n'en deuz peoc'h ebet, ken na vezont teuzet oll.

E kazerniou a zo, ne esperner goaperez ebed evit distrei ar zoudarded yaouank deuz ho deveriou kristen. N'euz forz, a lavaro en dervez kenta ar zoudard kalounek ha guir gristen : an offeren a glevin bep sul, pa c'hellin, va fater a livirin ha pa ven astennet em guele, kovez ha kommunia a rin, pa girin, e ti an aumounier, ha m'ar karan den n'er gouezo.

Setu ama hanoiou ar zoudarded galvet gant ar vanden genta :

- Joseph Arzel, C'hellen, 118^e, infanterie, Quimper.
- François Le Borgne, Pourané, 19^e, infanterie, Brest.
- Yves Cloatre, bourk, 54^e, infanterie, Compiègne.
- Vincent Corolleur, Penfrat, 54^e, infanterie, Compiègne.
- Jean-Marie Forest, Trémazan, 32^e, génie, Versailles.
- François-Marie Floc'h, St-Gonvarc'h, 54^e, infanterie, Compiègne.
- Jean-Marie Guennéguès, Kermajeau, 54^e, infanterie, Compiègne.
- Sébastien Guennéguès, Créac'hgoriou, 54^e, infant., Compiègne.
- Jean-Marie Jaouen, Kérincuff, 54^e, infanterie, Compiègne.
- François Jaouen, Cave, 54^e, infanterie, Compiègne.
- Hervé Kervran, Penfoul, 62^e, infanterie, Lorient.
- Auguste Perchoc, Kervéleoc, 35^e artillerie, Vannes.

AR SKOL GATEKIZ

Teir sizun a zo m'eo digoret ar skol gatekiz. Mad, en despet d'ar pezh a zo bet lavaret er gador brezek, en despet d'ar pezh a zo bet merket, var *Gannadik* miz here divar benn an oad da zont d'ar c'hatekiz hag an derveziou ma vezo great, e zeus bugale ha n'int ket bed c'hoaz tro ebed, ha kalz re all a zo deuet heb beza sellet ouz ho c'hentel.

Da biou ar pec'hed? D'ho c'herent a dra zur, n'o deuz ket kemeret gantho ar vialen pa ne deuent ket d'ar c'hatekiz, n'o deuz ket beillet evit ho lakaat da zeski ho c'hentel. Arabat dezo digarezi, e c'hoar ho bugale lenn, hag e teskint ho-unan. N'euz ket unan, var dek, o teski he-uran, ma ne vez ket lakeat d'en ober, ma ne vez ket great dezhan er gear, resita he gentel.

Ar gerent o deuz c'hoant da gaout bugale fur ha kristen, a rank beza ho-unan fidel da ober kement tra a zeski ar c'hatekiz d'ho bugale.

Ar skouer vad eo ar guella kelennadurez. Ma tesk ho pugel, e ranker, dindan boan a bec'het marvel, mont d'ar zul d'an offeren, hag ober ar pask bep bloaz, ha ma ne dit na d'an offeren, na da ober ho pask, e vezo buen kollet ar boan o peuz kemeret evit zeski dezhan.

katekiz ha freuzet ho labour. Ho kraouadur a lavaro abred. Perak e c'hourc'hemen din va zad ha va mamm ober ar pezh ne reont ket ho-unan ? Gourc'hemenno Doue, ha re an Iliz a zo goulskoude great evit an oll.

KATEKIZ A VOLONTEZ VAD

An dud vad a ra katekiz abalamour da Zoue, a zo ive dezo mall kregi en ho labour, a blij kement da Zoue hag a zo ken talvouduz evit an Eneou. Arabat dezho ankounac'haat ar veuleudi hag an aliou mad en devoa roet dezho, an Aotrou 'n Escop deiz ar gonfirmasion. Estreget ober katekiz, e tleont ouспен beilla evit gulet hag ar re a gentelliont, a vez d'ar zul en offeren hag er gousperou, hag aliez o kovez hag o kommunia,

ER SKOL GRISTEN

O deuz bet epad ar miz, ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez

Klas kenta.	{ Germaine Drogou. Madeleine Morel.	Eil rummad.	{ Anna Quivoron. Marie-Yvonne Conq. Philomène Bossard. Marie-Anne Le Borgne.
Kenta rummad.		Eil rummad.	
Eil rummad.	{ Euphrasie Maguerez. Marie Vaillant. Ernestine Guéna. Pauline Morvan. Gabrielle Perchoc. Marie-Renée Perchoc. Marie-Louise Talarmin. Joséphine Guéna.	Trede klas.	{ Marie Milin. Françoise Eliès, bourk.
Trede rummad.		Trede klas.	
Eil klas.	{ Rosalie Croguennoc. Joséphine Le Borgne. Eugénie Morel. Marie Squiban.	Rummad.	{ Hélène Bizien. Marie-Yvonne Kéros. Joséphine Fourn. Joséphine Talarmin. Gabriel Conq. Isabelle Guéna. Marie-Yvonne Guéna. Elisa Luart. Marie-Yvonne Perchoc. Haudes Talarmin.
Kenta rummad.		Rummad.	
Eil klas.	{ Françoise Sylvestre. Joséphine Lescop. Françoise Le Guen. Eulalie Cadour.		
Kenta rummad.			

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PABROUN	MAEROUNEZ
19 Guengolo.	Marg.-Eug. Corolleur, Arc'hantel.	Eug. Magueur. Louise Kerjean.
24 —	Claude-Marie Trébaol, Bédiez.	Claude Trébaol. Franc. Fourn.
26 —	Joséphine Kerjean, Trémazan.	J.-M. Vaillant. M. Kerjean.
28 —	Victoire Uguen, Traon.	Guil. Salou. Victoire Uguen.
28 —	Anne-Marie Talarvein, Penlorzou.	Franc. LeGuen. R. Talarvein.
5 Here.	Jean-F. M. Bothorel, Trémazan.	Jean Cadalen. M. Bothorel.

O deuz resevel lidou diveza Sakramant ar Vadiziant.

	TESTOU
19 Guengolo.	Reine-Ernestine Corolleur, Arc'hantel. V. Corolleur. E. Le Borgne.

Doue ra vezo meulet.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe
he derra :

24 Guengolo. Fr. - Marie Paul, Porspoder ha Marie Anne Magueur, Kerc'hoazoc.
Pater, Ave !

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goasked ar Groaz

24 Guengolo. Marie Luart, 75 vloaz, Ru-Allan.
6 Here. Magdeleine Godebert, 70 vloaz, Kerzent.

De profundis !

An 31 a viz here, derc'hent gouel an Oll Zent, e zeus iun ha vijil.

MIZ DU

1. Gouel an Oll Zent. An offisou evel d'ar zul. Offeren ha gousperou ar gouel.

Gouel an Oll Zent a zo dreist oll, gouel an dud digemeret brema er Baradoz ha ne vez ket great eur gouel a gostez en honor d'ezho ; evelse gouel hon tudou koz eo, gouel hor c'herent hag hor mignouned peur echu ho furkator gant'ho, hag hini ar vugale vian maro araok beza deuet ho skiant dez'ho. Pedomp mad anezho evit m'or sikourint en hon ezommou. Beza e zint hon difennourien en Env. Sonjomp ive penaoz en douar-ma, ar zent o deuz bet, kerkoulz a ni, poaniou da c'houzaon, techou fall da vrezelekaat, skoueriou fall da dec'het deuz outho, pec'hejou da gaout ar pardoun anezho. Mad, gant sikour Doue e c'hellomp ober ar pez o deuz great hag erruout eveld'ho er Baradoz.

En despet d'an daou zervez hanter a c'houel a zo dioc'htu, e ve mad, goulskoude, koumans kovez en derveziou araok pa deour da oferen ar chapeled ha dreist oll d'ar guener goude mern. Er bloaz-ma, kement den en deuz bolontez, a c'hello eas, kommunia evit an Anaoun.

2. 25 sul goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou ar zul. Goude gousperou ar zul, e vezo great ar brezegen evit an Anaoun, kanet gousperou ar re varo, a great er vered prosesion an Anaoun. Sur oun ne ankounac'haoc'h ket en dervez-ze Eneou ar purkator. Ho tiskouarn a vezo tano evit klevet ho hirvoudou, hag ho kaloun tener evit kaout truez outho pa lavaront deoc'h :

Breudeur, kerent ha mignouned,
Enn han ' Doue hor zelaouet,
Enn han ' Doue hor sikouret !
A bep tu d'eomp n'euz nemet tan,
Tan var c'horre ha tan dindan,
Ni n'hellomp dre hor pedennou
Distan na berraat hor poaniou,
Doue ouzomp ne zelou ket,
Enn han ' Doue, hor sikouret.

Petra da ober evit sikour an Anaoun, neket ebken dez gouel an Anaoun, mes bembez epad ar bloaz :

1° En ho pedennou, noz ha mintin, o pe sonj en Eneou a zo er purkator.

2° Bembez, kinnigit d'an Aotrou Doue evitho, ho labourou tenn, ho poaniou, ho trubuilhou, oc'h aluzennou.

3° Pa vioc'h en offeren, lavarit d'hor Zalver Jezus-Krist, lezel eun diveraden euz he c'hoad da zivera var an Eneou keiz-ze.

4° Grit an alies a possub ar gommunion evitho.

5° Lakit pedi evitho. Eur c'hiz da veza meulet en hor bro, eo lakaat servichou evitho, pa z'eo guir gant peb servich (hag a zo eur beden kaer hag eun aluzen ouspenn), e zeuz ive eun offeren, ar guella peden a ouffemp da ginnig da Zoue, peden Jezuz o vervel var ar groaz.

Netra talvoudussoc'h evidomp hon-unan eget pedi evit an Anaoun, rak an eneo-ze a lavar d'eomp :

Ha pa vimp-ni, e gloar Doue
Evidoc'h, ni a bedo ive.

3. Gouel an Anaoun, offeren yintin da 6 h. 1/2. Da 9 h., servich an Anaoun, offeren var gan ha prosesion er vered.

7. Guener kenta ar miz, offeren ar galoun sakr da 7 heur nemet kart.

9. Gouel dedi oll Ilizou Franz, offeren ha gousperou ar gouel. An Ilizou a zo konsakret evit beza tiez an Aotrou Doue, hag eun honor ker braz eo dez'ho, ma rear bep bloaz eur gouel a gostez evit delc'her sonj euz ho dedi pe gonsekrasion.

A zo pedet da ober ho hanter-heur adorasion er zul-ze :

11 h. Auguste Le Borgne, Pourané ; François Guennégues, Kelléron ; Yves Mingant, François Jaouen, Kerléo.

11 h. 1/2. An Aotrou Kuré, Joseph Lescop, François Jézéquel, François Corre, bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Jacques Perhirin, Kerc'hoazoc, François Pellen, René Jaouen, Kernézoc, Claude Taloc, Navant.

1 h. Jean Trébaol, Bédiez, Yves Uguen, Traon, Joseph Allégot, Kerlaguen, Yves Pellen, Kerzent.

1 h. 1/2. Jean-Marie Quéméneur, Traon, Gilles Guennégues, François Eliès, François Croguennoc, Kermajeau.

16. Eisved dedi ilizou bro Franz. Offeren ha gousperou ar gouel.

23. Sul diveza goude ar Pantekost. Offeren ha gousperou ar zul.

30. Kenta sul euz an Asvent. Oferen ar gouel, gousperou sant Andre.

KANNADIK


Kannadik miz guengolo ha miz here ho deuz koustet 52 lur. Bet evit sikour ho faea digant : C. C., F. T., J. C., pep a ugent real, P. T., M.-J. G., Y. K., G. M., pep a bevar guennek varnugent.

Doze r'ho faeo.



Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imp. r. Château, 4.



Ne c'hellimp ket ta distruja an Iliz Katolik

Eun den, enn deuz marteze, diskaret ouspen 12 guech, dre he skridou hag he gomzou binimus, an dud a veze e penn ar c'houarnamant, a skrive n'eus ket pell, en he gazeten, ne c'hellimp ket ta morse rei lam d'an Iliz Katolik, ne c'hallimp ket ta dic'hriena ar feiz d'euz kaloun ar gristenien, gouarnet gant hon Tad Santel ar Pab, hag an Eskapien a zo a-unan gant ar Pap, hag ar veleien a zo a-unan gant ho Eskapien. Hag he c'hoant fallakr eo ive c'hoant ar franmansounet ken gallouduz en hon amzer.

Mes, perak ne c'hellomp ket dont a benn euz ho zaol diaoulek ? Abalamour ma zeo'ha ma vezo atao an Iliz skoret gant Jezuz-Krist. Daoust ha n'en deuz ket lavaret da Sant Per p'en lakea e penn an Iliz, te a zo mean ha var ar mean-ze, me a ziazezo va Iliz, ha biken d'or an Ifern pe fallagriez he enebourien ne vezint treac'h dezhi ? Daoust a n'en deuz ket lavaret d'he Ebestel p'o c'hasse da brezek an Aviel dre 4 c'horn ar bed, krogit en ho labour gant fizians, rak me vezo ganeoc'h evit ho c'harpa betek fin ar bed :

Mes, perak kounar an dud dizoue a eneb an Iliz katholik ? Daoust hag eun drouk bennag he deuz great ? Nan, n'he deuz great morse, nemet vad d'an oll.

Pe ar c'hristen a varvo iaouank, pe hen a varvo koz, atao e kavo an Iliz en he geve, evit pellaat, m'ar gel, an drouk deuz he gorf pe deuz he ene, evit hen tenna divar hent an Ifern hag en lakaat var hent ar Baradoz.

En amzer ma savas Jezuz-Krist he Iliz, dre ar bed oll, koulz lavaret, ar bugel pa deue var an douar mac'hagnet, pe pa ne blije ket d'he dud n'en devoa da c'headal nemet ar maro raktal. Brema an Iliz, e deuz desket d'he dad ha d'he vam, eo ar bugel-ze, krouet var henevedigez an Aotrou Doue hag eo eun dever stris evitho, kaout soursi euz he gorf hag he Ene. Abalamour da-ze, an Iliz, evel ma teu ar bugel er bed, en laka dre ar vadiziant, e renk bugale Doue, hag a lavar d'he dud, merket hiviziken evit an Env e rankint diskouez d'ho kraouadur an hent, o teski dezhan dre ar c'hatekiz ar guirioneziou a rank da gredi hag an deveriou hen deuz da ober evit erruout er baradoz. Ha ma n'ho peuz ket a amzer da ober dezhan katekizmo, klaskit tud a volontez vad d'ho sikour. Lakit anezhan er skol gristen. Digasit anezhan kercent hag he 7 vloaz da skol an Iliz, evit ma c'hello ar c'henta anaout an dizevedigez a zo, etre ar bara a zebr bembez, ha bara ar gommunion a zo chenchet e korf, goad, Ene ha divinite hor Zalver Jezus-Krist.

O lakaat ar bugel da gommunia d'he 7 vloaz, ma ne c'hell ket an Iliz mouga he ioulou fall, da vihana e roio dezhan nerz da veza treac'h dezho hag e viro deuz an drouk-spered da gemeret en he galoun plas ar Spered-Santel. Ha ma talc'h he gerent, d'en digaz d'ar c'hatekizmo betek he 14 vloaz, ervez reolen hor parrez er poent-ze, e

savint kasi sur eur c'hraouadur a rei ho eurusded en douar-ma ha divezatoc'h eur zant er Baradoz.

Brema e klever aliez ar vistri hag ar vestrezed skol gristen, o lavaret : ar vugale a skoliomp a zo evel chenchet e bugale all, eleac'h ne velemp araok nemet dizentidigez, mouzerez, feneantiz, ne velomp mui nemet senti gant mall, labourat a volontez vad. Petra a zo penn kaoz euz an dra-ze ? Eun dra ebken, bugale ar skoliou kristen, dreist oll ar re a zo o loja, a gommuni koulz lavaret bemdez, hag o tougen bemdez Jezuz en ho c'haloun, e reomp oberou Jezuz, oberou a zantelez.

Tadou ha mammou a glever ken aliez o klemm, abalamour ma z'eo ho pugale dizent, ma e n'em zavont a eneb deoc'h, ma treuzont ho kaloun gant komzou rok ha trenk, grit evel ar mistri hag ar mestrezed skol kristen, sentit ouz gourc'hemen an Iliz ho mamm, a lavar deoc'h dre c'hinou hon Tad Santel ar Pap, deuit aliez, bembez mar gellit da gommunia, digasit ganeoc'h ho pugale en oad a skiant, hag ar re gossoc'h, hag e kavimp er gommunion eienen ar zentidigez hag a garantez en ho kenver, hag e reint ho joa en douar-ma e c'headal beza perlezennou kaera ho kurunen er Baradoz.

Eun dra bennak a zo chenchet er barrez

An hini a ra ar *C'hannadik* en deuz guelek kalz plac'hed iaouank en ho amzer diveza. Oll, koulz lavaret, e c'houlennent gant daelou, pellaat dioutho ar maro a deue d'ho skei didruer, pa gave dezho edont o vont da dauva eur vuez hir hag eüruz. Aliez, e veze mil boan ouz ho lakaat da zigemeret ho Sakramanchou diveza. Kaled oa eyitho ober da Zoue, a volontez vad, ar sakrifiz euz ho buez. Ne ket bet evelse, evit Denise Talarmin e devoa 17 vloaz ha Jeanne Pondaven he devoa 24 vloaz, pa deuas Doue d'o gervel d'he Varadoz er miz tremenet. Ho diou o deus goulennet anezho ho-unan ho Zakramanchou, o diou o deuz c'hoanteat kommunia aliez epad ho c'hlenved hir ha poanius ; rak gouzout a reant penaos pa vije Jezuz en ho c'haloun e toukfe ar penn pounera euz ho c'hroaz, ha pa o deuz guelek, edo erru Jezuz d'o c'herc'het, o deuz anezho ho-unan goulennet Sakramant an Nouen ha great a volontez vad, ar zakrifis deuz ho buez evit paea dle ho fec'hejou.

Gouzout a reant penaos an nouen a gresk ennomp buez ar c'hras, a ra d'an den klanv beza nebeutoc'h troet var an drouk, karet muioc'h ar mad ha saouri guelloc'h traou an Env ; gouzout a reant ive penaos an nouen o lakaat easoc'h ar spered, a deu da zousaat poaniou ar re doc'hor, hag a ro dezho zoken ar iec'hed, mar kav da Zoue e ve mad an dra-ze evit silvidigez ho Ene.

A beleac'h oa deuet d'an diou blac'h iaouank-ma, ar peoc'h-ze en amzer diveza. Ho diou edont e renk bugale Mari, ha guelek a reant an hini o devoa kemeret evit mamm, o telc'her dezho peb a gurunen en he c'hichen er Baradoz, ho diou oant bet bloaveziou o loja er skol gristen, hag enho o devoa desket penaos ma c'heller pedi evit kaout eur vuez hir en douar-ma, eo c'hoaz eun dra talvoudussoc'h, ober bolontez Doue, ha beza prest da vont d'ar Baradoz, pa deu Doue d'or gervel, pe en hor iaouankis pe en hor c'hosni.

TEIR REUNION GUITALMEZE

Eur blijadur ebet evidon, beza test, d'ar zul 9 a viz du, deuz an teir reunion a zo great evit ar Voazed, e Guitalméze. Er reunion genta, great evit komiteou emgleo katoliked ar c'hanton, oa 50 goaz bennag diredet a bep parrez gant ho beleien en ho fenn. Komite peb parrez en deuz lavaret petra en devoa great a-unan gant he beleien, evit kreski en he barrez ar garantez evit Doue, hag an oberou a ra vad d'ar c'horf ha d'an Ene. Voazed ar c'homite o devoa poaniet, koulz lavaret, en oll parrezioù evit alia an dud, ha bugale ar skolioù, da lakaat ho hano e breuriez ar Groaz-Ven. An oll a vel sklear penaoz, mar gelfe ar Vretoned tremen abiou eun davern heb efa odivi pe boessoun crenv, e vent ar bobl kenta euz ar bed, hag e vije e peb ti, bara da zebri ouz an naoun hag amann da leda varnhan. E kalz parrezioù eo dija hir listen ar re o deuz roet ho hano. Voazed ar c'homiteou o deuz ive labouret da ingala kazetennou kristen, ha da zigas an dud, stankoc'h d'ar gousperou. Evit-ze, e roont skouer vad, o tont atao ho unan pa vezont en offeren bred. Labouret ho deuz ive da zigas oll dud ho ziez hag ho amezeien d'ar retred a zo bet roet kasi en oll barrezioù dre okasion ar Jubile.

Ama, aotrou Persoun Guitalméze a zo savet en e za evit ober meuleudi parrez Landunvez, abalamour ma e deuz echuet retred ar Jubile dre eun dervez lakeat da studia guelloc'h karantez Jezuz evidomp e Sakramant an Aoter; n'em beuz, emezan, gelet guouel ebed kaeroc'h ha great gant muioc'h a zantelez hag a aked a berz an oll.

« Ar garantez-ze evit Jezuz kuzet dindan spesou ar bara hag hi a zo abaoue chomet beo e kalonou tud Landunvez? »

Ia, a c'heller da respount leun a joa. Er 4 miz tremenet abaoue an dervez kaer-ze, e zeus bet e Landunvez muioc'h a gommunionou evit na veze, e-pad eur bloaz araok. E-pad miz ar Roza ebken, euz bet daou vil kommunion hag evit gouel an Oll-Zent hag an Anaoun, kement all. Ar barrizioniz a oar brema penaoz e c'heller kommunia bembez, gant ali ar c'honfessour, pa vezer e stad a c'hras ha pa dostear euz an Daol Zantel gant eun intansion eün. Ogen, eun intansion eün a vez, pa gommunier evit plijout da Zoue hag evit gelout dre ar bara divin-ze enebi startoc'h ouz an defaoutou a c'heller da gaout.

An niver braz a gommunionou great d'ar gouelioù, o devezo lakeat ar Zent da dridal a joa er baradoz, o velet e kemeront ar memez hent gantho evit tizout surroc'h eurusded an Env, hag eneoù ar purgator berreat pe echuet ho foanioù abalamour d'ar gommunion great evitho, hor sikouro d'ho zro dre ho fedennou, da jom stard var hent ar Baradoz. »

An eil reunion a voa da 2 heur evit ar re a zo e penn emgleo an tadou a famill. Eno, int en em glevet evit enebi, oll asamblez, ouz al leorioù digristen a c'helfe beza lakeat etre daouarn ar vugale e skolioù a zo. Neuze, e voa dibabet daou evit mont da Guimper gant an autrou Auguste Carof, presidant ar C'homite. Er gear-ze, eo

en em vodet d'ar zul 16 a viz du, oll gomiteou an tadou a famill euz an Escopti.

Pa voa echu ar reunion-ze, an oll a ieas d'ar gousperou, kanet gant an aotrou persoun Sant-Pabu.

Goude ar gousperou, voazed emgleoioù ar gatoliked a bep parrez euz ar c'hanton a deuas d'ar patronaj. 600 oant o selaou an Aotrou Charreton, avokat e Lannion, o tisplega sklear ha freaz : eo eun dever evit an tadou hag ar mammou dioual ouz ar skolioù ne vez enno morse komzet a Zoue, evel pa n'en deffe ket ar bugel krouet evit an Ene, ar guir da zeski an hent? Stourm a rankint ive, emezhan, oll assamblez, ouz al lezennou nevez a zo c'hoant da voti eneb ar skolioù kristen. Ne lavarin ket hirroc'h, rak lennet o peuz dija he brezegen elavar, er *C'hourrier du Finistère*.

ER SKOL GRISTEN

O deuz bet e-pad ar miz, ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez

Klas kenta.	{	Germaine Drogou. Marie Brénéol. Euphrasie Maguerez. Josephine Conq.	Eil rummad.	{	Marie-Yvonne Conq. Anna Quivoron. Marie-Yvonne Perchoc. Marie Jaouen. Adèle Talarmin.
Kenta rummad.	{	Marie-Jeanne Le Borgne. Pauline Morvan. Marie Vaillant. Ernestine Guéna.	Trede klas. kenta rummad	{	Hélène Bzien. Angélique Léostic. Noëlie Lesvenan. Marie Milin. Marie Cadalen. Isabelle Guéna. Jeannie Magueur. Marie-Yvonne Trébaol.
Trede rummad.	{	Désirée Maguerez. Marie Squiban.	Eil Rummad.	{	Jeanne Didou. Marie Bossard. Françoise Eliès. Josephine Talarmin. Françoise Trébaol. Bernadette Jaouen. Marie-Anne Bossard. Gabriel Conq.
Eil klas. Kenta rummad.	{	Josephine Lescop. Pauline Conq. Françoise Sylvestre. Françoise Le Guen. Eulalie Cadour. Marie Derrien.			

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PARROUN	MAEROUNEZ
19 here.	Marguerite Sallou, Tour.	René Tréguer. Marg. Le Goff.
19 —	Eugénie-M.-A. Magueur, Naonet.	Franç Créach. Eug. Le Borgne.
25 —	Jean Habasque, Créac'h.	J. Guennégues. M.-A. Rondel.
17 du	Marie-Renée Cadour, Sant-Gouvarc'h.	François Conq. Marie-R. Michel.

Doue ra vezo moulet.

ENTERRAMANTHOÙ

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goasked ar Groaz

17 here.	Denise Talarmin, 17 vloaz, Kerzent.
18 —	François Floc'h, 56 vloaz, Sant-Gouvarc'h.
8 du.	Jeanne Pondaven, 24 vloaz, Bourg.

De profundis !

EAT D'AR BARADOZ

15 du.	Craourdur Trébaol, 15 minut, Bédlez-Vraz.
--------	---

Laudate pueri.

MIZ KERZU

Epad miz kerzu ha miz genver, an offeren vintin da 7 heur, an offeren bred da 10 heur.

3. Gouel sant Fransez Xavier, patrour Breuriez ar Feiz. Indulgans plenier da c'hounit d'ar re a zo er Vreuriez, deiz ar gouel hag epad an eizved.

Den ne c'hellfe lavaret re a vad euz ar vreuriez-ze, hag an oll gristenien a dlefe lakât ho hano enni. An oll n'int ket galvet da vont da brezek ar feiz, mes, an oll a c'hell rei an donrn d'ar missioner kalounek en eur zioueret eun dra bennak hag en eur bedi evithan. Piou, pe hen zo mestr, pe hen a zo domistik, ne c'hell bep sizun, dioueret eur guennek, pe var he vane, pe var he vutum, pe var eur c'hoari, pe var eur bourmenaden. En eur savetei Eneou ar bayaned, e saveteomp hon re hon unan. Rak an Eneou-ze a bedo evit ar re o deuz labouret da ober dezho anaout hent ar Baradoz.

Hag ar pez a lavaran euz breuriez ar feiz a c'hellan ive lavaret a Vreuriez ar Sainte-Enfance. E peleac'h ema ar bugel, a ne vezo ket prest da zioueret eur guennek ar miz var he vadigou, m'an en deuz kerent kristen da ober dezhan koumpren, e zeus er broiou payen, kalz bugaligon a ne ma ket evelghan, skrivet ho hano var garierou ar baradoz, abalamour n'int ket badezet. Mad, o rei eur guennek ar miz evit Breuriez ar Sainte-Enfance, e sikourint badezi ha digeri ar Baradoz d'ho breudeur payen, hag e veritint kaout digant Doue ar grasou ho dalc'ho krey ha yac'h, hag ouspen, sentuz ouz Doue hag ouz ho zud. Er giz-ze o devezo ho-unan en ho daouarn alc'huez ar Baradoz.

Ema ar mare, da zestum aluzennou Breuriez ar Feiz. Pedi a rear ar zelatourezed da c'houlou ho guenneien digant ar re ma roont dezho lizeri Breuriez ar Feiz ha da glask memprou nevez d'ar Vreuriez, evit kemeret plas, an dek a zo bet er bloaz-ma, galvet gant Doue d'an Env.

5. Guener kenta ar miz, offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 7 heur nemet kart.

7. 2^e Sul an Asvend, offeren ar zul, gousperou Konsepsion dinam ar Verc'hez.

8. Gouel Konsepsion dinam ar Verc'hez. An offeren vintin da 7 heur er bourg, an offeren bred e Kerzent da 10 heur, Rosera da 2 heur, gousperou da 2 heur hanter.

Dont oll da chapel an Introun Varia a Vir Zikour evit renevezi hor c'harantez en he c'henver hag evit goulou diganthi ar c'hraz da zalc'her hor c'haloun dinam o tec'het deuz an okasionou fall, evel ar belladegou danjeruz an dansou nos ha sul, a jaotr kement a Eneou.

14. 3^e Sul an Asvend, offeren ha gousperou sant Corentin, patrour an Escopti.

A zo pedet da ober ho anter-heur a adoration er zul-ze.

11 h. 1/2. Pierre Cadalen, Victor Cadalen, Guillaume Corolleur, Kelleret, Jacques Fourn, Touran.

12 heur. Guillaume Lescop, Yves Floc'h, Jean Guennégues, François Jézéquel, bourg.

12 h. 1/2. Ar skol gristen,

1 heur. François Calvez, Kerzent, François Arzel, C'hellen, Jean Cloâtre, Jean-Louis Foll, Langurru.

1 h. 1/2. François Fourn, Jean Cadalen, Sant-Samson; Victor Perchoc, Jean-Marie Perchoc, Kervéléoc.

Dimerc'her, diguener ha dissadorn, 17, 19 hag 20 euz ar miz, iün ha vijil ar Pevare Amzer.

21. Pevare sul an Asvend. Offeren ar zul, gousperou sant Thomas, abostol.

24. Derc'hent Nedelek, iün ha vijil.

25. Gouel Nedelek. An offis a goumanso da 11 heur hanter, an offerennou da hanter-nos. Chom en teir offeren. Offerennou an deiz a goumanso da 9 heur a kart.

Evit ma c'hello an oll konna, kcumans da govez azalek ar zul araok. Derc'hent Nedelek e vezo koveseat betek 6 heur diouz an nos, ha da 8 heur betek 11 heur a kart.

Ma vez trous en offerennou hanter-nos, ne vezo mui pelgent, evel e kalz parreziou tro var dro. An davarnerien ne roit ket ta re da eva ha ne zalc'hint den en ho zies epad an teir offeren. Jezuz a deu er bed evit digeri deomp d'or ar Baradoz, serret abaoue pec'hed Adam hag Eva, hon tad hag hor mamm genta. Ha chom a c'hellomp ni heb e garet? Nan, diskouezomp ta dezhan hor c'harantez ouz hen tenna euz kraou Bethleem evit rei dezhan lojeis en hor c'haloun dre eur gommunion santel.


25. Gouel Sant Stephan. An offisou evel d'ar zul, offeren ha gousperou ar gouel. En dervez-ze e vezo resevet arc'hant ar c'hadoriou hag ar recommandasionou pe beden-zul. An nep a garo a reglo araok.

28. Sul varlerc'h Nedelek. Offeren ha gousperou an Innosanted santel.

TAOLIT EVEZ

D'an 21, trede sul euz miz Kerzu, goude gousperou, e vezo reunion en ti skol kristen, evit ar re a zo en assurans evit ar chatal. Arabat ne vankfe den. Rak deuz kalz traou talvoudek evit an assurans, e zeus da zivis. Peb tiegez assuret, a baeo ive en dervez-ze evit ar 6 miz kenta euz ar bloaz 1914.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



Ar vall da reseo ar C'hannadik

Evit oll dud ar barrez, evit ar re baour koulz hag evit ar re binvidik, evit ar re memez, ne lennont ar peurlieusa nemet leoriou gallek, ar *C'hannadik*, abalamour ma zeo skrivet e iez kaer hon tud koz, a zo eur mignoun karet, a vez atao mall d'he velet oc'h en em gaout, hag a vez lennet piz, azalek ar penn kenta beteg ar penn diveza. Hag neket ebken ar re a veo er barrez, eo a ra digemer mad dezhan, ar vartoloded hag ar zoudarded eat pell d'euz ar gear d'ar zervich, a vez ive laouen braz ouz en reseo. Ganthan o devez keleier fresk ho farrez hag eun ali mad benag, o laka da enebi gant muioc'h a nerz kaloun ouz kement a glaskfe miret outho da ren eur vuez kristen. O lenn he gomzou brezounek, e kav dezho klevet mouez ho mamm garet, o lavaret dezho : va bugale, gouezit dibunna ho kuden, evit ma z'eoc'h bep sul d'an offeren, evel eur Breizad dispount ; it, ive, aliessa ma c'helloc'h, da di ar belek a gemer soursi ac'hanoch, digorit dezhan aliez ho kaloun dre eur govession vad, digemerit dre he zourn ar gommunion a zalc'ho krev oc'h Ene var hent ar Baradoz. Neuze em bezo fizians d'ho kuele o tistrei d'ar gear gant ar feiz birvidik a verve en ho kaloun pa gimiadaz diouzhin.

BLOAVEZ MAD

Petra lavaro da genta *Kannadik* miz genver ? Etre tud a en em gar a greiz kaloun, ema er poent-ze euz ar bloas, ar c'hiz kaer da lavaret an eil d'egule, bloavez mad. Ar *C'hannadik* a ra evit he oll lennerien ar memez goulen, hag evel ma vez digemeret gant braz ha bian, en deuz c'hoant da lavaret eur goumz da bep unan ha da zisplega da bep hini, ar pes en deuz c'hoant da gaout dezhan :

D'ar vugaligou, e lavaro : oh ! bugaligou, ne greskit ket re vuan, amzer aoualc'h o peuz da gaout anken ha poan, keit a ma vevoc'h. Mintin ha noz, ho penn glin pleget, ho taouarn kroaziet, ho lagad o para var ar Grusifi, grit ho pedennik d'ar Mabik Jezus ha d'ar Verc'hez he Vamm Zantel. Araok mont d'ho kouele, lakit ho chod ruz var hini ho mamm evit diskouez dezhi ho karantez, ha goude kouskit disoursi. Kendalc'hit pell da veva heb pec'hed ha da garet a greiz kaloun Doue hag ho kerent.

D'ar vugale, en oad da vont d'ar c'hatekiz mou e lavaro :

Lakiit oc'h oll boan da zeski ar guirioneziou a ranker da gredi hag an deveriou a ranker da ober evit gellout erruout er Baradoz. Ne vezit ket gourd da zont da skoll an Iliz en derveziou merket ha keit amzer ma c'houlen reolen ho parrez. Ar c'hatekiz mou great teir zul bep miz, evit ar re gant ho fevare pask, eo an hini a ra ar muia vad,

rak neuze eo e koumanser kumpren ar peuz ne veze aliez, desket, araok nemet evel eur perroket. Ne ouffer ket ta tamal re, an tad hag ar vamm ne gemeront ket eur gorden, pa vez red, evit digas ho bugale d'ar c'hatekiz mou, pa na fell ket d'ezho dont, var digarez emaint gant ho fevare pask. Ober a reont d'ho Ene an tor ar brassa hag ar peurlieusa e testumont evitho o unan anken galet, hag evit beza espernet ar vialen pa ne dleent ket, e lakeont, he dourn ho bugale, ar vaz ho lopo abred.

An deskadurez kristen ebken a laka er galoun an doujans evit Doue hag an doujans evit ar gerent.

Kemerit ive bugale azalek ho 7 vloas hag an aliessa ar guella, ar sikour dreist, a ro Doue deoc'h, dre ar gommunion, evit chom atao start var hent an Env.

D'an dud iaouank, e reket delc'her ho c'haloun neat a bep pec'hed, hag evit-ze ho fed, da dec'het deuz an okasionou fall, evel ar beilladegou noz er meaz euz ho zi, evel an dansou sul ha noz, evel ar c'hoariou a gas d'an davarn da eva odivi. Evel eur mesvier n'en em respek ket e unan, den ken nebeut, n'en deuz istim evithan, ha ma kav eur vaouez diskiant aoualc'h d'en c'hemeret evit pried, e vezo guele, heb dale, eur famil nevez en anken hag abred er baourentez.

Evit tec'het deuz ken bras voalen, ra lakei, oll voazet hag oll merc'hed yaouank ar barrez ho hano e breuriez ar groaz ven. Eur vech torret an tech da eva odivi ha boessoun krev, euz eürusedd ha iec'hed da gaout e peb ti. Iaouankiz, ra gresko bembez ennoc'h ar c'hoant da ober vad en dro d'eoc'h, ha da veza evel-se, joa ho tud hag enor ho parrez.

D'an tadou ha d'ar mammou, e reket kaout nerz kaloun aoualc'h evit digemeret gant mall ha laouenedigez ar vugale a blijjo da Zoue digas dezho. Doue ne vanko ket d'ho faeo euz ar boan a lakaint d'ho c'helen mad, ha ma savont anezho evithan e vezint ken aliez a berlezen lugernus en ho c'hurunen er Baradoz. Hag evel ar vugale a ra buanoc'h ar peuz a velont eged ar peuz a glevont, ra c'hello ho zud lavaret dezho, dre ho buez kristen ha dre ho skuer vad, baliit var hon roudou hag e reoc'h atao ar peuz a ro guir da vont d'ar Baradoz.

D'ar re goz, dija tost d'ho bez, e reket eun nebeut bloaveziou c'hoaz evit ma c'hellint rei sikour ha kuzul d'ar re iaouank a vezo en ho c'hichen, ha destum abenn ho maro eun tenzor brassoc'h a veritou. Oberou mad ha santelez ar re goz, eo a denn var an ti, bennoz puilla an Aotrou Doue.

D'an dud a zo pell deuz ho c'hear, pe o c'hounid ho bara pe e servich ho bro, e lavar : Dalc'hit sonj, penaoz Doue a c'houlen diganeoc'h e peb leac'h, ho teveriou a gristen. Evit plijout dezhan ta e rankint lavaret ho Pater, bep mintin ha bep noz, mont bep sul d'an offeren ha d'ar gousperou an aliessa possubl, digemeret Doue aliez en ho kaloun dre ar gommonion ha merka oc'h Ene bep bloaz, evit an env, dre eur pask great mad.

Daoust hag an Iliz nema ket o vont da veza diskaret ?

Er *C'hannadik* diveza e lavaren deoc'h ne c'hell ket an Iliz beza diskaret, rak skoret eo gant Jezus-Krist e-unan, hag ar pezh a zo harpet var an Oll Galloudek ne gouezo ket. Evit rei deoc'h muioc'h a fizians e zan da lakaat aman ar pezh a skriv *Kannadik* Guipavas divarben an Iliz en hon amzer :

« Hervez eur skrivaniere euz an Itali, en deuz great tro ar bed, ha skrivet eul leor evit diskouez pegement e c'hounid an Iliz en oll broioù, niver ar gristenien katolik, a zo kresket kalz, abaoue kant vloaz ha dreist oll er bloavezioù diveza.

En Europ, koumansomp dre Vro-Zaoz, en eur laosker a gostez an Irland. E 1800 n'oa ket ouспен 100.000 katolik, e leac'h brema e z'euz 2.300.000 ; hag an dud pinvidik ha desket eo a deu d'en em gontvertissa. En 12 vloaz diveza, 466 beleg protestant, 205 offiser, 129 barner ha tud a lezen, 60 medisin ha 65 euz an noblanz, o deuz goulennet beza digemeret en Iliz katolik.

En Allemagn, epad ar memez amzer, ar gatholiked a zo savet a 6 million da 20 million ha tri c'hant mil ouспен.

Er Russi, euz 1905 da 1909, e z'euz bet 230.000 konversion. En Turki, ouспен 24.000.

En Afrik, brema z'euz 100 vloaz, n'oa nemet eun dournadik katoliked, e leac'h hirio e z'euz 850 mil.

En Asi euz a netra koulz lavaret, ho niver a zo savet ive da dost da 5 millioun.

En Amerik an Iliz katolik e deuz gounezet kalz muioc'h c'hoaz. E koumansant ar c'hant diveza, ar Stadou-Unanet, n'o doa nemet 40.000 katolik ; hirio, o deuz tostik da 23 millioun.

Er *C'hannada*, en deiz hirio, e z'euz 250 mil katolik, e leac'h eiz ugent mil brema e z'euz kant vloaz.

En Amerik izela, niver ar gatholiked a ioa da 40 million.

Hag an Australi, e sao da c'huezek kant mil.
N'euz ket ezoum da rei muioc'h a chifrou, ivit diskouez pegement eo al labour great gant an Iliz dre ar bed oll, ha pegement eo kresket niver he bugale.

Mez ar Franz, er memez amzer, petra eo deuet da veza?

Lezen an disparti a dra sûr e deuz lakeat freuz ha dismantr en en touez. Madou an Iliz, roet d'ez-hi evit ober vad ha lavaret pedennou evit an anaouñ a zo bet kemeret divar e c'houst ! ar relijiuzed ha leanezed, providans ar paour, an den e poan pe dizesk, o deuz ranket mont er meaz euz ar vro, evel pa vijent bet torfetourien, ho ziez hag ho skolioù dilamet digantho ; en darn vuia euz ar

parreziou, ar veleien o deuz mil boan o kaout peadra da veva en despet d'ar zikour roet dezho gant diner an Iliz. Mez, n'e ket an dra-ze a ro leac'h da grena, da goll fizians ; ar bersekusion e deuz great atao muioc'h a vad eged a zrouk, en eur ziuna ar gristenien a ioa kousket, hag en eur rei dezho muioc'h a nerz kaloun.

Ar pezh a ro leac'h da grena eo, ar skolioù ne vez morse enno hano a Zoue, ar c'hazetennou difeiz a skigner e peb leac'h, hag an odivi milliget, a ra en hor bro eun drouk ken spountuz. Ar pezh a ro c'hoaz leac'h da grena eo, dallentez kalz goazed a ro ho mouez d'ar votadek da dud heb feiz hag a laka ho-unan, ar galloud etre daouarn ar re a ra eur brezel yud d'ar relijion gristen.

Goulskoude, ma ro an oll draou-ze tro d'eomp da gaout enkrez, ez euz ive kalz re all, hag a ro levezet ha fizians. Bloaz a zo, hon Tad Santel ar Pap Pi X, a lavare : « Ar pec'hejou great a ranko beza kastizet, mez ar Franz ne ielo morse da goll... Eun deiz a deuio, ha fizians em beuz e teuo dizale, — ar Franz a lavaro, evel sant Paol var hent Damas. Mestr, petra o peuz c'hoant e raffen ? — Bes kristen, ha sao en da zav, ha kea, Merc'h hena an Iliz. Kea evel, en amzer dremenet, da brezek va hano dirak an oll boblou ha dirak rouanez ar bed. »

Daoust ha selaouet e vezo ar beden-ze ? Ia, heb mar ebed ; ar Pap a gar ac'hanomp hag a vel sklear ema, stad hor bro, o vont da vellaat. Er c'heariou, var ar meaz, hag e peb lec'h, eo ar memez tra : ar bobl a zeblant distrei d'ar relijion.

Distrei a rei buanoc'h c'hoaz o velet an dud desketa a zo er vro, ar re a zo er c'hargou huella o kerzet, en e raok, hag o tiskuez d'an oll, e zint kristenien katolik.

Varlene, eur gazeten-hanvet (*l'Opinion*) a rea eun enklask er skolioù brassa euz a Paris, ha setu a-ma ar pezh a gavaz : er skol Polytechniq, var 220 e z'euz 150 hag a vez aliez o kommunia ; 42 o deuz roet ho hano da vont d'an adorasion enn noz, en Iliz Moutmartr. Er skol « Normale supérieure » e z'euz eun drederen hag a zo kristenien euz ar re vella. El lyseou braz Condorcet, Henry IV, Louis-le-Grand, an darn-vuia a zo ive fidel d'ho relijion. Ha m'o peuz c'hoant gouzout euz a beleac'h e teu ar gloareged, a ia da Zeminer braz Paris, selaouit : e 1912, var gant, 48 a ioa (ingénieurs), bet e skolioù braz Polytechniq, Centrale, Normale supérieure, pe offiserien.

D'eomp-ni, kristenien katolik, eo mad gouzout an oll traou-ze, n'eo ket evit kroazia hon divreac'h, hag en em lakaat da gousket, mez evit kaout muioc'h a nerz-kaloun da staga d'al labour, ha muioc'h a fizians en amzer da zont. Peb hini ac'hanomp a lle lavaret en-han he-unan. Me fell din e ve em zi, em farrez, var va lerc'h hag abalamour m'am bezo labouret evit-ze, eun tammik muioc'h a feiz hag a garantez evit Doue, er c'halounou. »

ER SKOL GRISTEN

O deuz bet epad ar miz, ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez

Klas kenta.	Eil rummad.	Marie Brénéol.	Eil rummad.	Marie Yvonne Perchoc.
Kenta rummad.		Euphrasie Maguerez.		Marie-Yvonne Conq.
		Germaine Drogou.		Marie Jaouen (Kerincouff).
		Joséphine Conq.		Anna Querné.
		Françoise Roudaut.		Yvonne Magueur.
				Rosalie Perchoc.
				Philomène Bossard.
Eil rummad.	Trede klas. Kenta rummad	Marie-Jeanne Le Borgne.	Trede klas. Kenta rummad	Angélique Léostic.
		Pauline Morvan.		Hélène Bizien.
		Ernesline Guéna.		Jeanne Didou.
		Félicienne Brézel.		Marie-Yvonne Allégot.
		Marie Vaillant.		Marie Gouzien.
				Françoise Brénéol.
Trede rummad.	Eil Rummad.	Désirée Maguerez.	Eil Rummad.	Jeanne Magueur.
		Marie Squiban.		Françoise Forest.
		Yvonne Brézel.		Joséphine Perchoc.
		Eugénie Morel.		Anne-Marie Jacq.
				Joséphine Rébaol.
				Bernadette Jaouen.
Eil klas.		Françoise Sylvestre.		Albert Morel.
Kenta rummad.		Pauline Conq.		Léontine Michel.
		Marie Cozien.		Haudes Talarmin.
		Marie Derrien.		
		Anne-Marie Eips.		
		Josèphe Cloatre.		
		Marie-Anne Guéna.		

SAKRADIANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

5 ker. u. René-Marie Le Hir, Kernéroc.	PARROUZ	MAEROUNIZ
8 — J ^e -M ^{ie} -G ^{ue} Le Borgne, Pen ar-Pavé.	Henri Le Hir.	Marie Cloâtre.
	Jean Morel.	G ^{ue} Quéménéur.

Doze ra vezo moulet.

ENTERI AN ANCHOU

A zo bet lakeate e douarsantel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goasked ar Groaz
23 du. Marie Guénéguez, 50 vloaz, Kerriou.
11 kerzu. Joseph Guéna, 31 vloaz, Ru-Allan.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

14 kerzu. Krouadur Guillaume Riouall, Kerc'hoarroc, 1 vinuten.

Laudate pueri.

MIZ GENVER

1. Ar mabik Jezus circonsizet. An offisou evel d'ar zul.

Ar blijadur genta a reimp da Zoue, en dervez a hirio, a vezo dont oll d'an offeren ha d'ar gousperou. Eur bloaz nevez, diazvezet raktal var Doue, a vezo kasi sur, eur blavez mad. Evit guir, pell a zo ne vez guelet den mezo ebet en Iliz Landunvez da zeis ar bloaz-nevez. An dra-ze a ziskouez e talc'hit d'ho c'h enor. Ha c'hoant o peuz brema, da ober eur joa dreist, da Jezuz, en dervez ma n'en deuz skuillet evidoc'h ar berad goad kenta : lennit gant evez ar paper a zo bet kaset da bep ti, evit diskouez an drouk braz a ra an odivi hag ar bouessoun krev da gorf ha da Ene ar mesvier, ha de vugale, ar freuz a lakeont er familhou, an dismantr a lakeont en tiegeziou ; ha goude beza elennet, lakait oc'h hano hag hini ho pugale kos pe iaouank, e breuriez ar Groaz Venn. Dalc'hit d'ho promessa, hag ar bloaz a goumanz hirio a lakai da c'houlouai

evidoc'h, eur vuez nevez, eur vuez a eurusded keit a ma c'heller he zizout en douar ma a boan hag a anken.

2. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 7 heur nemet kart.

4. Kenta sul ar bloaz. Offeren ha gousperou ar zul,

7. Hirio e tigor an eurejou gant kleier.

11. Ar zul kenta goude ar Rouanez : offeren ha gousperou ar Rouanez.

A zo pedet da ober d'ar zul-ze ho hanter-heur adoration.

11 h. 1/2. Yves Kervran, François Coadou, Jean-Marie Colin, Penfoul ; Auguste Perhirin, Penkear.

12 h. An aotrou Persoun, François Jézéquel, Ollivier François, Joseph Lescop, bourg.

12 h. 1/2. An ti skol kristen.

1 h. François Théréne, Kerc'hoazot, Claude Le Borgne, Tourane, Jean Taloc, Navant, Herve Coat, Lanhallès, Jean-René Corolleur, Troménec.

1 h. 1/2. Jean-Marie Pellen, Kerzent, Jean Autret, Arc'hantel, Joseph Jaouen, Kerléo, Jean-Marie Le Ven, Kergérioc.

KANNADIK

Kannadik miz du ha *Kannadik* miz kerzu o deuz koustet 52 lur. Bet evit sikour ho faea digant : M. C., dek guennek ; J. T., 6 real ; A. B., 8 real.

Peb *Kannadik* a deu epad ar bloaz da bevar guennek varnugent. Ma ne vez ket muioc'h a druez outhan, e varvo gant an dienez.

A lire à la fin de l'Année

Quelques heures... et cette année va finir, et elle ira rejoindre les autres... non point dans le néant... car le souvenir se garde de ce que j'ai fait de bien et de mal dans ces 365 jours, dans la mémoire du souverain juge, à qui rien n'échappe et qui n'oublie rien.

Mystère insondable du temps qui s'écoule comme de l'eau entre les doigts... temps auquel, je pense si peu... temps qui est plus que de l'argent, plus que de l'or et des diamants... temps qui est la monnaie dont je dois acheter l'éternité !

Pourquoi m'es-tu donné, ô temps ? Pour manger, boire et dormir ? Oh, non, je me sens l'âme trop noble pour n'aspirer qu'à cela.

Pour gagner de l'argent ? Mais l'argent ne fait pas le bonheur... et cet argent, il faudra le laisser un jour... Je ne l'emporterai pas avec moi, quand même on le mettrait dans mon cercueil.

Pour jouir de la vie ? Mais cette vie est si éphémère... elle est mêlée de temps d'amertume, elle est suivie de temps de déceptions.

Et puis, il y a trop d'injustices sur la terre, pour que je ne sois

pas intimement persuadé qu'il y a une autre vie où toutes ces injustices seront réparées.

C'est pour me préparer cette autre vie, que le temps m'est donné. Elle sera heureuse, éternellement heureuse, si je profite bien de ce temps. Elle sera épouvantablement malheureuse, si j'emploie mal ce temps qui me reste à vivre.


Cette année 1914, sera-t-elle suivie pour moi de beaucoup d'autres ? Je ne sais... peut-être sera-t-elle la dernière.

Je serai donc insensé de ne point profiter de ce temps si court, si rapide, si incertain, pour me préparer, par l'accomplissement de tous mes devoirs de chrétien, un bonheur ineffable qui ne finira jamais. Si je vis en bon chrétien, je ne craindrai pas la mort. Je me tiens toujours prêt à paraître devant Dieu, disait un officier chrétien, exemplaire... et cette année, il fut tué net, dans un accident de chasse. Combien il s'applaudit maintenant d'avoir été aussi prudent.



Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest. — Imprimerie rue du Château, 4.



BADIZIANTOU

Epad ar blavez 1913, euz ganet e Landunvez, 71 krouadur. 68 a zo bet skuillet var ho fenn dour santel ar vadiziant er mean fount ha skrivet ho hano var gairou an Iliz, a roio testeni int bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz hag heritourien euz ar Baradoz. 3 n'ho deuz bet nemet badiziant an ti hag a zo nijet d'an Env evel m'int deuet da sklerijen an douar-ma. E kenver Doue e c'hortozont ho zad hag ho mamm hag e pedont heb ean, evit goulenn ma reint ho zreuz er bed-ma, heb drouk ha dinam a bep pec'hed.

EUREUJOU

Beza e zeuz bet 12 eured. Eun tammik neubeutoc'h eged an daou vloaz araok. Ar penn abek aze eo e z'euz eat kalz paotred iaouank da zimiezi er parrezioù all, da veza ne vank ket e Landunvez merc'hed iaouank fur ha santel. Mez, peb hini a ra he santimant.

MARO

Ar maro en deuz diskaret 43. 20 muioc'h eged er bloavez araok, 2 o devoa dreist 90 vloaz, 5 dreist 80 ha 6 dreist 70. Ar pezh a ziskouez e vever koz er barrez, hag e ra eun dra vad ar re a deu var bord he aotjou, da glask iec'hed ha buez hirroc'h. Arabat goulskoude ankounac'haat eo buez peurbaduz ar baradoz, a ranker da dizout, araok peb tra.

ASSURANS AR CHATAL

Epad ar bloaz tremenet, Landunvezis, oc'h anaout int oll breudeur e Jezuz-Krist ha n'euz netra kaeroc'h eged rei an dourn an eil d'egile evit en em sikour pa deu kollou d'ho skei, ho deuz savet etrezho assurans ar chatal. Dreist eo eat mad an traou, peguir evit ar 6 miz kenta oa dija assuret kezek evit 100.000 lur, hag evit ar 6 miz a goumans euz deuet kalz re nevez da rei ho hano. Ha brema e vezo c'hoaz krenvoc'h keff an assurans, harpet var hini Landerne, a roio an hanter deuz an digoll, o lezel ganeomp an hanter euz ar pezh a roer dre gant, hag ouспен ar pezh hon devezho digant ar c'houarnamant ha digant hor mignouned. Rak ar re o deuz peadra, ha n'o deuz ket a jatal da assuri, ne vankint ket da rei eun aluzen d'ar c'hef evel « membres honoraires ».

Doue ha sant Alar o deuz ive hor sikouret, peguir er 6 miz kenta n'euz bet koll ebet.

Eun dra goulskoude a gav ar *C'hannadik*, doaniuz. Ar re o deuz saoud da assuri, o deuz great skouarn vouzar, ha pa z'euz deuet

c'hoant da en em unani gant Landerne, euz ranket lezel da goeza, assurans an anevaled korn.

Mez ar pezh ne ket eat da benn en taol kenta a c'hell c'hoaz beza great. Ra goumpreno an oll ho interest o-unan hag e vezo savet ive keff assurans ar zaoud. Gant ar pezh a vez kasset d'an tavarnioù evit rivina ar iec'hed ha lakaat freuz ha ienien en tiegeziou, an oll, pinidik hag intre, a c'helfe assuri ho zaoud.

An Eneou

An aked da vellaat ar pezh a zell ouz stad ar c'horf, n'en deuz ket great ankounac'haat an Eneou. Epad 1913, e c'heller emban, eo deuet tud ar barrez da denna frouez talvouduz euz ar retred great e miz gouere evit lakaat an oll e tro da c'hounit induljans kaer ar jubile. Ar retred-ze a echuas dre eur gouel, heb e bar, great d'ar zul 13 a viz gouere, evit lakaat Landunvezis da anaout guelloc'h karantez Jezuz evitho e Sakramant an Aoter. Diskouez a reaz dezho, penaoz dre ar Sakramant-ze, Jezus a jom atao gantho e tabernakl ho Iliz evit selaou ho fedennou, servichout da vagadurez d'ho Eneou dre ar gommunion hag en em ginnig e sacrifis evitho dre an Offeren zantel. Abaoue, ar gouel-ze e vez muioc'h a dud o kommunia bembes eged na veze epad ar zizun araok.

Ar garantez evit Jezuz elumet er c'halonou dre ar gouel-ze, o deuz great d'an tadou ha d'ar mammoù sonjal muioc'h e silvidigez ho bugale eat da vartoloded pe da zoudarded. Pa deuont e permission e teuont assamblez gantho da govez ha da gommunia, ha lizeri a feiz hag a garantez skrivet dezho aliez, o ali da vont d'an tiez savet evit o digemeret er c'heriou ma reont ho servich, ha da zarempret, heb spout, ar beleg a gemer soursi anezho. Eun dudi eo lenn al lizeri a zigason d'ho zud pe d'ho fastor, evit lavaret ar blijadur a gavont en tiez-ze etouez kamaraded kristen eveldo.

Ar zoudarded hag ar vartoloded a gav e Brest, rue de l'Harteloire, 11, eun ti atao digor evitho hag en-nan kement a ra dezho plijadur gristen.

Ar vartoloded e Toulon a gav ive evit o digemer, ar (Villa Jeanne d'Arc) e karter Sant-Roc'h hag eun ti all (Impasse Mirabeau). Evit kaout an ti o digemer e Cherbourg, n'o deuz nemet goulenn digant an Aotrou Loyer, kure e Sainte-Trinite, 22, rue Tour-Carrée. E peb hini deuz an tiez e z'euz eur beleg evit ho henchadur.

Ar beleg a zo e kear vraz Reims o soursial euz ar zoudarded, a ro dezho pa vez echu ho servich eun testeni int bet aketuz da vont d'he di. Skriva a rea d'hon Aotrou 'n Escop, e miz here diveza: Meuleudi am euz da rei da soudarded d'euz oc'h Escopti, hanvet var al lizer a gassan deoc'h. Ar *C'hannadik* ne c'hell lakaat nemet hanoioù ar c'hantonioù tosta dezhan. N'en deffe ket a blas evitho oll kantonioù an Escopti.

Setu aman hanoiou ar re o detuz eun testeni mad dreist : Pierre Pennek, deuz Recouvrance ; François Le Moigne, Kerber ; Yves Le Roux, Kernilis.

Testeni mad : Louis Le Her, Guillaume Pellé, François Monot, Guisseny ; François Morvan, Kerlouan ; Goulven Lunven, Gouesnou ; Jean L'hour, Lannilis ; Louis Le Guen, Coat-Méal ; Jean-Marie Monot, Plabennec ; Tanguy Pailler, Plouvien ; François Page, Kernilis ; Jean-Marie Omnès, Plouguin ; **Jean-François Pailler**, Landunvez. En eur vont bep miz da guerc'het ar *C'hana-dik*, eo bet abred deseuet da jom etouez ar gamaraded vad a goude e ti an aumônier. Ar paper-ze a zalc'ho betek fin e vuez hag ouz en diskouez gant joa, e c'hello lavaret ; an den iaouank en deuz bolontez vad, a c'hell assamblez servicha Doue hag he vro.

C'hoariou ar pies er skol gristen

Er skol gristen euz bet great teir c'hoari d'ar guener, gouel sant Stephan, goude gousperou hor d'ar zadorn da 1 heur.

Al leac'h ma c'hoari ar vugale, a ioa, en daou zervez, leun kouch, gant an dud deuet da velet hag o sklaskal ho daouarn e tigouezent pegement e plije dezho c'hoari ar merc'hedigou. Mez, ive ar paotrezed a rea ken brao ho roll, ma vichen nec'hed evit lavaret pehini anezho a reaz ar guella.

AR PIEZ KENTA. — AR ZUTEREZ BURZUDUS

Eur verc'hik, Germaine Drogou, e devoa bet digant he maerounez, a dremene evit eur sorserez, eur zuterez, evit he c'halanna. Penn teo a reaz, o velet eur prezant ken dister. Mez o sellet pis, e velas stag outhi eun tam paper. Buan e lenn anezhan. He maerounez a lavare dezhi, pa vezi en danger, pa pezo c'hoant da gaout eur guennek benag evit ober vad digant ar re a zo re stag ho c'haloun deuz madou an donar, c'huez er zuterez hag e laki da lamet a da drei en dro an nep a giri.

Epad ma zedo o sonjal ar vad a c'helje da ober gant he zuterez, peder deuz he c'hamaradezed : Eugénie Morol, Désirée Maguerz, Pauline Morvan, Ernestine Guéna, a deuaz da ziskouez dezhi, pep a vuzik kaer, ha da ober goap euz he zuterez. Evit kastiza eun tam ho ourgouill, e c'huezas en he zuterez, hag ar re ma, a rankas lamet ha trei betek dialana. A ouallc'h, a ouallc'h, a grient a bouez penn.

Ah, emezo, pa zedo da zuterez ken burzuduz e rankez raktal, lakaat da fringal eur pennad an diou vaouez koz a veles o tont ver-zoc'h ennomp (Joséphine Le Borgue, Marie-Renée Perchoc). Bep oump hen ho ziez, o kestal evit kaout sikour evit eun intanvez paour ha klanv hag e deuz 6 a vugale ne c'hellont c'hoaz gounit netra. Great hon deuz tro venn.

Pa erruaz, an diou goz e kenver Germaine e lavaraz dezho. Roit pep a ugent real evit ar baourez keaz intanvez e maor oc'h ober eur gest evithi. Nan, nan, merc'hik koant, an arc'hant klozet er c'hodel a ve diskiant tenna anezho er meaz. Mad, ma na roit ket pep a ugent real e roc'h pep a ugent lur. Hag i c'hueza er zuterez, hag ar merc'hed koz da lamet a da drei en dro en eur grial ; truez, truez, setu aze pevar real. Nan, nan, eme Germaine, pep a ugent eo hag ar zuterez en dro hag ar merc'hed koz da zansal.

O klevet an trouz, ar garde-champêtr, Marie Vaillant, ha teir maouez all, Josephine Lescop, Gabrielle Perchoc, ha Françoise Qué-méneur, a deuaz da velét petra ioa a nevez, mez ii ive a rank lamet ha mont en dro, ha spountet oll e kemeront an teac'h. An diou goz pegen stag bennag oa ho c'haloun ouz an arc'hant, a ro pep a ugent lur evit beza lezet da vont-gant ho hent. Neuze, Germaine a c'halv he c'hamaradezed ha laouen e zeont da gas an 40 lur d'an intanvez klanv. E tispartia deuz he c'hamaradezed, e lavar dezho, biken ya zuterez ne servicho da ober drouk, mez vad a rei ken aliez tro ma c'hello.


An daou biez all a ranko gortoz.

NEDELEK, AR BLOAZ NEVEZ

Eun dudi eo bet beza en offerennoù ar pelgent. Da veza ma z'oa leun an iliz, n'euz ket bet an disterra trouz. An oll a ganaz heb iouall, ha 400 a zo bet o taoulina euz an Daol Zantel.

Ha goulskoude, euz bet eun tam aoun, o klevet, var dro 10 heur, eur vanden estranjourien o iouall er bourk, evel pa vijent bet en eur foar, ha nan en noz ma tiskennaz Map Doue var an douar evit digeri dezho doriou ar Baradoz. An oll a lavare, glac'haret, pe seurt jolori a reint pa deuint en iliz. Mez, lezet ho deuz Jezuz en he graouik, heb dont d'hen adori. Marteze eun hostaleri bennag e deuz roet d'or digor epad an offerennoù.

Mad, d'an Nedelek, e ranke klevet an offeren dindan boan a bec'hed marvel. Ii ta, o deuz great pep a bec'hed marvel, hag an hini en deuz roet dezho d'or digor, en deuz great ken aliez a bec'hed marvel hag a zen en deuz dalc'het en he di epad an offerennoù. An arc'hant en deuz gounezet divar goust an Eneou keiz-ze, a dlje marvad, santout dija c'houez-tann an Ifern, m'ar deo eat an traou er giz-ze. E parrez Landunvez e bet koumanset mad ar bloaz. Deiz ar bloaz nevez, an Iliz a ioa leun evit an offerennoù ha gousperou, ha n'euz guelet den mezo ebet en offisou. Doue ra vezo meulet.



MIZ GENVER

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'ah Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
19 kerzu	Jen-Franç. Marie Magueur, Kérineuff.	Franç. Jaouen. M.-A. Trébaol.
20 —	Jeanne-Clémentine Hélias, Gorrékear.	Jean Guillerm. J. Glaziou.
21 —	Maria Appriou, Trémazan.	Jean Appriou. Marie Primel.
27 —	Auguste-Marie Gélébart, Kergastel.	Aug. Perhirin. J. Gélébart.
4 genver	Louise-Marie Conq, Kernézoc.	J.-L. Conq. M.-J. Jaouen.
14 —	Jean Provost, Curullou.	Jean Provost. M.-Y. Merrien.

SAKRAMANT A BRIEDELEZ

A zo bet unanet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

7 Genver.	Vincent Gouzien, Guitalméze, ha Marie-Renée Godebert, ar C'hastel.
12 —	Jean-Marie Morel, Lanildut, ha Marie-Anne Chapalain, Kergounan.
13 —	Claude Trébaol, Bédiez, hag Aline Le Menn, Arc'hantel.

Paler, Ave.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vereh, da c'hedal dez ar varn e goasked ar Groaz

3 Genver.	Christophe Colin, 44 vloaz, Kerzent.
8 —	Jeanne Le Bihan, 17 vloaz, Arc'hantel.
11 —	Josèphe Daouben, 69 vloaz, Kelléret.
13 —	Basti Fourn, 29 vloaz, Kerzent.
15 —	Désirée Bothorel, 80 vloaz, Bar-al-Lann.

De profundis.

MIZ C'HUEVRER

1. Pederved sul goude ar Rouanez. Offeren ar zul, gousperou ar Chandelour.

2. Gouel ar Chandelour. Hiviziken, an offeren vintin da 6 heur hanter, an offeren bred da 9 heur hanter.

Offeren ha gousperou ar gouel. Dont d'an offeren bred, gant peb a goulouen goar. Delc'her ar goulou en daouarn epad ma vezer ouz o benniga ha var elum epad ar brosesion, an aviel ha deuz ar gorreou betek ar gommunion. Goude, ho gorren en ti, evit ma vezint kavet da elumi, pa vezo eun dra behnag da venniga, unan bennag en he agoni, pe ar gommunion pe an nouen da rei. Ar goulou var elum a zigas d'eomp da sonj, eo Jezuz sklerijen ar bed, an Hini a verk d'eomp hent ar baradoz hag a rankomp heuilla ma fell d'eomp beza euz da viken.

6 Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 7 heur nemet kart.

8. Sul ar Septuagesim. Offeren ha gousperou ar zul.

15. Sul ar Sexagesim. Offeren ha gousperou ar zul.

22. Sul Ened pe Sul al Lard. Offeren ha gousperou ar zul. Ar

Sakramant a vezo expozet adalek an offeren vintin betek goude gousperou a vezo kanet da 3 heur. Er giz-ze ar re a reio molarjez er zul-ze, a c'hello beza abred awalc'h er gousperou. Goude gousperou e vezo kovesseat.

A zo pedet da ober, d'ar zul-ze, ho hanter-heur adoration :

11 h. François Breneol, Jean Bocheur, Kerzent, Basti Trébaol, Kerguérioc, Joseph Guenneguès, Kermajeau.

11 h. 1/2. An Aotrou persoun, Jean-Marie Pondaven, Jean Guenneguès, François Jézéquel.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. François Jaouen, Jean-Marie Pellen, Jean Squiban, Pierre Lehir, Kernézoc.

1 h. Job Perchoc, Kervéléoc ; Jean-Marie Colin, Kervéon, Jean Talarmin, Jean-Marie Cornen, Trémazan.

1 h. 1/2, Jean-Marie Minguy, Jean Bizien, Kelleron ; Joseph Le Borgne, Pourane ; Yves Pellen, Kerzent.

2 h. Rozera hag adoration d'an oll.

3 h. Gousperou.

23. Lun al Lard. Da 6 h. 1/2, offeren vintin, da 8 heur, servich solannel evit anaoun ar barrez.

24. Meurs al lard. Da 6 h. 1/2, offeren vintin ; da 8 heur, servich solannel evit ar veleien maro var ar bloaz ha dreist oll evit ar veleien éat d'an Anaoun goude beza labouret e parrez Landunvez.

Goude ar servich-ze e vezo expozet ar Zakramant betek 4 heur.

A zo pedet da ober eun heur adoration en dervez-ze :

9 h., Marie-Ursule Minguy, Françoise ha Jeanne Floch, Clémentine Allouer.

10 h., Marie Bizien, Philomène Guiziou, Jeanne Kerboul, Jeanne An Hir.

11 h., Françoise Morel, Claire Coat, Madame Vaillant, Jeanne Floch.

12 h., ar skol gristen.

1 h. Joseph Nedelec, Marie-Yvonne Lescop, Jeanne Kerjean, Noémie Vaillant.


2 h. Yvonna Arzel, Philomène Cloatre, Françoise Floch, Jeannie Léon.

3 h. Philomène Coat, Anne-Marie Squiban, Victoire Coadou, Catherine Castel.

4 h. Chapeled ha Bennoz ar Zakramant.

25. Merc'her al Ludu. Offeren vintin da 6 h. 1/2. Offeren bred da 9 heur.

Sonjal en hor finvezou diveza ar maro, ar varn, ar baradoz, an ifern, evit en em ziuval dre-ze deuz ar pec'hed.



AR VOTADEK

Evel ma vior galvet e miz Ebrel pe e miz Mae, da zibaba deputeed, ar *C'hannadik* a skrivo hirio eur gerik bennag divar benn ar votadek.

Voti a zo henvel tud da gas an traou en dro er vro, pe en departamant, pe er barrez. An dibab-ze a zo eun dra a bouez, eun dra talyouduz dreiz-han he-hunan, hag a denn da galz a zrouk pe da eur vad dispar. Rag, diouz an dud a vez dibabet, e ielo mad pe fall an traou evit ar vro, an departamant, ar barrez, koulz hag evit ar feiz, ar relijion hag an urz vad.

Penaoz ta neuze, e pareziou, c'houek ar feiz en-ho, e veler kristenien, bet en offeren diouz ar mintin, marteze o kommunia, hag a ia goude, da rei ho mouez da dud difeiz a glask pe ho deuz roet o ger, da aoza lezennou evit diskar ar relijion katholik.

Digarezi, a reint marteze, penaoz ar votadek a zo eun dra ha ne zell nag ouz Doue, nag ouz ar goustians.

Me a gave din, goulskoude, penaoz kement a ra eun den a zo ganthan he anaoudegez vad, n'euz forz e peleac'h, hag evit petra er gra, a ioa mad pe fall, diouz ma veze hervez pe a enep lezen Doue. He labour eo, ha deuz al labour-ze en devezo kount da renta da Zoue.

Me gave d'in penaoz an den n'en devoa nemet eur goustians.

Daoust hag ar goustians-ze a ve gellet da faouta ; an tamm a joum er gear da Zoue, hag an tamm da vont d'ar votadek d'an diaoul ? Den fur ebet ne gredo biken eun dra en doare-ze.

Da biou e roor da gredi, na ra drouk ebet d'an Enc, rei ar vouez da dud a rei lezennou evit miret, na ve e skoliou ar c'houarnamant hano ebet nag a Zoue, nag a gredo nag a bater, nag a Varadoz nag a Ifern ; a rei lezennou evit ma ranko an tadou hag ar mammou kristen kas ho bugale badezet, d'ar skoliou-ze, hag e ve enno leoriou a gounto geier divar benn ar relijion, histor ar vro hag an Iliz ; a rei lezennou a lakeio, divar goust an oll, arc'hant e kef ar skol, gant urz ne vezo roet guennek ebet d'ar vugale baour a ia d'ar skol gristen ; a rei lezennou evit teuler euz ho ziez hag euz ar skoliou, ar frered hag ar seurezed a gentellie ken mad ar vugale var deskadurez an douar hag er memez amzer, var ar pezh a rankent da c'houzout evit erruout er Baradoz ; a rei lezennou evit kemeret an tammik danvez roet d'an Iliz gant ar gristenien vad hag ouzpen an arc'hant roet evit pedi evit an anaoun, ha nac'h ouz ar veleien ar pezh a dlie dezho ar c'houarnamant abaoue m'en devoa kemeret madou an Iliz brema e zeuz passe kant vloaz ?

Koumprenomp mad en dra-ma, peb hini ac'hanomp en deuz he lod er pezh a ro tro d'ar re all da ober. Pa roomp hor mouez da henvel tud da vont evel depute pe senatour da Bariz, pe evel kuzulier jeneral da Guimper, pe evel kuzulier ar gommun d'an ti-kear, e kemeromp perz el labour a reint. Hon dever eo ta sellet piz, lakaat evez araok hag abred. Lod a lavar, me na vouien ket petra raje hennez pa vije savet e karg. Ma na ouiac'h ket, eo abala-

mour n'ho peuz ket kemeret ar boan da c'houlenn digant an dud a feiz a anavezit evit beza klasket atao mad ar vro hag ar relijion.

N'ho peuz sellet nemet deuz ar veren a lakea an douna odivi evit lounka. Mar d'eo evelse ema ar stâl, ho peuz great eur pec'hed a leziregez, hag eur pec'hed braz, o veza ma z'eo var eun dra grevuz ha pounner.

Mez ar peurliesia, eo eas anaout petra rei ar re a c'houlenn hor mouez. Mar dint harpet gant kazetennou hag a ra brezel da gement a zo santel, a ra goap deuz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, mar dint diffennet gant tud hag o deuz votet, al lezennou a enep an Iliz hag ar skoliou kristen, e c'hellit sonjal e reint evel ar re a labour evitho.

Ha ma vouiac'h araok ar pezh a raje an hini o peuz roet ho mouez dezhan, neuze oc'h ken fall hag hen, neuze emaoch daouhanter ganthan var an drouk a reio.

Hag oc'h ober eun implij fall gant ar vouez deiz ar votadek, e rear eun drouk hag a zo diez da zigoll. Pa vez laeret unan bennag, ec'h c'heller dic'haoui buan, o renta ar pezh a vez kemeret ; ma ho peuz tammalet e gaou eun all, n'ho peuz nemet en em dizlavaret, evit renta dezhan he vrud mad. Mez penaoz tapa ha digas en dro, an tamm paper taolet e kef ar votadek. Ar re zo eat e karg, a zo hanvet evit pevar bloaz. Kaer ho pezo keuzi ha lavaret a vouez huel : eur vech all m'hen talvezo dezhan. Da c'hortoz e vezo great an drouk. Lezennou a vezo douget a enep mad ar vro, ar barrez, ar relijion. Hogen, eur vech great, eul lezen fall a zo diez da freuza.

Lod all a fazi c'hoaz pa vez votadek. Ni, emezho, ne zeimp ket e touez ar freuz, ni a jommo sioul er gear, ha neuze da viana, n'euz forz piou a vezo hanvet, an dra-ze ne zello ket ouzomp, ne ket var hor c'hount e vezo.

Digarez fall ha fazi ! E diou c'hiz e c'hellomp sikour ar re fall da vont er c'hargou : da genta, var eun o rei hor moueziou dezho, d'an eil, o chomm eb rei hor mouez d'ar re vad a ioa a enep ar re fall.

Pa vez ta votadek, ar voazed, ho deuz c'hoant e ve lealded hag urz vad er vro a dle mont da voti ha dibaba evit ar c'hargou tud a-henn, gouisiek, hag a zoujans Doue. Rag dre zourn deputeed fur ha kristen, ar vro a vezo gouarnet ervez lezen an aviel, a ro urz dezho da glask mad an oll, mad ar relijion, ha da lezel he wir hag he dra gant pep hini.

An eil piez c'hoariet gant bugale ar Skol gristen, deiz gouel sant Stephan

KALANA AR MABIK JEZUS

Eur vanden vugale : Yvonne Magueur hag e breur, Marie ha Josephine Gouzien, Albert Morel, Yvonne Brezel, Joseph Jaouen, Louis Castel, Marie ha Bernadette Jaouen, Marie Jacq, Isabelle Guéna, Marie Derrien, Josephine Auffret, o devoa desket gant ho

c'herent kristen, pegen mad oa ar Mabik Jezus, a ziskennas euz an Env evit digeri dezho d'or ar Baradoz serret abaoe pec'hed Adam hag Eva, hon tad hag hor mamm genta. Mad, emezho, pa zeo ar Mabik Jezus ken mad, greomp dezhan assamblez eur bedennik c'houek, ha goude kassomp dezhan eul lizer evit er pedi da zont dre ar siminal, epad noz Nedelek, da lakaat en hor bouteier a gavo var an aoled, yec'hed hag eurusded evit hon tad hag hor mamm, furnez evit peb hini ac'hanomp hag ar c'hras da greski eveldan en oad hag e karantez Doue, ha ma plij gantha e lakei ive madigou, mez an dra-ze ne c'houlennomp nemet varlerc'h ar furnez hag ar zentidigez. Ho feden a oa bet selaouet. Diouz ar mintin e kavjont en ho boutou, madigou hag eul lizer digant ar Mabik Jezus evit lavaret e roe dezho ar grasou o devoa goulennet. Dirak kement a vadelez, ar vugale a ziskouezas ho anaoudegez vad o sklaskat ho daouarn hag o kana eur c'hantik evit kas betek ar Mabik Jezus, an drugaraz an tenerra euz ho c'halonou.

An dud a ioa o sellet ar c'hoari, a lavare : eüruz ar vugale o deuz kerent kristen hag a ra dezho, ken abred karet Jezus ha douja Doue.

A zo bed mear e Landunvez abaoe 1789

Bloavez	An Aotrounet	Micher	O chomm
1789.	François Corrie,	marc'hadour,	Arc'hantel.
1790.	Roullouin,	aotrou persoun,	Bourk
1791.	Tanguy Caraës,	labourer,	Foshuel.
1791.	Sébastien Salaun,	labourer.	Kervéon.
1792.	François Floc'h,	labourer,	Kervéloc.
1792.	Sébastien Salaun.	labourer,	Kervéon.
1793.	François Kermorgant,	labourer,	Kervaoret.
1794 da 1800.	Yves Bazil,	marc'hadour,	Kerzent.
1800 — 1804.	Guillaume Magueur,	labourer,	Gurulou.
1807 — 1809.	Sébastien Salaun,	labourer,	Kerveon.
1809 — 1815.	Yves Lamour,	labourer,	Curulou.
1815 — 1852.	Goulven Poullaouec,	marc'hadour,	Kerzent.
1852 — 1857.	Joseph Morel,	labourer,	Kerzent.
1857 — 1870.	Hervé Lenvec,	miliner,	Traon-Izela.
1870.	Jean-Marie Brezel,	den a vor,	Arc'hantel.
1871.	Yves Héliès,	labourer,	Kermajan.
1872.	René Corolleur,	labourer,	Curulou.
1873.	Yves Pellen,	labourer,	Kernézoc.
1874 — 1876.	Yves Morel.	labourer,	Kelléron.
1876.	Tanguy Le Ven,	marichal,	Kerzent.
1876 — 1877.	Yves Héliès,	labourer,	Kermajan.
1877 — 1881.	François Per,	labourer,	Kerléo.
1881 — 1911.	François Godebert,	labourer,	Kastel.
1911.	Jean Morel,	marc'hadour,	Bourk.

1919-1928 J. N. Minguy labourer
 1928- Yves Kerwan - id -
 1935- Jean Kerwan - id -
 Kelléron
 Jenfoul
 Kervinimic

Doue desket d'he bugale, gant eur vamm gristen

Piou a ra d'an heol bep mintin sevel
 Ken kaer var griben ar mene ?
 Piou ra d'an noz asten he vantel ?
 Va bugale ! **Doue.**

Piou n'euz livet e glaz an envou ?
 Hag ar mor braz ken kaer ive ?
 Piou n'euz livet ar bleun er prajou ?
 Va bugale ! **Doue.**

Piou a ro d'ar gouez kement a zelliou ?
 Ha pa gan ennhio d'ar beure,
 Piou zesk d'al labouz he gantikou ?
 Va bugale ! **Doue.**

Piou a ro he dra da bep perc'hen ?
 Nebeut d'unan kalz d'egile,
 Nebeut d'ar spern, muioc'h d'ar rozen
 Va bugale ! **Doue.**

Piou a laka kalon ho mammou,
 Pa c'hoarzit da c'hoarzin ive ?
 Da vouela pa velont ho taelou !
 Va bugale ! **Doue.**

Evit ho zad hag ho mamm garet,
 Pa bed sioulig ar vugale
 Piou a zelaou ho feden tanet ?
 Va bugale ! **Doue.**

Em ber, pa viot eat da gouskat,
 Goude 'r beden, en ho kuele,
 Piou a glozo d'eoc'h ho taoulagad ?
 Va bugale ! **Doue.**

ER SKOL GRISTEN

O deuz bet epad ar miz, ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez

Klas kenta.	Germaine Drogou. Euphrasie Maguerez. Marie Bréncol. Fernande Brézel. Joséphine Cong.	Eil rummad.	Marie Jaouen. Rosalie Eliès. Rosalie Perchoc. Louise Eliès. Philomène Bossard. Marie Balcon.
Kenta rummad.		Eil rummad.	
Eil rummad.	Marie-Jeanne Le Borgne. Pauline Morvan. Marie Vaillant. Ernestine Guéna.	Trede klas.	Angélique Léostic. Jeanne Didou. Elisa Minguy. Marie-Renée Croguennoc. Philomène Cornen. Jeannie Magueur. Rosalie Léostic. Anne-Marie Jacq.
Trede rummad.		Trede rummad.	
Eil klas.	Désirée Maguerez. Denise Talarmin. Marie Squiban. Eugénie Morel.	Eil Rummad.	Joséphine Trébaol. Isabelle Guéna. Marie-Yvonne Guéna. Elisa Luart. Albert Morel. Philomène Le Borgne. Marie-Yvonne Richard. Louise Pellen. Bernadette Jaouen. Marie-Anne Cong. Marie-Anne Bossard.
Kenta rummad.		Eil Rummad.	

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, héritourien ar Baradoz :

		PAEROUN :	MAEROUNEZ :
18 Genver.	Joseph Le Guen, Trémazan.	Fr. Guiziou.	Phil. Le Guen
20 —	Anne-Marie Guéna, St-Gonvarc'h.	Fr. Corolleur.	M. A. Guéna.
5 C'huevrer.	Yvonne J.-M. Eliès, Kerzent.	J.-M. Thépaut.	M.-A. Héliès.

Te Deum !

SAKRAMANT A BRIEDELEZ

A zo bet unanet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

21 Genver.	Jacques-M. Bégoc, Lanrivoaré, ha Marie-Yvonne Guiziou, Kergastel.
—	Auguste Gagnon, Plouzané, ha Marie Minguy, bourk.

Pater, Ave.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vered, da c'headal deiz ar varn e goasked ar Groaz

27 Genver.	Françoise Magueur, 73 vloaz, Kernézoc.
31 —	Marie-Yvonne Cadalen, 71 vloaz, Guitalmeze.
12 C'huevrer.	Augustine Pérez, 31 vloaz, bourk.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

13 Genver.	Jean-François-Marie Magueur, 5 sizun, Kérincuff.
------------	--

Laudate pueri.

MIZ MEURZ

Azalek ar zul kenta euz ar c'horaiz, betek pask solannel ar vugale, e vezo katekizmo evit ar baotred da 4 heur, d'al lun, d'ar merc'her ha d'ar guener, ha pa n'ho devezo ket gouezet ho c'hentel, e rankint dont ive d'ar meurz da 4 heur ha d'ar iaou da 8 heur-hanter.

Truezuz eo guelet peguen lezirek eo lod euz an tadou ha mammou da lakaat ho faotred da zeski ho c'hentelliou katekizmo. Ha c'hoaz, marteze, e vezo drouk enn-ho ma vezont korbelle.

Etouez ar baotred a dle ober ho fask kenta solannel er bloaz-ma pe er bloavez a zeu, ne vez ho c'houzout ho c'hentel kasi bep tro, nemet : François Bocheur, Gabriel Cozien, Hervé Kerros, Joseph Jaffrès hag Eugène Talarmin. An daou-ma a vez great katekizmo dezho bemdez gant Madame Prosper Jacq ha Leonie Contanée. Ar vugale all, ne deont, nemet pa dro en ho fenn, da gaout an dud ha volonteze vad a en em giunig da ober katekizmo dezho. Ar gerent a dlefe beilla var an dra-ze.

Jean hag Eugene Guéna, Jean Conq, Noel Lesvenan, Edouard Provost a vouez ive avichou ho c'hentel ; ar re all oll a vezo korbelle ma ne boagner ket muioc'h gantho.

D'ar meurs da 4 heur katekizmo evit ar paotrezet ha d'ar iaou da 8 heur hanter. D'ar c'hatekizmo-ze e teuo ive ar baotred a zo er skol e leac'h all. D'ar zul da 1 heur a kart e vezo ive katekiz-

mou d'ar vugale gant ho fevare pask ha d'ar re a zo er skoll e leac'h all.

Ar vugale 7 hag 8 vloaz a gendalc'ho, paotred ha paotrezed, da zont d'ar c'hatekizmo d'ar iaou da 9 heur hanter.

1. Kenta sul ar c'horaiz, offeren ha gousperou ar zul.

D'ar merc'her 4, d'ar guener 5 ha d'ar sadorn 7, iun ha vijil ar pevare amzer.

6. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 7 heur nemet kart.

8. Eil sul ar c'horaiz. Offeren ha gousperou ar zul.

A zo pedet da ober er zul-ze eun hanter-heur adoration :

11 h. Pierre Héliès, François Crogenoc, Kermajan, Jean Jaouen, Kerlèo, Claude Taloc, Navant,

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Yves Floc'h, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Auguste Le Borgne, Pourane, Jean-Marie Godebert, François Pellen, Kernézoc, François Cloatre, Langurru.

1 h. Louis Lesvenan, François Morvan, Nicolas Jaouen, Kerincuff, François Kervran, Penfoul.

1 h. 1/2. François Colin, Penfoul, Guillaume Rioual, Jean Cadalen, Kerc'hoazoc, Yves Magueur, sant Gonvarc'h.

15. Trede sul ar C'horaiz. Offeren ha gousperou ar zul. Reunion bugale Mari.

22. Pevare sul ar C'horaiz. Offeren ha gousperou ar zul. En dervez-ze e tigor e Lesneven eur retred brezounek evit ar voazed.

25. Gouel Maria Meurs. Offeren ha gousperou ar gouel. Offeren vintin er Bourk hag e Kerzent da 6 heur-hanter. Offeren bred e Kerzent da 9 heur-hanter. Rozera da 2 heur, komplidou da 2 heur-hanter. Deuomp oll en dervez-ze da Guerzent da bedi ar Verc'hez da rei deomp ar c'hraz da ober eur pask mad.

29. Sul ar Bassion. Offeren ha gousperou ar zul.

Er zul-ze e tigor pask. Evel bep bloaz e teuo bemdez unan bennag a bep ti da ober he bask. Oc'h en em rainna er guiz-ze, ne vezo morse re a brez hag ar c'hovesour en devezo muioc'h a amzer d'ho kelen o c'houi da sonjal en dra talvouduz a rit evit ho silvidigez.


Den er barrez ne jommo eb ober he bask ha neuze e c'hellimp laouen kana gant an *Te Deum*, da zul ar C'hazimodo :

Kavet hor beuz ar peoc'h hag an eurüded.

Kannadik miz genver ha *Kannadik* miz c'huevrer ho deuz koustet 52 lur.

Bet evit sikour ho faea digant : J. M., L. T., K. K., P. G., pep a 5 real ; M. C., 10 real ; M. S., H. H., P. J., M. A. B. pep a 8 real ; M.-J. K., 6 real ; I. C., 5 real ; J. N., M.-Y. L., J.-F., pep a 24 guennek ; J. K. 4 real, eur stroillad bugale, 6 real ; J. S., M. A., pep a 10 guennek.

Doze r'ho faeo.



PERAK E REIMP OLL, HOR PASK

Da genta, evit senti ouz Jezuz, an eil fersoun euz an Dreinded, diskennet euz an Env var an douar, evit hor prena dre he varo kris var ar groaz ha digeri d'eomp dor ar baradoz, serret abaoe pec'hed Adam hag Eva, hon tad hag hor mam genta.

Hen e-unan eo a lavar : Ma na zebrit va c'horf ha ma na evit ket va goad, n'ho poket ar vuez ennoc'h.

Ar c'homzou-ze a zo sklear : Ma fell d'eomp e chom-fe hon Ene beo, e rankomp kemeret ar gommunion. Ar gommunion a zo ken neser da Ene an den evit chom beo, a ma zeo ar bara d'he gorf, ar boued d'al loan, druzoni an douar d'ar yeoten pe d'ar vezen. Er gommunion great bemdez, pa c'hellent, eo e kave ar gristenien epad an 300 vloaz kenta euz an Iliz nerz-kaloun evit gouzaon an tourmanchou ar re grisa ha skuill ho goad dre ar verzerenti, kentoc'h eget nac'h Doue pe ginig ezans d'an doueou faoz.

D'an eil, evit senti ouz an Iliz hor mamm an denera.

Jezuz-Krist en deuz roet d'he Iliz, ar c'halloud da ober lezennou, ha chom heb senti oc'h an Iliz, a zo mankout da zenti oc'h Doue he-unan. Evel hon deuz lennet huelloc'h, Jezuz en deuz diskleriet e ranke ar gristenien, kommunia evit delc'her beo ho Ene. Neuze, an Iliz, o velet e zoa kristenien gourd ha lezirek, a leze ar misiou, ar bloaveziou da dremen heb reseo sakramant an aoter, a zougaz eul lezen, evit gourc'hemenn d'an oll dud fidel, en oad da c'houzout petra reont, kommunia e stad a c'hraz, da nebeuta en amzer fask, bep bloaz, en ho iliz parrez, nemet kounje o deffe bet digant ar re o deuz galloud evit-ze, da gommunia e leac'h all.

Ne rear ket ta ar pask o kommunia en dianveaz parrez pe en eur chapel, nemet kounje a ve bed. Red eo ive, kommunia e stad a c'hraz. Ne rear ket ar pask, oc'h ober eur gommunion sakrilaj.

An Iliz oc'h ordren kommunia da nebeuta epad an amzer fask, a ziskouez d'eomp ar c'hoant e deuz e resefemp aliesoc'h, bemdez mar geller, ar bara a vuez. Sakramant an aoter eo ar zoursen vraz euz a c'hraou Doue, hag abalamour da-ze ar c'hristen, a fell dezhan poania, d'en em savetei, a glask an alies a m'a c'hell ar vagadurez m'en deuz ezomm anezhi evit delc'her beo he Ene ha krenv, evit stourm ouz an drouk-spered, he dechou direol ha skoueriu fall ar bed.

An nep n'en deuz ket kommuniet, dre he faot, epad an amzer fask, en deuz great eur pec'hed marvel, hag a dle goudeze, kommunia kenta ma c'hello evit tenna he Ene paour euz ar stad a varo a virfe outhi da vont d'ar baradoz, ma teuffe Doue d'he gervel er stad truezus-ze.

Avichou e chomer ankeniet, o klevet tud o lavaret : ni a gova-saio hag a rei hor pask en dervez araok hor maro. Mez, ma laka Doue ar maro da zont araok ho covesion hag ho pask, petra e

teuoc'h da veza ? A dra zur e zeoc'h neuze, da vaga tann an Ifern assamblez gant an dud daonet.

Setu aman komzou Doue o kaozeal euz ar maro. Ar maro a deuio e kreiz an noz, evel al laer. Bezit ta atao prest d'hien digemeret, o veva e stad a c'hraz, ma ho peuz c'hoant da vont d'ar Baradoz. Doue en deuz promettet ar pardoun d'ar pec'heur a zistroio dezhan a vir galoun ; mez, en e beleac'h, n'en deuz promettet dezhan an dervez a varc'hoaz. Petra a zo ta diskiantoc'h, eget kaz, labour affer vraz ar silvidigez, beteg eun dervez a erruo pa sonjimp an nebeuta, heb gouzout a n'hi hon devezo neuze hon anaoudegez vad hag amzer da govez ha da gommunia. Ha neuze, daoust a Doue a zo red dezhan kemeret an dilerc'h deuz eur vuez roet oll d'ar bed ha diar pec'hed ?

Faites comme moi, et vous serez heureux

Hé oui ! j'ai fait mes Pâques ! c'est-à-dire, j'ai continué le geste qui depuis dix-neuf cents ans, nous relie à ce cénacle de Jérusalem où Jésus et ses disciples célébraient le banquet auguste... à ces premiers martyrs qui, au fond des Catacombes, prenaient avidement le pain sacré, avant d'aller mourir dans l'amphithéâtre... à ces aïeux qui bâtissaient de magnifiques cathédrales pour abriter la divine hostie...

J'ai fait mes Pâques !

Le flambeau de la tradition ne s'est pas éteint dans mes mains ! L'anneau de la chaîne, je ne l'ai pas brisé !... La foi reçue des miens, je ne l'ai pas avilié... je regarde le même ciel avec le même espoir... Je ne suis pas en contradiction avec ma femme, que j'ai épousée aux pieds des autels... avec mes enfants, que je fis baptiser, que j'envoie communier. Ce qu'ils croient, je le crois !... ce qu'ils aiment, je l'aime ! Et les aïeux ont dû nous bénir du fond de leur éternité, en voyant toute la famille, aller ensemble à la table eucharistique, comme ensemble elle se réunit à la table du repas matériel.

J'ai fait mes Pâques !

Je ne suis pas un isolé. Je suis le frère de ces innombrables chrétiens qui, dans le monde entier, se sont agenouillés, cette quinzaine, à la table sainte, et se sont relevés ensuite, avec le sentiment que Dieu habitait leur poitrine humaine, et qu'ils en étaient plus forts contre les menaces de la vie et les passions de leur cœur...

Dans cette multitude, il y a des savants et des ignorants, des enfants et des vieillards, des heureux et des infortunés... Et moi, pauvre être mûrissant pour la moisson prochaine, je suis heureux de lever mes mains avec toutes ces mains... de mêler mes prières avec toutes ces prières... de savoir que je suis chez moi dans toutes les églises catholiques du monde... que dans mon immense famille chrétienne, il y a eu... il y a tant de belles âmes encore, que, pensant à elles, Dieu aura peut-être pitié de la pauvre mienne !

J'ai fait mes Pâques !

Je sais pourquoi toutes les cloches ont sonné et sonnent joyeusement... pourquoi d'invisibles espoirs flottent dans l'air... pourquoi

tous les visages semblent rayonner... Et maintenant le soleil peut briller ! Il ne sera pas une ironie, car mon cœur est en fête !

Le ciel peut se faire sombre... J'ai renfermé dans mon cœur Celui qui est la lumière !

J'ai fait mes Pâques... *Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !...*

Pierre L'ERMITE.

Ar vugale o deuz skiant, a dle kommunia en amzer Bask

Petra, Mari, n'ho peuz ket a sonj da zenti ouz hon Tad Santel ar Pab, a c'hourc'hemen d'ar vugale o deuz skiant kommunia da bask hag aliesha ma c'hellont epad ar bloaz ? Perik, ho map, en deuz 7 vloaz echu, ha n'he deu morse d'ar c'hatekizmoù. Er giz-ze ne c'heller ket gouzout hag hen a oar an nebeudik katekizmoù a c'houlenner digant ar vugale araok ho c'has da gommunia. Ober a rit eur pec'hed bras, o chom heb poania da brepar ho map da gommunia.

Mez, aotrou Persoun, Perik a zo ken skanv a benn, a ken drouk.

Mad, Mari, evit ma teuo da vezo furroc'h, eo oc'h pedet d'er c'haz abred da gommunia. Ha n'ouzoc'h ket, penaoz Jezus, o tisken en he galoun, a roio dezhan nerz da veza treac'h d'he dechou direol o tivoan, d'an drouk-spered en doug da bec'hi, ha d'ar skoueriou fall a velo ama hag a-hont en despet d'ho soursi da veilla varnhan ?

Guelit, ar pezh a dremen er skoliou kristen, a gas ho bugale kerent a 7 vloaz pe araok, da gommunia kasi bemdez. Ar vugale-ze, kalz anezho, a zo chenchet evel re all en ho flas. Senti a reont var ar ger, hag eun dudi eo guelet ar boan a gemeront da ober ho deveuriou evit plijout da Jezus o chom en ho c'halonou.

Mez, aotrou Persoun, Perik n'oar ket c'hoaz aoualc'h a gatekizmoù.

Neuze, Mari, eo dre ho faot eo. N'ho peuz ket kourmant abred aoualc'h da zeski dezhan he relijion. Ha neuze, Mari, evit kommunia ar veach kenta, ne ranker gouzout nemet neubent a dra : « Ar c'hreansou, e z'euz eun Doue hebken a roio he varadoz d'an dud dibec'h hag a daolo en Ifern an neb a varv er pec'hed marvel, e z'euz e Doue, tri fersoun, an Tad, ar Mab, ar Spered-Santel, e z'eo Doue, ar Map, en em c'hreat den, evit hor prena. Gouzout a ranker ouспен e ranker kovez da viana ar pec'hejou marvel araok mont da gommunia ha n'eo ket an hosti eur bara henvel ouz ar bara ordinal, rak bet eo chenchet, da vare ar gorreou, en offeren, e korf ha goad hor Zalver Jezus-Krist.

Ar vugale avad a ranko da c'houde kendalc'her da zeski a nebeudou ar c'hatekizmoù penn da benn dre ma kresko ho skiant, dont d'ar c'hatekizmoù ken n'ho devezo great ho fevare pask solannel.

Bennoz d'eoc'h, aotrou Persoun, evit ho kuzuliou mad. Perik a ielo hiviziken d'ar c'hatekizmoù ha lakaat a rin va foan evit ma zeid da gommunia ar c'henta evit ma rei eur pask mad.

DINER AN ILIZ

Setu ama, petra lavar, an Aotrou n'Escop el lizer en deuz skrivet d'eomp evit ar c'houraiz : « Ar gest evit diner an Iliz a vezo great, kement ha ma vezo possubl, araok pask. An dud fidel a gompreno an dever a goustianz, o-deuz da sikour ho beleien da veva. An aluzennoù resevet evit an dra-ze, a vezo digaset da zekretour an Escopti, hag eur gommision a labourou evit rei sikour d'an nep en devezo ezom: »

C'houi, tud Landunvez, a zo re vad, evit ho peleien, evit ma vent, etouez ar re-ze ; mez, ober a rankit er memez tra, oc'h aluzen evit diner an Iliz, ha ma klemit eun tam ouz e rei, lesit ho trouk da goeza nan var an Aotrou N'Escop, a rank sikour kalz pareziou euz an Escopti, mez var an dud skiant, o deuz votet evit deuteed hag ho deuz roet ho mouez pa zint eot da Baris, evit na vije mui paet d'ar Veleien, an dle en devoa ar c'houarnamant, en ho c'henver, abaoue m'en devoa kemeret madou an Iliz.

Evel kustum oc'h pedet da zigas oc'h aluzen d'ar sakreteri araok fin pask. Ar re n'ho devezo ket roet ho frof a benn neuze, e zeor d'ho zi d'he goulenn digantho.

En ano Doue, grit oc'h aluzen en amzer merket, rak an aotrou persoun ne gav netra diesoc'h, eget lavaret d'ar re a gav dezhan a c'hell ober an aluzen, pa deuont d'ar bourk evit eur vadiziant pe eun eured, ne vezo sounet nemet eur c'hloc'h, rak n'ho peuz ket paet diner an Iliz evit ar bloaz-ma. Ar gourdroz-ze, a zo kalet evithan da ober, ha goulskoude, e rank ober he zever ha senti ouz an aotrou N'Escop.

ER SKOL GRISTEN

O deuz bet epad ar miz, ar guella renk dre ho labour hag ho sentidigez

Klas kenta.	{ Euphrasie Maguérez. Marie Brénéol. Joséphine Cong. Françoise Roudaut, Fernande Brézel.	Eil rummad.	{ Louise Hélias. Rosalie Perchoc. Marie Jaouen. Rosalie Hélias. Catherine Kermorgant. Madeleine Déniel.
Kenta rummad.		Eil rummad.	
Eil rummad.	{ Marie-Jeanne Le Borgne. Pauline Morvan. Marie Vaillant. Ernestine Guéna. Félicienne Brézel.	Trede klas.	{ Marie Milin Philomène Magueur. Marie-Yvonne Allégot. Françoise Brénéol. Marie Magueur.
Trede rummad.		Kenta rummad.	
Trede rummad.	{ Désirée Maguérez. Denise Talarmin. Yvonna Brézel. Marie Squiban.	Eil Rummad.	{ Isabelle Guéna. Joséphine Trébaol. Albert Morel. Louise Magueur. François Allégot. Bernadette Jaouen. Perr ne Kerros. Haudes Milin. Marie-Yvonne Balcon Thérèse Cadalen. Jeanne Foll. Marie-Yvonne Pellen.
Eil klas.		Eil Rummad.	
Kenta rummad.	{ Françoise Sylvestre. Pauline Cong. Marie Cozien. Joseph Cloatre. Augustine Talarmin. Anne-Marie Hélias. Catherine Talarmin. Françoise Le Guen. Marie-Yvonne Kerjean.	Eil Rummad.	{ Isabelle Guéna. Joséphine Trébaol. Albert Morel. Louise Magueur. François Allégot. Bernadette Jaouen. Perr ne Kerros. Haudes Milin. Marie-Yvonne Balcon Thérèse Cadalen. Jeanne Foll. Marie-Yvonne Pellen.
Eil klas.		Eil Rummad.	

SACRAMANT AR VADIZIANT

4. zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
17 C'huevreur	Marie Pellen, Kernéoc.	Joseph Kervoal. Louise Pellen.
22 —	Rosalie Le Borgne, Kerc'hoazoc.	Yves Guennéguès. J. Le Borgne.
23 —	Jean Le Ven, Sant-Samson.	Franç. Trébaol. Marie Fourn.
23 —	Jean Godebert, Castel.	Gouly. Godebert. M. Quéméneur.
24 —	René Landuré, Penfoul.	Yves Landuré. Jos. Michel.
5 Meurs	Geneviève Talarmin.	Joseph Talarmin. Gen. Le Dall.
12 —	Marie Magueur, Kerc'hoazoc.	G. Quéméneur. L. Magueur.
12 —	Jean Kermaidic, Lanhallès.	Jean Kermaidic. Thér. Lescop.
5 —	Gourvadezel, kraoudur Albert Kerros, Kerriou.	

Te Deum !

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vered, da c'headal dez ar varn e goaskeñ ar Groaz

- 8 Meurs Marie Jeanne Guennéguès, 65 vloaz, Arc'hantel.
- 13 — Marie-Yvonne Cloâtre, 77 vloaz, Guitalmeze.

De profundis.

Miz Ebrel

3. Guener kenta ar miz, offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 6 heur hanter.

5. Ar zul bleuniou, offeren ha gousperou ar zul. Hiviziken, an offeren vintin da 6 heur, an offeren bred da 9 heur.

E memor euz an digemer kaer great da Jezuz gant tud Jeruzalem er zul araok he varo, ar gristenien d'ar zul bleuniou, a zigaz gantho d'an offeren bred, bodou glaz, beuz pe bin. Araok an offeren ar beleg a vennig ar bodou ; goulén a ra ma tiouallint an dud euz an droug, ha ma tigassint bennoz Doue var an tiegeziou. Pa vezer distro da gaout dor an Iliz, an or a zo serret, ha ne zigor nemet goude ma vez skoet varnhi gant troad ar groaz. Kementse a verk, oa dor ar baradoz serret ouz an oll, beteg ma teuz Jezuz-Krist d'he digeri gant he groaz.

D'ar zul bleuniou goude gousperou e teuo eur beleg dianveaz da ziskleria ar basion. Dont oll d'he zelaou.

9. Iaou gamblit. Offeren bred pa vezo echu da goves, var dro 7 heur. Ar iaou gamblit a zo evidomp eun dervez a joa, pe guir en deiz-ze Jezuz a roaz d'eomp an testeni kaera euz he garantez lieb muzul, oc'h ober Sakramant an Aoter, evit chom ganeomp en tabernakl, servichout da vagadurez d'hon eneou dre ar gommunion, hag en eur ginnig e sakrifis da Zoue he dad, dre an offeren.

N'euz ket kaeroc'h dervez evit ober ar pask.

Epad ar « Gloria in excelsis » ar c'hleier a vez lakeat e bole hag goude e chomont mud beteg ar zadorn zantel, rak Jezus a zo o vont en he basion hag e gorf distaget euz ar groaz a vezo lakeat er bez, hag epad an amzer-ze, an Iliz a vezo e kaonv. Pa vez echu an offeren, ar Zakramant meulet ra vezo a vez douget gant ar brasa honor d'ar repozouer, kempennet kaera ma c'heller.

Goude-ze varzu ar repozouer eo, e ranker trei ha stoui d'an daoulin araok ha goude pedi. Da 7 heur hanter d'euz an noz, ar bourkiz hag ar re dosta d'ar bourg a deuio d'an Iliz da ober an Heur Zantel.

Dont eul loden da govez d'ar merc'her goude mern.

10. Guener ar groaz. An offiz da 7 heur. Guener ar groaz, dervez a dristidigez evit an dud a feiz. En deiz-ze, Map Doue, goude beza divoasket a bep seurt poaniou kriz, a varvaz var ar groaz evit silvidigez ar bed oll. Peb hini ac'hanomp o sellet ouz ar groaz, a ell lavaret, me eo em beuz sikouret rei da Jezuz taol ar maro dre va fec'hejou. Deuomp ive oll d'an offis evit pokat d'he c'houliau ha goulén pardoun euz hor pec'hejou. Epad an offis, e vezo great ar gest evit an douar zantel.

11. Ar Zadorn Zantel. Offis pa vezo echu da govez, var dro 7 heur.

Er penñ kenta, ar beleg a ia d'ar porched, da veniga an tan nevez. An tan nevez tennet euz ar mean, a verk eo nevezet peb tra gant Jezuz-Krist, gant an tan nevez e vo allumet ar goulou en Iliz evit diskuez e teu a Jezuz-Krist pep sklerijen ha pep mad hag ar c'houlaoen baskal, a verk, eo Jezuz-Krist savet beo, a douez ar re varo. Ar c'houlaoen baskal beniget, e zear gant ar groaz hag ar c'houlaoen-ze d'ar mean-fount evit beniga an dour a servicho da ober kristenien nevez. Beniget an dour, e tistroer d'an aoter en eur gana litanieu an oll zent. Goude al litanieu, e koumans an Offeren ha d'ar Gloria in excelsis, ar c'hleier a vez sounet, an Alleluia a vez kanet, skeudennou ar zent dizoloet. Deuet eo levenez ar pask. Dont da goves goude mern.

12. Ar zul Fask. Offeren ha gousperou ar gouel. An nep a fell dezhan sevel euz ar bez leun a vuez evel Jezuz, a dle da genta sevel euz ar pec'hed dre eur pask mad ha delc'her goude da c'houre'hemennou Doue hag an Iliz.

13 ha 14. Lun ha meurz Fask. An offisou evel d'ar zul. D'ar zul ha d'al lun e vezo koveseat goude gousperou.

A zo pedet da ober ho hanter-heur adoration d'ar zul Fask :

10 h. 1/2. Hervé Guennéguès, Créac'hgoriou, Yves Conq, Yves Huguen, Traon, Jean Lenvec, Kervizinic.

11 h. An aotrou Kuré, Jean Guennéguès, François Jézéquel, François Ollivier, Bourk.

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. An aotrou Persoun, Claude Lunven, Ti-Pri, Jean-Marie Sylvestre, Poullou-Pri, Jean-Louis Foll, Langurru.

12 h. 1/2. Jean-Marie Corolleur, Kerlaguen, Guillaume Bossard, Penkear, Jean Bossard, Lannourien, Jean Taloc, Kerc'hoazoc.

1 h. François-Marie Corolleur, Paul Minguy, Poullouarn ; Jean Bizien, Kellerou ; Jean Guennéguès, Kerc'hoézel.

1 h. 1/2. Bernard Jaouen, Cave ; Pierre Pailler, Lan-Gos ; François Fourn, Jean-Marie Taloc, Sant-Samson.

19. Sul ar C'hasimodo. Offeren ha gousperou ar zul.

25. Da 6 h., prosesion Sant-Marc, en dro d'ar vered.

26. Eil sul goude pask, Offeren ha gousperou ar zul. En dervez-ze kommunia ha pedi evit ma vezo hanvet, dre ar Franz a bez, deputeed a glasko araok pep tra, mad ar vro hag an Iliz. An tam paper lakeat er pôd, deiz ar votadek, a vezo poezet d'ho maro e balansou Doue ha kavet mad pe fall hervez ma vezo bet e tu Doue hag an urz vad, pe a enep dezho. Kristen ebet na vezo diskiant aoualc'h, evit lakaat he goustians dindan he dreid, o rei he vouez evit eur banne da eun den dizoue.

TAOLIT EVEZ

D'ar iaou 23 a viz ebrel e vezo an disput

Evit ar vugale a zesk ar c'hatekizmoù brezounek :

Da 8 heur-hanter, ar vugale gant ho fevare pask. Ar re-ma a ranko gouzout ive : an *Angelus* an *De Profundis* ha Litanioù ar Verc'hez.

Da 9 heur-hanter, ar vugale gant ho eil hag ho zrede pask solannel.

Da 1 heur-hanter : ar vugale gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h. Ar re ma a ranko gouzout ar genta hag an trede loden euz ar c'hatekizmoù.

Evit ar vugale a zesk ar c'hatekizmoù gallek :

Da 2 heur-hanter evit ar vugale gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask solannel. La quatrième communion devra savoir aussi l'*Angelus*, *De Profundis* et les Litanies de la Sainte Vierge.


Da 3 heur hanter evit ar vugale gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h : première et troisième partie du catéchisme.

Evit kaout eur priz e rankor, ouспен gouzout, heb faot ebet, goulen ha respount, al lodennoù merket da bep rummad, beza bet aketuz d'ar c'hatekizmoù epad ar bloaz, ha chom heb rebech ebet epad ar retred a goumanso da 4 a viz mae. Ar Pask a vezo d'ar iaou 7. Goude ar retred, ar c'hatekizmoù a gendalc'ho beteg miz gouere.

Kannadik miz meurz en deuz koustet 26 lur dek guennek.

Bet evit sikour he baea digant : P. L., V. M. C., M. A. P., M. J. L., peb a 8 real ; M. G, V. L., H. M. G., pep a 6 real ; F. O., J. M. G., pep a 4 real ; M. G., 6 guennek.

Doue r'ho faeo.



A ceux qui ont fait leurs Pâques

Et donc vous avez fait vos pâques ? Oui, et j'en suis très heurenx... Mais avez-vous pensé que tout n'est pas fini ? Que voulez-vous de plus ?... Un homme d'honneur et, vous l'êtes, que doit-il faire quand il a donné sa parole ? Mais la tenir.... Alors, avez-vous réfléchi aux paroles de l'acte de contrition que vous avez prononcées pendant que le prêtre vous pardonnait vos péchés par l'absolution ?... D'une façon un peu vague, peut-être ?... Laissez-moi donc vous expliquer. Il y a dans l'acte de contrition : 1° l'expression d'un vif regret pour les péchés passés, et aussi, 2° la résolution sincère, la promesse formelle faite à Dieu de ne plus commettre les mêmes fautes. C'est en somme, une parole d'honneur donnée à Dieu d'être désormais un vieillard chrétien. Est-ce ça ?... Evidemment... En sorte que si vous ne teniez pas à votre promesse, si vous retombiez dans les mêmes fautes, vous manqueriez à votre parole d'honneur ? Parfaitement... Donc, vous devez désormais observer les commandements de Dieu et de l'Eglise... Entendu et compris. Merci de me l'avoir rappelé. C'est que, voyez-vous, on est si enclin à oublier ses devoirs et ses promesses !

RETRED AR VUGALE

Ar retred a goumanso d'al lun 4 a viz mae. En dervez-ze, ha d'ar meurz ha d'ar merc'her, ar vugale, gantho peb a chapeled ha peb a gantik, a vezo en Iliz da 7 heur evit ar pedennou hag an offeren. Prezegennou a vezo great da 8 heur hanter, 11 heur nemet kart, 2 heur ha 4 heur. Ar chapeled a vezo lavaret da 1 heur hanter. Pedennou dioc'h an noz ha bennoz ar Sakramant goude ar brezegen diveza.

Pa ne vezint ket en Iliz ar baotrezed a ielo d'ar skol gristen, eno e vezint sikouret da gana kantikou ha lennet dezho traou kaer. Ar baotred ne jomint ket da c'hoari re dost d'an Iliz epad ma vezor o kovez hag a lakai evez evit ne dorrint ket a groaziou er vered.

D'ar iaou 7 a vae, pedennou hag offeren ar gommunion da 7 heur. Offeren bred da 9 heur hanter. Goude an offeren bred e vezo roet ar Skapular d'ar vugale gant ho fask kenta ha lakeat ho hano e breuriez ar Rozera. Da 1 heur hanter Rozera, gousperou, prosesion. En distro prezegen ha dirak ar Zakramant e vezo nevezet promessaou ar Vadi-ziant ha lennet an act a gonsekrasion d'ar Verc'hez.

Tadou ha mammou, c'houi a deuio deiz ho fask gant ho pugale, da rei d'ezho skouer vad, da bedi evitho, dreist-oll en eur gommunion gantho, o tremen gantho eun dervez a zo evitho unan deuz an derveziou kaera en ho buez. Brema, ma ho peuz c'hoant o deffe ar vugale-ze iec'hed, eurusded ha furnez, hag e raffent o laouenedigez er bed-ma, aliit anezho oll, paotred ha paotrezed da lakaat ho hano e breuriez ar groaz venn. Griit guelloc'h, roit ive ho hano.

1. GUENER KENTA, gouel an ebstel Sant Filip ha Sant Jakez. Kommunia, gant eur garantez henvel ouz ar joa e devoa ar Verc'hez ouz kaloun he Map Jezuz : dre-ze, e vezo sevenet mennoz Hor Zalver hag henoret hor Mam divin.

3. Sul. Gouel SANT JOSEPH, patron an Iliz katolik. Erbedi outhan hon ene, evit ma rai eur maro mad ; hor famil, evit ma prospero ; hor bro, a zo rouantelez Mari pried S. Joseph ; an Iliz abez, evit ma trec'ho an dud fall, a labour da goll an eneou.

10. Oferen ha gousperou AR PEVARE SUL GOUDE PASK. Evit hor zavetei, Mab Doue en em c'hreaz den, a veyaz er boan, a varvaz var eur groaz. Evit ma talvezo he boaniou deomp, e savaz he Iliz, hag ec'h invantaz ar Sakramanchou, a neta hag a zantela hon eneou. Bennoz dezhan.

17. Oferen ha gousperou AR PEMPED SUL GOUDE PASK. Petra zonje ar Verc'hez en derveziou diveza araok ma pignaz Jezuz d'an env ? He zonj a ioa chom er bed-ma evit peur-zeski an ebstel, skora an Iliz nevez-savet, kreski he c'harantez hag he gloar he-unan. Dioueret a rea levenez ar baradoz, evit eun tachad, abalamour da zikour an dud. Bennoz dezhi.

18-19-20. ROGASIONOU. Ar brosesion a vez great evit tenna goaligner an Ao. Doue divarnomp, gelver he vennoziou var an traou en douar, ha rapari hor pec'hejou. Ar c'hiz santel-ma a goumansaz var dro ar bloaz 460, en eskopti Vienn e kreizdeiz ar Frans, dre urz S. Mamert. Avechou ar bardounerien a vae 6 ha 12 heur pad, divoutou, en eur vizita 11 iliz bemdez !...

21. IAOU-BASK. Gouel berz : red eo klevet an oferan evel bep sul, dindan boan a bec'hed marvel. En deiz-ma, Jezuz a zavaz d'an env, korf hag ene, dre he nerz he-unan. Ne ziskennno mui nemet da fin ar bed, evit barn an oll dud. Mes er Zakramant meulet ra vezo e kavomp anezhan, petra benag eo kuzet dindan spes ar bara.

24. Sul. Gouel JEANN D'ARC, guerc'hez, patrounez Frans. Gagnet e Domremy (Lorraine) e 1412, da zul ar Rouaned, e klevaz S. Mikeal, Santez Katell, ha Santez Mac'harit o c'helver anezhi da stourm evit Frans (1423-1428) Senti a reaz e 1429. Epad bloaz e trec'haz ar Zaozoun. Mes guerzet dezho e Compiègne (23 Mae 1430), e oue koundaonet d'ar maro ha devet ez veo, e Rouen, (30 Mae 1431) en oad a 19 vloaz. Er baradoz ema o pedi evit ar Fransizien, goasket gant goasoc'h eget Saouzoun : gant mevelien an diaoul eo.

31. SUL AR PANTEKOST, deiz ar bloaz ma tiskennaz ar Spered Santel, trede persounaj an Dreinded, var ar Verc'hez Vari ha var an ebstel bodet en ti hanvet Senakl, e Jeruzalem. Ho leunia a reaz a bep seurt grasou, evit ma c'helljent konvertisa ar bed paian. — Ennomp e liskan gant he c'hrasou ive, bep tro ma resevomp eur Zakramant, dreist-oll ar Gonfirmasion.

PENAOZ E KOLLER AR FEIZ

FRANÇOIS COPPEE, skrivaniar brudet (nevez maro), en em gonvertisaz goude eur c'hlenved poaniuz. « Meur a hini, emezhan, ma karjent anzaou ar virionez, a lavarje int bet pelleat euz ar reli-

jian, da genta, dre ma tifen en em rei da oll ioulou ar c'horf ; n'ez eo nemet d'an eil ha d'ar fin eo o deuz klasket rezoniou da heulia direbech ho blijadur. »

PAUL BOURGET, skrivaniere konvertiset ive (beo c'hoaz), a lavar : « Paotred iaouank a zilez ar feiz, abred, abalamour m'o deuz great eur pec'hed udur, ha ne fell ket dezho mont da govez. Goudeze, goude beza dilezet ho feiz evit nac'h ho fec'het, e klaskont digareziou da nac'h guirionez ho relijion. »

Hag AN AO. DUPANLOUP, maro eskop Orleans (1878) a gloz ar gaoz evelhen : « Aotrounez, etre Doue ha c'houi, ar speuren n'eo ket an traou da gredi, mes an traou da ober. » D'ar c'henta gourc'hemen e vije pleget brao, panefe ar c'huec'hved.

DINER AR FEIZ

1. Petra eo diner ar feiz ? (Denier du Culte).

Diner ar feiz eo an dever a rank bep kristen katolik paea d'an Aotrou 'n Eskop, evit ma pourveo da ezommou he veleien.

2. Perag e livirit-hu : diner ar feiz a zo eun dever ?

Diner ar feiz a zo eun dever, abalamour ar c'hristen a dle digoll ar beleg, a ro he oll amzer dezhan. Deiz ha noz, ar beleg a dle rei he boan hag he amzer evit ar gristenien ; dezho e tesk ar relijion, evitho e lavar he bedennou ; dezho e ro ar Zakramanchou, ha d'ho bugale e tispleg ar c'hatekismou ; bizita ra ho c'hlan-vourien ; an oll oberiou mad zo en he garg. Eun dever eo hen digoll.

3. Ha koz eo lezen diner ar feiz ?

Lezen diner ar feiz a zo ken koz hag Aviel Jezuz-Krist. Rag Jezuz he-unan a lavaraz d'an ebestel : « Bep labourer a rank kaout he goumanant. » Hag hen he-unan a vevaz epad tri bloaz divar offransou he ziskibien.

4. Perag ne zastumer diner ar feiz nemet abaoe 1907 ?

Ne zastumer diner ar feiz nemet abaoe 1907, abalamour kentoc'h, araok an Disparti etre ar C'houarnamant hag an Iliz, ar c'houarnamant ne nac'he ket ouz ar veleien ar presbitaliou hag ar guenneien a vanke dezho.

5. Perag e livirit-hu e vanke ar c'houarnamant tiez hag arc'hant d'ar veleien ?

Ar Frans a vanke arc'hant d'ar veleien, abalamour e bloaveziou 1789 ha 1793 madou an Iliz a ioa bet laeret gant ar c'houarnamant ; embannet e oue goulskoude, dre lezennou ar vro, e vije paet d'ar veleien eun digoll deread ha da viken.

6. Perag e vez kaset diner ar feiz d'an eskopti, e leac'h hen delc'her e peb parrez ?

Diner ar feiz a vez kaset d'an eskopti abalamour da zaou dra : da genta, an Ao. 'n Eskop eo a gas ar veleien d'ar parrezioù, hag a dle ho beva ; d'an eil, ar parrezioù paoura a reseo dra an A. 'n Eskop sikour aluzennoù ar re all.

7. Perag sevel diner ar feiz, pa vez paet ar veleien, a hent all, evit an enterramanchou, oferennou, etc. ?

An arc'hant-ze a deu evit an enterramanchou, oferennou, ser-vichou, etc., a vez rannet e kalz lodennoù, etre an iliz, ar seminer, ar c'hloc'her, ar gurusted hag ar veleien. Gant al loden a deu dezho ar veleien e kalz parrezioù n'o deuz ket peadra da veva.

8. Paea diner ar feiz hag hen a zo eun dever a goustians ?

Paea diner ar feiz a zo eun dever da bep kristen, bep hini dioc'h he eaz ; rag bep kristen en deuz perz er Zakramanchou, pedennou, oberiou mad an Iliz.

9. Ha pec'hed eo rei netra pe re nebeut evit diner ar feiz ?

Pec'hed eo rei netra pe re nebeut evit diner ar feiz ; rag an dra-ze eo mont enep gourc'hemen an Ao. 'n Eskop hag enep ar pevare hag ar zeizved gourc'hemen a Zoue.

10. Pegement e ranker rei e diner ar feiz ?

Peb hini a dle rei ervez he c'halloud ha dioc'h ezommou an Eskopti. Hor Zalver en deuz lavaret ar pezh a reer d'he vinistred a zo great dezhan he-unan. Rei evit ar veleien a zo rei evit Jezuz-Krist.

11. Peur e ranker paea ?

Bep bloaz e ranker paea diner ar feiz, pa deu ar veleien da ober an dro, pe da gas tud vad en ho hano.

Invantet gant ar veleien ? — Ah ! nan !

Ar veleien n'o deuz ket invantet ar gonvesion ha sakramant ar Binijen. An Aotrou Doue eo.

— Ha guir eo ? eme Korantin Leon d'he bersoun. Me gav d'in, an dud n'o devije ket gellet invanti ar Binijen : re vad eo, hag an dud n'int ket re vad.

— Guelit, Korantin ! eme an Ao. Persoun. E lezennoù ar vro, e verkont prizoun, galeou, maro, d'ar re a zizento. E lezen ar gonvesion, pardon dioc'htu, gant ma vezo keuz guirion ; ha pardon bep taol. Eur vadelez divin eo.

— Me lavare ive, eme Leon.

— Oc'hpen, ma vije bet great lezen ar gonvesion gant ar veleien, ar veleien diana ne d-ajent ket da govez.

— Ha mont a reont ?... Ha pec'hi a reont avechou ?

— Sakramant ar Binijen a bardoun ar pec'hejou ; mes krenfaat a ra an ene, ive. Ne ket netaat eo e ra epken.

— Neuze eo henvel ouz louzou a zo. Lod a bare ar c'hlenvejou ; lod all a vir outho da gregi en den iac'h.

— Dres, Korantin. Goulskoude, mont da govez n'eo ket d'eur beleg eur blijadur brasoc'h eget d'eun all. Ha kovez an dud n'eo ket eur blijadur ken nebeut.

— Ne gav ket d'in ken nebeut. Beza e prizoun evelse, keit ha ma plij gant an dud dont d'ho telc'her ebarz ; trei a ziou, trei a gleiz, ugent guech, kant guech, ep flach e giz all ; a bep seurt c'huez en daou du, c'huez ar butun hag ar banne, c'huez an dillad glepiet pe glozet, ken skuizuz dreist oll pa emae var iun ; klevet an dra-ma, an dra-hont, ha gouzout petra da respount... eur vicher ziez, Aotrou !

— Ia, diesoc'h eget na c'hellit kompren, Korantin ! Red eo d'ar c'hovesour evesât ouz bep tra hag ouz peb den, delc'her sonj euz lezennoù an Iliz, euz stad ar barrez, euz an ene a anzav he factou, hag euz an eneou all asambles, — rei pe refus an absolven, en eur zonjal e vezo da respount dirag an Aotrou Doue euz al labour great, euz goad Jezuz skuillet var an eneou, euz an eneou sikouret da vont d'ar baradoz pe lezet var hent an ifern !... Eur vicher ziez, Korantin ! Eun digoll e deuz goulskoude, pa c'heller dizamma eneou deuz ho fec'hejou, hag ho lakât e karantez Doue.

— Ne d-it ket d'ar gador-govez, eta, evit klevet sekrejou ar familhou ?

— Doue ra viro ! Ha pec'hed braz e ve. Oc'hpen zo, eur vech er meaz, ar beleg ne c'hell diskleria netra, ne c'hoar netra euz ar pezh en deuz klevet pe lavaret, ha pa vije evit savetei he vuez he-unan.

— Ia, Aotrou Persoun. N'euz nemet Doue hag a c'hell rei eun hevelep nerz-kaloun. An dud, ar veleien ne c'hellont ket beza invantet ar gonvesion.

— Bez sur, Korantin, an oll digareziou ne dalont seurt. Tud zo a fell dezho beva en ho roll ; kentoc'h eget plega da jench buez, e kavont easoc'h nac'h en deuz an Aotrou Doue gourc'hemennet kovez ar pec'hejou. Setu aze ar virionez.

KORN AR GROAZ-VEN

Gant petra e reer an alcool ? Kentoc'h : gant petra ne vez ket great ? Greun ed, patatez, betterabez, frouez, geot, — koat, truillou, bouillen ruiou ar c'hearriou, euz a bep tra e tenner alcool da ampoezouni an dud... « Eur saoz o chom e Chicago (Etats-Unis), eme an Ao. medisin Bergeret, a denn alcool euz a bep seurt loudouriaj. An traou a skuber divar ar ruiou, dour ha teil an dud hag ar chatal, restachou brein, razed maro, etc. Euz dek karrad, e tenn 39 lur gres evit ober savons, ha 400 litrad alcool ! » Hum !... eva razed maro ha kaol brein, gant eur saoz ken iskiz !... Erfin, peb hini a zo libr.

An alcool, divalo, a zo ampoezoun. An alcool simpla (*ethylique*) a lazfe eur goaz a gemerfe eun hanter litrad anezhan. An alcool krenva (*amylique*) a lazfe pemp goaz a gemerfe eul litrad etrezho femp.

Al likuriou ne dalont ket guelloc'h. Oc'hpen an alcool, enno e kaver louzou goest da rei d'an den an drouk-sant, d'he lakaat sod, da ober dezhan kousket hanter-varo.

An Ao. Cheysson a lavare med e 1899 : « Eur mor a ampoezoun eo a red dre ar vro, oc'h hada ar maro ar rivin dreizhi. »

KORN AR ZOUDARDED

Eur zoudard, ginidik a eskopti Blois, a skriv kement-ma d'he dud. Er Maroc emaoamp, puotred a vilierou, beleg ebed ganeomp peur-li esa. Var an dachen a vrezel, pa guez eur c'hamalad keaz, e sikouromp anezhan evit ar guella. « Ha n'euz ket eur beleg dre aze ? » emezhan. — « N'euz ket. Petra rafez ganthan ? » — « Ah ! eme ar paotr, achu eo ganen. Diotachou aoualc'h e meuz great. Ne fell ket d'in krevi evel eur c'hi. Eur beleg a rankan kaout. Me fell d'in kovez. » — « Evit kovez, ne ri ket, siouaz ! Mes pok d'ar grusifi, goulenn pardon digant Jezuz, roue ar zoudarded ; kemer metalen ar Verc'hez, refuj ha mam ar bec'herien. » — « Ia, pa n'oun ket evit ober guelloc'h. Pa varvan evit va bro, ar Mestr en do truez ouzin. Eur pok dezhan ! Hag arabad va zeuler en toul ep metalen ; ro unan d'in. » Hag ar zoudard paour a varv, konfortet gant Jezuz ha Mari, epad ma redomp larkoc'h var an enebourien !

Skuer euz ar re gaera, pegen trist benag ez eo. Kentel talvouduz,

hag a zeski e ranker beza prest ato, ha servicha hon Doue evel hor bro, gant henor ha lealded.

VAR BARLEN HE VAM

Penaoz dont a-benn da zeski ken abred d'hor bugale ar pezh a zo red evit konna ? — Penaoz ? En eur boania, anat eo, hag en eur zoursial anezho kalz muioc'h eged ne ra lod. Ar mammou a dle lakaat doun en ho spered e rankont kelen ho bugale ez-vianik, ha poania bemdez, evit ma teuo da zivoan ha da grenfaat en ho c'halonou ar feiz hag an devosion. Ar gark-se a zo kaer meurbed, mes pounner ive !

Evit ho lakat da boania muioc'h c'hoaz, e kountin dezho eun histor e meuz lennet, n'euz ket pell.

Eun deiz, tostik da gear Laval, eur misioner a gavaz eur c'hrouadurik bian azezet var bord an hent. He vam a ioa o labourat, eun tammik pelloc'h, en eur park. Ar c'hrouadur en doa figur vad ha koant, hag a zelle laouen oc'h ar misioner. Hen-ma a iez d'he gaout, hag a c'houlennaz diganthen : « Paotrik, daoust ha te c'hoar sin ar goaz ? » Ar c'hrouadurik a vusc'hoaraz eb respont.

Mes ar vam, e doa klevet ar goulenn, a lavaraz d'ar beleg : « Aotrou, goulennit diganthen eun tammik katekiz ; respont a raio deoc'h. » Evit guir, ar paotrik a anaveze guirioneziou brasa ar relijion ha deveriou ar c'hristen, koulz ha guelloc'h zoken eged kalz bugale, o deuz bet ho « certificat », hag a zo echu gantho ho faskou.

— Mes pe oad en deuz ta ho krouadur ? a c'houlennaz ar misioner souezet.

— Tostik eo d'he dri bloaz !

— Penaoz o peuz gallet deski dezhan kement all a draou, ha ken abred ?

— Oh ! Aotrou, n'eo ket diez. Setu ama penaoz a ran : pa vez var va barlen, pa viskan anezhan, pa roan dezhan da zibri, me a gount dezhan ar relijion, hag a forz d'am c'hlevet, e teu a-benn da zeski an oll draou-se, ha d'ho gouzout mad...

Na kaera skuere evit an oll mammou !

KENAVO ER BARADOZ. — D'ar 25 a viz Here 1912, an Ao. Georges Gouille, kapiten-artillerie, a gerze d'ar vrezel er Maroc. D'an 3 a viz Kerzu 1912, ar c'hapiten a ioa var he dremenvan. Skriva ra d'he vam evelhen : « Va mam ger, resevet e meuz ar gommunion zantel. Pokat a ran deoc'h. Kenavo er baradoz. — Georges. » D'an 9, ar vam a reseve al lizer. « Kollet va map evidon er bed-ma, emezhi. Mes her c'haout a rin er bed all. »

TUD DIZOUE. — E miz Du 1913, ar framasoun Vieu, senatour, a gemere da vap-kaer an Ao. Marchandeaou, rener eur gazeten digristen (*Eclairer de l'Est*). Eun eured euz ar re gaera a oue goulennet ha great en iliz Sant-Sulpis e Paris. Adre ar priejou nevez, ar framasouned Dubost, Renoult, Haudos, hag hanter-kant framasoun ha iuzeo all, a gleve an oferen. — Ne fell ket dezho on defe, ni, relijion ha beleien. Eur saoz eo o defe, hi, ezom anezho !

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
25 Meurs.	Paul-J.-F. Guyader, Arc'hastel,	Jean-M. Taloc, Marie-L. Guyader.
26 —	François-Marie Héliès, Hellen,	François Calvez, Marie Héliès.
5 Ebrél.	Jean-G. Cloatre, Langurru,	Jean Minguy, Jeanne Jaouen.
11 —	Marie-A. Bervas, Sant-Samson,	Jean-M. Taloc, Marie-A. Bervas.

SAKRAMANT A BRIDELEZ

A zo bet unanet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helse he der i :

15 Ebrél. Yves-Marie Floc'h, Guitalmeze, ha Marie-Anne Autret, Trémazan.

ENTERI AN ANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar carn, e' gousked ar Groaz

29 Meurs. Anna Garo, 60 vloaz, Brélez.
6 Ebrél. Albert-Marie Peton, 52 vloaz, Kerriou.
12 — Jeanne Colin, 13 vloaz, Guitalmeze.

EAT D'AR BARADOZ

5 Ebrél Jean-Goulven Godebert, 6 sizun, Castel.

M I Z M A E

Miz Mari a vezo great bemdez en iliz, da 8 heur nemet kart, ha d'ar zul goude gousperou. Heu ober e peb ti, henori hor mamm euz an Eny a zo tenna varnomp grasou he map Jezus.

1. Guener kenta ar miz. Offeren ar Galoun Sakr ha bennoz ar Zakramant da 6 heur hanter.

3. Trede sul goude Pask. Offeren ha gousperou Sant Joseph.

10. Pevare sul goude Pask. Offeren ha gousperou ar zul.

A zo pedet da ober ho hanter-heur adorasion en dervez-ze :

10 h. 1/2. Biél Gélébart, Kergastel ; Yves Bellec, Colas Guéna, Sant Goudarc'h ; Biel Menguy, Poullaouen.

11 h. An aotrou Persoun, Joseph Godebert, Jean Floc'h, François Jézéquel, bourk.

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Pierre Trébaol, Troméneq ; Joseph Jaouen, Nadant ; Yves Jaouen, Kernézot ; Jean-Marie Foll, Langurru.

1 h. Yves Kerdraon, Penfoul ; Eozen Magueur, Penn-al-Lann ; Jean-Marie Jaouen, Landourson ; Eugène Jaouen, Kerléo.

1 h. 1/2. Jean Cadalen, Sant-Samson ; Basti Trébaol, Kerzounit ; Joseph Jarnic, Kerzent ; Pierre Luart, Kelleret.

17. Pemped sul goude Pask. Offeren ha gousperou ar zul.

Rogasionou. D'al lun 18 ar brosesion a ziblaso euz ar bourg da 6 heur, evit mont da chapel Sant-Samson, d'ar merc'her e vezo great tro ad Vered.

25. Ar iaou Bask. Pardoun Kerzent. Offeren er bourk hag e Kerzent da 6 heur. — Ar brosesion a ziblaso euz ar Bourk da 8 heur hanter evit erruout e Kerzent da 9 heur hanter, heur an offeren bred.


24. Sul goude ar iaou Bask, offeren ha gousperou Jeanne D'Arc.

31. Sul ar Pantekost.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

KANNADIK

PARREZ



LANDUNVEZ

SANT GONVEL
PATRON BENNET
AR PARREZ
PEDIT EVIDOMP

AR VOTADEK

An aotrou Soubigou, hon depute koz, a zo bet hanvet a nevez, ar 26 a viz ebrel, dre 10.714 mouez. Er pemp kanton a vote evithan, en deuz bet kalz muicc'h a voueziou eget brema e zeuz deou vloaz. Netra eno a zouezuz, an oll a ouie, en devoa votet gant tiz kement lezen a dlle ober vad d'ar vro, d'an dud reuzeudik ha da relijion, hag enebet gant nerz kaloun ouz kement lezen disleal ha diseiz a ginige ar fransounet hag ho mignouned. Goulskoude, eun nebeudik parrezioù o deuz roet d'an aotrou Soubigou nebeutoc'h a vouezioù eget ar veach kenta. Daoust hag er parrezioù-ze, ar voazed n'int ket deuet da voti, pe o deuz taolet er pod billeji evit c'hoarzin ha ne dlent kounta da zen, a laka eur banne odivi, araok ho feiz, mad ho bro hag ar paour, daoust hag ii a laka eun den dizoue, araok eur c'hristen penn kil ha troad? Kementse ne raffe ket kalz a honor d'ho hano a gristen resevet, dre ho badiziant ha d'ho hano, a zoudard da Zoue, resevet dez ho c'honfirmasion.

AR CHATEKIZMOU

Ar gerent ne veillont ket aoualc'h evit lakaat ho faotred da zeski penn-da-benn ho c'hentellioù Katekizmoù. Pevar ebken, o deuz disputet heb faot ebet, hag o fevar edont gant ho fask kenta. Ar re gant ho faskou all, da veza bet, lod anezho o tisput er bloavezioù araok ; a ioa kroget terchen ar feneantiz enno. Perak? Abalamour ho zud n'ho deuz ket o lakeat e poent, da resita dirazho ho c'hentellioù.

Al loden vraz euz ar baotrezed, a virit meuleudi. 55 o deuz disputet heb faot ebet. Da biou int dleour a gement-se, nemet d'ar Vestrezed a gemer poan gantho. 140 euz bugale ar retred o deuz roet ho hano evit Breuriez ar Groaz-Venn. Ho c'herent ne ginigint ta dezho odivi.

O deuz bet ar guella renk er skol gristen, epad miz meurz ha miz Ebrel.

Klas kenta.	Marie Brénol. Euphrasie Magüerez. Germaine Drogou. Josephine Conq. Madeleine Morel.	Eil Rummad.	Louise Hélias. Angélique Léostic. Madeleine Prigent. Françoise Floch.
Kenta rummad.		Eil rummad.	
Eil rummad.	Marie-Jeanne Le Borgne. Pauline Morvan. Marie Vaillant. Ernestine Guéna.	Trede klas.	Elisa Minguy. Hélène Bizien. Marie Provost. Marie-Françoise Hélias. Marie-Yvonne Dénél. Marie-Renée Croguennoc. Philomène Magueur. Marie Bossard. Marie-Yvonne Kerros. Noëlle Lesvénan.
Trede rummad.		Kenta rummad.	
Trede rummad.	Désirée Magüerez. Josephine Le Borgne. Rosalie Croguennoc. Marie Squiban.	Eil rummad.	Isabelle Guéna. Marie-Yvonne Guéna. Bernadette Jaouen. Elisa Luart. Louise Magueur. Thérèse Cadalen. Marie-Anne Bossard. Léontine Michel. Jeanne-Yvonne Trébaol. Marie-Jeanne Perchoc.
Eil klas.		Kenta rummad.	

1. LUN AR PANTEKOST. Ar gristenien vad a deu d'an offisou en dervez-ma, evel bep sul.

An Ebestel a resevaz tri zra d'ar Pantekost : ar prezeg, rak an oll dud a bep iez pe langaj a entente anezho, — ar garantez, treac'h d'ar prizoun ha d'ar maro gourdrouzet ; ar c'halloud da ober miraklou. Dre-ze eo bet konvertiset ar bed, dre-ze eo bet roet deomp tro da gaout hon loden-varadoz.

3-5-6. IUN HA VIJIL AR PEVARE AMZER (merc'her, guener, sadorn), evit kinnig da Zoue an east en douar ha tenna varnhan he vennoz, en em burifla araok an hanv, obten grasou d'ar veleien nevez.

7. SUL AN DREINDED. Abaoue ar seizved kantved, darn euz ar gristenien a c'houlenne ma vije great eur gouel a gostez en honor d'an Dreinded, eun Doue e tri fersoun. Ar pab Ian eil var 'n ugent a aotrez an offis d'an oll parrezioù. Gloar d'an Tad en deuz hor c'hrouet, d'ar Map en deuz hor prenet, d'ar Spered a deu d'hon santellaat.

11-14. IAU HA SUL AR ZAKRAMANT meulet ra vezo, gouel Jezuz, Map Doue, en em c'hreat bara evit maga hon eneou. Ar Zakramant a zo Jezuz beo, den ha Doue, kuzet gant spes ar bara ep na vije tam bara ebed en hosti. Ra vezo hor c'halonou leun a respet hag a garantez evit an Hini en em izela kement evidomp. Ra vezo hor meuleudioù hirvidik aoualc'h d'he gonsoli euz fallagriez pe ienien re a dud.

19-21. GUENER HA SUL AR GALOUN ZAKR. Jezuz a brenaz an dud dre garantez evitho hag evit he Dad : kreski gloar an Aotrou Doue, miret an dud deuz an ifern ; he garantez a deu euz he Galoun : gouel he garantez divin eo e reer, var he c'houlenn he-unan. « Karet e meuz an dud kement, ha ne resevan en dro nemet ingrateri ha disprijans. Deut d'am digoll, c'hui da viana, » dre gommunionou santel ha dre eur vuez kristen.

28. Sul Gouel SANT IAN VADEZOUR, « N'euz bet hini brasoc'h etouez bugale an dud » eme Jezuz divar he benn. Goulen dreizhan ar c'hras da zalc'her da bromesaou hor badiziant : karet Doue a greiz kaloun, renons da Zatan ha d'ar pec'hed. Er bloaz a zeu ha dalc'hmad ac'houdevez e vezo adarre great gouel Ian d'ar 24.

D'ar zadorn 4 a viz Gouere, derc'hent gouel S. Per ha S. Paol, e vezo iun ha vijil. — D'ar zul, 5 euz ar miz, kest en oferennou evit Hon Tad Santel ar Pab (diner Sant Per), en deuz kement a barrezioù, misionou, oberioù, da skora dre bevar c'horn ar bed.

ME C'HOULEN PERAG...

Ia, gulet a ran e poanier da ziskar va relijion katolik e va bro. Ha me c'houlenn perag.

Ar ministr Viviani a lavare er Gambr : « Ni a fell deomp diframma ar feiz deuz koustians an den » (10 Du 1906). « Ni fell deomp diskar ar relijion, ha kement-se dre ar skolioù », a skriv

ar framasoun Aulard er gazeten *Annales de la Jeunesse laïque* (Eost 1904).

Kaoziou brao. Labour ker brao all. Ne cuir ? Guelomp. E 1880 : kouentchou sarret, 5.640 manac'h pe leanez taolet var ar ru ; an aomonerien militer bannet kuit euz an arme. — 1882. Lezen ar skoliou laik : ar beleg en euz difen da vont enno. — 1884. Lezen an divors, kontrol beo d'ar Briedelez kristen. — 1889. Ar veleien d'ar c'hazarn : parrezion chomet ep beleg, eneu ead d'an eternite ep reseo ho sakramanchou. — 1895. Taillou nevez var ar c'houentchou, hag a bae an oll taillou all evelkent. — 1901 : tri ugent mil relijiuz pe seurez kaset er meaz euz ar vro, dre eul lezen hag a zo eun torfet. — 1903 : ar seurezed bannet euz hospitaliou ar vartoloded ; ar Grusifi taolet euz ar lez-varn. — 1905 : lezen an Disparti : ilizou, beleien, anaoun, ho madou laeret gant ar c'houarnamant, ar Pab nac'het ganthan. — 1906 : ar grusifi tennet euz ar skoliou. — 1907 : n'euz mui a aomonier evit ar vartoloded. — 1910 : ugent mil skol kristen sarret. — 1913 : lezennou enep an tadou famill ; prezegen ar ministr Barthou enep an Ao. Doue.

Ha ! mes, bet ez euz iuzevien, protestanted, muzulmaned, e Frans hag er c'holoniou : en ho zouez eo e kemerer hor ministred peurliesia ; d'ho c'henseurded e lezer bep frankiz. Ha d'in-me, da va relijion gatolik, ha deomp-ni epken, e reer brezel ha brezel iud !

Perag ? Ia, me c'houlenn perag.

Relijion ar iuzevien a vir outho da garet ar vro ma vezont enni. Relijion ar brotestanted a zo bet invariant gant eur Prusian divergount. Relijion ar vuzulmaned a ra tud divezet. Perag ne glas-ker ket affer outho ?

Va relijion gatolik a lavar karet ar vro ; dont a ra euz ar guella den zo bet biskoaz, Jezuz an Doue-den ; ober a ra tud kalounek ha tud vad. Hag e poanier d'he diskar ! — Perag, nemet abalamour ne fell ket dezhi plega d'an dud orgouilluz, ha lezel peb hini da veva en he roll ha diroll ?

Mes ive, pa 'z euz daou vil bloaz ema kement a dud oc'h ober brezel da va relijion, rouaned, bourrevien, soudarded, tud a lezen hag all, perag ive n'int ket deuet a benn euz ho zaol daoust ha d'ho galloud, d'ho danvez, d'ho frömesaou ? Perag, nemet abalamour hor Mestr Jezuz a zo galloudusoc'h, a zo ar Mestr, a zo Doue, — ha ne vezo morse nag an diaoul nag he vevelien evit freuza an Iliz zo bet savet ganthan !

Gant ar Mestr e fell d'in chom a-unan, brema, bepred : an treac'h diveza a vezo deomp ! — (Cf. *Peuple de France*, n° 19).

14.

Disul ez euz ebat da gaout

D'ar red, d'an ebatou ! E kear ha var ar meaz, sul ha gouel e saver a bep seurt goueliou. Tenna d'ar sibl, redadek var varc'h, var vor, var velo, konkour pe komedi, ha me c'hoar, aliez ha peurliesia epad an offisou, pe divezad aoualc'h evit miret ouz ar gristenien da baka oferen ha gousperou.

Piou zo kaoz ?

Ar Framasouned, ha netra ken.

Ha souezet oc'h ?... Mad ! evelse eo, tudou keiz. Lennit ar pezh a zo ama varlerc'h, kemennadurez roet d'ar framasouned gant

unan euz ar pennou braz en ho zouez. Ar gazeten *la Franc-Maçonnerie démasquée* he diskleriaz d'ar 15 a viz Gouere 1910.

« Evit laza offisou ar gristenien da zul ha dre-ze digristena ar vro, c'hui a gav deoc'h ar guella vije da ober eo sevel leun a c'houeliou laik, dre skoazel hon emgleo-framasouned.

N'eo ket : muioc'h a zrouk eget a vad e rafe an dra-ze deomp. Ma vije gouezet ez eo ar framasouned eo a zav ar goueliou-ze, ar gristenien enkrezet a rafe trouz, a skrivfe kounnaret en ho c'hazetennou ; hag an dud aounik, spountet gant eur safar ker braz, ne iafent var ho zro : hor goueliou a vije kollet.

Ne d'ai ket an traou evelse. N'eo ket o klask diskar pe sarra an ilizou e teuimp abenn euz hon taol, mes en eur c'houlonderi anezho, en eur jacha an dud da leac'h all. Ar framasouned a dle sevel en dro dezho emgleoiou, da farda a bep seurt goueliou da zul. C'hoant braz on deuz e vije eun emgleo er c'hiz-se e peb kear sous-préfecture, gant kenseurded pe gant hevelep emgleoiou bianoc'h er c'hommuniou all. »

Setu petra glask ar framasouned. En em guzat, kuzat ho labour divalo, boaza an dud da gimiada dioc'h an offisou, chench dervez an Ao. Doue e dervez Satan, euz dervez ar beden ober dervez an ebatou : hag hen ober en hevelep fesoun ne zonjo ket ar gristenien digeri ho daoulagad da velet fallagriez ar re a ra an neuz da ginnig ebatou, hag a ro ar goaleur eternal. Nep a gemer he varadoz er bed-ma, ne gav nemet an ifern er bed all.

Ar c'hristen d'an offisou ; lezomp an ebatou gant ar framasouned hag ho seurt.

17.

Mad, fall, na fall na mad

Ar c'hazetennou eo a lavaran. Tri seurt zo anezho : ar re vad, ar re fall, ar re ne ouzont beza na mad na fall. Pini a gemeroc'h ?

AR RE FALL ? Ma lennit anezho, e vezo buan ho kaloun en dienez a bep karantez guirion, a feiz, a honor. Enno e teskfoc'h an drouk, ar gasouni, an traou udur.

AR RE NA MAD NA FALL ? « Nag evit nag enep, na ia na nan ; ar relijion ne dal mui ; keleier a bep seurt, nemet euz traou an env » setu petra zonzont. Kounta raint an distera iar flastret gant eun auto, mes ne vo plas ebet evit eur C'hongrès katolik, ha pa vije bet oc'hpenn dek mil ha kant mil den ennan. Ma lennit anezho, ho spered a vezo leun a draou goulo : eur pezh kaer, ne ket ?

AR RE VAD ? Ar c'hazetennou mad a zifen Doue, an Iliz, ar Vro, ar mad. Enebi a reont (hag e koust ker dezho alies) ouz al lezennou fall, ouz an dud dizoue, ouz an oll dizursiou. Kannadet an Ao. Doue int en ho fesoun. Hag evel e lavare an Aotrou 'n Eskop Kettler : « Ma teuje an abostol Sant Paol er bed adarre, e vije skrivanier en eur gazeten ! »

Gant an tri seurt kazetennou, petra dleit ober ?

AR GAZETEN FALL D'AN DEN FALL : ha n'eo ket sklear ? Mar d-oc'h mad, mar d-oc'h kristen katolik, n'ez eoc'h ket da rei ho kuenneien d'unan fall, da unan enebour d'ho Toue, d'ho pro, d'ho famill, d'oc'h ene. N'ez eoc'h ket da lenn unan fall : penaoz kemeret ampoezou ep beza ampoezounet ? Ne lezfoc'h ket ho pugale hag ho servicherien da lenn ar gazeten fall : muntrer e vijec'h ma lezfac'h.

AR GAZETEN NEUTR (na mad na fall), d'an DEN BERR A SPERED ha d'an den GOLOET, TRUBARD. Ma n'ema ket ar gazeten evit ar mad, ema evit an drouk. Ma ne lavar ger euz traou ar relijion, ne zifenn ket Doue hag he vir, ne ra ket an dever red. Evit piou oc'h, c'hui, kristen katolik ? Evit Doue, pe a-enep ? evit an urz vad, pe evit an dizurs ? evit oc'h ene, pe enep dezhan ? Mar d-oc'h evit Doue hag oc'h ene, ne c'hellit ket beza evit ar gazeten ne ra hano ebed anezho, hag a lez ar re fall da enebi outho. Ma prenit, ma lennit, ma lezit lenn ar gazeten fall, ez oc'h eun den goloet pe eun trubard. N'oc'h ket, m'oar vad !

AR GAZETEN VAD D'AN DEN MAD. An traou mad, d'an dud vad ! Hor guenneien d'an hini a zifenn ar pez a garomp ar muia ! Eun dever eo anaout buez an Iliz, oberiou Doue er bed, evit he veuli. Eun dever eo anaout torfejou bourrevien an Iliz, heritourien Judas ha Pons-Pilat. Furnez eo deski penaoz en em zifen ha difen ar vugale. Ar gazeten gristen eo hen desko deomp, evit he loden. Lennomp, paeomp, skignomp ar gazeten vad.

E daou c'her, setu dever ar c'hristen a skiant vad :

1° Morse kazeten fall pe neutr, na prenet na lennet gant den en ti !

2° Ato ar gazeten vad, prenet, lennet, skignet !

Pere ar c'hazetennou mad ?

E brezounek : *Kannad, Liziri Breuriez ar Feiz, Feiz ha Breiz, Courrier du Finistère.*

E gallek : *Progrès du Finistère, — Militant, — Résistance, — Nouvelliste, — la Croix*, hag oll skridou ti ar *Groaz*, — mar kirit c'hoaz la *Libre Parole*, le *Soleil*, hag aoualc'h eo pell zo.

23. ALIOU EUN TAD D'HE VUGALE

1. Al labous ne gav ket pounner he ziuaskell. Ar c'hristen a gav skanv an diou askell hen dibrad euz an douar d'he gas d'an Env, ne lavar gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

2. Pe ho skeud zo braz, pe hen zo bian, ne rit ket a van, pa 'z eo guir ne d-oc'h na brasoc'h na bianoc'h evitse. Pe an dud ho meulo, pe hi ho tispennno, arabad ober van : ne d-oc'h na guelloc'h na falloc'h evitse.

3. Ar pez ne goust netra, ne dal netra. Poaniit, mar kirit talvezout.

4. Sonjit euz ho nesa ar pez e karfac'h e sonjfe ho nesa ac'hanoc'h.

5. Plijout d'ar re all n'eo ket kerkouls ha servichout dezho.

6. Tenna hon alan zo eun dra red ; pardouni zo ken red all. Ne vever ket epdho.

7. O pet urz vad, hag o po amzer.

8. Baradoz an Env a zo ober bolontez an Ao. Doue : baradoz an douar ive.

9. O pet daou venveg a bep seurt. Ma torr unan, egile a labouro : morse ne golfot amzer.

10. Danvez zo mad. Lealded zo guelloc'h. Ar guella eo ar zan-telez.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist heritourien ar Barados :

PAEROUN

MAEROUNEZ

22 Ebr.	Marie-Françoise Potin, Kervéon,	François Cabon.	M.-Y. Perhirin.
25 —	Jeanne-Marie Magueur, Lanourien,	Jérôme Guéna.	Marie Provost.
15 Mae.	Marie-Joséphine Corolleur, Curullou,	J.-M. Corolleur.	M.-J. Le Guen.
20 —	Jeanne-Marie-F. Guéna, Kervisinic,	F. Guennégués.	M.-J. Uguen.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn, e goasked ar Groaz.

23 Ebr.	Yves Floe'h, 23 vloaz, Navant..
30 —	Anna Jaouen, 72 vloaz, bourk.

MIZ EVEN

7. Sul an dreinded. Kerkent a goulou deiz, oll henchou Landunvez, a vezo leun a dud, ar chapeled en ho dourn, ar beden pe ar c'hantikou var ho muzellou, o vont da Guerzent, da chapel an Introum Varia a vir sikour. Gouzout a reont eo, ar vamm-ze a garantez gal-louduz ha prest atao d'ho sikour.

Ar pedennou da 4 heur, goude an nao dro d'ar chapel, ar chapeled, ar brezegen, an offeren var dro 5 heur hanter, ar gommunion ha bennoz ar Zakramant. An offeren bred da 9 heur.

14. Sul ar Zakramant. Ar sizun zantel-ze a vezo adarre evidomp evel amzer bask. Bemdez e tevio a bep ti, unan pe zaou da govez ha d'an offeren a vezo da 6 heur. Ar Zalud a vezo da 7 heur hanter. Digaz ar vugaligou.

A zo pedet da ober ho hanter-heur adoration er zul-ze :

11 h. Gabriel Pérez, Kerc'hoézel ; Yves Gélébart, Kergastel ; Francoise-Marie Cloatre, Kervéon ; Jean-Louis Minguy, Poulloarn.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Yves Minguy, François Jézéquel, Bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Jean-Marie Sylvestre, Poulou-Pri ; Joseph Léostic, Jean-Louis Foll, Jean-Marie Cloatre, Langurru.

1 h. Jérôme Guéna, René Gorolleur, Troméneq ; Jean-Marie Allégot, Yves Taloc, Kerloeguen.

1 h. 1/2. Hervé Perhirin, Jean-Marie Colin, Penkéar ; François Coadou, François Kervran, Penfoul.

2 h. Oll dud ar barrez assamblez a vezo euruz da drugarekaat epad eun heur Jezuz o chom goutho var an Aoter.

21. Gouel ar Galoun Sakr. A zo pedet da ober eun hanter heur adoration er zul-ze :

10 h. 1/2. Marie-Jeanne Marzin, Bédiez ; Marie-Jeanne Bizien, Kelléron ; Joséphine Le Ven, Marie-Jeanne Forest, Kerguérioc.

11 h. Catherine Castel, Noémie Vaillant, Joséphine Godebert, Jeanne Floch, Bourk.


- 11 h. 1/2. Clémentine Allouer, Françoise Floch, Julie Pérès,
Françoise Bégoc, Bourk.
12 h. Ar skol gristen.
12 h. 1/2. Marie-Anne Guennégues, Kerchoézel ; Françoise
Pellen, Madeleine Jaouen, Jeanne Pellen, Kernézoc.
1 h. an dimezellet Eugénie Marziu, Lucie Brézel, Rosalie
Corolleur, Mathilde Kerjean, Marie Le Dall, Archantel.
1 h. 1/2. Oll dud ar barrez assemblez.

23. Gouel sant Yan Vadezour ha sant Alar.



Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, Imp. rue du Château, 4.



An testeni a zeskadurez pe certifiat d'études

Er bloaz ma, evel varlene, 6 deuz merc'hedigou ar skol gristen o deuz bet e Guitalmeze, d'an 12 a viz Even, ho certifiat d'études.

Setu ama ho hanoiou : Marie-Jeanne Le Borgne, Lanlouc'h ; Joséphine Guéna, Troméneq ; Euphrasie Maguerez, Arc'hantel ; Pauline Morvan, Bourk ; Gabrielle ha Marie-Renée Perchoc, Ker-véléoc.

Kement-se a ziskouez aked ar vugale-ze d'al labour hag ar boan a gemer gantho ho mestrezed.

Ho deuz bet c'hoaz ho certifiat euz Landunvez : Félicienne Brézel, Arc'hantel. Ouma e devoa troet kein 2 viz a ioa d'ar skol gristen, evit mont d'ar skol laik, hag euz skol ar baotred : Jean-François Magueur, Tour, hag Armand Perhirin, Arc'hantel.

BREZEL D'AN ODIVI

E parrez Landunvez e z'euz dija 200 e breuriez ar Groaz-Venn. A sur-oun, e vije kals muioc'h m'ar karfet sonjal a zrevi en drouk a-ra an odivi, an absinthe, ar rom, hag an oll boessoniu great gant alcool.

Tadou ha mammou, aon o peuz na c'hoarvesfe d'ho pugale beza taget gant eur c'hi klanv, pe gant ar group, pe c'hoaz da goéza en tan. Mez, daoust ha kaout a ra d'eoc'h n'euz danjer ebet o rei dezho puezoun da eva ?

Selaouit mad, o rei odivi d'ho pugale, e rit eun drouk braz d'ho c'horf ha d'ho Ene. Digeri a rit an or d'ar c'hlenvejou ha da techou direol.

Eun torfed a rit ive oc'h ober, oc'h-unan, goall-implij euz ar boessoniu krenv, abalamour mac'h ampouezounit evelse enn araok ho pugale. Bugale an den douget da eva, a reseo eur goad fall, hag a zo sur da veza taget gant bep seurt klenvejou ha ple-gou direiz.

Eun enklask a zo bet great var 215 famill dishenvel, douget da eva re, ha var dri rumm tud an eil varlerc'h egile, da lavaret eo var an tadou ha mammou, var ho bugale hag ho bugale vian ; setu ama ar peuz zo bet kavet :

- Torfetourien 14 dre gant
- O koueza en drouk sant..... 17 dre gant
- Troed ho spered..... 19 dre gant
- Sounet ho memprou..... 22 dre gant
- Bouessounerien 50 dre gant
- Klandivik 60 dre gant

Evelse-ta, kerent douget da eva re, ne lavarit ken : « Ne ran

gaou nemet ouz-hin va unan. » Lavaret an dra-ze, a zo lavaret eur gaou.

C'houi-ta, tud digaloun ha didruez, a laz ho pugale en eur ziframma digantho ho iec'hed, a vije bet krenv, anez ho tech miliget, hag ar peuz a zo goassoc'h c'hoaz, en eur rei dezho ioulou dereiz.

Koumprenit-ta pegen pouner e vezo ho pec'hed da heur ho maro.

PARDOUN SANT SAMSON

D'an trede sul a viz gouere, e tiblaso ar brosesion, da 2 heur, evit mont d'ar Chapel. Dalc'hit sonj, Landunvezis, oc'h bet oll ezvianik voestlet da sant Samson, ha ma zoc'h choumet diampéch krenv ha iac'h, eo abalamour ma zoc'h bet ruillet var he Aoter ha trempet e dour he feunteun gant ho mammou kristen.

Kendalc'hit da veza devot dezhan ha diskouezit ho karantez evithan, oc'h heuil he brosesion evit mont ha dont. Pa en em gavo ar brosesion e vezo beniget ar mor. Ra vezo ta eno an oll tud a denn ho bara euz an aod evit meska ho fedennou gant re an Iliz ha goulen ma vezint dre sikour sant Samson, ii hag ho hagou diouallet diouz peb drouk.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk er skol gristen, dre ho labour hag o zentedigez :

<p>Klas kenta.</p> <p>Kenta rummad.</p> <p>Eil rummad.</p> <p>Eil klas.</p> <p>Kenta rummad.</p> <p>Eil Rummad.</p>	<p>Euphrasie Maguerez. Marie Brénéol Germaine Drogou. Joséphine Conq. Françoise Roudaut. Marie-Jeanne Le Borgne. Gabrielle Perchoc. Pauline Morvan. Marie-Renée Perchoc.</p> <p>Marie Vaillant. Ernestine Guena Joséphine Le Borgne. Ros die Croguennec. Desirée Maruerez. Joséphine Lescop.</p> <p>Françoise Sylvestre. Marie Cozien. Augustine Talarmin. Marie Derrien Françoise Guen. Marie Jaouen. Marie-Anne Brénéol. Eulalie Cadour.</p> <p>Marie-Anne Le Borgne. Louise Héliez. Madeloïne Prigent. Marie-Yvonne Quéméneur.</p>	<p>Eil rummad.</p> <p>Trede klas.</p> <p>Kenta rummad.</p> <p>Eil rummad.</p>	<p>Jeanne Didou. Anna Querné. Anna Quivoron. Angélique Léostic.</p> <p>Philomène Magueur. Marie-Jeanne Hamon Françoise Héliez. Françoise Trébaol. Marie-Yvonne Allégot Noëlle Lesvenan. Jeannie Magueur. Joséphine Talarmin, Madeloïne Cadalen. Marie Cadalen. Marie-Yvonne Guéna. Elisa Luart. Bernardette Jaouen. Isabelle Guéna.</p> <p>Thérèse Cadalen. Léontine Michel. Louise Magueur. Perrine Kerros. Marie-Yvonne Perchoç. Ernestine Brénéol. Marie Magueur. Marthe Lesvenan. Marie Magueur.</p>
---	---	---	--

262
MIZ EVEN

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN :	MAEROUNEZ :
24 Mae. Julie Coadou, Penfoul,	Jean Coadou,	Julie Corolleur.
31 — Marie-Herveline Lenvec, Kervisinic,	Hervé Lenvec,	M.-H. Lannuzel
4 Even. Marie-Joséphine Trébaol, Ti-Pri,	Prig. Gourguen,	M.-J. Le Guen.
5 — Marie-Yvonne Corolleur, Kelleret,	J.-M. Corolleur,	M.-Y. Nicolas.
8 — Marie-Yvonne Guennégues, Kelléron,	Frang. Le Guen,	M. Guennégues.
14 — Eugène-François-M. Foll, Langurru,	Eugène Foll,	Frang. André.
3 — Kraouadur Cadalen, Kelléret, gourvadezet.		
13 — Kraouadur Le Guen, Arc'hantel, gourvadezet.		

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar verc'h, da c'headal deiz ar varn diveza, e goasket ar groaz :

26 Mae. Yves-Marie Le Guen, 77 vloaz, Trémazan.

MIZ GOUERE

Miz Goad presiuz Hor Zalver

3. *Guener kenta.* — Er gommunion e resevomp, gant korf Jezuz, he C'hoad beo, — ar Goad a ruillaz pa oue Jezuz sirkonsizet, pa c'huezaz goad er Jardin Olived, pa oue skourjezet, kurunet gant spern, krusifiet, pa oue toullet he Galon gant lans ar soudard Lonjin, — ar memes goad a c'hell goalc'hi an oll bec'hejou, hag a ro deomp nerz aoualc'h da drec'hi ioulou hor goad pec'her.

5. *Sul kenta.* — Gouel Goad Presiuz Hor Zalver, SOLANITE SANT PER HA SANT PAOL, ebestel. Goude beza gouzanvet a bep seurt hed ho buez, an daou Abostol a oue merzeriet e Rom, Sant Per krusifiet he benn d'an traon, S. Paol dibennet. Mes petra eo ar bloaveziou e skoaz an eternite ? petra eo poan ar bed-ma e skoaz euruzted an Env ? Kouraj, kristenien : ar baradoz a vo deomp.

12. *Eil sul.* — Oferen ha gousperou AR C'HUEC'HVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Sonjomp ervad e komsou an Introït : « An Ao. Doue eo nerz he bobl... Aotrou, saveteit ho pobl, ha ben-nigit ar re a zo deoc'h. Kasit ho pugale beteg ar c'hloar eternal. » Ha pedomp evit ma tevio Bro-Frans da gompren e rank distrei ouz Doue ma ne fell ket dezhi beza treac'het gant he enebourien, ma ne fell ket dezhi e kuezfe an eneou en tan eternal.

19. *Trede sul.* — Oferen ha gousperou AR SEIZVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Orezoun an oferan a c'houlenn digant Doue « ma pellaio diouzomp kement tra a rafe drouk deomp, ha ma roio deomp kement tra a rafe vad deomp ». Kaer on devezo, n'omp guest da ober netra, da gaout netra, da viret netra, nemet Doue a rafe evidomp : pedi kalounek eo ar brasa furnez.

26. *Sul diveza.* — Oferen ha gousperou SANTEZ ANNA, mam ar Verc'hez Vari, kenta patrounez Breiz. Kaera iliz Santez Anna e

263
Breiz eo Santez-Anna-Vened : kentoc'h Bretonned eleiz a iea di da bardouna, var ho zroad, ha divoutou zoken. En hon eskopti, Santez-Anna-ar-Palud, kurunet varlene, eo ar vrudetta dre ar grasou obtenet enni abaoe meur a gant vloaz, ha dre an niver a dud en em vod er pelerinaj, a reer d'an diveza sul a viz Eost. — Pedomp Patrounez Breiz evit hor bugaligou, hon tud nevez-dimezet, ar re goz, — evit ma vezo servichet he map-bihan Jezuz gant an oll Vretouned.

Itroun Varia Garmez (16 GOUERE)

hanvet c'hoaz Itroun Varia 'r Skapular

D'ar 16 a viz Gouere 1251, p'edo an deiz o c'houlou, sant Simon Stok, rener braz menac'h Karmez, a velaz an env o tigeri ha dirazhan ar Verc'hez Vari, ganthi var he divreac'h ar Mabik Jezuz. Ar Vam benniget a ioa ive en he dourn eur skapular ; ha gant eur vuzc'hoarz e lavaraz d'he servicher devot : « Nep a varvo gant ar viskamant-ma, me c'houzanvo biken tan an ifern ».

Dek vloaz ha tri-ugent ac'houdevez, e tiskleriaz d'ar Pab Jean XXII e vije tennet kenseurted ar Skapular euz tan ar purkator trum goude ho maro ha dreist-oll d'ar zadorn goude ho maro. Ar Pab Jean XXII, ha var he lerc'h ar Pabed Alexandre V, Clément VIII, Pi V, Grégor XIII ha Paol V o deuz diskleriet « e c'hell ar bobl kristen kredi e roio ar Verc'hez Santel skoazel goude ho maro, ha dreist-oll da zadorn, dervez konsakret dezhi gant an Iliz, da anaoun ar re a vo bet e breuriez Itroun-Varia Karmez, gant ma vezint eat euz ar bed-ma e stad a c'hras, m'o devezo hed ho buez douget ar Skapular ha miret ar jastete ervez ho stad, ha lavaret *Offiz bihan ar Verc'hez*, pe ma ne c'hellont ket hen lavaret, gant m'o do miret ar iun hag ar vijil ervez lezen an Iliz, ha m'o do dioueret ar c'hik da verc'her ha da zadorn, nemet da zeiz Nedelek. Nep a c'helfe ket lavaret *Offiz bihan ar Verc'hez*, pe dioueret ar c'hik da verc'her ha da zadorn, he gonfesour a c'hell rei dezhan eun dra benag all da ober, ha kaout a rai ar memes tra madou ha grasou ar Skapular du.

Skapular Itroun-Varia Karmez a zioual euz an *ifern* nep hen doug d'an heur euz he varo, ha tenna a ra oc'hpenn an anaoun euz ar purkator, gant ma vo great ar pez on euz diskleriet bremaik ervez an Iliz katolik.

Nag a hini goulskoude na zougont ket ar Skapular-ze, dre ne zontont ket ennan, dre fae avechou, ha siouaz dre vez ive alies !

Eaz eo da viana dougen Metalen ar Skapular, zoken kuzet er godel : ar pez zo mad dreist oll d'ar zoudardet ha martolodet, aliez gouapeat abalamour d'ho feiz.

Leun a fizianz e promessa ar Verc'hez, hor bugale a gustum, da zeiz ho fask kenta, en em gonsakri d'ar Verc'hez Vari, ha guiska he mantel pe skapular Karmez. Euruz ar c'hrouadur a gendalc'ho epad he vuez e karantez Rouanez ar Elez ! Euruz ar c'hristen a roi he huanad diveza, en eur starda var boul he galoun ar viskamant roet dezhan gant he Vam euz an env ! He varo a vezo maro eur zant.

TEODOU

Dioc'h an noz, e sioulder ho kampr, pe dirag an Tabernakl sklerijennet ken dous gant lampr ar c'heur, dalc'hit sonj euz kement lavar o peuz laosket hed an dervez. Klaskit en dra c'hellit euz piou oc'h euz komzet, gant piou, petra oc'h euz lavaret : ha grit ho kount.

Piou oc'h euz meulet ? Deuz pet oc'h euz drouk-prezeget ?

Bep pardaez, epad eur sizun, grit ar zell-ze en ho koustians. Marteze e vezoc'h souezet ha spountet o velet pegen niveruz e vo bet ho trouk-prezegennou, pegen aliez o pezo barnet ar re o deuz da velet varnoc'h, pet guech o pezo goapeat ho nesa adre he gein pe a-zirazhan, pet ger didalvez, pet kaoz skanv o vezo laosket. Mes, ep mar ebet, mantri a reoc'h o velet pegen rouez e vezo an dud meulet ganeoc'h, ha c'hoaz na pet tro eur veuleudi dister en devezo digoret an hent d'eur ger goapauz benag n'o pefe ket kredet lavaret var ehun, ken kalet oa.

Dre-ze, e komprenfet petra dal an teod. An hini ne offans ket an Ao. Doue gant he deod, hen-nez a zo eun den parfet.

An Ao. kardinal MERCIER, arc'heskop Malines (Beljik).

EVIT ENEOU AR ZOUDARDED

N'euz hini ebet ha ne ouezfe pegen divalo eo ar soniou a gan ar zoudardet o vale var an hentchou pe o tiskuiza er c'hazarn. An darn vrasa a zo enep ar vodesti, a zo udur. Darn all a vlasfem an Ao. Doue, ar relijion, ar Zent. Darn all a daol goaperez var ar veleien, var ar relijiuzed, var ar seurezed. En eur ger, ar, soniouze a vije kavet divez var muzellou tud gouez. Perag paotred badezet a gred ho c'hana ? Perag kristenien vad a rankfe ho c'hlevet ? Perag fougaserien sod ha morjined lous a c'hell deski an drouk da baotred kalounek a ro tri bloaz amzer d'ho bro, hag a vezo galvet, piou c'hoar, da skuill ho goad evit he difenn ? — Mad e vije d'an tadou a zo en Union katolik kas hiniennou da bedi mistri an arme da zifenn na ve kanet nemet traou en honor d'ar Vro, pe da nebeuta traou honest e pep rejimant.

Eun dra all a zo. En Naoned, pe kentoc'h e kichen an Naoned, e Doulon, emae o sevel eun hospital evit ar zoudarded. Eur petition a vezo da zina, hag a c'houlennno ma vezo galvet ar seurezed da entent eno ouz ar re glanv, ha ma c'hello ar belek mont bemdez da velet anezho. D'ar muntrer kondaonet d'ar maro, ato e vez kiniget ar belek araok he gas d'ar chaffod : eneo hor paotred a dal ene ar muntrer, michans, ha pa glanyont e servich ar vro, ar vro a dle rei dezho ar belek a c'hoantaont.

Ar Pab Var rollou ar Groaz-Ven

Hon Tad Santel ar Pab Pi Dek en devoa benniget kenseurted ar Groaz-Ven, en ho C'hongrès diveza e Rom. Evit diskuez

pebez istim e ra euz ho labour, en euz roet he hano d'an emgleo italian. « Pell zo ne evan ket a alcool, emezhan ; rei va hano a vezo ato rei skuer vad. »

Oc'hpenn, d'an 23 a viz Ebrel 1914, an Ao. kardinal Merry del Val en euz skrivet, euz he berz, eul lizer da rener braz an emgleo.

— « Ar Pab, emezhan, a bed an Aotrou Doue d'ho sikour er vrezel a rit d'ar walen spountuz — ar banneou — enebour d'ar c'horfou ha d'an eneo, hag a denn d'he heul kement a valeuriou... Hon Tad Santel a ro he vennoz da volonte vad an oll genseurted, ha pedi 'ra anezho da gendelc'her gant ho labour kalounek... Na pegen talvouduz eo diskuez d'an dud an drouk a ra ar banneou : disteraat ha koll ar iec'hed, ar skiant vad, ar goustians, al liberte ; skigna an dizurz er familhou dinerzet ha rivinet ; miret ouz madou kaera ar vro ! E guirionez, e touez an oll oberiou, n'ez euz hini nesesseroc'h... Mes, pa stourmit ouz an enebour-ze, dalc'hit sonj n'o pezo ar gounid nemet dre zikour gras Doue, a gavit er beden, er zakramanchou, er binijen kristen. Ra baro sklerijen an Aviel er sperejou hag er c'halonou, ha goalen an evach a dardo, gant kement drouk a denn d'he heul. »

Mennoz ar Pab eo eta ma ielo var gresk emgleoioù ar Groaz-Ven, ma vezo ar genseurted aketuz da heulia lezen an Aviel ha mad da zarempredi ar gommunion, ma vezo torret tech bilimuz ar vezventi. Kenseurted ar Groaz-Ven a ra bolontez ar Pab.

A zo pedet da ober ho hanter-heur adoration da 12, eil sul a viz gouere

10 h. 1/2. Job Minguy, Poullaouarn ; Jean-Marie Minguy ; Yves Bizien, Kellerson ; Auguste Le Borgne, Pourane.

11 h. An Aotrou Kuré, Alexis Salaun, François Jézéquel, François Ollivier, Bourk.

11 h. 1/2. Ar skol gristen :

12 h. An Aotrou Persoun, Jean-Marie Godebert, François Pelten, Kernézoc ; Joseph Foll, Langurru.

12 h. 1/2. Yves Le Ven, Claude Bossard, Hervé Magueur, Jean Cadalen, Kerhoazoc.

1 h. François Théréne, Yves Riouall, Joseph Mogueur, Jean Cadalen, Kerhoazoc.

1 h. 1/2. François Fourn, René Bervas, Jean-Marie Cadalen, Yves Richard, Sant-Samson.

Kannadik, Ebrel, Mae, Even, o deuz kouspet 83 lur

Bet evit sikour ho faea digant : H. P., 10 real ; J. M. Q. ; M. R. Q. ; L. C., A. B., V. U., peb a 8 real. F. M., F. P., J. B., M. J. K.,

F. B., J. S., F. J., A. T., J. A., J. M. R., G. L., J. G., peb a 4 real,
M. T., V. B., F. A., peb a 10 guennek.

Doze r'ho faeo.

Assurans. — Assurans ar c'hezek a ra mab kenan, 10 nevez a zo assuret e fin miz Even.




Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, Imp. rue du Château, 4.

KANNADIK

PARREZ

LANDUNVEZ



SANT GONVEL

PATRON BENNIGET

AR PARREZ

PEDIT EVIDOMP



BUGALE MARI

Dissul 12 a viz gouere, kaloun ar Verc'hez a dridaz a joa hag a skuillaz var barrez Landunvez grassou puill. 18 plac'h iaouank, evit gellout servicha guelloc'h ho mammeuz an Env hag en em harpa an eil eben, dre ar skouer vad, var hent riskluz ar vuez, a gemeraz Medalen ha ruban an aspirantezed. O pokat d'ho medalen, e lavarent a galoun o guerc'hez dinam, grit ma vezimp bepred sentuz ous kement a vezo gourc'hemennet d'comp gant Doue, pe an Iliz, pe hor c'herent kare, grit ma karimp bemdez muioc'h-mui ho map Jezus ha ma vezo hor joa hen lakaat, an aliessa ar guella, en hor c'halonou, dre ar gomunion santel.

Setu ama ho hanoiou.

Josèphe Arzel.	Marie-Yvonne Jollé.	Heodez Milln.
Marie-Yvonne Bossard.	Victoire Kerjean.	Marie-Jeanne Perhirin.
Joséphine Conq.	Anne-Marie Léostic.	Marie Pellen.
Josèphe Cloâtre.	Marie-Anne Magueur.	Annette Prigent.
Céline Le Dall.	Marie-Yvonne Marzin.	Marie-Anne Trébaol.
Anne-Marie Eliès.	Victoire Guiziou.	Marie-Anne Talarmin.

Goude-ze, 9 euz an aspirantezed a zouge ar vedalen bloaz a joa hag o devoa diskouezet dre ho furnez, oant din da veza lakeat evit atao e renk bugale Mari, a lennaz ho act a gonsekrasion hag a voa skrivet ho hanoiou var rollou ar gongregasion ha roet dezho leor ar reolen. Evit perseveri, hag anaout ho deveriou e rankint lenn aliez al leorik-ze ha beza bepred aketuz da zont d'ar reunion en dervez merket, en despet d'an ebatou a c'hélfe ho guervel el leac'h all. Ar genta ebad, evit bugale ar verc'hez eo : klevout komz euz vertuziou ho Mamm euz an Env ha kana he c'hantikou.

Setu ama hanoiou ar gongreganistezed nevez :

Marie Brénéol.	Louise Forest.	Michelte Kerjean.
Marie-Anne Le Borgne.	Philomène Guennégues.	Jeanne Pellen.
Marie-Anne Cadalen.	Louise Kerné.	Marie-Yvonne Richard.

GOUEL MARIA HANTER-EOST

En dervez-ze offeren vintin er Bourk da 6 heur. E Kerzent an offeren genta da 6 h. 1/2, an offeren bred da 9 h. 1/2, Rozera da 2 h., Gousperou du 2 h. 1/2.

Bugale ar skol gristen ha bugale Mari gantho ho medalen, a en em lakeio var diou renk evit sikour kana, an oll' barizioniz a heuillo ar brocession evit mont ha dont gant respet hag en eur bedi.

Ra ranko an estranjourien ken stang er dervez-ze e Kerzent, lavaret : Landunveziz a zo oll, tnd a feiz dispount hag a skouer vad.

Tud an anseignou, ne ankounac'haint ket ober evel ho zud koz, a

da govez ha da gommunia pa vezent er memez henoriou ; ar merc'hed iaouank a vezo guisket e guen evit ober plijadur d'ar Verc'hez ho mamm.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk er skol gristen, dre ho labour hag o ventedigez :

Kenta rummad.	Marie Brénéol. Euphrasie Maguerez. Françoise Roudaut. Germaine Drogou. Joséphine Conq. Madeleine Morel. Pauline Morvan.	Eil rummad.	Elisa Minguy. Marie-Yvonne Kerros. Marie Provost. Marie Gouzien.
Tredé rummad.	Augustine Talarmin. Françoise Guen. Marie Derrien. Josphine Aufret.	Eil rummad.	Thérèse Cadalen. Louise Magueur. Philomène Eliès. Marie Lescop Léontine Michel. Marie-Yvonne Perchoc. Marie Anne Bossard. Marie-Anne Conq. Josphine Gouzien. Jeanne Foll. Ernestine Brénéol. Pierre Le Borgne.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PARROUN :	MARROUNEZ :
2 Gouere.	René-Marie Jézéquel, Traon-Bras.	René Jézéquel Franc. Magueur.
5 —	Joséphine Talarmin, Kelleret.	Is. Talarmin. Marie Talarmin.
5 —	Augustine Talarmin, Kelleret.	Jos. Talarmin. Aug Vaillant.
9 —	Anna Conq, Traon.	Jean Conq. Anna Cong.
9 —	Marie-Renée Fourn, Poulcallac.	René Jollé. Marie Fourn.
		Magnificat.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

23 Even Yves-Marie Minguy, Poullouarn ha Marie Cloâtre, Kernézoc.
33 — Jean Guéguen, Kerc'hozel ha Josphé Minguy, Poullouarn.

Pater, Ave.

ENTERRAMANTHOU

A zo bellakeat e Iouar santel ar verc'h da c'helal dez ar varn e goasked ar Groaz :

14 Gouere. Laurent Léostic, 33 vloaz, Salou, Guitalmeze.
18 — Emérentine Kéromnès, 17 vloaz, Salou, Guitalmeze

De profundis.

Eat d'ar Baradoz. — 15 Gouere Krouadur François Perchoc, diou vinuten, Archenteñ.

2. Oferen ha gousperou an NAVED SUL goude ar Pantekost. — Jezuz a lenvaz var gear Jeruzalem, abalamour d'he fec'hejou. « Nag a vech e meuz kinniget ar zilvidigez deoc'h, emezhan, hag o peuz troet kein ! » Deomp-ni ive Jezuz a ginnig hor pardoun, gant m'on devezo keuz ha glac'har, kasouni evit ar pec'hed, bolontez stard da jom santel iviziken : arabad e vije hor c'halonou staget ouz ar pec'hed : karet a dleomp Doue dreist bep tra, Doue hor c'hrouer hag hor Zalver.

7. GUENER KENTA. Dont d'an oferan ha kommunia, evit digoll kaloun Jezuz euz ienien ha sakrilachou kement a gristenien, evit konversion ar bec'herien, evit silvidigez ar Frans. Sant Remi, eskop Reims, a lavaraz d'ar roue Klovis, kenta roue Frans : « Hor bro a zo choazet evit difenn gloar an Ao. Doue. Bep tro ma talc'ho d'he dever, an traou a brospéro enni. Bep tro ma vanko d'he dever, goaligner an Ao. Doue he c'hastizo. » Her gueler a reomp.

9. Oferan an DEKVED SUL goude ar Pantekost. « Aotrou, sellit ouzin a druez » a lavare ar publikan, en Aviel. Pedi a dleomp, da lavaret eo adori an Ao. Doue, he drugarekaat, goulenn pardoun ha grasou diganhan. Goulenn traou ar bed-ma a zo mad, gant ma livirimp ato e goelet hor c'halon : Bolontez Doue bezet great. Dreist oll, goulennomp santelezh evit hon ene, grasou evit an Iliz, evit hor c'hérent, hor superiozed, hor mignoned hag hon enebourien, evit an anaoun. — Gousperou sant Laurans, merzer.

14. Guener. IUN HA VIJIL, evit en em brepari da c'houel ar Verc'hez : ar binijen a gempen ar galon.

15. Sadorn. GOUEL VARI HANTER EOST, gouel berz ; red eo dont d'an ofisou evel bep sul. — Ar Verc'hez a rankaz mervel, evel an oll dud, evel Jezuz he-unan. Mes he c'horf pur, bet tabernakl Map Doue en em c'hreat den, ne jomaz ket da vreina er bez. An Elez hen dougaz, resusitet, beteg an tron tosta da Zoue er baradoz ; hag abaoue Mari a veill varnomp, korf hag ene, gant karantez ha galloud mam eun Doue. — Ar brosesion a vez great evit seveni véu ar roue Louis Trizek (1640) a gonsakraz ar Frans d'ar Verc'hez.

16. Sul. Oferan ha gousperou SANT JOACHIM, tad ar Verc'hez. An tadou famill a c'hell deski gant S. Joachim penaoz sevel ho bugale, en eur rei kelennadurez ha skuer vad dezho ; ar yugale a c'hell deski digant Mari penaoz senti ouz ho zud, karet hag henori anezho.

23. Oferan an DAOUZKVED SUL goude ar Pantekost. « Karet a reoc'h an Aotrou ho Toue euz a greiz ho kalon, gant oc'h oll nerz, oc'h oll ene. » Setu gourc'hemen an Aviel. M'her grit, sonjit « hen-nez a zai d'ar baradoz, hag a ra bolontez an Tad a zo en Env. » Ma n'her grit ket, sonjit « peb guezen ha ne zougo ket a frouez vad, a vezo trouc'het ha taolet en tan. » — Gousperou sant Barthelemy, abostol.

30. Oferan ha gousperou an TRIZEKVED SUL goude ar Pantekost. « Jezuz hor mestr, o pez truez ouzomp » a lavare an dek den lor o c'houlen pareans. Hano Jezuz a zififi *Salver*, hano kemennet da Vari gant an arc'heal Gabriel : « Ho map a vezo nanvet Jezuz ganeoc'h » ; hano gourc'hemenet gant S. Gabriel da zant Joseph : « He henvel a reoc'h Jezuz, abalamour hen eo hag

a denno he bobl euz he fec'hejou. » Hon tenna euz ar pec'hed a goustaz ker da Jezuz ; pa en deuz bet truez ouzomp, bezomp truez outhan !...

ITROUN VARIA HANTER-EOST

Petra eo Gouel Maria Hanter-Eost ?
Gouel ar Verc'hez douget d'ar Baradoz, korf hag ene, gant an Elez.

Pe da vare oue douget ar Verc'hez d'ar Baradoz ?
Tri devez goude he maro.

Perag e livirit-hu oue douget d'ar Baradoz ?
Abalamour ar Verc'hez ne zavaz ket euz ar bez dre he galloud he-unan, evel Jezuz. Doue, dre eur burzud ar c'haera, a rentaz dezhi ar vuez, hag a gasaz an Elez d'he c'herc'hat ha d'he dougen d'ar Baradoz.

Penez oue anavezet ar mirakl-ma ?
Setu ama. An Ebestel en em gavaz asamblez e kichen ar Verc'hez epad m'edo var he zremenvan. Sant Thomaz ebken ne oa ket heno. Erruout a reaz tri devez goude ; c'hoantaat a reaz guelet, eur vech c'hoaz, korf santel ar Verc'hez benniget.

Ha petra c'hoarvezaz ?
An Ebestel a asantaz digeri ar bez. Mez, tra zouezuz ! ne oue kavet ennan nemed al linseriou hag ar bokedou a c'huez-vad lakeat gant ar c'horf pa oue sebeliet.

Petra zonzaz an Ebestel ?
Ne ouient petra da zonzal. Evelato ho douetanz ne badaz ket pell. Klevet a rajont an Elez o kana meuleudi da Vari savet a varo da veo. Oc'hpenn-ze Doue he-unan a roaz dezho da anaout ez oa savet ar Verc'hez en Env korf hag ene.

Perag e oue douget ar Verc'hez d'ar Baradoz korf hag ene ?
Evit tri dra. Da genta, evit enori en Env an hini oa bet var an douar ar pura euz ar grouadurien. D'an eil, evit lakaat en he renk Rouanez an Env hag an douar. D'an trede, dre ma ne felle ket d'Hor Zalver e vije chomet korf he Vam da vreina.

Petra eo ar gouel-ma evidomp ?
Eur gouel eo euz ar c'haera. Digas a ra deomp da zonz or beuz eur Vam er baradoz o pedi evidomp. Deski a ra deomp, oc'hpenn, ema hor plas e kichen hor mam, da lavaret eo omp galvet oll da veza sent ha sentezed, ha dre-ze da veva e doujans Doue hag en he garantez.

IT BETEG PENN...

Ma 'z eo guir ez eo Mab Doue en em c'hreat den evit hor prena ;

Ma 'z eo guir ez eo falvezet dezhan, goude he varo hag he resurreksion, kendelc'her da jom en hon touez var an douar ;

Ma 'z eo guir ema e tabernakl hon ilizou, hag ec'h en em ginik evidomp, bep mintin, epad sakrifis an oferan ;

Ma 'z eo guir e tisken en hor c'halonou dre ar gommunion, hag e skuill varnomp he c'hrasou, bep tro m'He resevomp gant eur galoun dibec'h, hag eur guir volonteiz vad ;

Ma 'z eo guir da ziveza, n'eo kristen mad, kristen evel ma tle beza, nemed an hini a gred an oll guirioneziou-se, hag a c'houarn he vuez penn-da-benn ervez he greden ;

Daoust ha n'o peuz ket an dever da drei ho spered hag ho kaloun varzu Sakramant an Aoter, magadurez hag eienen a vuez evit oc'h ene ?

Daoust ha n'o peuz ket an dever da vont aliez da velet Hor Zalver en he Dabernakl, pe guir ema eno o chom, noz-deiz, ha ne skuiz morse o lavaret deoc'h ato ar memes komz, evel guechall d'he genvroiz : « Deuit davedon-me, c'hui oll a zo poaniet ha glac'haret, ha Me ho kennerzo ! »

Daoust ha n'o peuz ket an dever, da viana ma 'z oc'h tost d'an iliz, da vont d'an oferen, memes var ar zizun, ha zoken ma rankit en em zieza eun tammik ?

Daoust ha n'o peuz ket an dever da zont, var goulenn Hon Tad santel ar Pab, da reseo Jezuz-Krist dre ar gommunion, gant eur galoun dibec'h hag eur guir volonteiz vad, ken aliez ha ma c'helloc'h dont d'an oferen ? Evelse eo e teuimp, evel ma c'houzomp, d'en em unani muioc'h-mui gant Han, ha da denna niverusoc'h varnomp grasou he Sakrifis.

Kristenien ar barrez-ma, sonjit mad er guirioneziou hag en deveriou-se. Ha ra blijjo d'ar Verchez gloriuz Vari, a zo bet ar genta oc'h adori Jezuz-Krist, ho sklerijenna evit ma teuoc'h muioc'h-mui, en amzer da zont, d'Her guelet, d'Her pedi, ha d'Her reseo, *el leac'h m'ema, en he Zakramant !*

LENN BUEZ AR ZENT

Lenn Buez ar Zent a zo beva an ene.

An historiou all, ha pa ne vije drouk ebed ennho, ne reont nemet digeri ar spered, deski traou nevez dezhan, pe diveraat an amzer epken. Dreizho ho-unan, ne zellont ket, an oll, ouz ar vuez guirion, buez an ene, ar zantelez.

Buez ar Zent a gresk ennomp ar vuez divin. Diskuez a ra deomp petra o deuz gelllet evit plijout da Zoue goazed, merc'hed ha bugale. Diskuez a ra ho labouriou, ho foaniou, hag ive ho gloar, ho miraklou, ho levenez. Bez int bet tud henvel ouzomp, tud tentet eveldeomp, ha skoaziet gant Doue eveldeomp, ho skueriou mad a ro kaloun deomp. « Ar pez o deuz great kement a gristenien en hon raok, perag n'her grafemp ket ive ? »

Lenn Buez ar Zent a zav huel hor spered.

Dreizhi ec'h anavezomp oberiou an Iliz hor mam, ha re ar Zent hor breudeur.

Henori a reomp tud a zo, abalamour ho zudou koz a reaz guechall labouriou souezuz, pe a drec'haz enebourien. Fouge zo ennomp o veza Fransizien ha Bretouned, dre ma oue hon tadou brudet dre bevar c'horn ar bed. E Buez ar Zent, e teskimp ez eo famill ar gristenien ar c'halouneka zo bet biskoaz : beza kristenien a vezo hor brasa henor.

Bugale d'ar Zent, komprenomp ez eo hon dever beva evelde ; Doue ra viro n'o defe da ruzia abalamour deomp.

Evel ma chom ar venanen var ar bleun evit tenna anezho ar pez a vezo ar mel dudiuz, evelse chomomp bep noz da zaouri bleuniou Buez ar Zent ; tennomp anezho ha dalc'homp mad ar zonjezonou devot, ar skueriou talvouduz, a vezo magadurez santel hor sperejou hag hor c'halonou.

EUR BINIJEN

Eneou santel a zo bet, a gustume ober a vianik pinijennou kalet. N'edoun ket goest da ober eveldeho. Neuze ne rean nemet an traouigou-ma : terri va bolontez va-unan, delc'her adre va muzellou eur respout rok pe goapauz dare da nijal kuit, rei eun taolik skoaz da va nesa ep beza guelet, mil tra vian en doare-ze : setu aze va finijen.

Soeur THÉRÈSE de l'Enfant Jésus.

A zo pedet da ober ho anter-heur adorasion da eil sul a viz east

10 h. 1/2. François Arzel, Charles Héliès, Hellen, Jean-Marie Pellen, Jean Cornén, Kerzent.

11 h. An Aotrou persoun, Guillaume Lescop, Yves Floc'h, François Jézéquel, Bourk.

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. Jacques Foll, Langurru, Jean-Marie Sylvestre, Poullou-pri, Jean Squiban, Jean-Marie Conq, Kernézoc.

12 h. 1/2. Jean Taloc, Guillaume Riouall, Vincent Le Borgne, Jean-Louis Théréné, Kerc'hoazoc.

1 h. Pierre Trébaol, Troméneq, Yves Le Ven, François-Marie Trébaol, Jacques Forest, Kerguérioc.


1 h. 1/2. Yves Magueur, Bar-al-Lan, Bon Magueur, Yves Le Ven, Sant-Samson, Jean-Marie Hamon, Kerc'hoazoc.

Kannadik miz gouere, en d'euz koustet 18 lur pemp gwennek

Bep evit sikour he baea, digant : J. C., P. T., J. M. C., T. P., peb a 8 real ; F. T., R. J., M. B., peb 4 real ; R. T., J. D., V. M., J. M. K., M. F., peb a 12 guennek, C. G., 12 guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



GOUEL SANTEZ ANNA

Ar zul, 26 a viz guengolo, a zo bet, evit parrez Landunvez, eun dervez talvouduz evit mad an Eneou. Gouel Santez Anna, great gant al lidou ar re gaera, a lavaras, d'ar mammou kristen, ho tever brassa eo ober sent euz ho pugale. Evit-se, savit anezo evel ma savas Santez Anna he merc'h ar Verc'hez Vari. Deskit dezho abred ho c'hatekismou, lakait anezho er skol gristen, ha lavarit dezho e rankont ober, araok pep tra, an oberou o c'hasso d'ar Baradoz.

Er zul-ze ive, goude an offeren bred, evit unani pedennou ar barrez, gant re, ar c'hant mil den, bodet e Lourd euz a bevar c'horn ar bed, evit deski guelloc'h an eil gant egile, penaoz diskouez karantez da Jezuz, o chom, goude ar gorreou, dindan furm eun tamik bara, oa bet eur brosesion dispar en honor d'ar Zakramant. Kalz euz ar barrisioniz a ioa bet d'ar guener ha d'ar zadorn en offeren ar Sakramant hag o koinmunia. D'ar zul vintin 400 all, a deuz da zaoulina euz n daol zantel. Lavaret a c'hellet ta, heb fazi, penaoz ar 1.000 den, a heuille Jezuz douget, epad ar brosesion, etre daouarn ar beleg, dindan an dé, Hen douge dija en ho c'halonou, dre ar gommunion.

Ar gristenien vad, n'oant ket eat, en dervez-ze, d'an offeren d'ar parreziou all. Ho meuleudi a rankent da rei hag ho c'harantez a rankent da ziskouez da Jezuz a jom gantho, dre vadelez, e tabernakl ho Iliz parrez, evit selaou atao ho fedennou, servichout da vagadures d'ho Eneou, dre ar gommunion hag en em ginnig e sakrifiz da Zoue he Dad, dre an offeren santel.

Er zul-ze, c'hoaz, goude gousperou, e voa great gouel ar priziou, er skol gristen. Araok ar priziou, e zeuz bet evel kustum, peziou c'hoari ha kanaouennou euz ar re goanta, a roaz joa d'an oll. En desped d'ar glao, an oll a selaoue gant plijadur. Mez ive, eun dudi oa, klevet ar merc'hedigou o tistaga gant gallek iac'h ar c'homzou o devoa da lavaret er pezh c'hoari. Ar c'hoarz hag ar sklaskl daouarn, a ziskoueze d'ezho, pegement e plije ho c'homzou hag o c'hanaouennou.

Eur bennoz hir deuz ar douar beteg an Env, d'an oll dud, a volontez vad, a deuz d'ar priziou ha da ziskouez d'ar mestrezed kristen, oant koutant deuz al labour a reont e Landunvez; bennoz dreist oll, d'an Aotrou Mear, da gonsel an Iliz ha da gonsel ti-kear. Muioc'h e teu ar skouer vad, a huel, muioc'h a vad, a ra.

AR BREZEL

Pa lennor ar pennad skrid-ma, kalz daelou a vezo bet dija skuillet, hag eun anken bouner en devezo poezet var ar spered. Mez, an oll, goulskoude, o devezo nerz kaloun aoualc'h, evit stourmouz ar Brusianed, o deuz diskleriet ar brezel d'hor bro garet, heb rezoun vad ebed. Ar goazed krenv; iac'h hag en oad merket, o

deuz d'ar galv kenta, dilezet pep tra, evit diffen ho bro, ho zra, ho buez.

Guel eo, emezo, mervel o vrezellekaat, eget chom, an divreac'h kroac'het, da zellet rivina ar vro, distruja hon tiegeziou. Araok kimiada deuz ho zud ken karet, o deuz lakeat Doue en ho c'haloun dre eur gommunion vad, a neuze, etre daouarn Doue, o deuz lavaret: he volontez santel ra vezo great. Gouzout a reant penaoz ma vez malloz Doue, var ar re o deuz digoret ar brezel heb lealded, e vezo ive he vennoz ar re, ne ziffennont nemed ho guir.

Brema ar re a gant ar re a jom er gear, evel ar merc'hed, an dud re iaouank pe re goz, pe glanv, o deuz ive deveriou da ober: pedi hag en em sikour da ober an eost hag al labourou a deu varlerc'h. E Landunvez, euz koumprenet-ze, hag eun dudi eo, evit kaloun Jezuz, gouelet euz bar an Env, an tiegeziou oc'h en em sikour, evit ho labourou.

Sikour a rear ive dre ar beden ar soudarded pe vartoloded a zo hirio pell deuz ar gear, pe marteze, var dachen an emgan.

Bep zul, evez leun an Iliz evit an offerennou, ar gousperou, hag ar pedennou great evit goulenn ar peoc'h. Evit beza guelloc'h selaouet gant Doue pa vezo he Vap en ho c'haloun, lod a gommuni bemdez hag eun niver bras da zul.

Da hantez-eost, Landunvezis, o zo deuet e prosesion, da chapel an Introun Varia a vir sikour a Gersent, da c'houlenn he skoazel epad ar stourmad, a goude beza klevet eur brezegen euz ar re gaera, great gant an Aotrou Colin, bet rejant e skolaj Lesneven, var ar fizians a c'heller da gaout e rouanez an Env hag an douar, e rajont al le, da viret penn-da-benn, lezen ar zul, o chom heb labourat hag o vont d'an offeren ha d'ar gousperou. Hag hiviziken, eleac'h ober deuz pardonniou ho zant Patroun, a en em gavo er bloavez-ma da 20 ha d'ar 27 a viz guengolo, derveziou a ebad, a vesventi, evel e meur a leac'h, o zremenint o pedi, o kana meuleudiou sant Gonvel, hag oc'h ober anezho, en guirionez, eun dervez a bardoun dre eur govesion vad hag eur gommunion zantel.

Ha brema, Itroun Varia a vir sikour, patrounez karet, tud Landunvez, pedit evitho ha dioualit deuz pep drouk ho soudarded hag ho martoloded, beniget ive ar Frans ha bizit evithi an Introun Varia ar gounid.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Barados:

		<i>Paeroun:</i>	<i>Maerounez:</i>
20	Gouere Eugene-Marie Morel, Bourk.	Fr. Jézéquel.	Eugénie Morel.
30	— Marie-Yvonne Léostic, Kerzent.	J.-M. Coadou.	A. Léostic.
9	East. Marie-Joséphine Cornen, Kerzent.	Franc. Calvez.	J. Guennégues.
12	— Yves-Marie-Jos. Cong, St Gonvarc'h.	J.-M. Cong.	Jos. Le Ven.
15	— Hervé Joseph Pérès, Kerc'hoézel.	H. Guennégues	M.-J. Tanguy.
19	— Désirée-Marie Perchoc, Lanhallès.	Guil. Perchoc.	Jos. Lescop.

O deuz resevet lidou diveza sakramant ar vadiziant

		<i>Paeroun:</i>	<i>Maerounez:</i>
28	Gouere. Pierre-Georges Todd, Kerzent.	Pierre Le Roy.	Gab. Le Roy.
28	— Colette-Marthe Le Roy, Kerzent.	Gorges Todd.	M. Richer.
10	East. Anne-Alberte-M. Marzin, Arc'hantel.	H. Marzin.	A. Briat.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'hadal deiz ar varn, o goasked ar Groaz
 26 Gouere. Marie-Yvonne Prigent, 83 bloaz, Troméneq.
 6 East. Louis Le Dall, 49 bloaz, Arc'hantel.

A zo bet pedet da ober eun anter-heur adoration d'ar zul 13 a viz Guengolo

10 h. 1/2. Clementine Allouer, Jeanne Floc'h, Soaz Cadalen, Jeanne Le Hir, Bourk.

11 h. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean Gennéguès, François Jézéquel, Bourk.

11 h. 1/2. Josèphe Nédélec, Marie-Yvonne Lescop, Françoise Floc'h, Anna Squiban, Bourk.

12 h. Philomène Coat, Claire Coat, Elisa Pérès, Philomène Cloatre, bourk.

12 h. 1/2. Josèphe Magueur, Françoise Guéna, Aline Trebaol, Troménec, Joséphine Godebert, Bourk.

1 h. Marie-Renée Fourn, Poullou-Pri, Philomène Cloatre, Marie Squiban, Marie-Jeanne Cloatre, Langurru.

1 h. 1/2. Joséphine Kervran, Marie Magueur, Penkéar, Marie Cabon, Marie-Yvonne Guennéguès, Kelléron.

Bep evit sikour he baea digant : M. J. J., D. E. F. P., pep a 8 real, digant : T. D., M. L., J. F., A. M. T., pep a 4 real ; digant : J. M. L., A. P., pep a 12 guennek.

Doue r'ho faeo.

MIZ GUENGOLO

4. GUENER KENTA. Kinnig da Galoun Jezuz eur gommunion a zigoll abalamour d'ar pec'hejou great epad an eost. Jezuz eo Mestr ar bed, mestr an douar ha mestr an amzer : nag a vech eo bet implijet fall an amzer ha madou an douar ! Jezuz eo ar Bara diskennet euz an Env : na pet o deuz blasfemet anezhan ! na pet o deuz troet kein d'an oferen, d'an ofisou, d'ar gommunion, epad ma tastument ar guiniz a vezo hor bara !

6. Oferen ha gousperou ar PEVARZEK SUL goude ar Pante-kost. « Arabad kemeret re a zoursi gant traou ar bed-ma », eme Jezuz en Aviel. Dreist oll arabad en em rei d'ar c'hoantegeziou fall, d'an ebatou dizhonest, d'ar gasouni, d'ar guarizi, etc.

8. Meurs. GINIVELEZ AR VERC'HEZ GLORIUZ Vari. Ofisou evel bep sul. Trugarekaat an Ao. Doue da veza roet d'an dud an hini a dlie beza Mam Salver ar bed. Meulomp Mari, konsevet ha ganet dibec'h, rouanez an oll grouadurien, santeloc'h, kaeroc'h ha madelezusoc'h eget an oll sent hag elez. Pedomp sant Joachim ha Santez-Anna, tad ha mam ar Verc'hez, a bedaz gant kement a fizians hag humilite ma oue roet dezhi, en ho c'hozni, eur verc'h ken dispar.

13. Oferen ar PEMZEK SUL goude ar Pantekost : Jezuz o resusita map eun intanvez, e kear Naïm, e kreiz an enterramant. Eur ger a oue aoualc'h : « Paotr, sao. » hag e savaz beo euz he arched. Eun dervez, peb hini ac'hanomp a resusito. Pehini ger a glevimp euz muzellou Jezuz ? « Deuit, c'hui, benniget gant va Zad » pe « Kit d'an tan eternal, tud milliget ? » Dioc'h hor buez e vezo hor maro hag hon eternite. — Gousperou ar GROAZ SANTEL savet.

16-18-19, merc'her-guener-sadorn. IUN HA VIJIL AR PEVARE AMZER. Dre ar binijen e netaomp hon eneo deuz pec'hejou an hanv, hag e tennomp bennoz Doue var an diskar-amzer.

20. Oferen SEIZ GLAC'HAR AR VERC'HEZ. Mari, rouanez ar verzerien, a zo bet er boan e doug he buez, abalamour da zikour Jezuz d'hor zavetei. He brasa ankeniou a oue : 1° klevet Simeon o lavaret dezhi e vije treuzet he c'halon gant eur c'hleze a c'hla-c'hlar ; 2° tec'het d'an Ejipt ; 3° koll Jezuz en Templ ; 4° gullet Jezuz o tougen he groaz ; 5° Chom e tal ar groaz ; 6° digemeret korf Jezuz maro, etre he divreac'h ; 7° lakaat Jezuz er bez. Arabad nevezi he foaniou dre hor pec'hejou. — Gousperou sant Vaze, abostol.

27. Oferen ha gousperou ar SEITEKVED SUL goude ar Pantekost — « N'o pezo ken Doue nemedon... Adori a reoc'h ho Toue a greiz ho kalon » (Aviel) An dever-se a reomp dre ar feiz, an esperans, ar garantez, ar relijion, en eur dec'het dioc'h ar pec'hed. Evit gouzout mad petra da ober, petra da gasaat, lenn bep sul eur gentel euz ar c'hatekiz.

Ekleo diveza Kongrès Lourd

D'ar zul 26 Gouere, en eur echui Kongrès ar Zakramant e Lourd dirag 10 kardinal, 200 eskop, 10 mil belek, ha 100 mil den a bep bro, an ao. kardinal Granito del Belmonte, kannad ar Pab, a gemennaz d'an oll karet muioc'h-mui Jezuz en Hosti Sakr.

Oc'hpenn, emezhan, tadou ha mammou, digasit ho pugale da reseo ho Doue er gommunion, an abretta ar guella. Jezuz karantezuz a zalc'ho ho c'halounou dibec'h ha glan. Ha sonjit mad, ma teu ho krouadur da zebri, ha pa ve bemdez, Bara an Elez hag a raio nerz d'he ene, eun dever ken striz all en deuz da zeski he gategiz : ha deoc'hui eo beilla var ar poent-se. Deski a rai guirioneziou hor relijion, ar gourc'hemennou kristen a dle beza reolen he vuez hag a raio dezhan beza kristen en he zonjou, en he gomsou, en he oberou.

C'hui, beleien ken niveruz ama, distroit d'ho parrezioù, devotoc'h c'hoaz d'ar Zakramant. Ervez lezen Pi Dek, poaniit da zigas oc'h oll parrisioniz d'ar gommunion pemdeziek ; prezegit, aliit ; erder ho karantez a dle trec'hi ar skuizder. Digasit eharz an Tabernakl, ken dilezet re alies, eneo eleiz a gonsolo Jezuz dre ho bizitou pemdeziek : Jezuz a c'hed anezho noz ha deiz. Ha peguir ar Zakramant a deuz deomp euz kalon Hor Zalver, bezit ebestel an devosion d'ar Galon Zakr. Savit pe adzavit Breuzieziou ar Zakramant, konsortiaj ar Galoun-Zakr ; kreskit ha tommit anezho ; digasit dreizho ar gristenien d'an Daol-Zantel. Ra vezint eien eur vuez kristen, santel, a redo dre an oll oberiou all, oberiou a garantez a lakaio ar peoc'h da ren erfin er bed.

Ha goulennomp digant Mari, ar Gonsepsion dibec'h, ma venigo ha ma kinnigo d'he Mab Jezuz hor pedennou hag hor meuleudiou. Respetomp anezhi evel mam hor Roue, karomp anezhi evel hor Mam.

Setu komsou lavaret aberz hon Tad Santel ar Pab : boaza ar vugale da gommunia a-vianik hag aliez, — dont bemdez da gommunia ha da vizita ar Zakramant, m'her geller, da viana bep sul, en em zantifia dre ar gommunion, trei an oll oberiou katolik da

garantez Jezuz beo en Tabernakl, hag evit seveni an oll mennoziouze, skigna an devosion d'ar Verc'hez Vari.

Evelse bezet great en hor parrez, da viana !

KORN AR ZOUDARDED

Soudarded Napoleon Bonapart a ieaz ganthan da Vro-Ejipt da vrezellekaat, var dro ar bloaz 1800. Meur a hini a oue prizouniet gant an Turked, ha n'euz ket pell eo bet kavet an toul tenval e leac'h m'oa bet kraouiet pemp den iaouank euz eur bro : ho relegou a ioa ebarz abaoue. Kinniget oa bet dezho buez ha liberte, gant mac'h asantfent nac'h Jezuz-Krist. Ar pemp a refuzaz. Pep hini anezho a oue evel siellet ez-veo etre mogerious striz, ne veze roet tamm boued ebet dezho. Bep an amzer, an Turked a c'halve anezho : « Ha nac'h a reoc'h ho Toue ? » Ar pemp a zalc'he mad. « Bara o pezo mac'h asantit ! » — Ger ebed. « Delivret ha paet mad e viot ! » — « Biken ! Kristenien omp. Da Jezuz-Krist e jomimp. Kentoc'h mervel eget trei kein dezhan ! » — Hag ar pemp a varvaz gant an naoun, evit ho feiz.

Ma fell deoc'h beza soudarded kalounek evel ar re-ze, brema epad ar vrezel, na grenit ket dirag kamaladed ne dalont ket hirroc'h egedoc'h — ar c'hontrol eo — ha sonjit er c'homsou a lavare er miz tremenet ar soudard Bertier, eur Paris, « Tri zra a zalc'h ac'hanon stard : va fedennou mintin ha noz, lavaret e kichen va gule var bennou va daoulin ; an oferen klevet bep sul, petra benag e rankan c'hoari chench-dijench gant va dillad ; ar gommunion resevet an aliesi ma c'hellan. »

Ha c'hui, kerent, taolit evez ma-z aio ho pugale da gaout eur belek-soudard pe an aomonier ; hen eo a dle delc'her ho plas en ho c'hichen.

EVIT MA PROSPERO AN TRAOU GANEOC'H

— « Pa ne ouzoun ket mui petra d'ober evit paraa va c'hlan-vourien, a lavare an ao. medisin Récamier, e kustuman teuler eun *Ave Maria* varzu va Mam oll c'halloudek. Meur a dro, sklerijen nevez a deuaz d'in goude va feden, hag e saveteiz va den. »

D'an ao medisin Lucas-Championnière, eun den difeiz a roe meuleudiou : — « Eur souez eo e c'helfac'h paraa kement a dud operet ganeoc'h ! Na c'hui a zo dournet mad ! » Ar medisin kristen a respountaz kerkent : « Dournet mad pe nan, ne ouzoun ket. Mes ar pez a ouzoun eo na meuz morse plantet va c'hanivet en eur c'horf da operi ep beza lavaret, da genta, eur Bater hag eun Ave ! »

Mad eo, ha red eo, lavaret hor pater mintin ha noz. Hed an deiz, pa grogomp en eun tam labour, sonjomp e Doue hag er Verc'hez. Sin ar groaz varnomp, var hor c'horf braz pe var hor c'halloun epken, — eur bedennik ver, — pe eun Ave, eur Bater, — ha bennoz Jezuz ha Mari a rai d'hon labour talvezout kalz muioc'h, ha d'hon traou prosperi.

TORFEJOU BUGALE

En eur gazeten vraz, an ao. Henri Robert, prezidant alvokaded Paris, a skriva e miz Du diveza : « E 1907, 23 mil den iaouank a oue barnet e Frans ; e 1908, 28 mil : an darn vrasa o doa etre 16 ha 18 vloaz. E 1907, var mil muntrer, 10 o deuz 16 vloaz, 150 etre 16 hag 20 vloaz. Var 5 muntrer, unan zo krouadur koulz lavaret..

Perag kementse ?

Ar famillou n'int ket unanet evel guechall, an dud divar ar meaz a deu re er c'heariou ; oc'hpenn, an heuriao, kazetennou, imachou mezuz ; ar Cinema o tiskuez torfejou ; dreist oll, ar skoliou dizoue. »

An ao. Descaves, skrivanier difeiz, a lavar : « Ne ouezer ket mui dre be benn kemeret ar vuntreien iaouank-se ! Ho zadou ha mammou o deuz kilet dirazho : penaoz ar mestr-skol, penaoz ho mestr-labour a c'helfe ho lakaat da blega ? Bep lun, en eizved lezvarn Paris, tri ugent paotr iaouank a vez kondaonet, ha meur a hini a vez laosket da vale. Ar virionez a ranker da lavaret : al lezen dizoue n'eo ket eul lezen da goustians ar vugale. »

Tadou ha mammou, dizale e vo poent kas ho pugale d'ar skol adarre : arabad eo deoc'h ankounac'haat pe nac'h ho tever. Ar skol gristen, araok bep tra, pa c'heller. Ma ranker mont d'ar skol laik, n'eo permettet morse lezel heuriao fall etre daouarn ar vugale, ha red eo ato evesaat ouz ar c'homsou a zibun ar mestr pe ar vestrez, gant aoun na teufent da drompla ha da zigristena ar re vian.

N'eo ket evit ober tud daonet anezho, m'oar vad, int ganet ganeoc'h.

MAM EUN NIJER


An oll a anavez hano ar Breizad kalounek, Brindejone des Moulinais, hag en deuz bet ar groaz a henor araok he ugent vloaz evit ar c'hloar a roaz d'he vro dre he veachou spountuz en ear, a-uz da vroio an Europ ha d'ar moriou. Setu ama eul loden euz lizer he vam d'eur skrivanier.

— Oh ! emezhi, me gav d'in n'eo ket achu c'hoaz an amzer pa zalc'hen ar c'hrouadurik ker etre va divreac'h, pa vagen anezhan gant va leaz (rag an eurvad-se e meuz bet). Aliez e save anezhan azioc'h va fenn, huela ma c'hellen, hag hen a c'hoarze goalc'h he galounik. Hag epad ma talc'hen anezhan huel, e leveren goestad ennon va-unan : « Va Doue, setu ar c'hrouadur o peuz roet d'in. Grit anezhan ar pez a geroc'h. Mes diouallit anezhan bepred, ha grit ma vezo ato eur c'hristen mad. »

Setu aze peden eur guir vam. Lavarit hag azlavarit anezhi, hag an Ao. Doue her selaouo. Rag he skouarn a zo tano da glevet peden ar mammou, pa reont van euz ho dever hag euz silvidigez ho re vian.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



INTROUN VARIA A GUERZENT

D'ar zul, 13 a viz guengolo, parrezioù kanton Guitalméze, a deuz e pelerinaj da chapel an Introun Varia a vir sikour a Gerzent, e Landunvez.

Ar c'hrouadur e poan, en daelou, en anken, a ia buan da gaout he Vamm. Sur eo, e vezo ganthi sikouret, sec'het he zaelou, laouenneat he galoun.

Parrezioù kanton Guitalméze, karget a c'hlaç'har, o veza ranket kimmiada, d'euz kalz euz ho zud, muia karet, eat d'ar brezel, o deuz sonjet, evel ar c'hrouadur-ze, d'eomp emez'ho, da di ar Verc'hez hor mamm, a ganthi ni a vezo sikouret, frealzet, dioualet hon tud.

Setu perak int deuet d'ar zul 13 a viz guengolo e pelerinaj da chapel an Introun Varia a Gerzent.

Eun dudi oa ho guelet o tont taed an henchou, ho beleien en ho fenn, ho banielou hag ho c'hroaziou o lintra dindan bannou skeuduz an eol, ho chapeled en ho daouarn, var ho muzellou ar pedennou hag ar c'hantikou a dlíe teneraat ar guella, kaloun ar Verc'hez ho mamm garet.

Etre 9 h. 1/2 ha 10 heur, e erruont e Kerzent. Skuiz mar kirit, mez laouen da veza gouzanvet poan evit tenna varnho bennoz an Introun Varia a vir sikour.

Croaz ar chapel a iea da boket d'ho c'hroaziou ha d'ho digaz d'ar plaz, merket da bep prosesion, var al leur vraz a zo dirak ar chapel. Ar blasen-ze a ioa kelc'het bep dek paz, gant pillerou chadennet an eil deuz egile, gant garlantezenou, hag e penn pep piller oa eur strollad pavillonou, skrivet varnho ar pedennou ar re gaera evit lakât he kaloun an oll fizianz er Verc'hez. E penn ar blasen, ouz moger ar chapel, oa savet an aoter. Goudoret oa gant guéz iaouank hag ive gant guéz o devoa meur a gant vloaz, ha dre ar guéz e rede garlantezennou eun dudi o guelet, en dro d'an aoter ha var an deleziou a zouge ar c'hantoloriou, oa bokedou roz a bep seurt liou, a-uz an aoter, oa eur groaz a 20 troatad vrahni squeuden hor Zalver, hag e c'harz troad ar groaz-ze edo ar Verc'hez beuzet en he daoulou, o c'houlén truez evit ar Franz digant he map Jezuz.

E tour ar chapel e velet o ficha gant an avel, drapoioù ar Franz, Bro-Zaoz, ar Russi, ar Serbi hag ar Belgique.

E diabarz ar chapel pep tra a ioa ive renket evit he lakaat kaer meurbet.

E vije bet renket pep tra, ken kaer, evit ar gouel, netra enno a zouezuz. An dimezel Mari, mestrez ar skol gristen, e devoa dija diskouezet evit Kongrès ar Sakramant e Landunvez, oa dournet evit ober en douar-ma gant guéz, ros ha glasier, eur skeuden deuz palez ar Baradoz. Hag ama, e devoa bet an heur-vad da gaout d'he c'helen ha d'he sikour, an Aotrou Ely-Labastyre, ken brudet evit renka pep tra kaer, en oll gouelioù. Bennoz ta dezho hag ive da Introunez Kerzent ha d'ho bugale o deuz sikouret ober ar garlantezennou, klasket fleur ha deliou glaz hag ornet ken kaer diabarz ar chapel.

Da 10 heur e koumansaz an offeren bred, ar beden dreist an

oll bedennou, peguir ne ket eun den a bed, mez map Doue he-unan eo a zao he beden verzu he Dad, dre e c'hoad, a red en offeren, evel guechal var menez Calvar. An offeren bred o voa kanet gant Aotrou persoun Guitalméze, an Aotrou Cardaliaguet a reas avielér hag an Aotrou Hamon abostoler.

Evit ma zache guelloc'h ar c'han, eur plas a ioa bet merket d'ar ganerien ha d'ar ganerezed e kever an harmonium a voa lakeat da vont en dro gant Aotrou persoun Lambaol-Guitalméze.

Goude an Aviel, Aotrou persoun Plouguin a reaz eur brezen gen var ar fizianz a dle kaout pep kristen er Verc'hez he Vamm. Gallouduz, emezan, koulz lavaret, evel Doue, e deuz ouzpen evidomp ar garantez an tenera a zo er bed, eur garantez a vamm. Hag e tiskouezas gant komzou freaz hag a iea betek diskouarn ar 5.000 den er selaoue, penaoz ma kar ar Verc'hez an oll broiou, e kar goulskoude muioc'h c'hoaz hor bro a Frans, hag e roaz da velet kementse o kounta ar burzudou e deuz great a vizkoaz evit hor bro garet.

Goude an offeren bred, pep hini a glaskaz el leac'h goudor evit debri buan he vern. Mall a oa da vont d'ar chapel da zaoulina ha da bedi dirak skeuden an Introun Varia a vir sikour ha dirak he map Jezuz a ioa lakeat var an aoter er Zakramant meulet ra vezo.

Da 1 h. 1/2, an oll a deuz adarre var ar blasen Vraz evit lavaret assamblez ar Rozera, ar beden-ze e deuz ken aliez tennet ar gristenien euz an anken hag euz daouarn ho henebourien.

Aotrou persoun Guitalméze a lavaraz ar Rozera ha pa veze echu an dizenez ha kanet ar myster, e roe da goupren dre eur brezen verr, pe seurt kentel a ro deomp ar myster. Kaout a reaz e mysteriou ar Rozera peadra evit diskouez da bed den badezet, petra a dlíe da ober evit rên eur vuez krizten ha tizout ar Baradoz.

Eun dudi oa selaou he gomzoù kalounek, ha pep hini a lavare, pa echue : ia, guir eo, evit tenna bennoz Doue var hon tud ed brezel, hag erruout hon unan en Env, e velomp brema guelloc'h petra hon deuz da ober.

Da fin pep dizenez euz ar chapeled a geuz, e zead var an daoulin hag an divreac'h e kroaz, e veze kanet ar Parce, pardounit, o va Doue, pardounit d'ho pobl ha ne jomit ket atao kounaret outhan.

Da 2 h. 1/2 e voa kanet ar gousperou ha roet bennoz ar Zakramant.

Araok disken divar an aoter, Aotrou persoun Guitalméze a zistroaz ouz ar bobl lodet dirazan hag a lavaraz : evit ma teuo hon tud d'ar gear divac'hagn hag ar c'henta, ha gounezet gantho ar viktor var hon enebourien, a kountant e veac'h, da zistrei ama adarre e pelerinaj a benn bloaz, d'an eil sul a vengolo, evit trugarekât ar Verc'hez ? An oll, o sevel ho daouarn en ear, a lavaraz en eur vouez : ia, domp a reimp. Kenavo-ta er bloaz a zeu d'an Introun Varia a vir sikour a Gerzent.

Eun nebeut goude, ar brosesionou a gemeraz an hent da zistrei d'ho farrezioù, hag an oll a gane gant muioc'h a fizianz, meuleudi ar Verc'hez.

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	Paëroun :	Maërounes :
1 Guengolo. Louis Magueur, Kerc'hoazoc.	Louis Grall.	Louise Hir.
5 — Julie-Fr. Kerlérour, arc'hantel.	Fr. Kerlérour.	J. Corolleur.
11 — Gourvadezet, krouadur Peton, Kerriou.		

ENTERRAMANCHOU

- 14 Guengolo. Marie-Anne Gourmel, 70 vloaz, Archantel.
Eat d'ar Baradoz
- 12 Guengolo. Marie-Jeanne Bervas, 18 mis, Sant-Samson.

**A zo pedet da ober eun hanter heur adorasion
d'ar zul II a viz here**

Ar re a ioa bet hanvet evit miz guengolo diveza.

Kannadik miz guengolo en deuz koustet 18 lur pemp guennek. Bet evit sikour he baea, digant : T. P., V. F., J. M., Y. B., A. C., V. N., pep a bevar real. J. K., M. P., D. H., S. G., pep a 12 guennek. Doue r'ho faeo.

MIZ HERE

Epad miz here, offeren ar chapeled hag ar pedennoù evit goulen fin ar brezel, a vezo lavaret, da 7 heur nemet kart.

MIZ HERE

2. GUENER KENTA. Gouel an Elez Mad. — Kinnig an oferen hag ar gommunion da Galon Jezuz, evit hen digoll euz ar boan on euz great da Vari ha d'hon eal mad p'on deuz dizentet ouz ho aliou mad. Pedi evit ma vezo pardounet, dre veritou Jezuz, ho fec'hejou d'ar zoudarded kuezet var an dachen.

4. SUL AR ROZERA. Ar Verc'hez e deuz lavaret : « Goude an oferen n'euz netra hag a blij d'in evel ar Rozera. » Teir chapeled, pemzek dizenez lavaret en eur zonjal e misteriou buez Jezuz ha Mari : setu petra eo ar Rozera. Oh ! en amzer vrema, dalc'homp, dalc'homp d'ar Rozera !

11. Oferen ha gousperou AN NAONTEKVED SUL goude ar Pantekost. — Parabolen an eured. Sonjal petra ziniñ ar ger *priedelez* : labour ar vam, dre ma tle ar vaouez beza mam ha poania a galoun vad abalamour d'he bugale ; liam ar ieo, dre ma tle an daou pried dougen ar memes sam ; eured, dre ma tle ar vaouez senti ouz he goaz.

18. Oferen ha gousperou Sant Lukaz, abostol. Medisin desket-brao, S. Lukaz a lezaz he vicher evit heulia S. Paol o veachi dre ar bed, en eur c'hounid eneou da Jezuz. Klevet a reaz gant ar Verc'hez histor ar Mabik Jezuz, kountet en he Aviel. Mervel a reaz laz gant ar baianed. Deski hor relijion ha karet Doue dreist hor buez : setu kenteliou S. Lukaz.

25. Oferen ha gousperou AR 21^a SUL goude ar Pantekost. An Aviel a c'hourc'hemen restaol ar pez a vankomp d'hon nesa. Laerez zo difennet ; delc'her tra an nesa a zo laerez. Kaout keuz n'eo ket aoualc'h : red eo restaol ; anez, pardoun ebed.

31. IUN HA VIJIL, da netaat an eneou araok gouel an Oll Zent.

Dervez ha sul kenta miz Du. AN OLL ZENT, gouel berz. Pec'hed marvel eo mankout d'an oferen er gouel-ma, zoken pa ziguez var ar pemdez. Goude gousperou ar gouel, e vez kanet gous-

perou an Anaoun. — Goulen ar c'hras da boania evit gounid hon loden varadoz.

2 a viz Du. GOUEL AN ANAOUN. Pedi evit an anaoun pri-zouniet er purkator entanet ; kasaat ar pec'hed veniel a gas an dud di ; karet ar binijen a vir ouz an tan.

AR ROZERA

Na kaera, na pinvidika peden, peden ar Rozera ! Alies e vez klevet lavaret : ar feiz a doc'horra, ar feiz zo o vont kuit... A drugare Doue, mar d'e guir kementze evit meur a vro, n'ez eo ket evit Breiz-Izel, a ziskuez d'ar bed oll ez euz goad kristen, hag euz ar guella, o redek e goazied he bugale. Ha perak e chom stard ar feiz e Breiz ? Evit meur a rezoun, mes dreist oll abalamour tud Breiz-Izel a gar ar Verc'hez, Itroun-Varia Rumengol, Itroun-Varia ar Folgoat, an daou hano dousa, etouez kalz re all, a ro Breiziz da Vam mil guech benniget Jezuz, hag abalamour ma ouezont lavaret ho Rozera en honor dezhi. Dalc'homp, dalc'homp d'ar beden du-diuz-ze, a zo er memes amzer eur gentel splam var misteriou brasa hor feiz, hag eur reolen a vuez !

Setu perak ar Pab Santel Leon XIII en deuz skrivet d'ar bed katolik pemzek lizer divar benn ar Rozera. Ar Rozera, hag adarre ar Rozera, setu ar gelennadurez a zo dalc'hmad var muzelloù ar Pab. Ha perak, nemed evit senti oc'h ar gelennadurez digaset euz an env gant ar Verc'hez Vari he-unan, ne ket epken en amzer sant Dominik c'hueac'h kant vloaz zo, mes deac'h koulz lavaret, e Lourd p'en em ziskuezaz abenn trivarc'h guech ar Rozera en he dourn, e Pontmain pa roaz d'ar vugaligou he guelaz ar memes aliou talvouduz ? Biskoaz Rouanez an env, ha Vikel Jezuz-Krist var an douar, n'o deuz aliet kement devosion all ebed.

Greomp brema eur zell ouzomp hon-unan. Marteze on divije gallet ober c'hoaz guelloc'h eget on deuz great ? Daoust ha roet zo bet en hon touez d'ar Rozera ar plas a c'houlen evithan ar Verc'hez hag ar Pab ? Ar zul kenta er miz, hag hen a zo e guirionez sulvez ar Rozera ? Ar c'hiz da lavaret ar Rozera en tiegeziou, daoust hag ez eo heuliet e peb leac'h, en eur lavaret diou dizenez bemdez ha teir da zul ? Daoust hag an oll a oar dindan envor misteriou ar Rozera ? — Danjer zo na ve red deomp anzav n'on deuz ket great var gementze kement a c'hellemp, kement hag e tliemp ober.

Ar Rozera zo bet devosion hon tud koz, hag hon tud koz a ouie hen lavaret mad, en eur zonjal er misteriou brasa buez Jezuz ha Mari. Evit ma chomo hor feiz ken beo, ken nerzuz ha feiz hon tud koz, ni ive a dle anaout mad ar misteriou-ze ha sonjal enno alies.

Evit-ze aoualc'h eo gouzout koublajou kantik ar Rozera euz Leor ar C'hantikou, gant ma vo var bep koublad eun tam sklerijen. N'euz ket eur famil kristen ha ne ve ket enni unan benag, koz pe iaouank, ha ne ve ket goest da zeski d'ar re all ar pez zo merket e kantik ar Rozera.

Induljans plenier d'an hini zo bet koveseat ha kommunit, bep tro ma teu da bedi en iliz evit ar Pab, azalek pardaez ar zadorn beteg kuz-eol ar zul (lavaret eun dizenez bep tro, pe 5 Pater ha 5 Ave).

A R V R E Z E L

E kreiz ankeniou amzer ar vrezel, eur zonzj dreist oll a voask ar c'halonou :

— Ha c'hoaz, ma vije Frans treac'h d'an Allmagn !

Ar Frans a vezo treac'h.

Pi Dek, eur zant hag en deuz great miraklou, a lavaraz er bloavez 1904, goude al lezen enep ar relijiuzed hag araok lezen an disparti etre an Iliz hag ar c'houarnamant :

— Ar Frans ne c'hell ket mervel. He zilvidigez en em gavo marteze kalz abretoc'h eget na oufet kredi.

— Nan, an Aotrou Doue na zilez ket ar Frans ; ar barr-amzer-ma ne bado ket : n'eo ket esperout eo a ran, mes gouzout mad !

— Red eo pedi kalz evit ar Frans, ha morse koll kaloun.

Erfin, er blavez 1911, Pi Dek a lavaraz da Gardinaled hor bro :

— Pa oue badezet en iliz Reims ar roue Clovis, roue Frans, neuze e oue great allians etre Doue hag ho pro. Ar Frans a vezo diouallet hag e vezo adarre, evel m'eo bet, soudard hag abostol ar feiz dre ar bed. He faotou a vezo puniset. Mes ar Frans na varvo ket.

Penaoz kredi ne ouie ket Pi Dek, eur Pab hag eur Zant, ar pez a lavare ?

Oc'hpenn, an oll a c'hoar e tistro an dud d'an Ao. Doue, abaoue ar vrezel. Eun den divar ar meaz a skrive d'he vaouez : « Biskoaz na moa gullet kement a relijion evel ma 'z euz brema. » Ofiserien ha soudarded a ia da govez, da gommunia, da glevet an oferen ; eur rejimant hussards a deu da Lourd da c'houlenn bennoziou ar Verc'hez ; kanoliou ha sabrinier soudarded Poitiers a zo benniget gant an Ao. 'n Eskop Humbrecht ; drapo ar 116^e, e Guened, a zo douget dre ar ruiou, eur helek a bep tu dezhi. Ar ministr Malvy a ro konje da Seurezed harluet da zont en dro d'ho c'houent koz. An dizoue Clemenceau a skriv en he gazeten : « Souezet oun, emezhan, ha va c'halon a lamm em c'hreiz pa velan ar venec'h, bet kaset kuit ganeomp, o tont euz a bep bro da gemeret ho flas en armeou. Eun dervez da zont, goude ankeniou ha poaniou brasoc'h eget nerz an den keaz, p'en em gavo asambles an oll galounou-ma, skuizet oc'h ober burzudou a gouraj, red eo e vezo etrezho eun unvanvieg ken stard ma ne vezo biken freuzeñ gant tra ebet ! Red eo e ve Frans kaeroc'h goude al lenv ! » Ia, distrei a reer da Zoue.

Penaoz en em gemero an Ao. Doue evit hon adzevel ? Peur e plijo ganthan hen ober ? Piou oar petra en em gavo ? — Ne dal ket ar boan d'her c'hask. Pedomp Jezuz ha Mari ; pedomp S. Mikeal, S. Louis, Jeann d'Arc ; kommuniomp, greomp pinijen, en em zantelaomp. Poaniomp, ha Doue a roio ar viktur. Doue na refuz netra d'ar beden ; ha Jeann d'Arc a lavare d'he zoudardet : « Kit da govez, da genta. Ha goudeze, ne vezoc'h ket trec'het. » Hon armeou zo bet koveseat. Hor bro ne ra mui brezel da Zoue. Ar zilvidigez zo en hent.

Petra glever

Red eo ober evel ar re all. — Ia pa reont mad. Nann, pa reont drouk.

Ar re all a rafe goap ac'hanon. — Grit mad, hag en eternite an diaoulou a rai goap anezho.

Me meuz gullet an dra-ze var ar journal. — Braz eo ho kinou ma lonkit kement skritur moull a velit.

Micher ar veleien n'eo ket fall. — Kit da veleik, neuze !

Michans, ober a c'hellan ar pez a garan. — Ia, da ! Hag abalamour da ze eo e viot barnet gant Doue var oc'h oll oberiou.

PA ZAULINIT EVIT KOVEZ

Deuet oc'h da gofez. Da ober eur govesion vad, michans. Ha gouzout a rit penaoz ober ?

Klevit. Ma teuit d'an iliz ha m'en em daolit er gador govez, huana ma c'hellit, en eur zonzjal : « Pebez chans ! goullou an toul ! » eun dichans eo. Aoun zo ne dalfe ket kalz a dra ar govesion a reot.

M'en em lakit var ho kador, daoulinet, da lavaret devot ho chapeled, ha ma 'z it er gador govez pa o peuz echu dibuna an 58 greunen, eur beden vad oc'h euz great, red eo esperout ; mes n'o peuz ket great ar pez a c'houlenne Doue ha stad ho koustians.

Ma pedit, ma klaskit mad ho pec'hejou, ha ma zit da govez gant an dra-ze epken, n'o peuz great nemet loden biana ho tever.


Petra da ober eta ?

Ar pez a lavar ho katekismou. Goude beza goulennet sklerijen digant Doue ha sikour digant ar Verc'hez hag oc'h eal mad, red eo deoc'h sellet piz en ho koustians, en eur zonzjal penaoz o pefe manket da c'hourc'hemennou Doue pe re an Iliz, pe kuezet er seiz pec'hed kapital, pe dilezet deveriou ho stad. Hag ar pez zo red dreist bep tra eo goulenn ha kaout kontrision, glac'har da veza offanset Doue, kollet ar baradoz ha meritet purkator pe ifern, nevezet pasion Jezuz-Krist, ha great poan d'eun Doue infinimant mad ha din da veza karet. Sonjit en ifern, er baradoz, er C'halvar ; goulennit pardon ; bezit bolontez stard d'en em ziuual deuz ho pec'hejou ha da dec'het euz an dentasion : ha neuze kit da govez gant fizians. Ho tever o pezo great, madelez Doue a raio an nemorant.

LAVARIOU KOZ

1. An odivi : dour a vuez d'ar marc'hadour, dour a varo d'ar prener paour.
2. Trempa re, zo devi an had ; eva re, zo devi ho koad.
3. Ma lavarez d'in petra evez, me lavaro d'id petra vezez.
4. Dre ar vrezel e kuez pennou : ar banne ziskar famillou.
5. Evel an diaoul, an den mezo ne ra nemet traou fall ato.
6. Ar mezhvier a zo he lod kounari ha mont da zod.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



MIZ DU

Sul ha devez kenta. GOUEL AN OLL ZENT. (En derc'hent, *iun ha vijil*.) Henori a reomp hirio kement hini zo er Baradoz : an Dreinded Sakr, Jezuz, ar Verc'hez, S. Ian Vadezour, an Elez, an Ebestel, an oll dud santel maro araok Jezuz hag abaoue, ar vugaligou badezet hag eat kuit araok kaout ho skiant, goazed, merc'hed, tud iaouank, a bep stad, a bep bro, a vilionou, hon difennourien dirag an Ao. Doue, da c'hedal ma nijimp da gaout perz en ho levenez. — Goude gousperou an Oll Zent, gousperou an Anaoun.

Eil devez. GOUEL AN ANAOUN. An Anaoun eo ar gristenien chomet er Purkator, da beur-baea dle ho fec'hejou da Zoue. N'euz ket da bedi evit an oll dud varo : darn zo er baradoz (hor bugaligou badezet, an dud peur-c'hreat ho finijen), darn all er limbou (bugaligou divadez), darn all er purkator, hag evit ar re-ma epken e talvez hor pedennou.

8. OFEREN AN TREDE SUL VAR'N UGENT goude ar Pante-kost. Aviel ar zul a zigas deomp da zonj e tleomp en em erbedi ouz Doue en hor c'hlenvejou : « Deuit oll davedon, emezhan, c'hui hag a zo beac'hiet, ha me ho rekouro. » Gelter ar medisin, kemeret louzou, kaout fizians enno : eun dra vad eo hag eun dra red. Mes ar Spered Santel a lavar : « An Ao. Doue eo en deuz lakeat an douar da zougen al louzou. » (Eccl. 38.4), hag hen eo mestr ar vuez hag ar maro. — Gousperou Dedi iliz ar Zalver.

15. Oferen ha gousperou DEDI OLL ILIZOU an eskopti. Dedi eun iliz a zo ar pedennou hag an oberiou a ra an Aotrou 'n Eskop evit lakaat eun ti da veza ti an Ao. Doue. Eun ti dediet da Zoue (konsakret, mar kerer) a zo eun ti santel, eun eil baradoz. Ennhan ar c'hristen a dle meuli Doue hag he bedi gant fizians ha respet, evel ma ra ar Zent hag an Elez.

22. Oferen ha gousperou EIZVED DEDI AN ILIZOU. En iliz eo omp bet great kristenien, bugale da Zoue, dre ar vadiziant. En iliz omp bet pardounet dre an absolven, maget gant Korf Jezuz. En iliz on deuz bet ar grasou kaera ; d'an iliz e vezo digaset hor c'horf keaz pa vezo eat hon ene d'ar bed all ; ha dre an dour benniget taolet var hor c'horf, hon ene a vezo diboaniet. An iliz a zo an dousa liam etre Doue ha ni : karomp anezhi.

29. SUL KENTA AN AZVENT. Kentel an dervez-ma eo : gedomp ar varn ziveza. Deiz ar varn a zeuio evel al laer en noz ; den na oar nag an deiz nag an heur, mes oll e rankimp en em ziskuez dirag lez-varn Jezuz-Krist, evit ma resevo peb hini ar pezh a zo dleet d'an oberiou, mad pe fall, en devezo great pa z'edo he ene en he gorf.

DIFENNET eo ober EUREUJOU adalek an Azvent beteg gouel ar Rouaned ; ha pa ve bet an dispans red, ne c'heller morse seni ar c'hleier hag ober solanite. An Azvent a zo eun amzer a binijen, evit brepari hon eneoù da c'houel Nedelek ; ne dle ket beza profanet gant plijaduriou ar bed.

An Anaoun

Pet seurt anaoun a zo er purkator ? Daou seurt. An dud a varv gant pec'hejou veniel, an dud a varv dibec'h mes n'o deuz ket peurbaet dle ho fec'hejou koz.

Pet seurt poaniou e c'houzanvont ? Daou seurt. An tan, an harlu. Devet int evel ma vije ho c'horf unanet c'hoaz gant ho ene. Harluet int, dalc'het pell euz ar baradoz ho guir bro, euz Doue ho guir tad. Poaniou spountuz !

Pet seurt tud a c'hell ho rekour ? Eur seurt : an dud veo, e stad a c'hraz. Ha refuz a c'helfent ?...

Penaoz ober ? An oll a c'hoar e vez rekouret an Anaoun dre hor pedennou, hon aluzennou, hor pinijennou, ar gommunionou a reomp, an ofeinnou a glevomp pe a lakeomp, ar zervichou a baeomp, hag an induljansou.

Petra eo an induljansou ?

An induljansou a zo eun diskarg a ro an Iliz euz ar boan on euz c'hoaz da baea da justis Doue, evit ar pec'hejou a zo bet pardounet deomp dre an absolven. An induljansou plenier a ro diskarg euz an oll boan dleet c'hoaz d'ar pec'hed, an induljansou all ne roont diskarg nemet euz a eul loden epken euz ar boan-ze.

E leac'h delc'her evidomp an diskarg-se, e c'hellomp peurvuia (pa lavar ar Pab) he rei d'an Anaoun. Ma her greomp, hor pinijen a jom deomp da ober en he fezh, mes an Anaoun a gav digorr en ho flammou, a zo douseat pe vouget an tan var ho zro, hag a zav abre-toc'h d'an Env. Eno e pedint evidomp ; ha marteze profit ker braz a vezo deomp beza dilezet hon induljansou evitho.

Evit gounit an induljansou, red eo beza e stad a c'hras, hag ober a boent da boent ar pezh a zo merket gant an Iliz.

Ar re a gustum mont da govez diou vech ar miz a c'hell gounit kement induljans plenier a ziguez er pemzek dervez. Ar re all a dle kovez da zeiz ar gouel, pe en derc'hent, pe daou zervez araok evit ar goueliou brasa, pe zoken tri dervez araok sul ar Rozera, ar Porsionkul, etc.

Ar gommunion a dle beza great da zeiz ar gouel pe en derc'hent.

Peurliesia e ranker bizita an iliz : ar pezh a reer en eur bedi evit ar Pab goude ar gommunion.

Pemp *Pater* ha pemp *Ave*, pe eun dizenez chapeled, setu ar beden gourc'hemennet evit ar Pab. Pa 'z euz meur a induljans da c'hounit er memez dervez, ar Chapeled a dal evit pemp induljans, ar Rozera evit pemzek...

Oc'h ober Hent ar Groaz, en iliz pe er chapelioù, e c'hounezer leun a induljansou : ne c'heller ket ho c'hounta oll. Red eo sonjal e Pasion Hor Zalver. ha mont dirak peb hini euz ar 14 station. Ar re ne c'hellont ket dont d'an iliz pe d'ar chapelioù a c'hell ober Hent ar Groaz er gear, gant ma talc'hint eur Grusifi staget outhi an induljansou, evel m'eo bet great er Mision, evel ma c'hell ober an Ao. Persoun. Mes er gear e ranker lavaret ugent guech ar *Pater*, *Ave*, *Gloria* (14 guech evit ar stationou, 6 guech da c'houde evit ar Pab), ha sonjal ive e Pasion Jezuz-Krist.

Bep mintin kinnigomp da Zoue, dre zaouarn ar Verc'hez, evit an Anaoun, kement induljans a c'hellimp da c'hounid.

Dioc'h an druez on devezo diskuezet d'hon nesa, e raio an Ao. Doue truez deomp hon-unan.

AN AZVENT

Peur e koumans ar bloaz kristen ?

Ar bloaz kristen a goumans da zul kenta en Azvent.

Petra eo an Azvent ?

An Azvent eo ar peder sizun araok Nedelek.

Petra ziniñ ar ger Azvent ?

Azvent a ziniñ donedigez (dont).

Piou a c'heder da zont epad an Azvent ?

Ar Mabik Jezuz, eil persounaj an Dreinded Sakr, Doue ar Map, en em c'hreat den evit beza Hor Zalver.

Perag ez euz 4 sul en Azvent ?

Evit ober deomp sonjal er 4 mil bloaz a zo bet araok ma teuz Jezuz er bed-ma.

Perag e kemer an Iliz quiskamanchou liou violet epad an Azvent ?

Abalamour al liou-ze, ervez an Iliz, a verk ar binijen. Guechall an Azvent a ioa eun amzer a binijen, daoust ma n'oa ket ken rust hag ar C'horaiz. N'euz mui a iun epad an Azvent, mes evelato an Iliz a lez ar merkou a gaon en he lidou evit alia ac'hanomp d'en em brepari, dre ar binijen, da zigemer ar Mabik Jezuz da zeiz Nedelek.

Perak ne ganer ket ar Gloria in excelsis en oferennou an Azvent ?

Adarre evit merka ar binijen : rag ar Gloria a zo eur c'han a joa hag a driomf.

Perag goulskoude e kaner an Alleluia ?

An Iliz a gan an Alleluia aliesoc'h soken eget er suliou all, abalamour, petra benag m'en em brepar da c'houel Nedelek dre ar binijen hag ar beden, e deuz evelato eur joa vraz pa esper guelet dizale an Doue en em c'hreat bugel bian.

Petra eo ar Rorate a vez kanet en Azvent ?

Ar Rorate zo eur deben gaer, kanet peurliessa e Salud ar Zakramant. Lavaret a ra deomp ar vall, an hast o doa ar luzevien da velet Salver ar bed o tont var an douar. Gantho ive ni a dle kana a greiz kaloun, pa c'hedomp dez ar bloaz ginivelez Jezuz : Rorate, coeli... Digasit, o envou, digasit an Hini Just var an douar, evel ma teu ar gliz euz an Env hag ar glao euz ar goabren.

Pehini kemm a zo etre an trede sul hag ar suliou all en Azvent ?

D'an trede sul e vez lakeat bokedou var an aoter, hag e vez c'hoariet gant an ogrou e leac'h ma 'z euz, abalamour ger kenta Introit oferen an trede sul a zo : en em laouennait, *gaudete*. An Iliz a lavar deomp beza laouen abalamour ma tosta amzer Jezuz da zont er bed.

Ma talc'homp mad da zonzjou ha da binijen an Azvent, gouel Nedelek a zigaso deomp santelez hag eurvad.

N'O PEUZ NEMET UNAN

Eun eskop a lavare d'eun den dizoue :

— Pet dourn o peuz ? — Daou, eme an den. — Doue r'ho miro deoc'h ! Evelato, ma teufac'h da goll unan anezho, egile a jomfe d'ho servich.

— Pet troad o peuz ? — Daou. — Ra blijo gant Doue ho dioual. Evelato, ma vankfe unan anezho deoc'h, egile a jomfe d'ho tougen.

— Pet lagad ha pet skouarn o peuz ? — Daou lagad, diou skouarn. — Ra vezint dalc'het gant Doue ho c'hrouer. Mes ma teufe eul lagad da veza dall, eur skouarn da veza bouzar, egile a velfe c'hoaz evelato, eben a glevfe evel a ziagent.

— Mes erfin, pet ene o peuz ? M'o pefe daou, e c'helfac'h koll unan anezho, ha mont d'ar baradoz gant egile. Siouaz ! n'o peuz nemet eun ene : ma kollit anezhan, ez oc'h kollet da viken. Save-teit oc'h ene !

EVIT AR ZOUDARDED

Eun dervez e Madagascar, an amiral Bienaimé a gasaz he zoudarded ha martoloded da baka eun tam douar difennet mad. Ofiserien a c'hrosmole. « An dra-ze eo koll goad Frans, emezho. Re vraz ar riskl evit brema. » — « Riskluz eo, eme an amiral. Mes red eo. It, ha dalc'hit fizianz. »

An emgann a oue tenn. Ar zoudarded malgach n'o doa ket aoun. An treac'h evelato a jomaz d'hon re-ni. Ha pa oue great an *appel*, den na vanke ; hini n'oa bet na lazet na glazet.

— Guelet a rit, eme neuze an amiral. Me ouie mad. Rag morse ne gasan va zud d'ar stourm ep beza lavaret va chapeled evitho, ha biskoaz ar Verc'hez ne deuz dilezet ac'hanon.

Evit soudarded Frans, eur chapeled bemdez e peb famill, en han 'Doue. Mari a zo rouanez Frans. E pe gorn-bro ne deuz ket eun iliz, eur chapel, eun aoter ? Kernitron, Lambader, Folgoat, Kerzent, Rumengol, Beg-ar-Raz, ar Porzou er Finister, Pontmain e leac'h ma tiskleriaz Mari fin ar vrezel e 1871, ar Salett e leac'h ma c'hourc'hemennaz ober pinijen, Lourd gant he miraklou hag he fedennou dez ha noz... nag a droniou d'ar Verc'hez en hor bro ! nag a varzudou great evit Frans ! Pedomp a galoun vad. « Santez Mari... brema, en heur euz hor maro... Itroun Varia an Armeou, Itroun Varia ar Mor, oh ! pedit evidomp ! Digasit hon tud d'ar gear, iac'h a gorf hag a ene ; ha roit d'hor bro geaz gloar ha konversion ! »

DRE AR FEIZ, AN TREAC'H

Daoust ha n'eo ket kaer ha talvouduz, dirak Doue ha dirak an dud, sakrifiz ar zoudard a varv var an dachen, hag a ro he vuez, a greiz he galoun, evit difen he vro ? Ah ! sur aoualc'h, dourek e lenvo an intanvez hag ar vinored keiz a jommo var he lerc'h, ha n'o doa marteze den all ebed da c'hounid bara dezho ! Mes m'o deuz feiz, e c'hellont en em gonsoli eun tammik o sonjal ne vezint ket dilezet gant Doue he-unan, hag oc'hpenn o deuz brema er Baradoz eun alvokad, goest da ober dezho muioc'h a vad eged n'en dije great var an douar. Rak ar zoudard a varv epad an emgann a dle kaout digant ar Barner, eb mar ebed, eun digemer trugarezuz. Evel ma tal da vadiziant ar goad a skuiller, e tal ive, a greder, da binijen ; ha setu perak e c'heller kredi e vez pardounet en eun taol he bec'hejou tremenet da gement hini a varv evit he vro. Eur *merzer* eo e guirionez, pe guir e c'houzanv ar maro evit ober he zever, ha difen eun dra zakr. En eur vervel evit he vro, e varv evit he vreudeur ; hag evel ma lavar an Aviel, n'euz ket brasoc'h karantez eged mervel evit an nesa. Abalamour ma c'hoar

mad an dra-ze eo e ro he vuez gant kement a nerz-kaloun. Gouzanv a ra ive ken braz poaniou hag an darn vuia euz ar verzerien, pe hen a varv en eun taol, pe eur pennad goudeze. Lavaret a c'heller eta dezhan komzou Sant Cyprian d'ar verzerien : « Kouraj, soudard kalounek : Jezuz-Krist hag he Elez a zo ho daoulagad o para varnot, hag a zo test euz da boaniou. Oc'h da c'hedal emaint, evit rei d'id da gurunen ! »

Ia, peb hini euz hor zoudarded a zo goest hiviziken da c'houlzanv peb tra evit bro Frans, hag evit Doue asambles. Guelit peseurt chenchamant burzuduz a zo deuet enno oll, dioc'htu m'eo diguet kelou ar brezel ! Klevet o peuz kounta marteze petra c'hoarvezaz, pa oue faoutet e kreiz ar mor, al lestr braz *Titanic*, brema zeuz eun nebeud miziou : an oll a en em lakeaz da gana asamblez ar c'hantik : « *Plus près de toi, ô mon Dieu !* » Mad, oll zoudarded Frans, p'eo kuezet varnho darvoud spountuz ar brezel, a zo falvet dezho ive tostaat oc'h Doue, en eur lakaat urz en ho c'houstians. En eun taol, ez eo bet dihonet ha renevezet ho feiz. A vanden, ez int eat da govez ha da gommunia, araok mont euz ar gear, pe eur veach en em gavet er c'hazarn.

Pa jomont a zav, epad ho beachou, e kichen eun iliz benag, ez eont ive ebars da bedi ha da gana kantikou...

Lavaret a c'heller n'euz bet biskoaz brezel ebed o lakaat kement a zoudarded da zistrei oc'h Doue, hag hou-ma ; biskoaz, ken nebeud, ne vezo bet saveteat kement a eneou. Ar zoudarded, a gav d'in, a vale laouennoc'h, hag a ziskuez muioc'h a nerz-kaloun, abalamour ma c'houzont ez euz en ho c'hichen kalz beleien, hag a roio dezho an absolven, ma vezont skoet var an dachen. E guirionez, an darn vuia anezho a vezo sikouret brema en ho heur diveza, hag a ielo evelse sùrroc'h d'ar baradoz. Ne zonzent ket e kementse an Deputeed, brema ez euz 25 bloaz, pa reant al lezen evit kas ar gloareged d'ar c'hazarn ! Hi a gave dezho a rachent gaou braz oc'h ar relijion, hag er c'hontrol biskoaz n'euz bet great kement a vad. Doue a ziskuez evelse, eur veach muioc'h, ez eo hirroc'h he vreaç'h eged hini an dud.

Daoust hag ar zoudarded hag an oll dud all, deuet brema da veza ken fidel d'ho deveriou a gristen, a gendalc'ho, eur veach echu ar brezel, da zervicha Doue, evel ma leont hen ober ? Ia, evel ma skrive en deveziou tremenet an Ao. Baudrillart, rener braz an Institut katholik e Paris, fizians a c'heller kaout e vezo viktor ar Frans var he enebourien eur viktor asambles evit an Iliz katholik : goude beza gouzanvet oll a-unan ar memes poaniou var an dachen a vrezel, ha goude beza en em zikouret asambles da zifen ho bro, ar Fransizien ne falvezo dezho mui en em zispartia, hag a zervicho oll gant ar memes kaloun an Doue en deuz ho zikouret da gaout an treac'h !

Greomp pinijen ha pedomp oll, a greiz kaloun, da c'houlen ma vezo roet deomp ar joa hag al levenez-se ; hag evit ma plijo d'Hor Zalver skuill varnomp muioc'h-mui he c'hrasou, lavaromp dezhan, evel ar roue Philip-August, var dachen an emgann, e Bouvines : « Va Doue, me Ho ped da zont d'am zikour ! N'ez oun nemed eun den dister, mes goad ar Fransizien a red em goazied, ha ma vezoc'h a du ganen, n'o pezo ket a leac'h da gaout keuz. Me ive a vezo fidel deoc'h ! »

SAKRAMANT AR VADIZIANT

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Barados :

		Paëroun :	Maërounes :
21	Guengolo. Guil.-F.-M. Guéguen, Kerc'hoazel.	G. Guéguen.	M.-F.-Ph. Arzel.
29	— Jean Luart, Kelleret.	J. Talarmin.	Aug. Talarmin.
5	Here. Gab.-Marie Appriou, Créac'h.	Gabriel Taloc.	J. Kermaidic.
8	— Guillaume Provost, Kerguen.	Guil. Jaouen.	Francoise Fourn.

Magnificat.

O deus resevet lidou diveza Sakramant ar Vadiziant

TESTOU :

20	Guengolo. Elisa Peton, Kerriou.	Amédée Le Ven. Noëlie Peton.
30	— Gabrielle-P.-M.-G. Kerros, Kerriou.	Prosper Jacq. Paule Le Bihan.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar vurn diveza, e goasket ar groaz :

6 Here. Perrine Bocheur, 86 bloaz, Penn-ar-Pavé.

A zo pedet da ober eun hanter-heur Adoration d'ar zul 8 a viz du

11 heur. — Françoise Morel, Philomène Guiziou, Elisa Pérès, Françoise Bégoc, Bourk.

11 h. 1/2. — An aotrou Persoun, Yves Floc'h, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Bourk.

12 heur. — Ar skol gristen.

12 h. 1/2. — Françoise Trébaol, Françoise Arzel, Marie-Renée Thépaut, Marie Le Hir, Kernézoc.

1 heur. — Victoire Foll, Kervizinic, Philomène Arzel, Créac'h-Goriou, Marie-Renée Quémeneur, Marie-Anne Salou, Traon.


1 h. 1/2. — Augustine Brézel, Marie Guéna, Amélie Le Dall, Anna Perhirin, Arc'hantel.

Kannadik miz Here en deuz koustet 18 lur 5 guennek.

Bet evit sikour he baea, digant : V. C., H. T., P. K, pep a 8 real ; J. H., V. C., J.-M. B., pep a 4 real. Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



MIZ KERZU

4. GUENER KENTA. Kinnig da Galoun Jezuz an oferen hag ar gommunion a zigoll evit rapari dreist oll daou seurt pec'hejou : da genta, ar re great gant an enebourien o laza tud didamall, o tevi tiez hag ilizou, o laerez, etc. ; d'an eil, ar re great gant an dud ne fell ket dezho anaout ha pedi an Aotrou Doue, zoken epad ar vrezel.

6. Oferen ha gousperou EIL SUL AN AZVENT. S. Ian Vadezour prizouniet a anzavaz he feiz e Jezuz-Krist. Pebez rann-galoun benag a ziguez ganeomp, dalc'homp da gredi e Jezuz, mestr madelezuz ha gallouduz, ne sko nemet evit pardouni, digoll ha kuruni.

8. (Kerzu). Oferen ha gousperou AR VERC'HEZ KONSEVET DIBEC'H. Ar Pab Pi Nao a ziskleriaz e 1854 : « Mari n'eo bet taget morse gant ar pec'hed orijinel, var lavar an Ao. Doue he-unan. » E 1858, Mari hen diskleriaz da Vernadett, e Lourd : « Me a zo ar Gonsepsion dinam. » Henoromp hor Mam dibec'h en eur dec'het dioc'h peb pec'hed ; ha promettomp, mar gellomp, mont da Lourd pa vezo echu ar vrezel ha deuet hon tud, gloriuz, d'ar gear.

13. Oferen-bred ha gousperou SANT KORANTIN, kenta eskop Kemper. Er brasa goaligner, relegou Sant Korantin, douget e proesion, o deuz ato tennet var an eskopti grasou pinvidik. En em erbedomp ouz Patron kenta Kemper ha Leon evit obten eur peoc'h trum ha gloriuz.

16-18-19. IUN HA VIJIL ar Pevare-Amzer. Kinnig ar binijen-ma, a-unan gant poaniou Jezuz, gant pinijennou hor zoudardet, evit ma vezo pardounet he fec'hejou d'ar Frans, hag evit ma plijo gant Doue rei dezhi beleien aoualc'h e plas ar re lazet en arme.

20. Oferen PEVARE SUL AN AZVENT ; gousperou S. Thomas, abostol. Deskomp var skuer S. Ian Vadezour respeti ar veleien, kannaded an Ao. Doue, konsakret dezhan, ker gallouduz var an eneou.

24. Iao. IUN ha VIJIL dere'hent Nedelek. — Da zeiz Nedelek, n'euz morse a vijil.

25. NEDELEK, gouel Map Doue en em c'hreat den o tont er bed e kraou Bethleem. Doue an Tad n'en em c'hreaz ket den ; Doue ar Spered-Santel ken nebut. Doue ar Map epken. He Vam guirion a zo ar Verc'hez Vari. N'en deuz ket a vir dad er bed-ma, peguir he gorf a oue furmet dre volontez ar Spered-Santel ; S. Joseph a oue he dad mager epken, petra benag oa guir bried da Vari.

26. Oferen ha gousperou S. STEPHAN, kenta merzer. Lazet e oue gant mistri ar Iuzevien, abalamour ma c'houneze re anezho da relijion Jezuz-Krist. Pedomp evit ar visionerien hag evit ar veleien.

27. Oferen ha gousperou S. IAN avieler. Goulen dreizhan ar c'hoant da glêvet an oferen ha da gommunia bemdez, pe bep tro ma c'hellor, — ha konversion ar gristenien a vank d'an oferen ha d'ho Fask.

Ar Brezel

Perak, a lavar kalz tud, e Aotre Doue, eur brezel ken hira ha ken skrijus ? Abalamour Doue a gendalc'h er brezel-ma koulz hag er brezeliou all, da ziskuez ar pezh m'eo atao : just ha madelezuz ha da ren ar bed, dre he brovidanz, evit brassa mad an Eneou.

I. — Ar brezel a zo eun testeni deuz justiz Doue

Epad ma chomo an dud heb kaout eur garantez guirion, an eil evit egile evel ma c'hourc'hemen Doue, epad ma ne blegint ket d'ar re o deuz da velet varnho ha ma lavarint ne fell dezho senti n'ag oc'h Doue, na mestr, epad ma krogint e leac'h ma c'hellint, heb guir ebed, epad ma klaskint ho euruzded pe ho baradoz en douar-ma ebken, e savo atao, abred pe divezad, brezel etrezho, pa gavo dez'ho e kavint en emgan ho mad pe ho interest.

Evit guir, Doue gant he oll c'halloud a c'helfe pellaat diouzomp eur seurt darvoud ; mez, pa vez Doue skuiz, o velet hor pec'hejou ken niveruz, daoust a leac'h a zo da veza souezet ma n'a deu ket da zistrei diouzomp ar rivin hag ar goalheuriou a bet seurt, a jachomp, hon-unan, var hor c'hein.

Hag en guirionez, pe hini deuz gourc'hemennoù Doue pe an Iliz n'int ket bet torret ganeomp ? Hano Doue goapeat dre gomzou ha skridou. He zervez sul, a zo bet dilezet evit labourat, mont er mor, heb offeren na gouzperou ; lod all, ne glaskont da zul nemed ebatou an diaoul : dansou, festou, c'hoariou ; kalz n'ho deuz ken soursi nemed rei ebad, plijadur d'ar c'horf dre ar pec'hed udur, dre ar vesventi milliget ; kalz ne sonjont nemet rastellaat ar c'hant n'euz forz penaoz, a verze ho Ene hag eneou ho bugale evit eur guennek benag ! Voassoc'h c'hoaz, hor bro ne felle mui dezhi anaout an Aotrou Doue evit he mestr. Great he deuz lezenou evit miret ne vije desket d'ar vugale er skoliou, he anaout, he bedi, he servicha. Bemdez e veze livet a bet seurt gevier evit he zisprijout, Hen hag he Iliz santel. Lammet a zo bet digant an Iliz kement e devoa, e klask e vije fin anezhi dre an dienez, kalz euz he bugale, a zo bet diframmet euz ho c'houentchou, abalamour ma pedent Doue ha ma labourent evit mad an Eneou, ha kaset er meaz euz ar vro.

Mez, justiz Doue, e deuz atao, he zro abred pe divezad, hag he goaligner a zo pouner. Unan deuz ar re bounera, eo ar vrezel gant an darvoudou a deu d'he heull, tud mac'haniel, lazet, hag aliez ar gernez, ar c'hlenvejou.

Red eo d'comp-ta trei varzu an Aotrou Doue evit goulen diganthen pardoun evit hor pec'hejou ha pec'hejou hor bro, evit goulen diganthen truez.

II. — Rak ar brezel a zo ive eun testeni a vadelez Doue

Ia, Doue hor sikouro, m'an hon deuz eun famik bolontez vad, rak plijout a ra dezhan he vadelez muioc'h eget he justiz.

Evit er guelek sklear, n'ho peuz nemet evessaat, er pezh a zo c'hoarvezed, p'eo digoret ar brezel. Ar feiz e leac'h ma seblante hanter-varo a zo deuet da greski. Soudarded yaouank hag a ioa gounezet gant ar blijadur ha lezirek braz var ho deveriou a gris-

ten, a zo bet chenchet var an heur. Sonj a zo deuet dezho, deuz ar c'hatekizmoù desket evit ho faskou kenta, euz hor Zalver maro evitho var ar groaz, eat int da govez ha da gommunia, kemeret ho deuz eur vedalen benniget ha pedi a reomp bemdez a greiz ho c'haloun. Diouall a reont dioc'h peb pec'hed, ha gouzanv a reomp, heb eur glemmaden ar brassa poaniou, ar skuisher, an naoun, ar zec'hed ha memez ar maro.

Ar brezel en deuz ive starteat ar feiz he kaloun ar re ne rankint ket mont var dachen an emgann. Koumprenet ho deuz e rankent dioc'h-tu distrei ouz Doue dre eur vuez kristen penn-da-benn, dre ar beden great a greiz kaloun, dre ar sakramanchou resevet aliez gant guir feiz. Bep sul an Ilizou a vez karget evit an offerennou, ar gousperou, ar Rozera, ar pedennoù great evit goulenn fin ar brezel hag ar gounid. E Landunvez, epad miz ar Rozera ha goueliou an Oll Zent, oll dud ar barrez, koulz lavaret, ho deuz kommunit evit an Anaoun hag ho zud eat d'ar brezel.

Hor bro Franz a bez he deuz great evel domp. Sklear eo, e za an traou guelloc'h ganthi evit araok. Emgleo a zo brema etre an oll, ha neuz hano ebet ken, koulz lavaret, da ober brezel d'ar religion. Pa c'houlenner eur sikour, evit an dud eat d'ar brezel, ne glevet ken lavaret, ia, ma lakait ho krouadur er skol dizoue. Eun den hag a lavar-fe an dra-ze, a ve hirio disprijet gant an oll. Ia, brema, e peb leac'h, n'euz nemet eur sonj, e n'em glevet, diffen ar vro ha gounit ar c'henta ar viktor.

III. — Bezomp leun a fisianz

Petra vezo evidomp an amzer da zont. Esperer a c'heller e vezo eun amzer a beoc'h, a emgleo, ha euruzded. Seblantout a ra, e ve eur vuez nevez o vont da bara evidomp. An oll o deuz ankounac'heat a taolet a gostez ar pez a lakea etrezho freuz ha disparti, ha dizale e teuo marteze an deiz ma vezimp gulet a-unan, neket ebken evit flastra hon enebourien, mez, ouzpen evit pedi ha servicha ar memez Doue. Kementse, a veler dija pa vez kanet servichou evit ar zoudarded maro er brezel. Tud hag o deveze araok aoun o lakaat ho zreiz e ti an Aotrou Doue, a deu e kreiz an Iliz, da unani ho fedennou gant re an Iliz, ha da zelaou gant evez ar prezegennoù great evit kreski ar garantez evit an Anaoun.

PEDEN EVIT SOUDARDED FRANS

An darn-vuia en em blijo oc'h he lavaret bemdez e kommun, pa vezo ar famill a-bez daoulinet evit ar pedennoù dioc'h an noz.

O Mestr gallouduz, Doue an armeou, taolit eur zell a vadelez var armeou Frans. Ni Ho ped evit hor zoudarded, hag evit kement hini a zo galvet gant ho dever var an dachen a vrezel; hi a zo hor beleien, hor c'herent hag hor mignoned. Hor c'huiteat o deuz evit mont da zifenn hor Bro, merc'h hena oc'h Iliz. Ho lakaat a reomp dindan skoazel ho Providans madelezuz: grit ma chommo gantho ho iec'hed hag ho nerz-kaloun, ha roit dezho ar viktor var ho enebourien displeal, evit m'or bezo ar joa d'ho gulet o tistrei, ar c'henta ar guella.

Ni Ho ped, ô va Doue, evit hor zoudarded *glazet*: roit dezho nerz da c'houzanv ho foan, rentit dezho ar iec'hed, ha grit ma teskint kaout sonj, en eur zougen ho gouliou gant henor, euz ar gouliou en deuz ho Mab divin resevet dre garantez evidomp.

Ni Ho ped, ô va Doue, evit hor zoudarded *a dle mervel*: plijit dousaat ho foaniou, rei dezho graz ar zakramanchou diveza, ha dreist-oll digemer mad er Baradoz. Ra dalvezo ar zakrifiz euz ho buez evit kaout dezho ar pardoun euz ho oll fec'hejou, hag euz pec'hejou ho bro Frans.

Ni Ho ped, ô va Doue, evit hor zoudarded *skoet var an dachen*: marvet int evit difenn hor bro gristen; ankounac'hait ho faziou, dalc'hit sonj euz ar boaniou gouzanvet gantho gant kement a gouraj ha resevit anezho dizale e rouantelez ar peoc'h hag an eürusted.

Kaloun Zakr Jezuz, gouzout a rit ez eo echu brema var menez Montmartr an iliz savet en oc'h henor gant ar Frans glac'haret, ha deuet adarre da veza fidel; ni or beuz fizians ennoc'h, bezit truez ouzomp, saveteit ac'hanomp!

O Guerc'hez Vari, ô Itroun Varia Lourd, Patrounez Frans, kinnigit hor pedennoù da Jezuz, ho Mab divin. O c'hui a zo gallouduz evel eun arme soudarded prest da zailla var ho enebourien, astennit ho skoazel oll-gallouduz var hon armeou, ha roit dezho ar viktor!

Silvidigez ar re glanv, pareit hor zoudarded *glazet*!

Skoazel ar bec'herien, digorit doriou ar Baradoz d'hor zoudarded a varv var an dachen!

Konsolasion an dud ankeniet, kennerzit ar famillou a zo en anken hag er glac'har!

Sant Mikeal, eal gardian ar Frans; Sant Louis, hor Patroun gallouduz; Plac'h eüruz Jeann d'Arc, digaset gant Doue da zeli-vra hor bro, goulennit evit hon armeou ar viktor, hag evit ar Frans ar pardoun.

Evelse bezet great!

Breuriezh ar Feiz hag ar Sainte-Enfance

D'ar iaoù 3 a viz kerzu gouel sant Fransez Xavier, patroun breuriezh ar feiz. En dervez-ze pe en deiz ma karor epad an eizved, kement hini a zo er Vreuriezh a c'hell gounit eun induljanz plerier gant ma vezint bet o kommunia.

Breuriezh ar feiz hag ar Sainte-Enfance, eo ar breurieziou a blij ar muia da Jezuz, hor Zalver. Perak? Abalamour, kenvreudeur breuriezh ar feiz, dre ho guennek ar sizun, ha bugaligoù ar Sainte-Enfance, dre ho guennek ar miz, a labour evel Jezuz da c'hounit Eneou da Zoue ha da zigeri d'or ar baradoz d'ar bayanet keiz.

Varlene aluzen parrez Landunvez a ioa kresket a 23 lur evit Breuriezh ar feiz hag a 20 real evit ar Sainte-Enfance. Er bloaz-ma e vezimp ken brokuz, rak izoum hon deuz da blijout da Zoue evit ma tigasso d'ar gear d'euz ar brezel ho bugale d'ar mammou, ho voazed d'ar gragez, ho zadou d'ar vugale. An aluzennoù a vezo destumet e kourmansamant miz kerzu ha roet pe d'ar veleien, pe d'ar re a ingal lizeri Breuriezh ar feiz hag ar Sainte-Enfance.

Gouel ar Ver'hez consevet dibec'h, 8 a viz Kerzu

Deiz ar gouel, offeren vintin er Bourg, da 7 h. Offeren bred e Kerzent da 10 h. Gousperou gant bennoz ar Sakramant da 2 heur hanter. Den ne vanko da zont en dervez-ze d'ar chapel da bedi an Itroun Vir Sikour evit ar zoudarded hag ar peoc'h.

Gouel Sant Stephan, 26 a viz Kerzu

D'an deiz-ze e vezo adarre resevet arc'hant ar beden-zul hag ar c'hadoriou. Digaz numero ar gador. An nep a garo a reglo araok.

An dra talvoudusa

E penn kenta ar vrezel, itrounezet a ieaz da gaout an Aotrou kardinal Sevin, arc'heskop Lyon.

— Deuet omp, emezho, da c'houlen diganeoc'h pe labour a c'helfemp ober brema, an talvoudusa evit ar Frans.

— Itrounezet, a respountaz an Ao. Sevin, na meuz nemet eur ger da lavaret var gementse. Talvoudusa tra a c'helfac'h da ober brema evit ar Frans, eo mont d'an oferen bemdez ha kommunia bemdez. Rag dioc'h ma viot unanet gant an Aotrou Doue eo e talvezo al labouriou all a c'helfac'h da ober:

E guirionez kinnig da Zoue korf, goad hag ene Jezuz-Krist sakriflet var an aoter evel var ar Groaz, hag en em ginnig hon-unan asambles ganthan — eo rei d'hon oberiou eun dalvoudegez divin, — eo lakaat eun Doue-Den da adori, da drugarekaat, da repara, da bedi en hor plas hag asambles ganeomp, — eo gounid kaloun Doue hag obten silvidigez hor bro.

BLOAVEZ MAD

— Bloavez mad d'id, Fanch.

— Bloavez mad, Bi. Deuz da gemeret eur banne, ta !

Setu daou vanne, unan paet gant Fanch, unan gant Bi.

— Bloavez mad, Saik !

— Bloavez mad, Bi. Ne gemeri ket eur banne ganen ?

Sada ! Daou vanne all. Bi a zo laouen.

— Bloavez mad, Per.

— Bloavez mad, Bi. Red eo kaout peb a vanne, ket ta ?

Adarre daou vanne. Bi a zo ruz he gribel.

Pa en deuz Bi achuet tro he gamaladed, ma c'hell echui, kuezra ra er fos, mezo dall, hanter vouget gant he gofad : eur bloavez koumanset mad, e guirionez !

— Na gredan ket refus, eme Vi.

Neuze, Bi, poent eo en em lakaat er Groaz-Ven, hag e c'helli respout :

— Bennoz Doue deoc'h ! Me meuz roet va hano d'ar Groaz-Ven. Goaz oun. Ne c'hellan ket mankout d'am ger. Banne ebet, nag hirio na varc'hoaz na biken !

(Ar merc'hed ne vo ket falloc'h dezho ober evel Bi, p'en em laka er Groaz-Ven.)

Evit ar Zoudarded prizouniet

LIZIRI. — Skriva var eur garten, pe var eul lizer en eun envelop digor. Lakaat ger evit ger an adres en deuz roet ar prizounier ; hag oc'hpenn, an daou c'her VIA PONTARLIER. Timbr chet.

ARCHANT. — Prenit er post eur mandat-carte international : ugent real, dek lur, ar pez a geroc'h. Var an tu cnep, skrivit adres ar prizounier. Oc'hpenn, lakit ar geriou-ma : **CONTROLE GENERAL DES POSTES, BERNE (SUISSE).**

DILLAD, BEVANS, LOUZOU. — Grit eur pakad (10 lur pouez d'an hirra). Grit varnhan eur vouchouer pe eun tam lienaj. Var ar vouchouer skrivit an adres, hag ar geriou-ma oc'hpenn : VIA GENEVE (SUISSE) ; kasit d'ar gar tosta ha paet daou wenek evit ar port. Ar gar a raio teir feuillen : unan evit an train ; diou evit an douan. Red eo diskleria petra zo er pakad. Arabad lavaret pegement e tal.

Ehaz E C'HELLIT LAKAD dillad, bevans, louzeier ; DIFENN ZO LAKAAT traou a c'helfe BREINA (kig, frouez) pe FUILL (guin, sirop, etc.) pe DEVI (allumettes, briquet-petrol). Setu aze an aliou roet gant an Agence des prisonniers de guerre, 26 bis, rue François I^{er}, Paris, 8^e arr.

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, broudeur da Jesus-Krist heritourien d'ar Barados :

Paeroun :

Maerounez :

30 Here Jean-Marie Pelleau, Kerguen.

Jean-M. Provost.

M.-R. Fourn.

6 Du Marie-Y. Corolleur, Pen-Frat.

Yves Héliez.

Joséphe Chapel.

Magnificat.

Gourvadezed

31 Here Kraouadur Kersaudy, Arc'hantel.

4 Du Kraouadur Trébaol, Arc'hantel.

Eat d'ar Baradoz

9 Du Denis Perhirin, 5 bloaz, Arc'hantel.

13 — Kraouadur Cadalen, 1 minut, Streat-Lann.

A zo pedet da ober eun hanter-heur Adoration d'ar zul 13 a viz Kerzu

11 h. 1/2. — Clémentine Allouer, Jeanne Floch, Jeanne Kerjean, Marie Minguay, Bourk.

12 h. — An aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean-Marie Pondaven, François Jézéquel, Bourk.

12 h. 1/2. — Ar skol gristen.

1 h. — Anne Le Ven, Marie Autret, Marie-Yvonne Théréne, Marie-Jeanne Perhirin, Kerc'hoazoc.


1 h. 1/2. — Monique Floc'h, Joséphine Coatanéa, Rochard, Marie-Jeanne Jaouen, Marie Vidamant, Arc'hantel.

Kannadik miz du en deuz koustet 18 lur 5 guennek :

Bet evit sikour er paca, digant : M.-J. K., P. R., J. K., pep a 8 real ; M. C., J. M., P. C., pep a 6 real ; C. G., J. F., J. P., pep a 4 real ; C. G., 8 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4,



MIZ GENVER

1. GUENER KENTA. Gouel AR MABIK JEZUZ SIRKONSIZET. Jezuz a skuillaz evidomp beradou kenta he c'hoad, pa n'ez oa nemet eur bugelik 8 dervez. Kennigomp dezhan he C'hoad oll resevet er gommunion, ha pedomp anezhan da zellet a druez ouz goad bugale ar Frans, a rüill var an tachennou a vrezel.

3. Sul HANO SANTEL JEZUZ. Sant Ian Gapistran a zaveteaz, dre zikour Hano Jezuz, eur gear kelc'het gant an Turked. Hano Jezuz a zo ken gallouduz ato : pedomp dreizhan, hag ar vrezel a vellaio evidomp.

10. Oferen ha gousperou GOUEL AR RONANED. Goulen dre an Tri Roue ma lakaint ar peoc'h etre rouaned an Europ, ha ma pado ar peoc'h etre ar gristenien e peb bro.

17. Oferen ha gousperou an EIL SUL GOUDE AR ROUANED : Jezuz en eured Kana, o chench an dour e guin : ar mirakl-ze a zo eur skeuden euz eur mirakl kaeroc'h a ra Jezuz meur a dro bemdez, pa jench bara an oferan en he gorf sakr, hag ar guin en he c'hoad, dre he gomsou azlavaret gant ar belek.

24. Oferen ha gousperou an TREDE SUL GOUDE AR ROUANED. Jezuz a lavaraz d'an dud lor pareet ganthan mont d'en em ziskuez, d'ar veleien. Dre-ze e felle d'ezhan deski deomp pegen braz respet ha doujans e tle ar guir gristen dougen d'ar belek, a zo eun « eil Jezuz-Krist ».

31. Oferen ha gousperou AR SEPTUAGESIM. « Rouantelez an Eny, eme Jezuz, a zo henvel ouz eun tad a famil. » Hon Tad eo an Ao. Doue, en deuz krouet, diouallet, prenet ha maget ac'hanomp. Dre ar vadiziant omp deuet da veza he vugale. Ha sentuz ha karantezuz aoualc'h e vezomp-ni ?

2. C'huevrer (meurs). AR CHANDELOUR. Oferen evel bep sul. Ar gouel-ma a zigas deomp da zonj euz Jezuz digaset d'an Templ (pe iliz) gant he dad mager hag he vam, Joseph ha Mari. Boazomp ar vugaligou, abred, da zont da iliz ar barrez, da anaout a naoter, an Tabernakl, Jezuz beo er Zakramant.

BLOAVEZ MAD

Ar C'hannadik a grog gant ar bloavez nevez, en he dri bloaz hanter. Epad an amzer-ze, en deuz, guella ma c'helle, skignet dre ar barrez-kentelliou kristen ha poaniet da lakaat peb den var hent ar Baradoz, en eur lavaret bepred ar virionez. Avichou, e kaver kaled, klevet ar virionez ; evelato pa vouezer e vez lavaret dre garantez, eleac'h enebi ouz ar re he frezek, e vezont trugarekeat. Setu perak, e vez digemeret bep miz ken laouen ar C'hannadik en oll diez. Netra eno souezus, en eur barrez kristen evel Landunvez.

Daoust a ne ket aberz Doue e teu, an oll aliou, an oll gentelliou a zo enn'han, rak al labour a fell dez'han ober e touez he lennerien, eo, ho startaat en ho feiz, ho zikour da veza guelloc'h kristenien. Er penn

kenta euz miz genver, e reket dez'ho oll eur bloavez mad hag euruz. Ar reked-ze, lennerien, a vezo sevenet evidoc'h, m'a talc'hit ; bep mintin, epad ar bloaz-ma, da ginnig ho tervez da galoun Jezuz oc'h en em rei dez'han da vad. Dre-ze oc'h oll oberiou, oc'h oll boaniou, oc'h oll ankenniou pounner, epad ar brezel, a vezo a-unan gant oberiou ha poaniou kaloun Jezuz. Ho puez a vezo buez Doue menoz pe guir e vezo dalc'had unanet gant he vuez. Ha ne ket kement-ze eur bloavez mad, ar guella a oufac'h da reketi d'eoc'h oc'h unan a d'an eneu m'ho peuz karantez evitho.

Ar c'hannadik a reket ive d'he oll lennerien, kaout fizians ha nerz kaloun, epad an darvoud spountuz a zo koezet vanho dre ar brezel. Ho fedi a ra da genderc'hel da hedi a greiz kaloun ha da ren eur guir vuez kristen. An naved pedennou, goulennet gant oll Eskibien Franz, deuz ar 4 d'an 13 euz ar miz diveza, a zo bet great er barrez gant mall a joa. Epad an naved, en despet d'an amzer fall ha d'ar veach hirr evit lod, an Iliz a veze karget da offeren ar pedennou hag an oll a zaouline gant feiz ouz an daol zantel, ha pa veze diskennet Jezuz er galoun e pedet gant muioc'h ha fizians. Doue hag ar Verchez, da gaout truez ouz ar Frans, da rei dezhi ar gounid vad he enebourien ha da ziaual he zoudard dioc'h pep drouk.

Petra a zo kaoz m'ar deo bet beteg vrema, diouallet soudarded ar barrez diouz ar maro ha pareet ker buan ar re glazet, nemet ar volonteiz vad a ziskoez ho zud da zont eul loden bemdez, an oll da zul, d'an offeren, da gommunia, d'ar Rozera, d'ar gousperou ha d'ar pedennou great evit goulen ar peoc'h hag ar gounid.

Unan ebken deuz bugale ar barrez, François Guyader, den dispount ha leun a nerz kaloun, evel an oll martoloded, a zo bet diskaret e Dixmud er Belgique. Pedomp evithan, kemeromp perz he glac'har he bried ha ra blij da Zoue he c'honsoli ha beza he-unan tad he bugaligou.

AR C'HLAS 15

Ar c'hlas 15 a rankas mont en hent, raktal m'oa bet galvet. An Aotrou persoun n'en devoa ket ta gallet rei dez'ho an aliou mad a roe abaoue 20 vloaz da oll zoudarded ar barrez araok ma zeant d'ar zervich.

Bet eo eurussoc'h evit ar c'hlas 15 hag ar re ajournet galvet asamblez gantho. Lavaret en deuz an oferan evitho en dervez araok ma z'eant en hent. Gant plijadur en deuz o guelec'h o taouline ouz an daol zantel epad an oferan-ze hag o tont da gerc'het medalen ar skapular ha da selaou aliou roet dezho evit brassa mad ho enepou. Kemeret e bet ho hano hag al leac'h ma zeont da ober ho zervich, evit ma c'hellor kas dezho, dre ar C'hannadik, keleier fresk ar barrez.

Claude Le Borgne, er 47° linen, Sant-Malo.
Yves Chapalain, er 1^{er} zouaved, Sant-Denis.
Joseph Foll, er 64° linen, Ancenis.
Jean-Louis Foll, er 64° linen, Ancenis.
Jean-Marie Guennégues, er 65° linen, Naonet.
Goulven Guennégues, er 65° linen, Naonet.
Jean Kerhuel, er 47° linen, Sant-Malo.
Jean-Louis Milin, er 71° linen, Sant-Briek.
Joseph Perchoc, er 43° linen, Guingamp.

Claude Taloc, er 4^e linen, Ville-Moustaussou.
François Trébaol, er 4^e artillerie var droad, Lorient.
Joseph Trébaol, er 4^e artillerie var droad, Lorient.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk er skol gristen, dre ho labour hag o zentedigez :

Kenta klas.	}	Tredre klas.	}	Philomène Magueur.
Kenta rummad.				Euphrasie Maguerez. Pauline Morvan.
Eil rummad.	}	Kenta rummad.	}	Ernestine Guéna. Francine Cong. Rosalie Croguennoc. Marie Squiban. Eugénie Morel. Josephine Lescop.
Tredre rummad.				Marie Derrien. Françoise Le Guen. Augustine Talarmin. Marie Jaouen.
Eil klas.	}	Eil rummad.	}	Catherine Talarmin. Madeleine Prigent. Yvonne Magueur. Suzanne Léostic. Marie Perchoc. Marie-Anne Le Borgne.
Kenta rummad.				Marie Gouzien. François Hélias. Marie-Renée Croguennoc. Françoise Hélias. Joseph Allegot. Marie-Yvonne Allegot.

A N A M Z E R

Ar Zaozon a lavar : An amzer a dal arc'hant. Ar gristenien a lavar : An amzer a dal goad Jezuz-Krist, skuillet evit paea priz hon eneou. An amzer a zo eun dra zantel. Arabad koll hon amzer. Tremen a ra buan. Dioc'h ar mintin, an dervez a vez kavet hir. Bloaz goude, daoust hag an dervez n'eo ket bet berr ? Ar bloavezh he-unan, 365 dervez hir, na pegen berr eo ! e spered eun den 40 bloaz, he amzer soudard zo ken tost c'hoaz ! Ma'z euz ken berr amzer da veva, bevomp mad, na gollomp ket eur minuten !

Oc'hpenn, ne ouzomp ket pegeit e pado an nebeudik amzer roet deomp. Varc'hoaz marteze e vo echu, marteze hirio. Bep dervez a c'hell beza an diveza. Arabad he goll !

Erfin, an amzer n'eo ket deomp, mes da Zoue hor mestr. Red eo renta kont ha beza implijet mad an tachadik fiziet ennomp, ma fell deomp kaout hor c'houmanant eternal.

Petra da ober eta ? Pa vez poent labourat, labouromp. E poent ar beden, pedomp. En amzer an ehan, ehanomp. Klaskomp bolontez Doue da genta, hag an nemorant a zeuio deomp var ar marc'had. Pa vezimp oc'h ober bolontez an Ao. Doue, fors peur e teuio d'hor c'herc'hat, e kavo ac'hanomp prest ha mad.

ROIT BELEIEN D'HO POBL

Ugent mil belek zo eat d'an arme. An hanter deuz beleien eskopti Kemper o deuz lezet ho farrezioù, skolachou ha skolioù : brezellekaat a reont ; difenn a reont tud ha traou, ha feiz ho c'henvroiz.

Pet a zeuio en dro ? Bemdez ar c'hazetennou a verk hanoù beleien lazet ; a douez ar re a zistroio d'ar gear, meur a hini a varvo dizale, uzet dre boaniou ar vrezel.

Pet belek a jomo da zoursial ouz an eneoù ?

Ar gloareged ho-unan, a 19 da 24 bloaz, o deuz kimiadet euz ho Seminer, an darn vrasa anezho. Ho rejanted a zo eat da zoudard, evelldho. Nebeut a gloareged a vezo beleget, ac'han d'eun tachad brao.

Sonjit pet bloavezh studi a rank ober an den iaouank araok gouzout ar pezh a zo hanvet « he vicher » gant kristenien laosk pe fall ! C'huoc'h bloavezh skolaj, pemp bloaz seminer, hag an tri bloaz soudard var ar marc'had : pevarzek vloaz etre koumans hag echui, pevarzek vloaz araok ma c'hello ar c'hrouadur dek vloaz kregi el labour laosket gant ar belek maro var an dachen !

Va Doue, roit beleien d'ho pobl, pe an eneoù a varvo stank ! Rag dre ar belek o vadezi, e teu ar feiz, ar vuez kristen d'an den ; dre ar belek o pardouni, e teu ar vuez dezhan en dro, p'en deuz lazet he ene dre ar pec'hed ; dre ar belek oc'h oferenna, e vez maget ar c'hristen o konnañ ; dre ar belek oc'h eureuji, e vez savet ar famillou kristen ; dre ar belek o prezeg, spered ha kaloun ar c'hristen a vez sklerijennet ha kennerzet ; dre ar belek ouz he noui, ar c'hristen a vel doriou an Env o tigeri d'hen reseo. Hent ar baradoz a vezo re ziez, ma ne deu ket ar belek d'he gompeza ; hag an eneoù dinerzet a varvo. Beleien deomp, o va Doue !

Peurvuia evelato, an Ao. Doue ne gemer ket ar vugale da veza he veleien, ep asant ho c'herent. Aliez soken, an tad hag ar vam eo a dle ober d'ho re vian sonjal e gloar ar velegiaj. Tadou, mammou, brema muioc'h eget hiskoaz, preparit beleien da Zoue. Arabad kaout aoun.

Dispign a vezo. Tud a c'hrosmolo. Sikour a vanko d'an tiegez... Lakeomp an oll digareziou a c'hell beza savet. Ne dalvezont seurt. Beleien a ranker kaout. Ar gerent kristen a dle ho rei da Zoue ha d'ar bobl kristen.

Penaoz en em gemeret ?

Araok he c'hinivelez, konsakrit ho pugel da Zoue. Kit aliez dirag ar Zakramant ha kinniget dezhan he grouadur. Pa gommuniit, livirit da Jezuz unani ganthan an hini a c'hoantait e ve beleg eun deiz. Pedit ar Verc'hez ma preparo korf hag ene ho pugel, evel ma reaz da Jezuz. Ha dreist oll, en em zantelañ : tad ha mam eur belek, tad ha mam eun eil Jezuz-Krist, a dle rei dezhan eur goad ken pur !

Pa vezo bet ganet ar c'hrouadur, dalc'hit da bedi evithan, da c'houlou evithan henor ha vertuzioù ar velegiaj, dalc'hit d'he gas dirag Jezuz beo er Zakramant ha dirag imaj ar Verc'hez, dalc'hit d'en em zantelañ. Abred abred deskit dezhan he bedennou ; boazit-hen da anaout ha da garet an ofisou, ar gommunion ; grit dezhan darempredi ar Zent iaouank douget evit ar Zakramant : S. Tarsizius, S. Louis Gonzag, S. Ian Berchmans, Jeann d'Arc, etc.

Grit ma tigo ro he spered abred, ma vervo he galoun gant kement zo mad ha santel. Ha kasit-hen da bersoun ho parrez, gant fizians : Doue a ouezo mad hentcha he zervicher.

Ha hep tro ma vezo digoret dor an Env d'eur c'hristen gant ho map, hep tro ho kurunen-c'hui a gresko skedusoc'h : eul loden o pezo bet en he zilvidigez.

An Ao. Doue a fot dezhan kaout beleien evit he bobl : kerent kristen, roit beleien da Zoue ha d'an eneou.

VA MAM E DEVOA KOMMUNIET

Eur zulvez, pa oan bugelik c'hoaz, edon ouz taol gant va zad koz, o tebri va souben epad an oferen vintin, goude servich ar chatal. Tad koz en doa lakeat eur boned gloan var he benn : rag an amzer oa ien. Dizale e klevchomp trouz an dud distroet euz ar bourk, ar bouteier o strakal var an douar kalet, ar moueziou o trouzia pe o c'hoarzin... an oferen oa echu.

Dor an ti a zigoraz en eur vigourat. Va mam eo a deue en dro, eur vuze'hoarz var he muzellou. Eul lamm a rajon, prest da bokat dezhi ha da grial devez-mad dezhi : mes, e chomiz a zav ; va zad koz n'oa ket mui azezet. Soun en he zav, he voned en he zourn, he benn plegét eun nebeut gant respet, ne finve ket. Ne finvaz ket, ken sioul hag en iliz d'ar gorreou, beteg ma oue pignet va mam d'an astaj da jench he dillad.

Sellet a rean ouz tad koz, souezet meurbed.

— Lomik, emezhan d'in goestad, da vam e deuz kommuniet en oferen. An Aotrou Doue a zó deuet ganthi en hor c'hear. Red oa he saludi.

Na meuz ket dizonjet abaoe, petra benag tad koz ha mam-mik a zo nijet pell zo d'ar bed all. Ha pa velan kristenien keaz o tont euz an iliz en eur c'hoarzin, p'ho c'hlevan o krial var an hent-chou ha var dreujou an ti, pa n'o deuz ket an disterra respet evit an Doue-Den sakrifiet dirazho en oferen pe diskennet enno dre ar gommunion, e kinnigan d'ar Zakramant respet ha karantez va zadou koz, d'Hen digoll eun nebeut.

Goude ar gommunion, Korf, Goad, Ene, Divinite Hor Zalvei Jezuz-Krist a jom en hor c'horf keit hag ar spesou sakr (var dro eur c'hart heur) ; pa vez teuzet ar re-ma, Korf, Goad, Ene Jezuz a nij kuit diouzomp ; mes he zivinite, he vuez, an Dreinded a jom ennomp. Dougomp respet da Jezuz o veva ganeomp.

VA GER

Ma kav deoc'h ez euz bet eun amzer guelloc'h evit ober pinijen eget amzer ar vrezel 1914, livirit d'in pehini amzer, ha me ho paeo evit ar c'helou-ze. Rag n'euz bet morse milionou tud oc'h en em laza, gant ijinou spountuz, evel er vrezel-ma. N'euz bet morse kement a dud o vont dirag ho Barner, na famillou ken niveruz rivinet, pe diskaret, pe lakeat e kaon ; n'euz bet morse netra ken truezuz. Pedit evit kaout eur peoc'h trum ha gloriuz, a zo mad. Ar binijen a roio ar brasa nerz d'hor pedennou.

Pehini pinijen ? Unan zo, eaz ha diez er memes amzer : diez, rag tud zo a lavar ato : « N'oun ket goest, petra fell deoc'h ! » ; eaz,

rag nebeut a dra eo, eur bannac'hik da lezel a gostez. Ia ! list ar bannec'h, hag ep douetans ebed ar peoc'h a zeuio abretoc'h, nebeutoc'h a dud a vo lazet, hag an Ao. Doue ho pennigo.

Bloaz hanter zo, eur paotrik eiz vloaz a Enez-Eusa, a ioa pedet gant he dud da gemeret eur verennadik kassis. — Ket, emezhan ! Me zo er Groaz-Ven. — N'oud ket, eme he dud ; ne peuz ket sinet c'hoaz. — Guir eo ; mes pa meuz roet va ger !...

Roit ho ker. Laoskit ar bannec'h : grit pinijen evit ho paotred hag ho koazed a zo e kreiz an tan.

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien d'ar Baradoz :

- | | | |
|----------|-------------------------------------|---------------------------------|
| | Paëroun : | Maërounez : |
| 28 Du. | Jean-Yves Godebert, Kersent. | Yves Thomas. Marie Godebert. |
| 7 Kerzu. | Marie-Jeanne Guennégues, Penfoul. | V. Le Borgne. M.-F. Débosq. |
| 14 — | Marie-Yvonne Habasque, Streat-Doun. | Laurent Floc'h. M.-J. Habasque. |

ENTERRAMANTOU

A zo bellakeat e douarsantel ar vered, da c'hedal dez ar varn e goashed ar Groaz

- | | |
|----------|--|
| 27 Du. | Michel Cadalen, 61 vloaz, Streat-Lann. |
| 4 Kerzu. | François Guyader, 30 vloaz, Dixmude, Belgique. |
| 4 — | Baziline Paumellec, 78 vloaz, Naonet. |
| 7 — | Gabriel-François Le Hir, 72 vloaz, Penkear. |

Eat d'ar Baradoz

- | | |
|----------|---|
| 2 Kerzu. | Marie-Yvonne Perhirin, 21 miz, Sant-Samson. |
| 9 — | Guillaume-Marie Provost, 2 miz, Kersent. |

A zo pedet da ober eun hanter-heur Adoration d'an eil zul a viz genver


- | | |
|------------|--|
| 11 h. 1/2. | Jeanne Kerboul, Marie-Yvonne Lescop, Joséphine Godebert, Jeanne Floc'h, Bourk. |
| 12 h. | An aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, François Ollivier, Bourk. |
| 12 h. 1/2. | Ar skol gristen. |
| 1 h. | Jeanne Skiban, Anna Skiban, Bourk ; Marie-Yvonne Lunven, ti-pri ; Françoise Sylvestre, poulou-pri. |
| 1 h. 1/2. | Michelle Le Ven, Marie Fourn, Marie-Anne Fourn, Joséphe Arzel, Kerzent. |

Kannadik miz kerzu en deuz koustet 18 lur 5 guennek :

Bet evit sikour er paea, digant : M. P., M. L., pep a skouet ; P. J., 8 real ; L. T., M. A., H. G., M. F., A. C., P. O., pep a 4 real ; A. T., J. T., pep a 6 real ; M. M., M.-A. G., E. G., G. D., M. D., M. J., P. M., E. M., M. S., M. V. J. J. pep a 2 vennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



MIZ C'HUEVRER

2. Dimeurs. Oferen ha gousperou ar CHANDELOUR ; gouel ar Verc'hez o kinnig ar Mabik Jezuz da Zoue he Dad, e Templ pe iliz Jeruzalem. Ar Verc'hez a blegaz d'al lezen a c'hourc'hemene d'ar mammou mont d'an Templ, d'en em burifia : goulskoude n'e doa ket d'heñ ober, hi ar zantela euz an oll grouadurien. Deskomp dre-ze senti ouz oll lezennou an Iliz.

7. Oferen ha gousperou ar SEXAJEZIM. Dre ma tosta amzer santel ar C'horaiz, en em breparomp dre eur beden aketusoc'h, komsou furoc'h ha devotoc'h, labouriou ha poaniou kinniget da Zoue e spered a binijen.

14. Oferen ha gousperou ar CHUINKUAJEZIM. En deiz-ma e tigor Adorasion ar C'harant-Heur, e darn vuia ar parrezioù. Bis-koaz n'euz bet brasoc'h izoum da bedi a-unan gant Jezuz, beo er Zakramant espozet. Hen eo, hag Hen epken, a c'hell adori, meuli, digoll ha pedi he Dad gant eur galoun deread, pa 'z eo divin. Dreiz-Han ec'h obtenimp santelez ha nerz-kaloun evidomp, iec'hed ha viktorezh d'hor zoudarded, peoc'h ha gloar d'hor bro, eurvad d'an Iliz, silvidigez d'an eneoù.

17. MERCHER AL LUDU. « Dalc'h sonj, eme ar belek en eur lakaat al ludu henniget var dal ar c'hristen, dalc'h sonj oud ludu hag e zi e ludu eun deiz ! » Ar zonz-se a viro ouzomp euz an orgouil, hon lakaio da brepar hor maro, a rai deomp kaout eun eternite euruz : « Sonjit en ho finvezioù diveza, ha ne bec'hot morse. »

21. Oferen ha gousperou SUL KENTA AR C'HORAIZ. Stagomp d'ar binijen a galoun vad : dre ar groaz ez eer d'ar c'hloar. Ha dre hor pinijen e vezo pardounet pec'hejou ar vro.

28. Oferen ha gousperou EIL SUL AR C'HORAIZ. « O pet truez ouzomp » ar c'homzou-ze euz an Aviel a verk deomp peger braz izom on deuz euz madelez ha galloud an Ao. Doue, ni ken bresk ha ken pec'her. Pedomp gant feiz, ep ehan, ep koll fizians, ha Doue hor selaouo, er mare an dereata.

LEZEN AR C'HORAIZ

Red eo ober pinijen epad amzer santel ar C'horaiz ha miret lezennou an Iliz divar benn ar iun hag ar vijil. Al lezen-ze a verk e rank kement hini o deuz 21 bloaz echu iun epad ar C'horaiz bemdez nemet da zul ; ar re zo en oad a skiant a rank chom ep debri kig epad ar C'horaiz.

Aotreef zo gant an Tad Santel ar Pab debri kig d'ar zul d'an oll brejou, hag ive da eur pred d'al lun, d'ar meurs, d'ar iaou, d'ar zadorn (da zadorn ar c'hoatueriou, ha d'a iaou ha sadorn er Sizun santel, e ranker evelato ober vijil).

An dud n'emañ ket e tro da iun abalamour d'ho oad, d'ho sempladurez, d'ho labourou tenn, a c'hell debri kig bemdez ha da bep pred, nemet d'ar merc'her ha d'ar guener.

Viou a c'heller debri bemdez nemet da Vener ar Groaz. Mes ar re o deuz da iun ne c'hellont ket debri viou d'ar pred bian da noz. Evit *prepari* ar boued, e c'heller lakaat gres (soa, lard) e leac'h aman, d'an deizioù vijil, nemet da Vener ar Groaz.

Ar gristenien o devezo bet dispans ar C'horaiz, a dle ober eun aluzen evit oberiou mad an eskopti, a gresk bemdez ho niver hag ho izomou. Ar beorien ha ne c'helfent ket ober eun aluzen zoken dister, a lavaro, bep sizun er C'horaiz, 5 *Pater* ha 5 *Ave* evit izomou ar Frans ha re an eskopti.

AR RELIJION GRISTEN A ZO DIVIN :

Rag eur burzud divin eo
pegen buan ha pegen lark e oue skignet

E nebut bloavezioù, hor relijion gristen a oue skignet dre bevar c'horn ar bed. Kalz traou ha kalz tud a enebe outhi goulskoude, ha tud dic'halloud a brezege anezhi. Perag eo deuet a benn da badout, nemet dre ma 'z oa nerz Doue ganthi ?

Da genta, AR RELIJION A OUE SKIGNET ABRED dre ar bed oll. Ugent vloaz goude ma 'z oa Hor Zalver pignet d'an Env, S. Paol a skriva da gristenien kear Rom : « Ho relijion-c'hui a zo bet prezeget d'ar bed oll. » Seiz-ugent vloaz goude, Tertullian a lavare d'ar baianed : « Kement ez euz ac'hanomp-ni kristenien, ma'z eo leun ho kearioù, ho manerioù, oc'h enezennou, oc'h emglecioù, oc'h armeoù, ho tribunaliou ; er Zenat emaoomp hag e palez an impalaer !... Ha ma 'z afemp kuit, e vijec'h spountet o velet pegen dezert e vije ho rouantelez ! » Ar paian Tasit a lavare, ug nt vloaz goude maro Hor Zalver, ne c'hellet ket niveri ar gristenien. Ha goulskoude ar baianed a gase d'ar maro kristenien a vilionou, hag an hereteked a zistage meur a hini euz ar guir Iliz. — Naontek kant vloaz zo brema emaoer o klask diskar ar relijion, e peb fesoñ : padout a ra, kreski a ra.

D'an eil, MEUR A ABEK A VIRE ouz ar relijion d'en em skign. Diez oa da gredi ha da heul. Prezeg a rea guirionezioù hag a zo dreist skiant an den. Embann a rea e ranket adori, evel eun Doue, eur Juzeo bet staget ouz eur groaz evel eun torfetour hag eur sklavour. Gourc'hemenn a rea d'an dud dilezel ho sonjou, ho ioulou, ho flijadur, ha dougen ho c'hroaz bemdez evel Jezuz, — beza humbl, dous, chast, pasiant, — gedal an eurusted goude ar maro epken !... Traou diez evit ar baianed hag ar Juzevien. Ar Juzevien a gave braz dilezel ho relijion goz, ho lidou, ho lezennou, kement a ioa buez tud ho ouen abaoe pemzek kant vloaz, evit heul kreden eur c'hrusifiet. Ar baianed, ar Romened, a ioa mistri ar bed oll, pinvidik-mor, desket kenan var skianchou ar bed, boaz d'an oll ebatou ; an hini en doa great staga Jezuz-Krist ouz ar groaz, Pons-Pilat, a ioa gouarner ha barner en ho hano... hag ar relijion nevez a vazhourc'hemenn dezho adori ar memes Jezuz, ha dilezel ho oll vazhourc'hemenn !...

Erfin, TUD DIC'HALLOU A BREZEGE ar relijion. Pe c'halloud o doa an Ebestel ?

Er bed-ma an den zo gallouduz m'en deuz arc'hant, deskadurez, pe armou. An Ebestel n'o doa ket kalz arc'hant ; beva reant pe deuz ho micher pe divar an aluzen : ne c'hellent ket prenañ an dud d'ho relijion. An ebestel n'oant ket tud desket : pesketerien divouizieik, ne ouient na prezeg helavar na skriva komsou brao da douelli an dud. An Ebestel n'o doa ken armou nemet ho fedennou,

ho feiz, ho c'harantez evit Jezuz hag evit an eneoù ; lazet int bet, hag ho diskibien var ho lerc'h.

Ha goulskoude an dud dic'halloud-se, e kreiz kement a enebourien, gant kredennou ken diez ha gant gourc'hemennou ken striz, o deuz skignet relijion Jezuz-Krist, dre ar bed oll, e nebeut amzer.

Eur burzud eo.

Eur burzud na c'hell beza great nemet dre nerz Doue.

Kendaze, Doue eo en deuz skignet hor relijion gristen,

Hag an nep zo enep ar relijion zo enep Doue.

Ar gristenien, a du gant Doue, a reseo ho rekompans en Env.

AR GROAZ VAR AN HENT

Hag henori a c'hellomp-ni ar Groaz, imachou Jezuz-Krist ? Ia, rag oc'h henori anezho, ec'h honoromp Jezuz-Krist he-unan.

Setu ar pezh a lavar al leor katekiz.

Livirit d'in eta perag ec'h henorit ar Groaz pa ema-hi ebarz an iliz, ha n'he henorit ket pa ema var an hent ? Ha c'hoaz, pa dremen ar groaz dirazoc'h o vont da di unan maro, e tennit ho tok hag e chomit peoc'h. Neuze, pa dremenit-c'hui dirag ar groaz-mean staget ouz ar c'hleuz pe savet var an dorgen, pe c'hoaz oc'h astenn he diou vreaoc'h var an dremenidi, salutit kroaz Jezuz.

Dre ar Groaz leun-c'hoad oc'h bet saveteet : grit eur zell a garantez ouz he skeuden livet pe kizellet dirazoc'h ; diskuezit, ha pa ve a vel d'an oll, ez oc'h anaoudek.

Korf Jezuz a zo staget outhi. En iliz e taoulinit devot da reseo korf ho Salver : var an hentchou na nac'hit ket korf Iñs Salver, a vezo ho parner eun deiz ; na vezit ket dievez : korf eun Doue eo, eun Doue-Den sakrifiet evidoc'h.

Ma livirit n'eo ket mui ar c'hiz, m'o peuz aoun euz goaperez an dud dizeblant ha diskiant, klevit : ar Brusianed hag hi ne daolont ket a bep seurt dismegans var drapo Frans ? ha n'eo ket drapo Frans, goulskoude, karet, henoret, difennet gant ar zoudard e kreiz an tan ? Mad, ar Groaz a zo merk Jezuz-Krist, drapo ar gristenien ; seul vuioch a zisprij a vez great varnhi, seul garantezusoc'h e tleit delc'her dezhi. Ar verzerien, ho tudou koz, a skuillaz ho goad evit-hi ; c'hui, tennit ho tok, da viana : eaz eo, hag eun dra red eo.

« N'o peuz ket bet mez oc'h anaout ac'hanon dirag an dud : n'am bezo ket mez oc'h anaout ac'hanoc'h dirag va Zad. » Setu petra lavaro Jezuz deoc'h, da zeiz ar varn.

BERR HA MAD

Tri zra : taolit evez !

1. Ar pezh a zispignit evit ho plijadur, a zo kollet da viken.
2. Ar pezh a espernit ep he zispign, a dremenno da re all var ho lerc'h.
3. Ar pezh a zispignit en oberiou mad, a baeo ho plas er baradoz, hag oc'h penn, e sikouro re all da vont di ganeoc'h.

DEVER STRIZ D'EN EM ZIKOUR AN EIL EGILE

Ar gristenien a dle e peb mare en em garet ken etrezho, hag ar garantez-ze ne dle ket epken beza en ho c'haloun ; he diskuez a dleont oc'h ober vad an eil d'egile, oc'h en em zikour. Mareou e vez hag e ranker c'hoaz ober evit ar re all muioc'h eget e poent all, p'o devez muioc'h izoum da veza sikouret.

Brema ema an amzer-ze. Kalz, kalz goazed siouaz ! o deuz ranket mont d'ar vrezel. N'int ket rouez an tiez n'euz mui goaz ebet enno.

Daoust hag al labouriou red a ranko, abalamour da-ze, chom da ober ? Nann. Al labouriou-ze a dle beza great. Red eo e ve trempet an douarou, red eo e vent gounezet, rak anez ne vo ket a vara er bloaz a zeu hag e ranko kalz tud dua gant an naoun.

Kendaze ta, red eo e ve sikouret da labourat ho douar an tiegeziou n'ema ket ho zud er gear d'hen ober. An dra-ze n'eo ket epken eun aluzen, mes bez eo eun dever a justis. E pe leac'h ema ar goazed a zo kement a zienez anezho brema ? O tifen ar vro, o tifen peb hini ac'hanomp hag hon traou. Kendaze ar re zo er gear ne reont nemet paea ho dle d'ar re ho difen e riskl ho buez, en eur ober evitho ho labour.

Red eo eta e teufe an oll garteriz da rei an dourn an eil d'egile. Evit-ze e tleont en em glevet evit ma vo great labour peb ti an eil goude egile. Aoualc'h ez euz c'hoaz a dud guest, re iaouank a c'huezek, seitek, trivac'h vloaz, hag a re goz goest da labourat, evit na joumo tamm douar ebet ha ne ve ket ententet outhan.

Evit al labour-ma arabad eo goulenn paeamant. Red eo e ve great evit netra, nemed gouzkoade ar re zo dervezourien ha n'o deuz evit beva nemed gounidegez ho dervezioù ; ar re-ma o deuz izoum euz ho guenneien evit kaout boued dezho ha d'ho zud.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Germaine Drogou. Euphrasie Maguerez.	Eil klas	{ Marie-Yvonne Aliégot. Marie-Jeanne Hamon.
Kenta rummad.	{ Pauline Morvan.	Eil rummad.	{ Joséphe Allégot. Françoise Héliès. Françoise Trébaol. Françoise Héliès. Philomène Cornen. Noëlie Lesvanan. Françoise Floch.
Eil rummad.	{ Ernestine Guéna. Marie Vaillant. Francine Conq. Rosalie Croguennoc. Joséphine Lescop. Eugénie Morel.	Trede klas.	{ Marie Magueur. Philomène Magueur. Madeleine Coatalen. Marie-Anne Mingant. Louise Kermorgant. Isabelle Guéna. Bernadette Jaouen.
Trede rummad.	{ Marie Derrien. Françoise Le Guen. Joséphine Auffret. Augustine Talarmin. Marie Jaouen. Marie Roudaut. Marie-Yvonne Perchoc.	Kenta rummad.	{ Rosalie Léostic. Marie-Yvonne Balcon. Marie Lescop. Marie-Yvonne Perchoc. Joséphine Trébaol. Françoise Kervran.
Eil klas.	{ Catherine Talarmin. Yvonne Magueur.	Eil rummad.	{ Marie-Anne Conq. Haudes Talarmin. Bernadette Hainon. Yves Laot. Catherine Didou. Joséphine Gouzien.
Kenta rummad.	{ Catherine Kermorgant. Suzanne Léostic. Rosalie Perchoc. Anna Quivoron. Marie Jaouen. Philomène Bossard.		{ Marie-Yvonne Jaouen. Marie Conq. Marie Bizien.

1320

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist,
heritourien ar Barados :

PAËROUN MAËROUNEZ

27	Kerzu.	Suzanne-Martiale Habasque, Créac'h.	Mart. Habasque.	S. Guennégues.
13	Genver.	Eugène-V.-F. Quéré, Arc'hantel.	Ernest Judo.	Josèphe Quéré.
15	—	Marie Renée Guéna, Ru-Allan.	J. Guennégues.	A. Guennégues.
19	—	Anne-Marie-L. Kerros, Kergounan.	Franç. Kerros.	Rose Chapalain.
21	—	Gourvadezet, krouadur, Gallou, Arc'hantel.		

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varne goasked ar Groaz

22	Kerzu.	Gabriel Kermaidic, 70 vloaz, Lanhallès.
22	—	François-Marie Colin, 70 vloaz, Penfoul.
4	Genver.	Anna Magueur, 67 vloaz, Kerzent.
6	—	Yves-Marie Trébaol, 48 vloaz, Troménec.
9	—	Marie-Françoise Jézéquel, 52 vloaz, Penfoul.
9	—	Victoire Luart, 60 vloaz, Streat-Lann.
13	—	Pierre-Marie Allégot, 69 vloaz, Langurru.
18	—	Anna Pellen, 95 vloaz, Penfoul.
		Jean Daouben, 25 vloaz, Trémouzon, maro er Belgique.
		François-Marie Cloatre, 26 vloaz, Bediez-Vian, maro er Belgique.
		Paul Gourmel, 25 vloaz, Arc'hantel, maro er Belgique.

Evel er guelit abaoe me bet moulllet *Kannadik* miz genver, eo deuet beteg ennomp ar c'helou glac'haruz d'euz maro tri d'euz bugale ar barrez, diskaret er brezel. 2 vartolot, Jean Daouben ha Paul Gourmel, 1 soudard, François-Marie Cloatre.

Unan d'euz cheffou Jean Daouben a skrive oc'h emban he varo : Kollet hon deuz eur martolod mad hag atao prest da ober he zever.

Al lizer digasset evit lavaret oa bet galvet gant Doue, François-Marie Cloatre, a lavare : Maro eo araok ar 17 a viz kerzu en hospital Messin. Beza en d'euz ta neuze tremenet kalz amzer var he vele a boan, peguir emgan Messin a ioa bet e miz eost, ha destumet kalz meritou evit digeri dezhan ledan d'or ar Baradoz.

Sonj diveza Paul Gourmel a zo bet evit he dad hag he vamm. Skriva a rea d'ezho d'an 13 a viz kerzu pegen braz karantez en devoa evitho, hag eo bet skoet d'ar 14.

Hon dever eo pedi oll evitho, p'eguir ho d'euz skuillet ho goad evit diffen hor bro, hor madou, hor buez.

Ra deuo ive ar sonj santel-ma da zoussaat anken c'huero ho c'herent : an disparti ne vezo ket hirr, rak ar vuez a zo her, ha dizale e kavint er Baradoz ar re a voelont en douar-ma gant daelou ken puill.

MORLARJES

Evel bep bloaz e teuor niveruz da govez ha da gommunia epad an derveziou enet. Ne lavarint ket evel kent, evit rapari ar boan a vez great da Jezuz dre dizurchou ha dansou sot morldarjes. « An amzer a zo brema re drist evit ma zache den da glask ebatou fall », Mez evit pedi Jezuz da zioual d'euz peb drouk hor soudarded hag hor martoloded ha da zigaz d'eomp ar c'henta ar peoc'h hag ar

gounid.

321

D'ar zul e vezo expozet ar Sakramant d'euz an offeren vintin beteg goude gousperou.

D'al lun, da 8 heur, e vezo kanet eur servich solennel evit oll dud ar barrez maro bloaz a zo ha dreist oll evit ar soudarded hag ar vartoloded kouezet var dachen ar brezel.

D'ar meur, da 8 heur, servich solennel evit ar veleien eat gant Doue, ha dreist oll, evit ar re o deuz labouret er barrez.

Da verc'heur al ludu, offeren vintin da 6 h. 1/2, offerenn var gann da 9 heur.

A zo pedet da ober eun hanter-heur Adoration d'ar zul 14 a viz c'huevrer

11 h. 1/2. Philomène Cloatre, Françoise Floc'h, Philomène Guiziou, Françoise Cadalen, Bourg.

12 h. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Jean Guennégues, Bourg.

12 h. 1/2. Ar skol gristen.

1 h. Marie-Jeanne Magueur, Marie Cadalen, Marie-Anne Magueur, Philomène Richard, Sant-Samson.

1 h. 1/2. Marie Prigent, Marie-Anne Daouben, Marie-Anne Brénéol, Victoire Guiziou, Trémazan.

2 h. Oll dud ar barrez.

A zo pedet da ober eun heur Adorasion da veurz all lard

9 h. Seza Morel, Jeanne Kerjean, Marie-Anne Cloatre, Bourg.

10 h. Josèphe Corolleur, Josèphe Guennégues, Marie Minguy, Bourg.

11 h. An Aotrou Persoun, Joseph Vaillant, Hervé Salaun.

12 h. Ar skol gristen.

1 h. Josèphe Nédélec, Noémie Vaillant, Marie-Yvonne Lescop.

2 h. Claire Coat, Jeanne Kerboul, Yvonna Arzel.

3 h. Jeannie Léon, Jeanne Floc'h, Madeleine Morel.

4 h. Bennoz ar Zakramant ha pedennou evit goulenn ar peoc'h.


Kannadik miz genver en deuz koustet 18 lur 5 guennek.

Bet evit sikour er paea, digant : F. M., 20 real ; P. S., 16 real ; M.-A. B., M. C., M.-A. F., 8 real ; M. V., 6 real ; J. P., 5 real ; Y. S., M. B., F. C., A.-M. S., E. M., 4 real ; J. A., 12 guennek ; C. A., 10 guennek.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



MIZ MEURS

5. GUENER KENTA. Kinnig da Galoun Jezuz an oferen hag ar gommunion evit hen digoll euz pec'hejou ar gristenien a vank da lezen ar C'horaiz ha da lezen ar binijen.

7. TREDE SUL AR C'HORAIZ. Jezuz o kas an diaoul kuit euz korf eun den dalc'het mud ganthan. Pedi evit ma kredo ar bec'herien diskleria ho fec'hejou oll d'ar belek, gant eur gontrision stard, evit ma raint oll eur Pask santel.

14. PEVARE SUL AR C'HORAIZ. Burzud ar bara kresket, en dezert, gant Jezuz. Ar burzud-ze a ioa skeuden burzud Sakramant an Aoter. En dezert, Jezuz a roe d'ar luzevien eur bara da veva ho c'horfou. Er Zakramant, Jezuz en em ra bara da veva eneu an oll dud. Meulomp he vadelez. Konsolomp anezhan, dilezet ha profanet gant tud difeiz. Digemeromp-hen aliez hag ervad.

19. Gouel bian SANT JOSEPH, pried ar Verc'hez Vari. Erbedomp outhan an tadou famil dreist-oll : ar re a zo chomet er gear, evit ma savint ho bugale var skuer ar Mabik Jezuz, — ar re a zo eat d'ar vrezel, evit ma tistroint iac'h ha santel d'ar gear.

21. SUL AR BASION. « Pehini ac'hanoc'h, eme Jezuz, a damallo ac'hanon gant guirionez ? » Ia, ma rankaz Hor Zalver gouzanv ar Basion hag ar maro, n'eo ket abalamour d'he bec'hejou eo, mes abalamour d'hon re-ni. « En em c'hreat pec'hed evidomp » eme ar Spered Santel. Mes deomp-ni eo, ervez S. Paol, peurachui ar pez a vank da Basion Jezuz evit hor zavetei : ober pinijen ha tec'het dioc'h ar pec'hed. — PASK ZO DIGOR.

25. *Iaou*. Gouel MARIA VEURS : ar Verc'hez kemennet dezhi e vezo Mam da Vab Doue ; ha kerkent, Doue ar Mab oc'h en em ober den enni. — En dervez-ma, Jezuz a goumansaz labour hor zilvidigez, hag a badaz keit hag he vuez. Lavaromp mad, teir guech hemdez, an *Anjelus* hen digas deomp da zonzj.

28. SUL BLEUNIOU. « Setu e teu ho Roue deoc'h, leun a zousder » eme ofis ar zul. Jezuz a zo prest da bardouni da nep zo a volonte vad. An absolven ne vezo na daleet na nac'het d'an hini a brometto laoskel he bec'hejou iviziken, fors pegen grevuz e vent. Ha goudeze, Jezuz a ziskenno er galoun, evel ma ne vije bet morse pec'hed ebed enni. Pedomp evit na vezo Pask sakrilañ ebed.

1 Ebrel. IAOU GAMBLID. Deiz ar bloaz ma oue instituet gant Jezuz Sakramant an Aoter, ar gommunion, an oferen, ar velegiañ. Na kaera dervez d'ober hor Pask !

2 Ebrel. GUENER AR GROAZ. Deiz ar bloaz maro Jezuz-Krist. Adoromp, meulomp, digollomp, pedomp galloud ha madelez an Hini a varvaz evidomp. — Ne c'heller ket ober er miz-ma kommunion ar guener kenta : er miz a zeu, an nao gommunion a vezo kendalc'het. — En ofis, KEST EVIT OBERIOU KATOLIK AN DOUAR ZANTEL, hospitaliou, skoliou, ilizou bro Jerusalem.

3 Ebrel. SADORN FASK. Jezuz er bez. Sellomp ouz korf Jezuz,

325
gouliet ha bronduet oll : ar memes hini a resevomp er gommunion ; peb gouli a zo evel eur ginou o c'houlenn truez diganeomp.
4 Ebrel. SUL FASK. Jezuz resusitet. — En oferen, KEST evit SEMINERIOU AN ESKOPTI.

PERAG OBER KORAIZ

— Perak ober iun ha vijil epad ar C'horaiz ? a c'houlenn Ian Berag.

— Sell ta ! emoup-me, perag paea an taillou ive ?

— Lezen ar vro eo ! eme Ian.

— Mad. Lezen an Iliz eo a ordren deomp ober iun ha vijil.

— Mes perag 40 devez ? daou pe dri a vije aoualc'h.

— Hor Zalver a iunaz 40 dervez, ep debri nag eva. Hen eo ar Mestr. Ar zervicher n'eo ket hueloc'h eget ar mestr. Greomp evel dhan.

— Perag debri boued vijil nemetken ? Eun tamik kik sal, pe c'hoaz kig ha fars, hag hi a rafe drouk da zen ?

— Ian, pa ne zent ket da baotrik ouzid, perag ne roez dezhan nemet eun tam bara seac'h d'he lein ?

— Evit he gorrija, al lampoun !

— Mad. Te peuz dizentet ive (ha me, ha peb unan) ouz Doue hon Tad euz an Env. Ar iun hag ar vijil hor c'hastizo : ha n'eo ket just ?

— Eo, eo. Mes perag hor c'hastiza ken kalet ?

— Ian, perag e savez ken abred, evit toulla an douar, palarat, eosti, c'hoennat, dindan an amzer ? perag terri da gorf evel ma rez ?

— Red mad eo, siouaz, evit kaout va zam bara.

— Red eo iun hag ober pinijen, evit kaout da loden varadoz.

— Perag neuze gourc'hemen ar iun ? Pinijennou all zo a vije easoc'h.

— Perag e touges-te eur galabousen var da benn ?

— Va boned a vir ouzin da baka eun taol goad pa vez tom an heol ; ha pa vez glao, pe avel, pe ienien, va bonet va difen euz ar paz hag ar c'hlenved.

— Fur oud, paotr ! Mes ar iun a voug ennomp tan ar ioulou fall ; dreizhan hor c'halon a dommo gant tan dous ar garantez. Hag evelse e vezo hon ene diouallet a bep drouk.

— Eur ger c'hoaz, eme Ian. En hostalirioù ne gaver ket a draou vijil. Perag ne zebrfen ket enno ar pez a zervichont ?

— Goulen traou vijil d'an hostis, hag e pezo.

— Ne mo ket, avad ! Aliez e meuz klasket kaout.

— Klasket ?... Red eo lavaret grons e zi da leac'h all. Arc'hant zo ganed er foar. Nep en deuz arc'hant a zo mestr. Pa vezi guelet o sevel da vont kuit, ker buan e klevi o kana var an tan ha viou, hariko, ha traou all. Mes sav da vouez, Ian !

— Allo ! eme Ian. Guelet a ran n'euz ket da enebi. Iun ha vijil, er gear hag er foar, al lezen eo ! N'eo ket re, ive, evit tizout ar baradoz !

Bep sizun, soudarded a skriv d'in, pe e teuit oc'h-unan d'am c'haout, evit va fedi da lavaret d'an Aotrou Mear, pe da gonsel ti-kear, rei skoazel d'eoc'h evit kaout ar zikour merket gant al lezen evit ar gragez pe an tadou hag ar mammou a joum en dienez, goudé ma vez eat ho zud d'ar brezel.

Evel ma kave d'in oa ezommek aoualc'h evit kaout sikour ar re a en em glemme ouz'in, em beuz klasket gouzout perag n'oa ket bet digemeret ho goulén. Kavet em beuz penaoz en ti-kear, oa bet roet d'ho goulén en (avis favorable), skrivet eo bet var ho faper a c'houlén, e veritent kaout sikour, hag evit lod oa bet skrivet diou, teir-guech.

An Aotrou Mear hag he gouseil, o devoa ta great ho dever ha ne c'heller tammal netra dezho.

Mez, ar varnedigez diveza pe an aotre da douch ar zikour a vez douget gant ar re a zo er gommission hanvet e Guitalméze, pe gant sous-prefet Brest, pe gant an deputeed dibabet e Paris evit gouelet a din oa a sikour ar re a zo bet lezet a gostez gant kommission Guitalméze, pe gonsel ar sous-prefet :

Mar d'oc'h lakeat a gostez en despet d'ho ezomm guiriou, e c'hellit kaz ho klemmou pe d'ar sous-prefet, pe da gommission Paris, o tiskouez dre desteni sklear emaoch en dienez, ha no po ket, heb ar zikour, bara da zebri.

Da veza ma ren brema en unvaniez stard etre an oll Fransizien, ne sounjont nemet rei an dourn an eil d'egile, evit taoler er meaz euz ar vro ar Brussianed ha kaout varnho ar gounid, e kaver c'hoaz tud berveled hag a laka en ho fenn, e vezo aoualc'h dezho tenna ho bugale euz ar skol gristen evit ho c'haz d'ar skol dizoue, evit kaout ar sikour a c'houlennont. Kement-se a zo eur fazi' braz euz ho ferz. Daoust hag e peleac'h e ve kavet hirio er Franz, eur mestr pe eur vestrez skol da skriva pe da lavaret : roit sikour d'an en ma n'en, rak he vugale en deuz lakeat er skol laik ? Respountet e vije dezhan : ar sikour, epad ar brezel, a zo votet evit ar gerent a zo en dienez, n'euz forz e pe seurt skol ema ho bugale.

An den a raffe pe a glaskfe rei sikour d'ar gerent a zo ho bugale er skol laik; kentoc'h eget d'ar gerent a zo ho bugale er skol gristen, a vije disprijet, nan ebken gant ar gristenien, me c'hoaz gant kement den a zo leal, ein, rak poan ha goad ar zoudarded a dall keit a keit n'euz forz e peleac'h ema ho bugale er skol, ha dienez an eil a zo ken din a druez ha dienez egile.

Goulskoude ma ne c'hellit ket kaout ar zikour a veritit, dre ali an Aotrou Mear hag he gonsel, a dlefe beza selaouet da genta, abalamour m'ac'h anavezont guella ezommou tud ho farrez, iit, mar kirit, da gaout ar re a gav d'eoc'h a vezo selaouet guelloc'h gant ar re a zo karget da ingla ar zikourou ; mez bezit sur, ne gavoc'h den leal da lavaret deoc'h : ia, sikour ho pezh, ma lakiit raktal ho pugale er skol laik. An amzer-ze, m'an en deuz morse renet, a zo tremenet, hag hirio n'euz mui er Franz, nemet breudeur, n'o d'euz nemet eur c'hoant, kaout ar gounid var an enebourien.

Ar re ta a denn ho bugale euz ar skol gristen, er gra gant ho bolontez, ho hunan, ha da Zoue ho devezo kount da renta euz ho labour digristen.

An diaoul ar spountusa en em ziskuezaz d'eur micherour, hag e lavaraz :

— Mervel a ri e ver. Evelato, ne lazin ket ac'hanod ma rez unan euz an tri zra-ma...

— Ober a rin ! Na meuz ket mall da vervel.

— Laz da dad ! Sko gant da c'hoar ! Pe ev banneou ! Gra unan a dri, hag e vevi.

— Petra da ober ? a zonjaz ar micherour. Rei ar maro d'an hini a roaz ar vuez d'in, morse ! Skei gant va c'hoar, hag a lus-kelle ac'hanon pa edon bian, ken nebeut ! Red eo d'in eva banneou.

Eva reaz, hag e oue mezo. Eur vech mezo, e skoaz gant he c'hoar, hag e lazaz he dad.

Epad ar vrezel, mezvierien a gred kendelc'her gant ho c'ho-vajou. Evit ho lod, inthi a denn kounnar an Ao. Doue var ar vro ; kaoz e vezont, evit ho lod, euz al lazerez tud hag euz ar goaleuriou a zo brema pinijen ar vro.

INDULJANS AR MARO MAD :

Peden evit asanti mervel.

Ar c'haera euz an oll induljansou eo an hini zo bet roet gant an Tad Santel Pi Dek, d'an 9 a viz Meurs 1904, evit heur ho maro, d'ar re a lavaro a greiz kaloun ar beden-ma, n'euz fors pegeit abarz mervel :

— « Aotrou va Doue, divar hirio e tigemeran a volonte vad hag a greiz kalon, deuz ho tourn, ar maro a blijo deoc'h digas d'in, gant he oll boaniou hag he oll enkreziou. »

Kement hini, goude beza bet o kovez hag o kommunia, a lavaro ar beden-se, memes pell araok mervel, hag e vent en ho iec'hed, a c'hounezo eun induljans plenier evit momet ho maro. Evelse, ma varvont ep belek, pe ma varvont goude beza kollet ho anaoudegez, an induljans gounezet araok a zeuio evelato da ziskarga ho ene, er momet diveza, euz ar poaniou, dleet d'ho fec'hejou. (Sklear eo, induljans ar maro mad ne ro morse pardoun ar pec'hejou, mes epken diskarg euz ar poaniou).

Mad eo eta ha talvouduz ober aliez *peden ar maro mad*, goude beza koveseat ha kommunit. Mad eo dreist oll d'hor zoudarded, a zo ken aliez e danger ho buez, anaout an induljans-se ha gouzout penaoz e c'hellont he gounid. Pa vo skrivet dezho, arabad ankounac'hat ho c'helen var gementse : berraat ha dousaat ho amzer Purkator, eun dever eo.

BURZUD AR FRANS

Nep a ra eur zell ouz histor hor bro-Frans, ne c'hell ket miret da zonjal : « Eun histor eo leun a vurzudou. An dud n'int ket goest da zioual eur bobl, evel m'eo bet diouallet hag adzavet Bro-Frans. An Ao. Doue a rank beza lakeat he zourn oll-c'halloudek eno ! »

Guelit ar vrezel-ma.

Araok ar vrezel, hor c'henvroiz ne reant nemet en em zrailla ; ar vro a gerze d'ar rivin ha d'an dismantr. An Allmanted a zonje :

« Pa zigoro ar vrezel, ar Frans a vezo konfontet oll dre ar gasouni a verv e tud an eil kostezen enep eben. »

— Kerkent digor ar vrezel, unvaniez stard en eun taol ! Oll evit Frans enep ar Prus !

Frans ne devoa sikour da c'hedal nemet digant eur vro : ar Russi ; ha c'hoaz red eo anzav ar Russi a iennea en hor c'henver. Digor ar vrezel, setu a-du ganeomp Russi, Bro-Zaoz, Beljik, Serbi, Japon, Australi, Canada, Hindoustan, ep kounta ar Roumani hag an Itali a zavo dizale.

Er penn kenta, e kilomp. Joffre a ro hano Jeann d'Arc d'an arme : ar Pruss a goumans plega . E miz guengolo, d'ar guener kenta ha da c'houel ar Verc'hez, emaoomp treac'h evit mad. Abaoue, e c'hounezomp ato muioc'h-mui, a nebeudou. Pa gave d'an dud oa kollet an traou, ar gounid eo a oa roet deomp.

Ha n'eo ket ar vech-ma epken.

En amzer Jeann d'Arc (1431) an Ao. Thomassin, goudé beza lavaret oa bet delivret Frans dre vuzud, a gendalc'he : « Ra ouezo peb hini en deuz an Ao. Doue diskuezet, a viskoaz evel brema, en deuz karet hag e kar bro Frans, en deuz he joazet evit he heritaj hag evit skigna dreizhi ar feiz katolik er bed oll. »

Daou c'hant vloaz goudeze, pa goumanse Frans parea goulou brezel ar Protstanted, an Ao. Henrys a skrive : « Var a veler, an darvoudou a vije kaoz d'ar broiou all da veza diskaret, a zo kaoz d'ar Frans da veza gloriuz : eur c'hras dioc'h an dibab eo a ra Doue dezhi. Pa zonjer eo ar goasa evithi, neuze eo e c'hoar en em zigoll ar guella ha tenna profit euz he faotou. »

C'huec'h bloaz zo, an Ao. Pichon, ministr e Frans, a lavare : « Eun nerz kuzet a zo hag a zioual Bro-Frans. » Daoust ha n'eo ket evitse eo oa merket var hor peziou arc'hant hag aour, guechall : « Doue a zioual ar Frans ? »

Guelloc'h zo. Eun Allmand en deuz skrivet eun heuriou enep ar Frans, nebeut araok ar vrezel-ma : ar prins Von Bulow, bet ministr kenta Guillou Eil. « Ar Fransizien, emezhan, a gred stard ne c'hell ket ho bro mervel evit mad. Ar feiz-se a zo savet var histor ho darvoudou tremenet ha var huez ho bro bete vrema. Pobl ebet ne deuz pareet, morse ha ker buan, goaligner ken spontuz. Pobl ebet, goude kollou pounner, goude goulou ken spontuz, ne deuz kavet evel dhi nerz-kalon, fizians, ha kouraj da boania. An Europ abez a zo bet ato sebezet o velet pegen huel eo bet savet Frans, pegen izel eo bet kuezet. Brezel 70 e doa diskaret Frans goasoc'h eget an oll brezelioù all : Frans goulskoude n'eo ket bet torret a-bez. Buan e lamm d'en em zifen, d'en em grenvaat ! »

Anzavomp eo Frans diouallet gant an Ao. Doue. Sonjomp evel Pi Dek ha Beneat Pemzek e paro evidomp amzeriou kaeroc'h. Ha pedomp, en em zantelaomp, evit ma jomo nerz Doue ganeomp, evit ma roio deomp eur peoc'h trum ha gloriuz !

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

		PAËROUN	MAËROUNEZ
7	C'huevreur.	M.-J. Gélébart, Kergastel.	Yves Perhirin.
10	—	J.-M. Provost, Curullou.	François Lallouer.
15	—	M.-Y. Vaillant, Stréat-Lann.	Tanguy Foll.
16	—	J.-A. Trébaol, Bédiez.	Jean Taloc.
			Marie-J. Gélébart.
			Marie Provost.
			Marie Vaillant.
			Madel. Godebert.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn, e goasok ar Groaz

- 5 C'huevreur. François Le Gall, 11 vloaz, Croaz-ar-Reun, Guitalmeze.
- 19 — Yves-Marie Floch, 63 vloaz, Bourg.
- 19 — François Jaouen, 57 vloaz, Arc'hantel.

De profundis.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dré ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Euphrasie Maguerez. Germaine Drogou.	Eil rummad.	{ Marie-Jeanne Hamon. Françoise Brénéol. Josephine Fourn. Marie Gouzien. Noëlie Lejvénan.
Kenta rummad.	{ Pauline Morvan.		
Eil rummad.	{ Ernestine Guéna. Francine Cong. Marie Vaillant. Rosalie Croguennoc. Josephine Lescop. Desirée Maguerez.	Trede klas. Kenta rummad.	{ Rosalie Léostic. Bernadette Jaouen. Louise Kermorgant. Marie Cadalen. Philomène Héliès. Catherine Didou. Josephine Trébaol. Marie Brénéol. Marie Lescop. Marie-Yvonne Perchoc. Perrine Kerros.
Trede rummad.	{ Marie Derrien. Josephine Auffret. Françoise Le Guen. Marie Jaouen. Marie Roudaut. Augustine Talarmin.		{ Louise Magueur. Marie-Yvonne Milin. Marie Kerjean. Josephine Gouzien. Yves Laot. Bernardette Hamon. Marie Morvan. Marie-Yvonne Jaouen. Léonie Bégoc. Yves Thepault. Marie Cong. Louis Guennégues. Jean Morel.
Eil klas.	{ Yvonne Magueur. Suzanne Léostic. Madeleine Prigent. Catherine Kermorgant Anna Quivoron. Marie Jaouen. Louise Laot. Madeleine Dénial.	Eil rummad.	
Kenta rummad.			


A zo pedet da ober eun hanter-heur Adoration d'ar zul 14 a viz meurs

- 11 h. — Anne-Marie Cloatre, Julie Pérès, Léontine Menguy, Marie Vaillant, Bourg.
- 11 h. 1/2. — An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Jean Guennégues, Bourg.
- 12 h. — Françoise Pellen, Madeleine Jaouen, Jeanne Pellen, Marie Squiban, Kernézoc.
- 12 h. 1/2. — Marie-Renée Guéna, Marie-Anne Guéna, Aline Trébaol, Marie-Anne Trébaol, Troméneec.
- 1 h. — Jeanne Talarmin, sémaphore, Marie Jaouen, Marie Taloc, Navant, Marie-Yvonne Bossard, Kerc'hoazoc.
- 1 h. 1/2. — Marie-Jeanne Morvan, Marie-Yvonne Perhirin, Joseph Bossard, Penkear, Marie-Yvonne Marzin, Bédiez.

Kannadik miz c'huevrer en deuz koustet 18 lur 5 guennek. Bet evit sikour he baea, digant : J. F., E. P., E. M., M. A. R., peb a 24 guennek, Ph. C., Ph. F., J. C., peb a bevar real.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



MIZ EBREL

4. SUL FASK. Jezuz o resusita a ziskuez eo Doue koulz hag ez eo den. Pa 'z eo Doue, e rankomp senti outhan en eur heulia he relijion poent da boent, ar relijion on deuz desket er C'hatekiz ha dre brezegennou hor beleien.

5-6. LUN ha MEURS FASK. An oferen hag ar gousperou a vez kanet en derveziou-ma abalamour Pask a zo brasa gouel ar bloavez kristen. Eur c'hristen mad ha devot a gar meuli he Grouer, he Zalver, he Varner, tri dervez dioc'htu, evel ma jomaz-hen tri dervez e tenvelijen ar bez.

11. SUL AR C'HAZIMODO. An offis a lavar : « Red eo beza ken pur hag eur c'hrouadur nevez-ganet. » Setu perag, pa 'z omp oll pec'herien, e rankomp oll netaat hon ene dre eur govesion vad. Pedomp evit na vanko hini ebed euz ar barrisoniz da ober eur Pask santel.

18. EIL SUL GOUDE PASK. « Me a zo ar Pastor mad » eme Jezuz « ha ne vezo mui nemet eur bagad-denved hag eur Pastor epken. » Goulenomp ma teuio an oll dud da heulia Jezuz ar Pastor mad, unanet oll er feiz hag er garantez kristen.

21. Merc'her. Gouel SANT JOSEPH, pried ar Verc'hez gloriuz Vari, patron an Iliz abez. Henori ar Zant braz a oue hanvet « va zad » gant an Den-Doue Jezuz, an hini a veillaz var guerc'hded. Rouanez an Env, an hini en deuz brema da entent ouz an oll gristenien. — Gouel bian S. Joseph eo a zo great, dre urz ar Pab diveza Pi Dek, d'an 19 a viz Meurs.

25. Trede sul goude Pask. Oferen ha gousperou SANT MARC, abostol. S. MARC a oue kaset da eskop da gear Alexandri, en Ejipt, gant he vestr Sant Per. — Ar prosesion a vez great, abaoue oc'hpenn c'huezek kant vloaz, evit gelver bennoz an Aotrou Doue var madou an douar, dreist-oll var an east o tivoan.

2 Mae. Oferen ar PEVARE SUL goude Pask. Gousperou AR GROAZ SANTEL kavet e Jeruzalem.

O PET SKIANT Y

En deiz all, en em gavet gant Fransa en train, oun bet souezet o velet ne ouie seurt ebet, koulz lavaret, var draou ar relijion. — Paour keaz Fransa, emoun-me erfin, mes ne ouzoc'h ger ebet euz ho relijion !

— Petra fell deoc'h ! eme Fransa. Pa n'euz ket bet desket d'in !

— N'o peuz ket desket, kentoc'h ! Rag n'eo ket ar c'hatekismou hag ar prezegennou a zo manket deoc'h, abaoue amzer ho paskou. Souezuz eo n'o peuz ket gellet paka ha dele'her eur sklabez benag.

— Oh ! eo. Mes n'oun ket evit isplika deoc'h.

— Goest oc'h da isplika penaoz boueta chatal ha trempa par-

keier, penaoz guerza, troki, prena — penaoz gounid arc'hant : ha n'oc'h ket goest da isplika penaoz gounid eur plas er baradoz ? Ha fur eo, Fransa !

— Mad ! pa meuz dizonjet !

— Aze ma an dalc'h, paotr ! Arabad oa dizonjal. Petra sonjfe an dud ma lavarfac'h o peuz dizonjet kregi en alar, pe hada, pe zourna ?

— Ne rin ket ive ! eme Fransa.

— Ne reoc'h ket, sur, abalamour bemdez emaoe'h var al labour, ha n'oc'h euz ket amzer da zizonjal. Dizonjal a vije koll arc'hant ha tiegez, ha paka brud eun innosant.

— Arabad eo, arabad !

— Ken innosant oc'h pa zizonjit penaoz ober evit gounid ho loden varadoz.

— Me zo eur c'hristen mad, goulskoude.

— Guelomp. Eur c'hristen mad eo eun den badezet, a gred hag a heul al lezen gristen. Ne ouzoc'h ket al lezen gristen. N'oc'h ket eta eur c'hristen mad. Dies a vezo deoc'h heulia eur relijion ha n'he anavezit ket mad aoualc'h.

— Ne lavaran ket deoc'h.

— Setu perag Pi Dek a skrive ar penn-kaaz d'an dud d'en em goll brema, eo evit an darn vrasa dre na ouzont ket ho relijion.

— Petra da ober, neuze ?

— Lenn bemdez er gear, araok pe goude *Buez ar Zent*, eur pennad euz ar Skridou Santel : Testamant koz ha nevez, — ar Pevar Aviel — ar Gelennadurez kristen, ha dreist oll al Leor Katekiz, ha pa ne vije lennet nemet eur gentel anezhan, mes gant evez, bep sul da bardaez. Evelse ne vije dizonjet netra, hag e vijac'h sur da zevel eun tiegez kristen, benniget gant Doue. Tud zo hag a labour a laz-korf da zestum guenneien evit ho c'hozni : ne zonzont ket en em zieza an distera evit assuri ho eternite. En han' Doue, o pet skiant !

MEZVIERIEN, DEOC'HUI !

Var gant den kraouiet evit beza lazet ho nesa, tri ha tregont a zo mezvierien. Var gant den kraouiet evit beza lakeat an tan goal, seiz hag hanter kant a zo mezvierien. Var gant den e prizoun evit beza glazet ho nesa, dek ha pevar ugent a zo mezvierien. Var bemp kant prizounier, tri c'hant tri var 'n ugent a zo mezvierien. — Kompagnunez vad, n'eo ket ta ?... An diaoul ive a gar gueleit an dud oc'h eva banneou. Rag hen, enebour an dud, en em blij ouz ho gueleit goasoc'h eget chatal. Chatal, ia ! Klevit.

En deiz all, eul loan a ioa stag ouz dor an hostaliri, hag eur vioc'h stag adre ar c'har. An ozac'h evel just a ioa oc'h eva eur banne ebarz an ti, petra benag en doa he c'houalc'h pell zo. Al loened geiz a zouble ho fenn, skuiz aoualc'h, m'oarvad. Eur c'halmalad a antreaz.

— Sell, eme ar vioc'h d'al loan, en he iez. Hen-ma zo vont da drinka ive gant ar mestr.

— Michans ! Eur souez eo : an dud o deuz sec'hed ato, hanvgoanv, mintin ha noz. Eur c'hlenved staguz eo, gueleit a rit : eun den a rank kaout tud all evit eva asambles. Trist eo beza eun den.

— C'hui lavar, eme ar vioc'h leun a furnez. Mez eo beza etn den a ouen al lonkerien. Ni, ar chatal, a zo furoc'h. Ne evomp ne-

med oc'h red, da viana.

— Pa lavaran deoc'h, eme al loan brabanser, eur mezhvier ne dal ket eun aneval.

Siouaz !

Mes komzit ato : ar mezhvier hag hen ho selaouo ?

GOUDE AR PASK

Goude ar Pask, petra zo da ober ? — Meur a hini, p'o devez great ho fask, a ankounac'ha dioc'htu ar pezh o deuz great, hag a gendalc'h gant ar memes plegou m'o doa, araok m'int eat da govez. Ken dizoursi ha tra, e kendalc'hont da vlassfemi ha da vallozi, da vankout da zul d'an oferen, da louza ho ene hag ho c'horf, d'en em rei d'an eva, da ober gaou ouz ho nesa, da zalc'her kasouni en ho c'halon, da zispenn ha da zua ar re a zisplij dezho. Ha great o deuz, an dud-se, eur pask vad ? — Anchal eo.

Ober eur pask mad a zo distrei ouz an Ao. Doue a galon vad, prometti dezhan e vo great kement vo gelllet evit senti outhan iviziken, evit tec'het dioc'h kement a zoug d'ar pec'hed. An dra-ze a vez prometted ober ne ket epken e deiz ar pask, mes epad ar vuez ac'houdevez.

Ia, mes an den zo simpl, ken bresk ma vez diskaret dillo. Setu perag an Ao. Doue ne zalc'h ket a zrouk ouz ar re a guez dre zempladurez, nemed o devez stourmet, poaniet da jom en ho zav, ha m'o do klasket sikour ha skor. — Sikour ha skor, digant piou ? — Digant an hini a c'hell ho rei, digant an Ao. Doue. Ha penaoz kaout ar zikour-ze ? Dre ar beden, ha dreist oll dre ar gommunion.

Araok ober ho pask, oc'h ene a ioa gouliet dre ar pec'hed, marteze lazet dre ar pec'hed marvel. Goude ho pask, o burzud ! emma resusitet oc'h ene. Mes he c'houliou, mar d'int sarret, n'int ket kleizennet mad c'hoaz, hag an nerz n'eo ket c'hoaz deuet deoc'h. An distera stokad a lakai ar gouliou da zigeri, goad an ene da redek, ha na peger buan adarre e kuzo e stad reuzeudik ar maro !

Ma livirit : « Nan, nan, ne fell ket d'in e ve chadennet va ene ouz an ifern ! » petra o peuz da ober neuze ? Mes petra rit pa vezit dinerz, feaz, evit dioual da guezha klanv ha da vervel gant ho sempladurez ? Mar d-eo digor ho kaloun, ober a rit eur pred mad, ha delc'her a rit da zibri aliez aoualc'h evit ma chomo ho nerz ganeoc'h ha ma kresko.

Grit ar memes tra evit oc'h ene. Roit aliez dezhan bevans sasun, hag e chommo iac'h ha seder. Ar bevans-se a zo galvet gant an Doue-Den ar bara a vuez : ar Gommunion eo ; Jezuz eo, gant he Natur Doue ha gant he natur den. « An nep a zebr euz ar baraze, eme Jezuz, a vevo da virviken », da lavaret eo an hini a gendalc'h da zebri ar bara divin, ken aliez ma zo izoum evit delc'her an ene iac'h, evel ma reer evit bevans ar c'horf.

An den dinerzet gant an naoun, ne glask ket digareziou evit chom ep debri. Perag eta e klasker digareziou evit pellaat euz ar gommunion ? Ar feiz hag ar volonte vad a vank ! Ar feiz : ne boanier ket da gompren mad aoualc'h petra eo ar Zakramant, petra en deuz Jezuz lavaret divar benn ar Gommunion. Ar volonte vad : tud zo a fell dezho mont d'ar baradoz, mes ne fell ket dezho chench buez : morgousket int, mont a reont guestadik varzu an ifern,

ken disoursi ha tra ; gourte int da rei d'ho ene ar bevans divin a zihunfe, a gennerzfe anezhan !

Goude hor pask, kendalc'homp da gommunia alies hag ervad : Jezuz her goulen, hag izom on deuz.

KENTELIOU BER

Ar c'homsou fall

Ar skueriou fall

Ar c'hamaladed fall

Ar c'hazetennou hag heuriao fall

a goll ar vugale, a goll an dud iaouank, a goll eneou dioc'h an druill.

PET BOULET ?

Pevar pezh-kanol a ra eur batteri. Pep batteri a denn 36 taol e 36 second (eun hanter-vinut), ha 720 taol en 12 minut.

Tregont batteri a zo e peb corps d'armée. Peb corps d'armée eta a denn 1.080 taol e 36 second, hag 21 mil 6 kant e 12 minut.

Tri c'horps d'armée a ra eun armée. Pa 'z euz 30 batteri e peb corps d'armée, ez euz 90 batteri (360 pezh-kanol) en eun armée. Peb armée eta a denn 3.240 taol e 36 second, ha 64 mil 8 kant taol e 12 minut.

Lakit e ve 10 arme e Frans. Setu ma vez tennet 648 mil taol e 12 minut, etrezho oll. E peb obuz, pe e peb taol, ez euz 300 boulet. Kendaze, ma vije kanoliou hon dek arme o tenna asambles, epad 12 minut epken, skuill a rafent var an enebourien 196 million 400 mil boulet !!!

Peb obuz a goust 30 lur. E daouzek minut, hor peziou kanol asambles a zispign oc'hpenn 19 million hanter ! — Ar vrezel a goust !

EUR MILLIARD

Var a lavarer, ar Frans a zispign eur milliard bep miz evit ar vrezel. Petra eo eur milliard ?

En AOUR, eur milliard a ra eur bern a 322 tonnen, 17 metr a hirder, 17 metr a ledander, 17 metr a huelder. Evit he zibrada, 6 mil den a rankfe poania. Evit he dransporti, 24 wagon, ar pezh a ra eun train a 400 metr a hirder. Ma vije lakeat ar bern aour da ober peziou ugent lur, ar peziou lakeat kichen ha kichen a c'helfe gelei an hent deuz a Vrest da Baris mont ha dont (262 leo) ; lakeat an eil var egile, e rafent eun tour a 8 leo a huelder. Ma vije great patromiou tud ganthan, 22 den aour a rafe.

En ARC'HANT, ar milliard a vije pounnerroc'h, na petra ta : 5 mil tonnen ! eur bern a 477 metr a bep tu ! An train d'ho lakaat en devije eul leo hanter a hirder, mil wagon en train ! Gant ar milliard arc'hant e c'heller ober eun neuden (pevar millimetr a-dezder) a rafe tro an douar abez. Eur milliard e peziou ugent real a rafe samm 250 mil den, peb a zac'had 800 pezh gantho !

E BILLIJI MIL LUR, eur milliard eo eur million a villiji : ar bern en devije 110 metr a huelder. E billiji kant lur, eur milliard en deuz eur c'hart leo a huelder.

Eiz miz brezel zo bet. Sonjit pebez bern arc'hant dispignet !... Ra blijo gant Doue lakaat fin d'ar walen !

AN AOTROU KURE

An Aotrou Kure, galvet da veza en Naonet a benn ar 16 a viz meurz, a resevas en dervez araok ma tie mont en hent, eun urz nevez. En dro-ma, oa galvet da veza e Brest d'an 19 a viz meurz, en 19^e rejimant a linen.

Pe hen a jomo hir amzer e Brest, pe hen a vezo galvet abred dirak an enebourien, den e parrez Landunvez n'hen ankounac'haio, oll e pedor Doue hag an Introun-Varia a Gerzent d'hen dioual a bep drouk ha da ober dezhan dizrei iac'h, goude ar gounid var ar Brussianed.

Mall a vezo oll, da zelaou a nevez he brezegennou ken kaer ha roet e brezounek ken iac'h, ha da glevet he vouez ken dudius evit ar c'han. Mall a vezo d'hen gulet adarre o vont drant ha lijer dre bep amzer, dre bep hent da gas ho sakramanchou d'hon tud klanv.

Ar beleg a vezo digasset gant an Aotrou 'n Escop da zerc'hel he blas, epad ar brezel, a c'hell ive dont en hon touez gant fizians. E parrez Landunvez, ar veleien a vez atao karet ha sentet outho, rak gouzout a rear e talc'hont plas an Aotrou Doue.

AN DISPUD

An dispud a vezo d'ar iaou 15 a viz ebrel.

Ar re vrezounek

Da 8 h., ar vugale gant ho fevare pask.

Da 9 h., ar vugale gant ho eil hag ho zrede.

Da 10 h., ar vugale gant ho fask kenta hag ar re iaouankoc'h.

Les Français

Da 2 h., ar re gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask.

Da 3 h., ar re gant ho c'henta pask hag ar re iaouankoc'h.

Evit kaout eul leor, ar re gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask a ranko gouzout heb faot ebed an teir loden euz ar c'hatekiz mou, goulennoù ha responchou, ha beza bet aketuz d'ar c'hatekiz mou epad ar bloaz.

Ar re gant ho fask kenta ha iaouankoc'h, a ranko gouzout heb faot ebed, al loden genta hag an trede loden euz ar c'hatekiz mou.

Dervez an dispud ne vezo ket a skol gatekiz.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAËROUN	MAËROUNEZ
3 Meurz.	Marie-Jeanne Colin, Kervéon.	Claude Cloatre.
7 —	Jean-Marie Taloc, Navant.	Jean-M. Taloc.
9 —	J.-M.-R. Guennégues, Kerriou.	Joseph Taloc.
11 —	Auguste-Mi Autret, Trémazan.	Jean Autret.
13 —	L.-M.-J. Morvan, Kerincuff.	Louis Gourvenec.
		Marie-J. Magueur.
		Françoise Provost.
		Marie-A. Le Guen.
		Marie Le Gall.
		Marie Morvan.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'headal dez ar varn, e goasked ar Groaz

28 C'huevreur. Joseph-Marie Corolleur, 56 vloaz, Archantel.

8 Meurz Hervé-Marie Jaouen, 53 vloaz, Kernézo.

11 — Joseph Calvarin, 71 vloaz, Traon-Huel.

De profundis.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Germaine Drogou. Euphrasie Maguéréz.	Eil rummad.	{ Marie Gouzien. Marie-Yvonne Allégot. Marie-Jeanne Hamon. Françoise Brénéol. Noëlie Lesvenan. Philomène Cornen.
Kenta rummad.	{ Pauline Morvan.		
Eil rummad.	{ Ernestine Guéna. Marie Vaillant. Francine Conq. Désirée Maguéréz. Marie-Anne Guéna.	Trede klas.	{ Bernadette Jaouen. Marie-Anne Mingant. Herveline Léostic. Josephine Brénéol. Josephine Trébaol. Catherine Didou. Marie-Yvonne Perchoc. Perrine Kerros. Léontine Michel. Françoise Kerfran. Marie Brénéol. Marie-Anne Bossard.
Trede rummad.	{ Marie Derrien. Augustine Talarmin. Françoise Le Guen. Marie Jaouen. Josephine Auffret.	Kenta rummad.	{ Marie Brénéol. Marie-Anne Bossard.
Eil klas.	{ Suzanne Léostic. Louise Magueur. Catherine Kermorgant. Anna Quivoron.	Eil rummad.	{ Joséphine Gouzien. Marie-Yvonne Jaouen. Marie Morvan. Léonie Bégoc. Jean Morel.
Kenta rummad.	{ Madeleine Déniel.		

A zo pedet da ober eun hanter-heur Adorasion d'ar zul II a viz ebrel

11 h. 1/2. — Claudine Cloâtre, Marie-Ursule Menguy, Françoise Floc'h, Anne-Marie Squiban, Bourg.

11 h. — Guillaume Lescop, Yves Minguy, Jean-Marie Pondaven, François Jézéquel, Bourg.

11 h. 1/2. — Ar skol gristen.

12 h. — Françoise Trébaol, Françoise Arzel, Renée Thépaut, Marie Le Hir, Kernézo.

12 h. 1/2. — Philomène Cloâtre, Marie Squiban, Marie-Anne Jaouen, Marie-Jeanne Cloâtre, Langurru.

1 h. — Rosalie Magueur, Françoise Jaouen, Kerincuff, Marie-Anne Eliès, Kerléc, Marie-Anne Eliès, Kermajeau.

1 h. 1/2. — Jeanne Gélébart, Kergastel, Marie-Renée Conq, Pauline Conq, Sant-Gonvarc'h, Marie-Renée Habasque, Stréat-doun.

Kannadik miz meurz en deuz koustet 18 lur 5 guennek. Bet evit sikour he baea, digant : J.-F. G., J.-M. C., J.-M.-P. C., peb a 8 real ; B. J., M. P., J.-M. F., peb a 4 real.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



M. Guengolo

1915



3. GUENER KENTA. — O Jezuz, kinnig a reomp d'ho Kaloun Sakr an oferen hag ar gommunion a zigoll, evit rapari an oll pec'hejou zo bet great epad ar vrezel, hag ive evit rapari ingrateri Fransizien zo, ne anavezont ket e vank hor bro he viktör brasa, var ar Marn, d'ho madelez ha d'ho kalloud.

5. Oferen ha gousperou ar PEMZEKVED SUL GOUDE AR PANTEKOST : Jezuz o resusita mab eun intanvez e kear Naïm. — O Jezuz, nag a vammou a vouel var ho bugale maro var an dachen ! Ma ne c'hellont ket azguellet anezho er bed-ma, grit, o Jezuz, m'em velint er bed all, en ho paradoz laouen ha gloriuz hag eternal ! Grit na varvo soudard ebed e stad a bec'hed marvel !

8. Oferen ha gousperou GINIVELEZ AR VERC'HEZ GLORIUZ Vari. — O Mari, dre al levenez a leuniaz kaloun ho mam santez Anna pa deujot er bed, konsolit ar mammou, diouallit ar vugale, lakit fin d'ar vrezel a vrev hor c'halonou.

12. Oferen ha gousperou ar C'HUEZEKVED SUL GOUDE AR PANTEKOST : Jezuz a respount d'ar luzevien hen tamalle da labourat er seizved devez. — O Jezuz, ho Mamm divin a lavare var menez ar Salett, tri ugent vloaz a zo : Unan euz ar pec'hejou a zigas goaligner an Ao. Doue var an dud, eo dre ma vez profanet ar zul. — Pardounit d'ar re a vank d'an ofisou, d'ar re a labour da zul ; pardounit d'hor bro.

15-17-18, dimerc'her, dirguener, disadorn. IUN HA VIJIL AR PEVARE AMZER. — Ar binijen-ma a ginnigomp deoc'h, o Doue, da genta evidomp hag a zo pec'herien ; d'an eil, evit hor zoudardet glazet a rank chom ep debri var an dachen hag en hospitaliou ; d'an trede, evit ar brizonerien geiz n'o deuz morse ho goualc'h.

19. Oferen ha gousperou ar SEITEKVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. « Petra zonjit euz ar C'hrist ? » eme an Aviel. Hag anaout a rit-hu he vuez, ar miraklou hag ar prezegennou a reaz, he varo, he vertuziou en Tabernakl, he c'hloar er baradoz ?... Red eo ho anaout. — Pedit evit na varvo soudard ebet ep beza anavezet ha karet Jezuz-Krist.

26. Oferen ha gousperou an TRIVAC'HVED SUL GOUDE AR PANTEKOST : Jezuz a para eun den seizes-oll, abalamour da feiz ar re hen douge. — O Jezuz, pa'z euz kement a dud bleset ne c'hellont mui en em vanea, pa rankont beza douget var ar c'hra-vaz, grit ma kavint infirmerien kalounek ha kristen, o devezo truez outho, a zousaio ho foaniou, a zavo ho sperejou varzu ennoc'h !

3 Here. Oferen ha gousperou AR ROZERA.

PRIZ AR GOAD PUR

Setu ama eur goms deuet deuz ginou eur vaouez divar ar meaz, koms dudiuz meurbet hag a zesk deomp profita guelloc'h deuz kenteliou ar vrezel.

O paouez kana edot, en eur barrez euz ar Savoie, eur zervich enterramant evit an Ao. Persoun, lazet er Beljik.

Er meaz euz an iliz, peb unan a lavare he c'her evit meuli ar beleg nevez maro, beleg santel deuet mad d'an oll. Meur a hini a c'houlenne perak Doue n'en doa ket diouallet anezhan dioc'h ar maro, ha n'en doa ket lezet laza en he leac'h eun difeiz benag.

Penaoz, eme eur vamm e doa daou vap en trancheou, penaoz,

o c'houzout pegement a bec'hejou a vez great en amzer-ma, e kredit-hu ober eun hevelep goulenn ? Pa zan me da c'hoalc'hi dillad, e klaskan ar dour neta. Evit goalc'hi kement a bec'hejou, Doue beza mesket gant goad Hor Zalver Jezuz.

Na pebez feiz er c'homsou-ze ! Na pebez heuz ouz ar pec'hed, na pebez aked a ioa en ene ar vaouez-ze da baed evit ar pec'hed.

Fallagriez an dud o deuz lakeat ar vrezel da ziroll varnomp : mes ar guir abek anezhi eo ar pec'hed.

Nep a oar pebez ofans eo ar pec'hed enep Doue n'eo ket souezet e teufe goaligner he Justis da boueza pounner var ar bed pec'her ! Eun tad a c'houzanfe ep en em jala, e ve great dezhan gant he vugale ar milved deuz an ofansou, deuz an disprij a ra bemdez d'an Tad pehini zo en env an darn vuia euz he vugale var an douar, a ve tamallet gant an dud da veza re laosk. Hag oc'hpenn zo ! Daoust ha Doue a ve Doue ma ne ve ket just ? Blasfemi a reont eta, ar re a gav abek e Doue pa lez breac'h he justis da boueza pounner var an dud.

Ar pec'hed zo eun dra ken grevuz ma ne c'hell beza paet nemed gant ar goad. Doue en he vadelez en deuz bet truez ouz ar bec'herien ; digaset en deuz var an douar he Vap unik, Hor Zalver Jezuz, evit hon dizamma deuz hor pec'hejou en eur rei he c'hoad evitho var ar groaz. Mes falvezet eo ganthan ive e vije mesket goad an den gant he c'hoad santel evit peur-echui labour hor silvidigez. Evelse eo e rank beza paet Justis Doue gant goad an den evit pec'hejou ar bed.

Eur beleg santel, an tad Rivet, rejant e Skol veur an Theoloji e Rom, lazet antronoz e penn he goumpagnunez, a lavare evelhen : *Hor ransoun a vezo great gant goad eun darn ha gant daelou eun darn all.*

Goad ha daelou o devezo seulvui a briz evit paea ar ransoun, ma vezo puroc'h eneo ar re ho skuillo :

Goad pur ha santel kinniget a greiz kaloun gant kalz evit rapari ;

Goad tud iaouank deuz ouen tud o deuz an neubeuta da baëa evitho ho-unan ;

Goad beleien ha relijiuzed unanet c'hoaz muioc'h gant goad an Oan divin dre zakramant an Urz ;

Hag an *daelou* skuillet gant kement a familhou kristen, an oll *poaniou diouerou* kinniget evit ar Frans er vrezel, daoust ha n'int ket *goad eneo kinniget evit paeamant ?*

Ar goad humen, a red en amzer-ma evel eur ster var an douar, a dle ober deomp trei hon daoulagad varzu ar C'halvar evit m'on devezo muioc'h a gas ouz ar pec'hed, muioc'h a aked da dec'het diouthan ha da bedi ma vezimp pardounet gant Doue ha ma vo fin d'ar vrezel.

Leac'h zo, ep mar, da gaout truez ouz ar re o deuz kollet ho zud er vrezel ; ne ket souez e vent glac'haret. Goulskoude arabat e ve dezho falgalouni, na grosmol enep Providans Doue. Evit ma vo skanfoc'h ho foan, e tleont sevel ho daoulagad huelloc'h eget ar bed-ma, ha sonjal gant fisians ez eo maro ho zud en eur ober ho dever, hag e vezint bet digemeret mad gant an Aotrou Doue. Er bed-ma e ranker goulskoude dispartia eun deiz benag an eil dioc'h egile ; mes er baradoz ec'h en em gaver adarre er joa, ha ne vezo mui dispartii ebed.

BOCHED AN DIABARZ

Tud a damall ato ar Pab, ar veleien, da veza kaoz d'ar vrezel : ar re-ze zo ker goaz ha Boched, « Boched an diabarz » eme prefet Blois.

Ar Boched a-zianveaz bro, an Allmanted, a boan da zismantri Frans dre ho armou. Boched a-ziabarz bro, ar Fransizien fall, a boan da zismantri Frans dre ho gevier.

An eil rumm a ro an dourn d'egile. An eil rumm a dal egile.

Piou en deuz savet, e Frans, ar vrezel great d'ar relijion abaoue daou-ugent vloaz ?

Ar Boched.

Lennit. D'ar 16 a viz Du 1871, nevez achu ar vrezel, Bismark a skrivaz d'ar c'homt d'Arnim, kannad ar Prus e Paris, eul lizer hag a zo bet moulet var ar *Journal officiel*, e Paris, d'ar 7 a viz Ebrel 1911. Setu hen ama : « Ma vije katolik gouarnamant ar Frans, ar Frans a vije re c'hallouduz en Europ ha soken e broiou pella ar Sao-Heol. Enebi ouz galloud ar Frans en eur zevel galloud ar Prus, setu hon labour. Evit dont a benn, enebi ouz ar relijion katolik hag ouz ar Pab, zo ar penn anezhi. Mar gellomp hen ober, ar Frans a vezo kaset da netra evit ato.

Enepe an Iliz katolik e tigor an eur vrezel, a vezo hir ha mantruz. Eun dra red eo, ma fell deomp peurachui diskar ar Frans. Skignit gevier ha drouk-prezegennou enep ar veleien, dre ar c'hazetennou difeiz (*radical*) zo e Frans : ar veleien a vezo dre-ze eur spontail d'ar bobl. Grit ma vezo hano aliez, er c'hazetennou-ze euz pebez danger ma tistrofe ar roue e Frans, euz ar veleien a glask beza ar vistri... Al lavariou zod-se ne vankont morse da drompla an dud dizesk ha d'ho lakaat da egari.

Lakit oc'h oll aked da zikour ar republikaned ha da gaout ho sikour evidomp : ar Frans eo a baeo ! »

Evit diskar ar Frans, Bismark a c'hourc'hemenne : « Duit ar veleien ! » Hennez a ouie mad he vicher a Brusian !

Nep a deu da zua ar veleien, a ra labour Bismark, a zikour diskar ar Frans, a zo eur Boch ha netra ken.

Da gement glabouser a skign gevier enep ho beleien (hag enep ho bro er memes amzer), ne rin, evit hirio, nemet ar respount-ma : « Mil lur e roin d'an hini a zigaso eun testeni ez eo ar Pab hag ar veleien kaoz euz ar vrezel. »

Ma lavar ar c'hlabouserien : « Ar veleien a c'hoar kuzat ho jeu », me respouto : « Skrivit, pe lakit skriva da Brezidant ar Republik, pe d'eur ministr benag, pe d'ar prefet. Goulennit, en ho lizer, piou zo kaoz euz ar vrezel. Mil lur e roin deoc'h ma respountont n'eo ket an Allmagn hag an Aotrich, ha ma ne zidamallont ket ar veleien. »

Michans, tud ar c'houarnamant a dle hag a c'hell gouzout ar virionez var ar poent-se. Ha ma ne c'hounezit ket ho mil lur, roit peoc'h erfin, Boched an diabarz !

DELC'HER !

213

Ar jeneral French, mestr ar Saozoun er vrezel-ma, a gasaz kelou d'ar Fransizien, eun dervez, ne c'helle ket padout ken dirag an Allmanted, hag e ranke kila ha mont kuit. Re veac'hiet oa !

Ar jeneral Foch, mestr ar rumm Fransizien a ioa harp ouz ar Saozoun, a ziredaz da gaout French. « Dalc'hit, emezhan. Dalc'hit eleac'h m'emaoc'h. Me respount deoc'h, e talc'hin eleac'h m'emaoun, hag e treac'himp an Allmanted. »

Delc'her, fors pegen beac'hiet e vezomp. Delc'her peb hini en he blas. Delc'her beteg kaout an treac'h. Setu penaoz e c'hounezer ar baradoz.

An drouk-spered, an dud, an traou, a zoug ac'hanomp d'ar peoc'h ha d'ar c'holl ? Dalc'homp ! An Ao. Doue a zalc'h ato euz he du. Grasou ha sakramanchou, setu ar sikour a ro deomp, sikour ar vin. Poaniomp ; dalc'homp kaloun ; Doue a rañ an nemorant. Harp ouz an Ao. Doue, ne zaimp morse da goll.

AN ADORATION

Bep 4 bloaz e teu tro peb pârrez en eskopti Quimper da ober epad eun neubeud derveziou Adoration ar Zakramant meulet ra vezo en hano ar barrez oll hag en hano an eskopti a bez. Hon tro-nt en em gav er blâ-ma, epad 4 dervez, deuz al lun vintin 27 a viz guengolo betek ar iaou 30 deuz an noz.

Biskoaz neuz bet muioc'h a izoum da zaoulina dirag Hor Zalver Jezuz-Krist evit he adori, he drugarekât, goulenn pardoun, ha goulenn diganthan he c'hrasou :

1° He adori a raïmp gant feiz ha gant respet stouet dirag an Hosti Sakr, en eur zonzal hag en eur gredi e ma dindan furm an famil bara-ze : Doue 'r Map, deuet da veza den, an Hini zo ganet e kraou Bethléem, an Doue a labouraz e stal ar c'halvez e Nazareth ; an Doue-Den a ziskuezaz he c'hloar var menez Thabor ; an Doue a varvaz var ar C'halvar, an Doue a vennige ar vugaligou, an Doue a c'halve davethan an oll dud poaniet ; an Doue a baree ar glanvourien, a resusite ar re varo ; an Doue a guruno er baradoz ar re o devezho hen gounezet.

En hosti e ma kuzet gened Doue a raio da viken eürusted an eneu santel, oll furnez Doue a c'houarn peb tra, oll galloud Doue en deuz krouet kement zo. En Hosti ema ar baradoz hag an eter-nite. Bez eo e guirionez kaera donezoun a c'hell Doue rei d'an dud.

Na pebez honor, na pebez joa evidomp kaout epad 4 dervez eun hevelep tenzor a vel dirak hon daoulagad !...

2° Ast e vezo ganeomp dont da zaoulina dirazhan evit *Lavaret bennoz* dezhan deuz eun hevelep madelez, hag ive deuz an oll grasou a ro deomp bemdez ha d'hon tud ha d'ar barrez, evit ar c'horf hag evit an ene. N'omp ken nemed peorien Doue, ne vevomp nemed deuz he aluzen. Petra da zonzal d'euz ar paour ne oar ked lavart bennoz d'an hini a ro dezhan he voued ?

Bennoz a lavarimp dezhan ive da veza diouallet hor bro Breiz ha miret ne ve breset gant an enebourien digernez o deuz disman-tret ha rivinet ar broiou ez int bet pe ez int c'hoaz ar vistri enno.

3° *Goulenn* a raïmp *Pardoun* da veza bet ken ien e kenver *Hor Zalver* en he *Zakramant*, da veza bet ken neubeut ast da glevet he vouez, a c'halve ac'hanomp da vont aliesoc'h d'he reseo er gommunion, da veza bet ken dizeblant da gas dezhan hor bugeligou hag hon tud iaouank, o deuz kement izoum anezhan evit diouall ho ene dioc'h ar peoc'h.

En eur zellet ouz an Hosti Sakr var an aoter ni velo Jezuz

o tiskuez deomp he Galoun kelc'hed gant ar gurunen spern, gouliet, hag ar groaz plantet ennan ; hag e klevimp anezhan oc'h en em glemm ouzomp en eur lavaret : « Setu ar Galoun en deuz kare kement an dud m'en deuz roet evitho beteg ar berad diveza euz he c'hoad, hag en distro ne gav euz ho ferz nemed ienien, blas femou, dismegans, kommunionou sakrilaj... Te da vihana, ro d'in da garantez birvidik. »

4° Epad an Adorasion e pedimp gant tiz, evit *goulen gras* da gaout muioc'h a sklerijen evidomp, evit hon tud, evit an oll bec'herien, divar benn karantez Jezuz evidomp er Sakramant. Ma vez anavezet mad ar Sakramant meulet ra vezo, e ve darempred dalc'h mad, ha dreizhan Jezuz a rofe deomp ar zantelez, ha gant ar zantelez, an eürusted.

Pedi a raïmp ive a zevri, epad amzer an Adoration, evit ar Frans evit goulen digant *kaloun Jezuz* pardouni dezhi he fec'hejou, rei dezhi ar gounid var he enebourien, eur peoc'h paduz ha talvouduz, hag an union etre he oll bugale e servich an Aotrou Doue. Kement-ze a c'houlennimp bemdez dre an oll bedennou a raïmp assamblez gant an dud vo en iliz epad an deveziou-ze hag en hano ar re zo pell diouzomp var an tachennou brezel.

Goulen a raïmp ive a greiz kaloun an oll grasou a vo mad evit an iliz, evit hon Tad Santel ar Pab. Dirag Jezuz en Hosti santel e pedimp evit hor parrez, evit ma kresko en eneou ar feiz kristen ha karantez Doue. Kas a raïmp ive lod euz grasou an Adoration d'hon tud anaoun er purgator, ha d'ar re oll zo maro er vrezel o tifen ac'hanomp.

Goulenomp oll digant Introun Varia Guerzent, hor Patronez benniguet, sikour ac'hanomp dre he fedennou da Galoun he Map da ober eun adoration vad, ha da zeski, epad an deveziou santel-ze, anaout ha karet guelloc'h guella Sakramant an Aoter meulet ra vezo.

REOLEN AN ADORATION

1° D'ar zul 26 guengolo prezegen en offeren bred gant an Tad missionner evit ober deomp kompren petra eo an adoration en em gav bep pevar bloaz evit pep parrez en Eskopti.

2° Er zul-ze da 2 h. ar brosession a ziblasso evit mont da chapel St Gonvel, hag an oll er pedo da denna bennoz Doue var an adoration.

Ar vugale

3° Ar vugale a dle ober ho c'henta, ho eil hag ho zrede pask solennel er bloaz a zeu, potred a merc'hed, a jomo en iliz. Evel ma vezo eat ar brosession euz an iliz, e vezo great dezho eur brezegen. Goude e vezint koveseat. Da 4 h. e vezo great dezho eur brezegen all, lavaret ar pedennou deuz an noz ha roet bennoz ar sakramant meulet ra vezo.

4° Da lun, 27, da 7 h. offeren ar gommunion evit ar vugale bet o kovez d'ar zul da noz. Da 9 h. e vezo great dezho an heur adoration.

— Evit gouzout hag ar vugale-ze a vezo deuet oll, e vezint galvet, dre ho hano, araok o c'hass d'a govez.

A dud vraz

An dud vraz a vezo rannet e teir loden.
En em glevet mad evit ma vezo kement a kement e pep loden.
En em ranna ive guella ma c'hellor etre ar gonfessored, evit ma

chello an oll beza koveseat goude mern en dervez ma teuint da ober ho retred. Pep hini a zigaso ganthan he chapeled hag he gantik.

Kenta Rumad an dud vraz

Ar c'henta rumad a deuio d'an iliz d'al lun, 27, da 1 heur a Mart. Raktal e vezo lavaret ar chapeled a great eur brezegen, goude e vezo koveseat betek 4 h., neuze e vezo eur brezegen all pedennou d'euz an noz ha bennoz ar Sakramant, hag e vezo c'hoaz koveseat betek 6 h. ma vez izoum.

D'ar meurs, 28, offeren ar gommunion da 7 h.
Heur adoration da 9 h.

Eil Rumad

D'ar meurs, 28, da 1 h. 1/4, chapeled, prezegen, kovession betek 4 h. Neuze prezegen evel deac'h, pedennou deuz an noz, a bennoz ar Sakramant. Kovession adarre betek 6 h.

D'ar merc'heur, 29, da 7 h. offeren ar gommunion. Heur adoration da 9 h.

Trede Rumad

D'ar merc'heur, 29, da 1 h. 1/4, chapeled, prezegen, kovession, betek 4 h. Neuze prezegen all, pedennou deuz an noz, a bennoz ar Sakramant, kovession betek 6 h.

D'ar iaou, 30, offeren ar gommunion da 7 h. Heur adoration da 9 h.

— D'ar iaou, 30, da 1 h. 1/4, prezegen hag heur adoration evit ar vugale 6; 7, 8 a 9 bloaz. Goude e vezint koveseat, ha pa vo echu roet dezho bennoz ar Sakramant.

D'ar gueneur, 31, da 7 h., offeren ha kommunion evit ar vugale a vezo kavet desked aoualc'h var ho c'hatekiz.

Taolit evez

Ar vugale 7 hag 8 vloaz a deuio d'an iliz da 8 h. 1/2 d'ar iaou, 23 a viz guengolo, neuze e vezint interrojet evit gueleit hag i a c'hoar katekismou aoualc'h evit kommunia pa reint ho adoration ; ar re ne vezint ket recevet a deuio er memez tra da govez, d'ar iaou, 30 a viz guengolo, goude mern, mez ne c'hellint ket kommunia d'ar gueneur.

A zo pedet da ober eun heur Adorasion

D'al lun, 27 guengolo

10 h. Marie-Ursule Minguy, Marie-Anne Cloâtre, Marie-Anne Guennéguez.

11 Seza Morel, Yvonna Arzel, Jeanne Kerjean.

12 Marie Bizien, Clémentine Allouer, Jeannie Skiban.

D'ar meurs, 28

10 Jeanne Floc'h, Françoise Floc'h, Anne-Marie Skiban.

11 Françoise Floc'h, Marie Minguy, Jeanne Floc'h.

12 Marie-Yvonne Lescop, Noémie Vaillant, Joséphine Godebert.

D'ar merc'heur, 29

10 An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean Guennéguez.

11 Joseph Corolleur, Rose Le Borgne, Julie Pérès.

12 Philomène Coat, Jeannie Léon, Marie Floc'h.

D'ar iaou

- 10 h. Ar skol gristen.
- 11 Joseph Nédélec, Joseph Guennéguez, Victoire Coadou.
- 12 Jeanne an Hir, Philomène Cloâtre, Philomène Guizioù.

AR SKOLL GRISTEN

Da lun 20 a viz guengolo e figoro ar skoll gristen evit merc'hedigou Landunvez. Ar guerent, evit guella mad ho bugale, a dlefe ho digaz en dervez kenta. Aliez e klever tud ar vugale o klemm hag o lavaret : Perag ne oar ket va merc'h lenn ken abred hag hini an ti all ? Perag ne c'hell ket mont da glask he zestem a zeskadurez ? Ar penn kaoz a-ze eo ne ket deuet d'ar skoll enn deiz m'eo digored, e deuz manket aliez epad ar bloaz var an dis terra digarez. Neuze, o velet ar re all desketoc'h evithi, e deuz kollet nerz kaloun hag eo chomet eb labourat gand aked hag eo kave diez dont d'ar skoll.

Hon dever a zo senti oc'h ar c'huzulioù hag ar gourc'hemen nou roet gant an Aotrou 'n Escop divar benn ar skolioù. Setu ar pezh en deuz skrivet araok gouelioù an Oll-Zent 1909.

« Ar veleien o do sonj euz ar geennadurez roet da gatoliked Franz dre Lizer an Eskipien.

» Lakât a raint an tadou hag ar mammou famill da evesat ouz an dever a goustianç o deuz da gas ho bugale d'ar skolioù kristen — pa c'hellont ep diazant braz evel ma vije koll ho c'harg ha dre eno ho bara.

Etouez an digareziou a ro darn euz ar gristenien laosk, e klever hen-ma alies : « N'oun ket evit paea ar skol. » Neuze, deuit da gaout an Aotrou Persoun, pe ar re a zo e penn ar skol gristen, hag e vezo lavaret dehoc'h petra ho pezo da ober. Ma c'hellit paea an nebeud a vo goulennet diganeoc'h ha ma c'hinit, neuze e tiskue sit karet an arc'hant muioc'h eget oc'h ene, muioc'h eget ho pugale geiz. Lod all a zigarez ar mistri hag ar vestrezet skolioù ar c'houarnamant a zo kerkouls kristenien ag ar re all, guell a ze, — mar d'eo guir mez ar skoll dizoue, dreizhi he-unan, ne ket great evid ar c'hristen, peguir ennhi ne c'heller ket lavaret d'ar bugel en deuz gourc'hemennou Doue a re an Iliz d'ha heuill evit gounid ar Baradoz, ha da en em viret diouz ar pec'hed evit tec'het deuz an ifern.

Bezit a du gant an Aotrou Doue. N'eo ket brema ar mare da vont enep dezhan.

ENTERRAMANTHOÙ

A zo bet lakeat e douar santel ar c'ered, da c'hedal deiz ar varn, e goasked ar Grouz 19 Gouere. Yves Magueur, 62 vloaz, Sant-Samson.


De profundis.

Eat d'ar baradoz. — 23 Gouere. Marie-Anne Bervas, 16 miz, Sant-Samson.

Kannadik mis Eost en deuz koustet 18 lur 5 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



MIZ HERE

3. Oferen ha gousperou AR ROZERA. — Roit deomp, o Doue, ni ho ped, pa henoromp misteriou ar Rozera, ma raimp evel ma reaz Jezuz ha Mari enno, ha ma tizimp ar madou a brometont.

10. Oferen ha gousperou an UGENTVED SUL goude ar Pante-kost. Eur prins a c'houlen digant Jezuz delivra he vap euz ar c'hlenved. « Hon dilivrit euz an drouk, o Jezuz, euz peb drouk en hor c'horfou, en hor madou, en hon eneu dreist-oll ; lakit fin d'ar vrezel, a zo unan euz goaligner pounnera ho justis ; lakit fin d'ar pec'hejou, a zo kirriek deomp da veza kastizet ! »

17. Oferen ar C'HENTA SUL VAR'N UGENT goude ar Pante-kost. « Rentit ar pez a vankit d'ho nesa » eme Jezuz en Aviel. N'euz pardon ebet evit an nep a zalc'h tra he nesa. Mont da govez ha kuzat ho laeronsi, a zo pec'het marvel ha sakrilaj. Mont da govez, diskleria ho laeronsi, ha del'her ar pez n'eo ket deoc'h, a zo chom er stad a bec'hed. Restaolit ! — *Gousperou Sant Lukas*, abostol.

24. DEDI ILIZ SANT-KORANTIN, KEMPER (oferen ha gousperou). An iliz a zo ti an Aotrou Doue. Penaoz en em zalc'hit-hu e ti Mestr ar bed ? Evel eun enebour, ma fell deoc'h chom e stad fall ? Evel eun estranjour, ma ne zonzit nag el lidou nag er Zakramant meulet ra vezo ? Evel eur zervicher, ma teuit evit senti ouz gourc'hemen ar Mestr braz ? Evel eur map, ma teuit dre joa ouz ho Tad euz an Env, a c'halv ac'hanoc'h da zarempredi he di euz an douar ?

30. Disadorn. IUN HA VIJIL, da gempen hon eneu araok gouel an Oll Zent. « Eun drouk-eal a zo, eme Jezuz, ha ne c'heller kas anezhan kuit nemet dre ar beden ha dre ar iun. »

31. Oferen an TREDE SUL VAR'N UGENT goude ar Pante-kost. « Ma c'hellan touch epken ouz dillad Jezuz, e vezin pareet. » Ober a rit guelloc'h eget touch ouz dillad Jezuz : he Gorf a resevit dre ar gommunion, gant he ene hag he zivinite. Ar gommunion zo eul louzaouen dispar da barea gouliou oc'h ene. — *Gousperou AN OLL ZENT*.

1 Du. Gouel AN OLL ZENT. Gouel berz. Red eo dont d'an ofer-
ren evel bep sul.

2 Du. Gouel AN ANAOUN. Peb belek a c'hell lavaret teir ofer-
ren en deiz-ma, evit ma vezo frealzet muioc'h ha delivret abretoc'h
anaoun ar zoudardet lazet er vrezel, anaoun an dud dilezet, an oll
anaoun guitibunan.

MONT DA VELEK

Bep tro m'en deuz ar c'hrouadur c'hoant da vont da velek
pe da vanac'h (pa ne ve ket eur c'hoant hirvidik c'hoaz), bep tro
ma tiskuez sklear e vije mad da zervich an Ao. Doue, ar gerent

kristen a dle taoler evez mad ouz mennoziou ho bugel, pa deuont
startoc'h-starta. Ma ne faziont ket, var a lavar an dud guiziek a
anavez ar mennoziou-ze, ar gerent ne c'hellont ket enebi outho ep
ober pec'hed. A be leac'h e teufe dezho ar guir da nac'h ho bugel
ouz an Ao. Doue, ma c'halv anezhan ? A be leac'h e teufe dezho ar
guir da nac'h ouz an Iliz eur zikour a zo red dezhi da gaout, evit
mad ar vro he-unan pa ne ve ken ? A be leac'h e teufe dezho ar guir
da nac'h ouz ho bugel eur plas, gloriuz evithan, ha red dezhan he
gaout evit en em zavetei, ervez sonj an Ao. Doue ?

Red eo sonjal ervad : ar gerent a zo evit ho bugale ; mes ar
vugale a zo evit Doue hag an dud ho breudeur.

Ervez an AO. GOURAUD, eskop Guened.

PETRA RA AN EVACH

Eun daolen brudet a ziskuez Jezuz o kinnig d'he ebestel ar
gommunion zantel, he gorf, he c'hoad, he ene, he natur Doue lakeat
ganthan dindan spez ar bara. Eun dudi eo sellet ouz an daolen-ze.

An hini en deuz great ar patrom kenta anezhi a ioa he hano
Leonard de Vinci, den a ijin kaer meurbed. Ar skuer a gemeraz
evit ober diouthan ar C'hrist, a oa eur c'horist. Ar paotrik iaouank
pa gane a veze henvel ouz eun eal, kement e lakea a galoun en he
vouez. He hano a ioa Pietro Bandinelli.

Leonard ne icia ket buhan gant he labour. P'en doa livet bizaj
ar C'hrist, e klaskaz epad meur a vloaz eun den evit beza skuer
da ober patrom Judas. N'oa ket eaz he gaout, rak red oa e vije
lennet var dremm Judas ioulou fall he galoun, gant ar roud pe
ar skeud euz ar vad en doa great Jezuz d'he ene araok m'oue gou-
nezet gant ar pec'hed.

Eun dervez Leonard de Vinci a velaz alkodet ouz eur mean
hed an hent eun truillok hanter vezo. Var he vizaj ez oa c'hoaz
eun dra benag euz an ear vad en doa bet araok, mes en he zaou-
lagad egaret, ha var he vizaj distrounk, oa eaz dreman lenn a zia-
barz ennan siou fall he galoun. Al liver a zonzaz dioc'htu : kavet
e meuz va den. Tenna reaz raktal gobari he benn var baper. Bez
oa e guirionez skeuden an Abostol deuet da veza treitour, an eal
deuet da veza drouk-spered. Souden, Leonard estlammet a lezaz he
bluen da gueza euz he zourn. Anavezet en doa, en truillok ken
euzuz he zoare, ar c'horist Pietro Bandinelli, a oa servichet dezhan,
eur blavez benag a ziagent, da skuer evit he Grist.

Berr oa he istor, mes na pegen glac'haruz : ar boesoun, ar
vezventi en doa he gollet e neubeut amzer. Na ped euz hon tud
iaouank ken sklear ho daoulagad, ken iac'h ho spered, ken kaer
ho ene a vezo kollet ive, abred pe zivezat, p'o do tanveat an alcool !

Pansion d'ar zoudard gouliet ha reformet

Eur soudard reformet a dle goulén, var baper lizer ordinal, pe bansion e c'houlén hag e pe leac'h e vezo o chom ; oc'hpenn, e tle kas ar paperiou hanvet : Acte de naissance (kavet en ti-kear), Etats de services (copiet var he Livret) certificat d'origine de blessure, certificat d'incurabilité, d'examen, certificat de vérification. Kas an oll baperiou d'an Dépôt. Ma vank eur paper benag, pedi an Dépôt da ober ha gortoz ar respount.

Da c'hedal, eur serjant reformet a doucho 33 lur 15 kuennek bep pemzek dervez, eur c'haporal 30 lur, eur zoudard 25 lur 10 kuennek.

Pa respounto an Dépôt, e roio pe eur bansion pe eur gratification. Hou-ma a vez roet pa zonjer e c'hello ar soudard guellaat divezetoc'h (deuz 30 skued beteg 130 skued er bloaz). Ar bansion a vez roet pa n'euz pareans ebed da gaout... Bep bloaz eur serjant a c'hell kaout a 800 lur da 1430 ; eur c'haporal, a 700 da 1170 ; eur zoudard, a 600 da 975 ; eur c'hart a vez paet bep tri miz.

* *

FAMILLOU SOUDARDET LAZET a c'hell kaout : da genta eur zikour dioc'htu, d'an eil eur bansion bep bloaz.

Evit kaout ar zikour dioc'htu, kas da Dinzorier an Dépôt eul lizer da c'houlén, gant feuilennou copiet varnho : an acte de décès roet gant an ao. mear, eun Extrait de mariage evit an intañvez, eun extrait de naissance evit bugale an hini lazet, pe he dad hag he vam mar d-eo dizemez. Evit eur zerjant, e toucher 200 lur ; evit eur c'haporal pe eur soudard, 50 skued.

Evit kaout eur bansion, kas ar memes paperiou a zo bet merket evit ar zoudardet reformet. An intañvez, pe ar vugale, pe an tad hag ar vam, a doucho bep bloaz : evit eur serjant, a 550 lur da 825 ; evit eur c'haporal, a 450 da 675 ; evit eur zoudard, a 375 da 563. Oc'hpenn, 200 lur dre vugel a-zindan 18 vloaz.

Ra blijo gant Doue miret n'o devije va farrisioniz abek da c'houlén ar pansionou truezuz-ze !

PERSEVERANS

Nag a bed zo, var zigarez m'o deuz pedet an Ao. Doue, en em erbedet ouz ar Verc'hez Vari, ouz Jeann d'Arc, ouz meur a zant all, a deu dioc'htu da fallgalouni ha da goll fizians, ma ne vez ket roet dezho eur viktor gaer d'an dervez merket gantho ! Petra ziskuez kementse ? Ez oa tano ho feiz, ha ne veritent ket c'hoaz ar mirakl a c'houlennent.

En ho zammik furnez, e kredent lavaret da Zoue : « Ni ro deoc'h beteg an deiz ma'n deiz. Ma ne rit ket neuze ar pez a zonj deomp beza eun dra vad meurbet, klevit mad, hor fizians ennoc'h a vo tanoeat ! »

Daoust hag an Aotrou Doue a c'hell kemeret eun hevelep

fisians evel mad ? Daoust ha plijout e c'hell dezhan e teufemp-ni da goumandi dezhan evel pa vije ni ar vistri hag hen ar zervicher ? M'en dije roet deomp hor goulén evel ma felle deomp koumandi dezhan, petra 'n em gafe ? Kaout a rafemp braz, ma ne rafe ket evidomp kement mirakl a c'houlénfemp diganthan, memes pa ouezfe e ve eun drouk evidomp. Pa lavaromp dezhan ober mirakloù d'an ampoent e fell deomp, e lavaromp dezhan eo padet re hir hor poaniou. Ne zonjomp ket eo ar poaniou-ze o padout a zave-
teio ac'hanomp.

Doue epken a c'hell barn peb tra, rak hen epken a vel peb tra hag a oar peb tra. Daoust ha ne lenn ket en' hor c'halounou, ma pedomp, n'eo ket dre ar c'hoant e ve karet ha servichet guelloc'h, mes dre aoun epken rak ar boan ? O veza ma fell dezhan hor savetei evit mad ha nann ober an neuz, daoust ha n'eo ket dre garantez evidomp e lez an darvoud a dle hor savetei da veza padusoc'h, evel ar medecin, en despet da glemmou an den bleset, a zil al louzou a zev beteg strad ar gouli evit he barea evit mad ?...

Eur paotrik pomb bloaz, a bede mintin ha noz, azalek penn kenta ar vrezel, evit ma tistroje he dad d'ar gear goude ma vo gounezet ar viktor, hag a lavaraz evelhen d'he vamm : « Neketa, mamm, ne vo ket izoum da bedi ken goude ar vrezel pa vo distro tad ?... »

Nag a bed en hon touez o defe c'hoant sonjal ha lavaret evel ar bugel-ze : « Pedomp gant tiz, greomp pinijen, obtenomp ar viktor digant Doue ; goudeze... e c'hellimp ehana. »

Doue, m'oar vad, a vele e vije re-hir, an ehan-ze ha n'edo ket c'hoaz he garantez grizienet doun aoualc'h en hor c'halounou, nag ar guir fisians en he Brovidanz.

Ia, pedomp, greomp pinijen, mes ne lakeomp termen ebed na condition d'ar Mestr.

Ofanset on deuz an Aotrou Doue, kastizet omp ; paeomp hon dle gant humilite ha fisians. Dianavezet on deuz karantez kaloun Jezuz ; raparomp ha digollomp anezhan dre vuioch a garantez.

Dreist oll ma fell deomp e guirionez diverra ar vrezel gant he boaniou, na greskomp ket bemdez an dle on deuz dastumet dirak justis Doue ; diouallop da ober pec'hejou dre ma vezont paet gant re all.

Evel m'o deuz re all perz er miritou a c'hounezomp, re all ive a rank paea evit hor pec'hejou. Piou c'helfe lavaret an dud keiz, beleien, seurezed, merc'hed a bep oad, didamall, ep mar, tretet e doare ken iskiz gant hon enebourien, n'int ket bet ar ransoun evit ar pec'hejou lubrik, ar mesventiou, ar c'homsou udur, ar guiskamanchou divodest hag an oll draou divergount a veler ken stank c'hoaz en hor bro ?

Doue a fell dezhan hor savetei, mes n'hor saveteio ket epdomp. Plegomp hor penn dindan goabren pounner ar vrezel gant eur galoun humbl ; dalc'homp sonj euz ar gomis-ma lavaret gant eun eskop euz eur bro : « Ar Franz a gav braz hag a zo drouk ennhio c'hedal, hag hi eo a laka Doue d'he gedal. »

Diskuezomp da Zoue eur guir garantez dre hor buez, dre hor vertuziou, dre hon oberiou kristen, dougomp respet d'an hini en deuz karget da c'houarn hon eneou : setu ar guir fesoun da zigas d'hor bro ar viktor hag ar peoc'h a c'hoantaomp oll a greiz kaloun.



VA MAMM VAD

An den euruz Paol, a urz an Trapisted, a ioa dare da vervel he vreudeur a ioa en dro dezhan o c'headal he huanad diveza en eur bedi evit he ene a ioa varnez mont euz ar bed-ma en hano an Dreinded Santel hag en hano ar Verc'hez Vari. Raktal e veljont he vizaj o lugerni, e chomment da zellet outhan. Ar c'hlan-vour en em zibradaz eun neubeut en eur lavaret : penaoz helfenne miret da vusc'hoarzin, da veza laouen, pa velan va Mamm vad dirazon prest da zigemeret va ene ?

Bezomp devot d'ar Verc'hez hed hor buez, greomp laouen he goueliou, gouel he Rozera er miz-ma, servichomp mad anezhi oc'h heulia he vertuziou, ha da zeiz hor maro e teui ive da zigemeret hon ene var dreujou an eternite.

MARO ER BREZEL

Daou deuz bugale ar barrez a zo bet adarre diskaret er brezel : Jean Morvan, 30 vloaz, dimezet da Philomène Le Gall, deuz Trémazan, a François-Marie Tanguy, dimezet da Vari-Anne Perchoc, deuz an Traon-Bihan.

Pedomp oll evitho a kemeromp pers e glac'har ho c'herent.

REOLEN AR C'HATEKISMOU

Ar c'hatekismou a vezo eun tamik chenchet er bloaz-man abalamour ne zeuz nemet eur beleg evit hen ober. Koumanz a rei e Sizun sul ar Rosera : d'al lun a d'ar merc'her da 4 heur e vezo katekiz evit ar vugale a dle ober ho eil ag ho zede pask.

D'ar meurs, da 4 heur, e vezo katekis evit ar vugale a dle ober ho fask solanel er bloaz a zeu ag er bloas varlerc'h, da lavaret eo ar vugale o devezo bet dek vloaz a nao bloaz araog ar bloavez nevez 1916.

D'ar iaou, da 8 h. 1/2, evit ar memez re evel d'ar meurs hag ouспен d'ar vugale nao, dek, unneg a daouzek vloaz ag a zo e skol e leac'h all. D'ar iaou c'hoaz, da 8 h. 1/2, katekiz d'ar vugale 7 hag 8 vloaz.

D'ar sul, da 1 h. 1/4, katekiz evit ar vugale gant ho fevare pask ag evit ar re a zo e skol e leac'h all.

Ar vugale a vanko c'houec'h guech d'ar c'hatekismou eb lavaret perag, ne c'hellint ket kaout ho fask a n'ho devezo priz ebed n'euz fors peger kouls e youezint ho c'hatekismou. Ar memez tra en em gavo gant ar re a c'hoario ag a gaozeo epad ar c'hatekis.

An tadou ag ar mammou a dle gouzout e dleont ober sent deuz ho bugale hag evit se eo eun dever striz evitho deski dezho ho c'hatekismou peguir dre ar c'hatekismou ebken e teskint hent ar baradoz, bro ar sent. Ar gerent a veillo ta evit ma c'houezo ho bugale ar gentel katekiz roet dezho da zeski a ma n'ho deus ket amzer da velet ze ho unan e kassint anezho d'an dud vad euz ho c'harter o deuz ar vadelez da ober katekismou.

An tadou hag ar mammou ag a gaoze ar brezounek en ho zi a raffe mad deski d'ho bugale ar c'hatekismou brezounek, er giz-ze da viana e c'hellint lavaret assamblez ar bater vraz.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	Paëroun :	Maërounez :
15 Eost. Jacques Jézéquel, Traon,	J. Magueur,	M. Y. Cloarec.
30 — Anne Brénéol, Kerzent,	Prigent Autret,	A. Brénéol.
6 Guengolo. Pierre-Marie Pellen, Kerzent,	Yves Pellen,	Marie Pellen.
12 — Joséphine-J. Pondaven, Arc'hantel, Victor Fourn,	A. Ascoët.	

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'headal deiz ar varn, e goasked ar Groaz

11 Guengolo. Marie-Yvonne Kerberénès, 49 vloaz, Poulcallac.

De profundis.

AN AOTROU KURE

Pa zistroaz an Aotrou Kure d'an Naoned deuz an hospital moa bet e peur barea e scribe d'an Aotrou Persoun : deac'h oa eat tri'ugent soudart infirmier d'ar front a volonte vad, hanter cant anezo a ioa beleien. Diziou 17 a viz guengolo e scribe a nevez d'an Aotrou Persoun : me ive a ielo d'ar front varc'hoaz, n'ouzon ket sur pe e zeo evit dastum soudardet glazet var an dachen a vrezel pe evit caout soursi anezo en hospitaliou tosta. Pedit evidon a lavarit da parresionniz Landunvez pedi ive evidon evit ma vezint dioualet deuz pep drouk.

AR ROZERA

Su ar Rozera a zo bet great gant an Iliz evit trugarekat Doue deuz eur victor vraz gounezet gant ar girstenien var an Turquet ho enebourien touet. Bezomp ive aketuz da lavaret hor Rozera evit ma teuo Doue, dre zikour ar Verc'hez, da zellet ouzomp gant truez, da rei deomp ar peoc'h, a distro hon tud d'ar gear goude beza bet ar gounid.

Da zul ar Rozera ag epad an eisved, induljans plenier da c'hounid gant ma vior bet o kovez ag o kommunia. Ar re a vezo bet dek guech er chapeled epad ar miz pe o devezo lavaret dek guech anezhan er gear ma ne c'hellont ket dont d'an Iliz a c'hounezo ive eun induljans plenier gant ma zeint da gommunia, a bep tro ma lavarint ar chapeled, litanioù ar Verc'hez, peden sant Joseph e c'hounezint seiz vloaz ha seiz Koräiz induljansou.

Goude kreiz-deiz d'ar sadorn araog sul ar Rozera a d'ar sul se epad an deiz e c'hounezer eun induljans plenier bep tro ma vez great eur visit d'an Iliz gant ma pedeuz evit hon Tad santel ar

Pab a ma vier bet o kovez goude ma ve eiz deiz araok ag o komunia d'ar zadorn pe da zul ar Rozera.

Oll-ta e lakamp hor bolontez vad da c'hounid an induljan sou-ze evit ken aliez a ene eat dirag Doue en eun taol koun epad ar brezel-man eb beza bet amzer da baea da Zoue' die ho fec'hejon.

PEDEN SANT JOSEPH

Ouzoc'h en em erbedomp en hon anken, o Joseph, tad euruz Goude beza pedet an Intron, ho pried Santel, e pedomp ac'hanoc'h ive gant fizians.

Abalamour d'ar garantez a bried oc'h euz bet atao evit ar Verc'hez dinam, mam da Zoue, ha d'ar garantez a dad oc'h euz douget bepred d'ar Mabik-Jesus, o pedomp a galon, da ober eur zell a drugarez ouz an heritaj en deuz hor Zalver Jesus-Krist prenet gant ar priz euz he c'hoad, ha d'hor skoazia euz oc'h oll galloud en hon oll ezomou.

O Joseph, c'houi, oc'h euz diouallet gant furnez, famill gaer Nazareth ; diouallit ive famill ar gristenien, ouen dud dibabet gant Jesus-Krist.

O tad meurbet karantezuz, mirit na vimp taget gant ar geier hag ar vreinadurez. O Tad gallouduz, euz bar an env, sellit ouzomp ha roit d'eomp nerz er brezel a ra d'eomp roue an denvalijen. Guechal oc'h euz saveteat he zuez da Jesus ; hirio saveteit he Ilis harpit anezhi a eneb kounar he enebourien hag he dilivrit euz peb drouk.

Roit deomp, e peb amzer, skoazel evit ma c'hellimp, sikouret ganeoc'h, kerzet dre ho roudou, beva santelamant, kaout eur maro mad, ha mont da joa ar Baradoz evit atao. Evelse bezet great.

A zo pedet da ober ho anter-heur Adorasion d'an 10, eil sul a viz Here

11 h. Marie Prigent, Marie-Anne Le Gall, Philomène Le Guen, Eodez Milin Trémazan.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, François Olivier, bourg.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Marie-Yvonne Guennéguez, Marie Bizien, Marie-Jeanne Guennéguez, Kelleroun ; Marie Guennéguez, Kerc'hoézel.


1 h. Jeanne Talarmin, Sémaphor ; Marie-Jeanne Morvan, Penfoul ; Marie-Yvonne Perhirin, Joséphe Bossart, Penkéar.

Kannadik mis Guengolo en deuz koustet 19 lur. Bet evit sikour he baea, digant : F. C., 20 real ; J. M., 16 real ; L. C., 8 real ; J. H., 4 real.

Doue rho faeo !

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



MIZ DU

1. Lun. Gouel AN OLL ZENT, gouel berz. Pedi oll sent ar baradoz evit ma vezo ar Fransizien santel aoualc'h da denna bennoz an Ao. Doue var hor bro. Pedi dreist oll sent Breiz ha sent Frans. Pedi an oll soudarded ha martoloded, maro var an dachen e stad ar c'hras hag eat d'ar baradoz.

2. Meurs. Gouel AN ANAOUN. Ar veleien a c'hell lavaret peb a deir oferen, dre aotre ar Pab Beneat Pemzek ; unan, evit an Anaoun a geront ; eun all, evit an eneu abandounet hag ar zou-darded lazet ; an trede, evit an Anaoun o doa lezet fondasionou laeret abaoue.

5. GUENER KENTA. Dre veritou ho Kalon Sakr, o Jezuz, o pet truez ouz hon tud eat da Anaoun ; pardounit hor pec'hejou ; mirit ouzomp da garet ar pec'het soken veniel.

7. Oferen ha gousperou DEDI AN ILIZ-PARREZ. En iliz hor parrez omp bet badezet, pardounet, kommunit, dimezet ; da iliz hor parrez e vezimp digaset eur vech diveza abarz mont d'ar vered. Buez hon ene a zo maget en iliz hor parrez dreist oll. Karomp, darempredomp hor parrez !

14. Oferen ha gousperou ar PEMPED SUL VAR 'N UGENT goude ar Pantekost (kemerit ofis ar C'huec'hved sul goude ar Rouaned). O Jezuz, deuet da brezeg ar guir feiz, grit deomp gouzout ha kredi stard ar relijion katolik ; grit ma savimp hor bugale evel tud a feiz ; grit ma c'hounezo Breuriez ar Feiz kalz eneu deoc'h er broiou paian.

21. Oferen ha gousperou ar ZUL DIVEZA goude ar Pante-kost. « Na lezimp ket ac'hanomp da gueza en dentasion. » An drouk-spered, hon techou, hon nesa, a c'hell dougen ac'hanomp da ofansi an Ao. Doue : gant sikour ar c'hras, e vezimp ato treac'h, ma pedomp ha ma poaniomp.

28. SUL KENTA AN AZVENT. Sonjomp er varn ziveza. Er vrezel e veler hag e klever traou spontuz ; c'hoariellou e skoaz ar pezh a vezo da fin ar bed. Bezomp prest ato da renta eun ene mad da Zoue, evit beza barnet a druez ganthan.

3. Kerzu. GUENER KENTA.

5. Kerzu. EIL SUL AN AZVENT.

AN ANAOUN

Petra eo an Anaoun ?

An Anaoun a zo eneu an dud maro e stad a c'hras, ha n'o deuz ket c'hoaz peurbaet dle ho fec'hejou d'an Ao. Doue.

E pe leac'h ema an Anaoun ?

An Anaoun a zo er Purkator.

Petra eo ar Purkator ?

Ar Purkator a zo eul leac'h a boaniou, hag eno an Anaoun a ra piniñ abarz mont d'ar Baradoz.

A betra e reont-hi piniñ ?

Piniñ a reont evit tri seurt traou. Da genta, evit ho fec'hejou marvel bet pardounet dezho, var an douar, mes n'int ket bet raparet aoualc'h. D'an eil, evit ho fec'hejou veniel n'int ket bet c'hoaz pardounet. D'an trede, evit ho fec'hejou veniel, pardounet, mes ep beza raparet aoualc'h.

Pegeit e pad ho piniñ ?

Keit ha ma 'z eo red evit dizaotri anezho. Lod ne reont nemet tremen. Lod all a jom hir.

Peseurt poaniou o deuz an Anaoun ?

Poaniou an Anaoun a zo braz. Ervez an darn vuia euz an doktored, henvel int ouz re an infern, nemet an dizesper hag ar gasouni : devi en tan, dioueret ar guel euz an Ao. Doue.

Ha soulaji a c'hellomp-ni an Anaoun ?

Poaniou an Anaoun a c'hell beza skanveat ha berreat gant ar gristenien a vev er bed-ma.

Pendoz an dra-ze ?

Kinnig a c'hellomp d'an Aotrou Doue, evit an Anaoun, hor pedennou, hor piniñnou, hon aluzennou, hon induljansou, kommunionou, oferennou, servichou ; en eur ger, hon oll oberiou mad.

Ma soulajomp an Anaoun, petra dalbezo deomp ?

Jezuz hon digollo ; an Anaoun hor zikouro pa vezint eat d'ar Baradoz.

FAMILLOU BRAZ

Diou vreg a zoare a ioa, en dez all, er memes amzer er poull kanna o c'hoalc'hi, Ceza Neubeut ha Mari Kalz oa ho hano. Kanna reont a zevri : ar c'holvez ne jomme ket pell da ehana, nag an teod ken neubeut.

Ceza Neubeut. — Na me meuz truez ouzit, paour keaz Mari... Ne ket poan a vank d'it ! Kouraj a rankez kaout evit sevel da dorrad bugale ! Ne ket me a garfe kaout eur famil evel da hini te !

Mari Kalz. — A drugare Doue, n'eo ket kouraj a vank d'in, na d'am goaz ken neubeut. Hag oc'hpenn, ne reomp nemed hon dever o kreski an dud en hon ti ; pa 'z omp dimezet, hor brasa mennoz a ioa kaout eur gurunen gaer a vugale...

Ceza Neubeut. — Kurunen gaer, ia, ia ; mes kurunen pouner ! Va goaz-me a lavar ne c'helfe ket beva ac'hanomp m'on defe eur bugel muioc'h.

Mari Kalz. — Hag an Aotrou Doue, petra rit-hu anezhan ? Hen hag a gemer soursi deuz al labousigou hag euz an distera krouadurien, kredi a rez-te e tilezfe va bugale ? En em drei a reer ato en eur fesoun benag ; kaout izoum a ro ijin. Ne mije ket kredet, ma ne vije en em gavet an dra-ze ganen alies.

Ceza Neubeut. — Ha ma kuezfec'h klanv, ho taou ?

Mari Kalz. — Ma ve sonjet e traou evelse, da be leac'h e iafec'h ? Ha ma varfe da vap Ian ?

Ceza Neubeut. — Ne lavar ket a draou evelse d'in ; skrija ran dija o sonjal ema en tenn kenta...

Mari Kalz. — Mad, me meuz dija daou lazet er vrezel — er baradoz e maint o veilla varnomp — ha ma kollan eun all benag o tifen ar Frans, e chommo ganen c'hoaz ar re vianna evit delc'her kompagnunez d'in. Rannet e ve sùr va c'haloun, mes lorc'h a ve ennon evelato.

Ceza Neubeut. — Mes penaoz e rez-te evit dont a benn a gement all ? Ne meuz nemed unan, ha n'oun ket evit dont a benn anezhan.

Mari Kalz. — M'e piye seiz eveldon-me, e teufez marteze easoc'h abenn anezho.

Ceza Neubeut. — Ho ! Evelato...

Mari Kalz. — Guel mestrez ar skol ; bez e deuz bugaligou eleiz, hag e ra dezho mont en dro evel ma kar.

Ceza Neubeut. — Te lavaro ar pez a giri, guelloc'h e c'heller soursial a unan eget a zek.

Mari Kalz. — Ré eo e soursier anezhan, kollet e vez gant ar c'hamambre. Va re-me ne reont james ardou na mouzerez ; gouzout a reont ne meuz ket amzer da jom da zellet outho ; n'int ket figuz var ar boued, na kizidik ouz ar riuo nag ouz ar boan ; boaz int da gaout ar pez zo red ha netra ken. Ne meuz ket aoun ec'h en em golfent gant goal gamaladed ; c'hoari a reont ken etrezho, n'o deuz izoum ebet a re all.

Ceza Neubeut. — Ia, mes, ha pa vezint braz ? pebez nec'hamant evit posti anezho hag ho lakât e tro da gaout bara !

Mari Kalz. — Va bugale, n'int ket savet er feneantiz. Ar baotred a ouezo en em zervicha euz ho divreac'h, ha va faotrezed, a fors da rei an dourn d'in e va oll labouriou, a vezo d'ho zrivac'h vloaz ken guest ha me da gas eun tiegez en dro. Mar bez unan pe zaou hag o defe diezamant evit en em zilua, ar re all a roio skor ha sikour dezho.

Ceza Neubeut. — N'o pezo ket bara gounezet evit ho kozni.

Mari Kalz. — Ne gav ket d'in e vemp dilezet gant hor bugale pa vezimp deuet da veza koz... Boazet int da gaout respet evit ho zad hag ho mamm, ha sùr oun n'on dilezint ket.

Ceza Neubeut. — Me meuz avi ouzoc'h ; en da di-te e vezer ato laouen. Du-ma e vez tenval ar pennou.

Mari Kalz. — Ne ket souez ; ganeomp-ni unan pe unan a gav ato eun dra benag evit divertisa ar re all. Hag oc'hpenn, c'hui n'o peuz nemed tri eal gardian, ha ni on deuz nao.

Etretant oa deuet ar pardaez, hag an diou vreg a ieaz d'ar gear gant ho samm dillad : *Mari Kalz* al laouenedigez en he daoulagad o sonjal en digemer a raje dezhi he bugaligou iaouanka a ioa ouz he gedal ; *Ceza Neubeut* a ioa tenval he fenn o sonjal er pez e doa klevet hag er gouint e dije da renta da Zoue euz he buez.

Examin a goustians an tad hag ar vamm a famil

Ne ket abalamour ma 'z eont brema d'ar skol n'int ket mui va bugale, sklear eo ; n'hellan ket beza dievez e kenver an deskadurez hag ar plegou a roer dezho. Ar mestr pe ar vestrez ne reont nemed delc'her va flas evit ober ar pez n'hellan ket me ober.

An deskadurez. — Ha mont a reont aketuz d'ar skol ? — Ha n'ho dalc'han-me ket er gear var eun digarez benag, pa c'helfen ho lezer da vont d'ar skol oc'h en em zieza eun neubeut ? — Hag en em jala ran evit gouzout ha ne vankont ket d'ar skol ?... Gant piou ez eont d'ar skol hag e tistroont d'ar gear ?

Er gear, ha lezer a ran-me gantho amzer da ober ho deveriou ha da zeski ar c'henteliou roet dezho er skol ?... Me zo o chom er bourk pe tost d'ar bourk . Hag ho c'has a ran d'ar c'hlas-studi goude peder heur ? — Ha n'ho lezan-me ket da goll ho amzer o c'hoari

ep na ve den da deuler evez outho ? — Ha goulén a ran-me deuz ho c'helou digant ar mestr pe ar vestrez, evit gouzout ha poania reont pe ne reont ket ?

An deskadurez var ar relijion. — Daoust hag an Ao. Persoun a zo kountant euz va bugale er c'hatekiz ? M'her goulénno digant-han. Hag ar vugale a ouezo e meuz goulénnet deuz ho c'helou. Ha great e meuz-me d'am bugale deski ha lavaret dirazon er gear ar gentel katekiz bemdez ? — Me fell d'in e ouezfent e talc'han muioc'h c'hoaz e vent desket var ho relijion eget var an traou all.

Ar plegou kristen. — Ha poaniet e meuz da zeski dezho petra eo ar mad, petra eo an drouk ? — Hag ho boazet e meuz da zelaou mouez ho c'houstians, da lavaret eo, mouez an Aotrou Doue a lavar dezho, a ziabarz enno, petra zo mad da ober ha petra zo fall ? — Ha desket e meuz-me dezho petra eo an dever, da lavaret eo ar pez a c'houlén Doue digantho e peb mare, ar pez a blij dezhan ? — Ha pouezet e meuz aoualc'h var gement-ma : e rank an den araok peb tra hag e peb mare ober ato he zever dre garantez ha dre zoujanz evit an Aotrou Doue ? — Ha poaniet e meuz aoualc'h evit rei dezho kenteliou mad ha skueriou mad ? D'ar zul o paouez da labourat hag oc'h heulia gant joa ofisou an iliz ? dioc'h ar pardaez, bemdez, o lavaret ar beden oll asamblez, hag ar pedennou araok ha goude ar prejou ? o tifen gronz ne ve james lavaret ger e va zi enep ar relijion, nag enep ar burete, nag enep an nesa ?

(Ar gerent a vo start al lezen gantho var gement-ze a vo doujet dezho gant ho bugale hag ive a vo karet gantho.) — Abaoue me maint er skol, pe guelloc'h pe falloc'h ez a an traou gantho ? Mar deont falloc'h, perak eo ? — Ha n'eo ket dre frouden e korrijan va bugale, re rust alies, pe re laosk avechou all, pe marteze ne daolan evez ebet ouz kement-ze ?

Bugale ar skoliou neutr pe dizoue. — Perak e kasan-me va bugale d'eur skol kondaonet gant an Iliz, a c'houarn ar gristenien en hano Doue ? — Ha red eo d'in kas anezho d'ar skol-ze ? — Ha ne meuz-me great an dra-ze ep goulén kuzul digant rener va c'houstians, va c'hovesour pe an Aotrou Persoun ? — Mar d-e meuz goulénnet kuzul, ha great e meuz ervez m'oa bet lavaret d'in ? — Ha great e meuz evel ma karfen beza great pa vezin dirak Jezuz-Krist o varn va buez ?

En deskadurez a vez roet d'am bugale er skol dizoue, ha n'euz netra enep ar relijion ? Ha sellet e meuz ouz ho leoriou ? Ha n'euz hini koundaonet ha difennet gant an Eskiptien ? Ha sellet e meuz ouz ho c'haierou ? Hag interrojet e meuz va bugale evit gouzout petra vez kountet dezho ? Ha chommet ez euz bilim en ho spered ? Mar deuz eun dra benag da lavaret, ha goulénnet e meuz kuzul evit gouzout petra da ober ?

Kerent kristen, ha sonjet o peuz c'huvi en traou-ze ? Marteze e kafoc'h hir eun tamik an examin-ma a goustians ; n'eo ket re hir, rak n'euz netra a re'ennhan. Examin an Aotrou Doue, d'ar fin, a vezo, m'oar vad, hirroc'h c'hoaz. Evesait eta, ha grit ar pez zo mad.

BELEIEN AN ESKOBTI ER BREZEL

Daoust ha c'hoant o peuz da c'houzout ped a zo eat da zelc'her ho flas er brezel, var an 1.153 beleg a zo brema en eskobti ? Me zo o vont d'hel lavaret d'eoc'h. Souezet e vezoc'h, me zo sùr, o klevet pegen niveruz int.

483 a zo anezho, tostik d'an hanter, eb kounta 150⁰ abad. Al loden vrasa a zoug ar fuzil hag a ia d'an trancheou, evel ar zoudarded all ; ar re gosa a entent oc'h ar re glanv en hospitaliou, pe o deuz karg a Aumonier.

Setu ama hanoioù ar veleien a zo bet lazet var an dachen a vrezel, pe a zo maro en hospitaliou :

An Ao. *Fr. Arzel*, rejant e skolach Lesneven ; *J.-P. Bescond*, kure e Plounéour-Ménez ; *René Courtès*, kure e Folgoat ; *Ernest Kerjean*, kure e Pont-Aven ; *Joseph Léost*, beleg-skolaer, e Ploumoguier ; *Henri Potin*, kure e Motreff ; *Joachim Jonqueur*, kure e Crozon ; *J.-M. Heydon*, beleg iaouank ; *Yves Cozic*, abad-relijuz ; *Yves Moënnier*, abad ; *Jean Porsmoguer*, abad ; *Talabardon*, abad ; *Joseph Treussier*, abad ; *Henri Héréus*, kure e Briec ; *F.-M. Boulc'h*, kure Lanveoc ; *Foricher*, beleget dek dervez araok ar vrezel ; ar gloareged *Lharidon* a Blounevez, ha *Georgelin* a Lannilis.

Eun toullad all a zo pe a zo bet prizouniet en Allemagn : an Ao. *Hervé Guéguen*, kure e Laz ; *Paul Gouriou*, kure en Irvillac ; *Guillaume Kerhervé*, rejant e skol Saint-Vincent, Quimper ; *J.-M. Le Lay*, kure e Kasteilin ; *Jean Picart*, kure e Landudal ; *Yves Picart*, kure er Roc'h ; *Pierre Le Saux*, skolaer e Landivisiau ; *Mathieu Seité*, kure e Plonévez-Porzay ; *Louis Bihan*, abad ; *Emile Salaun*, rener skol Konk-Kerne.

An Ao. *Boulc'h*, kure e Lanveoc, a zo bet hanvet letanant, hag an Ao. *Papè*, rejant e skol Saint-Vincent, Quimper, sous-letanant.

Hanvet « à l'ordre du jour », ha roet dezho ar groaz a vrezel : an Ao. *Boulc'h*, kure e Lanveoc ; *Joseph Le Foll*, rejant e Saint-Vincent, Quimper ; *Fr. Le Gall*, skolaer e Kerfeunteun ; an Tad *Gantier*, jesuist ; *J.-M. Heydon*, beleg-iaouank ; *Samuël Pengam*, kure e Saint-Hernin ; *Emile Salaun*, skolaer e Konk-Kerne ; *Sébastien Castric*, abad ; *Creignou*, abad.

An tri all-ma o deuz bet ouspenn ar vedalen militaire : an Ao. *Paul Simon*, kure e Treboul ; an Ao. *Jos. Le Foll*, rejant e Kemper ; hag an Ao. *Castric*, abad.

Kement all a desteniou a henor roet da veleien hon eskopti a ziskuez deoc'h e reont ho dever eb marc'hata, hag e karont ar Frans, evel Doue, a greiz ho c'haloun.

MEULET RA VEZO DOUE

Tud Landunvez o deus diskoezet adarre, evel epad kongres ar Sacramant, brema e zeus 2 vloas, oa atao beo enn ho c'haloun ar garantez evit Jesus-Christ e Sacramant an Aoter.

Deuet int gant mal da zaoulina dirag Jesus kuset dindan sepe-sou ar bara ha d'Hen lakaat en ho c'halonou dre eur Gommunion zantel, epad ar pevar dervez adorasion merket evit ho farrez.

Peb rummad hen deus bet eun dervez penn-da-penn gant peder brezegen gaer great tro a tro var Sacramant an Aoter gant ar pamb beleg galvet gant an Aotrou Person d'hen sikour.

Ar veleien-ze oa : an Tad Felix Le Louet, an Aotrou Joseph Conseil hag an Aotrou Herry, rejanted e skol an Intron Varia Vir-Zikour e Brest. An Aotrou Stanislas Conseil, rejant e skol Sant-Vincent a Baol e Kemper, hag an Aotrou Boulic, rejant e skolaj Kastel.

Ho frezegennou a blijie kement m'an o c'havet atao re verr.

Euz al lun vintin 27 a viz guengolo betek sur ar Rozera eus bet great er barrez 2.000 kommunion, kement-se a ziskouez eo rouez ar re chomet heb ober o Adorasion. Kals o deus kommuniet diou vech. An Anaoun ne ket bet ankounac'heat.

An nebeudik tud ho deus manket ho Adorasion dre ho faot a ioa tenval ho fenn da zul ar Rozera epad ma zoa laouen a re o doa great ho dever. Ho c'houstians a rebeche dezo ho dianaoudegez ;

Da genta e kenver tud ar perzeziou all eus an Eskobti o doa dalc'het ho flas dirag ar Sacramant pa n'edo ket ho zro ;

D'an eil e kenver ar zoudardet hag ar vartolodet o gede da bedi evitho epad an Adorasion hag epad an tri dervez a bedennou great evit goulenn dre sant Mikeal fin ar brezel hag ar gounit var an enebourien ;

D'an trede e kenver Jesus he-unan ho gede epad ar pevar dervez-ze evit e drugarekaad evit ar vadelez en deus da jom gant-ho athao e Tabernacl ho iliz evit selaou ho fedennou o c'harga eus he c'hrasou, goulenn pardon evit o fec'hejou ha servicha da vagadurez d'ho eneou dre ar Gommunion zantel.

Dianaoudek hag ingrat ar re zo chommet dre o faot heb ober ho Adorasion. O deus roet ouspen skouer fall, hag ar pec'het-ze eo unan eus ar re zisplij ar muia da Zoue.

Epad ma zedo var an douar Jesus ne astenne an dourn nemet evit ober vad, ne zigore he c'hinou nemet evit benniga.

Eur veach goulscoude he c'hinou a zigoras evit gervel mallos : Var biou ? Var ar pec'her a skouer fall. Mallos, emezan, var an den a skouer fall.

Guel e ve bet dezan ne vije ket ganet, pe e vije bet lakeat dezan deus he c'houzouk eur mean milin en dervez ma zeo deuet var an douar a taolet da veuzi e strad ar mor.

Ar c'han a zo eat ive brao en dro sikouret ma vezet gant mouez kaer an Aotrou Joseph Conseil.

Ar re glanv hag an dud re gabac'h evit dont d'an iliz da adori Jesus ho deus en adoret en ho c'haloun pa en deus ar beleg kasset dezo ar Gommunion betek ho zi.

Lavaromp ta oll en eur vouez : Meulet ra vezo Doue ha trugarekeat ar veleien o deus kemeret kement a boan evit lakaat oll dud Landunvez da c'hounit induljansou an Adorasion.

AR JENUFLEXION

Evit adori ar Zakramant meulet ra vezo, ar merk a vez roet eo ar pez a c'halver ar *Jenuflexion*.

Merc'hed ha goazed a dle hen ober, hag hen ober mad, gant respet, setu ama penaoz : en eur blega ar glin beteg an douar, o telc'her ar c'horf sou.

Ar jenuflexion a dleer ober dirak an tabernacl a zo enghan ar Zakramant meulet ra vezo, pa 'z eer en iliz ha pa deuer er meaz, pa dremener dirak an tabernacl sarret.

En eun doare all e tleer ober ar jenuflexion, o vont var an daoulin hag o soubla ar penn izel, pa vez ar Zakramant espozet var an aoter, epad an oferen etre ar Gorreou ha kommunion ar beleg, p'en em gaver gant an Aotrou Doue var an hent, douget gant ar beleg oc'h he gas d'eun den klanv.

Evit ober mad ar jenuflexion, arabad eo hen ober gant re a brez, mes kempennik, gant respet, o tiouall da zellet nag a gleiz nag a ziou.

Meur a hini a gaver, avechou, pe er ruiou, pe var an hentchou, ha ne ouezont ket penaoz en em zele'her p'en em gavont gant an Aotrou Doue. Peurliesia ne vezont ket euz ar barrez. Goulskoude bez ez euz meur a hini, re vraz ha bugale, hag a zo euz ar barrez. Er skol e tleer ho c'hentelia mad var ar poent-ze, mes ive er gear. Ar gerent a dle kelen abred ho bugale divar benn Hor Zalver Jezuz-Krist e sakramant an aoter hag ar fesoun da renta henor dezHan.

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien d'ar Barados :

	PARROUN	MAEROUNEZ
23 Guengolo.	Yvonne-Jeenne-Marie Floc'h, bourg.	Edouard Floc'h.
4 Here.	Fr.-Marie-Joseph Eliès, Kerguerioec.	Joseph Forest
4 —	M.-J.-G. Magueur, S.-Samson.	Joseph Magueur
7 —	Olga-Maria Kerros, Kerriou.	Jean Briant.
16 —	Madeleine-Marie Jaouen, bourg.	René Jaouen.
20 Guengolo.	Gourvadezet krouadur Nédélec.	sémaphore.
		M.-Yv. Lunven
		Marie Marzin.
		M.-Y. Maguenr.
		Olga Le Vaillant
		M.-Yv. Lescop.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeate douar santel ar oered, da c'hedal dez ar carn, e goasked ar Groaz
9 Here. Marie-Yvonne Fourn, 60 vloaz, Tréma-an.

De Profundis.

A zo pedet da ober ho anter-heur Adorasion d'an 14, eil sul a viz Du

11 h. Marie-Anne Brénéol, Françoise Jaouen, Joséphe Arzel, Kerzent ; Joséphine Le Borgne, Milin-Trez.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, François Olivier, bourg.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Marie-Yvonne Guennéguès, Créac'h-Gouriou ; Marie Cloâtre, Keryéon ; Francine Conq, Traon ; Marie Squiban, Kénézoc.

1 h. Jeanne Gélébart, Kergastel ; Eulalie Cadour, Marie-Renée Floc'h, Pauline Conq, Sant-Gonvarc'h.


Kannadik mis here en deus koustet 19 lur. Bet evit sikour he baea, digant : F. C., J.-M. K., P. K., M. T., Ph. C., J. G., peb a 4 real, C. G., 10 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

Mig Kergu

1916



MIZ KERZU

3. GUENER KENTA (gouel S. Fransez Xavier). O Jezuz, c'hui hag a skuillaz ho koad evit silvidigez an oll dud, kinnig a ran deoc'h ar memes Goad presiuz, dre an oferen hag ar gommunion a zigoll, evit rapari torfejou ha pec'hejou ar baianed, evit ma vezo roet muioc'h-mui a aluzennoù da Vreuriez ar Feiz, da c'hounid eneoù d'ho karantez.

5. EIL SUL AN AZVENT. Sant Ian Vadezour a anzavaz he feiz en he brizon, ep aoun ebet. Kristenien zo hag o deuz aoun da ziskuez ho feiz etouez ho c'henvroiz : c'hoarzin a reont pa glevont drouk-prezek euz ar relijion, euz ar veleien, euz ar burete ; debri a reont kig da vener, d'ar pevare amzer, er C'horaiz, var zigareziou ne dalont seurt. Ruzia reont euz Jezuz-Krist. Siouaz ! Doue ra viro na deufe Jezuz d'ho nac'h en deiz diveza.

8. KONSEPSION DINAM AR VERC'HEZ GLORIUZ VARI. En dervez-ma meulomp Mari, konsevet ep ar pec'hed orijinel, kaer ha skeduz he ene ; meulomp Santez Anna ha Sant Joachim, he c'herent ken santel ; meulomp Jezuz hag an Dreinded Sakr, a ro peb santelez ; meulomp an Iliz, a ziskleriaz deomp donezoun burzuduz ar Gonsepsion dinam.

12. Sul. Oferen ha gousperou SANT KORANTIN, kenta eskop ha patron an eskopti. — Sant Korantin, pedit evit ho pobl, saveteit ho c'horfou hag ho eneoù er vrezel-ma. Diouallit ho peleien eat d'an arme. Kennerzit ar re chomet er gear. Bezit gant an Ao. 'n Eskop er mareoù trubuilluz-ma.

15-17-18. Merc'her, guener, sadorn *ar Pevare amzer*. IUN HA VIJIL. Dre ar binjen-ma e kinnigomp poaniou ar goanv d'an Ao. Doue. Dreizhi ive goulennomp ma vezo douseat ho foan d'ar zoudardet keaz en trancheoù : petra hor pinijen e skoaz ho mizer ?

19. PEVARE SUL AN AZVENT. « Kempennit an hent d'ho Salver » a lavare S. Ian. Ha kempennit mad a rit oc'h ene araok mont da gommunia ? Hag ober a rit an aktou a feiz, a esperans, a respet, a gontrision, a garantez, a c'hoant, merket en oc'h heuriou-oferen ? Eur gommunion great evel divar nij a zoug nebeut a frouez.

24. Dirguener. IUN HA VIJIL derc'hent Nedelek. — Unani hor pinijen gant dienez Jezuz, Mari, Joseph, ne gavjont plas ebéd en hostaliri, hag a rankaz mont d'eur c'hraou da loja, gant pe seurt boued, m'o deuz bet eun tam benag ?

25. Sadorn. NEDELEK, gouel berz : Jezuz-Krist deuet er bed. Eun Doue oll c'halloudek, en em c'hreat bugelik ! Eun Doue mestr var gement tra a zo, en em c'hreat paotr ! Eun Doue euruz a viskoaz ha da viken, deuet da gaout poan ! Meulomp, adoromp, digollomp. — En oll oferennou, kest evit Semineriou an eskopti.

26. Sul. Oferen ha gousperou SANT STEFAN, avieler, merzer kenta. En eur vervel evit Jezuz, e velaz ar baradoz digor evithan. Ra blijo gant Doue digeri he varadoz dirag eneoù hor zoudardet a varv evit ho bro ! Ra vezint oll er stad a c'hras en heur euz ar maro !

1 Genver 1916. Oferen ha gousperou CIRCONCISION JEZUZ-KRIST.

2. Sul kenta. Oferen ha gousperou HANO SANTEL JEZUZ.

BREURIEZ AR FEIZ

Abenn peder pe bemp sizun, va farrisioniz ker, e vezo kaset oc'h aluzennoù d'an eskopti, a gaso anezho da Renerien braz ar Vreuriez, asambles gant re ar parreziou all.

Arabad e ve nebeutoc'h er blâ-ma eget kent.

Sal' e ve muioc'h !

Rag sonjit mad. Ar misionou a zo paouroc'h brema, abalamour d'ar vrezel. Nebeutoc'h a visionerien zo enno, peguir eun darn vraz zo deuet euz ar broiou pell da zifenn ar Frans : ar veleien chomet eno, ar re gosa, ar re zempla, a rank beachi muioc'h, paea muioc'h a dud da zikour anezho en ho labour. Kerroc'h eo an traou ; kas ar marc'hadourez var listri a goust muioc'h ; ar viche-mourien a gemer koumanant brasoc'h. A hent all, muioc'h a dud zo en dienez : ne c'heller ket ho lezel da vervel gant an naoun. Ma rank ar misioner serra hospitaliou, skoliou, kouentchou, na pet ha pet ene a vezo kollet !

Oc'hpenn ze. Pa ema ar visionerien en arme, dourn ha dourn gant hor goazed hag hor paotred, eaz eo kompren pegen stard e sonjont en ho farrisioniz a bep liou, o deuz ranket dilezel evit eun tachad, — evit ato darn anezho, rag meur a visioner zo bet laz. Bebez enkrez, ma c'houzont n'eo bet kaset dezho nemet aluzennoù dister ! Mil boan o devoa evit delc'her, araok ar vrezel. Ha lenva rankint var ho oberiou diskaret, pa'z aint en dro da velet anezho ? Goude beza risklet ho buez, skuillet ho goad, gouzanvet poan iskiz evidomp, ha gaelet a raint ac'hanomp o lezel goullou an dourn a astennont evit ho feorien ?

Dalc'homp sonj, sikour ar visionerien a zo sikour ar Frans hag an Ao. Doue. Sikour ar Frans : rag ar misioner a skign karantez ar Vam-Bro e kalonou he gristenien. Sikour an Ao. Doue : rag he labour, he c'hoant birvidika, a zo deski ar guir feiz d'ar baianed hag ho lakaat var hent ar baradoz.

Ma livirit : « Deomp-ni eo keroc'h an traou. Ni rank dispign evit hon tud eat d'an arme. Paouroc'h omp er blâ-ma », va respount a vo ber.

Da genta, guir eo tud zo re baour. Ne roint nemet pedennou. Mes pedi a raint a zevri. Doue ho anavez.

D'an eil, re all a c'hell paea an dek real daou wenek, goulennet bep bloaz gant ar Vreuriez. N'eo ket an dra-ze ho lakfe pinvidikoc'h da fin ar bloaz : eur guennek er zizun ! Piou ne c'hell ket prena eur guennegad butun nebeutoc'h, peb sizun ? piou na c'hell ket eva eur banne nebeutoc'h, espern eur guennek var ar c'huignou, an bonbonou, zoken var tammou dillad a zo, var braoigou ?

Ma rankit dioueret eun draik benag, Doue ho tigollo, kant evit unan. Roit brokuz, dre garantez evidoc'h oc'h-unan, evit ho pro, evit ar visionerien, evit Doue.

AR VEILLEREZ GOANV

Eun dra iskiz a rafe ar re a zonjfe er bla-ma mont da veilla evit klask ebad ha plijadur direiz. En amzer glac'haruz zo brema, e tle peb unan chom kloz en he di, pe e ti an amezeien dosta, o komz euz ho zud er boan hag en danjer er vrezel. Kouz lavaret ep ean, ra vo, oc'hpen, lavaret e peb ti ar Rozera gant kalz devosion, ha lennet eur gentel santel benag.

Diouallomp da skuiza o pedi ; ne vez selaouet gant Doue nemed ar re a zalc'h mad da c'houlouen diganthen ar pez e fell dezho kaout.

BELEIEN AN ESKOPTI ER BREZEL (eil listen)

Beleien lazet. — An Ao. Louis LAREUR, kure Daoulas, 28 bloaz, lazet d'an 3 a viz Here. Map oa d'an Ao. Lareur, konseiller jeneral Lokournan.

An tad Gabriel CARRE, relijiuz, bet kure e Lannilis, lazet d'ar 17.

An tad Ernest CROISIER, relijiuz, a barrez Lambaol-Plouarzel, deuet euz ar C'hanada, reformet e miz kerzu 1914, eat neuze da aumonier militaire, ha lazet var an dachen.

An Ao. Maxime KERGUELEN, kloarek, euz Brasparts, adjutant en 19^e, lazet dirag Tahure (Champagne) d'ar 27 a viz Guengolo. *Roet dezho ar Groaz a vrezel.* — An Ao. Hubert BOSSUS, aumonier militaire an 22^e division, rejant e skolaj St-Visant, Kemper.

An Ao. TIEC, kure e Recourans-Brest.

An tad Charles BRANQUET, relijiuz, bet kure e Guipavas ; aumonier militaire.

An tad LE HIR, bet soudard en 2^e colonial, brema aumonier militaire er 1^{er} colonial. Deuet eo euz enezen Haïti (Amerik) da fin 1914.

An Ao. BALBOUS, kloarek a Gemper, serjant zouaved.

Metalen militaire ha kroaz a vrezel. — An Ao. LUNVEN, kloarek a Viklan, serjant zouaved (trouc'het he c'har).

Kroaz a honor. — An Ao. Fr.-M. MADEC, kure er Relecq, aumonier an 2^e colonial abaoe miz eost 1914.

D'ar 25 a viz here, roue Bro-Zaos o veza deuet e Frans, a ieaz gant an Ao. Poincaré, president ar Republik, da vizita eun nebeud euz hor rejimanchou, hag ispisial an 2^e colonial. Goude ar revu, ar President he-unan a roaz ar groaz a enor d'ar re o doa diskuezet ar c'haera nerz-kaloun, abaoe ar penn kenta, hag en ho zouez edo an Ao. Madec. An Ao. Poincaré a stagaz ar groaz var he beul-trin, hag a bokaz dezhan goudeze dirak an oll. Roue Bro-Zaos, a ioa e kichen Joffr, a c'houlennaz digant hen-ma piou oa ar beleg-se, ha Joffr a respountaz dezhan : Eur beleg katholik eo, hag ar groaz a roan dezhan, abalamour m'en deuz eun nerz-kaloun euz ar re gaera e kreiz an tan. — N'oun ket souezet, eme roue Bro-Zaos, eur blijadur eo ho gullet, ha va-unan e meuz roet ar groaz a enor da veur a hini.

En « *Dépêche* », a zo bet diskuezet d'in, eo e meuz lennet ar pez a gountan deoc'h, hag evel ma c'houzoc'h ar gazeten-se ne c'heller ket rebech dezhi eur garantez dreist-muzul evit ar veleien. Kounta a ra goulskoude en deuz an Ao. Madec en em lakeat e riskl

ouspenn kant gueach da goll he vuez, evit mont da zavetei ar zou-darded blesset, hag en deuz aliez ho douget var he gein, dindan an tennou. Den ne verite eta muioc'h an enor a zo roet dezhan. Soudarded he rejimant a zo-foug enno, hag hiviziken, a c'heller kredi, e saludint ho Aumonier gant muioc'h c'hoaz a zoujans hag a garantez. Goud, er c'hontrol, a zo e riskl da baka eun derchen, o klevet en deuz President ar Republik he-unan roet ar groaz a enor d'ar beleg en deuz distroet dezhan he c'hevier ken aliez ha ken brao...

An Ao. François LE GALL, rener skol gristen Kerfeunteun, aumonier volontaire er 118^e linen. « Bet reformet guechall, nebeut a iec'hed dezhan, eat goulskoude en dervez kenta gant ar rejimant. Abaoe ar penn kenta, an oll o deuz desket var he skuer parfet en em rei hag en em zakrifia. D'ar 25 Guengolo 1915, en deuz lammet var an dachen, e penn kenta ar rejimant o sailla var an enebour. Abaoe, noz ha deiz en deuz klasket ar re c'hlazet, ha rekouret ar zoudardet en angoni. Ato er renk kenta, morse nec'het e kreiz an danjer, en deuz diskuezet ar gaera, an dispounta kouraj, hag ar vrasa karantez evit he nesa. Dre he galoun n'euz hini par dezkan, dre he vertuziou meulet gant an oll, dre he aliou ato selaouet, en deuz roet ar brasa sikour. Glazet d'an 12 Here 1915, e trancheou al linen genta, en eur vezia ar re varo epad m'edo an division en adre er repos.

(Ar groaz a enor, hag ar groaz a vrezel kenta klas.)

Sinet : JOFFRE.

Peden evit an amzer a vrezel

Great gant Bossuet, bet eskop Meaux (17^a kantved).

O va Doue, n'omp ket boaz, ha n'or beuz ket a nerz-kaloun da ober pinijen hon-unan : re bounner e kavomp zoken an nebeudik a c'houlouen an Iliz diganeomp. Setu perak, C'hui, o Mestr, o peuz truez oc'h hor zempladurez, hag a zigas deomp poaniou, ervez ma raket hor pec'hejou, ha ma c'houlouen ho justis ; hag evit diskuez muioc'h c'hoaz ho trugarez, e lakit d'hor parea ar poaniou a dlle ebken hor c'hastiza. Ah ! pa vihanna bemdez niver hor c'herent hag hor mignoned, ha pa gresk eb ean niver ar re varo, a gariemp kement ; pa stagit ac'hanomp oc'h ho kroaz, o va Doue ! dre ar c'hollou ken poaniuz a ra deomp sevel varzu an Env hon hirvoudou, grit ma tavimp hor c'hlemmou, ma stouimp hor penn dindan goaligner ho justis, ha ma c'houzanvimp gant nerz-kaloun, evel gvir gristenien, ar pinijennou talvouduz a zigasit deomp.

TRI MIL LEO

Eur misioner en em gavaz e Guened, d'ar 25 a viz Eost. Dont a rea euz an Amerik, en tu all d'ar C'hanada, euz ar vro hanvet Mackensie. Euz he barrez d'ar gar tosta, en deuz ranket ober c'huoc'h kant leo, var loan ha var he droad. Euz gar Edmonton da gear New-York, eur hizuniad-train, deiz ha noz, ep tarda an oll. Euz New-York d'an Heor-Nevez, eiz dervez var eul lestr. Re baour da haec he veach, en doa great eun dro gest evit gellout dont beteg Frans.

P'en em gavaz en dépôt, ar c'hapiten a lavaraz dezhan :

— « C'hui a vezo infirmier en eun hospital. »

— « Va c'hapiten, a respountaz kerkent ar misioner, na meuz

ket great tri mil leo var zouar ha var vor, evit beza kraou et en eun hospital. Goulen a ran beza kaset da linen an tan. En em jachit, ne ket ? »

Setu pe seurt tud zo bet harluet euz ho bro, var zigarez ne c'hellent ket beza Fransizien mad. Mes a bep seurt divroidi a gave dor zigor en hor Frans.

AR BREZEL

Ma kendalc'h ar brezel kendalc'homp ive da bedi. Deuomp d'ar zul nan ebken d'an Offeren mez c'hoaz d'ar Gousperou peguir neuze eo e vez great ar pedennou evit goulen fin ar brezel hag ar gounid var hon enebourien. Deuomp ive pa c'hellimp var ar zizun d'an offeren 7 h. nemed kart peguir goude an offeren ze e vez great ar memez pedennou. Mar guellit kommunia ne vankit ket d'en ober rak pa vezo Jesus en ho kaloun e selaouo c'hoas guelloc'h ho peden.

Bep pardaez ive pa vezomp oll assemblez daoulinet evit ober hor pedennou deuz an noz ha pa velomp, an daelou en hon daoulagad, goullo plas meur a hini deuz hon tud ne ankounac'haomp ket da bedi stard Doue evit goulen ho distro ar c'henta.

Hor soudarded hag hor martoloded a ra ho dever gant kaloun, 12 deuz hor parrez o deus déjà kayet ar maro o tiffen ho bro, al loden vrassa deuz ar soudarded eus a 20 da 35 a zo bet glazet, mez gant sikour Doue hag an Introun Varia a Gerzent kals anezo a zo pare hag a re all en hent mad da barea.

2 deuz hor soudarded Joseph Gourmel, sarjant en (Infanterie coloniale) ha Jean Mengui, sarjant en (Infanterie de ligne), a zo bet meulet gant ho cheffou dirak ho c'hamaraded abalamour d'an nerz kaloun o devoa diskouezet en emgan. O daou o devozo ar groas a vrezel. Ni ho c'henvroiz a zo euruz eus an henor great dezo.

An Aotrou Kure a zo brema iac'h. Kals labour en deuz goulskoude karget eo en hospital (temporaire salle des Fêtes) e Vitry-le-François, e departamant ar Marn, da zoursial eus ar re c'hliatet a vez digasset eus ar front. Bemdez, emezan, e kleo ar c'hanolietou o krozal. Pedomp evithan evit ma vezo diouallet deuz peb drouk.

GOUEL SANT FRANCEZ XAVIER

D'ar guener 3 a viz Kerzu, gouel Sant Francez Xavier, patroun breuriez ar feiz, d'an dervez-ze hag epad an eisved induljans plenier da c'hounit d'ar re a zo e breuriez ar feiz gant ma vezint bet o kovez hag o kommunia.

Evit beza e breuriez ar feiz e roer eur guennek ar zizun hag e lavarer bemdez eur Bater hag eun Ave Maria, gant ar c'homsouman : Sant Francez Xavier, pedit evidomp.

Breuriez ebet talvoudekoc'h peguir evel hor Zalver e rear aluzen evit prena eneou hag o c'haz d'ar Baradoz.

Varlene, aluzen breuziez ar feiz a ioa eat var gresk e Parrez Landunvez, rak an oll a vouie penaoz ar guella doare da denna bennoz Doue var hor Soudarded hag hor Martoloded en danjer oa sikour gounit Eneou da Zoue. Er bloaz-man e vezimp adarre bro-

kus evit aluzen breuriez ar feiz, rak izoum hon deus atao sikour Doue evit hon tud er brezel.

Aluzen ar (Sainte-Enfance) a ioa ive eat var gresk varlene. Bennoz d'ar 150 krouadur o devoa gouezet trugarekaat Doue da veza great dezo genel en eur vro gristen ha lakeat Doue da sellet a druez ouz ho Zadou hag ho Breudeur en emgan, o rei eur guennek ar miz evit ar vreuriez-ze.

Aluzen breuriez ar feiz hag ar (Sainte-Enfance) a zo da ober e koumansamant miz Kerzu. An neb a garo e roio d'ar Zelatourezed a gaz dezo liziri breuriez ar feiz.

AR C'HADORIOU, AR BEDEN ZUL

Da c'houel Sant Stephan, 26 a viz kerzu, e vezo, evel bep bloaz kemeret arc'hant ar c'hadoriou hag ar beden zul. Pep hini a zigasso ganthan numero he gador. Evel ne vel ket a sklear an Aotrou Persoun e ra deoc'h eun ali evit ar bloaz-man : O pedi a ra da zont epad miz kerzu d'an offeren 7 h. nemed kart e vez great enni ar pedennou evit ar Soudarded hag ar Vartoloded, deuit goude an offeren-ze d'ar sakreteri evit paea ho kadoriou hag ar beden zul, er giz-ze e vezo kals essoc'h evidoc'h hag evithan.

En danjer braz a zo evidomp oll epad ar brezel, den ne sonjo laerez an Iliz, o chom heb paea he gador.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Marie Roudaut. Eugénie Morel. Marie Derrien.	Trede klas.	{ Jeannie Magueur. Catherine Didou. Marie Guéna. Thérèse Cadalen. Marie Balcon. M ^{ie} Magueur (St-Samson).
Kenta rummad.	{ Augustine Talarmin. Berthe Bellec.	Kenta rummad.	{ Joséphine Gouzien. Jeanne Trébaol. Marie Talarmin. Marie-Anne Conq. Eodez Talarmin.
Eil rummad.	{ Marie-Yvonne Conq. Suzanne Le Touz Marie-Yvonne Kerjean. Suzanne Léostic.	Eil rummad.	{ Marie Bocheur. Léonie Begoc. Louis Guennégues. Jean Morel. François Cadalen. Marthe Lesvéan. Eugénie Forest. Julie Talarmin.
Eil klas.	{ Marie Perchoc. Françoise Brénéol. Angélique Léostic. Marie Gouzien.		
Kenta rummad.	{ Philomène Cornen. Joséphine Fourn.		
Eil rummad.	{ M ^{ie} Magueur (Kerhoazoc). Rosale Léostic. Marie-Anne Mingant. Isab. Ile Guéna. Marie Percuoc (Kervéléoc).		

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien d'ar Baradoz :

	PARROUN	MAEROUNEZ
23 Here	Marie-Josèphe Tanguy, Traon-	Joseph Tanguy, Marie Perchoc
1 Du	Augustine Guéguen, Poullouarn	Joseph Minguy, A. Quéméneur
1 —	Alexandrine Guéguen, Poullouarn.	Yves Minguy, Marie Maguaur

ENTERRAMANTHOU

À zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar vârn divesa,
e goasket ar grouz :

24 Here Jean-Marie Héliers, 36 vloaz, Kerguerioc.
3 Du Pierre-Marie Luart, 74 vloaz, Kelleret

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

16 Du Jean-Allain Guellec, 32 miz, Arc'hantel.

Laudate pueri.

ASSURANS AR CHATAL

D'ar merc'heur 15 a viz Kerzu Comissierien assurans ar chatal a zo pedet d'en em gavout er bourg da 8 heur evit pricha an holl c'hezek o devezo an oad.

Ar re a zo e karter ar Menez a en em gavo er bourg gant ho c'hezek da 8 h., ar re a zo e karter Kerzent da 9 h., ar re a zo e karter ar c'hantel da 10 h.

D'ar zul 19 a viz Kerzu ar re o deuz kezek assuret a zo pedet da zont oll d'ar reunion a vezo great da 3 h. 1/2 er skol gristen.

Peb hini a c'hello lavaret he c'her evit guella mad an emgleo.
En dervez-se e vezo resevet arc'hant an assuranz evit ar 6 miz a goumanso d'ar c'henta a viz guenver 1916.

Da ober ho hanter-heur Adorasion, d'an 12 eil sul a viz Kerzu

A zo pedet da ober ho anter-heur Adorasion d'an 12 eil sul a viz kerzu.

11 h. Marie-Anne Elies, Rosalie Croguennec (Kermajan) ; Marie-Anne Elies, Marie Balcon (Kerléo).

11 h. 1/2. An Aotrou Person, François Jézéquel, Joseph Vailant, Hervé Salaun (Bourg).

12 h. Ar skol gristen.
12 h. 1/2. Françoise Trébaol, Françoise Arzel, Renée Thépaut, Marie Le Hir Kernézoc.

1 h. Françoise Le Gall, Alexandrine Trébaol, Jeannie Perhirin, Isabelle Chapalain (Kerriou).


Kannadik miz Du en deus koustet 19 lur. Bet evit sikour he baea, digant : Y. B., eur skoued ; M.-J. K., 8 real ; M.-Y. P., M. F., R. B., Ph. C., peb a 4 real ; M. T., 12 guennek.

Le gérant : J.-M. LEROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

Miz Guenver

1916



BLAVEZ MAD

Ar *C'hannadik* a reket d'he oll lennerien eur bloavez mad kals re all ouspen hag eurusted an env da fin ho buez.

Goulen a ra evitho pasiantet epad ar brezel spountuz-ma dirol let varnho evit ma kresko ho mirit evit ar Baradoz.

Pedi a rei evit ma vezo diouallet deuz peb drouk Soudarded ha Martoloded ar Barrez, hag evit ma tistroint ar c'henta d'ar gear yac'h a gorf hag a Ene, goude beza bet ar gounid var ho enebourien. Pedi a rei ive evit ma kresko ar garantez kristen etouez ar re zo chomet er gear hag ma en em sikourint etrezo da ober ho labourou. Er giz-ze e vezo c'hoaz bara da zebri da veza ma zeus nebeut a labourerien er vro.

Ar Vichourerien mar deuz eun tam kaloun en ho c'hreiz ne gollint ket ken nebeut ho dervezioù oc'h en em vezvi pa c'houzont e zeus kement a izoum eus ho labour. Ne c'houlennint ket eur priz divergont evit ho labour var digarez ma ranker ho c'haout.

MIZ GENVER

1. Sadorn. CIRCONCISION HOR ZALVER JEZUZ-KRIST. — A-unan gant ar beradou goad a oue skuillet ganeoc'h evidomp, o Mabik Jezuz, e kinnigomp deoc'h oll goad hor breudeur skuillet var an tachennoù a vrezel : ra vezo purifiet gant oc'h hini, ra voalc'ho pec'hejou hor c'henvroiz !

2. Sul. HANO SANTEL JEZUZ. — Ra vezo benniget oc'h hano gant an oll dud, o Jezuz, o Salver. Ra vezo var muzelloù hor zoudarded kuezet var an dachen, o c'helver ac'hanoc'h d'ho rekour ha d'ho savetei !

7. GUENER KENTA. — Kalon Sakr Jezuz, digemerit an oferen hag ar gommunion a zigoll evit ma vezo raparet, a vrema, kement pec'hed, kement torfed, a vezo great hed ar bloaz.

9. SUL AR ROUANED. — O Tri Roue santel, c'hui hag a ziskuezaz eur feiz ken birvidik, grit ma vezo renet ar boblou gant tud a feiz, ha ma klaskint ato ober holontez an Ao. Doue, evel m'oc'h euz great.

16. EIL SUL GOUDE AR ROUANED. — Jezuz, great oc'h euz mirakl Kana, var goulen ar Verc'hez ho Mam. Selaouit ar pedennou e ra brema evit hor Bro, a zo he rouantelez. Ha mar bez red ober burzudou evit hon delivra, grit burzudou evit rouantelez Mari.

23. TREDE SUL GOUDE AR ROUANED. — Jezuz, c'hui a bareaz an den lor : pareit lorgnez an eneu, da lavaret eo, tennit an heretiked d'ar guir feiz ; an oll heretiked, o Jezuz, mes dreist oll ar re a ro an dourn deomp er vrezel-ma, evel ar Russed (chismatiked) hag ar Zaouzoun.

30. PEVARE SUL GOUDE AR ROUANED. — Jezuz, c'hui hag a goumande da vor Jenezareth, c'hui hag a zaveteaz bagou an Ebestel, beillit var hon listri, var hor martolodet ! Difennit anezho rag an enebourien dizolo pe kuzet ; kasit anezho d'ar porziou dizanjer ha d'ar viktor.

2. GOUEL AR CHANDELOUR (merc'her). Sant Simeon, c'hui hag a lavaraz d'an Ao. Doue ho laosker da vont e peoc'h, goude m'o poa douget ar Mabik Jezuz etre ho tivreac'h, mirit na vezo tizet gant ar maro hini ebed euz hor zoudardet ep beza bet kom-muniet.

4. GUENER KENTA.

6. PEMPED SUL GOUDE AR ROUANED.

AR BANNEOU

Eul lezen nevez a zifenn ouz an hostizien guerza odivi ha liku-ou krenv araok 11 heur. Mad eo, da c'headal guelloc'h.

Mad eo. Eur vez oa guelet tud o c'headal an *Anjelus* e kichen an hostaliri, prest d'en em ampoezouni an abretta ar guella. Eur vez oa guelet tud o tarda er bourkou, pe en hostalirioù ar c'hroaz-ziou-hent, en eur vont d'ar marc'had pe d'ar foar. Eur vez oa guelet tud o vont, da zul, deuz an iliz d'an hostaliri goude an oferen vintin, pe deuz an hostaliri d'an iliz araok an oferen bred. Labour ha banneou, santelez ha banneou, setu traou n'int ket great evit en em glevet. Mad eo e ve lakeat fin d'ar vez-ze.

Gedomp guelloc'h. Ar vuez zo ker, a lavarer : na rit ket a zispignou direzon evel ma reer en hostaliri. An Allmanted a zo nive-ruiz : na zikourit ket anezho en eur zisteraat ho korf hag ho pugale, dre eva banneou. Ar vrezel zo eur voalen spountuz : pellait anezhi dre ar binijen. Ha pa 'z eo guir hiniennou n'o deuz ket a nerz-kaloun goualc'h, esperomp e vezo savet eul lezen strisoc'h, da viret outho da goll arc'hant, iec'hed, skiant vad, amzer, santelez, gouen ha goad ho zud, dre ar banneou milliget.

Evit savetei ar bed, Jezuz hor Mestr a asantaz eva guinegr ha vestl. Evit savetei hor bro hag hon eneu, ar c'hristen mad a ziouer ar banne.

SONJEZONOU MAD

1. Ar madou a deu dre an hent fall, a zo die-
zioual.
2. Bleud an diaoul a ia da vrenn.
3. Rei d'ar paour aluzen aliez, ne ziverreaz b'
4. Bezit mud pa roit ; pa roer deoc'h, kom-
5. An hini a zalc'ho an askorn, a ielo ar c'
6. Abarz mervel rei he zavez, a dosta an

TADOU HA MAMMOU

Eun dever red o peuz da ober : S
Choazit :

1. — Pe c’hui a fell deoc’h ober euz ho pugale tud honest ha servicherien mad d’ho bro :

Evit-ze eo red : — Sila en ho c’haloun karantez Doue hag ar relijion ;

- Deski dezho pedi ez vianik ;
- Deski dezho karet ar Frans ;
- Deski dezho senti ouzoc’h ha respeti ac’hanoc’h ;
- Deski dezho ho c’hatekiz ;
- Rei dezho deskadurez er skol gristen ;
- Evesât gant piou e vezont, petra lennont ;
- Ehuna ho flegou fall ;
- Ho lakât etouez tud vad pa ’z int er bed ;
- Beilla varnho bepred.

2. — Pe c’hui fell deoc’h ober euz ho pugale lampouned ha tud fall...

Evit-ze : — Deskit dezho disprijout Doue hag ar relijion ;

Lavarit dezho n’ez eo ar vuez nemed eun ure hag e ranker kemeret ar blijadur ennhi ;

- Lavaret dezho : pa vezer maro eo echu tout ;
- Lavaret n’en deuz mui an den bro ebéd ;
- Lakât deski anezho er skol dizoue ;
- Lezer anezho da lenn leoriou ha kazetennou fall ;
- Lezer anezho da zarempret kamaladed fall ;
- Chom ep korrija anezho ;
- Rei dezho skuer fall ;
- Ho abandouni ho-unan er vuez...

Kerent fur, c’hui hag o peuz eur guir garantez evit ho pugale, paotred ha paotrezed, ne vezoc’h ket eur momet en entremar !

C’hui fell deoc’h ober euz ho pugale tud honest ha servicherien mad d’ho bro, grit ar pezh zo red evit kementze :

Savit anezho evel kristenien !

DOURN DOUE

An darvoudou a diz hor bro abaoe c’huezek miz n’o deuz ket c’hoaz digoret ho daoulagad da dud zo, ne fell ket dezho anzañ ez euz eun Doue, hag eo abalamour ma ’z eo bet ken ofanset en hor bro ha gant hor bro eo e tiguez ganeomp kement a draou gla-c’haruz. Eur beleg, persoun parrez Montalen (eskopti Grenobl) a zo bet tamallet dirag ar barner abalamour m’en deuz diskleriet dirak he barrisioniz ar virionez-ze ; ha kondaonet eo bet d’ar prizoun ha d’an amand.

Perak n’eo ket bet tamallet ive Aotrou ’n Eskop Grenobl a deuz da iliz parrez Montalen da ziskleria n’en doa an Ao. Persoun lavaret nemed ar virionez ?

Setu ama ar pezh a respountaz an Ao. Persoun dirak ar barner : — « Evel oll persouned Frans, me meuz goulennet pedennou ; ho goulennet e meuz gant komsou deread ; ne meuz great prezegen ebéd ep lavaret, m’e deuz ar Frans ofanset Doue, goad kement a Fransisien kalounek en deuz goalc’het ar pec’hejou-ze hag ar goad-ze a zo evidomp eun errez euz ar viktor. — Kouraj, fisianz ha pasianted, a lavaren bepred. »

Ma ne c’heller mui koms en doare-ze d’ar bobl kristen, arabat lavaret ez eur libr da brezeg ar relijion gristen en hor bro, rak hi

eo a zesk deomp eo maro Map Doue var ar Groaz evit kaout deomp ar pardoun euz hor pec’hejou.

Evel persoun Montalen, an oll veleien Frans a c’hell hag a dle alies prezeg d’ar gristenien e tleont goulennet pardoun digant Doue, ha goulennet sikour diganthen evit m’e devezo bro Frans ar gounid var he henebourien ; ha barner ebéd ne c’hello miret outho d’hen ober, rak eun dever eo evitho.

Ne ket ar veleien katolik epken a anzav hag a lavar e ma dourn Doue e kement tra en em gav var an douar. Setu ama ar pezh a lenner en eur leor skrivet gant an Ao. Freycinet divar benn ar vrezel 1870. Bez oa neuze ministr, ha brema eo adarre. Neuze oa ar iaouanka euz ar vinistred ; ha brema eo ar c’hosa (88 vloaz en deuz). « Kement a draou kountrol zo en em gavet gant ar Frans er vrezel-ma (1870) ma ’z eur troet da zonjal daoust ha n’eo ket kementze evel eur baecamant evit pec’hejou hor bro ? Dirak kement all a reuziou souezuz, n’eur ket souezet o dije gelllet an eneo o deuz relijion lavaret : « *Digitas Dei est hic.* » Dourn Doue a zo ama. An Ao. Freycinet a zo deuz ar relijion protestant.

Er vrezel vrema, ar re o deuz relijion a lavar ive dourn Doue zo ama. Dourn Doue dre eur vrezel ken paduz, ken rivinuz evit ar vro dre an dud hag an arc’hant a goller, a bouez varnomp evit ober d’ar vro paea evit he bec’hejou ; mes dourn Doue a skor c’hoaz hor bro pe guir e sikour anezhan da zel’her penn d’he enebourien ken gallouduz, ha roet dezhan ar gounid meur a dro.

Kement-ma a dle rei deomp kouraj da bedi, ha da bedi gant fisianz evit ma teui muioc’h c’hoaz Doue a du ganeomp, ha m’on devezo ar viktor evit mad.

Soudardet kristen, Soudardet digristen

Kristen pe digristen, hor zoudardet a ra mad ho dever en trancheou ha var an dachen. Ar goad a skuil ar c’hristen pe an digristen, a dal kement ha kement dirag ar Vro.

Mes dirag Doue n’eo ket henvel.

Ar soudard kristen, pa nij he ene dirag he varner, a c’hell goulennet gopr ar goad en deuz skuillet. Asanti en deuz great d’ar maro a c’hourdrouze anezhan ; he zevel en deuz great. Dre-ze he varo en deuz paet dle ar pec’hed, en deuz meritet ar zilvidigez. Eur zant eo. He zantelez a dalvezo d’ar vro muioc’h c’hoaz, evit ar viktor, eget n’en doa great he gouraj en emgann, p’en deuz sikouret he rejimant da c’hounid var ar Brusianed. Hed an eternite, he varo gloriuz en do mirit ha talvoudegez.

Ar soudard digristen, kuezet ep sonj ebéd euz an Ao. Doue, ne c’hell mui netra goude ar maro. Ar vro a dle kaout anaoudegez vad dezhan : rag evithi e varvaz. Mes an Ao. Doue ne vank netra dezhan : rag an digristen ne falvezaz ganthen nag anaout he Grouer na senti outhan.

Ha setu aze perag ar soudard kristen a dal kalz hirroc’h eget an digristen. Ar vad a rea hen-ma d’he vro, a echu gant he vuez. Ar vad a rea hen-nont, a bad hed an eternite.

En armeou Frans, var zouar ha var vor, stank-stank eo ar gristenien a c’hoar en em ganna evel leoned ha mervel evel sent.

Gant-se, ar re all a c’hell blasfemi, nac’h pe c’hoarzin : ar re vad a bedo ar Galon Sakr er baradoz, hag e saveteint ar Frans.

MAD HO PUGALE
AMILL
Ch peurretkez
I davez
heul he zorn

AR VRETONEZ ER VREZEL

Eun nebeut bloaveziou zo, eur prefet (prefet Guened oa) a ziskleriaz e vije kaset var harzou ar vro ar Vretounez ne ouient ket gallegat freaz aoualc'h. Ar paour keaz !

Brema ar Vretounez a zo var harzou ar vro, dirag ar Brusianed. Darn ne ouzont nemeur a c'hallek, ha goulskoude ne ket razho o deuz paotred Guillou an nebeuta aoun. Me gav d'in, an Allmanted a c'helfe lavaret, evel ar jeneral romen Jul Cesar, 1900 vloaz a zo : « Na pegen spountuz eo ar Vretonez pa lavaront : « Torr he benn ! »

An 22^e division, da lavaret eo, soudarded Guened, an Oriant, Kemper ha Brest (116°, 62°, 118°, 19°) e deuz bet ar groaz a vrezel goude emgannou ar Champagn, d'ar 25 a viz Here 1915. Ha setu ama petra lenner var eur gazetenn saoz, divar benn hor c'henvroiz : « An division-se a zo savet e Breiz-Izel : lavaret « ar Vretounez » a zo aoualc'h ! N'euz ket da zisplega an eil goude egile an taoliou kaer o deuz great. Kalounek, pennok, dispount ha sentuz, ho labour a zo dreist ; n'o deuz ket kavet ho far, nemet marteze e touez ar vartoloded fusiliers-marins, ginidik evelldho, evit an darn vrasa, euz bro goz Breiz-Izel, gouen an dud dispar ! »

Ha perag eo ar Vretounez e penn kenta ar re vella ?

Abalamour ma kredont e Doue, ma c'houzont ez euz eur vuez all, ma esperont an digoll eternal, ma unanont ho sakrifis gant ho Salver, ma ro Doue dezho grasou d'ho c'hennerza. « Evit Doue hag ar Vro ! » setu ger ar Breizad.

Brema goas a ze d'an hini a zisprijfe ar Breizad hag he Vrezounek. Panefe ar Vretounez, goulenn petra vije ar Frans ?

Enebourien an Iliz Katolik

Na pebez tud leun a vadelez ! Ne oue guelet morse krisoc'h egetho.

Epad ar pevar c'hant vloaz kenta euz an Iliz, Impalaered Rom a voalgasaz ar gristenien : euz ar re-ma, daouzek million a oue merzeriet e kreiz an tourmanchou spountusa.

En eizved kantved ha goude, Mahomet hag he Durked divadez a zismantraz rouanteleziou an Azi, an Afrik, hag an Europ zoken, dre an tan hag ar c'hleze.

Er c'huezekved kantved, Luther ha Calvin, mistri ar brotestanted, a nevezaz tourmanchou an amzer goz enep ar gristenien katolik.

E Bro-Zaoz, ar roue Herri Eiz hag ar rouanez Elisabeth a gasaz d'ar bourreo 25 eskop, 500 manac'h ; ober a rajont ker brao var gatoliked Bro-Irland ma oue lavaret ne jome mui nemet ludu ha korfou maro var lerc'h ho bourrevien.

E Frans, er blavez 1562, en eur blavez epken, ar Brotestanted a anzavaz beza lazet 4 mil belek, ha devet 90 hospital, hag ilizou a vilierou.

Er Beljik, an dud dizoue a reaz traou ken divalo ma ne gredfe den e vent posubl.

Epad an Dispac'h vraz, en hor bro, petra ne rajont ket ? Brema, ar protestant Guillaume, roue Prus (protestant, pe kentoc'h dizoue) gouzout a reer pegen kriz eo bet hag ez eo, hen hag he zoudardet ; gouzout a reer o deuz kasouni ouz ar veleien dreist oll.

Divar kementse, daou sonj a deu er spered :

Da genta, kaer o deuz bet ar vourrevien, an Iliz a zo bet ato treac'h dezho, abalamour Doue a zo ganthi. Chomomp a du gant an Ao. Doue, n'euz den d'he drec'hi.

D'an eil, nep en em laka a du gant ar vourrevien, a ziskuez en deuz nebeut a skiant ha nebeut a galon. Nebeut a galon : a du ema gant ar re grisa. Nebeut a skiant : a du ema gant ar re a vezo treac'h et da viken.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (trede listen)

O DEUZ BET AR GROAZ A VREZEL. — An Ao. MORVAN, kure Itron-Varia Garmez e Brest, aumônier an eil rejimant charserien var varc'h.

An tad JEAN LE QUEAU, caporal brancardier er 62^e, gouliet en he zivreaoc'h hag en he zivesker d'ar 25 a viz Guengolo, er Champagn. Daouzek kant soudard maro zo bet kavet ha beziet ganthan.

He vreur, an Ao. PIERRE LE QUEAU, kloarek, a ioa bet dekoret e miz Gouere.

An Ao. KERANDEL, skolaer e Plabennec, soudard infirmier en 19^e.

A ZOBET LAZET VAR AN DACHEN ar gloareged : René THEPAUT, a Zant-Meen, en Argonne, 10 a Vengolo. 22 bloaz.

Jean COZIC, letanant, a Zant-Goazek, 20 a Even. 21 bloaz.

Gustave TROMEUR, a Vrest (Pilier-Ruz), e Beljik, 28 Kerzu 1914. 21 bloaz.

EN DEUZ BET AR GROAZ A HENOR. — An Tad Yves GAUTHIER, misioner e Kemper, aumonier ar 115^e. Diou vech araok, en doa bet ar groaz ar vrezel. « Er vrezel abaoe ar penn kenta, en deuz skoret kenan ar zoudardet dre he brezegennou entanet hag he skueriou kalounek. A ra fae var an danjer, en eur c'hoarzin. »

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Eugénie Morel. Marie Roudaut. Berthe Bellec.	Trede klas.	{ Jeannie Magueur. Catherine Didou. Anne-Marie Jacq. Marie-Yvonne Guéna.
Kenta rummad.	{ Désirée Magueréz. Marie Derrien. Marie Jaouen.	Kenta rummad.	{ Joséphine Bouquet. Jeannie-Yvonne Trébaol. Marie Magueur. Bernadette Hamon. Marie-Anne Bossard. Louise Magueur. Marie-Yvonne Jaouen. Marie Morvan.
Eil rummad.	{ Marie-Yvonne Cong. Suzanne Léostic. Louise Kéroullé. Marie-Yvonne Kerjean. Suzanne Le Touz	Eil rummad.	{ Marie Bocheur. Marie-Yvonne Pellen. Léonie Begoc. Jeanne Foll. Louis Guennégues. Julie Talaermin. Marie Le Venn. Louis Lunven. Marie-Yvonne Kerras. François Cong.
Eil klas.	{ Marie Perchoc. Françoise Brénéol. Marie Gouzien. Philomène Cornen. Françoise Héliès, Bourg. Marie-Yvonne Allégot.		
Kenta rummad.	{ Marie Perchoc. Françoise Brénéol. Marie Gouzien. Philomène Cornen. Françoise Héliès, Bourg. Marie-Yvonne Allégot.		
Eil rummad.	{ Philomène Magueur. Marie-Anne Mingant. Isabelle Guéna. Marie-Yvonne Perchoc. Jeanne Brénéol.		

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iis, breudeur da Jesus-Krist, heritourien d'ar Baradoz :

PASROUN MAEROUNEZ

7 Kerzu. Jean-Louis Guennégues, Kelléron. Jean-M. Prigent. A. Guennégues.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar vurn diveza, e goaskèt ar groaz :

18 Du. Josephe Perrot, 68 vloaz, Kerc'hoazel.
27 — Marie-Anne Kerouanton, 77 vloaz, Kerlaguen.
3 Kerzu. Servich enterrament Pierre Le Ru, maro ar brezel

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

21 Du. Jean Luart, 14 miz, Penn-ar-Pavé.
29 — Pierre Kerhuel, 22 miz, Kerc'hoazoc.

Laudate pueri.

**A zo pedet da ober ho anter-heur Adorasion
d'an 9, eil sul a viz Genver**

11 h. Marie-Jeanne Perchoc, Kerveleoc ; Alexandrine Guennegues, Kerc'hoazel ; Marie Perchoc, Traon-Bian ; Marie-Jeanne Maguer, Tour.

11 h. 1/2. An Aotrou Person, Guillaume Lescop, Jean Guennegues, François Jézéquel, Bourg.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Rose Le Borgne, Marie-Ursule Minguy, Marie-Anne Cloâtre, Marie-Jeanne Kerjean, Bourg.

1 h. Jeannie Helies, Catherine Creac'h, Françoise Guennegues, Joséphine Coatanéa, Arc'hantel.

Kannadik mis Kerzu en deus koustet 19 lur.

Bet evit sikour he baea, digant : L. T., 20 real ; J. C., A. B., peb a 8 real, eur vanden vugale 8 real ; V. M., 6 real ; H. G. J. R., M. F., A. C., M. G., Y. A., H. P., C. C., peb a 4 real ; J. G., 10 guennek.



Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



MIZ C'HUEVRER

2. CHANDELOUR. Ar Verc'hez a ginnig ar Mabik Jezuz en Templ. — Livirit d'ar vugale perag e vez elumet ar c'houlaoù epad an oferen : evit henori Jezuz, lezhanvet sklerijen ar bed gant an den santel Simeon oc'h he gemeret divar diou vreaç'h ar Verc'hez. Hen eo a ro d'an eneoù sklerijen ar guir feiz, a gas anezho da c'hloar an Envou.

4. GUENER KENTA. — Kaloun Jezuz, kinnig a ran deoc'h an oferen hag ar gommunion a zigoll evit ho konsoli, dreist-oll, euz pec'hejou ar vugale, pa'z euz bugale a vlasfem ac'hanoc'h, a brofan ho korf sakr, pe ne anavezont ket ac'hanoc'h.

6. PEMPED SUL GOUDE AR ROUANED. « An enebour a hadaz louzeier fall e touez ar greun mad. » Tud zo a had an dizunvaniez, ar gasouni e touez ar gristenien. Ra jomo unanet start ar c'halounou o deuz ar memes feiz, ar memes Mestr Jezuz ! Ra vezo unanet an oll Fransizien er memes karantez evit ho Doue hag evit ho Bro !

13. C'HUEC'HVED SUL GOUDE AR ROUANED. « Rouantelez an env a zo henvel ouz an had sezo, a gresk beteg beza eur vezen vraz. » Ar feiz zo hadet ennomp da zeiz hor badiziant ; deomp-ni eo he lakaat da greski dre zeski hor c'hatekiz hag an Aviel, dre zelaou ar prezegennou, dre en em rei d'an oll oberiou mad. Doue a c'houlennou kount, eun deiz da zont !

20. SUL AR SEPTUAJEZIM. « Ar Mestr a roaz da bep hini eun diner. » Dioc'h ar mirit ar rekompans. Ma varfac'h brema, pe rekompans o pefe digant Doue ? Baradoz, pe burkator, pe ifern ? Grit eur zell ouz ho koustians, ha krenit !

27. SUL AR SEXAJEZIM. « An hader a zortiaz da hada en he bark. » Jezuz a zo deuet euz he varadoz da hada en eneoù, hag a zo dezhan, an oll vertuziou kristen. Ha lezel a raimp an had divin didalvez ennomp ? Ha leuskel a raimp an drouk spered da vouga anezhan ? Da biou omp, da Jezuz pe da Zatan ? — Poaniomp evit Jezuz.

3 Meurs. Guener kenta.

5 Meurs. SUL ENED, sul ar C'harant Heur.

AN ILIZ HAG AR BOBL

An Iliz katolik e deuz great ar brasa mad d'ar bobl, abaoe ma 'z euz anezhi.

Pa oue savet gant Hor Zalver, stad ar bed a ioa reuzeudik. Tud a vilionou a ioa sklavourien, guerzet, merzeriet, lazet, evel ma troe e penn ho mistri. Ar c'houarnamant a gemere buez ha madou an dud, ep guir na rezon. Etre ar boblou e save brezelioù paduz ha niveruz, ep ehan : ar brizounerien a ioa pe lazet pe kaset da sklavourien, ar broiou rivinet. Ar pez a velomp an Allmanted oc'h ober brema, setu ar pez a reat e pib leac'h guechall.

Piou en deuz chenchet stad ar bed ? An Iliz, dre he gourc'hemen a garantez, dre he zakramanchou, he fasianted, he labouriou, he vertuziou.

Hi eo e deuz diskleriet o deuz an oll dud guirioù henvel, ar memes baradoz da esperout, ar memes Doue evit Tad. Hi eo e deuz miret ouz mistri ar boblou da flastra ho sujidi, en eur zeski dezho e teu pib galloud digant an Ao. Doue, mestr ar vistri. Hi eo e deuz unanet ar boblou dre liam ar garantez kristen ; ha n'ez euz brezel etrezho nemet abalamour ne zalc'hont ket d'he lezennou.

Setu perag ar skrivanier brudet Henri Taine en deuz skrivet, evithan da veza eun den difeiz : « N'euz nemet an Iliz katolik evit miret ouz an dud da veza gouez evel guechall. Rag guelit. Bet eo bet guelet an dud oc'h en em ober paianed en ho buez : en Itali, er pemzekved kantved ; e Bro-Zaoz, er zeitekved ; e Frans, epad an Dispac'h-Vraz hag en amzer varlerc'h. Er memes taol, int deuet henvel ouz paianed an amzer araok Jezuz-Krist : kriz ha gadal, fall d'ho nesa, oc'h en em laza ho-unan dre re a blijadur, tud divalo ha muntrerien ! Setu petra vezer er meaz euz an Iliz. »

An Ao. Donoso Cortes, kannad katolik Bro-Spagn e Paris, en euz lavaret : « Ar relijion eo e deuz great ar bed civilizet. Skriva histor ar broiou n'int ket gouez, a zo skriva histor an Iliz katolik. »

Nac'h an Iliz a zo en em rei da Zatan, enebour an Iliz. Oberiou Satan eo an drouk a bep seurt.

Senti oc'h an Iliz a zo en em rei da Jezuz, he mestr, an hini a zo ar garantez, ar zantelez memes.

D'ar re o deuz aoun d'en em ziskuez kristen

Al letanant Auban a varve e Marseille, n'euz ket pell. Goude beza resevet an absolver, ar gommunion hag an Nouen, e lavaraz d'he vreur : « Kas eun depech da va c'holonel. Lavar dezhan emañ o vont kuit. Merk dezhan ive e meuz bet va oll sakramanchou hag e pedan anezhan da skriva kementse var ar rapport, en eur lakaat, oc'hpenn, e c'houlennan eur beden digant soudardet kristen ar rejimant. »

Er vrezel, var ar front, n'euz respet humen ebet.

En adren, perag ez euz ?

Ruzia deuz an Aot. Doue, deuz he vinstred, deuz he lezennou, a zo digalon.

ETRE DAOUARN DOUE

Red eo deomp oll en em lakaat, muioc'h eged biskoaz, etre daouarn Doue. Setu ama komzou kaer, lavaret n'euz ket pell, hag a ziskuez deomp penaoz hen ober.

Eur zoudard a skrive en trancheou d'ar 25 a viz here : « Nag ez omp eüruz, ni kristenien, e kreiz an oll drubuillou-ma, da gaout ar joa d'en em harpa var Galonou Zakr Jezuz ha Mari ! Ni a zo ama dienkreiz var ar pez a zo d'en em gaout ganeomp. En em lakaat a reomp oll dindan skoazell ar Brovidans divin. N'or beuz nemed daou c'houel braz da c'hedal : hini hon distro d'ar gear, e touez hon tud meurbed karet, pe hini hon digemer er Baradoz,

el-leac'h m'eo prepalet hor plas. Ra vezo great bolontez Doue ha nann hon hini. »

Joseph Lotté, bet rejant e Lycée Brest, konvertiset er bloaz 1908, deuet goudeze da veza eur guir zant, ha nevez-marzo var an dachen a enor, a skrive d'ar 24 a viz du :

« Deuet oun abenn da gaout eul leor-oferen, ha lenn a ran ar psalmour hag an hymnou. Nag ez eo dudiuz ar vagadurez a ro d'ar galoun pedennou an Iliz ! Dre he zikour, e seblantomp dihuna hep mintin gant eur vuez nevez. Biskoaz n'oun bet ken eüruz hag abaoe m'e meuz en em roet oll da Zoue. Bep mintin, e lavaran : *Fiat voluntas*, ra vezo great ho polontez ; pegen kaer eo ar gomz-se, pa vez lavaret a greiz kaloun, hag epad ar brezel eo hel lavarer evelse. »

« Daoust ha n'eo ket guir, va breudeur, a lavare n'euz ket pell an Aot. cardinal Mercier, e c'hoar Doue, en eun doare burzuduz, diskuez he drugarez hag he furnez, hag er memes amzer he justis ? daoust ha n'eo ket anat evidoc'h, ma'z eo ar brezel eun drouk spountuz evit ho puez var an douar, e ro ive d'an eneo eur galloud kaer d'en em netaat ha da ober pinijen, ha da zigemeret gant nerz-kaloun ar poaniou krisa ?

Lavaromp eta gant feiz peden an eskop Bossuet : « O Jezuz, mab unik an Doue beo, deuet var an douar da baëa dle va fec'hejou, me ro deoc'h va ene. Lakaat a ran ho koad presiuz, ho maro santel, ho kouliou adorabl, ha dreist-oll gouli ho Kaloun-Zakr, etre justis Doue ha va fec'hejou ; ho pedi a ran da ziouall, keit ha ma vevin, ha beteg va huanaden diveza, va c'haloun, va c'horf, va spered, va ene, ha va bolontez. Reseo a ran eb klemm, ha zoken a galoun vad, kement poan, kement darvoud a blijo deoc'h da zigas d'in pe d'ar re a garan, ha goulenn a ran evitho, koulz hag evidon, ma ielo da benn ar mennoziou a drugarez o peuz bet evidomp a hep eternite. »

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (pevare listen)

BET LAZET. An Ao. François COZIC, euz St Goazec, kure Kergloff, serjant er 64^e linen, blezet e Guengolo 1914, en emgann La Fère Champenoise, maro euz he c'houlou etre daouarn an Allmanted, o deuz kaset kelou e miz Genver 1916.

An tad Yves COZIC, breur d'an Ao. Cozic, misioner a urz ar Spered-Santel, caporal er 4^e zouaved, lazeta d'ar 15 a Vengolo 1914.

(Ho breur, Jean-Louis COZIC, sous-letanant en 118^e, a zo bet lazeta d'an 20 a viz Even 1915. Panefe ar vrezel, e vije bet er Seminer evel an daou all.)

BET DEKORET (kroaz a vrezel). An Tad CARRE, caporal er 87^e territorial, bet kure e Lannilis, lazeta en tranchée er goanv-ma.

An Ao. BERTHOU, a Dreglonou, bet kure Tourc'h, soudard en 219^e.

An tad Jean CARDINAL, a Vipavas, a urz ar Spered-Santel, serjant en 219^e, (Bet glazet ive).

Ar gloareged : An Ao. Le Bot, hag an Ao. Joseph Guéguen, a Voëlan (25 Guengolo).

KOMSOU DA ANAOUT

Da genta : Komsou ar Pab Beneat Pemzek

PREZEGEN D'AR GARDINALED, 22 Genver 1915. « D'ar Pab eo, emezhan, diskleria ne c'hell den freuza lezen ar guir, pe zigarez benag en devije. Kondaoni a ran kement tra en deuz torret ar guir, piou benag en defe great. »

Ogen, piou en deuz torret ar guir ? Piou en deuz diskleriet ar vrezel ? Piou en deuz saillet var ar poblou neutr ? Piou en deuz lazeta ar veleien hag an infirmerien ? Piou en deuz diskaret an ilizou ? An Allmagn eo. An Allmagn eta zo bet kondaonet gant ar Pab.

LIZER MINISTR AR PAB DA VINISTR AR BELJIK, 6 Gouere 1915. « Etouez ar pec'hejou kondaonet gant ar Pab, d'ar 22 a viz Genver, emä an torfed da veza saillet var ar Beljik, bro neutr. »

KOMZOU Beneat Pemzek d'AN AO. D'ERP, e Guengolo 1914 : « Eur justis zo er bed-ma evit ar boblou. Ar Brovidans divin, ep mar ebet, a rekompanso er bed-ma ar boblou o deuz sentet-outhi. »

KOMZOU Beneat Pemzek d'an Ao. Deploige, belj : « Reketi a ran e savo ar Beljik krenvoc'h ha kaeroc'h euz an trubuilhou-ma. »

A du gant piou emä eta ar Pab ?... Gant ar Beljik !

Evit ar Frans, na pet guech en deuz azlavaret e kar ar Frans, e talc'h d'ar Frans he renk a verc'h hena euz an Iliz, ez eo he bobl muia-karet ! Gouzout a rit eo bet diskaret iliz Reims gant an Allmanted. Petra ra ar Pab ? Daou dra. Da genta, en deuz respountet d'an Ao. kardinal Luçon, arc'heskop Reims, hag a damalle an dorfetourien : « Bennoz Doue deoc'h, da veza lavaret ar virionez d'in. » Pakit, Boched ! D'an eil en deuz hanvet da eskop persoun iliz Reims, an Ao. Landrieux. Pakit adarre, Boched !

Erfin, ma'z euz eun dra bet goulennet alies gant an oll gouarnamanchou unanet enep an Allmagn, ez eo liberte ar Beljik, ar Pologn, ar Serbi, hag an Alsace-Lorraine. Var gementse, petra lavar ar Pab ? Lennit. En he LIZER (28 gouere 1915) D'AR BED katolik : « Goulenn a ran, eme ar Pab, eur peoc'h sinet ervez ar guir, eur peoc'h hag a roio d'ar boblou ar rekedou o deuz guir da ober ! » Petra sklearoc'h ?

An Pab Beneat Pemzek a zo a du gant ar guir, ganeomp-ni eta.

D'an eil : Komzou an Ao. Mirman, prefet Nancy

An Aotrou Mirman a zo eun den difeiz ha dizoue ; mes n'ez eo na diskiant na dinerz ; ha karet a ra ar Frans.

E miz Genver 1916, en deuz skrivet ar c'homsou-ma : « Nep a glêvo unan benag o lavaret : « An hen-man-hen a zo kaoz d'ar vrezel ; an hen-man-hen a rô sikour d'ar Boched ; an hen-man-hen a zo evit ar Boched », nep a glêvo, a dle paka dioc'htu ar prezeger gaouiad, hag he gas d'ar prison. »

Setu kaozeal berr ha brao.

Ma klevit eta tamall hen-ma pe hen-nont da garet ar Boched, kasit-hen d'an archerien, pe diskuillit anezhan. Eun dever eo. Vad a reoc'h d'ar Frans.

An Aotrou Victor Marzin

D'ar zul eil a viz guenver, Doue a c'halvaz d'an Env, an Aotrou Marzin. Oajet oa a 69 vloaz.

D'ar guener dervez diveza euz ar bloaz oa bet skoet gant eur barr paralizi, a c'hounezas raktal ar penn. Da veza skoet prim an Aotrou Marzin a oa prest.

8 dervez araok o sonjal er c'homzou-ma a Sant Yan Vadezour : koumpezit an hent evit an Aotrou, e c'halvaz he Gouffessour evit lakaat he Ene e stad da reseo he Zalver evit Nedelec.

Da veza ma lavare aliez n'oa ket eun den devot, en devoa goulscoude kals feiz. Bep sul epad e yec'het e veze en offeren bred en he barrez. Pa veze cur mission pe eun adorasion e teue atao gant all loden genta, rak emezan, ar re a zo savet huelloc'h eget a re all dre ho danvez pe ho deskadurez a dle rei skouer vad.

D'an adorasion a viz Guengolo diveza, o veza ne c'helle ket dont d'ar bourg e c'houlennaz ma vije kasset ar gommunion dezan d'he di. Er giz-ze emezan e c'hellin adori Doue em c'halon, pe guir ne c'heellan ket mont d'an Iliz d'en ober.

Evit beza guir vignoun dezan, e rapket lavaret ganthan : ra vevo ar Roue ; betek e varo e c'hortoze er guelet var an tron.

An Aotrou Marzin en devoa eur galon vad, en he di e'vezet atao digemeret mad, hag e zourn a veze digor da zikour a re a deue da ober dezan ho c'hlem a baourentez. Aliez ar bizin a veze paet araok ma vezent deuet deus strad ar mor.

He Iliz parrez ne veze ket ankounac'heat : Var an daolen marbre a zo e traon an Iliz e veler he hano e touez a re ho deuz roet eun aluzen buil evit sevel an tour ; skeuden Sant Anton a Badou, an tapiz a vez var bazennou an aoter d'ar goueliou bras a zo ive roet ganthan.

Pe bet bruzinet gant ar gurun prenester chapel Introun Varia Gerzent, en deuz roet ar c'haera euz a re nevez : an hini a ziskouez Sant Tanguy o tibenna he c'hoar Santez Eodez. Sant Gonvel patron ar barrez hag an Introun Varia a Vir sikour a Gerzent o devezo a dra sur lavaret da Zoue kaout truez deuz he Ene.

Epad 35 vloaz e bet ajant mear er barrez. Anezan e unan eo en em dennet pa zantas edo o vont da goll e zaoulagad.

Abaoue ma zeus eur vag a zavetaj e Landunvez oa Président an emgleo. D'an dervez moa bet badezet ar vag-ze e reaz eur brezeguen eus a re gaera evit trugarekaad an Aotrou 'n Eskop hag ar Prefet maritim da veza deuet da gemeret perz er gouel-ze, hag evit diskouez an izoum a ioa eus eur vag a zavetaj evit sikour al listri hag ar bagou pesketa en danger da veza bruzinet epad an avel foll eus kerrek Landunvez ha Porspoder.

Mad oa ive da rei aluzen d'ar skoliou kristen. Skoliou kristen enez eussa ha skol gristen Porspoder, ho deus bet dreist oll pers en he vadelez.

18 vloaz a zo he kollas he vreur Noter e Lannilis, hag he c'hoar gaer, raktal e kemeraz en he di ho 6 minor. Beza en deus bet evitho eur garantez a dad. Evit ma vijent savet mad ha kenteliet guelloc'h var hent ar baradoz en deuz ho lakeat oll er skoliou kristen ar re vrudeta.

Unan euz he Nizezed deuet da veza leanez ne bedo ket an nebeuta evithan.

Deiz he enterramant Iliz kaer Landunvez a ioa leun gant ar gerent hag ar vignounet deuet da bedi evithan.

Requiescat in pace !

AR C'LAS 17

D'ar iaou 30 a viz kerzu, an Aotrou Person a lavaras an offeren a gimida evit Soudardet ar barrez eus ar c'hlas 17.

Hini anezo ne vankaz d'an offeren hag oll e teujont da zaoulina eus an daol zantel. Goude an offeren e teujont d'ar presbytal da gerc'het medalen ar skapular ha da glevet aliou diveza ho Pastor.

Setu aman ho hanoiou hag hanoiou ar rejimant m'int lakeat enni :

- Bégoc, Guill.-Jos., 64° réj. a linen, Ancenis.
- Cadalen, Jean, 65° réj. a linen, Naonet.
- Cloatre, Amédé, 130° réj. a linen, Mayenne.
- Cornen, Yves, 130° réj. a linen, Mayenne.
- Cozien, Joseph, 130° réj. a linen, Mayenne.
- Guennéguès, Gilles, 124° réj. a linen, Laval.
- Jaouen, René, 124° réj. a linen, Laval.
- Payen, Gaston-Joseph, 48° réj. a linen, Guingant.
- Talarmin, François, 23° réj. colonial, Paris.
- Talarmin, Joseph, 23° réj. colonial, Paris.
- Taloc, Vincent, 1^{er} réj. génie, Versailles.

Ra deui Doue hag an Introun Varia a Gerzent d'ho dioual a bep drouk epad ho c'honje.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Marie Roudaut. Eugénie Morel. Marie Derrien.	Catherine Didou. Jeannie Magueur. Jeanne-Yvonne Trébaol.
Kenta rummad.	Jeanne-Yvonne Lescop. Augustine Talarmin. Berthe Bellec.	Marie Magueur. Françoise Forest. Bernadette Hamon. Ernestine Brénéol.
Eil rummad.	Suzanne Le Touz. Louise Keroullé. Suzanne Léostic. Marie-Yvonne Cong. Marie-Jeanne Hamon. Catherine Kermorgant.	Marie Talarmin. Louise Magueur. Bernadette Jaouen. Marie-Yvonne Jaouen. Marie Morvan.
Eil klas.	Françoise Brénéol. Marie Gouzien. Françoise Hétiès. Marie-Yvonne Allégot. Philomène Carnen. Françoise Floc'h.	Marie Bocheur. Julie Talarmin. Marie-Yvonne Pellen. Joseph Potin. Léonie Bégoc. Prosper Allégot. Marthe Lesvenan. François Cong. Joséphine Magueur. François Corolleur.
Kenta rummad.	Marie-Anne Mingant. Isabelle Guéna. Marie Magueur. Marie-Yvonne Perchoc. Herveline Léostic. Joséphine Talarmin. Léontine Michel.	
Eil rummad.		

BADIZIANTOU

A zo bet great kristeniet, bugale da Zoue ha d'an Ilis, breudeur da Jezus-Krist,
heritourien d'ar Barados :

Paëroun : Maërounez :

19 Kerzu Marie-Jeanne Fily, Arc'hantel. J.-M. Menguy. Marie Cloarec.
6 Genver Eugène-M. Le Ven, Sant-Samson. F.-M. Le Ven, Eugénie Fourn.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'hedal deis ar varn diveza,
e goasket ar groaz :

4 Genver An Aotrou Victor Marzin, 69 vloaz, Arc'hantel.
4 — " Rose-Marié Foll, 17 vloaz, Stréat-Lan.

De profundis.

TRI HA TRI

Tri nebeut ha tri c'halz noazuz d'an den : 1. Gouzout nebeut,
kaozeal kalz ; 2. Kaout nebeut, dispign kalz ; 3. Talvezout nebeut,
en em istimout kalz.

Tri c'halz, rekompanset gant tri all : 1. Studia kalz a ro kalz
a zeskadurez ; 2. Kalz lealded a ro kalz a beoc'h ; 3. En em zonjal
kalz a ro kalz a furnez.

Tri medisin mad : an Ao. Iun, an Ao. Imorvad, an Ao. Labour.

Tri zra a ro an eurusted : 1. Ar basianted da c'houzany hor
poaniou ; 2. An doujans-Doue da dec'het euz ar goal ioulou ; 3. An
dousder da c'hounid an oll galonou.

Tri ali evit beva e peoc'h : selaouit, guelit, tavit !

**A zo pedet da ober ho anter-heur Adorasion
d'an 13, eil sul a viz C'houevrer**

11 h. Jeanne Magueur, Marie Cadalen, Marie-Renée Fourn,
Anna Magueur, Sant-Samson.

11 h. 1/2. An Aotrou Person, Guillaume Lescop, François Jé-
zéquel, François Olivier, Bourg.

12 h. Ar Skol Gristen.

12 h. 1/2. Marie Roudaut, Eugénie Morel, Berthe Bellec,
Marie Jaouen, Bourg.

1 h. Anna Floc'h, Anna Squiban, Marie Vaillant, Yvonne Ma-
gueur, Bourg.


Kannadik miz Genver en deus koustet 19 lur. — Bet evit si-
kour he baea digant : G. G., 20 real ; Un. P., eur skoued ; H. C.,
8 real ; A. T., 6 real ; J. N., M. Y. L., peb a 5 real ; J. C., 8 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

KANNADIK

PARREZ



Evit ma vezo eaz d'an oll familhou kristen ober an Akt a Gonsécration da Galoun Jezus, ar *C'hannadik* a laka aman varlerc'h al lid a zo da heul hag ar pezh a zo da lavaret pe da lenn :

KONSEKRATION AR FAMILLOU DA GALOUN DIVIN JEZUZ

e skeud Kaloun dinam Mari ha dindan skoazel Sant Joseph

D'ar 17 a viz Even 1689, Jezuz-Krist, dre vouez ar Plac'h Eüruz Mac'harit Mari, a alie ar Franz, hag e ser ar Franz ar broiou all ive, d'en em voestla d'he Galoun Sakr, dre vouez an hini her gouarnec. Ne oue ket selaouet na neuze nag abaoe. Gouskoude izoum on deuz euz hé zikour muioc'h eget biskoaz. Evit he gaout, greomp peb unan ar pezh zo en he c'halloud evit sevenn he vennoz en eur gonzakri dezhan hon oll familhou kristen. Evelse ec'h astimp ar mare ma vo e penn ar Franz eur c'houarnamant kristen a voestlo ar Franz a bez da Galoun Sakr Jezuz. An Tad Santel ar Pab Beneat XV, hon Aotrou 'n Eskop hon ali d'hen ober.

Penaoz e vo great ar Gonsekration ?

1° Lakât imach pe skeuden ar Galoun Sakr en eur plas a honor el leac'h ma vez peurliesha tud ar familh. Goulou var elum ha boke-dou a vo dirazhi ;

2° Choazet e vezo eur gouel braz en Iliz evit ober ar Gonselkration. Sul Fask a ve eun dervez kaer evit-ze ;

3° D'an heur merket, an tad pe ar vamm pe unan euz ar vugale a raio al lid santel evel-henn.

Da genta, an dud oll, bugale ha servicherien, en ho zav a lavaro :
Enn hano an Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evelse bezet great.

Neuze ar *Gredo* :

Me a gred e Doue, ann Tad Oll C'halloudek, krouer ann env hag ann douar ; hag e Jezuz-Krist, he Vab unik, Hon Aotrou ; a zo bet konsevet euz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari en deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krüsifiet, maro ha sebeliet ; a zo diskennet d'ann iferniou, ha resusitet ann trede deiz euz a varo da veo ; a zo pignet enn envou, hag azezet enn tu deou da Zoue, ann Tad Oll C'halloudek ; ac'hano e teui da varn ar re veo hag ar re varo. Me a gred er Spered-Santel ; ann Iliz santel katholik, kommunion ar Zent ; remision ar pec'hejou ; rezurreksion ar c'hig ar vuez eternal. Evelse bezet great.

Goudeze, oll daoulinet, e vo lavaret an Akt a Gonselkration, an tad pe ar vamm ar c'houblad kenta ; ar re all a respounto outhan bep eil evel ez eo merket. Mes ma kaver re ziez respount, e vo gellef lenn var eur memes taol an Akt a Gonselkration.

Akt a Gonselkration ar familhou da Galoun Sakr Jezuz

AN TAD PE AR VAMM. — Kaloun Sakr Jezuz, setu ni aman daoulinet dirazoc'h evit ho trugarekât, ervez hor galloud, evit oc'h

oll madoberiou, hag evit merka deoc'h hor brasa karantez evit ho madelez dispar en hor c'henver.

OLL A UNAN. — *Kaloun Sakr Jezuz, o pet truez ouzomp.*

AN TAD PE AR VAMM. — Evit senti ouz ar goulenn o peuz great alies, evit ma reno kentoc'h a ze ho Kaloun Adorabl var hor bro abez, o Jezuz, ni ro deoc'h hor familh oll var eun dro, e skeud Kaloun dinam Mari ha dindan skoazel sant Jozeph. En hon ti, evel e ti Nazareth, ra jommo bepred ar vrud vad, ar feiz, ar garantez, al labour, ar beden, an urz hag ar peoc'h etrezomp. C'hui, evel eur roue, reizit hor buez penn da benn, ha beillit gant preder var hon oll vadou.

OLL A UNAN. — *Kaloun Sakr Jezuz, reizit hor buez penn da benn ha beillit gant preder var hon oll vadou.*

AN TAD PE AR VAMM. — Deoc'hu, o Jezuz ken din da veza karet, ni ro hon oll boaniou, hon oll levenez, kement a c'hoarvezo en hon ti, ouz ho pedi da skuill ho kaera bennoz var hon tud ken beo ken maro. D'ho Kaloun divin ho roomp da viret evit ato ; ha ma teufe biken unan benag anezho d'ober fae var ho karantez, ni ra amand honorabl evithan. En hano ho Kaloun Sakr, o Jezuz, digemerit an digoll-man, bezit trugarezuz evithan.

OLL A UNAN. — *Enn hano ho Kaloun Sakr, o Jezuz, digemerit an digoll-ma ha bezit trugarezuz evithan.*

AN TAD PE AR VAMM. — Ho pedi a reomp c'hoaz evit an oll familhou euz ar bed. Diouallit ar vugale en ho c'havel hag er skolioù ; grit ma talc'ho hon tud iaouank var an hent mad ; bezit nerz an dud aflijet, souten ar re goz, arp an intanvezet, tad ar vino-ret ; oc'h unan, e peb ti, beillit e tal guele ar glanvoudien hag an dud var ho zremenvan.

OLL A UNAN. — *Kaloun Sakr Jezuz, beillit, oc'h unan, e peb ti, e tal guele ar glanvoudien hag an dud var ho zremenvan.*

AN TAD PE AR VAMM. — Mes, oc'h aspedi a reomp dreist oll, o Jezuz, mor a drugarez hag a garantez, d'hor sikour enn heur ar maro ; hon dalc'hit neuze tostoc'h eget bizkoaz d'ho Kaloun divin ha da galoun dinam ar Verc'hez Vari ; bezit evidomp porz ar zilvidigez, ha p'on devezo, an eil goude egile, tennet hon huanad diveza en ho ker'hen, neuze, o Jezuz, grit m'en em gavo an tiad a bez en ho Kaloun Sakr er baradoz. Goude beza heuillet mad var an douar ar reolen o peuz roet deomp. — Evelse bezet great.

OLL A UNAN. — *O Jezuz, grit m'en em gavo an tiad a bez en ho Kaloun Sakr er baradoz, goude beza heuillet mad var an douar ar reolen o peuz roet deomp. . . Evelse bezet great.*

OLL A UNAN :

Kaloun Sakr Jezuz, bezit hor c'harantez,
Kaloun douz Mari, bezit hor silvidigez,
Sant Jozeph, skoaziit hor familhou,
En hano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.
Oll er zav evit klevet lenn ar Reolen-man.

Reolen kinniget evit familhou ar Galoun Sakr

I. — Familhou ar Galoun Sakr a vezo a unan evit senti ep gina ouz oll kelennadurez an Iliz Santel Katolik. Rei a reont ho ger da heulia ar reolennoù a roi an Tad Santel ar Pab.

II. — Ar priejou kristen a gonzakro da Galoun Sakr hor Zalver, int-hi, ho bugale, oll dud ho zi ; ha bep bloaz e nevezint ar gonselkration-ze da zeiz gouel ar Galoun Sakr pe epad eisved ar gouel.

III. — Imach pe skeuden ar Galoun-Sakr a vezo e peb familh en eur plas a henor.

IV. — DEVERIOU E KENVER DOUE : 1. Ar priejou kristen a viro aketuz meurbed gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

2. Ar beden dioc'h an noz a vo lavaret e kamm gant an oll kerent ha bugale, ha muia ma vo gallet gant ar re oll a labour en ti.

3. Ar gommunion great alies a vezo en henor er familh, evit ar vugale iaouank koulz hag evit ar re zo muioc'h en oad. E kement ma vo gallet e vo kammuniet d'ar Guener kenta er miz, da c'houeliou braz an Iliz, ha da c'houeliou ar Verc'hez Vari.

V. — DEVERIOU AR PRIEJOU KEN ETREZHO : Delc'her a rint da viret penn da benn lezen gristen ar briedelez ha da vev unaniet hag e peoc'h.

VI. — DEVERIOU E KENVER AR VUGALE : 1. Bez e vezo eun dever sakr evit an tad hag ar vamm rei ha lakât rei d'ho bugale eun deskadurez kristen katolik, miret na ve roet dezho leoriou fall pe neutr ha mistri difeiz.

2. — Ar gerent a velfe en ho bugale, dre eur merk benag, e veit galvet gant Doue da veza beleg pe relijiuz a raï ar pez vo en ho galloud vit ma heullint mouez an Aotrou Doue.

3. — Ho fosubl a rint evit ne rint alianz ebet, a c'helfe lakât ho feiz e danjer, o sonjal e rankont araok peb tra klask rouantelez Doue evit-ho hag evit ho bugale.

VII. — DEVERIOU E KENVER AR ZERVICHERIEN : 1. An tad hag ar vamm a roio skuer vad evit ma vo sanctifiet ar zul hag ar goueliou, o vont da ofisou an iliz ; ober a rint kement vo mad evit ma c'hello oll dud ho zi ober evelldho.

2. Bez o devezo karantez ha patianted evitho.

VIII. — DEVERIOU A SKUER VAD EVIT HO ZUD HAG EVIT AR RE ALL : 1. Ar pleg-mad da zizkuez bepred er familh eur garantez vraz an eil evit egile, o sonjal e koms Hor Zalver : « Deskit ganhen ez oun douz hag humbl a galoun ».

2. Diquallet e vo mad dioc'h kement a c'helfe tizout ar burete en ti : ne vezo gouzanvet na skeuden, na taolen dizoare ; ne vo heullet giz divodest ebet ; leor na skrid fall ebet, na kazeten difeiz pe udur ne vint gulet en ti.

3. Ar vamm a familh ne c'houzanvo james e ve lavaret, dirazhi na dirag he bugale, komsou mezuz.

EVE SAIT. — Ar Gonzekration-man a vezo great, bep bloaz, gant ar memes lid, da zeiz Gouel ar Galoun Sakr.

Mad e ve hen ober meur a vech er bloaz, dreist oll d'ar Guener kenta er miz.

* *

Alia 'ran kenan oll familhou kristen an eskopti d'en em gonzakri d'ar Galoun Sakr, en unani gant ar Franz hag evit delc'her he flas dirak Doue.

Goulen a ran digantho ma lakint er plas a henor en ho zi eun imach pe eur skeuden a Galoun divin Jezuz. Dirazhi, an hini zo Penn ar familh a lavaro an Akt a Gonzekration, a vo lavaret bep bloaz gant ar memes lid.

Envori a ran d'ar gristenien fidel ar goms lavaret gant Hor Zalver d'ar plac'h eüruz Mac'harit Mari : « Me vennigo kement leac'h e vezo esposet enghan imach va C'haloun. Unani a rinn ar

familhou a vo disparti enno. Skoazia rinn ar re o devezo izoum skoazel. »

Kemper, 17 a viz Genver 1916.

† ADOLPH,

Eskop Kemper ha Leon.

MIZ MEURS

3. GUENER KENTA. — Kaloun Sakr Jezuz, kinnig a ran deoc'h an oferen hag ar gommunion a zigoll, evit rapari dreist oll pec'hejou an tadou familh ne heuliont ket skueriou sant Joseph, ho tad mager.

5. SUL ENED, deiz kenta ar C'harant-Heur. — O Jezuz sakrifiet evidomp var ar C'halvar hag er Zakramant, o pet truez ouz an oll bec'herien. Pardounit dezho. Santelait anezho. Ra zeuoc'h da veza anavezet gant an oll dud, evel ho Mestr hag ho Mignoun.

8. MERCHER AL LUDU. — Hag izom zo er bla-ma da zigas d'an dud da zonj ez int ludu hag ez aint e ludu ? Nag a gorfou maro var an dachen a vrezel ! nag a familhou e kaon ! pet guech en deuz an Ao. Doue galvet ac'hanomp da zonjal en hon eternite ! Taolomp evet. — En deiz-ma e kousmans IUN HA VIJIL AR C'HORAIZ.

12. SUL KENTA AR C'HORAIZ. — « An den n'en deuz ket izoum a vara epken » eme Jezuz d'an drouk-spered. Mad eo poania da c'hounid bara, ha zoken danvez, gant honestiz. Mes lakaad an oll aked, an aked brasa, da c'hounid madou ar bed-ma, kementse n'eo ket kristen.

15-17-18. Merc'her, guener, sadorn. IUN HA VIJIL ar Pevare-Amzer, evit gelver bennoziou an Ao. Doue var an cost en douar, bet ken diez da c'hounid, ha ken labouruz en hany da zastum.

19. OFEREN EIL SUL AR C'HORAIZ. — « Mad eo beza ama » eme S. Per da Jezuz var menez Thabor. Beza gant Jezuz zo an eürusted : ha ni zo eüruz dirag an Tabernakl, pe o kammunia ?... Araok kaout gloar an Env, e rankomp poania. — GOUSPEROU KENTA SANT JOSEPH.

20. SANT JOSEPH, pried ar Verc'hez gloriuz Vari. Patroun an Iliz abez, patroun ar familhou kristen, alvokad an dud ankeniet, erbedomp outhan ar peoc'h da lakaat etre ar boblou, etre ar c'herent ; ha goulennomp ma roio deomp fin ar vrezel gant ar Viktor.

25. Sadorn. Gouel ITROUN VARIA VEURS, ar Verc'hez kemenet dezhi e vezo mamm da Jezuz. — O Guerc'hez Vari, ho Mab a zeuaz ar bed evit terri chadennou an dud flastret gant an Drouk-Spered ha gant he vevelien. Gulet a rit pebez galloud e kemer brema enebourien ho Map : o Guerc'hez Frans, en han' Doue hor zikourit.

26. TREDE SUL AR C'HORAIZ. — « Eur rouantelez savet enghan an eil rumm enep egile, ne bado ket », a lavare Jezuz. O Mestr ar peoc'h, skuer a garantez, grit ma chomo an oll Fransizien unanet ato, evit ma vevo ha ma pado hor Mamm-bro, gloriuz ha santel.

2 Ebrel. PEVARE SUL AR C'HORAIZ. — « E pe leac'h e

kavimp bara aoualc'h evit beva kement a dud ? » a lavare Jezuz en dezers. He garantez a gavaz en he oll c'halloud an tu da greski ar bara. Bezomp fizians ennhan : hen a gemer soursi euz an traou disterra kerroul hag euz ar re vrasa — n'en em gollimp nemet ma tiskredomp varnhan.

Lezen ar C'horaiz

Ma vije en ho kraou eul loan direiz en deuz pilet ac'hanoc'h meur a dro, tost d'ho kas divar an hent er fos, petra rafac'h ? Ha rei a rafac'h kerac'h dezhan fors pegement ? Netra an oll ! Dre ar iun e teufac'h da zouplaat he imor, ne ket ? — Mad, eme Sant Augustin, ho korf a zo al loan fall-ze. An hent mad, a zo Jezuz, (me a zo ar vuez, ar virionez hag an hent emezhan) hag ho korf ne gar ket hent ar C'halvar. Evit dont a benn anezhan, iunit.

Nep ne c'hell ket iun, a c'hell lavaret pedennou, kommunia, ober hent ar Groaz, bizita ar re glanv, labourat evit an dud ezommek, gouzanv he boaniou gant pasianted, korrija he zefao-tou, etc.

A die iun : kement hini o deuz 21 bloaz achu, ha n'int ket dispanset dre ar gozni, al labouriou tenn, ar c'hlenved. Ar re n'emaint ket dindan lezen ar iun a c'hell dibri kig ken aliez ha ma keront bemdez, nemet d'an deziou vijil ha d'ar Pevare Amzer. Ar re a zo dindan lezen ar iun ne c'hellont debri kig d'ar merc'her ha d'ar guener e pred ebet ; kig a c'hellont dibri da eur pred, da lun, meurs, iaou, sadorn ; evit ar zul, d'an oll prejou. Morse hed ar C'horaiz, ne c'heller debri er memes pred kig ha pesked. — Ar vugale, goude 7 vloaz, a die ober vijil evel ar re vraz d'ar merc'her ha d'ar guener. (Sadorn ar Pevare Amzer, iaou ha sadorn ar Zizun Santel a zo deziou vijil evit an oll).

An dud a iun ne c'hellont ket dibri viou d'ar pred bian. Ar re ne iunont ket a c'hell dibri viou d'ho frejou oll. Den ebet na c'hell dibri viou da Vener ar Groaz.

E doug ar bloaz, e vezo gellet ober ar boued vijil gant gres e leac'h amann, nemet da Vener ar Groaz.

N'euz aotre da zebri kig epad ar C'horaiz nemet var eur gondition red : lakaat eun aluzen e kef ar C'horaiz, peb unan ervez he c'halloud e leal, evit oberiou kristen an eskopti. Ar beorien ne c'helfent ket ober eun aluzennik zoken dister, a lavaro bep sizun epad ar C'horaiz 5 *Pater* ha 5 *Ave* evit ezommou an Iliz, ar Frans hag an eskopti.

Joseph Gourmel, euz ar C'hantel

Pa resevaz Joseph Gourmel, serjant er (7^e régiment d'infanterie coloniale) ar Vetalen militaire hag ar Groaz a vrezel (avec palme). Setu ama penaoz oa bet meulet dirak e goumpagnunez :

« A fait preuve d'un courage et d'un sang-froid admirables, en entraînant, le 30 septembre 1915 sa demi-section à l'attaque d'un réduit ennemi puissamment organisé et, malgré deux blessures, a su maintenir ses hommes jusqu'à la nuit et les ramener dans nos lignes. »

François Uguen, euz an Traon

An torpilleur *Oriflamme* a gassas da strad ar mor, e miz cost divéza, eun torpilleur prussian e kever Cherbourg.

François Uguen hag ar martolodet a ioa var an *Oriflamme* o deuz bet, abalamour da ze, ar Groaz a vrezel.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Eugénie Morel. Marie Roudaut. Jeanne-Yvonne Lescop.	Trede klas.	{ Jeannie Magueur. Marie-Yvonne Quéna. Bernadette Jaouen.
Kenta rummad.	{ Marie Derrien. Marie-Yv. Perchoc. Marie Jaouen.	Kenta rummad.	{ Marie Magueur. Bernadette Hamon. Josephine Gouzien. Ernestine Brénéol. Haudes Talarmin.
Eil rummad.	{ Louise Keroullé. Marie-Yvonne Conq. Suzanne Léostic. Suzanne Le Touz. Georgette Bouquet. Louise Laot.	Eil rummad.	{ Marie Bocheur. Marie-Yvonne Pellen. Léonie Bégoc. Marie Kerjean. Jean Morel. François Cadalen. Vincent Cadalen. Yves Trébaol. Alexandrine Marzin. Marie Le Ven. Julie Talarmin. Julienne Didou.
Eil klas.	{ Françoise Brénéol. Philomène Cornen. Françoise Héliès (bourg). Josephine Fourn. Françoise Trébaol. Marie-Anne Mingant. Franc. Eliès (Kervajan). Marie Magueur.		
Kenta rummad.			
Eil rummad.	{ Lucie Bégoc. Herveline Léostic. Marie-Yvonne Perchoc. Louise Kermorgan. Julianne Le Touz.		

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien d'ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
19 Genver.	L.-M. Talarmin, Gorrékéar.	J. Talarmin.
30 —	Joseph-M. Menguy (Poullouarn).	M.-Y. Talarmin. Franc. Trébaol.
12 C'houevrer.	Joseph-M. Fily (Arc'hantel).	J. Gourmel. M. Kerléroux.

SAKRAMANT AR BRIEDELZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :
5 C'houevrer. Joseph Raoul ha Augustine Créac'h, Arc'hantel.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal deiz ar varne goasked ar Groaz

17 Genver.	Annette Héliès, 72 vloaz, Millin-Kreiz.
26 —	Victor Kerjean, 14 vloaz, Trémazan.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

19 Genver. Rose-Marie Foll, 18 dervez, Streat-Lann.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion da sul al lard, 5 a viz Meurs

11 h. Françoise Pellen, Magdeleine Jaouen, Jeanne Pellen, Marie Squiban (Kernézoc).

11 h. 1/2. An aotrou Person, Guillaume Lescop, Alexis Salaun, François Jézéquel (Bourg).

12 h. Ar skoll Gristen.

12 h. 1/2. Joséphine Cloatre, Marie-Renée Foll, Catherine Cloatre, Marie-Yvonne Léostic (Languru).

1 h. Françoise Magueur, Marie-Jeanne Magueur, Philomène Richard, Marie-Anne Cadalen (Sant-Samson).

A zo pedet da ober eun heur Adorasion da veurz ar lard 7 a viz Meurs

9 h. Catherine Castel, Marie-Yvonne Lescop, Noémie Vaillant (Bourg).

10 h. Marie-Ursule Minguy, Françoise Morel, Josèphe Guennéguez (Bourg).

11 h. An Aotrou Person, An Astrou Kure, Joseph Vaillant, Hervé Salaun (Bourg).

12 h. Ar Skhol Gristen

1 h. Françoise Floc'h (Gouzien), Anna Squiban, Bernadette Vaillant (Bourg).

2 h. Jeanne Squiban, Jeanne Floc'h, Magdeleine Morel (Bourg).

3 h. Clémentine Allouer, Françoise Floc'h, Jeanne Floc'h (Bourg).

4 h. Bennoz ar Zakramant.

Tud ar Bourg a deuo oll d'ar Venediksion.

AN AOTROU KURE

An Aotrou Kure a zo ket euruz da dremen daou zervez en hon touez. Gant kalz plijadur en deuz o kuelel o tont da c'houlen euz he gelou ha da zerri dezán an dorn.

Ho trugarekaat a ra dre vouez ar *C'hannadik*.

Atao e man (soldat infirmier, salle des Fêtes, Vitry-le-François (Marne).

Kannadik miz c'houevrer en deus koustet 19 lur.


Bet evit sihour hé baeñ digant : A. V., 8 real, Y. P., 8 guennek.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (pemped listen)

An Ao. Henri HEREUS, kure Brieç : « infirmier kalounek hag ato prest da vale, a zo bet glazet (ha marvet deuz he c'houliou) en eur adzevel dindan eur glao a obuzou ar zoudardet glazet e kichen he ambulans. » — Kroaz a vrezel kenta klas.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



Bugale emzivad dre ar vrezel

Nag a vugale o deus dija kollet pe a gollo ho zad er vrezel, maro evit hon difen ni ! N'ez eo nemed justis e rofemp an dourn evit sevel ar re euz ar vugale-ze a vezo izoumek, hag evit ma vezint savet evel bugale gristen.

An Aotrou 'n Eskop a c'houlenn diganeomp ma raimp eun emgleo evit-se, etre tud eskopti Kemper ha Leon. An Emgleo-ze a boanio.

Evit ma vo savet ar vugale emzivad en ho familhou ;

Evit ma vint lakeat, mar bez red, e familhou kristen pe e tiez kristen great evit repui bugale ;

Evit sikour anezho da gaout an oll vad a deui dezho dre lezennou ar vro pe a c'hell dont dezho en hent all ;

Evit sikour anezho da veza skoliet mad, da zeski mad eur vicher, da vleina mad ho buez.

Renerien an Emgleo, choazet gant an Aotrou 'n Eskop, a zo e Kemper. Dezho e vezo kasset an arc'hant dastumet evit beza ingalet etre ar re o devezo izoum ; dezho e vo skrivet evit kement a zello ouz ar vugale.

E peb parrez, an Emgleo a vezo renet gant an Aotrou Persoun, choaz a rei an dud a volentez vad a zestumo aluzennou familhou ho c'harter, hen eo a gasso ar guenneien a vo roet, d'ar Renerien e Kemper hag a skrivio dezho, pa vo izoum, divar benn ar vugale emzivad. Evit ho anaout guelloc'h ha gouzout izoum peb hini anezho, e vodo eur vech an amzer komite an union katolik.

Eur vech er bloaz e vezo great eur gest en oll ilizou ha chapelion an Eskopti evit ar vugale emzivad.

Ar re a roi ho asant d'an Emgleo, a roio 4 real er bloaz ;

Evit beza Memprou an Emgleo, e vo da rei 20 real er bloaz ;

Evit beza Madoberourien an Emgleo, e vo da rei 20 lur er bloaz ;

Evit beza Foundatourien, 100 lur er bloaz.

Evelse peb unan a c'hell rei ervez he c'halloud ha kaout perz en Emgleo gaer-ma.

TAOLIT EVEZ

An dud-vad a zo bet choazet evit dastum an aluzennou o goulenno bep bloaz digant ar familhou a zo merket var al listen kasset dezho gant an Aotrou Persoun.

Œuvre des Orphelins de la Guerre

Une œuvre dite des Orphelins de la Guerre est établie à l'Evêché de Quimper, en vue de procurer, par tous les moyens en son pouvoir, assistance matérielle et morale aux orphelins victimes de la guerre, dans tout le diocèse de Quimper et de Léon.

Cette Œuvre s'efforcera notamment :

De faciliter aux Orphelins l'éducation dans leurs familles ;

De les placer, si c'est nécessaire, dans les familles chrétiennes, ou dans des orphelinats catholiques ;

De les aider à obtenir les avantages que leur assure la loi française et les bienfaits que peuvent offrir les autres Œuvres ;

De les assister dans leur éducation, dans leur apprentissage ou dans la direction à donner à leur vie.

Un Comité directeur est établi à Quimper sous la présidence de Monseigneur l'Evêque.

Ce Comité a pour rôle d'assurer pratiquement la marche de l'Œuvre, d'en centraliser les fonds, et d'en effectuer la distribution ; de se tenir en relations avec les paroisses.

L'Œuvre des orphelins a pour représentant ; et répondants dans les paroisses, MM. les Curés et Recteurs. Ceux-ci choisiront des personnes actives et dévouées auquel reviendra le soin de susciter des adhésions, de procurer des ressources. Les souscriptions recueillies seront remises à MM. les Recteurs qui les feront parvenir au Comité directeur de Quimper, ils s'entendront avec le Comité de l'Union Catholique de la paroisse, pour étudier ensemble les besoins de chaque orphelin.

La Caisse est alimentée par une quête faite sur l'ordre de Monseigneur, une fois par an, dans toutes les églises et chapelles du diocèse, et par des souscriptions volontaires. Pour établir plus sûrement, chaque année, les prévisions des dépenses et répondre plus facilement à tous les besoins qui seront signalés, Nous croyons devoir créer quatre catégories de souscripteurs :

Les Fondateurs, qui paient une cotisation annuelle d'au moins 100 francs ;

Les Bienfaiteurs qui paient une cotisation annuelle d'au moins 20 francs ;

Les Membres titulaires, qui verseront une cotisation annuelle d'au moins 5 francs ;

Les simples Adhérents, qui sersent une cotisation annuelle de 1 franc.

ATTENTION

Les personnes charitables choisies pour recueillir les souscriptions auront la bonté de les demander aux familles indiquées sur la liste que M. le Recteur leur a expédiée.

Diner an Iliz (Denier du Culte)

Evel m'ho peuz klevet e lizer an Aotrou 'n Eskop evit ar C'ho-rañs, kest diner an Iliz a vezo great er parrezion araok Pask. O pedi a rear ta da zigaz evel bep bloaz oc'h aluzenn evit-ze, d'an Aotrou Persoun a benn fin miz Ebrel.

Ar re o deuz peadra da ober an aluzenn-ze, ha n'er greint ket, n'ho devezo nemet eur c'hloc'h evit an eureujou, ar badiziantou, hag ho c'haonv.

Mez petra eo diner an Iliz ?

Diner an Iliz eo an dever a rank peb kristen katolik paea d'an Aotrou 'n Eskop, evit ma pourveo da ezomou he veleien.

Perak e livirit-hu : Diner an Iliz a zo eun dever ?

Abalamour ar c'hristen a dle digoll r beleg, a ro he oll amzer dezhan, hag abalamour da ze ne c'hell ober labour al ebet evit gou-

mid he vara ; rak dezha ha noz, ar beleg a dle rei he boan hag he amzer evit ar gristenien ; dezho e tesk ar relijio,n evitho e lavar he bedennou ; dezho e ro ar Zakramanchou, ha d'ho bugale e tispleg ar c'hatekismou ; bizita a ra ho c'hlanvourien ; an oll oberieu mad a zo en he garg. Eun dever eo hen digoll.

Perak ne zastumer Diner an Iliz nemet abaoe 1907 ?

Abalamour kentoc'h, araog an Disparti etre ar C'houarnamant hag an Iliz, ar C'houarnamant ne nac'he ket ouz ar veleien ar presbitaliou hag ar guenneien a vanke dezho.

Perak e livirit-hu e vanke ar C'houarnamant tiez ag arc'hant d'ar veleien ?

Ar Frans a vank arc'hant d'ar veleien, abalamour e bloaveziou 1789 ha 1793 madou an Iliz a ioa bet kemeret gant ar C'houarnamant, embannet e oe gouskoude, dre lezennou ar vro, e vije paet d'ar veleien eun digoll deread ha da viken ; hag ar blavez 1906 eo bet adarre kemeret gant ar C'houarnamant an tamm peadra e devoa dastumet an Iliz abaoe 1793.

Perak e vez kaset Diner an Iliz d'an Aotrou 'n Eskop, e leac'h hen delc'her e peb parrez ?

Abalamour da zaou dra : da genta, an Aotrou 'n Eskop eo a gas ar veleien d'ar parrezioù ; hag a dle ho beva ; d'an eil, ar parrezioù paoura a reseo dre an Aotrou 'n Eskop sikour aluzennou ar re all.

Perak sevel diner an Iliz, pa vez paet ar veleien, a hent all evit an enterramanchou, offerennou, etc., etc. ? An arc'hant-ze a deu evit an enterramanchou, offerennou, servichou, etc., a vez rannet e kalz lodennou, etre an iliz, ar seminer, ar c'hloc'her, ar gurus, ar veleien. Gant al loden a deu dezho, ar veleien, e kalz parrezioù n'o deuz ket peadra da veva. Ar re o deuz peadra da veva ne resevont guennek ebet deuz an arc'hant dastumet evit diner an Iliz.

Hag eun dever a goustians eo paea Diner an Iliz ?

Ia eun dever a goustians da bep kristen paea Diner an Iliz, rag peb kristen en deuz perz er Zakramanchou, pedennou, oberieu mad an Iliz ; paea a dle ta ar re o ro dezhan.

Ha pec'hed eo rei netra pe re nebeut evit Diner an Iliz ?

Ia, pec'hed eo ; rag an dra-ze a zo mont enep gourc'hemenn an Aotrou 'n Eskop, hag enep pevare gourc'hemen a Zoue a ordren harpa hor beleien en ho faourentez, hag enep ar zeisved a ro urs da restaol ar pez a vez bet kemeret a enep peb guir.

Pegement e ranker rei e Diner an Iliz ?

Peb hini a dle rei hervez he c'halloud ha dioc'h ezommou an Eskopti. Hor Zalver en deuz lavaret ar pez a reer d'he vinistred a zo great dezhan he-unan. Rei eyit r veleien a zo rei evit Jezuz-Krist.

MIZ EBREL

2. PEVARE SUL AR C'HORAIZ : Jezuz oc'h ober d'he Ebestel ingala etre an dud ar bara kresket dre vuzud. « Bennoz deoc'h, o Jezuz, da veza roet deomp, dre ho peleien, bara burzuduz ar gommunion. Ra zeuio an oll gristenien d'hen tanva, en amzer Fask da nebeuta, e giz ma'z eo red. »

7. GUENER KENTA. « Kalon Sakr Jezuz, digemerit an oferen hag ar gommunion a zigoll evit ma vezo raparet an oll sakrilachou, an oll ienien, a raio deoc'h gouzanv eur basion nevez epad dervezioù ar Pask-ma. »

9. SUL AR BASION. *Pask zo digor.* Jezuz insultet a bep seurt gant ar Iuzevien. « Va Jezuz, roit d'in ho pasianted e va foaniou, grit ma karin va nesa zoken kasauz ; grit ma sonjo hor zoudarded da ginnig ho foaniou a-unan gant ho re-C'hui, evit m'o devezo talvoudegez dreist, evit Bro-Frans ! »

16. SUL BLEUNIOU, « Skrija ran, o va Zalver, pa zonjan penaoz oc'h bet digemeret gant ar Iuzevien : eun triomp d'ar zul, eur gasouni d'ar guener. Deuit e va c'halon ; deuit en oll galonou va familh ha va bro ; enno e viot karet hag henoret ep fallentez nag ankounac'h. »

20. IAOU GAMBLID. Ar ger gamb-lid a zinifi : ar GAMBR eleac'h ma oue great, da genta, LID an oferen, ar gommunion, ar velegiaj. Kaera devez da ober hor Pask, pa'z eo dezha ar bloaz ma koumansaz Jezuz da veva er Zakramant, testeni skleara he garantez.

21. GUENER AR GROAZ. Jezuz a varv evidomp. Ha ni a vev evithan ? Pet million a dud zo hag a laz Jezuz adarre dre ho fec'hejou marvel ? Siouaz !... Ra vevo Jezuz ennomp, ato, dre he c'hras. Ra vezo hon eneoù neat a bep pec'hed marvel.

22. SADORN FASK. Jezuz er bez : eun Doue en eur bez ! eun Doue en eun tabernakl ! Peur e komprenimp pebez islonk a garantez a zo e kalon hor Zalver ! Netra n'eo re zister, netra re izel dezhan, pa fell dezhan tenna hor c'halonou d'he heul. Karomp Jezuz.

23. SUL FASK. Jezuz, maro abaoe ar guener, a zeu beo er meaz euz ar bez. Ar mirakl-ma eo ar brasa, an hini a ro deomp ar grenva fizians e savimp, ni ive, euz a varo da veo, evit an eternite. Ra vezo hon ene prest ato da vervel e stad vad, evit ma vezo euzuz he eternite.

24-25. LUN ha MEURS FASK. Goude Pask, Jezuz en em ziskuezaz meur a dro d'he Ebestel ha d'he ziskibien. Debri a reaz gantho ; touch a rajont ouz he c'houlou kleizennet ; kaozeal a rajont gantho : kement a desteniou eo Jezuz resusitet evit mad, Den ha Doue evel m'en devoa hen lavaret.

30. SUL AR C'HAZIMODO. « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h » eme Jezuz. Ra vezo ar peoc'h en hor c'houstians, starteat er guir garantez hag er zentidigez oc'h an Ao. Doue ; ar peoc'h gant hon nesa, karet abalamour da Zoue ; ar peoc'h etre kenvroiz, ar peoc'h etre ar boblou dre hor viktoriaj !

5 Guener kenta.

7. Sul ar Pastor mad.

Sin ar Groaz ar Vretoned

Eur c'hapiten glazet, dizoue mes leal, zo bet digaset d'eun hospital e Guened.

— « Ha ! emezhan ! Ar Vretoned ! Setu aze tud ! Araog an emgann, e reont sin ar Groaz ; ha goudeze, ne c'hell na den na tra ho lakaat da darda ! »

Ar Breizad, skoret gant sin he Zalver, a c'hoar kement-ma : epad ma saillo var an enebour, eun Doue a veillo varnhan ; ha ma kuez, eur baradoz hen digollo.

Henoromp sin ar groaz, a ro kaloun d'hor zoudardet. Henoromp ar Groaz hag en ti hag en iliz. Saludomp kroaziou an hent-chou, kroaz ar brosesion. Greomp d'ar re vian pokat da imachou Jezuz krusifiet. Kinnigomp ar Grusifi d'hon tud en ho zremenvan, ma vezint rekouret ganthan.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (6^{ed} listen)

DEKORET HA LAZET. — An Ao. LCHARIDON, kloarek a Blonévez-ar-Faou, serjant en 118°. « Serjant dispount ha kalounek meurbed. Evithan da veza bet glazet, en deuz diskuezet ar brasa vaillantiz en eur denna he zoudarded da zailla var an trancheou allmand ; lazet d'ar 25 viz Guengolo, o c'hourin e touez allmanted, goude beza stourmet kalet kenan. »

O DEUZ RESEVET AR GROAZ A VREZEL. An Ao. Gabriel POULIQUEN, rejant e skolaj Sant-Visant Kemper, brancardier er 118°. « Brankardier-belek, deuet var he c'houlén d'eur rejimant active, ato remerket evit an disprij kaer a ra var an danjer hag eun aket parfét d'he labour. Goal-dizet var an dachen a vrezel, en eur boania da adzevel ar re vleset. »

An Ao. Auguste LESPAGNOL, kloarek, sous-letanant en 19°. « Eat d'ar vrezel evel soudard eil klas, en deuz diskuezet eur gourraj pase kaer en emgann Maissin, d'an 22 eost 1914. Eno, dindan eur glao a vouliji hag a obuzou, a guezze dioc'h an druill, en deuz dastumet ha kaset d'an tan eun tregont soudard dianket. Dre he nerz-kaloun, en deuz dalc'het anezho var eun dachen a dalie kalz evidomp, ha n'en deuz laosket an emgann nemet goude eur gourc'hemen striz. Glazet d'ar 7 a Vengolo 1915, e Lenharrée, e teuaz en dro d'ar rejimant, a veac'h pare. Epad an emgannou deuz ar 25 a Vengolo d'an 8 a Here 1915, en deuz en em ziskuezet *chef de section* dispar, ijinuz, dispount ha seder. »

An Tad Charles ROUDAUT, misioner a urz ar Verc'hez Vari, ginidik a Blouguerne, brancardier en 19°. « Goal-c'hlazet epad emgannou Tahure (25 a Vengolo-8 a Here) en eur vont dispount da zikour ar re vleset var eun tam douar dizolo, dindan eur glao a obuzou hag a vouliji. »

An Ao. Thénénan GOURIOU, ginidik a Sant-Thonan, belek-skolaer e Crozon, kaporal er 77°. « Kaporal dispar, remerket dreist-oll d'ar 25 a Vengolo, pa'z eaz var he c'houlén da adzevel ar re vleset etre an Allmanted hag ar Francizien, e doug an noz pad. »

Perag eo maro Jezuz-Krist

Perag ? — Abalamour ma felle dezhan.

Perag e felle dezhan ?

Abalamour ma kar Doue he Dad, hag abalamour da ober deoc'h karet ho Salver :

Da genta, abalamour d'he Dad.

Dre he bec'hed, Adam en devoa laeret an honor dleet da Zoue. Red oa digoll. Mes nag Adam na den ebet na c'helle digoll aoualc'h : eun den a zo goest da offansi eun Doue, mes eun den ne c'helle morse, anezhan he-unan, distruja an offans ha paea he

zle d'he Grouer. Neuze, petra da ober ? Eun Doue epken a c'helle kinnig eun digoll par d'an offans ; mes eun den eo a rank hen ober ! Setu perag an Doue-Den Jezuz a zeuio er bed hag e varvo, evit digoll ar Justis divin ha meritout ho fardon d'an dud.

D'an eil, abalamour d'an dud.

Ma karje, n'oa ket red da Jezuz mervel. Eur ger, eun huanad, eur muzc'hoarz, eun netraik kinniget gant Jezuz, a vije bet aoualc'h evit hor zavetei. Rag kement tra a ra, a zo divin, en deuz eun dalvoudegez ep muzul, a zo aoualc'h. Mes Jezuz a zonjaz : « An dud ne zalc'hint ket sonj euz va c'harantez, ma ne ran nemeur a dra evitho. Pa varvin evitho, e vezint douget d'am c'haret, e sentint ouzin, e vezint saveteet. » Hag e kavaz guelloc'h mervel.

Da zeiz Guener ar Groaz, da zeiz hor Pask, grit eur zell ouz ho koustians ; guelit ma karit aoualc'h an Hini a varvaz evidoc'h ; bezit guelloc'h kristenien goudeze.

Peden Santez Tereza

Ha kredi a rit, o Jezuz beo da viken, e karan ac'hanoc'h abalamour da levenez ho Paradoz, oc'h euz prometet deomp ?

Nann, o Jezuz. Me ho kar, ia, mes abalamour m'oc'h bet maleuruz, abalamour m'o peuz tanvet an oll poaniou, an oll dismegansou, C'hui, ô Doue chadennet, C'hui, ô Doue kaset d'ar groaz gant bourrevien !... Me ho kar, muioc'h abalamour d'oc'h angoni ha d'ho maro eget abalamour d'ho resurrection... Rag pa sonjan en ho passion, va enkrez zo ker braz ha ken krenv ma ne c'helle beza eun enkrez par er bed abez... Bep noz koulz lavaret, goude kement a vloaveziou tremenet, e velan ar momet ma varvaz, en noz trubuiluz da greizdeiz, ar C'hrouer dirag he grouadurien. Delc'her a ran va zellou entanet var ho kroaz, var ho korf guen sklerijennet gant sked ho karantez, epad ma chom va c'hambur ken tenval hag ar bez...

Stoui a ran d'an daou c'hlin, ep ger ebet. Mes va c'horf a grenn oll dindan poaniou ho korf ; spern ho tal a gelc'h va fenn bronduet ; tachou ho taouarn a doull va daouarn ; gouli ho kaloun a skuill goad em c'halon. Hag evidon da veza ama var ar poultren, ez oun unanet ken striz gant va Doue, m'en em zantan evel staget ouz ho kroaz, ganeoc'h, en tu all d'ar bed-ma.

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien d'ar Barados :

	PAEROUN	MAEROUNEZ	
17 C'houevrer.	J.-Yv. Pronost, Kerguen.	Yves Jaouen.	Thérèse Fourn.
26 —	Auguste Bégoc, Bourg.	Auguste Lozac'h.	Léonie Bégoc.
10 Meurs.	L.-M. Lenvec, Kervizinic.	Jean-L. Le Foll.	Marie-M. Calvarin.
11 —	Michel Perrot, Créac'h.	Michel Perrot.	Marie-Y. Magueur.
14 —	Joséph. Milin, Trémazan.	Jean-M. Milin.	Marie-Yv. Milin.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helle he derri :
6 Meurs. François Goaster, Co.quet ha Rosalie Corolleur, Arc'hantel.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal dez ar varne goasked ar Grouz

- 15 C'houevrer. Jeanne Lamour, 61 vloaz Kersaint.
 18 — Josèphe Magueur, 74 vloaz, Sant Samson.
 1 Meurs. François Théréne, 57 vloaz, Kerc'hoazoc.
 11 — Pierre-Marie Léostic, 73 vloaz, Guitalmaz.

De profundis.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Eugénie Morel. Marie Roudaut. Jeanne-Yv. Lescop.	Tre'le klas.	{ Jeannie Magueur. Bernadette Jaouen. Thérèse Cadalen.
Kenta rummad.	{ Marie Derrien. Augustine Talarmin. Berthe Bellec.	Kenta rummad.	{ Joséphine Gouzien. Ernestine Brénéol. Eléonore Bégoc. Marie-Anne Bossard.
Eil rummad.	{ Louise Keroullé. Suzanne Le Touz, Marie-Yv. Cong. Marie-Jeanne Hamon.	Eil rummad.	{ Marie Bôcheur. Marie-Yvonne Pellen. Marie Kerjean. Léonie Bégoc.
Eil klas.	{ Françoise Brénéol. Philomène Cornen. François rébaol. Rosalie Léostic.		{ Vincent Cadalen. Julienne Didou. Joséphine Magueur. Marie Taloc.
Kenta rummad.	{ Noélie Lesvenan. Madeleine Cadalen. Isabelle Guéna.		{ Marie Le Venn. Marie-Anne Taloc.
Eil rummad.	{ Lucie Bégoc. Julianne Le Touz. Jeanne Brénéol. Marie-Yv. Richard. Marie-Yv. Perchoc.		

**A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion da zul
ar Bassion, 9 a viz Ebre!**

10 h. 1/2. Aline Trébaol, Marie-Anne Guéna, Joséphine Guéna,
Marie-Anne Trébaol (Tromenec).

11 h. An Ao. Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel,
François Olivier (Bourg).

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. Elisa Perez, Eodez Lescop, Victoire Coadou, Françoise
Sylvestre (Bourg).

12 h. 1/2. Anna Le Ven, Marie-Yvonne Théréne, Marie Perhirin,
Marie-Yvonne Bossard (Kerc'hoazoc).


1 h. Monique Floc'h, Joséphine Coatanéa, Louise Quivoron,
Hélène Querné (Rochard).

Kannadik miz Meurs en deus koustet 19 lur.

Bet evit sikour he baea digant : M. A. B., J. G., R. T., peb a
8 real ; M. H., J. G., G. T., L. H., peb a 4 real ; M. J. G., 12 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



AN DISPUD

An dispud a vezo d'ar iaou 4 a viz mae.

Ar re Vrezouñek

- Da 8 heur ar vugale gant ho fevare pask.
- Da 9 heur ar vugale gant ho eil hag ho zrede.
- Da 10 heur ar vugale gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h.

Les Français

- Da 2 heur ar re gant ho eil, ho zrede, hag ho fevare pask.
- Da 3 heur ar re gant ho c'henta pask solannel hag ar re iaouankoc'h.
- Evit kaout eul leor, ar re gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask a rank gouzout heb faot ebet an teir loden euz ar c'hatekiz-mou, goulennou ha responchou, beza bet aketuz d'ar c'hatekiz-mou epad ar bloaz ha rei skuer vad epad ar retred.
- Ar re gant ho fevare pask a ranko gouzout ouспен : litanioù ar Verc'hez, an *De Profundis*, an *Angelus*, ha mysterioù ar Rozera.
- Ar re gant ho fask kenta ^{kaollet evez} ar re iaouankoc'h, a ranko gouzout eb faot ebet, al loden genta hag an trede loden euz ar c'hatekiz-mou, goulennou ha responchou.
- Dervez an dispud ne vezo ket a skol gatekiz.

RETRED AR YUGALE

- Ar retred-se a goumanso d'al lun vintin 22 a viz mae. Peb krouadur a zigaso ganthan eur c'hantik hag eur chapeled.
- Offeren ar gommunion a vezo lavaret d'ar iaou 25 da 7 heur a quart.
- Ar gerent a roïo an dervez kaer-ze skuer vad d'ho bugale o tont gantho da zaoulina ouz an daol zantel.

Arc'hant dastumet er barrez evit an emzivaded dre ar brezel

An Aotrou Persoun a drugareka an dud o deuz bet ar vadelez da zastum aluzennou ar famillou merket dezho var ho listen. Doue hag anaoudegez vad an emzivaded ho digollo euz ho foan. Peb listen ne deuz ket bet kement a kement. Netra eno a zouezus, pe guir n'oa ket e peb karter kement a kement a famillou na kement a dud o c'helloud rei eb en em zieza re.

Setu ama ar zoum dastumet gant ar re a ioa e penn peb listen :

Kenta listen, Madeleine Morel, Bourk.....	47	fr.	50
Eil, Marie-Anne Guennégues, Bourk.....	12		55
Trede, Marguerite Calvez, Kersaint.....	25	»	»
Pederved, Marie-Anne Arzel, Kersaint.....	20	»	»
Pemped ha c'houec'hved, Marie Prigent, Trémazan....	6		20
Seizved, Marie-Anne Cadalen, St-Samson.....	12	»	»
Eizved, Marie Cadalen, Kelleret.....	2	»	»
Naved, Marie Taloc, Kerc'hoazoc'h.....	13		25
Dekved, Marie-Yvonne Perhirin, Penkear-Penfoul.....	12		70
Unnekved, Bédiès-Troméneec.			
Daouzekved, François Jaouen, Kérincuff-Langurru.....	7		60
Trizekved, Marie-A. Héliès, Kermajeau ag an tiez tosta.	6		15
Pevarzekved, Francine Conq, Traon ag an tiez tosta....	8		05
Pemzekved, Madeleine Jaouen, Kernézoc.....	6		50
C'houezekved, J. Gélébart, Kergastel ag an tiez tosta..	10		30
Seitekved, M.-J. Bizien, Kelléroun ag an tiez tosta.....	17	»	»
Trivac'hved, J. Le Venn, Kerguérioc ag an tiez tosta..	10	»	»
Naontekved, Jeannie Trébaul, Kériou-Lanhalès.....	10		40
Ugentved, An aotr hag an itr. Jacq, Arc'hantel.....	17	»	»
Kenta listen var'nn ugent, an aotr. ag an itr. F. Brézel, Arc'hantel	13		10
Eil listen var'nn ugent, an aotr. Victor ag an dim. Eugénie Marzin, Arc'hantel.....	45	»	»
Trede listen var'nn ugent, J. Coatanéa, Rochard.....	12		70

MIZ MAE

5. GUENER KENTA. Kaloun Jezuz, me a ginnig deoc'h an oferen hag ar gommunion a zigoll, en union gant ar Verc'hez Vari o kommunia bemdez guechall, evit rapari pec'hejou ar Francizien, ispisial re ar zoudardet hag ar vartolodet. D'ar Frans purifiet e rooc'h ar gounid !

7. Oferen ha gousperou SUL AR PASTOR MAD. O Jezuz, Pastor mad an eneou, nag a zenved dianket ! nag a eneou a dro kein d'ho fastor ! Kit d'ho c'hlask ; kavit, kemerit ha dougit anezho : n'euz nemedoc'h o rei an eurusted !

14. Sul ha gousperou AN TREDE SUL GOUDE PASK. (An oferen var gan a c'hell beza hini *Patronaj sant Joseph*, gouel en em gavet d'ar merc'her araok). O Jezuz, oc'h Aviel a lavar : « Ho kaon a droio e levenez » Grit, me ho ped, ma teuo da vir ar ger benniget-se, evit kement a famillou lakeat e kaon dre ar vrezel, evit kement a soudardet hag a vartolodet a c'houzany poniaou garo var al listri, en trancheou, en hospitalioù, er prizounioù !

21. Oferen ha gousperou AR PEVARE SUL GOUDE PASK. Jezuz, c'hui oc'h euz lavaret : Ma c'houlennit eun dra benag e va hano digant va Zad, o pezo ». Mad, goulén a reomp digant ho Tad oll c'halloudek, en oc'h hano, ar gounid evit ar Frans, ar peoc'h evit ar hoblou, ar zantelez evit an oll. Ha refuzet e vezo deomp ? Na zellit ket ouz pec'hejou tud a zo. Sellit ouz ho kouliou, sellit ouz karantez ho mamm, a zo hor rouanez, hag o pezo truez deomp !

28. Oferen ha gousperou AR PEMPED SUL GOUDE PASK. O Jezuz, er zul diveza araok deiz ar bloaz ma pignfot d'ar baradoz,

lammit divarnomp kement tech ha pec'het a virfe ouzomp da vont ganeoc'h d'an eurusted.

29-30-31. ROGATIONOU. Heulia ar pedennou ha procesionou, great evit pellaat divarnomp goaligner an Ao. Doue, a zantomp ken pounner, — hag evit obten he vennoziou var al labour-douar, dieseat kement abaoe ar vrezel.

1 Even. IAOU-BASK. Jezuz o vont d'an Env. *Gouel berz*: pec'hed marvel o vankout d'an oferen. — Kest evit skoliou kris. ten an eskopti hag evit skolaj-meur Angers.

2 Even. Guener kenta.

4. Sul GOUEL JEANN D'ARC. (An Actrou 'n Eskop a c'houlenn e ve pase-kaer).

MIZ MARI

Evel bep bloaz, on devezo pedennou Miz Mari.

Muioc'h eget bep bloaz, ec'h heullimp anezho.

Perag ?

Klevit. Pa oc'h euz aret ho parkeier, trempet, hadet, kompet, c'huennet, hag aoualc'h eo evit kaout an eost a c'hoantait ? Gouzout a rit ez euz eun dra ne c'hellit morse rei : an amzer vad. Kaer o pezo labourat ijinuz hag aketuz, mar deo fall an amzer, an eost a vezo fall. Hogen, piou a ro an amzer vad ? An Aotrou Doue, sklear eo. Hen eo a laka labour an den da zougen frouez.

Var dachen ar vrezel ive, an dud a labour a laz korf, deiz ha noz, gant mil seurt ijinou. N'eo nag ar vaillantiz nag ar spered a vank. Mes « ma ne deu ket an Aotrou Doue da ziual kear, ne zervich ket beilla, d'an dud a daol evez outhi. » Red eo deomp lakaat an Ao. Doue da venniga, buan ha puill, labour spountuz hor zoudardet.

Penaoz, nemet dre ar beden ha dre ar binijen ?

Mes siouaz, hor piniennou zo dister, hor pedennou zo dibarfet. Petra dalvezont dirag an Ao. Doue ?

Kemeromp eta pedennou ha piniennou santeloc'h, galloudusoc'h, re ar Verc'hez Vari, mamm Jezuz ha mamm ar gristenien. Unanomp hon oberiou, hor meritou, gant he re. Jezuz ne refuzo morse he Vamm. Dreizhi e resevimp ar pezh a c'houlennomp, ar iec'hed evit hon tud, ar gounid evit hor bro, ar zilvidigez evidomp.

Deomp da bedennoù miz Mari ; dre-ze en em ziskuezimp kristenien guirion, Fransizien vad, tud a skiant.

PASK SOLANEL AR VUGALE

Ar vugale n'o deuz ket sonjet kalz petra reont var an douar, nag evit petra int bet lakeat er bed ; ne ouezont ket e guirionez petra eo ar vuez-ma, petra o deuz d'ober ennh. Setu perag e ran-ker displega an traou-ze freaz dirag ho daoulagad, rei dezho da anaout mad ho finvezou diveza, ar pezh a c'hell serra outho ar baradoz, petra eo ar pec'hed ha penaoz kaout pardoun anezhan, ha penaoz diouall outhan.

Ar re o deuz ar muia ezom da veza sklerijennet eo bugale ar pask solanel, abalamour ma teuont brema da gaout muioc'h a skiant, ha m'int goest da gompren petra eo konnaunia ha penaoz konnaunia. Dreist oll bugale ar pevare pask, a ranko brema mont

er bed da beur-zeski eur vicher, ha koumans gounit ho bara evit mad. Ar re-ma n'oufet ket ho c'hentelia re vad, evit ma talc'hint d'ar plegou kristen roet dezho beteg-hen, ha ma vezint var evez evit tec'het diouz an danjeriou zo er vuez evit ho ene.

Evesait mad, mammou kristen, tadou kristen : ar retred a zougo frouez dioc'h ma vezo bet heuliet.

Ne ket grasou Doue a vanko d'ar vugale epad an derveziou benniget-se. Mes an Ao. Doue ne rai ket goulskoude an oll labour he-unan. Bez e fell dezhan beza sikouret gant ar re zo ar vugale en ho c'harg, gant an tad hag ar vamm. Tadou ha mammou kristen, pedit ta a zevri evit ma raio ho pugale eur retred vad ha santel, ha roit dezho kuzulioù leun a furnez, ken dre goms ar re a zo er gear, ken dre skrid, ar re a zo eat da zifenn ar vro. Deuit da gommunia da zeiz ar pask solanel, pe e kichen ho pugale en iliz parrez, pe var linen an fan en eun iliz hanter-ziskaret, en eur c'hoat pe en tranchee, en dra c'helloc'h.

Ar bugel ne ankounac'hai james an devez kaer-se, a vezo bet kaeroc'h c'hoaz evithan, e kreiz ar vrezel, ma c'hoar o deuz he gerent digemeret ar memes Jezuz asambles ganthan.

EUR SKUER

Pa lavaran d'an dud konnaunia aliez, darn a gav a bep seurt digareziou. Dreist-oll : « C'hui gav deoc'h ez euz kementse a amzer da goll ? »

Labour zo, gouzout a ran. Re zoken.

Setu perag e vije guelloc'h dont da gerc'hat sikour divin ar gommunion. Eun den a zo nebeut a dra. Eun den skoret gant an Ao. Doue, oh ! petra ne dalv ket !

Ar roue Albert, roue Beljik, en deuz labour aoualc'h gant ar vrezel, m'oarvad. Mad, bemdez e koll amzer o vedita var an Aviel ; ba teir pe beder guech er sizun, e koll amzer o konnaunia.

Gant-se, eo bet lezhanvet : Skuer ar rouaned. Skuer meur a gristen e c'helfe beza !

Piou ar mestr en ti-ma ?

Piou ar mestr en ti, aliez ? — Ar c'hrouadur !

Piou a ra d'ar re all senti outhan ? Ar c'hrouadur !

Ia vad.

Rag, perag ho pugale ne zent ket ouzoc'h pa goumandit dezhan ?

— Ne fell ket dezhan, eme-c'hui.

— Goulskoude, deoc'hu eo ar guir d'he lakaat da blega, ha da ober ho polontez !

— Ah ! ia, c'hui lavar !... dreist oll abaoe m'eo an tad eat kuit ! Ne reer ket ar pezh a garer euz ar voused-se !

— Perak ?

— Ne ouzon dare ! ne ket mank da gaozeal brao hag hir ganthan. A bep seurt e promettan dezhan. Nul !

— Perag kaozeal hir ? perag prometti traou ?

— Ne zentfe ket panefe-ze.

— Klevit. Pa plegit dezhan, ne blego ket deoc'h ! Hag he lakaat e rit e pinijen ?

— Ne fell ket dezhan.

— Neuze, hen eo ar mestr ?
 — Ah ! m'hel lavar deoc'h, n'eo ket eaz kaout affer ouz an hail-
 lounded bian-se !
 — Piou zo kaoz ?
 — Ne ouzon ket. Goulskoude ne velont ket a skueriou fall er
 gear !

— Doue ra viro, ive ! Mes ha gouzout a rit-hu perag kement
 a gerent o deuz ken nebeut a c'halloud var ho bugale ?

— An oll ! Ne gomprenan seurt !

— Setu ama. An doujans a rouesa er familhou, abalamour ma
 rouesa enno ar zonz euz a Zoue. Kenta mestr a zo eo an Ao. Doue.
 Ar gerent pa zoujont Doue, ar vugale a zouj anezho.

Mammou, sentit oc'h lezen Doue e peb tra. Roit kenteliou ha
 skueriou mad, boazit ho pugale da viret al lezen gristen, grit dezho
 gouzout ho c'hatekiz hag he gompren.

Dalc'hit sonj : an Ao. Doue, pa en deuz roet deoc'h da zevel
 krouadurien great var he batrom, en deuz roet deoc'h perz en he
 c'halloud. Grit implij anezhan gant dousder, gant furnez, — gant
 nerz ive, rak izoum zo.

Pa ema ar familh ervez kaloun Doue, an tad hag ar vamm a zo
 ar vistri, ar vugale n'o deuz nemet bale, ha dre-ze ez euz peoc'h,
 karantez, hag eurvad. Evelse oa e Famill Santel Nazarethi, gant
 Jezuz, Joseph, Mari.

Tadou, mammou, koumandit.

Bugale, sentit.

AN ILIZ HAG AR PAOUR

An Hini en deuz savet an Iliz, Jezuz-Krist, a c'hourc'hemennaz
 dezhi : « En em garit an eil egile, evel me meuz karet ac'hanoc'h. »
 An Iliz e deuz sentet ato.

Gouzout a reomp, an Dispac'h Vraz a zibennaz tud vad ha
 dinoaz a vilierou. — Dispac'herien 1871, e Paris, a fuzillaz beleien,
 barnerien, generaled, hag a lakeaz an tan goal var ar paleziou
 kaera. Abaoue, on deuz gulet beleien kaset d'an harlu, mistri
 ha mestrezed tennet euz ho skoliou kristen, emzivad, tud koz
 ha kabac'h taolet er meaz... N'eo ket an Iliz a reaz an torfejouze
 hi eo ho gouzanvaz !

Mes pa'z euz bet hano dioueret evit rei d'an nesa, sevel hospi-
 taliou, beva ar beorien, easaat ho stad d'an dud a vicher, piou en
 deuz her great ? Hini guelloc'h eget an Iliz katolik.

Adalek amzer an Ebestel, 19 kant vloaz zo, ar gristenien a
 ranne ho madou gant ar beorien : ar gest a reant evitho. Merket
 eo e skridou S. Paul ha S. Laurans.

An hospital kenta a oue savet e Rom gant ar gristenien. Tri
 c'hant vloaz goude maro Hor Zalver, hospitaliou a repue ar paour
 e keariou Lyon, Reims, Paris.

Er Flandr (bro Lille) var dro ar bloaz 1250, al leanezèd a rene
 150 hospital. Araok an Dispac'h vraz, ar venec'h hag al leanezèd
 o doa savet pe a rene 18 kant hospital, hag e tispignent aluzennou
 evit 40 million etre ar re goz, ar re glanv, an emzivad.

Hag abaoue ? En hor Bro-Frans epken, 30 mil belek pe frer,
 6 ugent mil seur a gemere soursi euz ar paour, araok n'eo bet sar-
 ret pe laeret ho ziez. Ha ne c'houlennent koumanant ebet. Labou-
 rat a reont evit bennoz Doue ha netra ken.

Daoust hag etouez enebourien an Iliz eo e vez kavet an dud

vad a rekour an dud ezommek en ho foaniou ? Daoust hag an Iliz
 katolik n'eo ket eur skol a garantez bepred digor ?

An Iliz a gar ar paour, soken divar he c'houst. Ra vezo foug
 ennomp da veza kristenien katolik, kenseurtet euz an emgleo ka-
 rantezusa zo bet biskoaz, savet ma 'z eo var batrom karantez Hor
 Zalver.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (7^e listen)

MARO EN HOSPITAL, en Naoned, an Ao. Joseph PELLLET,
 infirmier, ginidik a Bonte-Kroaz, 42 vloaz.

MARO VAR AN DACHEN, an Ao. LE ROY, kloarek a Lango-
 len, lazet d'ar 25 a c'huevrer 1916 epad ma laboure er meaz euz
 an tranchée.

MARO E FORT D... d'an 4 a viz Ebrel, an Ao. QUERNE, rejant
 e kloerdi Kemper, sous-letanant en 19^e. Karet hag estimet gant
 an oll, ken mistri, ken soudardet. Ginidik a Vontroulez. 33 bloaz.

MARO VAR AN DACHEN. An Tad Jean BOZEC, ginidik euz
 hon eskopti, misioner deuet euz ar Gochinchine evit ar vrezel, bran-
 cardier en 9^e zouaved. D'ar 27 C'huevrer, eun obus en deuz tizet
 anezhan en he benn. Amzer da lavaret : « Va Doue ! va Doue ! »
 hag edo achu ganthan. Ar zoudarded oll a lenve en dro dezhan :
 he gouraj hag he zantelez a c'houneze an oll galonou dezhan.

KROAZ A VREZEL. An Ao. LE GOFF, ginidik a S. Jean Tro-
 limon, serjant er 116. « Serjant dreist, kalounek ha sentuz, glazet
 en emgann ar 22 eost, remerket e touez ar re all evit he vaillantiz
 hag he aked d'al labour. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. Laurent PERON, ginidik a Bont
 'n Abad, kloarek, soudard er 116^e. Goal-c'hlazet en emgann ar 25
 a Vengolo, pa rea sinat d'an artilleurien astenn ho zennou-kanol.
 En deuz refuzet mont kuit divar an dachen, araok beza roet he
 zrapo d'ar zerjant. »

KROAZ A VREZEL. An Tad Charles BRANQUET, aumônier
 volontaire, ginidik a Gemper, dekoret eun eil guech, evit he vaillant-
 iz en emgannou Verdun.

KROAZ A VREZEL. « An Ao. CAROFF, brancardier gant ar
 Marocaned, goal-c'hlazet e Souain, 7 Here 1915, en eur ober he
 labour dindan eur glao obuzou, gant eun nerz-kaloun dispar, ken
 seder ha tra. » An Ao. Caroff a zo kure e Guitalmeze.

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist,
 heritourien d'ar Barados :

PAEROUN :		MAEROUNEZ :
19 Meurs Edouard-J. Kerros, Kergouanan.	Edouard Provost.	Josèphe Kerros.
13 Ebrel Claude-M. Provost, Curullou.	Guill. Provost.	Marie-J. Magueur.
13 — Vincent-M. Taloc, Kerlaguen.	Vincent Taloc.	Marie-A. Vaillant.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douarsantel ar vered, da c'headal dez ar varne goasked ar Groaz

24 Meurs Marie-Jeanne Brénéol, 30 vloaz, Kersaint.
19 Ebrel Matthieu Brenteroc'h, 75 vloaz, Tour.
19 — François-Per 66 vloaz, Bourk.

De profundis.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Marie Roudaut. Jeanne-Yv. Lescop. Augustine Talarmin. Marie Derrien. Berthe Bellec. Marie-Yv. Perchoc. Marie-Jaouen. Joséphine Auffret.	Trede klas.	Joséphine Bouquet. Marie Magueur. Bernadette Jaouen. Jeannie-Yv. Trébaol. Françoise Forest. Françoise Keryran. Joséphine Gouzien. Erestine Brénéol. Eléonore Bégoc. Marie Talarmin. Elisa Luart. Marie-Anne Bossard. Alexandre Kermorgant. Léonie Bégoc. Marie Bocheur. Marie-Yv. Pellen. Marie Kerjean (Bourg).
Kenta rummad.	Suzanne Le Touz. Louise Keroullé. Marie-Yv. Conq. Georgette Bouquet. Suzanne Lé stic. Marie-R. Croguennec. Louise Laot. Marie-Yv. Kerros.	Kenta rummad.	Marie Magueur. Marie-Yvonne Milin. Marie Conq. François Cadalen. Louis Guennégues. Vincent Cadalen. Marie Taloc. Yves Trébaol. Jeanne Magueur. Julienne Didou. Alexandrine Marzin. Pélagie Sylvestre. Julie Talarmin. Marie-Anne Taloc. Marie Foll. Eugène Floc'h
Eil rummad.	Françoise Brénéol. Marie-Yvonne Allégot. Philomène Cornen. Franc Héliès Bourg. Fr. Héliès (Kervajeau). Louise Squiban. Isabelle Guéna. Marie Magueur.	Eil rummad.	Joséphine Talarmin. Lucie Bégoc. Catherine Didou. Marie-Yv. Perchoc. Julianne Le Touz. Herveline Léostic. Perrine Kerros. Jeanne Brénéol.
Eil klas.			
Kenta rummad.			
Eil rummad.			

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'ar 14 eil sul a viz Mae

10 h. 1/2. Marie-Anne Héliès, Marie Jarnic, Marie Le Borgne, Joseph Arzel (Kersaint).

11 h. An Aotrou Persoun, Job Godebert, Guillaume Lescop, François Jézéquel (Bourk).

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. Julie Pérès, Jeannie Léon, Jeanne Floc'h, Madeleine Morel (Bourk).

12 h. 1/2. Joséphine Le Venn, Marie-Jeanne Forest Kerguérioc, Rosalie Chapalain (Kergonan), Joseph Kerros (Prat Kerguérioc).

1 h. Marie Perchoc (Traon-Bian), Perrine Mellaza (Tréat-Doun), Jeannie Magueur (Tour), Gabrielle Perchoc (Kervéléoc'h).


Kannadik miz Ebrel en deuz koustet 19 lur.

Bet evit sikour he baea digant : M. C., eur skoued ; V. M., P. G., G. H., peb a 8 real ; J. P., E. P. peb a 24 guennék ; F. H., 10 guennék.

Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



Ar Soudarded glazet pe mac'hagnet er Brezel

Kalz tud divar ar meaz, siouaz, a zo distroet pe a zistroio deuz ar vrezel gant eur vreaç'h, gant eur c'har neubeutoc'h, pe a vo diguet c'hoaz goasoc'h gantho. Ne vezint mui guest da labourat evel ma reant p'edont diampec'h. Daoust ha ne ve ket guellet gouskoude ho sikour da c'hounit ho bara en eur ober eul labour benag, en eur implija en eur fesoun benag an izili a zo chommet mad gantho; ha meur a dro zoken, en eur rei dezho izili fesounet gan ijin, petra benag ne dalvezint james an izili kollet? Eo. O c'houzout mad kementze, eur guchen tud a galon a fell dezho sevel eun Emgleo evit sikour ar c'houerien mac'hagnet er vrezel.

C'hoant o deuz e teskfent en em zervichout a venvegou labour, a c'hiz nevez, gobariet vetepans evitho; eler, falc'heureuzou, etc. D'ar re n'helfent ket labourat an douar, e ve desket eur vicher skanvoc'h a c'heller ober var ar meaz, evel an hini a gere, a gemener, a c'hoakolier, etc...

Konseil an Emgleo en em implijo ive evit klask d'ar zoudarded plasou da c'hounit ho bara, dioc'h ho doare. Mes an dud-ma a ranko rei ho ger da zistrei ha da jomm var ar meaz p'o devezo desket ho micher.

Prezidant an Emgleo a zo an Aotr. Thomas deuz Plougastel-Daoulas, anavezet gant kalz koueriadet euz hor bro evit ar vad en euz great d'ar re en em ro d'al labour douar, dre Syndicat meur Landerne.

An Aotrou 'n Eskop en euz krivet evit he veuli da glask rei sikour d'al labourerien douar « glazet er vrezel » hag alia an dud vad da rei dezhan an dourn evit kementze.

An Emgleo evit an dud glazet er vrezel en deuz dija bet en aluzen 30.000 lur. An nebeuta oufe rei evit an Emgleo-ma eo 20 real er bloaz keit ma vezo izoum.

An neb en deffe bolontez da ober aluzen evit an Emgleo he c'haso d'an Aotrou (Danguy des Déserts, notaire à Landerneau, trésorier du Comité de l'Œuvre des mutilés de la guerre).

Aotrou Billant, à l'Office central, Landerneau, a respounto da gement hini a c'houlennno var an Emgleo sklerijen pe skoazell.

AR PARDOUNIOU

En amzer drubuilluz-ma, e leac'h klask evel ma reer aliez ebad ha mesventi, deiz gouel hor zent Patroun e klaskimp, evel hon tadou koz, pardoun euz hor pec'hejou dre eur confession vad, ha nerz a eneb hon techiou fall dre eur gommunion santel. Pedi a reimp en dervez-se hor zent Patroun, da zioual hon tud er brezel deuz peb danger, ha do digaz ar c'henta d'ar gear goude beza bet treac'h d'hon enebourien.

Ar merc'hed iaouank kristen a c'hoar ne ket d'en em ficha ema brema an amzer, na da redet e goal goumpagnuneziou, epad me ma hon tud o tivoada hag o vervel var an dachen, pe prizouniet o tua gant an naoun. Bezit oll modest en ho tillad hag en ho toare; ne glaskit ket plijout d'ar voazed a dremen en hon touez,

a ra goap ac'hanoc'h; ne rit darempred ebet gantho nemed mar bez izoum ha mar bez red.

Ar viktor on devezo var enebourien hor bro, mes nag a dud c'hoaz a vo lazet ha mac'hagnet araok ma vo great ar peoc'h!

AN AOTROU KURE

An Aotrou Kure ne ma mui e Vitry-le-François. Bez e ma brema en eun hospital ag a zo enna 800 soudard klanv pe glazet; ag e maor e kempen an hospital evit digemeret 500 pe 600 all; ne ket labour a vank dezhan.

Setu ama he adress nevez: « M. Caroff, Vincent, infirmier, 11^e section. Ambulance 11/12, sceteur postal 29. »

AR BREZEL

Ar barrez e deuz adarre da vouela var maro daou deuz he bugale diskaret er brezel. François Le Guenn deuz Tremazan, kouezet var an dachen e Massiges (Virginy) (Marne) ha Yves Le Ven deuz Kerguerioc, kouezet e Douaumont e kever Verdun. Pedi a reimp oll evitho ha kemeret a reimp perz en anken ho zud glac'haret.

MIZ EVEN

IAOU BASK. (Gouel berz. Red eo kaout oferen evel d'ar zul.) Gouel Jezuz o pignat d'an Env, korf hag ene, dre he nerz he-unan. — Ra blijo gant Doue rei ar memes eurusted da bep hini ac'hanomp; n'euz nemet eun dra a virfe: ar pec'hed eo. Deomp-ni en em zioual.

2. GUENER KENTA. Miz Even eo miz ar Galon Zakr. Ar guener kenta a zo deiz ar Galon Zakr. Eun dervez ar c'haera eo eta hirio evit dont da gommunia. Kinnig an oferen har ar gommunion evit ar gristenien fall o devezo manket d'an oferen en dere'hent.

4. SUL JEANN D'ARC, guerc'hez, patrônez Frans. « O plac'h euruz, guechall o peuz santeleat armeou Frans, flastret he enebourien, roet o puez evit ho pro: brema grit d'hon difennourien beva e guir gristenien, trec'hi an Allmanted; ha ma rankont mervel, dousait ho angoni, konsolit ho familhou, kasit ho eneou d'ar Baradoz. »

11. SUL AR PANTEKOST. Gouel ar Spered-Santel o tiskan var an Ebestel, evit sklerijenna ho sperejou, kennerza ho c'haloniou, santelaat ho eneou. Sklerijen, nerz-kalon, santelez, setu ar grasou da c'houlenn epad ar vrezel: rag izom on deuz da gompren eo mad bolontez an Ao. Doue, da c'houzanv ar boan ep grosmolat, da c'hounid sikour d'hon tud ha d'hor bro dre eur vuez kristen.

12. LUN AR PANTEKOST. Ofisou evel da zul. Pedomp evit kement hini a ra brema labour an Ebestel: ar Pab, en deuz karg ar bed oll; an eskapien, Aotrou 'n Eskop Kemper, a responto euz hon eneou dirag ar Barner braz; ar veleien, a vez dispennet ken aliez gant tud a dle respet hag anaoudegez vad dezho; evit ar visionerien, ar vistri ha mestred kristen, a boan da zeski ar religion d'an dud gouez ha d'ar vugale. Pedomp evit mistri ar broiou,

ma ouezint penaoz en em drei evit rei deomp an treac'h hag ar peoc'h.

14-16-17. Merc'her, guener, sadorn. IUN HA VIJIL AR PEVARE-AMZER. Ar binijen-ma a c'halvo bennoz an Ao. Doue var madou an douar, ha var eneou ar gloareged beleget derc'hent gouel an Dreindet. Pa vank sikour an dud, ra gresko sikour an Ao. Doue.

18. SUL AN DREINDED. Eun Doue e tri ferson ! An Tad Doue, ar Mab Doue, ar Spered-Santel Doue : ha gouskoude ar memes Doue ho zri, ha nann tri Doue ! Tra ne c'hell den he gompren, tra e rank peb den he gredi : diskleriet eo bet gant Jezuz-Krist, na c'hell na fasia nag hon lakaat da fasia. An Dreindet e deuz krouet, prenet, santeleat ac'hanomp ; meulomp ha sentomp.

24. GOUEL S. IAN VADEZOUR, kenderv Jezuz. Dre ar vadi-ziant omp bet digemeret en Iliz katolik, — on deuz resevet pers en he madou, pedennou, sakramanchou, induljansou, — ar vadi-ziant a zo dor kenta ar zilvidigez. Bennoz da Zoue da veza hor c'hreat kristenien, bugale dezhan, heritourien euz he varadoz. Ne stlejomp ket hor badiziant dre fank ar pec'hed.

25. SUL AR ZAKRAMANT MEULET RA VEZO. — Greomp euz zell en hor c'houstians : hag ober a reomp-ni kement ha ma c'hellomp, kement ha ma tleomp, e kenver Jezuz prizouniet er Zakramant ? e kenver an oferen ? e kenver ar gommunion ? e kenver ar vugale d'ho boaza da zakramanti ?

30. GUENER AR GALON ZAKR, dervez braz ar raparasion. Jezuz en deuz goulennet beza digollet euz an dismegansou ha sakrilachou e c'houzanv en he Zakramant. « Setu ar Galon e deuz karet an dud, ha ne reseo en distro nemet disprij hag ingrateri ! » Nebeutoc'h a bec'hejou, muioc'h a binijennou, guelloc'h oberiou.

1. Gouere. IUN, derc'hent gouel S. Per ha S. Paol.

2 Gouere. Sul S. Per ha S. Paol. — Kest Diner Sant Per.

Jeanne d'Arc : he lavarou

(Gouel sul henta a even)

Va mam e deuz desket d'in ar *Bater*, an *Ave*, ar *Gredo*. Hi eo, hag hini all ebet, a zeskaz d'in va c'hreanson, va c'hredennou oll.

Badezet oun, kristenez vad, hag e varvin kristenez vad.

Va mestr, roue an Env eo.

Peguir Doue a c'hourc'hemenne d'in mont da vrezellekaat, ne moa nemet senti d'ober. Pa mije bet kant tad ha kant mam, pa vijen bet merc'h d'ar Roue, Doue o koumandi, e vijen eat kuit.

Bolontez Doue eo e deuz galvet ac'hanon d'ar vrezel. Ha pa rankfen uza va divesker beteg va daou c'hlin, mont a rin d'al leac'h m'oun galvet gant Doue... Guelloc'h hirio eget varc'hoaz, guelloc'h varc'hoaz eget divezatoc'h. Red eo d'in mont hag ober, abalamour va Aotrou a fell dezhan.

Gouzout a ran em bo kalz da ober, mes va Aotrou va zikouro. Kement hini a stourm enep rouantelez santel ar Frans, a stourm enep ar roue Jezuz. (Ali d'ar Boched.)

Na meuz ket aoun rag ar zoudardet ; va hent zo great d'in. Ma tiguez an enebourien, me, me meuz va Aotrou hag a ouezo digeri an hent d'in... N'o pet ket aoun.

En han' Doue, ar zoudardet en em ganno, Doue a roio an treac'h.

Araok ! araok ! En han' Doue, treuzi a rin. Nep va c'har r'am heulio ! Kontant drouk-kontant, ar zoudardet a ielo, gounid a raint evel ma c'hounezjont. Ep mar ebet, an enebourien a vezo pullu-c'het, kit ebarz, ha dispount. Deomp-ni int, ho c'histilli a vo paket.

Bezit a galon vad. Enebourien Doue a vo flastret. Ha pa vijent a-istribill ouz ar c'houmoul, ni ho fako. Int-hi eo a dec'ho kuit, hag ker buan, buan, buan, ma renkimp kaout kentrou dispar evit redek var ho lerc'h.

Deomp d'an ilizou da drugarekaat an Ao. Doue da veza roet ar gounid deomp. Ma vijemp dianaoudek, ne jomfe ket a du ga-neomp, hag an treac'h ne vije mui deomp.

Keit ha m'en em ziuoullin pur, va Sentezed a vo ganen.

Me vije ar plac'h muia glac'haret euz ar bed, ma sonjfen n'emaoun ket e gras Doue.

Ma n'oun ket e stad ar c'hras, ra blijo gant Doue he rei d'in ; ma'z oun e stad ar c'hras, ra blijo gant Doue hen delc'her d'in.

Abalamour da bec'hejou an dud eo e lez an Ao. Doue anezho da goll ar stourmajou.

Kit da govez, resevit korf Jezuz. En han' Doue, bannit kuit ar blasfemou, al laerounsiou, an traou vil, ar rendael.

Me gar an Iliz. Me garje he skora euz va galloud ha mervel evit ar feiz kristen. Rag ar memes hini eo, Jezuz hag an Iliz.

Dalc'hit ar groaz savet dirag va daoulagad beteg var dreujou va maro, evit m'am bezo anezhi, keit ma vevin, d'am c'hennerza.

Eun ali roet dre ar c'hazetennou

1° Intanvezed hag Emzivaded ar Vrezel, ar re oll o deuz karg emzivaded, a rafe mad *prepari dioc'htu ho faperiou evit ho fansion* hag ho *c'has d'an ti-kear*. Ac'hano e vez kaset d'ar *sous-intendance* ; arabat e ve gedal ma vo echu ar Vrezel.

2° Kementze ne viro ket outho da gaout ar zikour o devez brema (Allocation) keit ma pado ar vrezel.

3° Ma kasont dioc'htu ho faperiou, e vezo prest ho brevet-pansion pa echuo ar vrezel, hag ep dale ebet e touchint ar pez a deui dezho.

Ma taleont da gas ho faperiou, setu ama ar pez en em gavo : goude ar vrezel ne vezo mui roet ar zikour (allocation) a vez roet brema. Neuze e rankint gedal meur a viz ep kaout netra, ken na vezo bet amzer da zellet ouz ho vaperiou araok rei dezho ho brevet-pansion.

Setu ama ar paperiou o deuz da brepari :

1° Acte de naissance ; — 2° Acte de mariage de la veuve ; — 3° Acte de décès du mari ou pièce en tenant lieu ; — 4° Justification par le chef du régiment ou détachement dans lequel était incorporé le militaire décédé, des causes de sa mort et de sa situation militaire (grade) au moment de son décès ; — Certificat délivré par l'autorité municipale constatant qu'il n'y a pas eu de divorce, de séparation de corps, que la veuve jouit de ses droits civils, que le mari n'a laissé aucun enfant mineur issu d'un mariage antérieur ni d'enfants naturels.

En ti-kear e vezo great ar pez vo mad evit kas an traou da benn.

Ma fell deoc'h sikour ar vrezel da echui

C'hui, er gear, c'hui a c'hell sikour ar vrezel da echui abretoc'h. Ha n'oc'h ket skuiz aoualc'h ganthi, marteze ?

Penaoz ober ? Pedi, sklear eo : hen ober a rit, ha mad eo, ha red eo.

Dre ar beden e teuio sikour Doue d'hor bro, da drec'hi an enebourien. Ia, sikour Doue : mes ho sikour-c'hui, ar pezh a c'hellit da rei d'ho pro, petra eo c'hoaz ?

Peziou aour zo. Digasit anezho d'ar resevoir, d'ar post, d'ar percepteur. Digasit dioc'htu, digasit oll, digasit gant fisianz.

Ne golloc'h ket, hag ar vro a c'hounezo.

Da genta, billiji a vezo roet deoc'h evit oc'h aour, kant lur evit kant, mil evit mil. An aour ne dal ket hirroc'h eget ar paper. Talout a ra nebeutoc'h zoken : rak mar kirit, e vezo roet deoc'h paper (boniou) hag a zoug tost da zaou skued interest dre kant lur, eleac'h an aour kuzet en armel ne brofit na deoc'h na da zen.

D'an eil, ma trokit oc'h aour ouz paper ar Frans, ar vuez, hag a zo ker brema, a c'hello beza guelloc'h marc'had, abalamour ar broiou estren na zavint ket ken huel ho ger.

D'an trede, seulvuioch a beziou-aour a vezo gant ar Frans, seulvuioch a beziou kanol, a obuzou, a fuzillou, a vevans, a bep tra, a vezo dezhi, peadra da bunta ar Boched kuit. Ma'z euz nebeutoc'h a aour, nebeutoc'h e vezo gounezet varnho, ha peur e echuo ar vrezel kaset a nebeudou ?

Ma fell deoc'h e teuje ho tud dizale d'ar gear evit mad, roit peziou aour d'ar Frans.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (8^e listen)

LAZET. — An Ao. Jean THOMAS, kloarek a Scaer, karet gant an oll er rejimant evit he zousder hag he vaillantiz (1916).

METALEN MILITER. — An Ao. Yves CREIGNOU, ginidik a Rosko, abostoler euz Seminer Kemper, serjant en 248^e. « Serjant kalounek meurbed, en deuz roet d'he zoudardet ar skuer gaera, o vont ato laouen d'an emgann ha d'al labour. D'ar 25 a vengolo 1915, e penn he zection, en deuz gounezet diou linen trancheou, an eil goude eben. Kelc'het gant an Allmanted, en deuz kaset he zoudardet var ho giz, o chom he-unan an diveza. Goal c'hlazet. »

Kentoc'h, an Ao. Creignou en doa bet ive ar groaz a vrezel.

KROAZ A VREZEL. — An Ao. GOURIOU, infirmier e Hericourt. « D'an 20 a veurs 1916, dre ma vez ken dispount hag eveziant, en deuz diarbennet eun darvoud braz ; eur zoudard o veza digaset eur grenad en he zac'h, an infirmier a velaz edo tost da derri, a gasaz ar re all er meaz, hag a jomaz he-unan goal c'hlazet. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. Louis SOUBIGOU, kloarek a Bloudiry, brigadier er 7^e artillerie. « Leun a diz hag a gouraj, remerket meur a dro, dreist oll d'ar 20 a veurs 1916, o tresa linen an telefon dindan eur glao obuzou braz. Ne c'heller ket he veuli aoualc'h, ken eveziant ha ken laouen eo en he labour. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. LAREUR, kure Daoulas, map an Ao. Lareur mear Plouzané (lazet). « Brancardier er 87^e, skuer

a nerz-kalon hag a vaillantiz. Ato remerket evit he gouraj, dreist-oll d'ar 1, 2, 3 a here 1915, pa'z ea dindan tan ar peziou-kanol hag ar mitrailleurouzou, da zamma tud glazet var he ziouskoaz, oc'h ober fae var an danjer. Lazet e lochen ar medesin, dismantret oll gant an obuzou. »

AR BELEK ER VREZEL

Lizer an Aotroun 'n Eskop Ruch, a Nancy, aumonier militer, hag en deuz ar groaz a henor hag ar groaz a vrezel

« Setu ama ar pezh e meuz gaelet epad pevarzek miz :

Me meuz gaelet hor zoudardet, ho vaillantiz, ho finijen, ho vertuziou, ho sakrifisou ; — hag e meuz meulet al labour o doa great en eneo an darn vrasa *Belek* ho farrez, *Belek* ho fask kenta.

Me meuz gaelet hon tud c'hlazet, hor c'hlanvourien, var eur c'hravaz, var ar c'holo, var an douar noaz, brevet gant ar skuizder, an naoun, ar sec'hed, an derzien hag ar boan ; — hag e meuz anavezet petra c'hell gras Jezuz-Krist, kinniget peurliesha gant ar *Belek*, evit restaol an nerz, an esperans, ar peoc'h, ar pardon.

Me meuz gaelet enterramanchou a gantchou, beziou a vilierou ; — hag e meuz gouezet edo an toul-ze, panefe ar *Belek* o pedi, eun toul du, divalo, ien-skilas, hag hanter zilezet.

Me meuz gaelet tud harluet a vagadou, merc'hed, re goz, bugaligou, o vont n'oun dare da be leac'h, ne ouzon ket gant petra nag evit pegeit ; — hag e meuz sonj mad, kerkent ha m'en em gave ar *Belek*, edo an dud reuzeudik-se rekouret, kennerzet ; araog ha goude ar veach, gouzout a reomp oll, meur a hini o deuz kavet er *Belek* ho guella mignoun.

Me meuz gaelet ar vertuziou kaera o lintra etouez pobl ar Frans. Me meuz gaelet, hag a-dost, mammou, priejou, bugale, kalounek ha rezinet ; — ha ken henvel oa ho doareou ouz skueriou huela ar guir vuez kristen, ma meuz ranket ho saludi, evel frouez guirion labour an Aviel, a zo bet prezeget epad kant ha kant vloaz d'hon tadou, d'hor c'henvroiz, gant ar *Belek* e peb amzer.

Me meuz gaelet ar c'heriadennou diskaret, an ilizou merzeriet ; — hag ho relegou a lavare d'in, var a gredan : « Ar *Belek*, hag hen a zeuio d'hon adsevel ? »

Me meuz gaelet eneo ar Veleien, lazet gant ar Prusian, abalamour ma kariet re ar Frans hag ho farrezioniz ; me meuz gaelet eneo ar persouned hag ar gloareged kuezet var dachen ar vrezel ; ha me gav d'in, ho ioul brasa pa bilent beuzet en ho goad, a ioa e savje var ho lerc'h, euz ho goad, *Beleien* evit goude ar vrezel.

Me meuz gaelet, santet, touchet ar virionez-ma : Ar Frans a rank kaout *beleien*, kalz *beleien*, *beleien santel*. Kerent, kinniget ho bugale. Kristenien, paeit ho studi. Ha c'hui, bugale, *beleien* da zont, dibabet gant Doue, roit ho kalon, ho spered, oc'h oll nerz. Mar bez red, roit ho goad. »

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Jeanne-Yv. Lescop. Berthe Bellec. Marie Roudaut. Eugénie Morel.	Trede klas.	Françoise Forest. Philomène Héliès. Bernadette Hamon. Françoise Kervran. Joséphine Gouzien. Ernestine Brénéol. Marie-Anne Conq. Eléonore Bégoc. Elisa Luart.
Kenta rummad.	Marie Derrien. Augustine Talarmin. Suzanne Le Touz. Marie-Yv. Conq. Georgette Bouquet.	Kenta rummad.	Marie Kerjean (Kersaint). Haudes Guéna. Haudes Talarmin. Francine Fily.
Eil rummad.	Jeanne Léostic. Madeleine Prigent. Louise Keroullé. Marie-R. Croguennec.	Eil rummad.	M. Magueur (Lanourian). Marie Conq. François Cadalen. Marie-Yvonne Milin. Marie Taloc. Yves Trébaol. Vincent Cadalen. Pélagie Sylvestre. Philomène Autret. Jean Morel. Gabrielle Cornen. Marie Foll. Paule Autret.
Eil klas.	Philomène Cornen. Franc. Héliès (Kervajan). Joséphine Fourn. Noélie Lesvénan.		
Kenta rummad.	Marie-Yvonne Perchoc. Joséphine Talarmin. Perrine Kerros. Léontine Michel. Marie-Yvonne Guéna.		
Eil rummad.	Louise Kermorgant. Anne-Marie Jacq. Herveline Léostic. Jeanne Brénéol.		

BADIZIANTOU

A zo bet great kristenien, bugale da Zoué ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien d'ar Baradoz :

25 Ebrel Francine Landuré, Penfould.	Fr. Minguant. Marie Michel.
10 Mae Ernest Le Menn, Argenton.	Ac. Talarmin. Joséphine Colin.
10 — Yves-Marie Corolleur, Penfrat.	Yves Corolleur. Fr. Guennégues.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varne goasked ar Groaz
3 Mae Stéphan Guéna, 50 vloaz, Arc'hantel.

De profundis.

EAT D'AR BARADOZ

26 Ebrel Jeannie Bellec, 3 bloaz, Sant-Gonvarch.


A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'ar 25 a viz Even, Gouel ar Zakramant

- 11 h. Marie-Ursule Minguay, Rose Amolot, Marie-Anne Cloatre, Marie-Anne Guennégues (Bourk).
- 11 h. 1/2. Ar skol gristen.
- 12 h. Philomène Coat, Marie-Yvonne Lescop, Joséphine Godbert, Bernadette Vaillant (Bourk).
- 12 h. 1/2. An Aotrou Persoun, François Calvez, Guillaume Lescop, Alexis Salaün (Bourk).
- 1 h. Louise Coat, Joséphe Lescop, Rosalie Perchoc, Lanhalès, Marie Brénéol (Kerriou).
- 1 h. 1/2. Lucie Brézel, Céline Le Dall, Maria Le Dall, Marie-Josèphe Guillerm (Arc'hantel).

Kannadik miz Mae en deuz koustet 20 lur 10 guennek.
Bet evit sikour he baea digant : P. G., 20 real ; J.-M. Q., 8 real ; J. P., 4 real 5 guennek ; J. T., J. K., J. B., peb a 4 real.
Doue r'ho faeo.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.



BUGALE MARI

D'an 12 a viz Even, lun ar Pantekost, e voa eur gouel kaer e Landunvez evit Bugale Mari.

Pevarzek plac'h iaouank a gemeras en dervez-se ruban an aspirantezed. Araok reseo ar ruban, daoulinet dirak skeuden ar Verc'hez, unan anhezo a reaz a vouez huel en ho hano oll, ar bromessa-ma : Tec'hed a raimp iviziken dioc'h an ebatou fall, evel ma eo : an dansou, ar veillerez noz, ar goal gompagnuneziou, al leoriou hag ar c'hazeten-nou fall ha kement a c'helfe beza evidomp danger da guezza er pec'hed ha tenna dismegans var ar Gongregasion. Prometti a rejont ouspenn kommunia da neubeuta eur vech ar miz ha dont atao d'ar reunion a vez great bep trede sul ar miz.

Derc'hel a reint d'ho fromessa, rak gouzout a reont penaos mar deo divalo mankout d'ar guer roet da eun den, e viche c'hoaz kalz divaloc'h mont a enep ar guer roet d'ar Verc'hez.

Setu ama hanoiou an aspirantezed nevez :

- | | |
|---------------------------|--------------------------|
| 1. Philomène Bossard. | 8. Ernestine Guéna. |
| 2. Augustine Brénéol. | 9. Philomène Magueur. |
| 3. Francine Conq. | 10. Louise Magueur. |
| 4. Rosalie Croguennoc. | 11. Marie-Renée Perchoc. |
| 5. Eulalie Cadour. | 12. Gabrielle Perchoc. |
| 6. Jeanne Didou. | 13. Marie Squiban. |
| 7. Marie-Gabrielle Fourn. | 14. Marie Vaillant. |

En dervez-se ive, unnek euz an aspirantezed koz ho deuz lennet ho Akt a Gousekration d'ar Verc'hez hag a zo bet lakeat evit atao ho hano var rôl Bugale Mari Landunvez.

Ar re-ma ive daoulinet dirak skeuden ar Verc'hez, ho deuz promet-tet a vouez huel : rei skouer vad e peb leac'h, ha miret a boent da boent reolen ar Gongregasion merket var al leorik bihan roet da bep hini anhezo. Evit-ze e lennint al leorik-ze aliez, e teuint bep miz d'ar reunion hag e taoulinint aliessa ma c'hellint ouz an Daol zantel.

Mont a enep ho ger a viche beza treitourez e keyer ar Verc'hez, hag e ve ober glac'har d'ho Mamm euz an Env.

Setu ama ho hanoiou :

- | | |
|----------------------------|-------------------------|
| 1. Marie-Jeanne Le Borgne. | 7. Thérèse Raoul. |
| 2. Marie Cozien. | 8. Françoise Sylvestre. |
| 3. Pauline Conq. | 9. Catherine Talarmin. |
| 4. Joséphine Guéna. | 10. Marie Taloc. |
| 5. Joséphe Kerros. | 11. Olga Vaillant. |
| 6. Madeleine Morel. | |

MIZ GOUERE

1. Sadorn, IUN HA VIJIL derc'hent gouel S. Per ha S. Paol.
2. Gouel S. PER HA S. PAOL. « Guelet a rit, o Sent gloriuz, e pe stad ema an Iliz oc'h euz savet en ho goad. Digasit ar peoc'h dezhi ha d'he oll bugale ; hentchit varzu ennhu kement ene dianket.

Ra vezo unanet an oll dud krouet gant Doue, ervez peden ho Mestr. »

7. GUENER KENTA. « Kalon Jezuz, digemerit an offeren hag ar gommunion a zigoll e kinnigomp deoc'h, evit rapari ar pec'h-jou great ken epad al labour er foenneier, ken epad ar vrezel var an dachen hag en adrenv. »

9. SUL AR GALON ZAKR. Induljans plenier da c'hounit en eur gommunia hirio ; induljans 7 vloaz ha 280 dervez, en eur adori ar Zakramant espozet . « O Jezuz, kinnig a reomp deoc'h an oll henoriou a vezo rentet d'ho Zakramant, evit ho tigoll deuz kement a ingrateri, a fallagriez, a leziregez, a zaotr kalonou ar gristenien. »

16. Oferen ha gousperou AR PEMPED SUL goude ar Pante-kost. An Aviel er zul-ma a c'hourc'hemen d'ar priejou beza fidel an eil d'egile. Kas kuit ar zonjou fall pa zavont er spered, en em viret da laosker ger fall ebet, delc'her an oll skianchou er strisa chastete, ober deveriou ar stad a briedelez e peb lealdet ha santelez.

23. Oferen ha gousperou AR C'HUEC'HVED SUL goude ar Pantekost. Jezuz o kreski ar bara evit maga an dud en dezers. « Ma kasan anezho var iun, eme Jezuz, e kuezint var an hent. » Ma ne zebrit ket bara ar gommunion, alies aoualc'h, diouallit ne guezfe oc'h ene var hent ar baradoz ha ne c'helfac'h ket adzevel.

30. GOUEL SANTEZ ANNA, mam ar Verc'hez gloriuz Vari, patrounez Breiz. Ha sonjal a rit-hu, ervad, pegement a vad e deuz great Santez Anna d'ho pro ? He diouallet e deuz, meur a dro ha beteg dre vuzud. An dro ziveza a oue e miz Eost 1914, pa viraz ouz al listri allmand da zaila var hon aotchou ervez ho c'hoant. Hag henori a rit patrounez ho pro ? Hag he fedi a rit ? Ha mont a rit d'he chapelioù ? d'he aoterioù ?

4 Eost. Guener kenta.

6. Sul. Gouel Hor Zalver goloet a c'hloar.

MALLOZ D'AR BANNEOU

Epad labour ar foen, kouls hag epad en eost, diouallit ouz ar banneou.

Leun a zigareziou e kaver, gouzout a ran, evit eva banneou, evit rei da eva. Dreist oll e lavarer : « Ne vezo ket kavet a dud da labourat, ma ne vez ket roet odivi dezho. »

Er Russi, er Sued, en Etats-Unis, er C'hanada, e broioù all c'hoaz, difenn zo guerza odivi. An dud ne labouront nemet guelloc'h aze.

Eva banneou (peurliesha ec'h ever re pa ever) zo dispign sod, zo berraat danvez ar vro, zo diskar iec'hed, buez, niver an dud hag ho bugale, zo ober pec'hed a c'hourmandiz, ober goap ouz Hor Zalver e kroaz pa edo he gorf keaz dizec'het hag he vuzellou devet gant terzien ar maro.

Marteze e livirit : « Sad' aze komsou brao, mes ne ket gant kaoziou e vezo falc'het va foenneier. Falc'herien a ranker kaout. Hag ep odivi, falc'her ebed ! »

Perag ne deufac'h d'en em glevet, oll pennou-tiegez ar barrez,

evit refuz banneou d'ho falc'herien ? Pa raio an oll henvel, easoc'h e vezo. Grit an ese, da viana.

Ne ket gant banneou e vezo saveteet ar Frans.
Gant pinijennou ne lavaran ket !

D'ar Mammou, hag ive d'an Tadou

Hirio e Frans, pevar million hanter a vugale a zo er skoliou (a 8 da 13 vloaz).

Hirio en Allmagn, ema er skoliou daouzek million a vugale (a 8 da 13 vloaz).

Dre-ze, a benn 15 pe 20 vloaz, e vezo 12 soudard allmand goest da stourm enep 4 a fransizien. D'ar mare-ze, piou a viro ouz ar vrezel da zont ? Den ebet.

Piou a vezo kaoz ? An 8 million a briejou ne reont ket ho dever, pa refuzont soudardet d'ar vro, kristenien da Zoue.

Rag, var gant familh fransez, c'huezek n'o deuz ket a vugale ; hanter kant o deuz unan pe zaou ; tri var'n ugent o deuz tri pe bevar ; — eiz o deuz pemp pe c'huec'h ; teir o deuz seiz pe vuioc'h. En eur ger, var gant familh, c'huec'h ha tri-ugent n'o deuz bugel ebet pe n'o deuz nemet unan pe zaou : ne lakeont ket ar bobl da greski.

Eur bobl ha ne gresk ket a zo eur bobl kollet er bed-ma.

Eur bobl ha ne vir ket lezen an Ao. Doue : « Kreskit ha deuit niverussoc'h » ne vezo morse benniget ganthan.

Kerent digalon, kerent torfetour, a denn malloz an Ao. Doue var ho familh, var ho bro, varnho ho-unan.

Grit oll ho tever. Me lavar : oll ; rag an ali-ma n'eo ket red he rei da galz, a drugare Doue. Mes red oa he rei !

BEZIT EURUZ

Mac'harit a glemm. Re valeuruz eo, a lavar.

— Bezit euruz, Mac'harit, bezit euruz !

— Ha penaoz ? Me garfe aoualc'h, mes...

— Mes ankounac'haat a rit re vuan ar vad o deuz ar re all great deoc'h. Sonjal a rit epken er boan o deuz great deoc'h, great en despet dezho peurliesea, ep he c'houzout.

— Ato emaint var va c'hein !

— Ha c'hui var ho c'hein dezho, ive !

— Penaoz ober, neuze, evit beva e peoc'h gant tud an ti, gant an amezeien ?

— En em rit bihanoc'h c'hoaz, Mac'harit. Me roio deoc'h, evit ouzoc'h.

— Brao e vije. Mes ar re-ze, ho ger zo rust ha rok.

— En em rit bihanoc'h c'hoaz, Mac'harit : Me roio deoc'h, evit netra, peder gentel a zoare.

— Roit, da velet.

— *Da genta* : Grit ho tever a galon vad, gant eur musc'hoarz, ep diskuez morse ar boan a reer deoc'h.

— Musc'hoarzin e kreiz va foan ! Ar galon a fraillo, ar mu-zellou a c'hoarzo. Mad.

— *D'an eil* : Grit a galon vad ar pezh a blij d'ho nesa.

— Ia ! ha pa ne blij ket d'in ?...

— *D'an trede*, neuze : Gouzanvit gant pasianted ar pezh a zis-
plij deoc'h.

— Pasianted, pasianted !... Ma c'helfen, ia !

— *D'ar pevare* : Goulennit, meur a dro, digant ho nesa, penaoz ober an traou a ouezit ober koulz hag hen.

— Ne ket sod an dra-ze. Egile a vezo foug ennhan, hag e teuo habaskoc'h.

— Brema ma fell deoc'h, oc'hpenn, beva e peoc'h gant an Ao. Doue ha gant ho koustians, ra c'hello oc'h Ead mad kaout ac'hanoc'h e peb mare euz an dervez, oc'h ober unan euz ar pevar drama : Pedi — Labourat — Ober vad — Kemeret pasianted.

— En eur ger, eme Vac'harit, en em gounta evit netra, en em lakaat d'an izella, setu aze ar peoc'h gant Doue ha gant an nesa.

— Guir eo, Mac'harit. Grit evel ma reaz Jezuz, evel m'her gour-
c'hemen, ha bezit euruz !

HIR, TENN, SUR

General eun armee en deuz skrivet d'he familh an tri ger-se :
HIR, TENN, SUR. « Ar vrezel a bado ; poan a vezo o kas kuit an e nebour ; sur omp da c'hounid... Mes hirio muioc'h eget biskoaz, e komprenan pegement e tal, er vrezel-ma, ar pezh na c'hell den he boueza : ar beden, ar zakrifis, ar zantelez, kement zo etre daouarn an Hini a c'hoar bep tra, a vel bep tra, a gas bep tra en dro. »
ESPERIT ha PEDIT.

Ne zonjan nemet ennHan

En hospital, en noz, meur a gant den iaouank dihun : ho foan n'ho lez ket da repoz.

Er meaz, dirag an or dal, eun auto a zired. Eur zoudard iaouank zo ebarz, goal dizet.

— « Kollet eo » eme ar medisin a vouez izel. « Netra da ober... »

Ar beleg infirmier a dosta.

— Ha poan ec'h euz ? re a boan, va mignon ?

— Oh ! ia, eme ar c'heaz. Re a boan !

— Ha sonjal a rez-te en Aotrou Doue, eun nebeut ?

— Ne zonjan nemet ennHan, hag e kinnigan va foaniou dezHan.

Ar beleg, an dour en he zaoulagad pa gley komsou ken kaer, a ro an absolveren hag an nouen. Eur merzer muioc'h o sikour ar Frans, er baradoz !

MEDICIN AN ENE

An Ao. F. B., a eskopti Kemper, a skrive n'euz ket pell :

— Soudard ebet n'en deuz refuzet rei eur pok devot d'ar grusi-
sifi ha d'ar vetalen-skapular.

Eun nozvez, eur paotr 19 vloaz (eur voulet en he benn) a gemere ac'hanon evit ar medicin.

— Re a boan e meuz, emezhan. Soulañit ac'hanon, en han Doue !

— Siouaz, em'oun-me. N'oun ket medicin, — nemet medicin an ene, ma kerez.

— Oh ! na me zo kontant neuze ! eme ar c'hlanvour. Guel e ganen, ha kalz, guelec ac'hanoc'h eget ar medicin. Me ho ped, se-laouit va c'honfesioñ.

Hag e touez ar re vleset all, ar zoudard iaouank (a vro Rochefort edo) a resevaz ar zakramanchou diveza, en eur ginnig da Zouc sakrifis he vuez. En dervez varlerc'h e varvaz euruz.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (9^d listen)

KROAZ A VREZEL. — An Ao. FOLL, bet dekoret kentoc'h a Vohars, rejant e skolaj Sant-Visant Kemper, aumônier ar 118^e. « Epad m'edo ar rejimant dindan eur glao spountuz a obuzou, deuz an 31 a Veurs d'an 19 a Ebrel, en deuz roet ato skuer ar brasa vaillantiz, prest ato d'en em zakrifia dizamant, o vont da zikour ar re c'hlazet fors e pe leac'h. »

KROAZ A VREZEL (eil dro). — An Aot. TIEC, a Bonte-Kroaz, kure Recouvrans-Brest, brancardier er 118^e. « Dekoret kentoc'h. Skuer a vaillantiz, a zakrifiz, ato oc'h en em ankounaat he-unan, ato prezant el leac'h m'her galv he zevel, ken evel brancardier, ken evel beleg. »

KROAZ A VREZEL (diou vech). — An Ao. Joseph MAZE, beleg a Blouider, rener skol kristen Landivisiau, caporal infirmier en 19^e. « Var linen an tan adalek ar penn kenta, ne zonj ket ennhan he-unan, a ziskuez ar brasa kalon. E kreiz an danjer goasa, en deuz adzavet ar re c'hlazet, ententet ouz soudardet eleiz dindan glao puill an obuzou, deuz ar 25 a Vengolo d'an 8 a Here 1915. Glazet he-unan gant eun obus, e Tahure. Leun a virit hag a humilite ! » Pareet ha distroet d'an tan : « Epad an derveziad spountuz 17 a Ebrel 1916, dirag Verdun, en deuz diskuezet a grenn ober fae var ar maro. Epad m'edo ar stourmad en he voasa, en deuz ententet ouz tud c'hlazet aleiz hag great kas anezho var an adrenv, petra benag oa he benn, dezhan he-unan, tizet gant eun tenn. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. COTTEN, a Elliant, kloarek e Seminer Kemper, caporal téléphoniste : « En deuz meur a dro goulennet mont dindan an tan da zresa an neud orjal pulluc'het, en despet d'ar maro o c'hourdrouz. Dre he vaillantiz, eo deuet a benn da gas an oll urziou. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. NICOLAS, beleg a Henvic, skolaer e Sant-Pabu. « D'ar 14 Even, da 9 heur dioc'h an noz, en despet d'an tan spoutuz, a zo eat gant he vrouetten-guele dre ar blenen, da glask ar re c'hlazet. Pilet gant eun obus oc'h eklati, en em adzavaz hag a gerzaz gant he hent. Pa zistroe, eur voulet a dreuzaz he skoaz kleiz : kendelc'her a reaz, kas a reaz ar zoudard glazet d'an ambulans, ha goudeze epken e tiskleriaz oa goal c'hlazet he-unan. He nerz-kaloun dibreder a zo bet, er poent-se, eur rekour dreist evit he oll gamaladed. »

LAZET HA DEKORET. — An Ao. BOULC'H, eil-letanant en 19^e, kure, Lanveoc. « D'ar 25 a Vengolo 1915, e Tahure, karget da zisken e kaverniou an Allmanted evit laza an oll ebarz, en deuz

great he garg dizamant euz ar maro, dibreder ha dispount, offiser da vezá meulet e peb giz, en deuz great prizounerien eleiz. (Deko-great he garg dizamant euz ar maro, dibreder ha dispount ; offiser

LAZET HA DEKORET. — An Ao. QUERNE, eil letanant en 19^e, rejant e Seminer Kemper. « Offiser dreist, e peb giz, dispount, kalounek, stard. Belek ha soudard euz an dibab. Lazet gant henor, d'ar 4 a Ebrel 1916, en eur stourm, pa zalc'he he zoudardet en tranche, dindan eur glao spountuz a obuzou divent. »

LAZET. — An Ao. GUINVARC'H, beleg a Enez-Tudy, rener skol gristen Plouneour-Trez.

PRIZOUNIERIEN

Ne gasit ket mui a vara, mui a viscuit d'ho tud dalc'het en Allmagn. An Allmagn a refuz ar pakajou, pa'z euz bara pe viscuit ebarz. Ho tud n'ho resevint ket.

Mes ar Frans (ar c'houarnamant) a gas hiviziken bara en Allmagn evit an oll fransizien prizouniet. Peb hini a resev tri c'hant gram bemdez (pevar lur er sizun) deuz gouarnamant ar Frans. An Allmagn a lavar e ro, oc'hpenn, daou c'hant gram bara du bemdez ; mes er bara prusian ez euz muioc'h a vrenn-eskenn eget a vleud guiniz.

N'o peuz guennek ebet da rei da zen ebet evit ar bara a vezo kaset d'ar brizounerien. Paet e vezo var an taillou, hag ive var ar pez e ranko an Allmagn da rei da Frans goude ar viktor.

Kasit pakajou d'ho tud evel kent. Lakit ebars fourmaj, konserv, anduill, chocolat, sukr, kafe malet, deliou the, louzou evit ar paz, hag all. Dillad, mar kirit ; mes tam lien ebet.

Arabad lakaad ebarz netra da eva, nag amann, na bara. Ne vije ket roet d'ho tud. (An amann hag al lien a zervich da ober poultr !)

Grit mad ho pakajou, gant daou dam paper teo ha stard. Lakit an adres var an tam paper zo dindan egile. Lakit an adres var an tam paper zo var gorre egile. Guelloc'h eo zoken skriva diou vech an adres var an eil paper. Liammit stard gant eur fiselen krenv. Koulmit mad. Hag erbedit ar pakad ouz Eal mad ar prizounier : ar veach zo hir, an Allmanted n'int ket tener, hag ar prizounier en deuz naoun. Red eo d'ar pakad beza great mad, evit en em gaout.

Kimñad ar Zouav

Eur zouav, glazet da genta hag eat d'ar front adarre, a oué lazet. Varnhan e oue kavet eul lizer en devoa skrivet, e ken kaz, d'an hini e devoa ententet outhan en hospital.

— Itroun, al lizer-ma a zo va c'himiad. Pa lennoc'h anezhan, e vezin marvet evit ar Frans. Pegen trum benag e vezin skoet, amzer em beza da gas eur zonj diveza varzu ennoc'h. C'hui eo oc'h euz va digaset da Zoue en dro : ra vezoc'h benniget da viken, itroun ! N'eo ket falvezet ganeoc'h ec'h en em rofen d'an dizesper. Lavaret oc'h euz d'in kemeret fizians e trugarez divent an Ao. Doue, hag e meuz santet ar pardon o kueza var va ene paour en droublien. Mervel a ran, kontant, pa varvan evit va bro. Na me gompren, brema, ar c'homsou e lavarec'h d'in : « Ar garantez evit ar vro a zo an huela, ar gaera, an tosta euz ar garantez evit Doue. » Mont a ran kuit en eur zonjal ennoc'h : Sonjal a rin ennoc'h beteg er baradoz. « Gant Doue, evit Frans, e varvan ! »

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Marie Roudaut. Augustine Talarmin. Jeanne-Yv. Lescop. Berthe Bellec.	Tre'e klas.	Bernadette Hamon. Françoise Foret. Joséphine Gouzien. Françoise Kervran. Philomène Héliès.
Kenta rummad.	Eugénie Morel. Marie Derrien. Marie-Yv. Perchoc. Marie Jaouen.	Kenta rummad.	Marie-Anne Conq. Marie Lescop. Ernestine Brénéol.
Eil rummad.	Joséphine Auffret. Suzanne Le Touz. Louise Keroullé. Marie-Yv. Conq. Yvonne Magueur. Catherine Kermorgant. Georgette Bouquet. Madeleine Prigent. Marie Gouzien.	Eil rummad.	Marie Talarmin. Alexandre Kermorgant. Haudes Guéna. Marie Kerjean (Kersaint). Marie-Yv. Pellen. Marie-Yv. Jaouen. Francine Fily. Marie Bocheur. Marie Morvan.
Eil klas.	Françoise Eliès (bourg). Philomène Cornen. Franc. Héliès (Kervajan). Noélie Lesvenan.	Trede rummad.	Marie-Yvonne Mitin. François Cadalen. Marie Magueur. Marie Conq. Marie Taloc.
Kenta rummad.	Isabelle Guéna. Marie Cadalen. Louise Kermorgant. Léontine Michel. Marie-Yvonne Guéna.		
Eil rummad.	Herveline Léostic. Perrine Kerros. Marie-Yv. Richard. Jeannie-Yv. Trébaol.		

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

28 ^e Mae: Joseph Morel, bourk,	<small>PARRON</small> Albert Morel.	<small>MAEROUNEZ</small> Cl. Allouer.
5 Even: François-Henri Trébaol, Bédiès,	Yves Le Ven.	Aline Le Menn.

ENTERRAMANHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar bered, da c'hedal deiz ar varn diceza, e goasket ar groaz :

27 Mae: Hervé Morvan, 74 vloaz, Penfoul.

EAT D'AR BARADOZ

9 Even: Joseph Morel, 11 dervez, bourk.

**A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion
d'an eil sul, 9 a viz gouere**

10 h. 1/2. Marie-Anne Cadalen, Françoise Le Gall, Philomène Le Guenn, Jeannie-Yvonne Jollé (Trémazan).

11 h. An aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Joseph Vaillant (Bourk).

11 h. 1/2. Ar skol gristen.

12 h. Françoise Morel, Anne Squiban, Julie Pérès, Jeanne Floc'h (bourk).

12 h. 1/2 Marie-Jeanne Magueur, Anna Magueur, Marie Cadalen, Philomène Richard, (Saint-Samson).


1 h. Joseph Héliès, Marie-Yvonne Talarmin, Caroline Arzel, Louise Héliès (Gorrékéar).

Kannadik miz Even en deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea, digant : J. F., P. C., J. G., V. L., F. J., P. L., peb a 4 real.

Doue r'ho faeo.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



Testeni a zeskadurez (Certificat d'études)

D'an 20 a viz even 6 deuz merc'hedigou skol gristen Landunvez o deuz bet an testeni a zeskadurez roet en hano ar C'houarnamant :

Berthe Bélec (Bourk) ; Jeanne-Yvonne Lescop (Bourk) ; Eugénie Morel (Bourk) ; Marie-Yvonne Perchoc (Kervéléoc) ; Marie Roudaut (Bourk) ; Augustine Talarmin (Trémazan).

Bennoz da Zoue, meuleudi d'ho mestrezed, meuleudi d'har gerent a gas aketus ho bugale d'ar skoliou, meuleudi d'ar vugale o deuz labouret mad.

Ouspen 5 a nezo :

Berthe Bélec ; Jeanne-Yvonne Lescop ; Eugénie Morel ; Marie Roudaut ; Augustine Talarmin, o deuz bet ar certificat libr, roet gant inspecteur skoliou kristen an eskopti : ar certificat-ma a zo en tam diessoc'h da c'hounit ; Rak enterrojet e vezer ive var an histor zantel a var ar geennadurez kristen.

Deuz ar barrez e zeus bet resevet 6 all evit o certificat :

François Bizien (Kéléroun) euz skol gristen Guitalméze ; Yvonne Kerjean (Ar-C'hantel) euz skol gristen Porspoder ; Joseph Magueur (Prat-ar-C'hantel) a François Bocher (Kersent) euz skol an Aotrou Bleuven ; Yvonne Brézel (Ar-C'hantel) euz skol an dimezel Poullaouëc ; Rolland Vidamant (Ar-C'hantel) euz ar skol laik Porspoder.

SIZUN AR ZAKRAMANT

Sizun ar Zakramant a zo bet talvouduz meurbet evit an eniou e parrez Landunvez. D'an daou zul ar brosesion a zo bet kaër kenan. Jesus or Zalver benniget, kuset d'indan spessou ar bara a douget er Zakramant meulet ra vezo, a vele gant joa an hent dre he ini e tremene goloet a vokedou a c'houez vad, hag an tiez stignet gant a linseriou ar re vraoya, aded varno roz a beb liou.

Ar reposouerou great : er zul genta var hent Kerzent, hag en eil zul var hent ar C'hantel, a voa en dudi o goelet, ken kaër oant. Nentra eno souezus, evit o lakat ker brao : lod a roaz bokedou, lod gouez, lod pallennou, ha peb ini a roaz a galoun vad he labour evit renka peb tra en he blaz.

Besomp sur, penaoz divar an aoter-ze, Jesus a skulias he vennoz var oll dud ar barrez ; var ar re a oa eno kenkoulz a var o soudarded hag o martoloded, pell ac'hano o tiven o bro, pe o c'houzaon naoun e prisoniou an Allemagne, pe o tivouaska poan en ospitaliou.

Mez ar pezh a blijas c'hoaz muioc'h da Jesus eget an traou-ze, oa gouelet an dud oc'h heuil niverus ar brosesion, o kana he veuleudi, hag ouc'h er pedi gant ar feiz birvidik, da gaout truez outo a da zigaz dezo ar c'henta d'ar gear ho soudarded hag ho martoloded, goude beza bet ar gounit var an enebourien.

Mez ar reposouer a blijas ar muia da Jesus oa bet ini ar c'haronou a deuz de zigemeret epad ar zizun-ze dre ar gomunion zantel.

Evel an amser fask e teue bemdez a beb ti unan benag da offeren ar Zakramant, evit gellout kovez a komunia.

An Aotrou n' Eskop en doa lavaret : Evel ma selou Doue goeloc'h pedennou ar vugale no deuz ket c'hoaz dispiljet deza dre ar pec'hed, digassit anezo oll deuz 7 vloaz betek 13, da govez a da gomunia epad sizun ar Zakramant, evit ma ranko Doue seveni d'ho fedennou a rei deomp ar peoc'h ar c'henta.

An tadou hag ar mammou a zentaz, all loden vrasa anezo, euz an ali-ze.

AN ILIZ PARREZ

Pa c'houlennaz an Aotrou Persoun, digant lod perak no doa ket sentet euz an ali-ze, e respouchont : noamp ket bet en offeren en hor parrez, d'ar zul moa bet roet.

Digasset o deuz ive goulskoude o bugale da govez ar zizun varlerc'h, pe da zul ar Galoun-Zakr. Alo, tud Landunvez en tam bolontez vad, a ra deuio a beb ti unan benag da viana d'an offeren bred beb sul d'ar barrez ; er giz-ze e c'houezimp atao an aliou, ar gourc'hennou a vezo roet er gador bresek. Hon iliz a zo brao, digassomp ta dezi beb sul hon aluzen evit ma vezo dalc'het atao kaër. An offeren lavaret beb sul en oc'h iliz parrez gant an Aotrou Persoun a zo evidoc'h ; a Doue a ro ive d'ho peleien ar grassou red evit preseg deoc'h ar pezh a reio ar muia vad d'oc'h eniou.

Perak aliez kalz d'euz ar re a vez en offeren en ilizou dianveaz parrez ne zelaouont ket an offeren gant evez, a na daolont ket a spled d'ar presegennou ? Lavaret a reont : An draze ne zell ket ouzom-ni. E tont d'ar parrez e reomp ive aluzen evit ma vezo pedet evit han Anaoun, hag e zeomp on unan da zaoulina a da bedi var beziou hon tud eat gant Doue.

Ar zonzj e vezo ive dizale hor plaz er vered, a rei deomp beva santelloc'h, a dioual gouelloc'h deuz ar pec'hed.

Pa veler e parresiou a zo tud eul leo anter pe diou leo deuz an iliz, ni zonzjo omp oll tost, pegour den nen deuz da ober evit dont de iliz parrez ouспен tri c'hart heur vale.

Evit kaout berroc'h an hent da zont d'an iliz, digassit ive o pugale d'ar skol d'ho parrez. Ar merc'hedigou o tont d'ar skol gristen a zikouro, en eur baea ervez o galloud, delc'her a beva ar mestrezed kristen a zesko dezo skianchou ar bed hag ouспен hent ar baradoz ; ar baotred o tont da skol laik o farrez a c'hello ive ober vad d'ho eniou. Rak neuze e vezo eassoc'h dezo dont d'ar c'hatekismou d'an iliz, a da govez en derveziou merket dezo.

Boaset a vianik da zont d'ar bourk, ne gavint ket reir pa vezint braz dont d'an offeren hag d'ar gouesperou d'ho farrez. Er giz-ze e roimp ive skouer vad an eil d'egile, hag e treuzimp ar bed-ma, krok an eil e dourn egile, evit stourm surroc'h oc'h enebourien hor zilvidigez, hag ec'h en em gavimp divezatoc'h oll asamblez er baradoz.

AR BREZEL

Abaoue me bet moullet ar C'hannadik diveza e zeuz deuet deomp adarre er c'helou trist.

Jean-Marie Marzin, deuz ar Bediez, a zo bet diskaret e (Chat-

tancourt) e kichen Verdun. An oll bacesionis a gemero pers e glac'har he dud, hag a bedo evit ma vezo digemeret gant Doue en he varadoz.

MIZ EOST

4. GUENER KENTA. Jezuz, gouzout a rit e tigor an trede blavez brezel : evit mac'h echuo, e kennigomp a-unan gant ho meritou, oll poaniou ar zoudardet hag ho familhou, ar goad hag an daelou skuillet. O pet truez ! o pet truez !

6. SUL JEZUZ GOLOET A C'HLOAR. Red oa deoc'h, eme-c'hui, tremen dre ar basion hag ar maro, evit reseo ar c'hloar evit mad. Ar vro a dremen dre ar basion, o Jezuz. Roit dezhi hag ar c'hoar hag ar peoc'h !

13. Oferen ha gousperou AN NAVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Kristenien, lennit mad an oferen en deiz-ma : hano zo ennhu euz ar vrezel, euz ar fizians da gaout en Ao. Doue, euz ar binijen da ober evit rapari ar pec'hejou, euz an enebourien a c'hell beza diskaret gant eur c'hezaden euz ginou an Ao. Doue. Lennit, sonjit ervad, pedit.

14. IUN HA VIJIL derc'hent gouel ar Verc'hez. — Ar Verc'hez er Salet hag e Lourd e deuz lavaret hag aslavaret : Pinijen ! pinijen ! pinijen ! — Kinnigomp eta dezhi, a galon vad, an nebeut diezamant a zo oc'h ober iun. Greomp vijil en despet d'al labour eost. Hi hen talvezo deomp.

15 Meurs. GOUEL AR VERC'HEZ GLORIUZ VARI douget d'an Env gant an Elez. Ar brosesion en dervez-ma a oe goestlet d'ar Verc'hez gant ar roue Louis Trizek, tri c'hant vloaz zo, e testeni a anaoudegez vad hag a garantez. Mari zo ato rouanez Frans. Var he douar eo diskennet meur a vech. Servicha anezhi a zo sikour ar Frans.

20. Oferen ha gousperou an DEKVED SUL goude ar Pantekost. Pedomp evel publikan an Aviel (maltouter), en eur anza da Zoue ne dalvezomp netra, e vezomp pec'herien, mes an deuz fizianz ennan, hag ennan epken. Hen hor zelaouo : rak ar beden humbl a nij beteg he Galon

27. Oferen ha gousperou AN UNNEKVED SUL goude ar Pantekost. — Jezuz, dirag eun den bouzar ha mud, a zavaz he zaoulagad varzu an Env hag oc'h huanadaz. Huanad trugarezuz ! Jezuz a zonje pegen fall eo ar pec'hed, penn-kaoz da gement poan, da gement drouk a zo er bed, hag en devoa truez ouz an dud, maleuruz dre ho faot. Diskaromp ar pec'hed ennomp, hag e tostaimp euz an eurusted.

1 a Vengolo. Guener kenta.

3. Oferen ha gousperou an Daouzekved sul goude ar Pantekost.

AMZER AN EOST

An dihun a vezo abred, tudou ; d'al labour e rankfoc'h staga buan : evit miret da goll amzer, livirit eur beden vad da Zoue, — ha nann eur beden divar nij : Doue zo mestr an deiz.

Al labour a vezo tenn ; an eol a vezo tom ; ar c'huezen a zivero ;

red e vezo eua eun dra benag. Kinnigit an eva da Zoue, dre zin ar groaz da nebeuta. Na evit ket a'hini krenv : ne grenfa ket ac'hanoc'h ; devi a ra ar goad en ho koazied.

Var al labour e vezo ganeoc'h tud re iaouank ha tud re goz ; paotred, goazed, hag ive merc'hed ha plac'hed. En ho touez e vezo ive oc'h Elez mad hag ho Toue. Oc'h Elez mad hag ho Toue a c'hoar klevet, a c'hoar guelet koulz hag an dud, ha kalz lemmoc'h : en ho komsou hag en oc'h oberiou, bezit kristen, bezit santel.

Dioc'h an noz, pell en noz, e rankfoc'h labourat ha poania ; ar pennad kousket a vo berr. C'huekoc'h e vezo, m'her c'hinnigit da Zoue dre ar beden, goude beza taolet eur zell ouz ho koustians ha benniget Mestr ar vuez hag ar iec'hed.

Boueta ranker pa labourer ! Ar boued iac'husa a zo an hini a blij da Zoue. Ar boued difennet ganthan a zo eun ampoezoun d'an ene. C'huec'h dervez er zizun, debrit kig ho koualc'h. Bep guener avad, traou vijil epken.

Da zul, da c'houel ar Verc'hez, ho labour a vezo pedi, nann eosti. Etre al labour sul hag al labour ifern, n'euz kemm ebet. Deut da ehana dirag ar Zakramant, er gommunion, en oferen hag er gousperou. Etre an ofisou, goude an ofisou, en em zigollit euz ar c'holl-kousket a vezo bet hed ar sizun. Ha d'al lun e tigoro eur sizuniad nevez ha benniget.

Rag en den ez euz diou loden : ar c'horf hag an ene — al loden vella eo an ene. Avechou e ranker labourat a laz-korf Mes arabad eo laza oc'h ene !

Meulit Doue dre ho labour, ha n'he vlasfemit ket.

Ha kredi a rit-hu ?...

Dioc'h an noz en oc'h examin, dioc'h ar mintin goude ho kommunion, ha kredi a rit-hu lavaret kement-ma da Zoue :

— Re rust ouñ e kenver an hen-ma'n-hen ; bezit rust ouzin-me.

— Me meuz lakeat ar re all da c'hoarzin divar goust va nesa ; grit dezho c'hoarzin goap ouzin-me.

— Ne zellan ket ouz va amezeien, ouz va breur, ouz va zad koz ; na meuz ket lavaret eur ger mad dezho. — Disprijit ac'hanon, va Doue, na rit nemet rebechou d'in mar plij.

— Ne garan ket ar re a vev ganen ; arabad eo deoc'h va c'haret.

— Ne bardounan ket d'an dud kintuz : arabad eo deoc'h pardouni va fec'hejou !

Ha kendalc'hit al listen, mar kirit.

E guirionez, perag an Ao. Doue ne rafe ket deoc'h ar pez a rit d'ho nesa ? Daoust ha n'en deuz ket lavaret : « Evel m'o pezo muzulet ar re all, me a vuzulo ac'hanoc'h ? » Ha c'hoaz : « Arabad ober d'ho nesa ar pez ne garfac'h ket e ve great deoc'h oc'h unan ? »

Grit eta ervez ger Sant Per Fourier : « Ober drouk da zen. Ober vad d'an oll. » Ha Doue a vezo guelloc'h evidoc'h.

AN DAOULAGAD

E Bro-Spagn, eun den koz bet ato er brasa ankeniou, he gorf daoubleget gant ar gozni hag he foaniou, — laouen ato en despet da-ze.

— Penaoz e c'hellit beza ken laouen en eur stad ken reu eudik ? a c'houlenne eur mignoun outhan.

— Ne ran nemet eun dra : ober implij vad euz va daoulagad.

— Ne gomprenan ket, eme egile.

— Selaouit. Pe zarvoud benag a ziguez, e sellan ouz an Env ; ar zell-se a zigas d'in da zonzj euz va brasa affer er bed-ma : va loden baradoz da c'hounit.

— Netra ken ?

— Eo. Eur zell all a ran var an douar. N'eo ket braz an toul am bezo abarz ennhan. Da betra en em ziesa kement gant traou an douar ?

— Guir eo. Mes c'hoaz ?

— Eun trede sell a ran, ouz ar bed en dro d'in : kalz tud zo maleur-soc'h egedon. Perag en em glemm eta ? Guelet a rit : sellet ouz an env a ra d'in sonjal en eurusted eternal am bezo ; sellet ouz ar bez a ra d'in ankounac'haat kement zo var va spered ; sellet ouz va nesa a ra d'in kaout truez outhan ha kompren va eurvad va-unan.

Grit evel an den koz. Ho taoulagad ho konsolo.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (10^d listen)

LAZET d'ar 6 a vae 1916 : an ao. BOTHOREL, belc'h a Lennon, rejant e skolaj Sant-Visant Kemper. Eun obus en he benn ; maro var an taol.

KROAZ A VREZEL. — An tad GAUTHIER, jezuist e Kemper, aumônier volontaire ar 115, bet dekoret euz ar groaz a honor, bet 4 kroaz a vrezel. « D'ar 4 a viz mae 1916, en deuz goulnnet mont gant eur vanden a dlie sailla var eun tranchee allmand. Chomet betek ar fin, dindan eur glao a obuzou, e kreiz ar zoudardet a c'helle kaout izom anezhan, o tiskuez dreze pegen kalounek eo ha penaoz e talc'h d'he garg a vele, ken pounner. »

METALEN MILITER HA KROAZ A VREZEL. — An ao. LABBE, kloarek e seminer Kemper. — « Remerket dreist-oll evit he gouraj hag he galoun pa spie an trancheou allmand. Meulet gant he golonel. He vaillantiz ken kaer a dle beza eur skuer d'ar rejimant abez. Eut volontaire d'ar front, ato volontaire evit ar gevridiou danjerusa ha diesa. Bet goal c'hlazet er stourmad. An dourn kleiz paralizet, hag hanter-zeizet he ilin. »

METALEN MILITER. — An ao. Yves BALBOUS, kloarek e Kemper, serjant zouav, goal c'hlazet, 30 Mae 1915 : « Skuer a zentidigez, ato prest d'en em zakrifia, mad da zevel sperejou he zoudardet hag d'ho c'hennerza. Glazet e kichen trancheou an enebour. »

LAZET d'ar 26 Even, e stourmad ar Somme : an ao. BORGNE, kure Landeleau hag an ao. GUENNEGAN, kure Rosnoën ; ho daou a Blonéour-Trez, lazet gant ar memes obus.

KROAZ A VREZEL. — An ao. Joseph PERHIRIN, a Dreboul, kloarek e Kemper ; brancardier er 71. « Soudard ken kalonek ha ma c'heller beza, n'euz netra goest d'he sponta, en em roet (er ehana epad nao dervez) da adzevel soudardet glazet he gompagnunez ha da entent outho, ep ober van ebet deuz ar glao obuzou a goueze var he dro. »

AR PAB HAG AR FRANS

1. — Eur gazeten suiss la *Tribune de Genève* e deuz diskleriet, d'an 21 a Ebrel 1916, en deuz hon Tad Santel Beneat Pemzek obtenet deuz an Allmanted e vije digaset en dro e Frans leun a brizounerien civil : tost da gant mil !

Naontek mil pemp kant daou-ugent a voazed (19.540), pemp mil ha daou-ugent, eiz kant peder ha tregont a verc'hed (45.834), hag ugent mil trivac'h kant, pemzek ha pevar-ugent a vugaligou (21.895) n'edont ket c'hoaz pevar bloaz, ar vugaligou keiz !

Etrezho oll, seitek mil ha pevar ugent, seiz kant tri hag hanter kant prizounier (97.753) o deuz askuelet hor bro, dre labour ha dre vadelez ar Pab, a gar ato ar Fransizien.

2. — Oc'h penn : d'ar zoudardet a Frans hag a Vro-Zaoz, bet prizonniet gant an Turked, ar Pab en deuz kaset pakajou abenn diou vech, da c'houel Nedelek 1915 ha da c'houel Pask 1916.

3. — Erfin, en deuz kaset he gannad, an ao. 'n eskop Dolci, d'ar jeneral turk Enver-Pacha, evit obten ma vije diouallet mad ha kempennet brao beziou soudardet Frans ha Bro-Zaoz, kuezet e stourmajou an Dardanelles. Enver-Pacha en deuz respontet e kaso poltrejou ar beziou da familjou ar zoudardet keiz-ze.

Ha pa vezo ar vrezel evit echui, guelet e vezo sklearoc'h c'hoaz peger hirvidik eo karantez Beneat Pemzek evit hor bro.

Henor d'ar Pab, difennour ar Fransizien !

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Jeanne-Yv. Lescop. Eugénie Morel. Marie Roudaut.				Bernadette Hamon. Joséphine Gouzien. Philomène Héliès. Marie-Anne Cong. Eléonore Bégoc.
Kenta rummad.	Berthe Bellec. Augustine Talarmin. Marie-Yv. Perchoc.		Trede klas.		Thérèse Cadalen. Marie Brénoel. Marie Talarmin. Marie Yv. Jaouen. Marie Kerjean (Kersent). Marie Bocheur. Haudes Talarmin. Marie-Yv. Pellen.
Eil rummad.	Joséphine Auffret. Suzanne Le Touz. Louise Keroullé. Marie-Yv. Cong. Madeleine Prigent. Yvonne Magueur.		Kenta rummad.		
Eil klas.	Marie-Yv. Allégot. Philomène Cornen. Françoise Eliès (bourg). Joséphine Fourn. Louise Squiban.				François Cadalen. Marie-Yv. Milin. Marie Taloc. Vincent Cadalen. Marie Magueur (Lamour). Marie Cong.
Kenta rummad.	Louise Kermorgant. Herveline Léostic. Léontine Michel. Marie-Yv. Guéna. Perrine Kerros. Marie Bossart.		Eil rummad.		Philomène Autret. Marthe Lesvenan. Paule Autret. Yves Trébaol. Joseph Floch. Marie-Yv. Kervran. Ernestine Le Guen. Ernestine Talarmin.
Eil rummad.	Jeannie-Yv. Trébaol. Joséphine Trébaol. Marie-Yv. Richard. Anne-Marie Jacq.				

JENERALED FRANS

Ar jeneral Gallieni, ministr ar vrezel, maro n'euz ket pell, a c'houlennaz he-unan he zakramanchou diveza. Eur beleg-soudard eo a zeuaz var he c'houlen.

Ar jeneraled zo brema e penn hon armeou a zo kristenien vad : Castelnau, Foch, Franchet d'Esperet, Petain, ar vistri huella, ar re o deuz saveteet ar Frans dindan Joffre ha gant ho soudarded ; eveldho, Grandmaison (lazet), Gouraud (torret he zivesker, trouc'het eur vrac'h), Nivelle (difennour Verdun) ha dek ha dek all, zo kristenien vad, ker mad da gommunia evel da flastra Prusianed.

N'eo ket sod beza kristen en ho c'hompagnunez.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

PAEROUN MAEROUNEZ

- 17 Even Eugène F. Magueur, Lannourian. J. Magueur. Phil. Provost.
- 18 Gouere Goulven Cadour, St-Gonvarc'h. Goulv. Conq. Eulalie Cadour.
- 25 Even Gourvadezed : Krouadour Trébaol, Tipri.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'ered, da c'headal dez ar varn diveza, e goasket ar groaz :

- 3 Gouere Jean Bossard, 45 vloaz, Lannourian.
- 4 — Marie Perhirin, 71 vloaz, Sant-Samson.

De profundis.


A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil sul, 13 a viz Eost

- 11 h. Josephe Bossard, Marie-Yvonne Perhirin (Penkear), Marie-Yvonne Taloc, Françoise Debosque (Penfoul).
- 11 h. 1/2. An aotrou persoun, Guillaume Lescop, François Jézéquel, Yves Cloâtre (Bourk).
- 12 h. Ar skol gristen.
- 12 h. 1/2. Françoise Guena, Aline Trébaol, Joséphine Guéna, Marie-Anne Trébaol (Troméneq).
- 1 h. Marie Le Ven, Marie-Jeanne Marzin (Bediez), Marie-Anne Héliès (Prat-Louet), Françoise Trébaol (Bergeb).
- 1 h. 1/2. Marie Jaouen, Rosalie Pors, Marie-Jeanne Labat (Kermajeau), Philomène Kerjean (C'hellen).

Kannadik miz gouere en deus koustet 20 lur 10 guennek.

Bet evit sikour e baea, digant : J.-M., 4 real ; F.-B., J.-L., peb a 8 real.

Doue r'ho faëo.



AR SKOL GRISTEN

Merc'hedigou ar skol gristen goude beza roet aliez epad ar bloaz guennek ho madigou evit sikour ar zoudarded mac'hagnet, pe brizouniet, goude beza destumet dousennou viou evit tud glazet hospitaliou Brest, o deuz ouспен diouret ho friziou, evit rei an arc'hant o diviche koustet da zikour diffennourien ar vro a en em gave er muia izoum.

Eleac'h ho friziou euz bet roet dezo eur paper hanuvet (Diplôme) a honor : An (diplôme) ze a zalc'hini evel eun testeni deuz ho c'haloun vad e kenver ar zoudarded a ziffenn ho bro en danger bemdez euz ho buez.

Goulskoude ar merc'hedigou a zo choumet er skol betek ma eo echuet a zo bet roet dezo gant an (diplôme) peb a leorik offeren evit o zrugarekat da veza labouret betek an dervez diveza.

Sikouret o deuz ive ar zoudarded dre ho fedennou birvidik hag ho c'hommunionou santel.

TAOLIT EVEZ

Ar skol gristen evit ar baotrezed a zigoro d'all lun 18 a viz guengolo. Eun dra vad eo digaz ar vugale d'ar skol en dervez ma tigor : rak ar re a deu divezatoc'h, o velet ar re all desketoc'h evito a goll aliez nerz kaloun, hag a ra neuze feneantezed : kerent a gleveur avechou o lavaret : perak va merc'h n'e deuz ket bet he (certificat d'études) ? Ar penn kaoz a ze eo en deuz manket ho krouadur aliez er skol, epad ar bloaz, hag en deuz her giz-ze kollet lod euz an deskadurez red evit kaout ar (certificat). No peuz ket-ta da damall nemed c'houi oc'h-unan.

Sklear eo ive, penaoz ma ho lezit da loja int surroc'h da gaout ho zesteni a zeskadurez, hag e nebeutoc'h a amzer, peguir ho devez neuze kalz muioch a skol bemdez.

Evit gellout delc'her en e za ar skol gristen eo red d'ar gerent paea eun dra benag evit ar skol ervez o feadra, hag ouspenn pa c'heller a leoriou, ar paper, a liou, ar plu, etc. a gousout a rit eo brema kresket ar priz var beb-tra, arabat e vezo-ta en em glem re ma ranker dispign eur guennek benag muioch. Mez ive, gouzout a rit, tadou ha mamou, penaoz an deskadurez kristen eo an heritag kaera a c'hellit lezell gant ho pugale. Koll a c'hellitnt er bed-ma ho madou, ho iec'hed, mez ma o deuz desket kemeret gant pasianted hag evit Doue poaniou an douar-ma evezint paet er bed all dre eurusted peur-baduz ar baradoz : a dall hirroc'h eget oll denzoriou ar bed-ma. Doue e-unan eo a lavar : « Petra dall d'an den gounit ar bed oll m'ar teu da goll e ene. »

Eun deskadurez kristen ne vez-ta morse paet re ger.

Bennos ive d'an dud a zikour ar skol, o paea evit merc'hedigou paour, pe o rei leaz, pe aluzennou all.

MIZ GUENGOLO

1. GUENER KENTA. Ar pec'hed kenta, pec'hed Lusifer, a oue raparet dre zentidigez Sant Mikeal. Kinnigomp da Galoun Jezuz offeren ha kommunion an dervez-ma, dre an Arc'heal gloriuz, evit rapari pec'hejou ar re a zav enep Doue, mestr ar boblou.

3. Oferen ha gousperou AN DAOZKVED SUL goude ar Pantekost. — En Aviel, Jezuz a ziskuez pe garantez e tleomp kaout evit an dud glazet. Ha sikouret o peuz anezho dre ho pedennou, dre oc'h aluzennou, dre ho komsou truezuz ? Tud, glazet ouz ho tifenn, a jom ledet var an dachen, a zivoask poan en hospitaliou, er prizouniou, en harlu, — a jomo mac'hagn, dall, mud, bouzar, seizet, beteg ho maro. Petra rit evitho ?

8. Guener. Gouel GINIVELEZ AR VERC'HEZ VARI. O tont er bed, Mari a zigasaz laouenedigez d'he zud, d'he fobl, d'an Iliz. Ra vezo leun a vugale santel e famillou hor bro, levenez an ti, honor ar Frans, bleun ar baradoz !

10. Oferen ha gousperou an TRIZEKVED SUL goude ar Pantekost. Goude beza pareet eun den lor, Jezuz a lavaraz : « Kit d'en em ziskuez d'ar veleien », evit senti ouz lezen Doue en eur ziskuez respet evitho. C'hui, kristenien, ha respeti a rit ho peleien ? Ha selaou a rit gant plijadur ar re a zispenn anezho ? ho zamall a rit oc'h-unan ? Er c'hontrol, ha c'hui zo mad d'ho difenn ? Ha senti a rit ouz an Ao. Doue, a goms ouzoc'h dre ar belek ?

17. Oferen ha gousperou AR PEVARZEK SUL goude ar Pantekost. Mar kerer, e c'heller kana offeren SEIZ GLAC'HAR AR VERC'HEZ. Ar Verc'hez hor mamm e deuz bevet en anken ato. C'hui, he bugale, hag anaout a rit-hu he glac'hariou brasa ? Teir en amzer ar Mabik Jezuz ; peder, epad ar Basion. 1. Ar Chandelour. — 2. An tec'h d'an Ejipt. — 3. Jezuz kollet en Templ. — 4. Hent ar Groaz. — 5. Maro Jezuz. — 6. Korf Jezuz etre divreac'h he vam. — 7. Jezuz er bez.

24. Oferen ha gousperou ar PEMZEK SUL goude ar Pantekost. — Jezuz o resusita eun den maro. O c'hui, hag a vouel var eun tad, eur map, eur breur maro er vrezel na vouelit ket evel ar re o deuz kollet an esperans. Ho tud a zavo eun deiz euz ho beziou. Korfou gloriuz a vezo dezho, e plas ar c'horfou-pri o devoa bet. En em velet a reoc'h, en em laouennat a reoc'h assambles. Hag oc'h eurusted a bado da viken !

1 Here. Sul AR ROZERA. Kest evit ar Patronachou ha kelc'hou.

6 Here. Guener kenta.

AR PEVARE AMZER a ziguez d'ar merc'her 20 euz ar miz, d'ar guener 22, d'ar zadorn 23. IUN HA VIJIL : mad e vezo evit rapari ar pec'hejou a c'hourmandiz great epad an eost !

Seiz Glac'har ar Verc'hez

1. Ar Chandelour. Mari a zigasaz ar Mabik Jezuz d'an Templ (iliz Jerusalem) 40 dervez goude Nedelek. Al lezen oa e vije asprenet ar map hena, ha roet eun aluzen evithan. Ar beleg Simeon a

lavaraz d'ar Verc'hez : « Abalamour d'ho map, ho kalon a vezo treuzet gant eur c'hleze a c'hlaç'har. »

2. *An Ejipt*. E kreiz an noz, eun Eal a reaz d'ar Famill Santel sevel, kuitaat Bethleem, bale dre an dezers, treuzi harzou ar vro, mont d'eur vro estren, ha chom eno. Skuisder ha danjer en hent, dienez hag enkreiz en Ejipt, keuz da veza kollet ker buan kerent, mignounet, madou ha peb tra !

3. *Jezuz en Templ*. Distroet en ho bro, e Nazareth, ar Famill Zantel a zentaz ouz al lezen, en eur zont bep bloaz da Jerusalem. En dro genta ma teuaz Jezuz (daouzek vloaz en devoa), e chomaz tri devez varlerc'h S. Joseph ha Mari — ep gouzout dare d'he dud. Ar re ac'hanoc'h o deuz kerent « dispariset » a c'hell gouzout ha lavaret, eun nebeut, pe boan o devoue Joseph ha Mari.

4. *Hent ar Groaz*. Goude m'oa bet Jezuz pilet dindan he Groaz, ar vech kenta, Mari en em gavaz ganthan. An tal toullet gant ar spern, an daoulagad leun c'hoad, ar muzellou disliv, ar bleo hag ar baro glepiet gant ar c'huezen, ar goad, ar skopou, louseat gant ar pri ; ar c'horf dispennet gant ar fouetou, deuz ar penn d'an treid ; sonj ar maro o tostaat ; goaperez ar luzevien, har ar rest... Setu penaoz ema he Jezuz, ar c'haera e touez bugale an dud ! Hag abenn peder heur, Jezuz a varvo !

5. **MARO JEZUZ**. Mammou hag oc'h euz guelec'hoz ho krouadur o vervel dirazoc'h, sonjit ervad. Pehini den a varvaz e kreiz tourmanchou ken iskiz ? Pehini mam e devoue eur galoun karantezusoc'h ? Pehini map a oue sentuz, trugarezuz, divin, evel Jezuz ? Tri bloaz ha tregont a garantez parfet, a vuez santel ha ken dous... ha setu ar maro !... Mari a jomaz en he zav, mes he c'halon a vennaz frailla en he c'hreiz : ar Vamm a c'hlaç'har, mamm Doue ha mamm an oll dud.

6. *Mari o reseo korf Jezuz* être he divreac'h. An daou zen santel Joseph Arimati ha Nikodem, gant S. Ian, a zistagaz korf Jezuz euz ar Groaz. Mari her c'hemeraz, gant pe respet, gant pe zaelou ! Guelec'hoz a reaz ervad gouliou he vuia karet, he zaouarn hag he dreid toullet ken didruez, he Galoun digor, — eur prenv breset gant an dud fall. Kinnig a reaz sakrifiz Jezuz hag he hini da Zoue evidomp, o kompren guelloc'h eget biskoaz fallagriez hor pec'hejou !

7. *Jezuz er bez*. Mestr ar vuez a zo maro. An Hini a zeue da zavetei ar re all a zo kraouiet dindan ar mean. Mari e deuz kollet he Map unik. Ne c'hell mui na dougen, na briata, na pokat, na zoken guelet korf Jezuz, great euz he goad. He merzerenti zo ar boaniusa zo bet biskoaz. Konsolomp Mari en eur gommunia ervad. Ar bez a ioa terval ha ien ; ra vezo hor c'halonou skeduz dre hor zantelez, tom dre hor c'harantez : Jezuz a glask repuï enno !

BREZEL D'AN ODIVI

Hag izom zo diskleria c'hoaz an drouk spountuz great gant ann alcool : n'euz ket unan enn hon touez ha ne ve ket sklerijen-net awalac'h var ann dra-se. Oll or beuz sonj mad euz ar skueriou truezuz guelet gan'eomp hon-unan araok ar brezel, ha zoken abaoue. Mad eo goulskoude dizelei c'hoaz ar gouli, evit ma vezo koumprenet pegen euzuz eo, ha pegen necesser he barea.

Er bloaz 1913, e veze evet e Frans 5 litrad alcool pur ar bloaz

dre benn, da lavaret eo en eur gounta ar vugale, ar merc'hed, ar re goz, ar re glanv, ha kalz re all ne evont ket, pe a ev nebeud kenan. Ann alcool pur a zo re grenv dreiz-han he-unan, ha gant peb litrad e vez great peurliessa. 3 litrad odivi. Evelse, 5 litrad alcool pur a ro 15 litrad odivi, dre benn, ha ma tiskountomp ar merc'hed, ar vugale, ar re glanv, hag ar re ne evont ket, e teuomp da velet e za *ouspenn kant litrad odivi ar bloaz gant re a ev*.

Greomp brema ar gount euz ann hostaleuriou. E 1911, e z'oa e Frans 478,483 hostaleuri. E 1912, e z'oa 481,159 : enn daou vloaz-se, e z'euz eta bet digoret 7 *hostaleuri nevez bemdez*, enn hor bro. Ann dra-se a ra 1 hostaleuri dre 83, (atao en eur gounta ar merc'hed, ar vugale, ar re glanv, hag ar re ne evont ket.)

Taolomp eur zell goudeze var ar broiou all, e kenver ann eva. Siouaz ! kaer meurbed oa hor stad : er gourin da velet piou a evo muia, ni a ioa a galz er renk kenta ! Ni a eve eul litrad alcool pur dre benn muioç'h eged ar vro a deue var hol lerc'h. Ni a eve, hon unan hep-ken, — ann dra-ma a zo spountuz, — muioç'h a absinth eged ann oll broiou all euz ar bed. Ni or boa 1 hostaleuri dre 83 den, d'ar mare ma ne d'oa ann Allemagn nemed 1 dre 246, hag ann Norvèg nemed 1 dre 9.000 den.

Goude lakaat ar poezoun da redet enn hon touez, e kassemp anez-han ive d'ar broiou a ioa dindan hor galloud. Dinerzi a reamp, enn taol kenta, ar boblou-se a ro d'eomp er brezel-ma eur seurt sikour, hag a roche d'eomp ann dourn muioç'h c'hoaz enn amzerda-zont. Hag ar pez a zo souezussa, ho ampouzouni a reamp gant alcool deuet euz ann Allemagn. Enn Dahomey, el leac'h ma vez evet 6 litrad alcool pur dre benn, (da lavaret eo 20 litrad odivi, en eur gounta merc'hed, bugale, etc.) ann Allemagn a zigasse eun dalvoudegez alcool a zeiz kant mil lur e 1907, hag a nao c'hant tri-ugent mil lur e 1912. Er Senegal, var 698,509 litrad digasset e 1909, ann Allemagn, evit he lod, e deuz guerezet 631,235 litrad, hag ar Frans, — enn unan euz he c'holoniou ! — 56,915 litrad heb-ken. N'or b'oa gounid ebed zoken, dioc'h eur c'hommerz ken divalo !

Anaout a rit ann drouk divent great enn hor bro hag enn hor c'holoniou, gant ann alcool. Enn departamanchou a vez evet enn-ho ar muia odivi pe bouessoniuou krenv, var gant den iaouank, ne vez kavet nemed 40 mad da vont d'ar zervich. Er bloaz 1911, d'ar mare ma kreske niver ann dud enn Allemagn euz a 113 dre zek mil, er Bulgari euz a 188, hag e Bro-Zaoz euz a 98, e Frans ar maro a c'houneze var ar beo *euz a nao dre zek mil !...*

* * *

Kollet oa hor penn gan'eomp. Ha brema e fell d'eomp beza fur. Prenet or bezo ar furnez-se gant kollou ha poaniou dreist kount, ha gant goad hon tud maro. Difen grons eva bouesouniuou krenv, evel ma reer er Rusi, evel ma reer var linen an tan : n'euz ken louzaouen.

Rei lamm da Frans, pe rei lamm d'an evach fall : Choazit !

HON DAULAGAD DIGOR ATO !

Epad ma 'z eo goasket hor c'halonou dre an enkreiz on deuz o velet darvoudou ar vrezel, o velet ar maro o fale'ha kement euz hon tud en ho guella, ez euz re all, ato ar memes re, n'o deuz soursi nemed da ober brezel da Zoue, brezel d'ar relijion, brezel d'ar gristenien katolik.

Red eo deomp digeri mad hon daoulagad evit evesât ha miret ouz ar pezh zo fall el lezennou a reer, ervez hon oll galloud.

Da genta, lezen ar vugale emzivad dre ar vrezel. — Piu a dle beza roet da gulator d'ar vugale-ze ? — Ho mamm evel just, ho mamm epken pe unan benag euz ho c'herent tosta, m'o deuz kollet ive ho mamm, evel m'eo al lezen evit an oll vinored all.

Ha padal ne ket evelse eo e klasker ober. Ar prefed, (ha pe-rak ?) a deui da astenn he graban var ar familh, hag a c'hello hen-vel unan benag, dioc'h he zourn, da deuler evez ouz ar pezh a rai ar vamm pe ar c'hulator, ma ne vezont laik aoualc'h, mar greont rei d'ar vugale eun deskadurez kristen. Evelse intanvezed ar re vo maro er vrezel o devezo neubeutoc'h da velet var ho bugale eget ar mammou all.

Perak ive al lezen nevez ne verkfe ket, sklear, pegement e vo roet da bep bugel ? Daoust ha just eo e ve roet muioc'h d'an eil eget d'egile ? Danjer zo ne deufe ar politik d'en em emmel euz an affer-ma. Ne dle beza kemm ebed etre ar vugale, pe guir an tadou o deuz roet ho buez evit ar vro.

E kenver al lezen-ma, eun ali d'ar mammou, intanvezed ar vrezel : Klasket e vezo, m'oar vad, deseo anezho da gas ho bugale da skoliou brasoc'h evit ma vezint desket guelloc'h.

Evesât mad : a briz ebed ar vamm ne dle asanti da gementze. Hi epken hag ar vistri skol choazet ganthi a dle kentelia he bugale, hag ar vistri-ze a dle beza mistri kristen, hag ar skol eur skol gristen. Al lezen ne ve just ma ne ro ket d'ar vamm sikour ha frankiz var gementze.

AR SKOLIOU-MICHER

Hano zo ive euz eul lezen evit ma ranko an oll vugale en oad heulia eur skol vicher. Eun dra vad eo e ve desket eur vicher d'an oll vugale a dle gounit ho bara gant poan ho divreac'h.

Mes ama-adarre : liberte, frankiz da bep unan ! Ma vez great skoliou micher, red eo e ve lezet an dud libr da gas ho bugale d'ar skol a garint. Red eo e ve skoliou micher kristen, mar bez skoliou laik.

N'eo ket red beza eun doktor speredek evit guelet petra glasker adarre. C'hoant a zo da lakât ar vugale, savet ez iaouank er skol gristen, da zarempret epad meur a vloaz skoliou dizoue, evit ober dezho koll ho feiz hag ho relijion.

Eul lezen all c'hoaz emeur o prepar evit ma vo desket abred d'ar baotred, kerket hag ho 16 vloaz, ar vicher soudard.

Danjer zo ne ve klasket, var zigarez ober an exerciz, miret ouz ar baotred iaouank da heulia ar zul evel m'eo gourc'hemennet gant Doue. Meur a vloaz zo, e veler tud ar c'houarnamant oc'h ober ho oll galloud evit distrei ar gristenien katolik dioc'h ofisou ar zul, en eur ober euz an dervez santel-ze dervez an ebatou hag ar jolori.

Enep al lezennou-ze, ni katoliked a dle en em zevel. Penaoz ? O tiskleria a vouez huel e fell deomp e ve lezet ganeomp hor liberte, hor frankiz, o sina petitionou evel m'o deuz great intanvezed ar vrezel, (oc'hpen daou c'hant mil) hag oc'h en em glevet ken etrezomp ha gant an oll dud vad evit choaz da ren ar vro kannaded leal ne glaskint nemed mad ar vro.

Hag o veza ne deu netra da vad nemed gant sikour Doue, pe-

deomp anezhan a zevri evit ma roi deomp eun taol skoaz, ha ma teui deomp ar peoc'h a ziabarz hor bro hag a zianveaz. Ne skuizomp ket o konnaunia hag o lavaret hor chapeled evit an dra-ze.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (II^d listen)

KROAZ A VREZEL. — An Ao. LHOSTIS, a Gernouez, rejant e skolaj Sant-Visant e Kemper, serjant en 219°. « Goude maro al letanant, en deuz kommandet he section gant kement a gouraj hag a ijin, dindan eur glao obuzou. » — Great adjutant er memes amzer.

KROAZ A VREZEL. — An Ao. GUEGUEN, a Gommana, kure e Scignac. « Var he c'houlen, e teuz deuz eun hospital d'ar front ha buan d'eur rejimant. Ato remerket evit he vaillantiz hag evit ar fae a ra var an danjer ha var ar boan. D'an 27 a vae 1916, pa guez eur glao spountuz a obuzou braz, tost kenan d'an allmand, ez eaz da adzevel soudardet glazet ha n'oant ket zoken euz he rejimant. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. LE GALL, a Gernouez, kure Cleden-Poher. « Soudard leun a gouraj, da rei da skuer d'ar re all ; mad dreist da entent ouz ar re c'hlazet, ouz ar re dare, da vervel ; ne varc'hat ket da gas ursiou ar vistri, pegen tenn benag, eo an emgann. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. SPARFEL, avieler e Seminer Kemper, sous-letanant. « Offiser euz an dibab, kalounek, dizamant d'he boan, seder ato e kreiz an darvoudou spontusa. D'an emgann ez a ar c'henta bepred, evit rei skuer d'he zoudardet. C'huec'h miz var'n ugent zo ema o kombati, glazet eur vech. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. ROUDAUT, kloarek a Blouguerné, clas 16. « En em ginniget a volonte vad, dindan eur glao obuzou, evit dizelei kamaladet douaret dindan ho lochen. Daou anezho zo bet saveteet, dre he vaillantiz, he basianted hag he labour. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. LARNICOL, kloarek a Gemper. « Seder ha kalounek dindan ar glao obuzou a gompeze an trancheou ; dispout kenan o vont d'an emgann ; en deuz pelleat an enebourien a zaille varnomp. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. PERHIRIN, kloarek a Gemper. « Ken kalounek ha ma c'heller beza. Epad nao dervez dioc'htu, en em roet da entent ouz ar soudardet glazet en he gompagnunez ha d'ho c'has d'an adre, ep ehana, ep ober van ebet ouz an danjeriou spountusa. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. BERVAS, kloarek a Gemper. « Caporal mad dreist. Dre he vaillantiz, en deuz great d'he soudardet, paket dindan eur glao obuzou, senti ha kombati ep aoun ebet. »

LAZET HA DEKORET. — An Ao. MILLINER, kloarek a Gemper, clas 16. « Leun a spered hag a galoun, seder ha zoken laouen e kreiz ar brasa danjeriou. Lazet gant eun obus, e kreiz an emgann. »

KROAZ A VREZEL. — An Ao. BERTHOU, beleg a Dreglonou, serjant en 219°. « Goude m'oa bet lazat al letanant, en deuz kementet he blas, hag hentchet he section var an trancheou allmand, o sailla var an enebour, ken seder ha tra, kalounek meurbed. »

LAZET. — An Ao. Paul GRALL, beleg a Landivisiau, rejant e skolaj Kastel, infirmier en 219°, lazat d'ar 24 a viz Gouere 1916.

442

AR BRISOUNERIEN

Gouzout a rit e zeuz difen da gas bara d'hor zoudarded prisouniet en Allemagn, na bara boulanger na bara ar gear. Gouarnamant Frans a gas dezho.

Kentoc'h, eur c'homite katolik savet e Kemper a gase dezho bara deuz ar Suiss, evit seis lur er miz. Brema e kinnig kas daou goli er miz, evit nao lur er miz, e plas ar bara.

E peb hini, euz an daou bakad, e vez lakeat pemp tra : kig konserv, daou lur konfitur, eun hanter-lur chocolat, eun hanter-lur sardined pe thon, leaz kaledet pe bouillons kaledet pe fourmaj. Beb pakad a goust trivac'h real : beb miz e vez kaset daou bakad ; ar pezh a ra nao lur er miz.

Kaz an arc'hant hag adres ar prisounier da Guemper, da unan euz an aoutrounez Guivarc'h, rue Kéréon ; Maudit, rue Verdelet ; de Gouesnongle, rue Vergoz.

BADIZIANTQU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iiz, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

9 Eost Claude Conq, Traon. PABROUN Gabriel Conq. MABROUNEZ Marie-Yvonne Conq.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal deiz ar curn diveza, e goasket ar groaz :

- 1 Eost Marie-Yvonne Colin, 73 vloas, Kergastel.
- 2 — Marie-Yvonne Floch, 71 vloas, Rochard.
- 3 — Sébastien Guenneugès, 53 vloas, Lokournan.
- 10 — François-Marie Jaffrès, 41 vloas, Arc'hantel.

Eat d'ar Baradoz

7 Eost Jean Corolleur, 15 miz, Kelleret.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion, d'an eil sul, 10 a viz Guengolo

11 h. Marie-Yvonne Guenneugès, Krec'hgoriou ; Marie-Jeanne Uguen ; Francine Conq, Traon ; Maria Guéna, Penfrat.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun ; an Aotrou Kure ; Guillaume Lescop ; Yves Cloatre, bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Noémie Levailant ; Julie Pérès ; Joséphine Godebert ; Jeanne Floch, bourk.


1 h. Marie Provost, Kurulou ; Marie Jaouen, Landourzan ; Marie Jaouen ; Noélie Lesvénan, Kerinkuff.

1 h. 1/2. Marie-Anne Eliès ; Marie Balcon, Kerléo ; Alexandrine Guenneugès ; Anne-Marie Eliès, Kermajeau.

Kannadik mis Eost en deuz kousted 20 lur 10 guennek.

Bet evit sikour e baea, digant : M. C., 20 real ; J.-M. P., 10 real ; J. P., 4 real ; J. M., 12 guennek.

Doue r'ho faëo.



Reolen ar C'hatekismou

Ar C'hatekismou a zigoro da lun 2 a viz here.

Setu ama ar reolen :

D'al lun, da 4 heur, evit ar vugale gant o eil hag o zrede pask.

D'ar meurz, da 4 heur, evit ar vugale ganet er bloavez 1906 ha 1907 : da lavaret eo ar vugale o devezo bet 10 vloaz echu, araok ar c'henta a viz genver 1917, hag ar re o devezo bet 9 bloaz echu araok ar c'henta a viz genver 1917. Ar re ziveza-ma a resevo ive e miz mae kenta sakramant ar gonfirmasion, m'ar gouezont mad ho c'hatekismou, ha ma no devez ket manket d'ar skol gatekiz.

D'ar merc'her, da 4 heur, evit ar vugale gant ho eil hag ho zrede pask.

D'ar iaou, da 8 h. 1/2, evit ar re a deu d'ar meurz d'a 4 h., hag ouspen d'ar vugale a zo er skol e leac'h all. D'ar iaou c'hoaz da 9 h. 1/2 evit ar vugale 7 hag 8 vloaz.

D'ar zul, da 1 l. 1/4, evit ar vugale gant ho fevare pask, hag ar re a zo er skol e leac'h all.

Ar gerent ne glaskint digarez ebet evit miret dezho ho bugale gant ho fevare pask da zont d'ar c'hatekiz. Ar c'hatekismou great dezo d'an oad-se eo an talvoudeka evit-ho.

Ar vugale en oad da zont d'ar c'hatekiz, o devez atao er gentel da zeski. Ar gerent-ta, beb pardaez, a zikouro ho bugale da zeski ho c'hentel. Ma ne oar ket ar gerent lenn, pe ma no deuz ket a amzer e kassint ho bugale, d'an dud a volontezevad, a gaver e peb karter, evit ober katekismou.

Perak eo red, ha red mad d'ar gerent deski ho c'hatekismou d'ho bugale ? Abalamour ma zeo an den lakeat var an douar evit anaout, karet ha servicha Doue hag er giz-se gounit ar baradoz. Ogen penaoz e c'helfe ar gerent, ma ne reont ket a gatekiz deski d'ho bugale hent ar baradoz, hag heulia anezhan ?

Setu ama ar pez a lavare an Aotrou de Segur, hanvet an eskop dall, divar benn an dever o deuz ar gerent da ober katekismou d'ho bugale. Neo ket en ali eo a roer dezho var ar poent-ze, mez er gourc'hemen start.

Perak e guirionez, ema ar vugale var an douar ? Araok pebra, neo ket-ta evit anaout Doue, he garet, he zervicha, hag evelse gounit ar baradoz ? Kerkent a ma c'hanavesont Doue e rankont e adori, e anaout evel ho mestr ! Kerkent a ma c'hanavezont Jesus... ha neo ket red e karfent aneza ? ma ne garfent ket ho zad a zo en env e ven bugale ingrat hag fall.

Penaoz e c'hello ar vugale anaout Doue ma ne vez ket desket dezho ho c'hatekismou ? Eas eo goelet dre eno peger braz pec'hed a ra ar gerent hag pebez torfed a eneb Doue hag eneb ho bugale, pa ne lakeont ket o foan da zeski pe da lakat deski dezho ho c'hatekiz.

KROAZ A VREZEL

Ar C'hannadik en deuz diskleriet bete vrema ano tri zoudard pe vartolod dekoret a Landunvez : Jean Minguy euz Kergastel ; Joseph Gourmel euz Ar C'hantel ; François Uguen euz an Traon.

Setu ama ano tri all dekoret evelldho, a meuled dirak ho c'hamaraded gant ho mistri.

François Kerjean (second-maitre canonnier) euz Ar C'hantel en deuz bet ar groaz a vrezel gant (palme) hag ar vetalen (militaire).

Setu ama penaoz eo bet meulet :

« Le second maître canonnier Kerjean, Jean-François, 4^e batterie lourde, en service dans une batterie avancée depuis le mois de septembre a fait preuve d'un superbe courage pendant les trois jours de combat qui s'est déroulé à Herbebaix, sous un violent bombardement, s'est rendu volontairement au poste de commandement des avant-postes pour chercher des renseignements nécessaires, a montré beaucoup de dévouement en se tenant hors de l'ouvrage pour se rendre compte de l'effet des projectiles qui tombaient près de la volée de la pièce, donnant à tous l'exemple de l'entrain et de la bonne humeur. Est allé fréquemment à l'abri chercher du matériel et des vivres malgré les éclats d'obus qui ont à maintes reprises déchiré ses vêtements. »

Goulven Floc'h euz Sant-Gonvarc'h a zo bet meulet er giz-ma :

« Floc'h, Goulven, de la 19^e compagnie du 19^e d'infanterie. Très bon soldat, plein de bravoure, de belle humeur et d'entrain, a été blessé grièvement le 27 septembre 1915, en se portant à l'assaut des tranchées ennemies ; perte de l'usage du pied gauche. » Il a reçu la croix de guerre avec palme et la médaille militaire.

Jean-Louis Foll deuz Langurru a zo bet meulet er giz-ma :

Le général de la 130^e division cite à l'ordre du jour : le soldat de 2^e classe Foll, Jean-Louis, de la 10^e compagnie du 39^e d'infanterie : « Excellent soldat, très courageux, a reçu plusieurs blessures graves le 3 octobre 1915, en participant à l'attaque d'une barricade ennemie, à la grenade. » En devezo ar groaz a vrezel.

Meuleudi d'ar 6 kalounek-se ! Henori a reont ho farrez hag ho bro.

Doze r'ho faëo.

Marteze e zeuz re all, martoloded pe zoudarded hag o deuz bet ive ar groaz a vrezel. Ar C'hannadik a zisklerio ho anoioù gant levenez, ma teu do anaout.

AR VREZEL

Ar barrez a zo adarre e kaonv deuz unan euz e bugale : Jean Kermaidic euz (Lanhalès) laset er (Somme).

Eun all, guechall e choum er barrez, Laou Perchoc eur (Lanhalès) en deuz kavet ar maro e (Salonique).

Oll e pedimp evitho.

MIZ HERE

1. SUL AR ROZERA. Guerc'hez ar Rozera, c'hui a zo Guerc'hez ar Viktoriou. Roit ar viktor d'ho pro, Rouanez Frans. Selaouit ar pedennou great e Lourde, er Salett, er Pontmain, e Folgoat, e Rumengol. N'a skoit ket ouz ar re fall, mes sellit outho a druez ; selaouit ar re vad, selaouit ar re zister, c'hui hag oc'h euz kanet : « Doue a zay ar re izel ! »

8. Oferen ha gousperou ar SEITEKVED SUL goude ar Pan-

tekost. — Jezuz a c'houlenne : « Petra zonjit euz ar C'hrist ? » Ha S. Per a respounte : « C'hui zo Map an Doue beo ! » Ni kristenien, a zonj ive eo Jezuz map d'an Doue beo, Doue he-unan, oll galloudek, oll vadeleuz, mestr ha mignoun asambles. Hag he garet a reomp-ni ? Hag he respeti a reomp ? Ha senti a reomp outhan ? Hag hen reseo mad a reomp ?

15. Oferen ha gousperou an TRIVAC'HVED SUL goude ar Pantekost. — Jezuz o pardouni ar pec'hejou. — Ha bet ez euz eur galloud souezusoc'h, eur vadelez tenerroc'h ? N'euz nemet diskleria ar pec'hed d'ar belek, ha setu ar goustians neteat, ar pec'hed distrujet, ar meritou distroet, ar baradoz digor ! Nag e tlefemp kaout keuz da offansi eun Doue ker mad !

22. Deiz ar bloaz DEDI ILIZ KATEDRAL KEMPER. Perag ober eur gouel a gostez evelhen ? Abalamour en iliz katedral eo ema an Eskop. An Ao. 'n Eskop eo a ra, en he iliz katedral, ar veleien a vezo kaset d'ar parrezioù ; en iliz katedral eo e ra an eol sakr a gonsakro ar vugale nevez-badezet hag a nouo ar gristenien var ho zremenvan ; deuz an iliz katedral eo e teu kemennadurez an Ao. 'n Eskop d'he bobl. Eun dever eo eta honori an deiz ma oue konsakret an iliz hag a zo evel mamm ilizou all an eskopti, ha pedi evit an Ao. 'n Eskop.

29. Oferen ha gousperou an UGENTVED SUL goude ar Pantekost. — Sonjomp er c'homzou-ma a lavaromp ken alies : « Roit deomp hirio hor bara pemdeziek. » Anzavomp n'on deuz bara nemet digant madelez Doue, a rô deomp douar, eol, amzer, chatal, eost, nerz hag ijin. Hag ephan n'on do ket. Bennoz dezhan ! Bezomp truez ive ouz ar brizounerien n'o deuz ket ho goualc'h ; kasomp aluzen dezho ; greomp pinijen evitho.

31. Dimeurs. IUN HA VIJIL dere'hent gouel an Oll-Zent.

1 Du. Gouel berz. An Oll-Zent.

2 Du. Gouel an Anaoun.

3 Du. Guener kenta.

5 Du. Oferen ar 21^e sul goude ar Pantekost. Gousperou Dedi an iliz-parrez.

PEDEN AR ROZERA

Leon Trizek en devoa skrivet d'ar bed katolik pemzek lizer di-var benn ar Rozera. Ar Rozera hag adarre ar Rozera, setu ar gelennadurez a ioa dalc'hmad var he vuzellou. Ha perak, nemed evit senti oc'h ar gelennadurez digaset euz an env gant ar Verc'hez Vari he-unan, ne ket epken en amzer sant Dominik c'hueac'h kant vloaz zo, mes deac'h koulz lavaret, e Lourd p'en em ziskuezaz abenn tri-varc'h guech ar Rozera en he dourn, e Pontmain pa roaz d'ar vugeligou he guelaz ar memes aliou talvouduz ? Biskoaz Rouanez an env, ha Vikel Jezuz-Krist var an douar n'o deuz aliet kement devosion all ebed.

Greomp brema eur zell ouzomp hon-unan. Martreze on divijegellet ober c'hoaz guelloc'h eget on deuz great ? Daoust ha roet zo bet en hon touez d'ar Rozera ar plas a c'houlen evithan ar Verc'hez hag ar Pab ? Ar zul kenta er miz, hag hen a zo e guirionez sulvez ar Rozera ? Ar c'hiz da lavaret ar Rozera en tiegeziou, daoust hag ez eo heuliet e peb leac'h, en eur lavaret diou dizenez bemdez ha teir da zul ? Daoust hag an oll a oar dindan envor misteriou ar

Rozera ? — Danger zo na ve red deomp anzav n'on deuz ket great var gementze kement a c'hellemp, kement hag e tliemp ober.

Ar Rozera zo bet devosion hon tud koz, hag hon tud koz a ouie hen lavaret mad, en eur zonjal er misteriou brasa euz buez Jezuz ha Mari. Evit ma chomo hor feiz ken beo, ken nerzuz ha feiz hon tud koz, ni ive a dle anaout mad ar misteriou-ze ha sonjal enno alies.

Selaouit Leon XIII el lizer a skrive evit miz ar Rozera 1892 : « Ar c'hristen, emezhan, a vez ken distranset gant traou an douar ; ken avelet he speret gant traou goulo, ma tizesk ha m'ankounac'h neubet a neubet an traou brasa ha nesessera, hag he feiz a guez e langiz, e danger da vervel.

« Evit pellad an danger-ze diouz he bugale, an Iliz a zo leun a vez hag a aked, hag euz ar Rozera eo e tenn ar zikour ar galloudusa. Dre ar Rozera, e guirionez, gant ar c'haera hag ar pinvidika peden, e vez displeget dirak spered an den, an eil goude egile, ar misteriou brasa euz hor relijion.

» Ha da genta, ar re a zigas da zonj ez eo Map Doue en em c'hreat den, hag e deuz Mari, deuet da veza mam o chom guer-c'hez evelato, great evit Jezuz gant eul levenez santel, kement a ra eur vam evit he bugel.

» Goudeze, poaniou kriz Jezuz en he basion, Jezuz oc'h ar groaz, ha kement en deuz gouzanvet evit prena an dud.

» Hag ive misteriou he c'hloar, Jezuz treac'h d'ar maro, Jezuz pignet en env, ar Spered-Santel digaset ganthan, hag an digemer meurbed dudiuz great da Vari er baradoz, ha gloar hag eurusted Mari ha Jezuz hag an oll dud santel er baradoz.

» An oll misteriou, emezhan c'hoaz, a zo displeget alies dirak ar re a lavar ar Rozera, ha lakeat dirak ho daoulagad evel var eun daolen. Evelse ar Rozera a laka da zivoan ha da greski, en ene ar re hen lavar mad sonjou bepred nevezet a feiz hag a garantez ; mont a ra beteg strad ho c'haloun evel pa gleffent mouez an tennerra euz ar mammou o diskleria dezho ar misteriou-ze hag o lavaret dezho komsou a zilvidigez a bep seurt.

» Rak-se, eme Leon XIII, ne ket lavaret re, er famillou hag er broiou a zo enno en honor ar c'hiz koz euz ar Rozera, n'euz danger ebed ne ve ket anavezet guirioneziou ar relijion, nag e vent gounezet gant ar fals-kredennou enep ar feiz.

Na lezomp ket didalvez kentelioù ken sklear ha ken nerzuz, ha greomp kement ma c'hellimp evit ma vo desket en dro deomp gant oll dud hon ti, gant hon amezeien, petra eo ar Rozera, ha penaoz e tleer hen lavaret. Evit-ze aoualc'h eo gouzout koublajou kantik ar Rozera euz Leor ar C'hantikou, gant ma vo var bep koublad eun tam sklerijen. N'euz ket eur famill kristen ha ne ve ket enni unan benag, koz pe iaouank, ha ne ve ket goest da zeski d'ar re all ar pez zo merket e kantik ar Rozera.

Ha bezomp sur, evit lakaat fin d'ar vrezel spontuz-ma, n'ez euz peden ebed, goude an oferen hag ar gommunion, hag a ve nerzuzoc'h eget ar Rozera.

Bezomp kristen en hon oll doareou

N'euz ket guelet biskoaz goasoc'h amzer var an dud eget an hini zo breman, hag ar re o deuz eun neubet skiant a zo tenyal ho spe-

red ha glac'haret ho c'haloun, o velet kement a zarvoudou o poueza varnho, var ho zud ha var ho bro. Gouzout a rit pet goaz euz ar barriz zo bet lazeta, re all n'euz mui menek ebet anezho, pe c'hoaz prizounierien. A dra zur n'euz ket a leac'h da gemeret ebad ha d'en em fougeal. Gouskoude nag a bed a veler, etouez ar merc'hed dreist oll, ha ne reont van evit guelec'h en dro dezho kement a dud e kanv. N'euz ken sonj en ho spered nemed d'en em ficha, ha d'en em ziskuez. Eur vez eo guelec'h merc'hed kear, gant ho guiskamanchou divodest a bep seurt liou, noaz ho divreac'h, ho gouzouk, ha eul loden euz ho c'herc'henn. Ar gizioù-ze a deu neubet ha neubet d'en em zila ive en hor touez ha zoken var ar meaz. Red eo kaeat outho !

Merc'hed kristen, sonjit en dristidigez zo er vro, en hon tud o vervel var an tachennou brezel hag o leski en hospitaliou, evit difen hor buez. Neuze e ouezoc'h petra dâl ar vuez-ze hag ec'h implijoc'h anezhi er vodesti hag e servich Doue.

Mammou kristen, meur a hini ac'hanoc'h a laka ar fouge da zivoan e kaloun ho pugaligoù, en eur voaza anezho ez vihanik da garet an dillad kaer. Ha souez eo pa vo deuet ar vugale-ze en oad, ne ve nemed avel en ho fenn ha sonjou goullou en ho c'haloun ?

En amzer ankeniuz-ma ne dle beza nemed eur zonj en hor spered : pedi hag aspedi an Aotrou Doue da gaout truez ouzomp, da rei deomp ar viktor hag eur peoc'h paduz. Evit ma vezimp silaouet ganthan, e rankomp diouall ne ve netra en hor buez a zisplijfe dezhan.

Lizer da Intanvezed ar vrezel

Va merc'h, pounner eo ar zamm a c'hlaç'har a bouez varnoc'h. N'euz nemed Doue a c'helfe rei deoc'h an nerz o peuz izoum ! Ma ne zeller nemed er vuez-ma, petra ve gellat lavaret pe ober dirak eun hevelep darvoud ? Mes list sklerijen an Aotrou Doue da bara en oc'h ene, na pebez frealzedigez neuze a deui en ho kaloun !

Evesait mad : E guirionez ho pried n'eo ket maro. Beo eo, eüruz eo, ho kuelec'h ra.

Beo eo : Nag eun arched a jench doare pa zonjer er virionez-ze ! Ar c'horf zo maro, mes an ene zo beo.

Eüruz eo : Ha n'euz ket er zonj-ze peadra d'ho tizamma euz ho klac'har ? Karet unan benag a zo beza eüruz o c'houzout eo eüruz. Daoust ha ne ket ar pez a rit brema ? An disparti kalet a ioa red evit ma vije eüruz da viken gant an Aotrou Doue an hini e vouelit dezhan. Bezit eüruz o c'houzout eo eüruz, ha sonjit eo ho sakrifiz a zo an abek euz he eürusted.

Ho kuelec'h a ra : N'o pet douetanz ebed var gementze ; he zaoulagad hag he galoun zo digor varnoc'h guelloc'h ha muioc'h eget guechall. Bevit en he zoujanz ha dirak he zaoulagad. Gant fisianz grit ar gefridi en deuz lezet ganeoc'h, savit he vugale, lakit an dourn d'an oberiou a rea er bed-ma.

Va merc'h, bezit krenv : Doue zo en ho kenver, ho tud, ho mignouned a vezo en ho kenver. Ne viot ket dilezet. Ho samm zo pounner, ha gant ar zam-ze var ho tiousoaz, red e vo deoc'h redet er vuez ha beza laouen. Kement-ze a reot, gant graz Doue : ne falgalounit ket. Ho teveriou, ho labouriou, oc'h aferiou a gaso ac'hanoc'h arak. Ne ve ket mad choum a zav evit maga oc'h en-

krez, ha *vertuz* e vezo evidoc'h bale gant aked en hent ar vuez, rak nikun ne ma var an douar evithan he-unan epken. An nep a vev ar guella eo an hini en em implij ar muia hag a ro ar muia.

Red eo e vec'h krenv ha kountant en ho sakrifiz ; red eo e ve ho puez digoumoul ha sklear.

Pedit, labourit, reizit mad ho puez evit na deui ket da zister-rât ; ra vezo ho puez leun evit na deui ket da veza tenval. Skuillit levezet en dro deoc'h. Roit ho kaloun, a leiz dourn, e leac'h he zastum evidoc'h epken, ha seulvui e vezoc'h eüruz, seulvui Doue a vo kountant. Kouraj ! Arabat e ve ar boan treac'h d'eoç'h ; grit euz ar boan-ze, a galoun vad, eur sakrifiz da Zoue evit ma vezo eüruz ho pried. Ar vuez n'eo ket hir ; ha gant kalonou brevet ha sakrifisou poaniuz e c'heller ober ennhi traou dudiuz.

En eur zonjal en ho pried beo, en ho pried eüruz, en ho pried a veill varnoc'h hag a c'hed ac'hanoc'h, e kafot ar peoc'h ha zoken an eürusted. En eur vont d'ar baradoz, en deuz digoret eun or var an eternite. Ho pried, a ioa kentoc'h en ho kichen, a zo c'hoaz unanet ganeoc'h gant muioc'h a garantez eget biskoaz, a zo eat dre an or-ze e sklerijen an Aotrou Doue, hag ac'hano e sell ouzoc'h gant muioc'h a deneredigez. Digoret en deuz an hent, dreizhan dizale c'hui ielo ive.

O pet kouraj ha fisianz ! It d'oc'h oll deveriou gant aked evit plijout dezhan, evit ma c'hello lavaret da Zoue : « Guelit pegen kourachet eo, gant pebez feiz e ra he zakrifiz, nag hi zo din ac'hanoc'h hag ac'hanon-me ! » En ho kouraj, e kafot eur zoursen a joa.

Ma teufe, eun dervez benag, eur zonj c'hucro en ho kaloun enep Doue, e lavarfen deoc'h, evel eur zant d'eun intanvez : « Petra rebechit da Zoue ? Ma vije plijet ganthan, n'o pije james anavezet an hini en doa roet deoc'h, hag o peuz bevet ganthan e joa ar guir garantez. Petra rebechit dezhan ? Da veza galvet d'ar baradoz an hini a garit. Daoust ha c'hui, e guirionez, a gar ho pried, ma tislpij deoc'h e ve eüruz evit ato ? Eüruz eo, daoust ha n'eo ket kementze eur joa dispar evit eur garantez guirion ? An disparti, evit eur pennad a zo glac'haruz... mes paea c'hellit dre ar sakrifiz-ze eun union a bado da virviken hag eürusted an hini a garit. »

Na guir eo kementze ! Deuz ar baradoz, divezatoc'h pa reot gant ho pried eur zell var ho kiz, c'hui vennigo derveziou tenval ho puez, sklerijennet neuze gant sked ar baradoz. Mar gelfemp lakât da bara evit mad en hor spered ar sklerijen peurbaduz, e velfemp traou dudiuz el leac'h ne gavomp nemed tenvalijen ; tridâl a rafemp gant ar joa dirak ar pez a denn daelou diganeomp. (A berz Doue).

YAN HA YOUP

Ian a zo kaporal er c'holonial. Youp a ioa soudard en he skouaden. Youp a ioa eur iuzeo paour-raz, ha goapeat aliez gant he gamaladet. Ian hen difenne ato, hag a roe ato dezhan eul loden vrao euz he bakajou. Youp a garie Ian, a c'hellit kredi, evel eur breur pe eun tad.

Eun nozvez, Youp a oue goal dizet e kichen Ian, en eun toul obus. P'en em velaz kollet, e lavaraz :

— Selaou, Ian, ne fell ket d'in mervel evel eur c'hi. Kovez ac'hanon !

— Ne varvi ket. Gortoz.
 — O vervel emañ. Mes selaou. Me meuz great va zonzj evel-hen : n'ez euz nemet ar guir relijion e deuz gellet rei d'it kement a vadelez em c'henver. Me fell d'in mervel en da relijion. Red eo d'it kovez ac'hanon.

— Mes n'oud ket evid kovez, Youp, pa'z eo guir n'oud ket kristen. Iuzeo oud, n'oud ket badezet. Netra da ober !

— Mad, eme Youp, badez ac'hanon neuze.

N'oa ket da varc'hata, Ian a vadezaz Youp gant dour an toul-obus. N'en doa ket ankounac'heat ar c'homsou sakr desket guechall er c'hatekiz.

Mes Youp n'oa ket kontantet c'hoaz. Kaer a ioa, ne varvfe ket ep beza koveseat he bec'hejou.

— Petra fell deoc'h ! eme Ian da c'houde, ne meuz ranket senti ; me meuz great an neuz da viana. Mes pa en doa diskleriet he bec'hejou, ne ouien ket petra da respont dezhan, hag e meuz lavaret ar *Bater noster*, da velet. E keit-se, va c'heaz Youp a dre-menaz !

Ha setù penaoz madelez eur zoudard a c'hounezaz eun ene iuzeo da Jezuz-Krist, hag a zigoraz dor ar baradoz, ep dale tam er purkator, da unan euz hon difennourien.

BADIZIANTQU


A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
29 Eost. Jean Lostis, bourg.	Jean Taloc.	Jeanne Crozon.

**A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion
d'an eil sul, 8 a viz Here**

- 11 h. Marie Magueur, Marie-Yvonne Magueur, Marie-Anne Cadalen, Virginie Richard, Sant-Samson.
- 11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean Guennégues, François Olivier, Bourk.
- 12 h. Ar skol gristen.
- 12 h. 1/2. Françoise Morel, Françoise Cadalen, Philomène Cloâtre ; Philomène Cloâtre, Bourk.
- 1 h. Marie-Anne Cadalen, Marie-Anne Daouben, Josèphe Brénéol, Marie-Jeanne Forest, Trémazan.
- 1 h. 1/2. Josèphe Bervas, Françoise Guiziou, Victoire Guiziou, Marie-Anne Talarmin, Kelleret.

*Kannadik miz guengolo en deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea, digant : F. C., 20 real ; J. F., M. P., M. A., peb a 4 real ; P. H., E.-F. A., peb a 12 guennek.
 Doue r'ho faeo.*



AR VREZEL

Abaoue ar *C'hannadik* diveza e zeuz deuet d'comp ar c'helou glac'haruz d'euz maro tri zoudard euz ar barrez : Goulven Gueinn guès euz Penfoul, 23 vloaz ; Jacques Kermaidik euz Lanc'halez, 35 vloaz ; dimezet oa da Varie Perchoc ; ha François-Marie Perchoc deuz ar C'hantel, 35 vloaz ; dimezet oa da Victorinè Morvan. O zio oant kristenien vad, goelet e vesent heb sul en offeren hag er gous perou d'ho zro. Kovez a komunia a réant aliez n'o guelet jamez d'an zul o choum da draïna en tavarniou. An daou zimezet a réa eurus ted ho gragez, hag ar re-ma a gendalc'ho da zével ho bugale e dou jans Doue.

Ne Ankounac'haimp ket on tri genvroad en hor pedennou. Ken delc'her a reimp ive da c'houlen euz Doue ar gounit ar c'henta var on enebourien ha distro hon tud d'ar gueur iac'h ha divac'hagn. Evit ma vesimp selaouet gant Doue, e peb ti e vezo lavaret bemdez gant feiz hag evez ar pedennou diouz ar mintin a diouz an noz. Lennet beb pardaez *Buez ar Zent*, a d'ar zul, an Aveli, goude meren. Ar gerent a reio ive katekismou d'ho bugale, hag o digasso da skol an Ilis, en derveziou merket. Oll ive e roimp ar zul, d'an Aotrou Doue, penn da benn, o chom eb labourat, hag o tont d'an offeren hag d'ar gousperou, hag ive d'ar Rozera.

Bugale Marie ne deint morse a eneb ho ger. Prometet o deuz dirak aoter ar Verc'hez, tec'hed deuz an ebatou divennet, hag beza aketuz da réunion ar Gongregasion, a vez great d'an trede sul deuz ar miz.

Beb eil sul ar miz e vez exposet ar Zakramant meulet ra vezo. Den ne ankounac'haio dont da adori Jesus, er poent merket dezhan var ar *C'hannadik* : Ma ne c'hell ket dont e-unan e pedo eun all da gemeret e blaz. Kement ini a zo en offeren bred hag er gous perou a gemero poan evit tremen da viana en 1/2 heur dirak ar Zakramant, a na pa vent ket bet hanvet. Pedi a reint c'houek Jesus da gaout truez euz ar (France) a da rei dezhi ar peoc'h.

Kroaz a vrezel ha Medalen a zavetaj

An Aotrou Joseph Garo d'euz ar C'hantel, cabiten (au long cours) a zo bet meulet er giz-ma, gant ministr ar (Marine).

« Le ministre de la Marine a décerné la médaille de sauvetage en argent, de 1^{re} classe, à M. Garo, Joseph, capitaine au long cours inscrit à Brest n° 58, commandant le vapeur Yser. »

« Après avoir recueilli, le 5 novembre 1915, l'équipage d'un voilier italien coulé par un sous-marin, a dû abandonner son navire. Canonné et torpillé, près du Cap de Fer, et a ramené son personnel. »

Le présent diplôme lui a été délivré afin de perpétuer dans sa famille et au milieu de ses concitoyens le souvenir de son courage et de son dévouement.

M. l'Administrateur de l'Inscription maritime de Brest a été aussi chargé, par le ministre de la Marine, de remettre à M. le capitaine au long cours Joseph Garo, la croix de guerre avec étoile en argent.

Mouvement de la population de Landunvez

depuis le 21 septembre 1802 jusqu'au 31 décembre 1915

Dates	Mariages	Naissances	Décès	Augmentations	
1802-1812	115	457	266	+	191
1813-1822	97	544	383	+	161
1823-1832	94	443	321	+	122
1833-1842	117	460	315	+	145
1843-1852	108	527	368	+	159
1853-1862	114	482	375	+	107
1863-1872	129	505	475	+	30
1873-1882	123	546	512	+	34
1883-1892	121	585	433	+	152
1893-1902	101	513	409	+	104
1903-1912	147	513	326	+	187
1913	11	69	44	+	25
1914	8	55	26	+	29
1915	1	43	45	-	2
Totaux :	1.286	5.742	4.298		1.444

TESTENI A ANAOUDEGEZ VAD

Kannadik Landunvez en deuz eun dle da baea da unan euz beleien hon eskopti, koezet var an dachen a enor d'ar 4 a viz guengolo diveza : An Aotrou Jean-Marie Conseil, euz Cléder, kure e Sant-Vaze, Montroulez.

Hen eo en deuz great ken koant patrom hon Iliz, a labourer, hag ar martolod a zo var golo hor *C'hannadik*, a patrom an Introu. Varia Vir-Zikour a Gersent, a vez aliez var ar bazeñ diveza. Eur galloud ken dispar en doa da ober taolennou, hag imachou, ma zoa deuet buan da veza brudet e peb leac'h ; a ma veze goulennet digant-han heb seurt skeudennou.

Mez anavezet oa unioe'h c'hoaz abalamour d'he galoun vad, ha d'ar hoan a gemere evit ober plijadur d'an oll. N'eo bet nemed eur bloaz enn he barrez, ha goulskoude e zoa deuet mad da beb ini.

En 219^e, n'en doa ive nemed mignoned. Ken mad, ken laouen oa, an Aotrou Conseil, ha kement a nerz-kaloun a ziskoueze bepred ! Ato e veze da genta el leac'h ma zoa danger, evit rei skuer d'he gamaladed, hag evelse e zeo koezet var an dachen.

Koezet eo, skoet gant diou vouled en e gostez, epad ma zca dindan ar glao obuzou da zestum er zerjant diskaret : Eur pennad goude e varve o lavaret d'he gamaladed :

« It raktal da leac'h ma c'halv ac'hanoc'h ho tever. Me a varv evuruz, o skuill va goad evit va bro, hag evit m'an devezo Doue truez outhi ar c'henta. »

Landunveziz a bedo evit-han, hag a c'houlennno digant-han kaout sonj er baradoz euz ar *C'hannadik* en doa guisket eun en doare ken koant.

1. *Merc'her*. AN OLL ZENT. Gouel berz. Meulomp ar Zent : treac'h et o deuz an drouk-spered hag an dud henvel outhan ; gloriusoc'h int eget ar rouaned. Ha bevomp eveldho. N'euz plas er Baradoz nemet evit Sent.

2. *Iaou*. AN ANAOUN. An den gouliet a zo truezuz he zoare. An Anaoun a zo en tan, pell euz an Ao. Doue, oc'h huanadi varlerc'h an euruzted, oc'h huanadi varzu ho anaoudeien chomet var an douar. D'ar zoudard glazet, piou a refuzo sikour ha louzou ? D'an Anaoun devet, ha ni a refuzo sikour hor pedennou, kommunionou, aluzennou, induljansou, pinijennou ?

3. **GUENER KENTA**. — Kalon Jezuz, c'hui a gemeraz evidoc'h loden poanusa tourmanchou ar bed. Soulajit, ni ho ped, dre ho korf sakrifiet, dre ho koad skuillet oll, a adoromp en oferen hag er gommunion a zigoll, soulajit ar poaniou a jom d'an Anaoun da c'houzanv, dreist oll anaoun ar zoudardet maro evit hor bro.

5. *Oferen* ar 21° **SUL GOUDE AR PANTEKOST**. « Ma ne bardounit ket ho nesa, ho Tad euz an Env ne bardouno ket ac'hanoc'h », eme Jezuz en Aviel. — O Jezuz, roit ar garantez d'an dud. Lakit ar peoc'h da ren etre kerent ar memez famill, etre amezeien, etre kenvroiz, etre an oll boblou.

12. *Oferen* ha gousperou an 22° sul goude ar Pantekost. Mar kerer, e c'heller lavaret **OFEREN DEDI AN ILIZ-PARREZ**. — An iliz zo ti an Ao. Doue. Dezhan eo. En iliz ema o chom. Dirag he Vajeste, penaoz ec'h en em zalc'hit ? Deuz an Tabernacl an Ao. Doue, beo, a vel ac'hanoc'h beteg e goeled ho kaloun. Petra rit, petra livirit, petra zonjit dirazhan ? Adorit, meulit, raparit, pedit : dreist peb tra, karit ho Toue deuet da veva e touez an dud.

19. *Oferen* ha gousperou AN 23° **SUL GOUDE AR PANTEKOST**. Aviel : Jezuz a restaol ar vuez da verc'h eun ofiser. Kinnigomp da Zoue an oll zoudardet maro evit ar Frans ; kinnigomp ar re a riskl bemdez ho buez, ar re zo bet glazet pe klanv ; ha pedomp Jezuz da unani he veritou gant ho re, evit ma vezo restaolet ar vuez d'ar Frans, merc'h hena an Iliz.

26. *Oferen* ha gousperou **AR ZUL DIVEZA GOUDE AR PANTEKOST**. Aviel divarbenn fin ar bed. Brema e veler brézelioù, die-
nez, traou spontuz : nebeut e skoaz ar pezh a vezo e fin ar bed, netra e skoaz an ifern. Poaniomp da veva santel aoualc'h da c'hounit hon loden varadoz, eleac'h n'euz mui na poan, nag enkrez, na daelou na drouk ebed.

1 Kerzu. Guener kenta.

3. *Oferen* ha gousperou. **SUL KENTA AN AZVENT**. — N'heller ket eureuji gant solanite epad an Azvent.

DIRAG BEZIOU HOR ZOUARDDET KRISTEN

An den just (kristen mad), soken pa varv araok an oad, a gav ar peoc'h.

O veza ma plije da Zoue, ez oa karet gant Han. Ha dre ma veve etouez ar bec'herien, eo bet chenchet plas dezhan, eo bet kaset ac'han gant aoun na deuje ar fallagriez da drompla he spered, pe na vije touellet he galon gant ar plijadurioù.

He ene a blije da Zoue : setu perag an Aotrou en deuz bet mall d'he denna euz a douez an drouk.

An dud her guel ep kompren seurt : ne zonjont ket ema gras an Ao. Doue hag he drugarez, gant hor zent, hag e kemer soursi euz ar re en deuz dibabet.

Guelet a raint, goapaat a raint (rag tud zo a ra fae var ar sakrifis ha var an dud a galon). Mes an Aotrou a c'hoarzo dezho. Ha goudeze e kuezint ep honor. E touez ar re varo e vezint, gant ho mez da viken. An Aotrou a freuzo anezho. Pilat a raint ha ne livirint ger, diskaret ha kaset da netra.

Dont a raint, spontet-oll gant sonj ho fec'hejou ; ho zorfejou a zavo dirazho, evel kement a destou d'ho fulluc'ha.

Neuze an den mad a zavo en he zav, soun ha stard ep krena, a zirag ar re a zisprije he labourioù.

O velet anezho, ar re fall, o krena gant ho spount, a lavaro an eil d'egile : « Setu ama eta an hini a c'hoapeant ! Tud sod m'edomp... diank edomp, pell euz ar virionez. Sklerijen ar zantelez ne bar ket varnomp !... » (**LEOR AR FURNEZ**, skrivet araok Jezuz-Krist)

En em gonsolomp eta. Hon tud lazet evit hor bro n'int ket maro abez : hon guelet a reont, beilla reont varnomp, hor c'haret a reont. Hag an Ao. Doue a zo ho rekompans, eurusted re vraz evit m'her c'homprenimp.

BREZEL D'AN ODIVI, AN DOUR A VARO

Viktor ar Marn a zo eun testeni burzuduz euz nerz-kaloun ar Frans, ha ne c'hellan ket kredi ez affe hor bro, en em ziskueaz neuze ken kaer ha ken buezek, d'en em laosker da vervel.

Ha goulskoude, ma ne deu ket dioc'htu enni he-unan, ha ma ne fell ket dezhi a grenn, hag eb dale pelloc'h,

da genta, taoler er meaz an alcool,

d'an eil, lakaat niver ar vugale da greski,

va skiant a lavar d'in ez eo re zûr ar Frans, — pa vezo echu ar brezel, ha gounezet ganthi ar viktor, — da veza kollet.

Araok hanter-kant vloaz, — p'e guir en hon touez ar maro a c'hounid bep bloaz var ar beo ouspenn tregont mil den, — ar Frans ne vezo nemed eur c'hoz vro vian a 33 million dud, hag a gavo dirazhi an Allemagn, savet en 50 vloaz beteg kant million dud, eb kounta c'hoaz an Aotrich.

Daoust hag an dra-ze n'e ket spountuz, dreist-oll pa zonjer n'ez oa en Europ a-bez, en amzer Louis pevarzek, nemed 40-million dud, hag ez oa an hanter anezho d'ar Frans ?

Peseurt sonj-ta en deuz hor gouarnamant ?

Aotrou Briand, c'hui zo brema ken brudet ha ken meulet, ni ho ped, taolit d'an traon an alcool !

Ne dit ket da gila, grit deomp ar vad-se.

Taolit an alcool er meaz euz ar vro, evel ma z'eo taolet gant ar Russie hag ar Roumanie.

Peurechuit ho labour, mirit na gendalc'ho ho kenvroiz d'en em goll gant an odivi, hag e teuoc'h neuze da veza unan euz ar re vrasa e touez ar Fransizien.

1814-1914

Er blâvez 1814, tri c'hant missioner a labourer er broiou pell da c'hounit eneoù da Jezuz-Krist : tri c'hant epken.

Er blâvez 1914, ugent mil missioner a brezege ar feiz katolik dre bevar c'horn ar bed.

Oc'hpenn, c'huoc'h ugent Urs a seurezed a gase 55 mil seur da ren skolioù, hospitalioù, etc., er broiou gouez.

Dre ho labour, ez euz kant guech muioc'h a gatoliked er broiouze : 28 million hirroc'h eget kant vloaz zo. En eur brezek, en eur c'houzanv, en eur vervel, ar visionerien o deuz roet evel eur vuez brasoc'h da Iliz Jêzuz-Krist.

Ha c'hoaz, tud a gredo lavaret ar Relijion a za var zisteraat !... Guelet a rit pegen fall int desket !

Epad ar vrezel, an darn vrasa euz ar visionerien a zo diredet da zifenn ho bro, ha var ar memes tro ho relijion. Ne jom er broiou pell nemet ar re goz, ar re zinerzet, nebeut anezho : na pegen die-soc'h ho labour !

Deomp-ni eta an dever a zo strisoc'h da skora ar misionou dre hor pedennou, hor zakrifisou, hon aluzennou. Va farrisioniz, tostaat a ra gouel Breuriez ar Feiz. Digorit braz ho kaloun ; sikourit Breuriez ar Feiz gant largentez : an eneoù hag an Ao. Doue ho pao !

AR GREDO DA GENTA

An Aotrou kardinal Luçon, arc'heskop Reims, a zigemere n'euz ket pell eur vandennad kristenien.

— Aotrou Kardinal, eme unan, pa vezo bet sinet ar peoc'h goude ar viktor, an oll Fransizien en em unano evit adzevel oc'h iliz katedral merzeriet ; hag oll a-unan ez aimp di da bardouna, ha da gana an *Te Deum* evit ar viktor.

— Red e vo da genta, a respountaz an arc'heskop, red e vo d'an oll Fransizien beza kanet ar *Gredo* araok !

P'en em roio ar Fransizien da zervicha Doue, neuze e teuo buan da vir ger ar Plac'h Euruz Jeann d'Arc : « Ar zoudarded en em ganno, ha Doue a roio ar viktor ! »

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (13^{ved} listen)

DIOU GROAZ A VREZEL HAG AR VETALEN MILITER. An Ao. TASSIN, a Dregourez, beleg-skolaer e Konk-Kerne, caporal brancardier en 219°. Maro, d'an 2 a viz Guengolo, euz ar gouliou resevet d'an 31 a Eost. « O klevet oa chomet var an dachen korf eur c'hâ-piten, a zo eat a volonte vad d'he gerc'hat, a dreuz an obuzou hag ar bouliji ; dindan an tan, en deuz beziet anezhan, kempennet ar bez, ha lakeat eur groaz varnhan. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. Quéméner, a Blouyorn, kure Plonéour-Lanvern, caporal brancardier en 219° : « Eat gant ar re genta a zaille var an enebour, en deuz entetet ouz ar re vleset, dindan ar glao obuzou. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. Morvan, a Bloujean, caporal infirmier en 219°, kure e Crozon. « Eat gant ar re genta a zaille var an enebour, en euz entetet ouz ar vleset el leac'hioù ma kuez ar puilla glao an obuzou. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. BELLEC, a Daole, persoun ar Cloître-Pleyben, aomonier militier. « Var linen an tan abaoe ar penn kenta, en deuz diskuezet ato ar gaera vaillantiz hag ar galon ar vella. Epad emgannou pevar dervez kenta gouere 1916, en deuz baleet deiz ha noz dindan an tan, var al linen genta, evit rei d'ar zoudardet sikour ar zakramanchou ha skuer ar gouraj, en eur adzevel ar re c'hlazet, en eur glask ar re varo evit ho bezia dindan an obuzou. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. LE GOAZIOU, a Vontroulez, brigadier-brancardier en 3° d'artillerie, beleget eur sizun araok ar vrezel. « Epad ma kuez eur glao puill a obuzou, en deuz risklet he vuez alies, a volonte vad, evit sikour entet ouz soudardet glazet n'edont ket euz he rejimant, en eur geraden bombardet, er plas danjerusa. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. BARS, a Esquibien, kure e Plonéis, serjant en 262° (er vrezel abaoe ar penn kenta). « Glazet d'ar 1 a viz Gouere, n'en deuz asantet e ve entetet outhan, nemet en dervez varlerc'h, o tiskuez dre-ze ar brassa vaillantiz. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. FLOCH, kloarek a Vipavas, serjant. « Leuz a galon hag a vaillantiz, goal c'hlazet en tranchée, o tiskuez d'he zoudardet penaoz delc'her penn ep kila. Serjant euz ar re vella. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. MESSENGER, kloarek a Henvic, serjant er 48°. « En emgann ar Sambr, en deuz buan kemeret plas an offiser lazet, pa'z oa ar stourmad en he ziesa, hag en deuz hentchet he zoudardet evit ar quella. »

KROAZ A VREZEL (eil guech). An Ao. LE GALL, a Gernouez, kure Cleden-Poher, soudard en 265°. « Kalounek, dispount, eur skuer d'an oll. Goal c'hlazet, d'an 23 Gouere 1916, en eur gas eur gourc'hemen, en deuz en em ruzet var zaou c'hant metr, dindan eur glao obuzou dreist-ordinal, evit kas he gefridi da benn. Dre-ze en deuz roet d'an oll skuer an huella sakrifis. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. LE BERRE, a Gerlouan, kure e Montroulez, caporal-brancardier. « N'euz netra goest da derri he gouraj. D'ar 27 a viz eost, en deuz roet ar skuer gaera a vaillantiz hag a ijin. Dindan glao an obuzou, en deuz saveteet dek soudard goal c'hlazet. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. JAFFRES, a Zant-Thégonnec, serjant e Sant-Visant, Kemper, maréchal des logis, 42° d'artillerie. « Var linen an tan abaoe daou vloaz zo, n'en deuz ehanet morse da ziskuez he gouraj hag he vaillantiz. Goal c'hlazet e kichen he ganolioù. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. YVINEC, euz ar Merzer, kloarek e Kemper, maréchal des logis er 27° d'artillerie. « Netra en tu all d'he gouraj ha d'he aked d'al labour. Goal c'hlazet e kichen he ganolioù, pa zalc'he he zoudarded seder dindan eun tan spontuz. »

LAZET. An Tad GAUTHIER, aomonier er 115°, jezuist a Gemper, bet dekoret euz ar groaz a honor, bet 4 embann a honor. Lazet eo bet en eur glask sikour soudardet glazet a grie e kichen trancheou an Aïmantet.

LAZET. An Ao. J.-M. CONSEIL, a Gléder, kure e Montroulez, nevez-decoret, lazet gant daou voulet, en emgann ar Somme, pa glaské adzevel ar zerjant Chevillotte, glazet var an dachen.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Georgette Bouquet. Suzanne Le Touz.	Trede klas.	Marie Lescop. Bernadette Kervran. Marie-Anne Cong.
Kenta rummad.	Yvonne Magueur. Joséphine Auffret. Alice Henry.	Kenta rummad.	Marie Kerjean. Eléonore Bégoc. Hélène Gélébart. Haudes Talarmin. Ernestine Brénéol. Marie Bocheur. Marie-Yvonne Pellen.
Eil rummad.	Louise Laot. Marie-Jeanne Hamon. Julianne Le Touz. Germaine Bellec.	Eil rummad.	Pélagie Sylvestre. Julie Talarmin. Philomène Autret. Marie-Anne Taloc. Julianne Didon. Alexandrine Marzin. Paule Autret. Marthe Lesvenan. Ernestine Talarmin. Ernestine Le Guen. Marie Pöll.
Eil klas.	Joséphine Fourn. Isabelle Guena. Françoise Eliès (Kermaj.). Louise Squiban.		
Kenta rummad.	Marie-Yv. Perchoc. Joséphine Bouquet.		
Eil rummad.	Léontine Michel. Jeannie-Yv. Trébaol. Marie-Yv. Richard. Fr. Forest. Joséphine Gouzien. Yvonne Abjean.		

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

23 Guengolo. Jean-F.-M. Appriou, Trémazan. PAEFOUN : MAEROUNEZ :
Franç. Gélébart. Marie Primel.

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :
1 Guengolo Yves-Marie Lé Gall, Tour-Tan, et Marie Eugénie Guéna, Ar Chantel.

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar c'hered, da c'hedal deiz ar varn diceza,
e goasket ar groas :

30 Guengolo. Eugène Eillin, Trémazan, 15 vloaz.
16 Here. Yves Brenéol, Kerriou, 46 vloaz.

**Da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil sul,
12 a viz Du :**

11 h. Marie-Yvonne Téréne, Marie-Jeanne Perhirin, Marie-Yvonne Bossard, Marie-Louise Magueur, Kerc'hoazog.

11 h. 1/2. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean-Marie Pondaven, Jean-Marie Bégoc, Bourk.

12 h. Ar skol gristen.

12 h. 1/2. Mme Vaillant, Mme Bleunven, Josephé Nédélec, Josephé Corolleur, Bourk.


1 h. Marie-Yvonne Cloarec, Traon-Braz ; Julie Floc'h, Traon-Bian ; Marie-Jeanne Breterch, Tour ; Marie Copie, Prat-Kergeriok.

1 h. 1/2. Sophie Salaun, Louise Forio, Zoée Coatanéa, Françoise Le Ru, Rochard.

Kannadik miz Here enn deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea digant : J. G., L. C., M. T., peb 8 réal ; M. C., J. F., J. N., peb a 4 réal ; C. G., 10 guennek.

Brest, imprimerie rue du Château, 4.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



BREURIEZ AR FEIZ

Gouel sant Fransez Xavier, patrom breuriez ar Feiz a en emgav d'ar zul 3 a viz kerzu.

En dervez-ze hag epad an eizved ez euz eun induljans plenier d'ar re a zo er vreuriez gant ma vezint bet o kovez hag o kommunia. D'en ne c'helfe lavaret re a vad euz ar vreuriez-ze, hag an ollgristenien a dlefe lakât o hano enni. An oll n'int ket galvet da vont da brezeg ar Feiz, mes an oll a c'hell rei an dourn d'ar misioner kalonek en eur ziouret eur guennek ar sizun var he zispignou didalvez ha lavaret bemdez eur *Pater* hag eun *Ave Maria* gant ar c'homzou-ma :

Sant Fransez Xavier, pedit evidomp.

Evel lavar person Arz, en eur zavetei eneou ar bayaned e save-teomp hon re hon unan.

Ma n'emaoc'h ket c'hoaz er vreuriez gaer-ze, hastit affo mont enni, hag evelse e reoc'h da Jezuz ar brassa plijadur hoc'h e sikour da gaz eneou d'ar Baradoz^o hag o pezo perz en oll meritou ar visionerien, er mirit euz ho labouriou, er mirit euz ho foaniou hag er mirit euz ho maro, pa skuillont ho goad evit Jezuz-Krist evel c'hoarvez meur a vec'h.

TAOLIT EVEZ

Da gouel sant Fransez Xavier eo e vez roet aluzennoù Breuriez ar Feiz ha Breuriez ar Sainte-Enfance.

Roit-ta er pemzek dervez kenta euz miz kerzu ho aluzennoù d'ar zelatourezed a gas deoc'h Liziri Breuriez ar Feiz pe ho digasit d'an autrou Persoun pe d'an autrou Cure.

Breuriez ar Yugale vian (Sainte-Enfance)

An tadou hag ar marmou a ra kalz plijadur d'an Autrou Doue ha kalz vad da eneou ho bugale, o lavaret dezho dioueret eur guennek ar miz var ho madigou evit sikour breuriez ar Sainte-Enfance. Ma c'houlen ho bugale digantho : perag ober-ze ? E respountint dezho : va bugaligou c'houi pa z'oc'h deuet ver an douar-ma ho peuz kavet eur c'havel d'ho tigemeret, kaloun eun tad hag eur vamm d'ho karet hag da veilla varnoc'h evit ne vanko netra deoc'h, kaset o deuz ac'hanoc'h d'an Iliz evit ma teuoc'h da veza bugale da Zoue hag heritourien euz an Env. Diskouezet ho deuz ive deoc'h hent ar Baradoz ha kemeret poan da zeski deoc'h ho katekismou.

Mez evit bugale ar bayaned ne ket ar memez tra, aliez ho zad hag ho mamm eleac'h kemeret soursi anezho ho laka d'ar maro pe ho lez da vervel gant an dienez, ne c'hellont ket ken neubeut deski dezho hent ar Baradoz pe guir n'hen anavezont ket o-unan. Mad ho kuenne ar miz a zervicho d'ar misioner pe d'al leanez evit prena ar vugaligou dilezet, rei dezho ti dillad ha boued hagar pez a dal hirroc'h c'hoaz hent ar Baradoz.

Varlene 168 krouadur euz ar barrez ho devoa roet ho aluzen, ha trugarekeat Doue er giz-ze da veza great dezho genel en eur vro gristeu, ha tennet a dra sur var ho zad pe ho breudeur er brezel bennoz an autrou Doue a bae atao mad kement a vez great evit savetei an eneou.

Maro var an dachen a henor !

Setu ma z'euz maro eun all da lakaat var ar *C'hannadik* :

Yves Chapalain, 21 bloaz, euz Kergounan. Er zouaved edo, regiment leun a vaillantis atao er penn araok en emgann. Eur mignoun dezhan a skrive d'he c'hoarezed : Ho preur a zo kouezet o tifenn ar Frans, tizet eo het gant eur vouled en he henn.

Esperomp en deuz Doue en digemeret en he varadoz. Er veac'h diveza m'oa het er gear en devoa kovesaet ha kommunit.

Sevel a ra niver hor zoudarded ha martoloded maro da ugent. Piou en dije kredet, p'edo ar brezel o koumans, e vije bet lakeat er barrez kement a famillou e kaony, hag e vije bet diskaret eun toullad ken braz a dud, e bar ho nerz hag ho oad.

Petra reimp-ta ? Nemed pedi kalz muoc'h ha kalz guelloc'h : pedi evit ar re varo evit ma vezint euruz gant Doue en he varadoz ; pedi evit ar re veo dreist-oll evit ar re a zo var an dachenn. Dalc'homp sonj avad ne c'hell beza selaouet hor pedennoù nemed dre ma vezimp mignouned hon-unan da Zoue, da lavaret eo ma vez hon ene neat a bec'hed marvel.

MEULET. — Claude Taloc, euz a Navant, soudard er 146^e regiment a linen, eilved kompagnunez, en deuz bet eun testeni a veuleudi digant he golonel evit an nerz kaloun en deuz diskouezet e stourmajou Verdun. Ni, he genvroiz, a gemer perz en henor great dezhan.

ASSURANS AR CHATAL

D'ar iaou 21 a viz kerzu. Commiserien assurans ar chatal a zo pedet d'en em gavout er bourg da 8 heur evit pricha a nevez ar c'hezec a zo dija assuret hag ar re a zo en oad da veza kemeret en assurans.

Ar re a zo e karter ar Menez a en em gavo er bourg gant ho c'hezec da 8 heur, ar re a zo e karter Kerzent da 9 heur, a re a zo e karter ar c'hantel da 10 heur.

D'ar meurs gouel sant Stephan 26 a viz kerzu an dud o deuz c'hezec assuret a zo pedet da zont da reunion a vezo great da 3 h. 1/2 er skol gristen.

Peb hini a c'hell lavaret he c'her evit guella mad an emgleo.

En dervez-ze e vezo resevet arc'hant an assurans evit ar 6 miz a goumanso d'ar c'henta a viz genver 1917.

Ar c'hadoriou, ar beden zul

Da c'houel Sant Stephan, 26 a viz kerzu, e vezo, evel bep bloaz, kemeret arc'hant ar c'hadoriou hag ar beden zul. Peb hini a zigasso

anthen gnumero he gador. Evel ne vel ket a sklear an Autrou Persoun e ra deoc'h eun ali evit ar bloaz-man : O pedi a ra da zont epad miz kerzu d'an offeren 7 h, nemet kart e vez great enni ar pedennou evit ar soudarded hag ar Vartoloded, deuit goude an offeren-ze d'ar sakre-teri evii paea ho kadoriou hag ar bedon zul, er giz-ze e vezo kalz essoc'h evidoc'h hag evithan.

En danjer braz a zo ezidomp oll epad ar brezel, den ne sonjo laerez an Iliz, o chom heb paea he gador.

MIZ KERZU

1. GUENER KENTA. Kaloun Jezuz, kinnig a reomp deoc'h an oferen hag ar gommunion a zigoll evit rapari blasfemou an dud a nac'h guerc'hded, santelez, galloud ho Mamm divin, ar Verc'hez gloriuz Vari.

3. SUL KENTA AN AZVENT. — Brema e veler hag e klever traou spountuz, an enkreuz a voask ar c'halonou. Pegen goasoc'h e vezo an anken pa zeuio Hor Zalver da varn an oll dud ! Ra blijo gant Doue kaout truez ouzomp ! Ra vezo hor buez mad ha santel, evit ma vezo euruz hon eternite.

8. Guener. GOUEL AR VERCHEZ KONSEVET DIBEC'H. Ar Verc'hez e deuz dibabet eur gearik a Vro-Frans, Lourd, evit disklaria enni ez oa « Ar Gonsepsion dinam » : merk a garantez-hag honor dispar d'hor bro. Da Lourd e tired tud a vilionou a bevar c'horn ar bed. E Lourd, ar Zakramant hag ar Verc'hez a ra ar muia burzudou. Diskuezomp hon anaoudegez vad en eur heulia skuer purete hor Mamm divin.

10. EIL SUL AN AZVENT. Aviel : Sant Ian Vadezour, e pri-zoun, o kas tud da c'houlou digant Jezuz mar d-eo ar Zalver gortozet. — Divar he skuer, guelomp gant pebez aked e tleomp deski anaout Jezuz, he vuez, he lezen, he Iliz, he zakramanchou. Eur c'hristen ha ne anavez ket Jezuz-Krist, petra dal ?

17. Sul SANT KORANTIN, eskop ha kenta patron Kemper ha Leon. — Guehall, pa varve leun a dud e Kemper dre ar vosen, e oue douget relegou sant Korantin, e prosesion, dre ruiou kear. Ar voalen a dardaz. Pedomp hor zant patron ma viro ouz kristenien he eskopti da vervel er vrezel, pedomp ma tostaio fin ar voalen, pedomp ma kompreno ar gristenien e rankont beva santeloc'h ma fell dezho lakaat da blega justis an Ao. Doue.

20-22-23. IUN HA VIJIL AR PEVARE AMZER (merc'her, guener, sadorn). Kalet eo ober pinijen. Kalet eo, da hiniennou, klevet kentel ar binijen ; he hañs epken a ra poan dezho. Goulskoude Jezuz, ken madelezuz, a lavare : « Ma ne rit ket pinijen, mervel a reoc'h oll. » Hor pinijen a zikouro ar vrezel da echui, a zaveteio eneou, a viro ouz tud da vervel.

24. Pevare sul an Azvent. Oferen DERCHENT NEDELEK. Gousperou kenta Nedelek. Sonjal e poan S. Joseph hag ar Verc'hez pa edont o klask lojeiz e kear Bethleem, pa ne gavchont nemet eun toul dindan an douar, e kichen al loened. Pebez palez evit tad mager ha mamm eun Den-Doue ! pebez tron evit Jezuz, mestr kement tra a zo ! — Kinnig da Jezuz er c'hraou poaniou hor zoudardet a rank loja ive ebarz an douar ; — goulou ma vezo diarbennet an enebour kriz a dennaz ar goaleuriou-ma var ar bed.

25. NEDELEK, gouel berz. Teir oferen hirio. Perag ? Ar genta en honor da Jezuz o font er bed. An eil, en honor da Jezuz o font en hon eneou. An deirved, en honor da Jezuz o font da varn an dud. Trugarekaat Jezuz da veza deuet d'hor zavetei ; rapari an dismegans on deuz great var he brezans en hon touez, goulou ma varno ac'hanomp gant trugarez.

26. Gouel SANT STEFAN, merzer kenta. S. Stefan a gemere kouraj en he angoni (lazet a daoliou mein) en eur zellet ouz an Env digor d'he zaoulagad. Ar memes baradoz a c'hortoz ac'hanomp : Kemeromp pasianted.

31. SUL DIVEZA. Adoromp an Ao. Doue, mestr ar vuez hag ar maro, a roaz deomp ar blavez-ma. Trugarekaomp he vadelez, hon c'houzanvaz hag hor c'hargaz a vadoberou (grasou, sakramanchou, madou). Goulennomp pardoun, evidomp hag evit ar bec'herien. Goulennomp diou gras dreist-oll : eur maro mad, hag ar viktor er blavez 1917.

1. Gouel Jezuz circonsizet.

5. Guener kenta.

7. Sul ar Rouaned.

EN NOSVEZ NEDELEK

Ar barrisioniz zo vont d'ar Pelgent.

Ar Mabik Jezuz, da c'hedal mare ar Gorreou, ma tiskenno var an aoter, a ra eun dro dre ar barrez. En dro dezhan, eur vandennik ealigou, eneou ar vugale eat d'ar baradoz nevez-badezet, hag o doa c'hoant gulet ho zud hag ho ziez.

— × —

Ar c'henta ti ma tiskennaz Jezuz ennihan a oue eun ti soul dirapar, henvel aoualc'h, michans, ouz kraouik Bethleem, lochen tud a galoun, a laboure ep en em glemm, — ep gounid tam peadra ebed, ken nebut — Leor ar *Gelennadurez kristen* a ioa chomet var an daol abaoue koan. Ha var bajen *Ginivelez* Jezuz, Jezuz a skrivaz evelhen :

— « Euruz an dud paour, ar baradoz a vo dezho. » Hag ez eaz pelloc'h.

— × —

Ep dale, ar Mabik Jezuz gant he Ealigou en em gavaz e ti tud pinvidik. Pinvidik evel rouaned, dous ha chentil d'ar beorien ha d'ar zervicherien, eun dudi beva en ho c'hichen. Ha Jezuz a lezaz, er C'hraou savet en he honor en eur gambr a gostez, eun tam paper alaouret merket varnhan ar c'homsou-ma :

— « Euruz an dud dous a galoun, an dud trugarezuz ; an douar a vezo dezho, hag e kavint truez en Env.

— × —

An Ealigou, laouennoc'h dre ma'z eant, a heuliaz Jezuz e ti eun intanvez. He fried a ioa bet lazet e penn kenta ar vrezel, seiz krouadur vian chomet var he lerc'h ; — diner ebet, nemet aluzen ar c'houarnamant, nebut a dra evit guiska, beva, loja, skolia kement

a dud, pa n'helle ket ar vamm mont dioc'h an deiz nemet ral-ral. M'e devoa skuillet daelou, m'e devoa poaniet da rei d'he bugale eun tam bara kemeret avechou var he loden he-unan, — Jezuz her gouie mad. Mes gouzout a rea, ive, pebez fizians e doa an intanvez e kaloun tener he Doue, ha pebez doujans d'he volonte. Jezuz a lakeaz en oaled eur ialc'h pounner, skrivet varnhi :

— « Euruz an dud a skuill daelou, rag e vezint konsolet ». Hag e sinaz : *Ar Mabik Jezuz.*

— × —

Ar vugale santel a vizitaz meur a diegez evelse, ep na vijent gullet. Abarz ar fin, e jomchont en eur famill, kristen meurbet. An tad, ato er penn kenta evit difenn ar religion ; ar vamm, uzet dija gant sourei ar vugale ; ar vugale, reizet eun dudi ho gullet, abaoue ar map hena Jean-Mari, deuet e permission euz al linen kenta gant he groaz a vrezel, beteg ar Mac'harit vian a goumanse lavaret, ken koantik, hanoiou dous Jezuz ha Mari... an oll, erfin, hag a veve di-drouz ha santel. Jezuz a gemeraz ebat, eun tachadik, q sellet outho, hag ez eaz goestad da lavaret d'ar vamm :

— « Euruz an dud pur ha didrouz, rag e velint Doue er baradoz. »

— × —

Poent oa mont d'ar Pelgent. Ar Mabik Jezuz a nijaz varzu an aoter, d'en em ober bara evit an dud, da rei rekour da bep hini ha da c'houlenn digant he Dad « ar peoc'h er bed-ma d'an dud a volonte vad », ar peoc'h erfin etre an oll boblou.

Ha red eo paea an dle epad ar vrezel ?

O veza ma c'hell beza diez da veur a hini, epad ar vrezel, paea an interest var arc'hant amprestet gantho, paea ho gouel-mikeal evit ho zamm ti, ez euz great eul lezen evit rei dezho amzer en tu all d'an termen da baea ar pez a dleont.

Mes arabat e ve kredi evelato, evel ma kred lod, ne ve izoum ebet da baea ar priz ferm na da restaol arc'hant amprestet, nag interest ebed. Al lezennou great er vro var gementze ne lavaront ket an dra-ze ha ne c'hellont her lavaret.

Mes hag e lavarfont, eul lezen all a zo ha ne lavaro morse kementze, houn-nez eo lezen an Aotrou Doue. Houn-nez ne bardouno ket d'ar re a c'hell paea ho dle, ha n'her greont ket.

Evelse an hini a douch guenneien bep miz (an *Allocation*) hag a ra implij fall euz ar guenneien-ze evit prena lipouzerez, bouesoun, dillad kaer, hag a lez ho dle, gouel mikeal pe all ep ho faea, ar re-ze o deuz pec'hed ha pec'hed braz. Ar re o deuz tiegeziou hag a c'hounit arc'hant epad ar vrezel, ma talc'hont ho friz gouel mikeal ep he baea pa deu an amzer, ar re-ze ive o deuz pec'hed ha pec'hed braz. Marteze e sonjont evel-hen : « Me a bosto va arc'hant var ar c'houarnamant hag e mezo 5 dre gant evitho, ha goude ar vrezel me baeo mestr va douarou pe mestr va zi. »

Hol-la ! « Me a bosto va arc'hant », eme c'hui. Livirit ta, arc'hant va mestr. Abaouc ar gouel-mikeal, an arc'hant-ze zo dleet dezhan, a zo dezhan dre vir, ha dezhan eo ive an interest a douchit.

Red eo beza tud honest bepred. *Cuique suum*, da bep hini ha dra. Lezen Doue eo.

Famillou ar Galoun Sakr

N'eo ket aoualc'h e ve lakeat a vel en ti kristen imaj ar Galoun Sakr, red eo c'hoaz e ve gant aked rentet henor dezhan.

Da genta red eo, evit henori an imaj santel, e ve alies taolet varnhi an daoulagad. An henor-ze a zo dleet dre vir da Galoun Jezuz. Pa deui ar zellou-ze pe euz an tad, pe euz ar vamm, pe euz ar vugale, ep mar ebet, e plijint d'Hor Zalver. Eur zell, great gant feiz ha gant fisians var imaj Kaloun Jezuz, a rai ato vad d'an hini her grai. Ar Galoun Sakr a ouezo kelen anezhan ; hag ar bannou sklerien a darzo deuz ar Galoun divin a roi sklerder, frealzedigez ha nerz, da oll vemprou ar famill kristen.

D'an eil, evit henori imaj Kaloun Jezuz, e tleer pedi dirazhan. An tad dioc'h ar mintin, araok mont d'he labour, a dle karga Kaloun Jezuz da ziuall he dud ha da rei bennoz d'he labour, ha kinnik ive dezhan an oll boan en devezo gant he labour. Ar vamm a c'houlenn he vennos evithi, evit he bried, evit he bugale ; he bedi a rai da ziuall anezho dioc'h peb drouk ha dreist oll dioc'h lasou an drouk-spered. Ar vugale, goude beza lavaret peden an Abostolaj « Kaloun Sakr Jezuz, me ginnig deoc'h va fedennou, va labouriou, va foaniou... » a rai ive ar bedennik-ma : « Kaloun Sakr Jezuz, roit deomp ar c'hraz d'ho karet ato muioc'h mui ; roit deomp ho pennoz ha diouallit deomp, pell amzer, hon tad hag hor mamm. » Dioc'h ar pardaez, ar famill abez en em asamblo evit ober a-unan ar beden vraz, dirag imaj Kaloun Jezuz. He drugarekât a rai deuz ar grasou, ar madoberiou bet diganthan hed an deiz ; ha goulenn a vo great diganthan he vennoz ive evit an noz.

Ar Galoun Sakr a vezo e guirionez protektour ar famill beniget-ze ; oll e karint anezhan, oll e c'halvint anezhan en ho foanio, en ho darvoudou. En ti-ze e reno ar peoc'h hag an eürusted, ha kement hini a deui en ti-ze a lavaro : E guirionez, Kaloun Jezuz a c'houarn ar famill-ma.

Tadou ha mammou a famill, dalc'hit ta ma vezo imaj ar Galoun Sakr en ho tiez, henorit anezhi guella ma c'helloc'h ; m'her grit, Hor Zalver, en deuz roet he c'her e skuillo var ho tiez *bennoziou a bep seurt*.

Ar re zo ho feiz dister a gavo braz ar bromesa-ze, hag o do beac'h o kredi e teufe da vir. Mes ar guir gristen a oar e c'hell galoud an Aotrou Doue muioc'h eget ne c'hell an den koumpren. Ha petra ! Mevelien an diaoul a rafe en dra c'hellont evit digristena ar famill, ha Kaloun Jezuz a jomfe dizeblant o velet eul labour ken iskiz ? Ha ne deufe ket da zikour he vugale ? Ha posseve kementze ? Nann. Evit herzel ouz eun hevelep darvoud, Jezuz-Krist a ginnig deomp eur sikour ne vanko biken, he Galoun Sakr. N'ou deuz nemed lakât imaj he Galoun divin en hon ti, hag an ifern vo dic'halloud enep deomp.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

3 Du. Hervé-Marie Saliou, Tour.	Hervé Cornen.	MAEROUNEZ :
6 — Marie-Ros. Vaillant, Streat-Lann.	Prigent Vaillant.	Yvonne Saliou.
11 — Jean-Marie Corolleur, Curullou.	Jean Le Guen.	Jeannie Vaillant.
		Marie-J. Magueur.

ENTERRAMANCHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn diveza,
e gouasket ar groaz :

- 26 Heré. Marie-Anne Brénéol, 25 vloaz, Tremazan.
29 — Victoire Talarmin, 51 vloaz, Sémaphore.
1 Du Joseph Coat, 75 vloaz, Kerzent.
2 — Jean Vaillant, 53 vloaz, Tremazan.
6 — Léonie Costanéa, 50 vloaz, Arc'hantel.
10 — Françoise Morel, 71 vloaz, bourg.
12 — François Jézéquel, 53 vloaz, Penfoul.
15 — Louise Forest, 18 vloaz, Tremazan.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :


Kenta klas.	Eugénie Morel. Josephine Aufret. Suzanne Le Touz. Yvonne Magueur.	Trede klas.	Marie Lescop. Françoise Kervran. Philomène Eliès. Thérèse Cadalen. Hélène Géléhart.
Kenta rummad.	Alice Henry. Marie-Yvonne Cong. Georgette Bouquet. Madelaine Prigent.	Kenta rummad.	Marie Bocheur. Marie-Yvonne Pellen. Marie-Yvonne Jaouen. Marie Taloc. Yves Laot. Marie Mrgueur (Lannour.)
Eil rummad.	Marie-Jeanne Hamon. Julianne Le Touz. Marie Gouzien. Marie-Yvonne Kerros. Philomène Cornen.	Eil rummad.	Pélagie Sylvestre. Jeanne Magueur. Louis Luvven. Alexandrine Marzin. Yvonne Querré. Marie Bizien Kelléroux. Françoise Uguen. Herveline Saliou. Yves Le Hir.
Eil klas.	Françoise Brénéol. Marie-Yvonne Allégot. Françoise Elièse (Kermaj.)		
Kenta rummad.	Isabelle Guena. Rosalie Leostic.		
Eil rummad.	Jeannie-Yv. Trébaol. Josephine Trébaol. Marie-Yv. Richard. Louise Kermorgant. Josephine Gouzien. Léontiee Michel.		

Da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil sul,
10 a viz Kerzu :

- 11 h. 1/2. Marie-Anne Provost, Sophie Goueziou, Navant, Julie Corolleur, Marie Cléac'h, Kerlaguen.
12 h. Marie-Ursule Menguy, Jeanne Floc'h, Julie Pérez, Jeanne Floc'h, bourg.
12 h. 1/2. Ar skol gristen.
1 h. Joséphine Kervran, Marie Magueur, Penkear, Marie-Anne Le Guen, Jeanne Corolleur, Penfoul.
1 h. 1/2. Jeanne Cadour, Marie Trébaol, Thérèse Lescop, Lanhalès, Vincente Chaplain, Kergouan.

Kannadik miz du en deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea digant : J. T., J. P., M. H., bep a 8 real ; Y. T., J. M., J. H., pep a 4 real ; F. P., 10 guennek.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.



MIZ GENVER

1. Gouel ar Mabik Jezuz circoncizet. — N'oa nemet eiz dervez c'hoaz, hag e skuille he c'hoad evit an dud. Erbedomp ouz ar Mabik Jezuz ar zoudardet a skuill ho goad evidomp hag evit ar Frans, ha goulennomp m'en em ginnigint da Zoue evel Jezuz.

5. GUENER KENTA. Kinnigomp digoll da Galoun Jezuz evit kement pec'hed a vezo great epad ar bloaz, ken ganeomp, ken gant an dud all. Eur souez hag eur spont eo sonjal er pec'hejou marvel a vilionou a zav bep bloaz enep hor C'hrouer, hor Zalver, hor Madoberour divin. Morse ne raimp re evit digoll anezhan.

7. SUL AR ROUANED. Goulennomp ma teuo ar Rouaned, en hon amzer, da adori ar guir Doue, d'he adori e guirionez, da veza guir gristenien. Ne d'ai nemet guelloc'h aze evit ho foblou. Ne glaskint ket ober brezel pa vezint humbl ha karantezuz.

14. EIL SUL AR ROUANED. Pa chenchaz Hor Zalver an dour e guin, var beden ar Verc'hez, e roaz eur merk euz he Zakramant meulet ra vezo, eleac'h ma jench ar guin en he C'hoad. Goulennomp ma vezimp preparet gant ar Verc'hez da ober kommunionou santel.

21. TREDE SUL AR ROUANED. An ofis a ro tro deomp da drugarekaat an Dreindet euz gras ar vadiziant, a lakeaz ac'hanomp var hent ar baradoz. Delc'her sonj on deuz renonset da Zatan ha d'ar pec'hed, hag ez eo mezuz mankout d'hor ger.

28. PEVARE SUL AR ROUANED. « Aotrou, saveteit ac'hanomp ! emaoomp o veuzi ! » N'ez euz nemet eur Zalver, evit ar boblou evel evit an dud.

Poaniomp da zavetei hon eneoù hag hor bro, evel ma ne vije nemedomp goest d'hen ober. Mes pedomp, evel ma tlefe an oll labour beza great gant an Ao. Doue.

2 C'houevrer. Gouel ar Chandelour. Guener kenta.

4 C'huevrer. Sul ar Septuajezim.

BLAVEZ MAD

Eur zonzj a zav dreist an oll sonjou, en eur goumans ar bloaz 1917 : ha fin a vezo er bla-ma ? Fin ar vrezel, n'euz ket izoum da lavaret.

Doue her goar. An dud a c'hell esperout.

Doue a c'hell rei ar viktor hag ar peoc'h. An dud a c'hell ho meritout hag ho c'haout.

Hon dever kenta eo beza leun a fizianz. Va farrisioniz ker, gouzout a ran ez euz tud hag a lavar : « Daoust hag ar viktor a vezo deomp ? » N'euz daoust ha ebed. Fin a vezo. Ar viktor a vezo deomp.

N'eo ket red beza profet evit hen diskleria. N'euz nemet gueleit an traou evel ma vezont.

Daou vloaz hanter zo, pa zigoraz ar vrezel, edomp teir vro enep teir : Frans, Russi, Serbi, enep Allmagn, Autrich, Hongri. An teir-ma a ioa preparet pell zo. Ni, n'edomp ket an oll. Ni a dlefe beza paket lamm dioc'htu.

Petra en em gav ?

Ar Beljik en em laka a du ganeomp ; dre-ze tardet an Allmanted ; ar Fransizien o deuz amzer da zével ho soudardet ha da zêlc'her penn eun tachad.

Bro-Zaoz ne dlie ket dont ganeomp. Dont a ra. Hi eo a vir ouz Breiz da veza paket gant al listri allmand eat dija en hent. Hi eo a ro d'ar Frans amzer ha listri da reseo obusou, kanoliou, etc., euz an Amerik.

An Itali a ioa a-du gant an Allmagn hag an Autrich, abaoue tregont vloaz. Da genta, ne dea ket enep deomp. D'an eil, a benn bloaz, e tro a-du ganeomp, hag e ra brezel d'he c'hamaladed koz.

C'hui gav deoc'h n'ema ket dourn an Ao. Doue o ren ar boblou hag o tigas anezho d'hor skora ?

Epad ar miz kenta, e rankomp kila. Da c'houel ar Verc'hez, 8 guengolo 1914, viktor ar Marn a zo silvidigez ar Frans. Bete vrema, n'euz bet den hag a c'helfe beza komprenet penaoz o deuz gounezet neuze, nemet dre eur mirakl roet d'ar Frans gant Jezuz-Krist « hag a gar ar Fransizien ».

Var an Yser, 6 mil fusiliers-marins a dard 40 mil Prusian. Ar re-ma ne gredent ket mont var araog, o sonjal oa tud a vilierou dirazho. Perag eun hevelep sonj ? Gant piou edomp dallet ?...

E c'huevrer 1915, an Allmanted a zaill var gear Verdun, n'oa ket difennet. Gounid a reont brao. Ar forjou brasa a guez etre ho daouarn. N'o doa nemet dek minut bale da ober evit beza mistri var gear. Mes gueleit a reont eun Itron Ven o tifenn outho avans ken.

Ha goude beza lezet pemp kant mil soudard lazet dirag Verdun, etre c'huec'h miz, e kollont en eur zizun ar pez o doa paet ken ker.

Ma livirit : « Mes ar Serbi zo bet flastret. Ar Roumani a goll. Ar Gres a zav en hon enep », ne nac'hin ket ar virionez, pegen glac'haruz benag e ve. Mes dalc'hit sonj. Evit flastra Serbi ha Roumani, an Allmagn e deuz kollet soudardet a vilierou, a vije bet red dezhi da gaout evit trec'hi ac'hanomp : uza ra dre viktorieu a-bell ; ha ni a deu krenvoc'h-krenva bemdez.

Lavaret a rit : « Ni a goll tud ive. » Siouaz ! ha kalz re ! Mes nebeut eo e skoaz kollou an Allmanted.

O pet fizianz. Ar boan n'eo ket echu. Hor bro na echuo ket ive. Rag Pi Dek hen lavare : « Doue a gar ato ar Frans ! » Ha Beneat Peinzek a lavar : « Karet a ran ar Frans, ar Frans a bez. » Ger ar Pab eo ger an Ao. Doue.

Fizianz, ha fisians c'hoaz ; hag er brasa ankeniou, fizians ato ! Setu hon dever kenta.

Hon eil dever eo en em zantelaat : dre ar beden, ar zakramanchou, ar hinijen, hon oberiou pemdeziek. Rag peden an den santel a zo ato selaouet gant Doue.

Ha ne reketin deoc'h nemet an tri zra-ma evit ar bloaz nevez : ar viktor, distro hon oll soudardet d'ar gear, ar zantelez.

Ra blijjo gant Doue kaout truez ouzomp !

Blavez mad d'ar Zoudardet ha d'ar Vartolodet

Da genta, va mignoned, bennoz Doue deoc'h evit beza difennet ac'hanomp abaoue nao miz var 'n ugent, ken kalounek. Panefe c'hui, douar Frans a vije bet kaillaret gant ar Prusian ; en hor bro-Breiz on divije gueleit ha gouzanvet enkreziou ha darvoudou spontuz ar Beljik hag ar Serbi.

Bennoz Doue deoc'h, hon difennourien !
 Meuleudi deoc'h ive. E bro ebed hag en amazer ebed, n'euz bet stourmet gant soudard ebed evel m'oc'h euz great, c'hui. Morse n'euz bet enebourien ken kriz, ken galloudek, — armou ken spountuz, var an douar ha dindan, var ar mor ha dindan, en ear zoken, — poaniou ken kalet, e bouillen an trancheou, var zouar skournet an toullou obuzou, dindan an erc'h hag ar glao, dindan an houarn, an tan, an ezennou bilimuz, — nebeut pe netra da zrihi, ha peseurt boued !... e guirionez, meur a hini zo er baradoz ha n'o deuz ket gouzanvet hanter ho poaniou ! Ah ! bezit meulet, soudarded ha martolodet, hag ar bed-ma hag er bed all !

Er bed all !... Eno petra dal ho poaniou ? Ar pezh a geroc'h. Moarvad, ne vankit morse da ginnik ho tervez da Zoue. (Ma n'her grafac'h ket, ho poan ne gountfe ket evit ar baradoz.) Mad, seul-vuioc'h a garantez kristen e lakit e offrans ho tervez, seul-vuioc'h a virit oc'h euz dirag Doue. Pa emaoch en toull teñval ha glep, evel er bez, var linen an tan, — pe o viza an enebour dre doul ar c'hreneau, — den ebet o sellet ouzoc'h, Doue a zell ouzoc'h, Doue a niver ho poaniou, Doue a brepar ar rekompans. Pa emaoch rivet var hont al lestr, oc'h eyesaat ma teu eur sous-marin pe eur c'har-nij d'ho tistruja, — pe hanter-zevet gant gor ar machinou, — Doue a zalc'h he lagad hag he galoun da bara varnoc'h. Diverka ra derveziou, bloaveziou purkator divar ho-Leor a vuez ; merka ra hirroc'h a Varadoz. Eun dervez a zeuio e viot souezet o velet peger braz e vezo an digoll !

Kinnigit ho poan evit ho silvidigez, evit ho tud a lezit er gear, evit ho parrez hag ho pro : « Doue hag ar vro » setu diou garantez ho tudou koz. evitho eo e poaniit, var skuer ar re goz.

Ra vezo ar bla-ma an diveza euz ar vrezel. Ra zeuoc'h oll er gear, iac'h hag ampart, ar re a zo prizouniet evel ar re all. Ra vezo pounner-pounner samm ar meritou o pezo dastumet er vrezel. Ra vezo an eternite mad d'ho tigoll !...

AR VAMM GRISTEN

Dioc'h ar vamm, ar c'hrouadur : eur vezen vad a zoug frouez vad ; divar eur vezen fall ne zavo ket a frouez vad.

Guelit en Aviel. Araok meuli Sant Ian Vadezour, « ar brasa etouez bugale an dud » ar Spered Santel a veul vertuziou he dad Zakari hag he vamm Santez Elisabeth.

Sant Paol, evit meuli Sant Timothee, a gomz euz feiz Eunis ha Louida, he vamm hag he vamm goz.

Meuleudiou Sant Louis, roue Frans, a zigor dre vertuziou ar rouanez he vamm, Blanche a Gastill, — evel ma tigor meuleudiou ar Verc'hez Vari dre vertuziou Sant Joachim ha Santez Anna, he zad hag he mamm.

Guelit brema petra lavar ar Zent euz ho mammou. Sant Bazil ha Sant Gregor, eskipien : « Bennoz, mil bennoz deoc'h, o va Doue, da veza roet deomp eur vamm hag a zo eur zantez ! » Sant Augustin : « Da va mamm eo ez oun dleour a bep tra. Pa e deuz ar vamm poaniet da gizella doun, e kaloun he bugale, an henvelidigez ouz an Ao. Doue, kredi a c'hellit e pado an henvelidigez, daoust ha d'an techou fall. »

An Ao. Vianney, persoun Ars, da unan hag a lavare dezhan : — « Euruz oc'h da veza bet devot a vianik », e respounte : « Va mamm eo zo kaoz. goude Doue : ken devot oa ! Lavaret a rea d'in : Va bianik, ma veljen ac'hanod oc'h ofansi Doue, poan vraz e mije. »

Erfin, dalc'hit sonj euz geriou an daou skrivaniere brudet Ozanam ha de Maistre : « Netra na dosta an den ouz an Ao. Doue evel zonzjal en eur vamm zantel... Var barlen ar vamm eo e vez furmet ar pezh zo a vella er bed. »

Mammou kristen, bezit santel, roit ar skuer vad e peb giz : ho pugale a vezo evel doc'h. C'hui eo a rai ho bonheur pe ho goalheur eternal.

SKOL-VICHER E PENANRUN (DIRINON)

evit ar Zoudardet mac'hagnet divar ar meaz

An Aotrou 'n Eskop en deuz lakeat ober ar skol-se, ha henniget anezhan. An Aotrou Dumoncel, a Lanilis, a zo ar rener braz.

Oc'hpenn kant soudard, labourerien douar araok ar vrezel, a zo bet resevet. Re all a gemero ho flas pa vezint bet desket aoualc'h. (Evit ar goulenn, skriva d'an *Office central agricole*, Landerne.)

Daou rumm zo. Lod, ar re zo biana ho bles, a c'hello distrei d'ar gear, eur pennadik goude beza bet ho gar, ho breac'h mekanik, ha staga evel araok d'ar memes labour, memes en ho farkeier. M'o deuz c'hoant evelato, e chommint pelloc'h er skol, evit deski labouriou hag a gresko ar gounidegez en ho zi.

An eil rumm eo ar re a zo bet tizet goassa, ne vezint goest mui da labourat evel guechall, e vezo red mad dezho deski eur vicher nevez, a c'hellit evelato da ober var ar meaz, evel ar jardinach, al labour-orjil, (vannerie) labour al leaz pe ar fourmaj, sevel ier, guenan, etc. An oll micherieu-se, pa vezont desket mad, a zo euz ar re vella. Peb hini a gemero an hini a blijo dezhan.

Pegeit e pado ar skol evit peb soudard ? Kalz pe nebeud, dioc'h ma vezo diez ar vicher... ha dioc'h ma poanio d'he deski. Ne gousto netra ar skol, nag ar hansion, ha zoken, pa ielo kuit peb soudard, e vezo roet dezhan, ma c'heller, eun tammik arc'hant, ha klasket dezhan eur plas, m'en deuz c'hoant.

Peseurt reolen a vezo heuliet e skol Penanrun ? Reolen eur famil gristen. Imaj St Sebastian, ar zoudard merzer, a zo lakeat azioc'h an or-dal, p'en em gaver ; imachou ar zent labourerien-douar, hag ar groaz, a zo e peb kampr euz an ti, her ro da anaout freaz awalc'h. Eur mestr a vezo, anat eo, mes eur mestr mad, ken tener he galoun ha ma z'eo digor he spered : an Aot. *Yhuel*, bet pell mestr-skol e Kastellin, boaz dioc'h ar vugale ha dioc'h an dud, atao karet gantho oll ; ha bet asambles sekretour ar Syndicat, troet oc'h an traou divar-ar-meaz, ha gouiziekl dioutho. Me zonzj d'in e kav'o d'ar zoudarded a vezo digemeret en he di beza c'hoaz er gear, kenteliet gant ho zad...

Maner Penanrun a zo e parrez Dirinon, eun dek minut ebken dioc'h Loperhet. Eun dudi eo guelet ac'hano an daolen a zo displeget dirag an daoulagad : guez huel ha kaer, eur jardin vraz, prajou, douar-labour, vardro eun tregont dervez-arat. An ti a zo koz, hag al lojamanchou n'int ket ken eaz ha ma vijent nevez, mez frankiz a zo da bep tra, arrebeuri, benviachou, ha loened.

Bennoz d'an Ao. 'n Eskop, en hano ar zoudardet, en hano al labourerien-douar.

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (14^{ved} listen)

METALEN SANT-JORJ (Russie), roet d'an Aotrou TIEC, a Bonte-Kroaz, kure Karmiez Brest, brancardier er 118° ; ha d'an Ao. QUEFFELEC, euz Dineault, beleget er sizun araok ar vrezel.

KROAZ A VREZEL gant ar palm. An Ao. **VAPE**, a Lanmeur, rejant e Sant-Visant Kemper, letanant : « D'an 23 a viz Gouere, en deuz henthet he zoudardet gant ar brasa ijin hag ar gaera kouraj ; anavezet dre-ze stad an enebourien, en deuz roet tro da baka eul leac'h difennet mad ha talvouduz meurbed. »

METALEN MILITER, An Ao. **TASSIN**, a Drégourez, belek-skolaer e Konk-Kerne, maro euz he c'houliou : « Caporal-brancardier n'euz netra en tu all d'he galoun ha d'he vaillantiz, ato prest da rekour ar re c'hlazet el leac'hiou danjerusa. Bet daou embann a honor. »

LAZET. An Tad **BOZEC**, a urz Sant-Visant a Baol, ginidik euz Gouézec, infirmier chasseurien. Lazet en eur rekour he gapiten var an dachen.

KROAZ A VREZEL. An Ao. **J.-L. ROUDAUT**, a Sant-Nouga, kure Plobannalec : « Brancardier leun a galoun, en deuz kaset d'an adrenv soudardet glazet dindan eur glao obuzou, ha kerc'het anezho beteg e kichen an enebour, var eun dachen goleet a vitrailleurouzou. »

KROAZ A VREZEL. An Tad **DURAND**, euz Plobannalec, manac'h a urz Sant Beneat : « Soudard euz an dibab, kalounek meurbed. Hardis kenan da furchal e trancheou an enebourien. Etouez ar re genta pa zaillaz ar gompagnunez da baka trancheou allmand. »

KROAZ A VREZEL. An Tad **COSQUERIC**, euz Plobannalec, manac'h a urz Sant Beneat, adjudant er 62°. Daou embann a honor : « Dispount ha seder, evel na veler ket alies, a c'hoar delc'her he zoudardet en urz en diesa darvoudou. » — « Eur skuer a vaillantiz, ato seder, ato remerket en oll stourmajou abaoue penn kenta ar vrezel. Da Nedelek 1915, en deuz kelc'het eur fort enebour hag a rankaz dre-ze en em renta. Bet glazet. »

(An Tad Durand hag an Tad Cosquéric a zeuz deuz ar broioù estren da gombali evit ar Frans, petra benag m'oañt bet harluet evel menec'h.)

KROAZ A VREZEL. An Ao. **KERMAREC**, a Blougastel, belek-skolaer e Plouzané, soudard en 219°. « En deuz adsavet ha saveteet meur a zoudard glazet, dindan eur glao tan, gant ar brasa kaloun. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. **LARNICOL**, kloarek e Kemper : « D'an 12 Even 1916, dispount ha seder dindan eur glao obuzou a gompaze an tranchee, en deuz taolet kuit, gant ar brasa vaillantiz, an enebour a zaille varnomp. »

KROAZ A VREZEL. Jacques **GUENNOU** (eil embann a honor). A Loperhet, kure e Plourin Montroulez : « En em ginniget a volente vad da glask an artilleurien glazet, dindan eur glao obuzou, abenn diou vech. »

KROAZ A HENOR. An Tad **BRANQUET**, a Gemper : « Aomnier volonter, var linen an tan abaoue daou vloaz ; ato eur skuer a vaillantiz hag a galoun ep he bar, o rei kaloun d'an oll. D'an 2 a Vengolo, derc'hent ar stourm, en deuz baleet el linennou kenta evit rei kouraj d'ar zoudardet entanet dre nerz he gomzou hag he skuer Epad tri dervez, en em skuzet ep ehan o sikour korf hag ene ar re c'hlazet. » — Goal c'hlazet e Combles, en diou c'har.

LAZET. An Ao. **BRETON**, kloarek a Blouguerné, aspirant er 1^{er} zouaved, lazet d'ar 7 a viz Du 1916.

LAZET. An Ao. **CLOASTRE**, kloarek a Gerber, aspirant er 118°, lazet d'an 30 a Here 1916.

LAZET. An Ao. Yves **VASSELET**, kloarek a Lothey, lazet d'an 13 a viz Du 1916.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
18 Du	Joseph Talarmin, Kelleret.	Jacq. Talarmin. Marie Talarmin.
18 —	Jeanne Potin, Kerveon.	Jean Perhirin. Joseph Potin.
23 —	Odette Yven, Argenton.	Alb. Talarmin. Jeanne Riou.
6 Kerzu	Marie-Yvonne Guéna, Kervizinic.	Pierre Guéna. M. Guennégues.
11 —	Jeanne-Léontine Quéré, Argenton.	Léon Quéré. Yvonne Allégot.
19 —	Victorine Perchoc, Lanhalès.	Yves Lescop. Vict. Morvan.

SAKRAMAMANT AR BRIEDELZ

A zo bet liammet gant eul lian santel ha n'euz nemet ar maro a c'helfe he derri :

25 Du	Yves Le Guen ha Félicie Gréac'h, Arc'hantel.
28 —	François-Marie Corre ha Marie-Anne Guennégues, bourk.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Engénie Morel. Suzanne Le Touz. Josephine Auffret.	Trede klas.	Marie Lescop. Bernadette Hamon. Marie Brénéol.
Kenta rummad.	Alice Henry. Yvonne Magueur. Georgette Bouquet.	Kenta rummad.	Françine Filly. Marie-Yvonne Pellen. Marie Bocheur. Marie Magueur. Léonie Bégoc.
Eil rummad.	Marie Gouzien. Louise Laot. Julianne Le Touz. Marie-Yvonne Allégot. Germaine Bellec. Marie-Yvonne Ketros. Philomène Cornen. Lucie Bégoc.	Eil rummad.	Pélagie Sylvestre. Julie Talarmin. Jeanne Magueur. Louis Lunven. Yvonne Querné. Alexandrine M. rzin. Marie Bizien (Kellerou). Marie Bizien (Kerguénab). François Corolleur. Joseph Bizien. Tanguy Eliès. Herveline Saliou. François Cong. Joseph Magueur. Joseph Cadalen. Prosper Allégot.
Eil klas.	Françoise Brénéol. Marie-Anne Mingant. Louise Kermorgant. Jeannie-Yv. Trébaol. Léontine Michel.		
Kenta rummad.	Josephine Bouquet. Anne-Marie Jacq. Josephine Trébaol. Marie-Yv. Richard.		
Eil rummad.	Bernadette Jaouen. Françoise Forest. Philomène Le Borgne. Yvonne Abjean. Josephine Gouzien. Ernestine Brénéol. Hélène Géléhart.		

17 GENVER 1917

Eskipien zo, e Frans, hag o deuz aotreet ar vœu a zo ama varlerc'h :

Ma plij gant ar Verc'hez kas ar Brusianed kuit euz douar Frans a benn ar 17 a viz Genver 1917, eur chapel a vezo savet dezhi e Pontmain. (E Pontmain, d'ar 17 a viz Genver 1871, ar Verc'hez en em ziskuezas da gemenn fin ar vrezel all).

Na livirit ket : « Biken ne vezint eat kuit d'an deiz-ze ! » Pe-

rag ? Abalamour ma vije eur mirakl ? Michans, n'eo ket deomp-ni lakaat eun termen da c'halloud ha da vadelez Mamm Doue !

Dalc'hit sonj. Ar roue Sennakerib, guechall-goz, a ioa varned paka kear Jerusalem. En eun nozvez, Eal an Ao. Doue a lazaz 175 mil soudard dezhan, ha kear a oue delivret. Ha diesoc'h e vije hon delivra ?

Na livirit ket : « Doue ne fell ket dezhan. » Ne ouzoc'h ket. Prometit sikour sevel ar chapel, da genta, ma teu Mari d'hon delivra. Ne baoc'h ket ma n'oc'h ket selaouet : mes promettit, hag e viot selaouet !

AR VREZEL

Da vouela hon deuz adarre var maro daou deuz hor zoudardet : Jean-Marie Jollé, deuz Tremazan, 24 bloaz. Epad ma kasse boued d'he gamaraded eo bet lazet var he auto gant eun obus talet euz eur c'har nij.

Jean Squiban, deuz Kernezoc, 43 bloaz, a zo maro dre ar gouliou great gant eun obus. 15 dervez en deuz tremenet en eun hospital e Troye. Digemeret en deuz ar maro, rezinet da bolontez Doue, goude beza resevet he zacramanchou gant ar feiz ar brassa. Doue emezhan ne zilezo ket va fried ha va bugaligou.

Setu eno ar pezh en deuz skrivet al leanez a ioa var he dremen- van. An Aotrou kure, infirmier e Troye, a ias d'he anterramant hag a heuliaz ar c'horf betek ar bez.

Setu ama adress an Aotrou kure oamp bet ken eüruz da glevet o kana deomp an ofissou da c'houel an Oll-Zent ha da c'houel an Anaoun.

(Monsieur Vincent Caroff; infirmier 11^e section, ambulance 11/12. Secteur postal 29.)

Da ober ho hanter heur adoration d'an trede sul 14 a viz Genver :

11 h. 1/2. Marie-Jeanne Magueur, Tour ; Joseph Kerros, Prat-Kerguérioc ; Marie Perchoc, Traon-Bian ; Joseph Perchoc, Kervéléoc.

12 h. An Aotrou Persoun ; Guillaume Lescop ; Jean Guennéguès ; François Corre, Bourk.

12 h. 1/2. Ar skol gristen.

1 h. Marie L'Hostis ; Marie Le Ven, Bédiès ; Anna Scieller ; Guillemette Léostic, Kerguérioc.


1 h. 1/2. Françoise Trébaol ; Renée Thépaut, Kernézoc ; Louise Perchoc, Kespernic ; Joseph Kervennic, Kéristin.

Kannadik miz kerzu en deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea digant : M. C., P. J., A. B., peb a 8 real ; H. G., J. R., M. G., A. C., M. P., J. L., J. S., J. B., peb a 4 real.

Doue r'ho faëo.

KANNADIK

PARREZ



MIZ C'HUEVRER

2. *Guener kenta*. AR CHANDELOUR. Jezuz a oue kinniget en Templ, da Zoue he dad, gant ar Verc'hez ha sant Jqseph, evel eur viktim evit silvidigez an dud. Ar Verc'hez he-unan en em ginnigaz e viktim, gant he C'haloun dibec'h a dlie beza treuzet gant seiz kleze a c'hlaç'har. — Kinnigomp da Galounou Jezuz ha Mari hor poaniou, klenvejou, ankeniou, evit ho digoll hag evit konversion ar bec'herien.

4. SUL AR SEPTUAJEZIM. — El lizer skrivet gant Sant Paol da dud Korint (e Bro Gres) e lennomp ar geriou-ma : « Kement hini a stourm, a ziouer meur a dra ; ha kementse evit eur gurunen hag a c'hoenvo. Ni, kristenien, a stourm evit eur gurunen ha ne c'hoenvo morse. » Kouraj ha fizians eta : ar boan a dremenno ; an digoll a bado.

11. SUL AR SEXAJEZIM. En eil lizer S. Paol da dud Korint, S. Paol a lavar an oll dourmanchou en deuz gouzanvet. Goude beza pedet an Ao. Doue a benn teir guech da bellaat ar C'halur c'huero diouthan, n'en deuz resevet nemet ar respount-ma : « Va gras a zo aoualc'h d'it. » Bezomp pasiant eta. Goulennomp gras Doue, deuomp d'he c'haout er Zakramant, ha ne vezo poan ebet re ziez da c'houzanv.

18. SUL AR C'HARANT-HEUR. Frouez lizer S. Paol : an humilite, ar garantez. Kaer e vije d'in, emezhan, ober an traou kaera, ma n'oun ket humbl ha karantezuz, ne dalvezan seurt. Dirag ar Zakramant meulet ra vezo, en em c'hreat ken dister dre joaouzomp, goulennomp digant Jezuz ma vezo hor c'halounou henvel ouz he Hini.

21. MERC'HER AL LUDU. En eur reseo al ludu var hon tal, sonjomp e vezimp dizale henvel ouz ar meutad ludu-ze, hor c'horf eat da netra, hon ene eat da be leac'h, purkator, baradoz, pe iferrit? Sonjomp ive er zoudardet keaz chommet var an tachennou brezel, da vreina, da vont e ludu, ep beza bet na sebeliet na beziet, ha pedomp eyit ar re a varvaz evit difenn ac'hanomp.

25. SUL KENTA AR C'HORAIZ. « Setu brema amzer ar zilvidigez » eme S. Paol el lizer hanvet « an abostol ». Arabad laosker da vont da goll gras an Ao. Doue. Dre an oll vertuziou, dre ar binijen dreist-oll, en em ziskuezomp diskibien guirion da Jezuz. Piou c'hoar ma n'ema ket an Ao. Doue o c'hedal eur C'horaiz great mad evit lakaat fin da voaligner ar vrezel ?

28 C'huevrer, 2 ha 3 Meurs, IUN HA VIJIL ar PEVARE AMZER.

2 Meurs. Guener kenta.

4 Meurs. Eil sul ar C'horaiz.

Lezennoù ar C'horaiz

Ar C'horaiz zo eun amzer a binijen, hag a dle prepari an eneou da c'houeliou Pask. Setu perag

477

DA GENTA, N'HELLER KET EUREUJI gant solanite adalek merc'her al ludu beteg goude sul ar C'hazimodo. An dud o deuz eur rezoun braz hag a vir outho da c'hedal evit ho dimezi, a rank goulenn dispans ha paea eun amand (20 real). Ha c'hoaz, n'eo ket permettet seni ar c'hleier na rei bennoz ar priejou. Ar bennoz-ma a dle beza resevet divezatoc'h, an abretta goude Pask.

Ne vije ket deread en em rei da levenez an eured, banket, soniou, dansou hag all, pa ema ar gristenien oc'h ober pinijen var skuer Jezuz-Krist hag a dremenaz 40 dervez ha nozvez ep debri nag eva.

D'AN EIL, RED EO IUN. An dud a dle iun eo ar re o deuz 21 bloaz echu, nemed ar gozni, pe ar c'hlenved, pe ho labouriou tenn a virfe outho ; ar gragez zo o tougen pe o vaga n'o deuz ket da iun.

Ar re a zo dindan lezen ar iun ne c'hellont dibri kig d'ar merc'her ha d'ar guener, e pred ebet. Da lun, meurs, iaou, sadorn, e c'hellont dibri kig da eur pred epken. Da zul, kig d'an oll prejou. Morse hed ar C'horaiz, na sul na pemdez, ne c'heller dibri er memes pred kig ha pesked. D'ar pred bian, ar viou n'int ket permettet d'an dud a iun.

Ar re ne iunont ket a c'hell dibri kig ha viou d'an oll brejou, nemet e rankont ober vijil d'ar merc'her ha d'ar guener.

An oll a rank ober vijil d'ar Pevare Amzer, hag e pevar dervez diveza ar Sizun-Santel.

An oll a c'hell aoza boued vijil gant gres eleac'h amann, e doug ar bloaz. Goulskoude, nag ar viou nag ar gres n'int permettet, da zen, dez Guener ar Groaz.

Erfin, nep a zebr kig er C'horaiz dre zispans, a rank lakaat eun aluzen e kef ar C'horaiz, peb unan ervez he c'halloud e leal, evit oberiou kristen an eskopti. Ar beorien ne c'helfent ket ober eun aluzennik zoken dister, a lavaro bep sizun epad ar C'horaiz 5 Pater ha 5 Ave evit ezommou an liz, ar Frans hag an eskopti.

Greomp hon tammik pinijen gant kouraj. Petra eo e skoaz poaniou, hor zoudardet ? e skoaz ar Purkator ? e skoaz ar Basion gouzanvet evidomp gant Jezuz, roue ar Verzerien ?

AR VUGALIGOU

Pa'z edoum oc'h ober listen ar vugaligou badezet en iliz parrez er blavez tremenet, eur zonj a droe dalc'had e va spered :

— Petra deuit da veza, an ealigou-ma ?

Ne lavaran ket ar re anezho nijet dioc'htu d'ar baradoz. E kichen ar c'havel gullo, ar vamm a skuill daelou : ha goulskoude ! N'e deuz mui enkreuz ebet da gaout evitho. Dre an hent berra, dizanjer, an Ao. Doue en deuz galvet anezho. Ganthan emaint. Ar baradoz zo ho c'hear. An Elez hag ar Zent zo ho breudeur. Euruz int, hag ho eurusdet a bado da viken. Na lenvomp ket varnho : meulomp Doue !

Mes ar vugaligou all, ar re a vev hag a vevo pell hag hir mar plij gant Doue ? Oll int henvel brema. Ar vadiziant e deuz roet ar memes gened dezho oll. Varc'hoaz, a benn dek vloaz, epad an eternite, petra vezint ? ato henvel, pe dishenvel ?

Eur vamm a lavaro marteze, pa zello ouz he c'hrouadur luskellet :

— Me garje e vije pinvidik va map !

Eur vamm all, oc'h he starda var boul he c'haloun, a lavaro :

— Me garje e ve krenv evel an dir !

Eur deirved, o velet he merc'h laouen en eur c'hoari, a zonjo :

— Oh ! ra vezi euruz hed da vuez, va merc'h !

Pe c'hoaz : « Ra vezo va c'hrouadur kaer evel an deiz ! »

« Ra jomo pell var an douar ! » — « Ra vezo mad bepred ! »

Marteze hiniennou a lavaro : « Me garje kaout evit va mab an oll donezonou, oll madou ar spered hag ar galoun. »

N'euz nemet ar vamm gristen hag a ouezo ar guella tra da reketi d'he c'hrouadur : « Ar pezh a c'houlennan ouz Doue evit ar map, ar verc'h, en deuz roet d'in, — an donezoun presiuz a reketan dezhan, dezhi, a zo : ra vezo eur zant, ra vezo eur zantez ! »

Ha ne gav ket deoc'h eo ar vamm diveza-ma hag a gar he c'hrouadur ar muia hag ar guella ?

Mammou kristen va farrez, ra vezo ho pugale oll sent ha sentezed !

Ne c'heller ket kaout ar peoc'h brema dioc'htu

Ar peoc'h dioc'htu ? eun uvre, hag eun uvre fall.

Eun uvre. Ar Frans e deuz sinet eur c'hontrad gant ar Russi, gant Bro-Zaoz, gant an Itali, ar Beljik, ar Serbi, ar Roumani. Dre ar c'hontrad-se, ar poblou unanet o deuz diskleriet ha touet ne asanto hini anezho da zina ar peoc'h, nemet aotreet e vije gant ar re all. Ogen, ar Serbi ne c'hell ket c'hoantaat ar peoc'h brema, pequir an Allmantet a fell dezho delc'her ho bro dindan ho seul.

Ar Beljik a vije d'an Allmagn ma vije hou-ma goest da rei deomp eur peoc'h ervez he zonzj : ar Beljik a refuz ar peoc'h-se. Ar Russi a lavar : « Peoc'h ebet, nemet eur peoc'h a restaolo hon douarou deomp ! » Bro-Zaoz ne zino ar peoc'h nemet goude beza kaset an Allmagn da netra. Kendaze, ar Frans, liammet gant he le, ne zino ket ar peoc'h araok ar re all. Goulen ar peoc'h, brema, zo eun uvre.

Hag eun uvre fall. An Allmagn a vije kontant da gaout ar peoc'h.

Perag ? Abalamour e deuz manket he zaol en dro-ma. « A benn tri bloaz, emezhi, an Allmagn a vije krenv adarre, ha krenvoc'h kalz. Diskleria a rafe ar vrezel eun eil guech, ha ne vije pobl ebet o telc'her dirazhi ! » Petra gavit guelloc'h, Fransizien ? Kendelc'her eur pennad c'hoaz, flastra an Allmagn evit mad, ha miret ne zavje eur brezel all da bulluc'ha ho pugale ? Pe, a hent all, tarda dioc'htu ha beza galvet adarre abenn tri bloaz, evit beza maleuruz adarre, ha kaout lamm marteze ?

Pasianted eun nebeut c'hoaz : heur an Aô. Doue zo tost !

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (14^{ved} listen)

KROAZ A VREZEL da dri c'hloarek a Gemper. An Ao. CLOASTRE, aspirant en 118°. Lazet : « Dispount, kalounek, skuier a vaillantiz hag a nerz-kaloun. En deuz dalc'het he zoudardet dizaoun dindan eur glao obuzou. Dizamant euz he boan hag euz an danjer, en deuz poaniet da gempen al linen kenta. »

An Ao. MOENNER. « Brancardier abaoe ar penn kenta. Ato remerket evit he labouriou, pegen braz benag oa an danjer, dreist oll e Verdun, en Ebrel 1916. »

An Ao. ROUDAUT, 20 vloaz. « En deuz saveteet daou gamalad beziet gant eun obus, petra benag e ranke labourat dindan an tan spontusa. »

PEVARE EMBANN A HENOR. « An Ao. François LE GALL, a Rosnoën, rener skol gristen Kerfeunteun, aomonier volontaire er 408° (ar Groaz a henor a oue roet dezhan e Verdun). « N'en deuz ket he bar. D'ar 17 a Vengolo ha d'an 10 a Here 1916, a zo eat en tu all d'he c'halloud evit sikour ar re c'hlazet. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. THEPAUT, a Blouzéniel, kure e Goulien, infirmier en 219°. « En deuz dastumet kalz soudarded glazet, hag ententet outho, dindan eur glao braz a obuzou, dizamant d'he vuez. »

KROAZ A VREZEL. (eil guech). An Ao. PENGAM, a Blouzéniel, kure Sant-Hernin, caporal brancardier en 219°. « D'an 31 Eost 1916, a zo eat da zelvira soudardet beziet gant eun obus. Da bar-daez, var an dachen dizolo, en deuz ententet ouz kalz a re c'hlazet, ha digaset korfou eleiz en hon linennou. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. FAILLER, a Blounéour-Lanvern, kure Sant-Segal, brancardier : « Leun a galoun, dizamant d'he boan, en deuz refuzet dilezel eur zoudard glazet hag en em gave dindan an obuzou. En emgannou adalek ar 24 betek an 28 a Here 1916, en deuz adzavet ar re c'hlazet e kichen an trancheou allmand, daoust ha d'an obuzou. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. BRENEOL, a Gemper, kure er Piliier-Rouge Brest, caporal brancardier en 298° (fort de Vaux). « Ato remerket en danjer ar brasa, dindan an tan goasa, ato oc'h adzevel ar re vleset en linen kenta. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. GUEGUEN, a Sant-Marc, kloarek, soudard er 95°. « Dindan eur glao obuzou ne darde ket, en trancheou an diesa, enterret ha bronduet meur a dro, en deuz dalc'het kaloun ha penn, o teuler ivez gant vaillantiz ouz eur post an danjerusa. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. KERJEAN, a Sant-Marc, kloarek, soudard en 248°. « Epad pevar dervez dindan an obuzou ep paouez, en deuz baleet kalounek etre ar c'holonel hag ar gompagnunez da gas an ursiou. »

KROAZ A VREZEL (eil guech). An Tad Charles ROUDAUT, a Urs Mari, a Blouguerne. « Caporal dispount, goal c'hlazet gant eun obus teo, en deuz roet ar gaera skuier a nerz-kaloun, en deuz refuzet beza kaset d'an adrenv var ar c'hravaz, o lavaret : « Ma zail an Allmandet varnomp, me fell d'in beza gant va skouaden. » N'en deuz asantet mont da gaout ar medicin nemet var urz he officer, ha goude beza sellet piz ma 'z edo he zoudardet oll en ho' fost. »

KROAZ A HENOR. An Ao. Adolphe BELLEC, a Benze, persoun ar C'hloastr-Pleyben, aomonier ar 61° division (219, 318, 262, 316). Bet kentoc'h ar groaz a vrezel. « Var linen an tan abaoe ar penn kenta. Ato en danjer brasa. En deuz sikouret ep ehana korfou hag eneou ar zoudardet, dindan ar glao spountuz a obuzou, epad emgannou ar Somm. »

Pemp belek a eskopti Kemper o deuz bet ar groaz a henor bete vrema : An Tad Gauthier, jezuit a Gemper, lazet abaoe ; an Ao. Bellec, persoun ar C'hloastr ; an Ao. Madec, kure ar Relecq ; an

Ao. Le Gall, rener skol Kerfeunteun ; an Tad Branquet, a Gemper.
Epad ar blavez diveza, dek belek-soudard euz an eskopti a zo bet lazet er vrezel, ha c'huec'h kloarek. — Ra blijo gant Doue diouall ar re a jom beo : ar barrisoniz, pa vanko ar veleien, a gavo kerse !

AR VREZEL

Pedomp evit Jean-Marie Cadalen deuz Kelleret, 29 bloaz, ha Joseph Théréne deuz Kerc'hoazoc, 24 bloaz ; o daou bet diskaret var an dachen a vrezel.

E « congrès » ar Zakramant great e parrez Landunvez tri bloaz a zo bet da viz gouere diveza, Tad ar retred a c'houlennaz digant ar barrisoniz en diviz great gantho var Zakramant an Aoter, penaoz e c'heljent dont aliessoc'h d'an iliz da adori an Doue zantel kuzet a zindan spesou ar bara ?

Jean-Marie Cadalen a respountaz : kementze a ve eaz da ober. Pa deuer d'ar bourk var ar pemdez da ober eur gevridi e leac'h choum eur c'hart d'heur pe marteze eun heur da gounta komzou didalvez en ti ma vezer deuet e c'helfet mont d'an iliz eur pennadik evit lavaret da Jezuz e karomp anezhan hag e c'houlennomp diganthen he vennoz. D'ar zul eo ivez, emezhan eaz mont da adori Jezuz. N'euz nemet en em gavout er bourk 15 minut araok an oferen pe ar gousperou pe choum eur pennad en iliz da c'houde an ofissou. An tamik amzer-ze lakeat da drugarekaat Jezuz da veza choumet ganeomp e sakramant an Aoter, a denfe varnomp grasou puill an Aotrou Doue.

Pa glevjon oa bet diskaret Jean-Marie Cadalen er brezel e teuaz da sounj d'inn deuz e komzou hag e lavarchen ma n'en deuz great he-unan an ali mad a roe d'ar re all e ma a dra sur breman en eurusted ar baradoz o veuli Doue evit atao.

MEULED

Setu ama penaoz eo bet meulet gant he vistri : Bossard, Yves, de Penkear, soldat de la compagnie de mitrailleuses. A assuré avec beaucoup de zèle et de dévouement les fonctions d'agent de liaison dans un secteur violemment bombardé. »

Beza en devezo ivez ar groaz a vrezel.

Jean Squiban deuz Kernezoc a ziskouezaz kement a nerz kaloun var an dachen a vrezel, m'ar deo bet digasset d'he bried goude e varo : ar groaz a vrezel gant : « palmes » hag ar vetalen militaire.

Eur vech c'hoaz muioc'h, e pedan ar zoudarded hag ar vartoloded pe ho familhou da zigass kelou d'inn p'o dezho resevet kroaz pe vetalen pe pa vezint bet meulet.

Punitions infligées aux Enfants

Les parents soucieux de leurs graves devoirs ne doivent ajouter qu'une foi très restreinte et toujours très défiante aux excuses

de leurs enfants quand, aux écoles, ou, aux catéchismes, on est obligé de les punir.

Quelques parents sont assez faibles et, il faut le dire, assez mal avisés pour donner raison à leurs enfants et tort à leurs maîtres. Il serait pourtant bien mieux et bien plus raisonnable de dire et de supporter que si M. le Curé ou les maîtres et maîtresses ont cru devoir punir un enfant, ils ne l'ont pas fait par un simple caprice, mais bien parce que c'était nécessaire. Si, au lieu de donner toujours raison à l'enfant, le père et la mère le punissaient à leur tour, l'enfant se corrigerait mieux et plus vite de ses défauts, ce qui lui serait beaucoup plus salulaire qu'une indulgence aveugle. Cette sorte d'idolâtrie de certains parents pour leurs enfants est une maladie qui ne devient que trop commune. Il faudrait y remédier. Aux yeux des parents idolâtres, les enfants sont toujours des perfections, et pendant ce temps-là ces enfants deviennent d'autant plus vicieux qu'ils sentent qu'ils sont approuvés et qu'ils sont plus sûrs de l'impunité.

Croyez toujours que, lorsque l'enfant se conduit bien au catéchisme et à l'école, il est toujours bien vu et justement apprécié. Soyez bien persuadés que toutes les fois qu'on l'a repris et même puni, c'est qu'il l'a mérité.

N'oublions pas que les efforts de ceux qui sont chargés de la formation morale et intellectuelle des enfants ne sont efficaces que lorsqu'ils sont secondés par les parents.

L'éducation des enfants est une mission rude et difficile ; il faut à ceux qui l'accomplissent un courage beaucoup plus grand qu'on ne se l'imagine. Pourquoi leur rendre la tâche encore plus pénible et les décourager par une désapprobation injuste quand ils font leur devoir ?

Comme on ferait pourtant de la bonne besogne si tous les parents étaient assez raisonnables pour comprendre que leurs enfants ne sont pas parfaits et qu'il y a beaucoup à faire pour les rendre un peu meilleurs, pour former leur esprit et leur conscience. Comprenons bien cela, mes chers paroissiens et tout ira mieux.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Eugénie Morel. Joséphine Auffret. Yvonne Magueur.	Trede klas.	{ Marie-Anne Kerjean, Haudes Talarmin. Francine Fily.
Kenta rummad.	{ Madeleine Prigent. Marie-Yvonne Cong. Georgette Bouquet.	Kenta rummad.	{ Marie Talarmin. Marie Bocheur. Jeanne Quéna. Marie Morvan. M. Magueur (Lanneuron). Marie Cong. Léonie Bégoc.
Eil rummad.	{ Marie Gouzien. Marie-Yvonne Allégot. Philomène Cornen. Louise Laot. Joséphine Fourn. Marie-Yvonne Kerros. Isabelle Guona.	Eil rummad.	{ Philomène Autret. Pélagie Sylvestre. Julienne Didou. Jean Morel. Alexandrine Marzin. Marie Pérès. Paule Autret. Marie Bizien (Kerguénab). Marie-Yvonne Kervran. Ernestine Talarmin. Françoise Uguen. Françoise Guéna.
Eil klas.	{ Noëlie Lesvénan. Marie-Anne Mingant. Jeannie Magueur. Josephine Trebaol. Léontine Michel. Marie-Yv. Richard.		
Kenta rummad.	{ M. Magueur (St-Samson). Joséphine Gouzien. Yvonne Abjean. Hélène Gélébart. Françoise Kervran. Joséphine Quéméneur.		

BADIZIANTOUJ

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Itr, breudeur da Jezus-Krist, heritourien ar Baradoz :

- 31 kerzu. Victor-Dieudonné-A. Marzin, Arc'hantel : paëroun, an Aot. Pierre Briat ; maërounez, an Itr. Jeanne Coantic.
14 gúenver. Yves-Marie Talarmin, Tremazan : paëroun, François Talarmin ; maërounez, Catherine Talarmin.

A zo bet gourvadezet

- 29 kerzu. Krouadur Le Mest, Kerzent

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'hedal deiz ar varn diveza, e goasket ar grôas :

- 17 genver. Yves Héliers, 76 bloaz, Bourk.

Eat d'ar Baradoz

- 21 kerzu. Jeanne-Léontine Quéré, 10 dervez, Arc'hantel.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion da zut al Lard, 18 a viz C'houevrer ;

11 h. Marie-Jeanne Bizien, Josèphe Cloâtre, Kelleroun ; Françoise Guennégues, Kerc'hoézel ; Marie Cozien, Keristin.

11 h 1/2. An Aotrou Persouin, Guillaume Lescop, Joseph Vaillant, Hervé Salaün, Bourk.

12 h. Heodez Lescop, Eliça Pérès, Anna Squiban, Marie-Anne Cloâtre, Bourk.

12 h 1/2. Skol gristen.

1 h. Françoise Arzel, Marie Le Hir, Marie-Renée Thépaut, Kernézoc ; Marie-Jeanne Kerjean, Bourk.

1 h.1/2. Marie-Renée Michel, Françoise Roudaut, Augustine Cadour, Marie-Anne Le Ven, St-Gonvarc'h.


Kannadik miz genver en deuz koustet 20 lur 10 guennek.

Bet evit sikour e baea digant : M. L., J.-M. Q., M.-J. K., peb a 8 real ; V. M., 6 real ; M.-Y. L., 4 real 4 guennek ; J. K., J. K., B. J., peb a 4 real.

Doze r'ho faëo.

KANNADIK

PARREZ



MIZ MEURS

Delc'her sonj euz ar Pevare-Amzer (dimerc'her 28 a c'huevrer dirguener ha disadorn 2 ha 3 a veurs) IUN HA VIJIL, da ginnig an Nevez-Amzer da Zoue.

2. GUENER KENTA. Kaloun Sakr Jezuz, kinnig, a reomp an offeren hag ar gommunion a zigoll evit konsoli ac'hanoc'h euz pec'hejou añ dud ne reont na Koraiž ebet na pinijen, hag evit obten ho c'honversion.

4. EIL SUL AR C'HORAIZ. Lizer S. Paol da dud Salonik, o c'hourc'hemen dezho beza pur a galoun hag a gorf, mad ha karantezuz : « rag, emezhan, an Ao. Doue n'en deuz ket galvet ac'hanoc'h da veza tud fall, mes sent. » Dioc'h ma raimp, e kavimp. Ma fell deomp beza selaouet gant Doue, arabad sevel etrezomp hag hen moger hor pec'hejou.

11. TREDE SUL AR C'HORAIZ. Lizer S. Paol da dud kear Ephez (Azi Izela) « Bezit henvel oc'h Doue en oc'h oberiou, evel he vugale muia karet. Baleit dre hent ar garantez, evel m'en deuz Jezuz hor c'haret, hen, en em roet evidomp en eur en em ginnig da Zoue evel eur viktim a c'huez vad. » Ma henoromp ar zoudardet a varv evit delivra ac'hanomp euz a dre skilfou an allmandet, pebez henor e vankomp da Jezuz, a varvaz evit hon tenna euz a dre skilfou Satan, euz an ifern !

18. PEVARE SUL AR C'HORAIZ. Lizer S. Paol da C'hallaoued an Azi. Bannit kuit kement tra zo kountrol d'hi silvidigez : an orgouil, ar goal ioulou, an tech d'ar pec'hed. Evelse epken on devezo ar rekompans eternal. (Gallaoued an Azi a ioa euz lignez soudardet diskennet eno euz a Vro-Frans).

25. SUL AR BASION. — Lizer S. Paol d'ar Iuzevien. « Dre he c'hoad eo en deuz Jezuz prenet deomp hor zilvidigez eternal. Abalamour d'ar maro en deuz gouzanvet, evit rapari pec'hejou an dud en amzer goz, an dud galvet ganthan a reseo an heritaj eternal bet prometet dezho. » Arabad saotri ha koll hon ene, a zo koustet ker d'Hor Zalver ! — GOUSPEROU KENTA GOUEL ITRON VARIA VEURS.

26. Lun. ITRON VARIA VEURS : ar Verc'hez Vari kemennet dezhi e vezo mamm Doue. Perag map Doue en em c'hreaz den ? Abalamour an den ne c'hell ket ober pinijen aoualc'h, ha goulskoude an den eo en deuz pec'het hag e rank rapari. A hent all, eun Doue ne c'hell ket gouzanv. Setu perag eun Den-Doue a rankaz beza, hag a reaz pinijen evidomp pa'z eo den hag a raparaz aoualc'h pa'z eo Doue. Gouel an Inkarnation eo hirio.

1 Ebrel. Sul Bleuniou.

6 Ebrel. Guener kenta : GUENER AR GROAZ. Ne vez ket kommunit en dervez-ma.

Sonjezonou Koraiž : ar Maro

Lavaret a rit : « Sonjar er maro ! Neuze n'heller ket beva ! » — Ne c'heller ket beva evel eun dizoue, guir eo. Bevit evel ma plij gant Doue, ha sonj ar maro ne vroudo ket ac'hanoc'h.

Lavaret a rit : « Eur vech maro, maro tout ! » An anevaled, ia. An dud, nann. Hon ene ne vary ket.

— Lavaret a rit : « Diskiant eo sonjal er maro ». N'eo ket. Rag an traou diskiant ne zonzont ket er maro. Eun dra fur eo, zoken, sonjal e varvoc'h. Goude ar maro, ar varn. Dioc'h ar varn, an euruzted pe ar goaleur eternal. Hag ar varn a vezo dioc'h hor buez, dioc'h hor zonzou, komsou, oberou... Sonjit er maro, hag e viot furoc'h.

Lavaret a rit : « Amzer zo. Ne varvin ket c'hoaz. » Pet er barrez a varvo er bla-ma ? er miz-ma ? Pet o devezo eur maro trum, na resevint ket ho sakramanchou ? Ha c'houi a oar peur e teuo ho tro ? Ha c'hui a c'hello appelli an termen pa vezoc'h galvet ?

Bezit prest !

Lavaret a rit : « Fors aze, leve zeuz. Me c'hell beva eaz. » Ha pa vije mil guech muioc'h a leve, n'o pezo morse aoualc'h da brena gantho eur plasik er baradoz ! Ar maro ho kaso da baour. Oc'h oberiou mad, n'o pezo tenzor all ebet !

Lavaret a rit : « Goulskoude me garfe beva ato. » Neuze, va faotr, va merc'h, sentit oc'h Doue, hag e roio deoc'h ar vuez eternal. Evelse bezet great !

AR C'HATEGISMOU

C'hui a fell deoc'h e ve desket mad ho pugale. « Brema, eme-c'hui, e ranker kaout deskadurez. » N'eo ket ho persoun eo a lavaro kontrol ! Amzer aoualc'h en deuz tremenet er skoliou, a drugare Doue.

Mes dalc'hit sonj, ar gelennadurez talvoudusa, — ha zoken n'euz nemethi hag a zo red — eo ar gelennadurez kristen, eo ar c'hategismou.

Skiantchou ar bed a zervich evit ar bed-ma : nebeut amzer ha nebeut a dra. Skiantchou an Env a zervich evit an Env : eun eternite, an eurusted parfet.

Beza desket a zo mad. Mes deskadurez eun dizoue a zervicho dezhan enep ar mad, ma kar.

Kaout eur spered lemm a zo brao. Kaout eur galoun ehun a zo guelloc'h.

Beza eun den a galoun a zo mad. Anaout, karet ha kaout kaloun an Den-Doue Jezuz a zo guelloc'h. Ennhan eo e kav an den ar brasa kouraj, pasianted, levenez, e trubuilhou ar vuez-ma.

Hap e pe leac'h e vezo anavezet Jezuz ? e pe leac'h e vezo desket lezen ar mad, hent an eurusted ?

Er c'hategismou.

Kasit eta ho pugale d'ar skol-katekiz. Grit dezho deski ho c'henteliou. Tostaat a ra goueliou Pask : ho pugale o deuz ho fask da ober. Abenn tri miz, en em gavo Pask solanel ar vugale : ha desket aoualc'h int da gaout ho fask ? En em gemerit e poent hag en amzer : divezatoc'h e vezo re zivezad.

Na livirit ket : « Labour presetoc'h zo brema, gant ar vrezel. » Ger diskiant ha fallakr ! Roit da Zoue ar plas kenta en ho ti, en ho labour, en ho tervez : hen ho sikouro, bezit dizoursi.

Ha klevit ar peñ a lavare tud hag o doa muioc'h a spered hag a zeskadurez eget n'hon do morse.

Jouffroy a lavare d'he bersoun : « Deskit mad he c'hatekiz da va merc'h. Me meuz lennet an oll heuriaou. Hini ebet na dal kement hag eur bajen katekiz. »

Odilon Barrôt : « Bep tro ma klevan recita ar c'hategismou e teskan eun dra nevez benag. »

Napoléon kenta, o sevel eun ti-skol evit paotrezed an offiserien maro er vrezel : « Savit' deomp, emezhan d'ho mestrczed, plac'hed a feiz, da genta ! »

Ha Victor Hugo, e 1850 : « Ar gerent hag a laka ho bugale er skolioù merket varnho : Ama ne vez ket desket ar relijion, .. ar gerent-se a dlefe beza kaset dirag ar barner. Ne fell ket d'in e ve difennet deski ar c'hatekiz. Pell ac'hanô ! Eun dra red eo e ve desket, muioc'h eget biskoaz. »

Klaskif bolontez Doue da genta, eme Jezuz, hag ar rest a zefio deoc'h var ar marc'had.

ENEP AR BANNEOU

(Kemennadurez aberz an Ao' n eskop)

Ar Groaz Ven, rumm katolik Emgleo Frans enep ar banneou, a bed an oll Fransizien da c'houlen digant ar c'houarnamant ma vezo fardet eul lezen da zifen eva banneou, hini krenv ha likurioù g'reat ganthan.

N'euz ket da boueza kalz var an izotum a zo da enebi ouz an evach; aliez hon deuz diskuezet dre goms ha dre skrid pebez danjer ha pebez drouk a deu da heul ar banneou. Oc'hpenn, dre ar vrezel eo embannet muioc'h-mui an dever a zo da drec'hi an tech milliget.

Tud ha traou zo a glask kaeat ouz al lezen a c'houlennomp. Red eo eta sina feuilennou-petition, niveruz aoualc'h evit kas da netra, e berr amzer, kement a virfe ouz hor mennoz da vont da benn.

Ar feuilennou da zina a vez kavet e ti Emgleo Frans (Ligue nationale contre l'Alcoolisme, 147, boulevard Saint-Germain, Paris 7^e).

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL (15^{ved} listen)

KROAZ A VREZEL. An Ao. Jaouen, brancardier, evit he vailantiz da adzevel ar re c'hlazet dindan eun tan ar spontusa, hag evit he vadelez a ra d'an oll karet anezhan.

KROAZ A VREZEL (eil guezh dezhan) An Tad ROUDAUT, a Blouguerne, a urz Tadou Mari, caporal-brancardier, remerket adarre evit he gouraj hag he galon vad.

KROAZ A VREZEL. An Ao. KERAMOAL, euz ar Relecq, kure e Douarnenez, brancardier-aumônier en 19^e : « Skuer a gouraj hag a galoun. Var linen an tan abaoue miz east 1914, ato prest da vale d'al leac'hiou danjerusa evit sikour ar zoudardet, ken ar c'horfou, ken an eneou. »

KROAZ A VREZEL (trede embann a henor). An Ao. MARTIN, a Nevez, kure Plouvorn : « Eh deuz diskuezet eur gouraj hag eur vadelez dispar epad emgannou an 11 a gerzu 1916, en eur vont a zirag hon linennou da adzevel an dud c'hlazet ha da vezia ar re varo. »

ESPERNIT

Ar Frans e deuz mizou spountuz gant ar vrezel. Piou a baeo ? An Allmandet a baeo eul loden. Mes al loden all a guezio ato

var ar Fransizien. An traou zo ker brema : kerroc'h e vezint. Euz meur a dra ez euz diouer : euz muioc'h e vezo. Etre paea taillou ha prena marc'hadourez, e teuzo buan an arc'hant.

Perag eta implij ar guenneien ken sod ha ma ra eun darn ? Prenna reont an dillad kaera ha kerra a vez kavet. Lipouzerez, kuingnou, skotennoù, bombonoù, ha banneou evel just, nag a zispignou didalvez hag e vezo kavet kerse abenn eun tachad !

Red eo gullet an traou evel m'emaint. Ne vezo ket paet ato an allocation d'ar Fransizien. Ne vezo ket ato pemp dre gant a gresk var an arc'hant postet d'ar C'houarnamant. Ne vezo ket ato dizamet euz an taillou ar voazed eat d'an arme; pa deuint en dro, ar beac'h a guezio varnho adarre. Hag an traou ne vezint ket guelloc'h marc'had.

Ar skiant hag ar furnez a c'hourc'hemen deomp eta en em lakaat dioc'htu da espern hor guenneien ha da ren eur vuez eun tammik disterroc'h.

A bep amzer, an Iliz e deuz aliet ac'hanomp d'en em viret dioc'h an dispignou foll, ha da bellaat dioc'h plijadurioù an dribi hag an eva. Hon Tadou koz a lavare deomp ive kuitaat an daol araok ma vez re leun hor c'hof, hag ar vedisined, d'ho zro, a ro deomp da anaout e rankomp enebi oc'h hon ioulou direiz; ma fell deomp beva koz. Mes brema ouspenn e tleomp, eb dale pelloc'h, berraat kalz hon dispignou, evit diskuez or beuz eun tamm kaloun. Fors pegen tenn e c'helfe beza ar sakrifisou a c'houlenner diganeomp; n'ez euz hini anezho ha ne rofe ket a leac'h deomp da zoubla hor penn dirak ar zoudardet keiz mac'hagnet a en em gav ganeomp var an hent, ha zoken dirak n'euz fors peseurt soudard a deu divar ar front, hag en deuz sikouret hor savetei, ha miret ouzomp da veza brema dindan treid ar Boched. Evel m'hel lavare n'euz ket pell eur skrivancier brudet, René Bazin, « *peb hini euz an heuriou a dremenomp er peoc'h hag er c'housked, a zo bet pael gant goad.* » Dalc'homp sonj euz ar virionez-se, ha ne glemmimp mui gant an diezamanchoù dister a rankomp da c'houzany. Delc'her start beteg ar fin, a zo kaout nerz-kaloun evel ar zoudardet dispar a varv evidomp. An taol diveza a glasko rei deomp hon enebourien, araok beza diskaret, a vezo spountuz : da bep hini ac'hanomp eo eta; ervez hor stad hag hor galloud, da rei an dourne evit ma vezint trec'het abars ar fin; hag evit ober hon lod euz al labour, e tleomp diskuez sentidigez, bolonte vad, fizians. Evelse e veritimp kemeret perz e joa ar viktor hag ar peoc'h.

FURNEZ AR RE GOZ

1. Nag euz e vije al labourer douar Ma karje anaout mad ar priz euz he vadou.
2. Dre he voued e chom ar iec'hed en ho korf. Dre he voued e teu santelez d'oc'h ene. Roit bara d'ho korf. Roit Jezuz d'oc'h ene.

AR VREZEL

E miz c'houevrer hon deuz bet adarre da bedi evit daou deuz hor zoudardet : Auguste Héliers deuz ar bourk, 28 vloaz. 16 miz

a zo n'euz beet kelou ebet anezhan. N'ouzer ket da zur e peleac'h e bet skoet gant ar maro.

Joseph Fourn deuz Touran, 24 vloaz. Reformet da genta, oa bet kavet mad da vont da zoudard pa deuz ar brezel, d'ar 4 viz du 1914 e zeaz da Lorient. Eno e kavaz eur mignoun, kristen mad eveldhan hanvet Le Hir. Chomet int bet atao assamblez. Araog mont euz a Lorient e rajont ho fask assamblez. Epad m'int bet er Belgique e vankent morse d'an oferen d'ar zul ha d'ar pedennou a veze greeat pa c'hellet d'ar pardaez. Galvet da vont d'ar Salonique he treujont ar mor var al lestr *Littia*. 3 guêch oant bet var ar poent da veza (torpillet). En em gavout a rejont gouskoude eb drouk ebet e Salonique. Eno e rejont adarre ho fask assamblez. Goude oant bet kasset da Florina hag abaoue e vrezellekeant heb ean var an tal (sur le front) hag e kendalc'hent da ober heb aoun ebet ho deveriou a gristen. Joseph Fourn a zo bet laz et er Serbie gnt eur vouled en he benn d'ar 4 a viz du 1916 (tranchée) kenta. He vignoun Le Hir a ioa bet glazet 6 dervez goude. Hen eo en deuz kountet kement-ma da dud Joseph Fourn pa deuaz e permission er miz diveza. Netra ne c'helle ober dezho muioc'h a joa en ho glac'har eget gouzout en devoa bevet ho mab kristen mad epad he amzer zoudard. Doue en deuz dija e baet dre eurusted heb fin ar baradoz.

En unan deuz emgannou diveza e kenver Verduin Jacques Fourn, breur Joseph, a denne gant he (vitraillouse) en (tranchée) tosta d'ar Boched pa gouezaz eun (obus) en (tranchée) he oll gamaraded a oue laz et pe glazet, Jacques a joumaz he unan en he za hag epad 8 heur dioc'htu e kendalc'haz da denna gant he (vitraillouse). Beza en devezo marvad ar groaz a vrezel rag pa c'hellaz he gapiten dont en (tranchée) e lavaraz dezhan : kaz a rin oc'h hano d'ar cheffou braz evit goulen ma vioc'h dekoret !

AR MOR

An dud a zo o chom var rib ar mor a gav ennhan ar peur-liessa peadra da veva. Rei a ra dezho pesked da zebri ha da verza, bizin da drempa ho douar ha da zevi evit ober (soude). Mez ar mor ker mad evit ar moraer a zo treitour. He darziou a c'hell pa sonjer an neubeuta goueledi ar vag. Abalamour da ze an dud a vor a dle muioc'h eged den all ebet derc'heel ho c'houstians e stad a c'hras evit ne vezint ket diskaret gant ar maro e pec'hed marvel. Lakaat a rankont-ta abred doujans Doue e c'haloun ho bugale, o teski dezho ho c'hreansou hag ho c'hatekismou. Ra lezint anezho da heuil ar c'hategiz beteg m'ho devezho great ho fevare pask. Eur retred great evit ar pevare pask eo ar vella, pe guir neuze eo e teuer da goupren ar guella guirioneziou ar religion. Miret ouz ar vugale da heuil ar retred d'ar pevare pask a zo mont a eneb reolen kategiz ar barrez ha rei skouer fall ha tenna er giz-ze malloz Doue.

Ar moraer a roi ive skouer vad d'he vugale o chom heb labourat da zul hag en eur ho c'haz ganthan d'an oferen ha d'ar gousperou ha da govez aliez. Er giz-ze ho boazo a vianig da zelc'her atao ho c'houstians e stad vad ha da chom heb mont d'ar mor d'ar zul. Labour zul n'hen deuz morse pindivikeat den hag en deuz digoret dor an ifern da galz eneo.

EUR VAG GOUELEDET

E miz genver diveza Rolland Vidament deuz Arc'hantel, 55 vloaz, patroun ar vag a savetaj, a icaz var he vag da enterramant he c'hoar gaer da Enez Eussa. Ganthan edo he vap Rolland Vidament, 15 vloaz, hag he ni Ernest Judo, 16 vloaz.

Goude beza pedet evit an hini varo hag heuliet anezhi beteg ar bez e tistrojont ho zri d'ar gear er vag. Great o doa dija eur pennad brao a hent peguir unan deuz gardianed tour tan ar Four e guelaz. Eur moment goude ne velaz mui netra. Penaoz oa bet gouelet ar vag ? hag i a ioa bet skoet gant eun (torpille) pe bruznet gant eur (mine) taolet eer mor gant ar Boched ? pe i e devoa touchet eur garrek ? pe i a ioa bet tumpet gant eun tarz mor ? Den n'en goar evit c'hoaz.

Patroun ar vag a savetaj en devoa ken aliez astennet an dourn evit savetei an dud o vont da veuzi ne gavaz den evit en tenna euz ar mor hag a icaz d'ar strad gant he zaou coumpagnoun.

Dirak eur maro ken trum, deskomp derc'heel atao hon ene neat a bec'hed marveel, ha pedomp evit hon tri genvroad evit ma tigemero Doue anezho ar c'henta en he varadoz, ha goulennomp dre Itroun-Varia a Gerzent ma vezo kavet ho c'horfou ha sebeliet e douar zantel ar vered. Kemeromp ive oll perz e kaony ho zud glac'haret.

AN AOTROU GUYOMARD

En he lizer diveza an Aotrou Guyomard a lavare e zoa guelloc'h hag en devoa an esperans da c'hellout c'hoaz labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneo. Trugarekaat a ra tud Landunvez da veza pedet evithan. Kenderc'heil a raimp oll da c'houlenn digant Doue evithan ar iec'hed en deuz kollet dre ar skuisder en deuz kemeret da brezek deomp ha da velet hon tud klanv.

Setu ama he adress : (L'abbé Guyomard, chez les religieuses hospitalières Augustines, au Couvent de Notre-Dame de la Victoire, en Saint-Martin-des-Champs de Morlaix, Finistère).

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Josephine Auffret. Yvonne Magueur.	Trede klas.	Marie-Anne Bossard. Haudes Guéna. Marie Cong.
Kenta rummad.	Marie-Yvonne Cong. Madeleine Prigent. Georgette Bouquet.	Kenta rummad.	Haudes Talarmin. Marie-Yvonne Pelleu. Odette Rouat. Marie Morvan. Jeanne Magueur. Alexandrine Marzin. Léonie Bégoc.
Eil rummad.	Marie Gouzien. Louise Laot. Germaine Bellec. Louise Kermorgant. Françoise Brénéol. Josephine Bouquet. Louise Squiban.	Eil rummad.	Marie Bizien (Kéleroun). Marie-Yvonne Kervran. Yvonne Querné. Jean Morel. Joseph Floch. Françoise Guéna. François Cong. Eugène Floch.
Eil klas.	Marie Mingant. Marie-Yvonne Perchoc. Léontine Michel.		
Kenta rummad.	Josephine Trébaol. Yvonne Abjean.		
Eil rummad.	Philomène Le Borgne. Françoise Kervran. Hélène Gélébart. Josephine Quéméneur. Marie-Yvonne Jacouen.		

**A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion
d'an eil sul, li a viz Meurs ;**

11 h. — Victoire Foll, Kervisinic ; Michelle Arzel, Créac'h-Goriou ; Marie-Renée Quémeneur, Marie-Anne Salou, Traon.

11 h. 1/2. — An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean Guennégues, Jean-Marie Pondaven, Bourk.

12 h. — Catherine Castel, Noémie Vaillant, Joséphine Godebert, Julie Pérès, Bourk.

12 h. 1/2. — Ar skol gristen.

1 h. — Françoise Pailler, Jeannie-Yvonne Fourn, Françoise Le Guenn, Curullou ; Françoise Héliers, Kerléo.

1 h. 1/2. — Philomène Brenterch, Marie-Jeanne Prigent, Kervéléoc ; Michelle Trébaol, Augustine Quémeneur, Kerc'hoézel.

ENTERRAMANCHOU

23. Genver. — Annette Tanguy, 55 vloaz, Navant.

1. C'houevrer. — Marie-Françoise Prigent, 83 vloaz, Kersaint.

Eat d'ar Baradoz

10. C'houevrer. — Marie-Rosalie Vaillant, 3 miz, Streat-Lann.

Kannadik miz C'houevrer en deuz koustet 20 lur 10 guennek. Bet evit sikour e baea digant : J. M., P. H., peb a 4 real.

Epad miz C'houevrer an amzer fall en deuz ienneat ar c'ha lounou e kenver ar *C'hannadik*. Izoum en deuz gouskoude deuz eun aluzen bennag evit beva ag asten he vuez.

Doze r'ho faëo.

P E D E N

O Jesus ni a bed Ho Kaloun Sakr leun a drugarez evit ar Franz, hor bro.


Kalet ha padus eo ar poaniou he deuz da c'houzanv, ha tenval meurbet eo an amzer.

O Jesus-Krist, mignoun ar Fransizien, plijet ganeoc'h selaou mouez ar goad skwillet gant kement a dud kalonek ; sellit gant truez ouz anken ar mammou, ouz daelou an intanvezed hag an emzivadad. Bennigit labour ar re a zo o stoum gant kement a galoun, ha roit deomp ar joa da gaout eur peoc'h just ha padus.

Pec'hed hon deuz : en anzao a reomp gant humilite ; pardoun a c'houlennom evit hon oll bec'hejou, hor pec'hejou hon-unan ha re ar vro, o deuz offanset Ho majeste hag Ho karantez.

Ni a bromet deoc'h, evit an amzer da zont, senti ouz Hoc'h gourc'hemennou ha re an Iliz, sanctifia ar zul o klevet an oferen, ober hor Pask hep bloaz, kaout doujanv evit lezennou santel ar Briedelez, rei d'hor bugale eun deskadurez kristen. Ni a labouro gwella ma c'hellimp evit sevel a nevez ho rouantelez en hor bro garet.

Kaloun Sakr a Jesus, ho pezit truez ouzomp ;
Kaloun dinam Mari, pedit evidomp ;
Sant Mikeal, pedit evidomp ;
Jeann d'Ark, pedit evidomp ;
Sent ha Sentezed euz ar Franz, pedit evidomp.



MIZ EBREL

4. SUL BLEUNIOU. Lizer S. Paol da dud kear Filip. « Jezuz, evithan da veza Doue, en em lakeaz da netra oc'h en em ober henvel ouz an dud. En em izelaat a reaz o senti beteg mervel, ha mervel var eur groaz. » Penaoz e sellimp oc'h Jezuz ep laosker hon orgouil kuit, ep senti ha douja ?

5. IAOU GAMBLID, deiz ar bloaz ma oue savet Sakramant an Aoter, ar Gommunion hag an Urs. — Kenta lizer S. Paol da dud kear Efez. « Nep piou benag a zebro bara ar gommunion pe a evo ar guin konsakret ep beza neat he goustians, a brofano korf ha goad an Ao. Doue. » Pedomp evit pec'herien a zo, hag a gred dont da gommunia gant pec'hejou marvel, tud sakrilaj hag a verz Kaloun Jezuz d'an Droug-Spered.

6. GUENER AR GROAZ, deiz ar bloaz ma varvaz Jezuz var ar Groaz evit hor prena : mister ar Redemption a oue great dre ze. « Va fobl, eme Jezuz, petra meuz great d'id eta ? penaoz e meuz kontristet ac'hanod ? Respount d'in. » Siouaz ! an Ao. Doue n'en deuz great nemed vad deomp, ha ni a gendalc'h da ober poan dezhan, goude beza bet kirriek dezhan da vervel. Pardoun, va Jezuz.

7. Sadorn Fask. C'huec'h loden en offis : 1. bennoz an tan nevez (an tan a verk ar garantez); 2. bennoz Goulaouen Pask, hag a verk rezurecsion Jezuz ; 3. an daouzek profesi, kenteliou divarbenn ar zillvidigez ; 4. bennoz dour meur ar vadiziant, e vezo badezet ganthi ar vugale beteg sul ar Pantekost ; 5. an oferen, hag a zesk d'ar gristenien chom dibec'h evel da zeiz ho badiziant ; 6. ar gousperou : ar psalm *Laudate*, ar berra zo, gant an *Alleluia*, da heul ar gommunion, evit trugarekaat an Ao. Doue euz he vadelez. En amzer goz, n'oa ket a blas en iliz da Zadorn Fask. Peur o tistroio ar memes giz ?

8. SUL FASK, gouel Jezuz o resusita. — Lizer kenta S. Paol da dud Korinth. « En em netait euz ar ioulou koz », rag Jezuz, hon Oan pask, a zo bet sakrifiet », hag e renkomp delc'her da zrebi he gorf evit chom santel.

9. LUN FASK. Aktou an Ebestel : Sant Per a lavaraz d'ar bobl : « Jezuz en deuz gourc'hemennet deomp prezeg d'an dud. » Ia, setu aze eur mirakl braz ! Daouzek pesketaer dizesk, lent, paour, dic'halloud, o deuz chenchet ar bed hag he lakeat da veza, euz a baian, kristen katolik. Penaoz o devije gellet, nemet edo Doue gantho !

10. MEURS FASK. Aktou an Ebestel : S. Paol a lavaraz d'ar Juzevien : « Jezuz a resusitaz e guirionez, rak guelet eo bet gant kalz tud, epad meur a zervez. » Pa'z eo Jezuz resusitet, he lezen a zo ar virionez. Kredomp ha sentomp.

15. SUL AR C'HAZIMODO. Kenta lizer Sant Ian : « Piou a zo treac'h d'ar bed, nemet an hini a gred eo Jezuz Map da Zoue ? » Dre ar feik guirion, e c'hounezimp ar baradoz, a dal mil guech guelloc'h eget ar bed oll.

22. EIL SUL GOUDE PASK. Kenta lizer S. Per. « Jezuz en deuz gouzanvet evidomp, hag hen dibec'h, o lezel eur skuer deoc'h, evit ma valefec'h var he roudou. » Ma ne fell ket deomp kemeret hent ar Groaz, e penn hor beach ne gavimp ket ar baradoz.

25. Merc'her. *Prosesion Sant Mark*. Er blavez 590, ar vosen a zis-

kare an dud e Rom, a vilierou. Ar Pab Sant Gregor a ordrenaz e ve great seiz prosesion dre gear, er seiz karter, en eur gana litanioù ar Zent. D'ar fin, eun eal a oue guelet var maner ar Pont, o lakaat he gleze en he feul : hag ar vosen a dardaz kerkent. — Ra vezo aoualc'h a feiz, a c'hlae'har, a zantelez e prosesion ar bla-ma, evit ma tardo ar vrezel.

29. Trede sul goude Pask. GOUEL SANT JOSEPH. Santez Tereza a gustume lavaret n'e devoa morse pedet Sant Joseph. ep kaout he goulén. Sant Joseph hor zelaouo evel Santez Tereza pa pedimp evel dhi.

4 a Vae. Guener kenta.

6. Pevare sul goude Pask.

Da Vener ar Groaz, kest evit Oberiou an Douar Zantel.

Da Zul-Pask, kest evit ar Seminer.

PERAG OBER VA FASK ?

Me rai va Fask, abalamour da Zoue, d'an Iliz, d'ar re all, d'in va-unan.

Doue en deuz gourc'hemennet kommunia. « Nep na zreb ket va c'horf, n'en deuz ket ar vuez enghan. » Doue eo ar Mestr. Me zento outhan. Me rai va Fask abalamour da Zoue.

An Iliz e deuz merket peur kommunia. — An Iliz, da lavaret eo, ar Pab, e bloavez 1215, a-unan gant oll eskiptien ar bed bodet e Rom. « Da Grouer a resevi da Bask, devota ma c'helli. » An Iliz a zalc'h plas an Ao. Doue, a goumand d'in euz he berz. Me a gommunion da Bask, abalamour d'an Iliz.

Ar re all a zo pe kristenien pe divadez. Ar gristenien a zo breudeur d'in dre ar vadiziant, a reaz ac'hanomp oll bugale d'ar memes Tad divin. Me a dle rei skuer vad ha skoazell dezho, skuer ar garantez hag ar zentidigez, skoazell va pedennou ha va unvaniez gantho. An dud divadie, Jezuz a varvaz evitho : va Fask a dalvezo dezho grasou a gonversion, a rai dezho tenna frouez euz maro va Zalver. Me rai va Fask abalamour d'ar re all.

Ha me, pebez henor, pebez grasou ! Kommunia a zo en em unani gant eun Doue strissa ma c'hellan. Kommunia a zo en em zantelaat ha kompeza hent ar vertuz. Kommunia a zo terri va zechou fall. Kommunia a zo hada ennon ar rezurreksion gloriuz. Me rai va Fask abalamour d'in va-unan.

Ha pa'z euz tud eleiz, siouaz, ne reont ket ho Fask, e rin eun eil kommunion en ho flas, evit rapari ar boan e reont du Galoun va Zalver.

BERR HA MAD

Setu ama eur prezegen verr klevet var ar meaz digant eur person koz.

— Va hreudeur ker, emezhan, ar pez a zispignomp evit hor plijadur a zo kollet da viken ;

Ar pez a espernomp var an douar, a vezo laosket ganeomp da re all, pa varvimp ;

A pez a roomp evit oberiou mad, evit an Ao Doue, he gaout a raimp en dro er baradoz.

Pa ne da ket mad an traou, pa 'z oc'h inouet, a himor fall, kemerit al louzeier-ma : Peden, Labour, Pasianted, madelez.

Trist oc'h ? — Pedit.

Inouet oc'h ? — Labourit.

Poan oc'h euz ? — Gouzanvit ep klemm.

Ar re all a zisplij deoc'h ? — Grit vad dezho.

Ha ma ne deuit ket abenn euz ho melkoni gant an dra-ze, setu louzeier all ne goustint ket kerroc'h.

Ha c'hoant oc'h euz da lenva ? — Kanit.

Drouk zo ennboc'h ? — C'hoarzit.

Ha mouzet oc'h ? — Komsit laouen.

Klanv och ? — Roit peoc'h ha pedit goestad.

Na livirit ket eo re ziez al louzou da gemeret. Ea ho raok, tud a vilionou o deuz paret ho foaniou dreizho : grit evelldho.

MERC'HED FRANS A ENEB AN ALCOOL

Setu ama eur goulen great da oll merc'hed hor bro, hag a vezo selaouet, eb marebed, gant kement hini e deuz eun tamm skiant hag eun tamm kaloun.

Merc'hed Frans,

Ar vro a ro deomp da c'houzanv ar c'haletta sakrifisou ;

Evit e difenn e roomp ar re a garomp ar muia ;

Hor prijou, hor potred, hor breudeur a zo e kreiz an tan hag a varv evithi.

Eb fallgalouni, e tigemomp an oll boaniou-se, abalamour ma'z omp sûr e savetaint ar Frans, hag e teuio, dre ho nerz-kaloun, da veza kaeroc'h hr skedusoc'h !

Mes ar Prussian n'ema ket he-unan.

En hon touez ez euz eun enebour all, a ziskar hag a laz evel egile : AN ALCOOL.

Merc'hed Frans, stagomp oll d'al labour : stlapomp an enebour-se er meaz euz hor bro gaer.

Da genta, roomp skuer d'ar re all ; niromp na vezo great implij anezhan en hon tiez.

Digoromp ho daoulagad d'ar re a laosk ho zud da veza kollet, hag a en em goll ho-unan gant ar mignoun treitour-se.

Sevomp hor mouez, evit ma teuio ar Gouarnamant d'hor zikour.

Eun dever striz or beuz oll brema. Deuet da veza c'hoarezed dre ar boan hag ar glac'har, en em unanomp evit ma c'hounezimp eur viktore all :

Ar Fraus taolet gant hi an Alcool d'an traon !

Euz a bep tu e teu meuleudi d'ar merc'hed kalounek a fell dezho kas er meaz euz ar vro an alcool milliget. Unan euz ar re genta, an Ao. Cardinal Amette, arc'heskob Paris, en deuz skrivet d'ezho eul lizer, evit ho alia da gregi mad el labour, ha pedi a ra Doue, emezhan, da skuill varnho he vennoz, abalamour n'ez euz netra ken red evij buez ar Frans.

Ar pemp kenta a zo ho hanoiou ama varlerc'h a zo kloareget euz Seminer Kemper.

KROAZ A VREZEL. An ao. KERANDEL (trede embann a henor), brancardier en 216. « Remerket adarre, 26-29 here 1916, pa glaske ha pa zigase d'ar post sikour he gamaladed glazet : e kreiz an deiz, dindan an tan. »

KROAZ A VREZEL. An ao. FALC'HUN, caporal. « Kouraj dispar, vaillantiz netra en tu all dezhi. Glazet eun eil guech d'an 22 a ven-golo 1916. »

KROAZ A VREZEL. An ao. DÉNIEL, infirmier. « Abaoue ar penn kenta euz ar vrezel, en deuz diskuezet ar galoun gaera, ken seder ha tra, hag en emgannou Deniécourt 17-18 guengolo 1916. »

KROAZ A VREZEL. — An ao. MARREC, serjant er 71^e (eil embann). « Kalounek, karget da spia an enebour. D'ar 25 a viz du 1916, en deuz risklet he vuëz dindan an tan ar goasa, evit enaout peziou-kanol allmand, hag en deuz askavet he-unan eur post flastret gant an Allmandet. »

KROAZ A VREZEL. — An ao. AUFFRET, téléphonist. « Ato prest da vale, dizamant euz an danger, kalounek ha dispount bepred. Remerket dreist oll e Salonik, Doiran ha Monastir. »

KROAZ A VREZEL. An ao. Thalamot, a Gleden-Cap, kure Ergue-Armel, brigadier-aumonier. *Kenta embann* : « Eat en dro da entent ouz ar re c'hlazet, pa edo an tan en he voasa ; en deuz galvet eur c'hamalad d'he zikour da zougen eur zerjant goal-vleset, hed a hed eun hanter-leo ; ato o labourat, prest da vale. »

Eil embann : « Deuet en dro var al linen, var he c'houlen, en deuz ravitaillet ar peziou kanol dindan an tan. Ha pa 'z eo belek, en deuz ententet ouz an oll zoudardet glazet, ha kaset anezho d'ar post-sikour, dizamant d'he skuizder. »

An ao. FOLL, a Vohars, aomonier ar 118^e, rejant e skolaj Sant Visant Kemper, en deuz bet he bemped embann a henor, evit ar fae a ra var an danger ha var ar maro, ato e goasa an tan evit rei sikour dioc'htu d'ar zoudardet glazet.

An ao. CELTON, a Blonéis, kure e Lesneven, kuzet peultriner dre he skuizder e zervich ar vro, reformet e 1917, maro da fin c'huevrer.

MEULED

Claude Taloc euz an Navant, a zo bet meuled evit an eil guech ha dekoret euz ar groaz a vrezel. Setu ama komzou he veuleudi : « Le colonel cite, à l'ordre du régiment, le soldat Taloc, Claude, du 146^e infanterie, 2^e compagnie, très bon soldat et courageux, a fait preuve de sang-froid, grièvement blessé à l'assaut dans la Somme le 1^{er} juillet 1916. »

DINER AN ILIZ

(Denier du Culte)

An Aotrou 'n Eskop en artikl dek euz he lizer ar C'horaz en deuz gourc'hemennet : Ar gest evit Diner an Iliz a vezo great, ke-

ment ha ma vezo possubl, araog Pask. An dud fidel a goupreno an dever a goustians o deuz da zikour o beleien da veva. An aluzennou resevet evit an dra-ze a vezo kasset da zekretour an Eskopti, hag eur Gommision a labouro neuze evit rei sikour d'an nep en devezo ezom. Er guelel a rit ne vezo o kaout perz en aluzennou-ze nemet ar re o deuz ezom.

Ar pezh a c'houlenner diganeoc'h a zo neubeut a dra 6 guennek dre zen.

Goulskoude evel ma zeuz lod re baour evit rei memez an aluzennik-ze, ar re binvidik a zo pedet da rei eun tamik muioc'h eged 6 guennek dre zen. Evel er bloaveziou all e c'h'esperer e rooc'h an aluzen-ze araog Pask d'an Aotrou Persoun pe d'an Aotrou Kure. Mont a reor da c'houlenn an aluzen da di ar re o devezo ankounac'heat e rei. Da betra e serviche an ilizou ma ne ve ket a veleien evit lavaret an oferen, pardouni ar pec'hejou er gador govez, diskleria an Aviel er Gador ? Ar veleien a implij ho amzer hag ho buez oc'h ober al labouriou-ze. Gant piou e vezint bevet, nemed gant ar gristenien ? N'euz nemed da veuli an darn vuia euz ar barrisioniz deuz an aked o deuz evit rei ar pezh e dleont diouret evit kement-ze. Rouez int ar re n'her greont ket. Ar re-ze a dle gouzout e reont eur pec'hed braz, m'an ho deuz peadra da ober eun aluzen. Kement hini en em servich euz ar beleg evit he ene hag eneou he dud, a zo eun dle, eun dever a justis evithan : sikour ar veleien da veva.

Divarbenn or Gonfirmasion

Daveurzar Pantekost goude meren 29 mae, an Aotrou 'n Eskop a deuio da rei ar Gonfirmasion da vugale ar barrez.

Mad eo d'an oll gouzout petra eo ar Gonfirmasion, ha dreist-oll d'ar gerent ho deuz bugale da veza konfirmet, evit ma teskint dezho petra eo ar zakramant-ze.

Petra eo ar Gonfirmasion ?

« Ar Gonfirmasion zo eur Zakramant hag a ro deomp ar Spered Santel gant he zeiz donezoun, evit ober kristenien barfet ac'hanomp. »

Beza « konfirmet » a zinifi, beza « starteat » er feiz. Dre ar Vadiziant, e vezer great bugale da Zoue ha d'an Iliz ; dre ar Gonfirmasion, e teuer da veza soudardet da Jezuz-Krist. — Eur c'hristen hen deuz ato var an douar da vrezellekaat enep an tentasionou, a-enep ar gwal skueriou, a-enep ar goaperez a deu dezhan abers an dud difeiz, hag aliez siouaz ! abers kristenien laosk. Ruzia euz hor feiz pe euz hon dever, a ve beza eur soudard digaloun ha treitour. Jezuz a ruzio er bed-all euz ar re ho do mez anezhan er bed-man.

E pe stad e ranker beza evit reseo Sakramant ar Gonfirmasion ? Red eo gouzout ar c'hategismou hag anaout mad guirioneziou brassa ar feiz.

An nep n'ho anavez ket, penaoz hen devezo nerz da c'houzany ha da vervel, mar he red, evit he feiz ? Red eo ive beza e stad a c'hraç : p'e guir ar Gonfirmasion a zo evit krenvaat ennomp graç hor Badiziant, e rankomp beza dalc'het ar c'hraç-ze en ene pe beza bet anezhi adarre, dre Zakramant ar Binijen.

Piou hen deuz galloud da rei Sakramant ar Gonfirmasion ?

An Aotrou 'n Eskob.

Petra ra an Aotrou 'n Eskob pa ro ar Gonfirmasion ?

Da genta, ec'h asten he zaouarn var ar re a dle beza konfirmet, en eur ober eur beden evit goulenn digant Doue, ma plijo gant-han digass dezho ar Spered-Santel gant he zeiz donezoun.

D'an eil, an Aotrou 'n Eskob a ra gant an oleo sakr, sin ar groaz var dal ar re a vez konfirmet, evit deski dezho, ne dleont ket kaout mez oc'h anzav Jezuz-Krist, hag er memez amzer e lavar dezho : « Me ra sin ar groaz varnoc'h hag ho konfirm gant oleo ar zilvidigez, en hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evel-se bezet great. »

D'an trede, an Aotrou 'n Eskob a ro eur fasadik d'ar re a vez konfirmet evit deski dezho, e dleont beza prest da c'houzany a bep seurt dismegans hag a bep seurt goaperez, dre garantez evit Jezuz-Krist.

Petra eo donezounou ar Spered-Santel ?

An donezonou-ze a zo plegou mad a laka Doue en hon Ene evit ober deomp dont da veza santelloc'h. Seis zo anezho : Ar Furnez, hon doug da garet ha da zaouri madou an Env ha da zistaga hor c'haloun deuz traou an douar ; ar Skiant, hor sikour da goupren guirioneziou ar religion hag ar pezh a c'hell beza talvouduz evit hor silvidigez ; ar Guzul a ra deomp choaz e poent hag enn amzer, ar pezh a dle servichout da ober ac'hanomp sent ; an Nerz, a vir ouzomp da gaout aoun oc'h anzaou hor feiz pe da falgalon o vrezellekaat eb ean a enep an techou fall, ar bed milliget hag an drouk-spered ; ar Vouisiegez, a ra deomp anaout an hent a dleomp da heul evit mont d'ar baradoz hag an dangeriou m'hor deuz da ziouall outho ; an Devosion, a ra deomp karet D ue evel hon tad ha kaout plijadur oc'h he zervicha ; an Doujans, a laka en hor c'halon eun doujans vras evit Doue hag aoun rak kement tra a c'helfe displijout dezhan.

AN DISPUD

An dispud a vezo d'ar iaou 3 a viz mae.

Ar re Vrezounek

Da 8 heur ar vugale gant ho fevare pask.

Da 9 heur ar vugale gant ho eil hag ho zrede.

Da 10 heur ar vugale gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h.

Les Français

Da 2 heur ar vugale gant ho eil, ho zrede, hag ho fevare pask.

Da 3 heur ar vugale gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h.

TAOLIT EVEZ

Evit kaout eul leor, ar re gant ho eil, ho zrede hag ho fevare pask a rank gouzout heb faot ebet an teir loden euz ar c'hatekismou, goulennou ha responchou, beza bet aketuz d'ar c'hatekismou epad ar bloaz ha rei skuer vad epad ar retred.

Ar re gant ho fevare pask a ranko gouzout ouспен : litanioù ar Verc'hez, an *De Profundis*, an *Angelus*, ha mysterioù ar Rozera.

Ar re gant ho fask kenta solannel hag ar re iaouankoc'h, a ranko gouzout heb faot ebet, al loden genta hag an trede loden euz ar c'hatekismou, goulennou ha responchou.

Dervez an dispud ne vezo ket a skol gatekiz.

498

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Josephine Auffret. Madeleine Prigent.	Trede klas.	Haudes Talarmin. Marie Bocheur. Odette Rouat.
Kenta rummad.	Marie-Yvonne Cong. Yvonne Vagueur. Georgette Bouquet. Catherine Kermorgant. Marie Gouzien. Louise Laot. Germaine Bellec.	Kenta rummad.	Julienne Didou. M. Magueur (Lannourien). Haudes Guéna.
Eil rummad.	Marie-Yvonne Kerros. Isabelle Guéna. Philomène Cornen. Josephine Bouquet Françoise Floc'h.	Eil rummad.	M. Bizien (Kerganaben). Ernestine Le Guen. Marie Le Ven. Ernestine Talarmin. Joseph Potin. Jean Morel. Marie Bizien (Kéléroun). Joseph Bizien. Julie Talarmin. Marie-Yvonne Kervran. Yvonne Querné.
Eil klas.	Anne-Marie Jacq. Marie Cadalen.		
Kenta rummad.	Marie-Yvonne Guéna. Marie-Anne Mingant. Hélène Gélébart. Josephine Trébaol. Ernestine Brénéol. Philomène Eliès. Marie Lescop. Bernadette Hamon. Marie Brénéol. Thérèse Cadalen.		
Eil rummad.			

BADIZIANT

8 Meurs. Marie-Jeanne Trébaol, Troménec : paëroun, Jean Trébaol; maërounez, Françoise Trébaol.

ENTERRAMANTHOU

21 C'huevrer. Marie-Françoise Milin, 79 bloaz, Trémazan.

25 C'huevrer. Bazile Kervran, 64 bloaz, Penfoul.

11 Meurs. Jean-Louis Peton, 18 bloaz, Kériou.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil su, 8 a viz Ebrel;

11 h. — Joséphine Brénéol, Rose Normand, Marie-Jeanne Jaouen, Gabrielle Quéménéur, Kersaint.

11 h. 1/2. — Marie Bizien, Clémentine Allouer, Jeanne Floc'h, Françoise Cadalen, Bourk.

12 h. — An Aotrou Persoun, Joseph Godebert, Guillaume Lescop, Jean Guennégues, Bourk.


12 h. 1/2. — Ar skol gristen.

1 h. — Thérèse Carmez, Lanlouc'h; Alexandrine Bihan, Philomène Kerjean, Hellen; Anne-Marie Fourn, Streat-Lan.

1 h. 1/2. — Yvonne Prigent, Eugénie Miry, Milin-Trez; Jeanne-Yvonne Guivarc'h, Marie Allégot, Kersaint.

Kannadik miz meurs en deuz koustet 22 lur 16 guennek. Bet evit sikour e baea digant : J. C., A. S., peb a 8 real; J. P., J. T., peb a 4 real.

Doue r'ho faëo.



MIZ MAE

4. GUENER KENTA. — O Mari konsevet dibec'h ha chomet ato dibec'h, plijet ganeoc'h kinnig hor c'hommunionou a zigoll da Galoun ho Map, ha lakit anezhan da zellet a d'uez onzomp-ni pec'herien.

6. PEVARE SUL GOUDE PASK. *Lizer Sant Jakez* : « Selaouit kalz, kaozeit nebeut, n'en em roit ket d'ar goler. Rag koler an den ne ra ket lezen an Ao. Doue. »

13 PEMPED SUL GOUDE PASK. *Lizer Sant Jakez* : « Ma kav deoc'h beza devot, pa lezit ho teod digabestr, ho tevotion ne dal netra. »

14-15-16. ROGASIONOU. (N'ez euz na iun ni vijil) Da betra ar Procesionou ? Da genta, dreizho e tiskleriomp hor feiz a vel d'an oll. D'an eil, eur barreziad-tud o pedi a-unan a vezo selaouet muioc'h eged hiniennou epken. Heuliomp ar Procesionou.

17. IAOU BASK, Jezuz o pignat d'an Env. GOUEL BERZ. *Histor an Ebestel* : An Elez a lavaraz d'an Ebestel : « Jezuz hag a zo pignet en Env pa laoskaz ac'hanoc'h, a ziskenno eun deiz er memes doare. » Ra blijo ganthan, pa zeuio da varn ac'hanomp, ober d'eomp pignat d'an Env evel dhan ! — Kest evit skolach-meur Angers ha skoliou kristen an Eskopti

20. SUL JEANN D'ARC. Guehall an Ao. Doue a reaz eur mirakl pa gasaz Jeann d'Arc da zavetei Bro Frans. Er vrezel-ma, meur a virakl en deuz great evidomp adarre. Peur e roio an delivrans ? P'on devezo great aoualc'h a bedennou hag a zakrifisou var skuer Jeann d'Arc.

27. SUL AR PANTEKOST, ar Spered Santel o tisken var an Ebestel d'ho sklerijenna ha d'ho c'hennerzi. Iuzevien a vilierou a gredaz an Ebestel o prezeg. Ra vezo ar veleien selaouet ive gant ar gristenien ! Ra vezo unanet stard an oll gatoliked ! — Kest evit ar Seminer.


29. LUN AR PANTEKOST. Offisou evel da zul. *Histor an Ebestel* : « Jezuz-Krist eo, eme Sant Per, hag a zo bet hanvet gant an Ao. Doue da varn ar re veo hag ar re varo. » E pe stad ema va c'houstians ? Ma varvan hirio, da be leac'h e vezin kaset gant va Barner ? D'ar Baradoz ? pe d'an Ifern ? pe d'ar Purkator ?

30. MERC'HER AR PEVARE AMZER. *Iun ha vijil*. Kinnig ar bijnen evit ar gloareged a vezo beleget da zadorn an Dreindet, nebeu-anezho, ha dinerz c'hoaz, pa 'z eo guir ar re all a rank brezellekaat. Ra blijo gant Doue gelver aoualc'h a dud da henor ar velegiaj : rag eur vro ep beleien a za buan da vro c'houez.

1 Even. GUENER KENTA. Iun ha vijil ar Pevare Amzer.

2 Even. Sadorn. Iun ha vijil ar Pevare Amzer.

3 Even. Sul an Dreindet.



Deuit d'an iliz d'ar Miz Mari.

Da nebeuta, grit Miz Mari en ho kear.

Perag ?

Abalamour ma 'z oc'h kristenien, Fransizien, Bretouned.

Kristenien, picu a zo kaoz ma c'helloc'h mont d'ar baradoz ? piou zo kaoz n'oc'h ket paianed ha sklavourien ? Jezuz, ep mar ebet, Jezuz an Den-Doue. Mes dre biou eo deuet Map Doue d'en em ober den ? Piou a zikouraz anezhan d'hor zavetei ? Mari he Vamm. Rak-se, deuit da henori mamm ho Salver.

Fransizien, pe rouanez oc'h euz ? Mari ! En he iliz e Reims e oue badezet ar Fransizien kenta, da zeiz Nedelek 496. Hag er c'hantved diveza, hi eo en em ziskuezaz da baotred ha da baotrezed e Bro Frans, e Paris, er Salett, e Lourd, e Pontmain, en eur ober kefridiou deomp a berz Doue. Rouanez Frans eo : ar Fransizien he zujidi a dle he henori.

Oc'h penn, ar Bretoned penaoz ne garfent ket merc'h ho fatrounez Santez Anna ? Pemzek kant vloaz zo ema Santez Anna o tiouall Breiz : eur merk a garantez hag a zoujans roet d'he merc'h a zigollo ar vamm.

Erfin, nag a c'hrasou en deuz resevet peb hini ac'hanomp dre ar Verc'hez ! nag a c'hrasou zo da obten ! Ken evidomp, ken evit hon tud eat da zifenn ar vro, pedomp Mari, hon alvokadez oll galloudek.

D'ar Miz Mari, bep tro ma c'hellimp !

AR PROSESIONOU

Ar c'hiz da ober ProseSIONOU a zo ken koz hag an Iliz, a c'heller lavaret.

Petra zinifont ? Dreizho :

1. Dirag Doue ha dirag an dud e tiskleriomp e kredomp en eun Doue oll galloudek, prezant e peb leac'h, mestr varnomp ha var bep tra :

2. E tiskuezomp e kredomp e Jezuz-Krist, Den ha Doue, bet staget ouz ar Groaz evidomp ; rei a reomp dezhan eun testeni a anaoudegez vad evit kement a c'hrasou en deuz gounezet deomp ;

3. Oc'h unani pedennou ha karantez oll gristenien ar barrez, e roomp eur skeuden euz an unvaniez a zo etre oll vemprou an Iliz : unvaniez dindan ar memes mistri (Pab, eskipien, persouned), ar memes gourc'hemennou, ar memes sakramanchou, ar memes feiz ;

4. Pa velomp dre ar parkeier burzudou galloud ha madelez an Ao. Doue, pa glevomp hor breudeur kristen o kana he veuleidiou, hor fizians en hor C'hrouer a gustum kreski ;

5. Pa valeomp, o vont euz an iliz evit dont d'an iliz, e vezomp douget da zonjal emaomp en hent deuz pinsin ar vadiziant da varadoz an Env, ha n'ema ket hon demeurans guirion var an douar-ma. En hent varzu ar baradoz !

Deuit eta d'ar Rogasionou.

Na livirit ket : « Labour zo. N'euz ket amzer. Da betra mont ? »

Labour zo ? Mes piou a ro nerz deoc'h da labourat ? piou a denno an nerz digaeoc'h evel ma karo ? Deuit da c'houlenn nerz digant Doue, nestr ar vuez. Piou a ro douar ha frouez an douar ? piou a goumand d'an avel, d'ar glao, d'an eol, d'an had, koulz ha da vuez an

dud hag ar chatalou ? Da betra sevel abred da labourat, ma n'ema ket ar Mestr a du ganeoc'h ? Pedit, ha Doue a labouro evidoc'h. Labour Doue, kredabl, a dal muioc'h eget labour an den.

N'euz ket amzer ? Gounezit eta eun hanter dervez, bemdez epad an tri dervez Rogationou, en eur zioueret ar brosesion. Hag e kav deoc'h an Ao. Doue ne c'hello ket en em zigoll, ma kar ? Daoust hag en eun hanter-dervez, hag e nebeutoc'h zoken, ne c'hell ket kas da netra al labour o pefe great dre c'hoaperez outhan ? An oll darvoudou evel an oll denzoriou, a zo en he zaouarn.

Koll amzer o pedi Doue a zo gounid amzer.
Deuit d'ar Brosesion.

428

GOUEL JEANN D'ARC

Eur ger epken : deuit da gommunia da zeiz gouel Jeann d'Arc.

Da c'houel Jeann d'Arc. Guechall hi eo a oue dibabet gant Doue, a douez an oll Fransizien, evit savetei ar Frans euz eur vrezel n'oa fin ebet d'ezhi. Hirio an deiz, hi a zo en Env o tifenn ar Frans. dirag tron an Ao. Doue. He feden a zo krenv. Krenvoc'h e vezo, ma vez kresket dre nerz ho pedennou c'hui.

Kommunia. Ar gommunion. gant an oferen, a zo ar beden galloudusa. peden Jezuz oc'h en em unani gant an den, hag oc'h en em zakrifia. Roit da Jeann d'Arc sikour ar greuva peden, evit ho pro, evit ho tud, evidoc'h oc'h unan.

Oc'hpenn, brasa devosion Jeann d'Arc a ioa henori ar Zakramant meulet ra vezo. En he frizoun, pa dremene dirag dor ar chapel, e faouline da adori he Zalver kuzet outhi. D'he dervez diveza, he bourrevien ne gredjont ket refus ar gommunion d'ezhi. Kendaze, pa 'z eoc'h da gommunia, Jeann d'Arc a zello a druez ouzoc'h pa ziskuezoc'h kaout ar memes devosion evelldhi.

Evit Jeann d'Arc hag evit ar Frans, kommunia.

430

Labour hag Oferen

Var zigarez ez euz labour da ober, tud zo hag a vank d'an oferen.

Al labour n'eo morse eur rezoua vad da zilezel servich Doue. Koumansit ho labour abretoc'h ; pe grit divezatoc'h. Mes roit da Zoue an nebeut amzer a c'houlou : dezhan eo an amzer.

Ma ne roit ket da Zoue ar pez a zo dezhan, ar pez e c'houlou, Doue a c'hoar mil tro da askemeret diganeoc'h ar pez a laerit.

Dalc'hit sonj euz ar ger e lavare ar Verchez var menez ar Salett : « Abalamour e laosker re a vlasphemou, abalamour ma profaner ar zul, darvoudou braz ha goaligner justis Doue a guezou var ar vro ! »

436

AR ZOUARDET HER GOULEN

Lennit al lizer a zo ama varlerc'h. Skrivet eo bet gant kommandant eur vataillon soudarded var droad, ar re a skuill evit ar Frans muioc'h a c'hoad eget an oll zouda rded all.

Lennit, Mirit da lenva mar gellit. Mes roit dezhan he c'houlou.

Aotrou,

Dont a ran da ober deoc'h eur goulou a ra evel don an darn vuia euz ar zoudarded kristen.

Dre ma tosta deiz ar c'hrogad braz, — an diveza, ma plij gant Doue, — ar zoudarded se a zigemer en avans an oll danjeriou, an oll boaniou, an oll zakrifisou a rankint da c'houzanv.

Mes sikouret e karfent beza gant ar gristenien a zo var an adrenv.

Eun dudi eo gueleit an oll ganoliou, obusou, mitraillezou, etc., a zigaser d'eomp ; a veac'h ma' zeo ledan awalac'h an hentchou evit ho laosker da dremen. Hag an oll draou-se, anat eo, a zikouro kalz ac'hanomp da zont a benn euz hon enebourien ; evit kaout ar viktor e zeo red, ouspenn, sikour an Ao. Doue.

Ar zikour-se, ar gristenien a zo en adreav a dle her rei deomp.

Petra velomp goulskoude, en adrenv ?

Var an digarez kaer ne c'heller ket beza atao o vouela, kalz a goll buan ar zonz euz poaniou skrijuz ar zoudarded er Somm hag e Verdun, ha zoken euz ho maro ; hag abalamour ma zeo red beva, emezho, brema evel araok, n'o deuz ken soursi nemed gant ho afferiou... ha re aliez gant ho slijaduriou, hag e kountont var ar zoudarded evit ober ar brezel, ha gouid ar viktor.

An darn-vuia o deuz kollet buan ar volonteiz vad o deuz diskuezet er penn kenta, hag a zo skuizet pell zo o tont d'ar pedennou hag o tostaat oc'h ar zakramanchou, ken klouar ha ken lezirek ez int deuet da veza hag en amzer a beoc'h, d'ar mare ma ve red pedi kalz muioc'h eged biskoaz, evit kaout digant Kaloun trugarezuz Hor Zalver ar brasa sikour or beuz bet morse ezoum da c'houlou.

Petra dle-ta da ober tud an adrenv, evit ma ne fallgalouno ket ar zoudarded var ar front, ha ma talvezo ho foaniou hag ho maro da c'houlou ar viktor ?

N'eo ket red dezho lakaat ar Frans a-bez da zistrei oc'h Doue, hag ar C'houarnamant da gemeret perz er pedennou lavaret en ilizou. An dra-ze, sur awalac'h, a ve kaer meurbed, mes ne c'hell ket beza great e ken berr amzer, ha mall eo goulskoude en em glevet hag en em unani. Ar pez a c'houlennomp, eo ma teuo dioc'htu ar vuia possubl a gristenien da zével varzu Doue ho fedennou birvidik, ha da rei deomp evelse an dourn e kreiz an emgannou spountuz a vezo dizale. Arabad eo chom da vare'hata : tud an adrenv a rank beza unanet o pedi, evel eun arme, a-benn an deiz memes, ha tostik eo, ma tirollo ar c'hrogad braz.

Ar c'henta ar guella koumans, evit ma teuo an oll bedennou-ze da lakaat Doue a du ganeomp, ha da dalvezout deomp ar viktor.

Evel m'o deuz goulennet beteg vrema kanoliou, obusou, ha traou all, ar zoudarded kristen a c'houlou hirio pedennou, a zo ive muniou.

Peb hini a c'houlou digant ar re a c'hell he glevet... Me ; Aotrou, e meuz sonjet skriva deoc'hui, a c'hell skei var kement a zoriou.

N.., commandant.

Hag e skoan var zor ho kalounou !

Pedit. Grit pinijen.

Roit an dourn d'ho pugale, d'ho preudeur, d'ho koazed, d'ho tadou a zo e kreiz an tan. Roit dezho sikour Doue.

Pedit. Grit pinijen.

504

AR VREZEL

Er miz tremenet hon euz pedet evit Gabriel Corolleur euz Cùrulou, 34 bloaz, bet glazet en emgann ha maro oc'h en em gavyout en hospital d'an 10 a viz meurs. Oll e kemeromp perz e glac'h ar he bried a joum ganthi 3 krouadur vian.

Pedet hon deuz ive evit Jean-Marie Corolleur, breur da Gabriel, 28 bloaz.

N'euz bet kelou ebet anezhan abaoe ar 15 a viz eost 1914.

COMMUNION SOLANNEL AR VUGALE

Bugale ar barrez a rei ho fask solannele d'an 29 a viz mae. Tadou ha mammou kristen, bemdez, beteg ma savo evitho an deiz kaer-ze, labourit da greski feiz ho pugale, da doma ho c'halonnou a garantez evit an Doue en deuz o c'hrouet, evit Jesus-Krist en deuz o frenet gant ar priz deuz he c'hoad var ar groaz, hag a blijo ganthan dont enno gant he gorf, he Ene, he zivinite pa zeint da zaoulina ouz an daol santel. Deskit dezho int euruz da gaout eur retred a dri dervez, evit diazeza guelloc'h c'hoaz, en ho spered, guirioneziou ar relijion, evit o sikour, da nettaat ho Ene a bep pec'hed araok digemeret en ho c'haloun ; Jesus-Krist, map Doue, an eil ferson, euz an Dreindet Santel.

En dervez diveza euz ar retred, pa vezo bet pardounet ho fe-c'hejou d'ho pugale dre an absolven, c'houi ive roit dezho ho pennoz ha reketit dezho chom hed ho buez stard en ho feiz, sentuz ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

Da zeiz ar gommunion deuit da zaoulina gant ho pugale ouz an Daol Zantel evit ma reoc'h gantho, en dervez-se muioc'h eget biskoaz, ar memez kaloun hebken.

AR RETRED

Retred ar vugale a gommanso d'ar zadorn 26 a viz mae da 7 h. An oll vugale a ranko kaout eur chapeled, hag ar re a c'hoar lenn, eur c'hantik.

Pa ne vezint ket en Iliz ar baotrezed a ielo d'ar skol gristen, eno e vezint sikouret da gana kantikou ha lennet dezho traou kaer. Ar baotred ne jomint ket da c'hoari er vered, kana c'hellimp gouskoude enni kantikou gant n'er greint ket epad ma vior o kovez.

D'ar zul ha d'al lun ar vugale a vezo en Iliz a benn 7 h.

Piou a ranko heuill ar retred ? Ar vugale gant ho fevare, ho zrede, ho eil fask hag ive ar vugale gant ho fask kenta solannel, da lavaret eo, ar re o devezo bet dek vloaz echu araok ar c'henta a viz genver 1917.

Ar vugale o deuz bet 9 bloaz araok ar c'henta a viz genver 1917, hag a vezo bet resevet, a vezo konfirmet, mez ne deuint ket d'ar retred hag ar paotrezed ne vezint ket guisket e guen.

Galvet e vezint, gouskoude, da zont da govez d'al lun da 10 h. ha da zeski e pe seurt renk e teuint da gonfirmi.

505

D'ar meurs e konnaunt assamblez gant bugale ar paskou. Perag ar vugale-ze, ne heuillint ket ar retred ?
Abalamour, lod a elche kredi, o deviche great ho fask kenta solannel, n'eo aotret en Eskopti, ken na vez bet 10 vloaz araok ar bloaz nevez.

Ar vugale ta, a vez o konnaunt da bask ha var ar bloaz hag ar re a vezo konfirmet araok ho 10 vloaz, ne vezont resevet evit-ze, nemet abalamour d'ar bromessa a ra ho c'herent do digas d'ar c'hatekismou ken no devezo great ho fevare pask solannel etouez ar vugale.

D'ar meurs, 29 a viz mae, offeren ar gommunion a vezo da 7 h. a kart.

Prezegen ar berseverans a vezo da 9 h. hanter. Goude ar brezegen, e vezo renevezet promessaou ar vadiziant, lennet an act a gonsekration d'ar Verc'hez, roet ar skapular da vugale ar pask kenta solannel ha lakeat ho hano var roll breuriez ar Rozera.

Kemeret a vezo ive en dervez-se hano ar baotrezed gant ho fevare pask ho devezo c'hoant da vont e Kongregasion Bugale Mari.

AR CONFIRMASION

Ar gonfirmasion a vezo ive d'an 29 a vae goude meren.

An Aotrou n' Eskop a deuio euz Sant-Pabu. Abalamour d'ar brezel ne dei d'he gerc'het nemet eur voitur beteg Guitalmoze.

Ar mammou, a zigaso ive, d'ar bourg, en dervez-se ho holl bugale evit beza beniget gant an Aotrou n' Eskop ha dre eno gant Doue e-unan.

An Aotrou n'Eskop o benigo euz d'or ar balustr. Evit-ze ar vugale a deuio deuz kostez aoter ar Galoun Zakr ; hag a ielo kuit dre gostez aoter ar Verc'hez.

A vezo digemeret gant an Aotrou n' Eskop, er presbytal, goude ar gonfirmasion : conseil ar gommun, conseil an Iliz, hag ive an dud euz Breuriez ar Gelennadurez kristen a ra, a volentez vad, katekismou da vugale ar barrez.

Goudeze an Aotrou n' Eskop, a ielo da visita ar skol gristen.

A zougo an dé evit kass an Aotrou n' Eskop d'an Iliz : an Aotrou Mear, an Aotrou Ajant, prezidant ha tensorier conseil an Iliz.

Evit kass an Aotrou n' Eskop d'an Iliz hag hen digaz d'ar presbytal, a zougo : ar banniel braz : Yves Cadour, Yves Conq, François Potin ; banniel ar famill zantel : Joseph Talarmin, Kelle-ret ; Joseph Magueur, Kerc'hoazoc ; banniel an abostolaj : Jean-François Kervran, Penfoul ; François-Marie Eliès, Kervajan.

Ar fabriket a zougo ar c'hroaziou.

Ma vez eur jenchamant benag araok e vezo embannet.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil sul, 13 a viz Mae :

11 h. — Perrine Arzel, Jeanne Le Ven, Michelle Léaustic, Marie-Jeanne Bervas, Kelleret.

11 h. 1/2. — Marie-Ursule Minguy, Françoise Floc'h, Jeanne Kerjean, Victoire Coadou, Bourk.

12 h. — An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, François Ollivier, Joseph Vaillant, Bourk.

12 h. 1/2. — Ar skol gristen.

1 h. — Jeanne Calvez, Ty-Pri; Philomène Cloâtre, Marie-Anne Jaouen, Marie Squiban, Langurru.

1 h. 1/2. — Marie-Yvonne Quéméneur, Marie-Françoise Le Gall, Jeanne Daouben, Philomène Le Gall, Trémazan.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Josephine Auffret. Madeleine Prigent.	Trede klas.	Haudes Talarmin. Marie Bocheur. Marie-Yvonne Pellen.
Kenta rummad.	Georgette Bouquet, Yvonne Magueur. Marie-Yvonne Cong.	Kenta rummad.	Léonie Bégoc. Marie Kerjean.
Eil rummad.	Marie Gouzien. Louise Laot. Germaine Bellec. Philomène Cornep. Marie-Yvonne Kerros. Isabelle Guéna.	Eil rummad.	Josèphe Potin. Marie-Yvonne Kervran. Marie Bizien. Josèphe Floc'h. Marie Bizien (Kéléroun).
Eil klas.	Marie-Anne Mingant. Yvonne Abjean. Hélène Gélébart.		
Kenta rummad.	Marie-Yvonne Perchoc. Marie Cadalen.		
Eil rummad.	Ernestine Brénéol. Bernadette Hamon. Françoise Kervran. Thérèse Cadalen. Marie Lescop.		

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezus-Krist heritourien ar Baradoz :

27 Meurs. G.-M.-J. Godebert, Kastel.	PAEROUN	MAEROUNEZ
27 — Marie-Yv. Cadalen, Streat-Lan.	G. Godebert.	M.-F. Jaouen.
	H. Le Borgne.	M.-A. Cadalenr

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal dez ar varn divesa, e goasket ar groaz :

19 Meurs. Ollivier Le Borgne, 72 bloaz, Kersaint.
14 Ebrel. Marie Magueur, 73 bloaz, Sant-Samson.

Eat d'ar Baradoz

7 Ebrel. Krouadur Allegot, 5 minuten, Kerlaguen.

Kannadik miz Ebrel en deuz koustet 22 lur 16 guennek. Bet evit sikour e baea digant : P. G., 20 real ; M. R. C., Y. J., peb a skoued ; J. B., 8 real ; A. T., R. N., J. H., peb a 6 real ; E. P., 24 guennek ; M. T., A. V., peb a 4 real ; C. G., M. F., peb a 10 guennek.

Brest, Imp. r. Château, 4.

Le gérant : J.-M. LE ROUX.

Kannadik Parrez Landunvez

AR VREZEL

Er miz diveza hon deuz bet adarre da bedi evit tri deuz hor zoudarded : 1° Eozen Gelebart deuz Kergastel, 36 bloaz. N'euz bet kelou ebet anezhan abaoe an 8 a viz here 1915 ;

2° Jean-Marie Perchoc deuz Kerveleoc, 31 bloaz. Setu ama ar pez a skrive he serjant evit diskleria he varo a en em gavaz d'an 22 a viz meurs diveza :

« Parrez Landunvez e deuz kollet unan deuz he guella bugale, ar c'haporal Jean-Marie Perchoc, maro eo e c'hristen mad hag o tiskuez kalz a nerz kaloun. Karget oa bet assamblez gant 12 soudard all da ziloja ar Brussianed deuz eul leac'h ma reant kalz drouk d'ar Fransisien. E kredi oant deuet abenn deuz ho zaol, Jean-Marie Perchoc a zao en e za hag a lavar : Araok, kamaraded, n'euz den ken ama. N'en doa ket echu he gomz ma resevaz eur vouled. Koueza a ra hag eur vinuten bennag goude he rentaz he ene da Zoue. Karet kalz oa gant he vignouned. An eil (section) deuz he goupagnunez a zestumaz etrezho 25 lur evit lakaat pedi evithan, hag henori anezhan » ;

3° Jean-Marie Cadalen deuz Kerc'hoazoc, 22 bloaz. Gouliet en emgann eo maro en hospital « Sainte-Croix-Auxil (Châlons-sur-Marne) », d'an 8 a viz mae diveza.

Ra gemero Doue anezho ar c'henta en euruzdet e varadoz.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	Eugénie Morel. Josephine Auffret. Yvonne Magueur.	Trede klas.	Léonie Bégoc. Francine Fily. Odette Rouat. Marie Morvan. Marie Magueur. Haudes Guéna.
Kenta rummad.	Madeleine Prigent. Marie-Jeanne Hamon.	Kenta rummad.	Marie-Yvonne Kerjean. Marie-Yvonne Milin. M. Bizien (Kerganabren). Marie Taloc. Marthe Lesvénan. Yvonne Querné. Marie Le Ven.
Eil rummad.	Marie Gouzien. Marie-Yvonne Kerros. Philomène Cornep. Germaine Bellec. Isabelle Guéna. Françoise Eliès. Louise Kermorgant.		
Eil klas.	Marie Cadalen. Marie-Yvonne Guéna. Perrine Kerros. Hélène Gélébart.		
Kenta rummad.	Joséphine Gouzien. Anne-Marie Jacq.	Eil rummad.	Joseph Bizien. Françoise Uguen. Marie Guéna. Suzanne Saliou. Joseph Magueur. Suzanne Saliou. Joseph Magueur. Marie Guéguen. François Cong. Marie Hamon.
Eil rummad.	Bernadette Hamon. Marie Lescop. Thérèse Cadalen. Marie Provost.		

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion, da Zul ar Zakramant, 10 a viz Even :

11 h. 1/2. Françoise Guiziou, Marie-Anne Bervas, Marie-Anne Talarmin, Marie-Jeanne Hamon, Kelléret.

12 h. Joséphine Godebert, Julie Pérès, Françoise Bégoc, Bernadette Vaillant, Bourk.

12 h. 1/2. Ar skol gristen.

1 h. An Aotrou Persoun, François Calvez, Guillaume Lescop, Hervé Salaün, Bourk.

Da ober ho hanter-heur adorasion, da Zul ar Galoun-Zakr, 17 a viz even :

11 h. Marie-Anne Cann, Anna Le Ven, Marie-Perrine Autret, Françoise Hamon, Kerc'hoazoc.

11 h. 1/2. Rose Le Borgne, Marie-Anne Cloâtre, Mme Gouzien, Marie Héliès, Bourk.

12 h. An Aotrou Persoun, Guillaume Lescop, Jean-Marie Pondaven, Jean-Marie Sylvestre, Bourk.

12 h. 1/2. Alexandrine Trébaol, Isabelle Chapalain, Keriou ; Marie Copy, Prat-Kerguerio, Vincente Chapalain, Kergounan.

1 h. Marie Coatanéa, Emma Brézel, Joséphine Le Menn, an dimezel Eugénie Marzin, Arc'hantel.

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jezuz-Krist heritourien ar Baradoz :

22 Ebrél. Anne-Marie Jaouen, Bourk : paëroun, Yves Jaouen ; maërounez, Philomène Coat.

8 Mae. Vincent Brénéol, Kerzent : paëroun, Joseph Vaillant ; maërounez, Françoise Brénéol.

11 Mae. Jeanne-Josèphe Le Goaster, Arc'hantel : paëroun, Pierre Le Goaster ; maërounez, Jeanne Pellen.

Magnificat !

EURED

A zo bet liammet gant eul'lian santel ha n'ezuz nemet ar maro a c'helfe he derri :

8 Mae. Hervé Perhirin, Guitalméze, ha Corentine-Marguerite-Marie-Jeanne Le Vern, Kersent.

Pater-Ave !

ENTERRAMANTHOU

A zo bet lakeat e douar santel ar veréd, da c'hedal deiz ar vurn divesa, e goasket ar groaz :

3 Mae. Sébastien Gélébart, 72 bloaz, Kergastel.

13 Mae. Anne Sielleur, 69 bloaz, Kerguerio.

De Profundis !

MIZ EVEN

1. GUENER KENTA. *Iun ha vijil* ar Pevare Amzer. Ar beden vella eo an oferen hag ar gommunion. Ar beden kennerzet gant ar binijen a zo dispar. Eun oferen, eur gommunion, ar iun, kinniget er memes dervez da Galon Jezuz, na pebez digoll kaer euz pec'hejou ar bed !

2. Sadorn. *Iun ha vijil* ar Pevare Amzer, da ginnig d'ar Ver-c'hez Vari, a oue he C'halon treuzet gant eur c'hleze a c'hlac'har pa oue Kaloun Jezuz treuzet gant lans ar zoudard.

3. SUL AN DREINDET. Lizer kenta S. Ian : « Va bugale muia karet, Doue a zo karantez. En deuz diskuezet he garantez en hor c'henver en eur zigas he Vap unik d'ar bed. » Pe voaligner benag a sko ar bed, Doue a zo karantez ! Den na c'hell kompren misteriou an Ao. Doue. Adoromp gant fizians : ar spered lemma, ar galoun garantezusa zo dezhan.

10. SUL AR ZAKRAMANT meulet ra vezo. « An dra-ma zo va C'horf. An dra-ma zo va Goad. » Ne jom na bara na guin. Chenchet int e Korf hag e Goad Jezuz-Krist, d'ar Gorreou, gant ar belek o lavaret komsou Jezuz. Dre hor respet, hor c'harantez, hor c'hommunionou, diskuezomp da Jezuz on deuz komprenet petra dal he Zakramant.

17. SUL AR GALOUN ZAKR. Jezuz en deuz savet an devosion d'he Galoun evit beza digollet ganeomp euz ar boan a ra ar bec'herien dezhan, dreist oll en he Zakramant. An oferen, ar gommunion, ar binijen, setu ar pez e c'houlén.

24. Sul. Gouel SANT IAN VADEZOUR. Ober a reomp gouel S. Ian da zeiz ar bloaz he c'hinivelez ; hag er c'hontrol, ar Zent all a vez henoret deiz ar bloaz ho maro. Perag ? Abalamour S. Ian a oue santeleat araok beza ganet, hag ar Zent all n'o deuz ar zantelez evit ato nemet pa varvont.

1 Gouere. Sul S. Per ha S. Paol.

6 Gouere. Guener kenta.

Ar Zakramant ho kar : hag he garet a rit ?

Jezuz, den ha Doue (Doue ar Map) a gar ac'hanoc'h. Evidoc'h eo e teuaz er bed. Evidoc'h eo e prezegaz al lezen hag e reaz ar miraklou a lennit en Aviel. Evidoc'h eo e varvaz en tourmanchou krisa. Evidoc'h eo e chom er Zakramant, daoust ha d'an oll zakri-lachou. Rag eaz eo he gompren, ma vije chomet en he Varadoz, e vije chomet ep poan.

Petra c'houlén en dizro ?

Beza karet ganeoc'h.

Hag he garet a rit ?

Ma teuit d'an oferen bep sul, bep gouel, bep tro ma c'hellit var ar pemdez ; — ma teuit da gommunia aliez hag ervad ; — ma kustumit bizita Jezuz en iliz ha lavaret ho mennoziou dezhan ; — ma teskit d'ho pugale, d'ho servicherien, d'ho tud, ober evel doc'h ; — neuze ia, e karit Jezuz.

Ma yankit d'an oferen evit eun digarez dister, ma kommuniit ral hag ep he zonzal koulz lavaret, ma ne gavit netra da lavaret

da Jezuz, ma ne rit vañ o velet an tiad tud ken dizeblant ha c'hui, ha kredi a c'hellit e karit Jezuz evel ma z'oc'h karet ganthan ?

Siouaz, ma ne glevit oferen ebet, ma ne rit ket ho Pask soken, ma rit fae var an iliz, ma teskit d'ar re all beza ken dizoue ha c'hui, e tiskuezit o peuz kas ouz Jezuz. Ha Jezuz a c'hell lavaret deoc'h evel d'ar Juzevien : « Evit pehini euz va oberou mad e persekudit ac'hanon ? »

Va farrisioniz ker, pedomp evit enebourien ar Zakramant, pedomp evit ar c'halounou ien-sklas, evit an eneou klouar, bezomp mad da zigoll Jezuz.

Evit an Den-Doue o chom etouez an dud abaoe 19 kant vloaz, evit he vadoberou a bep seurt, anaoudegez, karantez ha respet !

439

KALOUN SAKR JEZUZ

Perag en deuz Hor Zalver savet an devosion d'he Galoun ?

Evit ma teuo da veza Roue var an eneou ha var ar boblou. Var an eneou e vezo Roue, pa vezint anaoudek en he genver evit he dri mister brasa : an Inkarnasion, pa gemeraz hon natur evit rei perz deomp en he natur divin ; ar Redempcion, pa varvaz var ar Groaz evit paea dle hor pec'hejou ha gounid deomp gras ar zilvidigez ; Sakramant an Aoter, hag a vag hon eneou.

Var an eneou e vezo Jezuz Roue, pa raparint an dismegans great ken aliez varnhan gant leun a dud : he c'halloud hag he vadelez nac'het, he c'hourc'hennou torret, he bromesaou goapeat, he c'hourdrouzou disprijet, he Zakramant profanet.

Var an eneou Jezuz a vezo Roue, pa heuliint he vertuziou : pa vezint dous hag humbl, pasiant ha madelezuz, sentuz oc'h Doue, aketuz evit he c'hloar, mad da ober pinijen...

Penaos e vezo Jezuz Roue var ar boblou ?

Pa vezo lezet bep frankiz d'he relijion gant ar C'houarnamant, pa vezo lezennou ar broiou great ervez lezen Doue, pa vezo kristen ar famillou.

Petra c'houlen Hor Zalver Jezuz evit ma teuo da veza Roue en hor bro ? Tri merk a honor : Goulen a ra e ve savet eun iliz, gant ar Vro abez, en honor d'he Galon (iliz Montmartr eo). Goulen a ra ma vezo konsakret ar vro, gant ar C'houarnamant, d'he Galoun Zakr (n'eo ket great c'hoaz, petra benag meur a gommun, an oll eskoptiou, meur a emgleo, leun a famillou, o deuz sentet ouz mouez Hor Zalver). Goulen a ra ma vezo lakeat imaj ar Galoun Zakr var drapo an armee ha drapo ar vro (lakeat eo bet gant tud a vilionou, mes gant ar C'houarnamant eo e tle beza aotreet ha gourc'hemenet, ervez mennoz Jezuz).

Peb hini a dle ober en dra c'hell evit kreski an devosion d'ar Galoun Zakr. « Diveza labour he garantez evit savetei ar bed. » Hag evit deski muioc'h mui an devosion d'udius-se, ne c'hellan ket erbedi re ouzoc'h lenn hag azlenn *Kannad ar Galoun Zakr*, a ro kenteliou ha skueriou ken kaer da genseurte abostolaj ar Beden.

440

D'AR RE O DEUZ BUGALE

Da zul Bleuniou hag abaoe, pa zellan ouz ar vugale a bep oad en iliz, er c'hatekismou, hag e leac'h all, n'oun ket evit miret da zonjal penaos e vezont savet gant ho zud. Rag dioc'h ma vezint savet, e vezint euruz pe nan, ha Doue ho digemero pe ho banno kuit.

Bugaligou 12 miz, 15, 20 miz, na pegen koantik int ! Ententit mad ouz ho c'horfou ; divezatoc'h o devezo izoum a iec'hed. Na roit ket a draou pounner nag a ampoezoun dezho da zibri na da eva !

Bugaligou 2 pe 3 bloaz, koantoc'h koanta ato. Diouallit ! na blegit morse dezho. Ma plegit, int-hi a gemero plegou fall, hag a bado hed ho buez pe hirroc'h. Deskit ive dezho ho fedennou.

Bugaligou a 4 da 6 bloaz. Diouallit muioc'h c'hoaz ! Poent eo deski dezho petra eo ar mad, petra an drouk. Red eo koms dezho alies euz an Ao. Doue, a ro da bep hini dioc'h ma ra, — euz ar baradoz hag an ifern. Ma vankont, punisit : ral, mes stard. Grit dezho kaout kas ouz ar gevier hag ouz an traou divalo, sellou, geriou, hag all. Ha dreist-oll, na blegit morse dezho ! Ma plegit eur vech, int-hi na blegint morse.

Bugaligou 6 ha 7 vloaz, hag a gav mad ar bonbonou, hag a c'hoanta beza servichet brao, hag a gustum mouza. Ar bonbonou a ra drouk d'ho dent ha d'ho c'hof, an orgouil a laz ar garantez ennh, ar vouzerez ne dle ket beza gouzanvet. Grit dezho pedi mintin ha noz.

Paotred ha paotreded 8 ha 9 bloaz : eur ger epken, mes unan mad. Kasit anezho da gommunia aliez, aliez, aliez. Izoum o deuz. Grasou o devezo. Ho zud a gavo gras. Mes morse na blegit dezho.

Paotred ha paotreded 10, 11 vloaz... er miz a zeu e livirimp.

441

Adarre hag ato ar banneou

Tud zo, Fransizien zo, kammersanted zo, deputeed ha senatourien zo, hag a gav dezho buez eur zoudard ne dal ket eur banne.

Eo, eo, evel ma lavaran deoc'h.

Ar re-ze, en ho C'hongrès e Paris, er bla-ma, o deuz goulennet ne c'helfe mui ar C'houarnamant ober rekizision an alcool. An alcool a zo red goulskoude evit ober poultr da garga obuzou ha da laza Boched. Goulennit digant ar c'heaz soudard ma vije brao, ma vije posubl, sailla var ar Boch panefe an ridoch houarn stegnet, dirag al linen kenta o vale, gant an obuzou a guz an dud ouz tan an enebour !... Goas a ze d'ar zoudardet, eme an aotrounez brao, ma vank ar munisionou dezho d'en em zifen. Da genta, roit banneou d'ar mezvierien ! An divarlerc'h, d'hon difennourien.

Ah ! marc'hadourien hag everien torfetour !

Eun dra all zo. Ne gaver ket a zukr aoualc'h. Mad, er miz a zeu ho *Kannad* a lavaro perag.

Ar banneou d'an traon, evel oll enebourien Frans.

442

SKUER PREZIDANT AR REPUBLIK

N'eo ket an Ao. Poincare eo, mes an Ao. Wilson, prezidant an Etats-Unis, eur mestr hen ive !

An Amerik ne ouie ket pe e raje brezel d'an Allmagn pe n'her graje ket. Ar vinistred o ioa bodet er palez. An Ao. prezidant Wilson a erruaz, sonjou pounner var he spered, eaz oa her guelet. Dibab ar peoc'h pe ar vrezel evit millionou tud, a zo eur goal guden da zirouestla.

— Aotrounez, emezhan, ne ouzon ket pe e kredit pe ne gredit

ket e galloud ar beden. Evidon-me a gred. Pedomp. Galvomp sikour an oll galloudek.

Var-ze, prezidant an Etats-Unis a guezaz var he zaoulin ; an oll vinistred a reaz evel dhan, hag ar prezidant, a vouez uhel, a reaz ar beden.

Abaoue, ar prezidant en deuz diskleriet ar vrezel d'an Allmagn : n'eo ket ar Frans eo a glemmo. Mes piou oar ma n'eo ket ar beden great gant conseil ar vinistred eo e devozo digaset eur zikour ker braz, divent, d'hor bro ha d'he c'henseurted ?

Pedomp. Dalc'homp. Kendalc'homp. Sikour Doue a dal an oll armeou. Dont a ra ato e poent hag en amzer.

443 **Teodou flemmuz, teodou ifern**

Oh ! Jopik ! Oh ! Mari-Jeannik ! na c'hui a c'hoar flemma ! Jopik ! Mari-Jeannik, na c'hui a vo flemmet !

Ho teod a ra eur vicher-ifern : ho teod a lesko en ifern, ma kendalc'hit.

Avechou e livirit ar virionez, avechou all gevier. Pa ouzoc'h, e kaozeit. Pa ne ouzoc'h ket, e kaozeit memes tra.

Ho nesa en deuz brud mad : brud fall e roit dezhan. Ho nesa a ioa varnez dimezi, eun taol teod, ha freuz buan ! Ho nesa a c'houlenne eur post da veva he famill : eun taol teod, kenavezo d'ar post !

Mamm ar zoudard ne resev ket a gelou : « Ho map zo lazet » eme-c'hui, fouge ennoc'h abalamour ma ouzoc'h keleier... ha ma plantit ar c'hleze en eur galon dener.

Ar Frans a c'hounid var an Allmagn, mes a nebeudou. « Treitourien zo » eme-c'hui ; hag e hadit an disfizians, an droulans, ar gasouni.

An Iliz a zo, evel bepred, goal gaset ha goal damallet. « Ar Pab zo bach, eme-c'hui. Ar veleien zo boch ». Ha c'hui, badezet, a labour enep an Iliz ho lakeaz var hent an Env, enep ho Toue : ha bemdez e livirit, piou oar : « Hon Tad pehini zo en env... hon delivrit euz an drouk ! »

Jopik, Mari-Jeannik, ar gabestr d'ho teod, en han' Doue ! pe em bezo aoun braz evit ho teod flemmuz hag ifernuz !

444 **LEZENNOU DISLEAL**

Na pet guech e oue klevet, eun amzer a zo bet, ar geriou-ma : Al lezen zo al lezen. Plega ranker. Ar relijiuzed a vez kemeret ho ziez dioutho ; int-hi a zo kaset er meaz euz ho bro : al lezen eo. Plega rankont ! Ar veleien, ar C'houarnamant ne bae mui he zle dezho ; an ilizou, an anaoun, ar C'houarnamant a denn dioutho ho madou ha fondasionou : al lezen eo, n'euz netra da lavaret.

Mad. Daou ministr a zislavar ar geriou sakrilaj-se, daou hag o devoa votet an oll lezennou enep ar relijion, daou ha n'int ket konvertiset.

Millerand, bet ministr ar vrezel, oc'h ober eur gonferans e Marseill : « Goude ar vrezel, emezhan, ar Republik ne c'hell ket miret da zalc'her d'an unvaniez santel. Ne c'hell ket miret da rei ho guir d'eur rummad Fransizien vad hag o deuz skuillet ho goad evit ar Vro, hag o deuz meritet, hag a virit ato, a bep seurt meuleudiou en trancheou, me lavar ar veleien hag ar relijiuzed ! »

Rei ho guir dezho, emezhan. Al lezennou enep dezho a ioa eta lezennou enep ar guir !

Clemenceau, bet prezidant ar vinistred, eur paian peguir n'eo ket bet badezet, a skriv en he gazeten. « Eur torfet euzuz ha sponzuz e vije, emezhan, kas kuit euz ar vro ar Fransizien, — beleien, relijiuzed, seurezed — o deuz entetet ouz hor zoudardet glazet hag a vije chomet var an dachen panefe-hi. Lezen an Disparti, lezen ar C'hongregationou, a zo bet great fall : mankou pounner int. Ar vrezel a ro tro alies d'ho ehuna. Ne vije ket just mankout d'an de-ver-se. »

Evit beza eul lezen guirion, lezen an dud a dle beza ervez lezen Doue. An daou-ma a anzav o doa great lezennou disleal. Ho zerri a ranker.

445

AL LIZER FERM

Al lezen a bermet da hiniennou gortoz evit paea ho lizer ferm. Ia, pa ne c'hellont ket.

Tud zo hag a c'hell paea ho lizer ferm, ha n'her greont ket. Pec'hed o deuz. Arc'hant ho nesa e talc'hont en ho ialc'h.

Rag ar perc'hen en deuz ato guir da veza paet gant an hini a c'hell. He di, he zouar, he draou a zo dezhan. Nep a ra implij anezho a dle ho faea, pa c'hell. Ma n'her gra ket, peseurt kemm zo etrezhan hag al laer ?

446

AR VELEIEN ER VREZEL

MARO EVIT AR FRANS. An Ao. ROUDAUT, a Blouguerne, rener skol gristen Sant-Martin Brest, bet reformet divar ar front, maro abaoe en he 30 vloaz.

KROAZ A VREZEL. An Ao. JEZEQUEL : « Soudard en ambulans 2/61. Infirmier mad, kalounek, aketuz d'al labour, goal vleset pa rea he zervich en ambulans dindan eur glao obuzou. » (38 bloaz.)

MARO EVIT AR FRANS. An Ao. JEZEQUEL, a Blouguin, bet kure Plovan, goal vleset d'ar 24 a viz meurs 1917, maro d'ar 26.

MARO EVIT AR FRANS. An Ao. BILLANT, a Zant-Urbain, kure Garlan, lazet e Saily, e miz eost 1914. N'oa ket bet a gelou anezhan abaoe. Persoun Saily, delivret dre viktoreiz meurs 1917, en deuz lavaret e peleac'h eo beziet. (32 ans.)

KROAZ A VREZEL. An Ao. CADIOU, a Bloueskat, rejant e skolaj Sant-Visant Kemper, letanant en 19° : « Offiser da veza meulet ar muia, ijimuz ha kalounek meurbed. Epad dek dervez attack (ebrel 1917) en deuz goulennet, dastumet, barnet kement keleier euz an emgann a vije mad d'ar vistri da c'houzout. Pa edo ar stourmad en he voasa, en em ziskuezaz ken dispount ha seder, difouge ato. » (Eil embann.)

MARO EVIT AR FRANS. An Tad LAGATHU, a Blougastel, missionner, soudard-aomonier en 2° colonial, lazet d'ar 16 ebrel 1917.

KROAZ A VREZEL. An Ao. MADEC, a Lambézellec, rejant e

Kastel, sous-letanant en 235° artillerie : « Kaer dindan an tan. D'an 22 ebrél 1917, obuzou pounner o kuez var he beziou-kanol, en deuz redet da zikour daou ganonnier glazet en eur vatterie all, gant ar brasa fae var an, danjer. »

KROAZ A VREZEL. An Ao. LHOSTIS, a Gernouez, rejant e Sant-Visant Kemper, adjudant mitrailleur en 219°. « Ken kalounek ha difouge, eat gant eur strollad soudardet el linennou allmand. Leun a enebourien o veza saillet varnho, hen eo en deuz tec'het pe lazet an darn vrasa, dre he vitraillereuzou hag a denne piz ha puill. » (Eil embann.)

447 KOMZOU A GONSOLASION

**evit ar gerent a zo kuezet ho zoudarded
var an dachenn a enor**

(Tennet euz ar Skritur-Zakr, Leor ar Furnez, chap 4-5, skrivet enn Egypt, vardro 150 vloaz araoek Jezuz Krist.)

An den just, zoken pa varv araoek an oad, a gav ar peoc'h hag an eürusted.

Eur gozni honoruz, n'eo ket an hini a deu goude eur vuez hir ;

N'eo ket niver ar bloaveziou eo a ra talvoudegez ar vuez,

Mez ar furnez eo a zalc'h evit an den plas ar bleo guen,

Hag ar pez a ro kozni eo eur vuez disklabez.

Deuet mad oa da Zoue, karet oa gant-han,

Hag o veza ma veve e touez ar bec'herien, ez eo bet douget en eur vro all.

Diframmet eo bet, gant aoun na deuche ar fallagriez da zaotri he spered, hag an drouk da c'hounit he galoun.

Rak an techou fall a zo touelluz, hag a guz ouzomp ar mad,

Hag an ioulou, p'en em lakcont da virvi, a drenk buan eur spered dinoaz.

Duet e berr amzer da ren eur vuez dibec'h, an den just en deuz dastumet eun niver braz a veritou, abalamour ma plije kalz he ene da Zoue.

Setu perak an Oll-gallouduz en deuz he dennet buan euz a greiz ar fallagriez.

Ar boblou a vel an dra-se eb he gompren.

Ne conjont ket ema gras Doue hag he drugarez gant he zerviche-rien.

Hag e kemer soursi gant ar re a dle mont d'ar baradoz.

Mes an den just a deu ar maro dezhan a varn an dud fall a jom c'hoaz var an douar.

Hag an den iaouank, duet ken buan da veza difazi ha direbech, a varn an den fall a jom da goza er bed-ma.

Guelet a raint maro an den fur, mes eb kompren mennoziou Doue en he genvet, na perak en deuz he dennet divar an douar ;

Sellet a raint, en eur c'hoapaat, mes Doue a c'hoarzo dezho d'he dro ;

Ha goudeze e kuezint e touez ar re varo, goloet a vez hag a zis-honor evit atao.



Kannadik Parrez Landunvez

AR VREZEL

Ar barrez e deuz adarre da zouguen kaonv ha da bedi evit tri deuz he bugale maro er brezel : Jean Kerhuel euz milin-Trez, 22 vloaz, lazec gant eun obus en (tranchée). Yves Uguen, eus an Traon, 36 vloaz, ha René Cloâtre euz Kelléron, 43 vloaz. Ho daou int maro en hôpital dre ho gouliou. Lezel a reont bep a 4 kraouadur, oll e kemerimp perz en anken ho zud glac'haret.

MEDALEN (MILITAIRE)

Dar zul 10 a viz Even, goude an offeren bred, an aotrou Mear en deuz roet ar vedalen (militaire) da Jean-Marie Guennégues euz Kerc'hozel, goal c'hlazet er brezel. An oll barissioniz a ioa euz euz an honor-ze great d'ho c'henvroad hag a bedo Doue da barea he c'houlou ar c'henta possubl.

Testeni a zeskadurez (Certificat d'études)

Pemp eus merc'hedigou ar skol gristen ho deuz bet ho testeni a zeskadurez roet gant ar c'houarnamant d'an 9 a viz even : Joséphine Auffret, bourg ; Georgette Bouquet, bourg ; Marie-Yvonne Conq, Traon ; Yvonne Magueur, bourg ; Madeleine Prigent, Kerzent. Trugarez d'ar Mestrezet o deuz kemeret kement a boan evit ho deski hag honor d'ar merc'hedigou o deuz poaniet da labourat.

Pevar paot euz ar barrez ho deuz bet ive ho zesteni a zeskadurez Alfred Guéna, euz ar C'hantel ; Edouard Provost, euz Kerriou ; Luc Rapine, bourg ; Alain Talarmin, euz ar C'hantel.

A zo pedet da ober ho hanter-heur Adorasion d'an eil zul 8 a viz Gouere :

11 h. — Josephe Guéna, Marie-Jeanne Magueur, Louise Hamon, Françoise Fourn, St-Samson.

11 h. 1/2. — Josephe Nédélec, Eodez ; Josephe Lescop, Guennégues ; Elisa Pérès, bourg.

12 h. — An aotrou Persoun ; Guillaume Lescop, Jean Guennégues, François Olivier, bourg.

12 h. 1/2. — Ar skol Gristen.

1 h. — Marie-Anne Le Gall, Philomène Le Guen, Marie Bothorel, Marguerite Forest, Trémazan.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

<p>Kenta klas. { Eugénie Morel. Josephine Auffret. Yvonne Magueur. Madelaine Prigent Marie-Yvonne Conq. Georgette Bouquet.</p>	<p>Tre'e klas. { Léonie Bégoc. Francine Fily. Jeanne Guéna. Marie Magueur. Marie Yvonne Milin. Alexandrine Marzin. Marie Taloc. Louise Magueur. Pélagie Sylvestre. Marie Bizien.</p>
<p>Eil rummad. { Marie Gouzien. Philomène Cornen. Marie-Yvonne Kerros. Léontine Michel. Louise Kermorgant. Marie-Anne Mingant.</p>	<p>Kenta rummad. { Marie Foll. Marie Pères. Marie-Yvonne Mingant. Joseph Magueur. Marie Guéguen. Josephine Bégoc. Jeanne Perchoc. Perrine Magueur. Louise Sylvestre. Marie Hamon. Marie-Jeanne Cadour. Catherine Jaffrès. Madelaine Querné.</p>
<p>Eil klas. { Marie Cadalen. Hélène Gélénat. Josephine Gouzien. Anne-Marie Jacq. Perrine Kerros. Jeanne-Yvonne Trébaol.</p>	<p>Eil rummad. { Marie-Anne Conq. Bernadette Hamon. Marie Lescop. Marie-Yvonne Jaouen.</p>

BADIZIANTOU

A zo bet great bugale da Zoue ha d'an Iliz, breudeur da Jesus-Krist, heritourien ar Baradoz :

	PAEROUN	MAEROUNEZ
19 Mae. Olive Eugénie Talarmin, Arc'hantel.	E. Talarmin.	A. Talarmin.
21 — Josephine Luart, Pen ar pavé	S. Luart.	E. Luart.
22 — Jeanne-Pélagie Bocheur, Kerzent.	F. Bocheur.	M.-A. Brénéol.
22 — Marie-Anne Bocheur, Kerzent.	O. Bocheur.	M.-A. Bocheur.
14 Even Marie-Yvonne Taloc, Navant.	J. Vennéguéz.	M.-Y. Taloc.

Magnificat !

EUREUJOU

A zo bet liammet gant eul liam santel ha n'eus nemet ar maro a c'helfe he derri :

23 Mae. François-Marie Fourn, Tourane, ha Marie-Fr. Maguer, Sant-Samson.
28 — Yves Gagnon, Plouzane, ha Léontine Menguy, Kergastel.
6 Even Jean Boucher, Bourk, ha Jeanne Floc'h, Bourk.
13 — Pierre-Marie Jos. Guennéguéz, Guitalmeze, ha Marie-Fr. Bégoc, Bourk.

Pater-Ave !

ENTERRAMANTHO

A zo bet lakeat e douar santel ar vered, da c'headal dez ar curn diveza, e goasket ar groaz :

5 Mae. Ernest-Marie Coatanéa, 45 bloaz, Arc'hantel.
17 — Joseph-Etienne Jaffrès, 13 bloaz, Arc'hantel.
19 — Victor Coatanéa, 75 bloaz, Arc'hantel.
25 — Yves Uguen, 35 bloaz, hospital (maritime), Rochefort.
27 — Vincente Provost, 38 bloaz, Kergouanan.

De Profundis !

Kannadic miz mae a miz even ho deuz koustet 45 lur ha 12 guenek. Bet evit sikour ho faea, digant : V. M., J. C., P. R., J. P., peb a 8 real M. F., J. K., M. P., peb a 4 real.

Doue r'ho faeo !

MIZ GOUERE

30 Even. IUN HA VIJIL derc'hent solanite S. Per ha S. Paol.

1. Gouere. SUL SANT PER HA SANT PAOL. Histor an Ebessel a gount penaoz Herodes a brizouniaz S. Per, evit he zibenna goude Pask. S. Per, erreet gant diou jaden, a gouske etre daou soudard ; pevarzek soudard all a zioualle an doriou. Eun eal a zihunaz S. Per hag a gerzaz kuit ac'hano, gaelet na klevet gant den. — Pa blijo gant Doue delivra an Iliz hag ar Frans, den na c'hello miret. Pedomp ta, evel ma rea ar gristenien genta evit S. Per.

6. GUENER KENTA. O Kalouñ Sakr Jezuz, ni a ginnig deoc'h an oferen hag ar gommunion a zigoll evit rapari ar pec'hejou great ha da ober epad an eost a bep seurt.

8. C'HUEC'HVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Lizer S. Paol d'ar Romened. « Ma vezomp henvel ouz Jezuz en he varo, e vezimp henvel outhan en he rezurrection ive. » Ar maro a c'hell beza tenn an eternite a vezo braz ha kaer aoualc'h da zigoll ac'hanomp.

15. SEIZVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Lizer S. Paol d'ar Romened. « Ar maro eo gobr ar pec'hed. » Dre ar pec'hed e teuaz ar maro er bed. Deuz ar pec'hed e teu an oll boaniou. Perag eta e karc'emp anezhan, hon enebour goasa ?

22. EIZVED SUL GOUDE AR PANTEKOST. Lizer S. Paol d'ar Romened. « Mar d-omp bugale da Zoue, e vezomp ive heritourien dezhan, daou-hanter gant Jezuz. » Ar vadiziant a reaz ac'hanomp bugale da Zoue. Mes ma savomp enep hon Tad, ma ne vevomp ket ervez skueriou Jezuz hor breur divin, e kollimp hon heritaj eternel, ar baradoz.

29. Sul SANTEZ ANNA, patrounez Breiz, mamm ar Verc'hez Vari. Kentel d'an tadou ha d'ar mammou. Gloar Santez Anna a deu deuz he merc'h ha deuz he Map bian Jezuz. Gloar ar c'herent a deu dezho deuz kelennadurez mad ho bugale. S. Paol a lavar ne c'hell an tad hag ar vamm en em zavetei nemet dre ma labouront da zével mad ho re vian.

3 Eost. Guener kenta.

5 Eost. Naved sul goude ar Pantekost.

AR SKAPULAR

(Gouel Itron Varia Karmez, 16 Gouere)

Mari, rouanez an Env, en em ziskuezaz guechal da Zant Simon Stock, superior Tadou Karmez. Lakaat a reaz ar Skapular en he zourn en eur lavaret :

— Setu ama, va map, eur viskamant a zifenno en oll danjeriou kement hini he dougo. En ho heur diveza, e skoazello anezho hag e viro outho da guez a ifern da viken.

Sklear eo, nep a zouge ar Skapular ep doujans, ep karantez, na dlefe ket kounta var ar zilvidigez evel var eun dra dleet d'he zevosion. Mes an hini a zoug gwiskamant ar Verc'hez gant fizianz

ha respet, an Drouk-Spered na gavo krog ebed ennhan. Ha zoken e danjeriou ar c'horf, e vezo difennet.

N'euz ket pell e varvaz ar c'hleronier Rolland, bet chasseur var droad en he iaouankiz. Eun dervez en Aljeri, surprenet gant an Arabed, e stourmaz gant kement a galon ma tec'haz kuit ar re ne ouent ket lazet, eur bern leun c'hoad anezho.

Evithan he-unan, etouez kement a dennou, ne bakaz ket eur gignaden zoken.

Ar jeneral Cavaignac a reaz dougen anezhan e triomp dirak an oll soudarded, ar muzik o c'hoari en honor dezhan. Dioc'h ar par-daez, ar c'hlerouner a leinaz oc'h taol an offiserien, hag ar jeneral a lavaraz oa souezet en divije bet ar chans da veza chomet diva-c'hagn e kreiz kement a voullji hag a daoliou :

— Va jeneral, eme Rolland, ne ket souez goulz Koude ; rak me meuz eur zae-houarn dispar :

— Pe seurt zae-houarn ?

— Setu hi ama, va jeneral.

Hag hen ha dizelei he vruchet, ha diskuez skapular ar Ver-c'hez !

Guella zae-houarn a oufemp da gaout, ni ive, eo ar skapular-ze. Dougomp anezhan noz-deiz hag e peb leac'h, ha greomp d'hon tud hen dougen ive, d'hor zoudarded ha d'hor martolodet dreist-oll, pa risklont ho buez bemdez evidomp.

SANTEZ ANNA, PATROUNEZ BREIZ. — Ar ger Anna a zinnif leun a c'hras. E guirionez, Santez Anna a oue leuniet gant gras ar Ver-c'hez Vari he merc'h, pa gonsevaz anezhi dibec'h. Abaoue ar penn kenta euz an Iliz, e oue henoret meurbet etouez ar gristenien. Er blavez 710 he relegou a oue digaset euz an Douar Zantel da Constantinopl, ha roet da veur a iliz.

E Bro-Breiz, santez Anna a oue karet en amzer gosa, dreist-oll eleac'h ma oue savet en honor dezhi eur chapel e kichen Guened, pa oue dizoloet eur patrom koz anezhi, e park ar Boscenno, gant eul labourer devot hanvet Nikolazik, er 17^{ved} kantved. Hon tudou koz a gustume mont di da bardouna, ha var ho zroad zoken, evel ma veler merket var gahierou koz Santez-Anna-Vened.

Dalc'homp sonj ez eo hi eo hag a zo karget gant Doue da ziuall hor c'horn-douar. Ma n'eo ket diskennet an enebourien e Breiz ervez ho menoz, piou a viraz outhan ? N'eo ket hon listri ; c'huec'h lestr koz ha n'edont ket euz ar re vrasa, penaoz o dije diarbennet ar Boched niveruz ha galloudussoc'h ? N'eo ket al listri Saoz ken nebeut, rag Bro-Zaoz ne valee ket evidomp c'hoaz er mare-ze. Perag neuze e troaz kein an enebour dirag ken nebeut a Fransizien ? Breac'h Doue, ep mar ebed, a grogaz er stur d'hon delivra. Ha patrounez Breiz eo, hor zantez Anna, hag e devoa pedet he Map bian Jezuz evidomp.

Bennoz Doue dezhi ! Ra vezo meulet gant Breiziz oll ! Ra vezo desket d'ar vugale he hano, he buez, he madelez !

BEZOMP DEZHAN. — Doue a zo ganeomp, e kraou Bethleem. Bian, er boan, paouroc'h eget ar paoura, ep ti nag oz na kavel na netra : ha kementse evit gounid oc'h ene. — Ha mont a rit d'he adori, d'he bedi, d'he drugarekaat ?

Doue a zo ganeomp, var an douar. O labourat, o poania, o c'houzanv, epad 33 bloaz. — Eveldhan, labourit. Evit hen digoll, gouzanvit ho poaniou a galon vad.

Doue a zo ganeomp, en iliz, deiz ha noz : he oll amzer a zo deoc'h. — Hag he vizita a rit ? Penaoz e tremenit ar zul ?

Doue a zo ganeomp, var an Aoter. Bep mintin e tiskan varnhi, e teu da bedi, da rapari, da drugarekaat he Dad en ho plas-c'hui. — Ha ne c'helfac'h ket dont avechou da zalc'her kompagnunez dezhan, zoken var ar pemdez ?

Doue a zo ganeomp, en Tabernakl. Prizounier a volonte vad, dilezet gant an darn vrasa, disprijet, offanset, profanet gant eun darn. — Eleac'h koll amzer, eleac'h kaketal he drouk prezeg, kit da velet Jezuz beo en Tabernakl. Kountit dezhan ho poan, hag hen ho tizammo. O pet truez outhan, daou vil bloaz zo prestik ema prizouniet evidoc'h !

Doue zo ganeomp, ouz an Daol Zantel. Hor bara, hor buez, hon louzaouen eo. — Pet guech e tebrit bara pemdeziek an ene ? Pet guech e krenvait oc'h ene, pet guech e pareit he glenjejou dre ar gommunion ? Jezuz a lavar : « Deuit bemdez ! »

PEDEN E KOMMUN. — D'ar mammou eo e lavaran dreist-oll : epad an hany, epad an eost, dalc'hit d'ar beden e kommun, daoust ha d'al labour, d'ar skuisder, d'an estranjourien a zikour ac'hano-c'h marteze.

Perag ? Abalamour Jezuz en deuz roet he c'her : « Pa'z euz daou pe dri, emezhan, en em vodet e va hano, emoun en ho zouez. » Dre-ze ma fell deoc'h beza selaouet suroc'h ha buanoc'h, pedit, an tiad tud daoulinet dirag ar Grusifi, pe dirag imaj ar Galon-Zakr. Pedit, evit ma tistroio d'ar gear an tad, ar breur, ar map, ar vignou- ned, oll diampech ha dibec'h. Pe, ma vezont kuezet evit ar vro, evit ma 'z aint d'an digoll eternel.

Ha da zeiz ar peoc'h, touseat dre ho pedennoù, ar zoudard hag ar martolod, deuf en dro erfin, a zaoulino er gear d'ho zro, a-unan ganeoc'h, evit trugarekaat Doue an armeou hag obten ma pado ar peoc'h euruz.

Rag pa deu Jezuz e touez an dud, ez eo ato evit skuill varnho he vennoziou pinvidika.

Grit bemdez ar beden e kommun.

D'AR RE O DEUZ BUGALE. — Ho fask kenta solanel o deuz great, ho pugale ? Mad, poent eo digeri al lagad ! Aoun e meuz evitho ! Goal gompagnuneziou, soniou udur, kaoziou mezuz... diouallit, tadou, mammou ! C'hui oar teuler evez ouz al leue bian : hag ouz ho re vian oc'h-unan, neuze ?...

Ho pugale a zo oc'h echui ho faskou ? An oad sod o deuz. Eo, siouaz ! Beillit varnho, e pep leac'h ! N'ho laoskit morse digabestr. Gouzout a ran e vezont oll kement a ealigou : mes an elez a guezaz, eun drederen anezho ! Ma komzont enep ho mistri, enep ar vugale all, grit dezho rei peoc'h. Ma velit e koumansont gouzout traou a zo, mirit na vezint desket adreuz ; livirit dezho ar pez zo red, na re na re neubeut, goestad, kempen, ha santel. Oc'hpenn, guelit petra reont euz ho sulveziou, euz ho fardouniou, foariou hag all.

Ho pugale, pa grogont en ho femzek vloaz, a zo diesoc'h da c'houarn. Bep tra zo danjer evitho. Beillit, pedit, aliit. Ma n'o peuz ket great ho tever penn da benn bete vrema, re zivezad e c'hell beza. Da viana, kasit anezho alies da govez ha da gommunia. Na roit ket kalz guenneien dezho. Diouallit euz an heuriaou, imachou, kartennoù, kazetennoù fall... diouallit euz bep tra.

Aoun e meuz e guirionez. Paotred iaouank, na peger bresk eo an den ! Pedomp evit an dud iaouank.

AR PSALMOU. — Kana rit ar psalmou, pe ar c'haner hag ar beleg a gan anezho dirazoc'h. Ha gouzout a rit petra int, petra levront ?

Da genta, peur e kanit anezho ? En oferen ha d'ar gousperou. Peden ar beleg araok pignat ouz an aoter, an Introit, an Trait gant an Alleluia, peden al Lavabo (pa ema ar beleg o voalc'hi he vizied da fin an offertoire) fin ar Sanctus (Benedictus qui venit), ar beden goude ar gommunion; kementse oll a zo tennet euz ar Psalmou. Ar gousperou a gommunion dre bemp psalm. Ofis an Anaoun, evel ar Placebo, hag ar zervichou, a zo Psalmou. Pa deu ar vaouez da veza benniget he fenn en iliz, eur Psalm a vez lavaret evithi. Da fin litanion ar Rogationou, eur Psalm ive. N'euz lid ebet, koulz lavaret, ha ne ve ket kanet pe lavaret ennan eur Psalm benag. Kant hanter a kant zo anezho.

Piou a reaz ar Psalmou ? Ar roue David a reaz an darn vrasa : an 40 kenta, ha 33 all. David, bet pastor denved araok beza soudard, jeneral, ha roue, a renaz pobl ar Iuzezien, e bro Jerusalem, vardro mil bloaz araok amzer Jezuz-Krist. — He vab, ar roue Salomon, a skrivaz an 71ved psalm. Asaph, Eman, Ethan, bugale Core, oll kanerien e Templ Jerusalem ; Moyzez zoken, mestr braz ar Iuzevien pemzek kant vloaz araok amzer Jezuz, — re all c'hoaz a skrivaz ar Psalmou all.

Mes an hini a zeskaz d'ar skrivanier petra da lakaat er Psalmou, an hini a viraz outho da fazia, Doue eo, ar Spered Santel heunan.

Petra lavar ar Psalmou ? Ar Psalmou a lavar da Zoue kement peden a c'hell dont euz kaloun an den. Adori, trugarekaat, goulenn grasou, goulenn pardoun, meuli, gelver ar Zalver, etc., setu ar pez a c'hell peb kristen ober dre ar Psalmou, ar pez a reaz ar gristenien kenta, ar gristenien a bep amzer hag a bep stad.

Da zul ha da c'houel, dreist-oll er gousperou, kanit ar Psalmou. Lennit, er memes amzer, ar geriou gallek pe brezounek a zo en oc'h heuriou kichen ha kichen gant ar geriou latin. Ne viot ket inouet ; ho peden a dalvezo hirroc'h pa gomprenoc'h petra livirit, pa gasoc'h da Zoue ar memes pedennou a oue great gant kement a dud santel en ho raok, ha gant Jezuz he-unan. Rag an Den-Doue a lavaraz aliez ar Psalmou, ha var he Groaz zoken, en he dremenven, e vuzlavare ar Psalm Deus Deus meus, Va Doue, va Doue, perag o peuz va dilezet ?

SOUDARDET LABOURERIEU DOUAR. — Setu ama al loden vrasa euz al lezennoù evitho, ervez ar *Journal officiel* 27 a Ebrel 1917. — 1° Labourerien douar service armé euz ar c'hlas 88 ha 89 ; al labourerien douar service auxiliaire euz ar c'hlas 95 ha kosoc'h, an daou rummad-se a dle beza kaset d'ar gear. Oc'penn, ar re iaouankoc'h hag a zo en intérieur a c'hell beza kaset d'ar gear evit eun tachad. Goulskoude, ne vezo ket laosket da vont soudardet service armé euz ar c'hlas 18, euz an eil revision (ebrel-mae 1917), hag euz ar c'hlassou 1913-1917 bet ajournet kentoc'h ha lakeat brema service armé. Erfin, ar re a zo o teski ar vicher dezho.

Permisionou agricoles a vez roet d'ar re a labour ho douar heunan ha d'ar fermourien, ha d'ar vevelien goulennet gant eur mestr.

Deuz a 8 da 30 dervez, dioc'h brazder an tiegez hag izomou an armee. Mes daou viz a dle beza etre ar permission ordinal 7 dervez hag ar permission agricole.

Soudardet a c'hell beza kaset gant an ofiserien da labourat douar epad eur pennadik, euz a 1 dervez da 30, da zikour ar fermourien dosta.

Pep hini a ouezo, dre-ze, petra c'hell goulenn ha kaout.

ESPERNIT HO PARA. — Var zouar Frans, ar vrezel a vir na ve hadet hag eostet aoualc'h a viniz. Red eo prena a zianveaz. Ar guiniz prenet a zianveaz a rank beza paet en aour. Ar Fransizien o deuz digaset aour d'ar c'houarnamant ; mes ar c'houarnamant en deuz izoum euz an aour evit prena kement a draou, ma rank beza piz varnhan.

Arabad teuler ar restajou bara var ar bern teil. Arabad rei d'ar chatal ha d'ar c'hezek na guiniz na bleud na bara.

Koll bara a zo koll aour.

Koll bara a zo koll obuzou hag armou.

Espernit ho para ! Espernit ive ar sukr, ar petrol, ar glaoudouar, an dillad, ar bouteier, bep tra. Espernit evit delivra ar vro !

Hag evelse, var ar marc'had, e reoc'h pinijen, hag e paoc'h ho tle da justis Doue.

PAKAJOU DA GAS D'AR BRIZOUNERIEU en Allmagn. — An Ao. Dévaud, beleg katolik euz ar Suisse, hag a vizit hed ar bloaz hor c'henvroiz prizouniet, en deuz roet an ali-ma. Abaoue ar c'henta a viz Ebrel, ar Boched a zell piz ouz ar pakajou. Ar boestou-konserv (sardined, kig, etc.) a zo digoret oll gantho, araok beza kaset d'ar brizounerien. Ar re-ma peurlies a labour pell euz ar c'hamp braz. Ne resevont ho fakajou nemet miz, daou viz, pe hirroc'h, goude m'o peuz ho c'haset dezho, hag an traou zo louedet, breinet, divlaz, didalvez.

Na gasit ket a gonservou. Kasit legumachou seac'h, macaroni, nouilles, riz, kig mogedet, en eur ger, traou goest da jom mad pa rankje ar pakad chom digor eur pennad brao.

Ma kasit patatez, diouallit. Red eo tenna dioutho an had, an tammou a servijfe d'an Allmandet da blanta patatez evitho heunan. N'eo ket deoc'h beva an enebour !

BREZEL D'AR BANNEOU. — En hospitaliou zo, ne gaver ket aoualc'h a alcool da barea gouliou ar zoudardet glazet. Red eo entent outho gant ostillou n'int ket puret mad.

An oll a c'hoar ez euz riskl evit ar re glanv oc'h ober an dra-ze, mes laoskomp ar vedisined gant ho labour. Gouzout a rit pe ez euz leac'h pe n'ez euz ket da espern var draou hag a zo kement a ezoum anezho evit para ar re glanv. Ar pez a zo mezuz, avad, eo gueleet odivi leun ar guerennoù, en hostaleuriou a zo harp oc'h an hospitaliou, d'ar mare ma n'ez euz ket awalac'h a alcool er re-ma, evit entent oc'h ar glanvourien en eun doare deraed. Guelloc'h e kaver eta laosker hor zoudarded blesset da barea, eged displejout d'an everien. Lavarit d'in ha n'eo ket an dra-se eun dra spountuz !

Disul diveza, ez oa réunion vraz, e Paris, gant *La Ligue nationale contre l'alcoolisme*. Ar président, ar medisin brudet Debove, a lavaraz e kresk bemdez niver an dud a en em goll gant an odivi, hag e kresk er memes amzer hardisiegez ha galloud ar varc'hadourien pouezoun. Var he lerc'h, eun doktoez, an Itroun Girard-Mangin, a ziskuezaz e teu muioc'h-mui, siouaz, ar merc'hed da ober

evel ar goazed, hag e kemeront en uzinou kalz plegou fall, ha da genta ar pleg da eva.

Dre druez ouz ho tifennourien, dre druez ouz ar Frans brevet, laoskit ar banneou a gostez !

DOUE A C'HED. — Tud, diskiant ha fall, a vlasfem ar Mestr braz pa n'en deuz ket roet ar viktore deomp c'hoaz.

Doze en deuz great miraklou evit savetei ar Frans ; ar jeneral Cherfils, skrivaniere euz ar re vrudetta evit traou ar vrezel, hen disklerie n'euz ket miz er gazeten *Les Etudes*.

Ne ra ket ar mirakl a gasfe an enebourien kuit, en eun taol.

Ar Mestr eo. Gouzout a ra petra en deuz da ober. Ha gant-se, daoust ha meur a hini ne dlefit ket anzao n'o deuz ket great, ken evit diarbenn ar vrezel, ken evit he gounid, kement tra zo en ho galloud ? Araok tamall an Ao. Doue, dezho eo en em damall.

Gouskoude, an Ao. Doue a c'helfe rei ar viktore ma karje. Ha n'her gra ket.

Perag ?

Gedal a ra peden mistri ar vro. Gedal a ra ma troi pennou braz ar bobl varzu ennhan, mac'h anavezint he c'halloud, ma c'houlennint skoazel he vadelez.

Gedal a ra ma sento ar Fransizien, an darn vrasa diana, ouz he zek goure'hemen hag ouz re he Iliz.

Gedal a ra ma kredo ar zoudardet, ar vartolodet, en em ziskuez kristenien stard dirag an oll. Na pet zo, hag o deuz saillet var ar Boched evel leoned, hag a gren dirag eun teod fall ha sod !

Gedal a ra ma vezo ar binijen treac'h d'an ebatou udur, ma vezo mouez ar zakrifis krenvoc'h, niverusoc'h, eget ar blasfemou. Gedal a ra mac'h anzavo ar Fransizien eo Doue ar Mestr.

O c'hedal ac'hanomp ema. Goulennomp konversion hor c'henvroiz oll. Doue her fell dezhan ! Hag ar viktore a ziredo da heul.

NA ZIZONJIT MORSE. — Ar gazeten *L'Instituteur français* a gount an dra-ma : — « Me moa kerent chomet e kear Lille beteg ar miziou diveza. Kaset int bet da Frans gant an Allmandet, ha setu petra o deuz disklriet d'in. E Lill, katoliked a vilierou a heul mad ho relijion. Mad, ar Boched n'o deuz lakeat er vro nemet soudardet katolik, hag a ia d'an ilizou d'en em ziskuez en oll offisou. Er skoliou, ar Boched a zesk ho fedennou d'ar vugale, hag e lavaront da geariz, ken flour hag ar mel : « Guelit. Na c'hui a vije libr ma vijec'h dindan lezen hor bro Allmagn ! Gouarnamant ar Frans ne ra ha ne rai nemet brezel d'ho relijion ; ni a zifenn anezhi ! »

Setu aze ho finesa ! Enebourien ar feiz a ro tro d'ar Boched da hada an droulans, ar gasouni, etre ar Fransizien. Nep a ra brezel d'ar feiz a ro an dourn d'ar Boch, muntrer hor bugale !

Na zizonjit morse !

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL. — An Ao. Pengam, kure Sant-Hernin, caporal brancardier : trede embann a honor.

An Ao. Cotten, kloarek a Elliant, serjant telefonist e Salonique : trede embann a honor.

An Ao. Calvez, kloarek a Zant-Louis Brest, soudard, lazet en emgannou mae 1917 (Aisne).

An Ao. Quinquis, kloarek a Lokournan, soudard ; kenta embann a honor.

Tregont beleg, seiz kloarek ha tregont a zo bet lazet euz an eskopti.

Kannadik Parrez Landunvez

BUGALE MARI

D'ar 24 a viz Even, Kaloun an Introun Varia a vir sikour a dridaz a joa. En dervez-se, 16 aspirantez nevez a zo bet digemeret em he C'hongregation :

1 Marie Bossard ; 2 Anne-Marie Brénéol ; 3 Marie-Anne Le Borgne ; 4 Marie-Renée Balcon ; 5 Françoise Eliès, K. ; 6 Françoise Le Guen ; 7 Marie Jaouën, K. ; 8 Marie Jaouën, L. ; 9 Angélique Léostic ; 10 Suzanne Léostic ; 11 Louise Magueur ; 12 Eugénie Morel ; 13 Augustine Perhirin ; 14 Marie Provost ; 15 Marie-Yvonne Perchoc ; 16 Françoise Trébaol.

Er memez dervez 14 euz an aspirantezed kos ho deuz lennet ho Ak a Gonsekrasion d'ar Verc'hez, hag a zo bet lakeat evit atao ho hano var rôl bugale Mari :

1 Philomène Bossard ; 2 Augustine Brénéol ; 3 Francine Conq ; 4 Rosalie Croguennoc ; 5 Eulalie Cadour ; 6 Jeanne Didou ; 7 Marie-Gabrielle Fourn ; 8 Marie-Jeanne Magueur ; 9 Louise Magueur ; 10 Philomène Magueur ; 11 Marie-Renée Perchoc ; 12 Gabrielle Perchoc ; 13 Marie Squiban ; 14 Marie Vaillant.

AR VREZEL

Abaoue ar *C'hannadik* diveza daou soudard hag eur martolod euz ar barrez, a zo bet galvet gant Doue : Yves Foll, 27 vloaz, euz Street-Lann, maro var an dachen ha honor, ha Jean Celton, 31 vloaz, euz ar Rochard, maro er gear, an 8 a viz gouere, dre eur c'hlenved paket var an dachen a vrezel, ha Prosper Le Dall (quartier-maître) 24 vloaz, euz Arc'hantel, koufountet assamblez gant al lestr *Kléber*, ar 27 Even.

Maro trum Prosper Le Dall a lavar deomp, dreist oll : bezit atao prest, rak ne ouzomp nag an deis nag an heur, ma teuo Doue d'or gervel. Prosper c'hoaz iaouank, a ioa var ar poent da veza hanvet (second-maître) skoet e bet gant ar maro pa dride e galon gant joa o velet dirazhan douar Breiz he vro, eur pennadik c'hoaz emezan hag e vriatin va zud muia karët. Krenv oa, neun a rea evel eur pesk, perak ta neuze eo bet etouez an neubeudik martolodet beuzet euz al lestr *Kléber* ? Doue ebken er goar. Saved gant eur vam gristen, bet meur a vloaz en eur skol gristen e zeuz da esperout en devezo dalc'het da gentelliou mad e vloaveziou kenta hag e ma brema gant Doue en he Varados.

Allo martoloded a soudarded, peguir e zeuz breman evidoc'h eun danger ker bras, ne vankit morse pa d'eoc'h da ober eun dro d'ar gear da zont da govez ha da gommunia. Er giz-se, oc'h ene e stad a c'hras hag unanet gant Jezuz e tistroc'h, laouennoc'h, ha dispountoc'h pe d'ho lestr, pe d'ho kazern, pe d'an emgan rak sur e vioc'h neuze ma teu Doue d'ho kervel da vont var eun da eurused peurbaduz an env.

Ar Groaz a Vrezel

2 deuz hor c'henvroiz ho deuz bet ar groaz a vrezel : Yves Vidamant euz Arc'hantel, meulet e bet er guiz man gant he gabiten

dirag tud he lestr : « martolod leun a vaillantiz ha choumet dispount en he bost en despet da eur glao a obuziou. Julien Ave, euz Arc'hantel, meulet eo bet gant he geflou er guiz man : soudard lun a nerzkalon, bet glazet 4 guech en emgan.

SKOL GRISTEN

O deuz bet ar guella renk dre ho labour hag ho zentidigez :

Kenta klas.	{ Eugénie Morel. Joséphine Auffret. Yvonne Magueur. Marie-Yvonne Cong. Catherine Kermogant.	Trede klas.	{ Léonie Bégoc. Marie Magueur. Francine Fily. Marie Yvonne Milin. Alexandrine Marzin. Pélagie Sylvestre. Marie Taloc.
Kenta rummad.		Kenta rummad.	
Eil rummad.	{ Louise Laot. Marie-Yvonne Kerros. Isabelle Guéna. Joséphine Bouquet. Marie-Anne Maingant.	Eil rummad.	{ Marie Foll. Marie Pères. Suzanne Saliou. Marie-Yvonne Maingant. Marie Guéguen. Perrine Magueur. Joséphine Bégoc.
Eil klas.	{ Perrine Kerros. Hélène Gélébart. Joséphine Trébaol. Jeanne-Yvonne Trébaol. Marie-Yvonne Richard.		
Kenta rummad.			
Eil rummad.	{ Marie Lescop. Bernadette Hamon. Marie Magueur. Odette Roux. Thérèse Cadalen.		

SAKRAMANT AR VADIZIANT

22 Even. Jean Cloâtre, Bourk : paëroun, Jean Cloâtre ; maërounez, Philomène Cloâtre.

24 Even. Yves-Marie Belec, St Gounvarc'h : paëroun, Yves Belec ; maërounez, Anne-Marie Flech.

Gourvadiziant

5 Gouere. Krouadur Le Borgne, Kerc'hrazoc'h.

EUREUJOU

4 Gouere. Joseph Talarmin Gorrequear, ha Marie-Renée Ellés Arc'hantel.

17 Gouere. Julien-Emile Avé, Lurzachet (Seine-et-Oise), ha Geneviève le Dall, Arc'hantel.

ENTERRAMANTHOU

1 Gouere. Jean Marie Créach, 77 vloaz, Arc'hantel.

5 — Marie Le Ven, 42 vloaz, Feunteun-Ven.

6 — Joseph Arzel, 18 vloaz, Kerzent.

10 — Noël-Jean Celton, 31 vloaz, Rochard.

A zo pedet da ober ho hanter heur Adrasion, d'an eil sul, 12 a viz Eost

11 h. Marie Cann, Anna Le Ven, Marie-Yvonne Hamon, Perrine Autret, Kerc'hoazoc.

11 h. 1/2. Clémentine Allouer, Jeanne Floc'h, Françoise Cadalen, Catherine Castel, bourk.

12 h. An Aotrou Persoun, Joseph Godebert, Guillaume Lescop, bourk ; Jean-Marie Godebert, Kernézoc.

12 h. 1/2. Ar skol gristen.

1 h. Marie-Anne Daouben, Marie-Jeanne Forest, Françoise Le Guen, Augustine Talarmin, Trémazen.

Kannadik miz gouere en deuz kousted 22 lur ha 16 guennek, bet evit sikour e baea digant : M. T., J. C., peb a 8 real ; F. et J.-M. K., M. G., J. M., peb a 4 real ; J. T., M. D., peb a 10 guennek.

Doze r'ho faëo.

MIZ EOST

3. GUENER KENTA, eil gouel Sant Stefan merzer. « Kaloun Zakr Jezuz, me a ginnig deoc'h an oferen hag ar gommunion evit ho tigoll euz ar pec'hejou great epad an eost. Me a daolo evez ouz ar vugale, ma kendalc'hint da gommunia ha da zont da oferen ar zul, en amzer ar vakans, koulz hag en amzer ar skol. »

5. OFEREN AN DEKVED SUL goude ar Pantekost. — Lizer S. Paol da dud Korinth er Gres : « Ar memes Spered-Santel a ingal an oll donezonou etre an dud, o rei da bep hini evel ma kar. » Kendaze, n'euz ket da glask gouzout perag an hen-man-hen en deuz, perag me na n'euz ket... Doue a ro da bep hini he lod. Doue a zo just, hag an eternite a roio dioc'h ar mirit ar rekompans. — GOUSPEROU GOUEL JEZUZ TRANFIGURET, deuet da veza skeduz ha gloriuz var menez Thabor.

12. Oferen ha gousperou an UNNEKVED SUL goude ar Pantekost. — Lizer S. Paol da dud Korinth. « Jezuz, emezhan, a varvaz abalamour d'hor pec'hejou. » Peb hini ac'hanomp a zo kaoz euz eul loden euz gouliou Jezuz ; ar fouetou, ar spern, an tachou, ar groaz, ar maro... ni zo kaoz. Petra ginnigomp da Jezuz d'hen digoll ? Sonjomp ervad ! Poaniomp, karomp ar binijen.

14. Derc'hent gouel Mari Hanter-Eost (meurs). IUN HA VIJIL, Mari, ar Vamm a c'hlaç'har, a c'houzanvaz aoualc'h evidomp, pa oue daou-hanter gant Jezuz var labour hor zilvidigez. Eun tammik pinijen en honor dezhi !

15. Merc'her. Gouel AR VERC'HEZ DOUGET D'an ENV GANT AN ELEZ. — An Abostol a zo tennet euz al Leor hanvet Eklesiasitik. « An hini en deuz va c'hrouet en deuz repozet e va zelt », eme ar Verc'hez. Ennomp-ni e repoz an Ao. Doue ive dre ar c'hras ha dre ar gommunion : ha n'her c'hasomp ket kuit dre ar pec'hed ? ha ne reomp ket dezhan eun digemer divalo ? Pedomp Mari da zeski deomp kommunia ervad, evit ma savimp d'an Env eun deiz, dre vertuz korf he Map.

19. Oferen ha gousperou an DAOUZEKVED SUL goude ar Pantekost. — Eil lizer S. Paol da dud Korinth. « N'omp ket goest da gaout sonj vad ebet, ac'hanomp hon-unan ; anzav a reomp hon oll galloud a deu digant Doue. » A betra en em fougeal, neuze ? Petra zo deomp ha n'on devije her resevet ? Bezomp humbl ha dous a galoun, var skuer hor Mestr divin.

26. Oferen ha gousperou an TRIZEKVED SUL goude ar Pantekost. — Lizer S. Paol da C'hallaoued an Azi. « An traou prometet gant an Ao. Doue, roet dre ar feiz e Jezuz-Krist, d'ar re a gred. » Ma fell deomp kaout hon heritaj eternal, ar Baradoz prometet a viskoaz gant an Ao. Doue, kredomp Jezuz. Mar kredomp Jezuz, greomp ar pezh a c'hourc'hemen, resevomp he zakramanchou.

2 a viz Guengolo. — Oferen ha gousperou ar Pezarzekved Sul goude ar Pantekost.

7 a viz Guengolo. — Guener kenta.

SUL KENTA A VIZ EOST

Konsekrasion al labourerien-douar da Galoun Jezuz

A bell zo, eo bet savet an emgleo « Société des Agriculteurs de France », etre labourerien-douar katolik ar Frans, evit en em zi-

kour, dre Assuransou, Syndikajou, etc., en em denna guelloc'h gant ho labour, ha gounid easoc'h ho buez.

Mes bet e fell dezho, er memes amzer, diskuez ez int kristenien, ha rei da Zoue en hor bro hag en ho famill ar renk en deuz guir da gaout. Setu perak o deuz bet ar zonj da vont da Vontmartr, d'ar 25 a viz c'huevrer diveza, evit en em voestla d'ar Galoun-Zakr ; hag eur veach bodet eno, deuet euz an darn vrasa euz eskobtiou Frans, o deuz en em glevet evit goulenn digant ho Eskibien ma vije lakeat, bep sul euz ar bloaz, labourerien-douar peb departamant, an eil goude egile, da ober ar gommunion asambles ha d'en em gonsakri d'ar Galoun-Zakr, en hano ar re all hag en ho hano honnan. An Eskibien o deuz dioc'htu roet ho aotre hag ho bennoz d'eun dra ken kaer ha ken talvouduz.

Abaoe, ez euz bep sul kommunion ha konsekrasion d'ar Galoun-Zakr en eun eskopti benag. Tro departamant an Oise a zo bet da genta ; epad miz gouere, e oue, d'an 1, hini al Loir-et-Cher hag an Eure-et-Loir ; d'an 8, hini ar Seine-Inférieure hag an Eure ; d'ar 15, hini ar C'halvados hag an Orne ; d'an 22, hini an Ille-et-Vilaine hag ar Manche ; d'an 29, hini ar C'hôtes-du-Nord hag al Loire-Inférieure ; d'ar 5 a cost, hini ar FINISTER hag ar Morbihan ; d'an 12, hini ar Vendée hag ar Charente-Inférieure ; d'an 19, hini ar Mayenne hag ar Sarthe ; d'ar 26, hini ar Maine-et-Loire hag an Indre-et-Loire, etc.

Tro ar Finister, her guelet a rit, a en em gav eta d'ar zul kenta a viz cost, hag an Ao. 'n Eskob a c'houlenn ma vezo ar gouel ar c'haera. An Ao. Persoun, e peb parrez, a lavaro petra vezo great, eur pennadik araok ; mes da nebeuta, ec'h alio ar goazed da gommunia en deiz-se, hag epad an oferen-bred, pe d'ar vénédition, goude gousperou, e lenno en ho hano an akt a gonsakrasion d'ar Galoun-Zakr, a zo ama varlerc'h.

Kaeroc'h e vezo c'hoaz, ma teu ar voazed dirag imaj Kaloun Jezuz, peb a c'houlenn en ho dourin, da lenn oll a-unan, a vouez uhel, an Akt a gonsakrasion, epad ma vezo ar merc'hed hag ar vugale oc'h heulia ar memes komiso var ar paperiou ingalet en ho zouez.

Fizians e meuz e lakaio ho bolontez vad an oll goazed, ar re a zo er gear, ha zoken ar re a zo er brezel, evit diskuez ho feiz hag ho c'harantez d'ar Galoun-Zakr.

An Ao. 'n Eskob a bed start ar c'hazetennou katholik, ar *C'hannad*, ar *C'hannadik* el leac'h ma 'z euz, hag ar breuriezou goazed voestlet d'ar Galoun-Zakr, da boania evit ma vezo an deiz-se eur gouel kaer, ha ma plijo d'ar Galoun-Zakr skuill he vella bennoz var hor famillou ha var hor parrezioù, ha rei dizale d'ar Frans ar viktorel.

Konsekrasion labourerien Frans d'ar Galoun Zakr a Jezuz

Kaloun Zakr Jezuz, Hon Doue hag Hor Prener — eienen an oll vadou — ato glac'haret o velet an dud dianaoudek en ho kerver, — ni oc'h ador an hano hor famillou hag en hon hini, — ni ho ped en hano hor bro goasket gant ar brezel.

Evit diskuez hon anaoudegez vad euz ar vennoz a skuillit var hon labourou ; — evit rapari an offansou great d'ho madelez gant an dud divar ar meaz dre al labourat d'ar zul, ar mankout d'an oferen, ar blasfemou, ar c'homzou lubrik, ar vezventi, ar pec'hejou

enep lezen santel ar briedelez, ar skolioù dizoue, hag ar pec'hejou all — ni oll — labourerien-douar, pennou-tiegezh, merourien euz ar Frans — gant hor gragez hag hor bugale — a ginnig deoc'h, e pae d'hor pec'hejou, hon oberou, — hon labourou, — hor poanioù pemdeziek.

Ni bromet deoc'h en em zikour etrezomp da heulia ho vertuzioù ; ni ra le da leuskel ar re a zo dindanomp da henori ac'hanoch ; — ni c'houlenn digant ho madelez selaou ar pedennou zo bet great deoc'h en Iliz Vontmartr gant ar re a gomze en hon hano, — ni ho ped, da rei an treac'h d'hor zoudarded hag ar peoc'h d'ar bed.

Kaloun Mari — dre ar c'hleze en deuz ho treuzet — grit ma servichimp ar Galoun Zakr a Jezuz en hevelep doare m'ou dezo perz er grasou kaer en deuz prometet.

Epád m'ema bugale Frans e kreiz ar goasa brezel zo bet hiskoaz, — grit ma c'hello hor bro, — dre garantez ar Galoun Zakr, — kemeret adarre he renk henoruz etouez ar broiou katolik, — ha ma ouezimp, — ni, — lakaat da zével a-nevez var ar meaz gizioù santel hon tadou koz.

O Kaloun Zakr a Jezuz, — ni ho ped dre Galoun dinam Mari, — o pet truez ouzomp, — kennerzit hor buez, — hon hentchit, hon renit er peoc'h hag er joa. Evelse bezet great.

IMPRIMATUR.

Quimper, 29 juin 1917.

A. COGNEAU,

V. G.

GOUEL MARI ANTER-EOST. *Petra da henori en dervez-ma ?*

Maro euruz ar Verc'hez Vari, hag he nijal d'ar baradoz.

Petra lavar ar Pabed var gement-se ?

E lavaront Mari a oue savet dreist an oll elez, hag a leuniaz a levenez ar baradoz abez.

Petra lavaront c'hoaz ?

E lavaront c'hoaz e oue digemeret Mari deread ha gant gloar, gant Jezuz he Map, an Den-Doue.

Petra lennomp en offisou a zo ?

Lenn a reomp : Petra benag Mari a rankaz mervel, goulskoude ar maro ne oue ket treac'h dezhi.

Petra zonj ar gristenien hag an doktored ?

Sonjal a reont e oue Mari kaset d'an Env korf hag ene gant an Elez. Zoken, eskipien a gantchou o deuz goulennet digant Hon Tad Santel ar Pab e vije ar greden-ze diskleriet artikl a feiz, ha na vije ket mui kristen katolik kement hini hen nac'hfe.

Var betra eo harpet ar greden-ze ?

Var zaou dra. — Da genta, Jezuz o resusita a rentaz ar vuez da veur a zant, hag e kasaz anezho ganthan d'ar baradoz : da gredi eo n'en do ket great nebeutoc'h evit he Vamm benniget. — D'an eil, ar gristenien genta a zastumaz gant evez ha gant henor relegou korfou an Ebestel, Sant Stefan, hag ar re all : n'euz hano ebed euz relegou korf ar Verc'hez ; perag, nemet abalamour ne oue ket laosket er bed-ma gant Doue ?

Mes petra da zonjal dreist-oll euz ar Verc'hez gloriuz Vari ?

Sonjal a dileomp e oue ar Verc'hez hueleat en Env kement ha m'e devoa en em izeleat var an douar.

Penaoz en em izeleaz ar Verc'hez ?

N'euz den ebet ken difouge hag hi, hi ar zantela euz an oll grouadurien, hi Mamm an Doue oll-galloudek, hi Rouanez ar bed oll.

Perag e vez great Protesion en deiz-ma ?

Abalamour eur roue Frans, Louis Trizekved euz an hano, a reaz le d'ar Verc'hez e vije protesion en honor dezhi, bep bloaz ha da viken, e digoll euz ar skoazel roet ganthi d'ar Roue ha d'ar Vro.

Ha fizians e c'hellomp kaout e pedennou Mari ?

Hag unan zo hag a c'helfe difiziout ?

Petra c'houlèn Mari euz he zervicherien ?

Mari a c'houlèn mac'h heulio ar gristenien he skueriou ; dreist-oll, ma vezint pur hag humbl evel d'hi.

LABOURIOU HANV. « *Nisi Dominus œdificaverit domum...* » ma ne deu ket an Ao. Doue da zevel an ti, nul eo ho labour d'ar re a zav an ti. » Evelse e lavar ar Psalm a ganomp da c'houlou ar Verc'hez, evelse e lavar ive ar skiant vad.

Setu perag eo arabad dizonjal euz an Ao. Doue epad an eost. Ar c'hontrol eo. Madou an douar a deu deoc'h diganthan. An nerz, ar iec'hed, an amzer, hen a zo mestr varnho. Pedit epad an eost !

Pedennou great mintin ha noz, ha great mad. Pedit a zo espern amzer, ha nann lie c'holl.

Ofisou da zul. Rentit gloar da Zoue, roit skuer vad d'ar barisioniz all, leuniit ho spered hag ho kalon gant komsou ha kantikou an Iliz.

Kommunion. Ne ankounac'hait ket ar guener kenta, ar zul kenta, goueliou ar Verc'hez. Deuit da vaga oc'h ene gant ar Bara divin, c'hui hag a hoan kement da assuri bara d'ar Frans.

Mes na labourit morse da zul. Labour sul, labour nul : abred pe zivezad, al lavar koz a deu da vir. — Pa vezo red-red ober eun tam labour, deuit da gaout ho persoun ; gant he aotre, n'o po ket a bec'hed.

Na roit ket a evachou krenv d'ho labourerien. Da betra ? Mezvi anezho ne avanso ket al labour. Ha perag, pa zervichont ac'hanoc'h, ober dezho riskla devi en tan ?

Na lezit den da laosker geriou udur pe vylasfemou. Diouallit er park, diouallit en ti, diouallit er c'hraou, diouallit ato ! Beillit var ar vugale. Oh ! ar vugale geiz ! pebez danjer en eost evitho !

Pa echuo an eost, goude kement a skuider hag a enkre, goude kement a veritou hag a c'hrasou kinniget deoc'h gant madelez ho Toue, — ma n'oc'h ket santeloc'h eget pa stagjoc'h d'al labour, — neuze, pegen huel benag, hag hir ha niveruz, e ve ho perniou foen, kolo ha greun, — neuze (Doue ra viro !) o pezo kollet ho poan hag oc'h amzer.

AR PSALMOU. An *DE Profundis*, Psalm 129. — Ma 'z euz eur Psalm a lavaromp alies, ez eo hen-ma dreist oll abaoe ar vrezel. Eur beden eo, da c'helver trugarez an Ao. Doue var eur prizounier dalc'het pell euz he vro. Great e oue, a greder, gant eur Juzeo harluet e kear Babilon, meur a gant vloaz araok amzer Jezuz-Krist.

Pevar c'houblad zo anezhan : 1. *De Profundis... Fiant aures...* Ar prizounier a bed an Ao. Doue da zelaou anezhan.

2. *Si iniquitates... Quia apud te...* Arabad eo da Zoue delc'her kount euz pec'hejou an den, mes epken deuz trugarez he Galoun.

3. *Sustinuit anima... A custodia...* An den a esper e Doue ; deuz ar mintin d'an noz, ar bobl a esper ennHan.

4. *Quia apud... Et ipse redimet...* Rag Doue a zo leun a vadelez hag e tenno ar bobl euz drouk ar pec'hed.

Ar Psalm-ma, lavaret da genta evit obten he bardon d'ar pec'her, a vez peurliesha lavaret brema evit delivrans an Anaoun.

An den, eme S. Augustin, kuezet dre he faot, ne c'hell ket adzevel dre he nerz he-unan. Krial a ra euz islonk he bec'hed ; huanadi, lenva ra beteg ma zavo varzu an Hini a zo dreist an Elez uhela, Petra c'hortoz pa gri ? Esperout a ra en he Zalver, na deuaz er bed ha ne varvaz nemet abalamour dezhan. Euz a be leac'h an esperans-se dezhan ? Euz a drugarez he Zoue. Ha petra an drugarez, nemet ar zakrifis, nemet goad Jezuz skuillet var ar groaz, pa blijaz gant unan didamall en em rei evit ar bec'herien hag ho zenna euz a c'halloud an Drouk-Spered ?

An *De Profundis* a zo mad da lavaret evit an Anaoun, evit ar brizounerien, evit ar bec'herien, evit kaout fin d'ar vrezel.

SOUARDET PRIZOUNIER. — 1. Hano zo kalz da zigas darn anezho d'ar gear, pe d'ar Suiss da nebeuta : hag Hon Tad Santel ar Pab a ra en dra c'hell evitho. Bete vrema ar re gl'avn hag ar re vac'hagn epken o deuz gellet en em denna, kalz muioc'h anezho. Divezatoc'h ar re iac'h a c'hello dont ive. Da genta : an oll zoudardet hag o deuz tremenet 18 miz en Allmagn, gant m'o devezo 48 vloaz, pe 40 vloaz ha tri a vugale. D'an eil, kement ha kement a zoudardet français hag allemand, euz ar re o deuz great 18 miz prizoun ; an tadou tri a vugale, hag ar re a zo bet prizouniet er penn kenta, a zeuio araok ar re all.

2. Prizounerien a c'houlèn paperiou da ziskuez int tadou famill. Tennit oad ho bugale euz an ti-kear, ha kasit dezho. Ar C'houarnamant a ro aotre brema.

3. Boestou konserv a c'hell adarre beza kaset d'ar brizounerien : an Allmandet ne zigoront ket ar boestou ken. Ar Frans en em venje var ho c'henvroiz, evel just ; dre-ze int digaset da darda gant ho falloni.

LIZER EUR ZOUDARD LAZET ABAOUE. — « Va breur ker, m'en em gav al lizer-ma ganed, ez eo dre ma vezin kuezet.

BOLONTEZ DOUE EO. — Arabad dizesperi. Meur a hini zo kuezet e va raok, tud guelloc'h egedon-me, evit ho dever, evit difenn ar Vro. Va geriou diveza e kasan d'it, evit ma prepari hor c'herent keaz d'ar c'helou ho glac'haro kement. Me garje beza chomet beo evitho, rag ne vevchont o daou nemet evidomp-ni.

Doue ne fell ket dezhan. A greiz va c'halon e plegan d'he volonte pa n'euz nemethi hag a ve guir ha mad. Daoust hag e guirionez n'eo ket abalamour dezHan hag evit mont dezHan eo omp bet lakeat er bed ?

Euruz c'hoaz, ma prenan mignounaj va Doue evit ar vuez eternel, dre ar zakrifis a ran euz ar vuez-ma, d'hen digoll euz va fec'hejou.

Ma mije gellet beva evel dot, me mije savet eur FAMILL, e c'heller kredi. Va brasa levenez a vije bet poania en dra c'helljen da gaout bugale kalounek, sentuz ha kristen. Ra vezo va nized evelse, da vugale-te hag a garan te c'hoar pegement.

Hentch anezho evel m'omp bet hentchet gant hor c'herent. Gra

anezho tud a galoun hag a benn, tud hag a ouezo poania hag a zalc'ho d'ho c'hredennou. Ra garint ho Doue ; ar rest a vezo roet dezho var ar marc'had.

Da vriata a ran gant va oll garantez. Kenavo er baradoz !
Kollat he vuez ganthan : digollet er vuez eternal.

Perak-ta ez eo bet skuillet kement a c'hoad pur ?

« *Ne vez ket a bardoun*, a lavar deomp al Leoriou Sakr, eb na ve skuillet a c'hoad ». Guir eo, goad ar C'halvar en deuz paet en eur doare burzuduz, dle hor pec'hejou. Mes Hor Zalver deomp an enor da c'houien diganeomp eun nebeud euz hor goad evit he unani gant he hini, evel eur veraden zour lakeat er c'halir gant ar beleg, ha mesket gant ar guin a deuo da veza goad Jezuz.

Eüruz ar goad a vez skuillet evit eun dra zantel !

Ar goad-se a drempe an douar m'eo kuezet varnhan, hag a laka da zivoan eun cost kaer ha puill ; en eur vervel, e ro buez.

Ha c'hoaz, nann !... Ne varv ket ar goad-se, rak buez a deuo emnhan adarre. Ne ia ket da goll. pe guir e vezo kavet divezatoc'h. Ar Fransizien euz an amzer da zont a velo anezhan o lugerni dirazho evel eur sklerijen dudiu. Er baradoz, ar zoudarded kuezet var an dachen a vezo anavezet e touez ar re all, dre ar goad a jommo var ho zal, evel eur merk a c'hloar. Hag hon ilizou, bet diskaret 3 mil anezho gant ar Boched digernez, a vezo savet a-nevez a vilierou ; ha diazezet evel ma vezint var goad presiuz hor merzerien, e padint goudeze beteg fin ar c'hanvejou...

Ha divezatoc'h, pa gendalc'ho ar Fransizien, en eur zavel huel ho fenn, da zifenn al lealded hag ar justis, e talc'hint hepred sonj euz ho zadou, n'o deuz morse baleet nemed dre an hent eün, ha n'eo bet ruziet ho zal nemed gant ar goad, biskoaz gant ar vez...

BELEIEN AN ESKOPTI ER VREZEL. — An Ao. Yves LAMENDOUR, a Lambézellec, kure Hanvec, infirmier-aumônier (volonter) er 174 infanterie, — embann a honor, 4 a viz mae, er Champagn.

He vreur, an Tad LAMENDOUR, misionner a Urs ar Spered-Santel, — embann a honor.

An Ao. Jean LE ROUX, a Gleder, kure Plouégat-Guerrand, brancardier G. B. D. 3, glazet d'ar 5 mae, a zougaz goudeze eur zoudard glazet ; — embann a honor.

An Ao. Jean ROUALLEC, a Blouénan, beleget er sizun araok ar vrezel, brancardier-rejimant ; — embann a honor.

An Ao. KERAMOAL, euz ar Relecq, kure Douarnenez, aomnier an 19^e ; — eil embann a honor.

An Ao. LE GALL, a Gernouès, kure Cléden-Poher, bet kentoc'h eun embann a honor, en deuz nevez-resevet « Metalen aour ar gouraj militer » digant roue ar Serbi.

An Ao. François POULIQUEN, a Gomanna, beleg-skolaer e Guitalméze, brigadier er 28^e d'artillerie, — embann a honor.

An Ao. François CAROFF, kloarek a Zant-Marc, glazet e miz cost 1914, klanv abaoue, nevez-marzo euz he c'houliou.

Kalz beleien euz an eskopti a ioa, abaoue pell amzer, e bro

